

Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{rs}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildut*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 3041 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne : 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempt.). 5 f. l'an

PUBLICITÉ
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Petra c'houlenn ar Gatoliked. —
Endro da eteo Nedeleg, BREIZADIG. — Pedervet kenstrivadeg
ar C'hardinal Dubourg, J.-B. MARTIN. — Buhez Jenovefa a
Vraban. — Tro Vreiz, G. P. — Divinadennou.

Bloavez laouen d'ar Vretoned.
Ha peoc'h d'an holl dud vad er bed!

SULIOU HA GOUELIOU MIZ GENVER

- 1 a viz Genver. — Eizvedez Nedeleg H. Z. p. 225.
4 a viz Genver. — Eizvedez an Innosanted santel. Gouel
hano santel Jezuz, p. 229.
11 a viz Genver — Gouel ar Rouanez, p. 233.
18 a viz Genver. — Eil sul goude ar Rouanez, p. 239.
25 a viz Genver. — Trede sul goude ar Rouanez, p. 244.

Petra c'houlenn ar Gatoliked

Prezegenn graet da wazed Eskopti Kemper ha Leon, e Kemper hag e Folgoad, d'ar 7 ha d'an 8 a viz Kerzu diveza, gant an A. M&DEC, person Goulc'hen.

AOTROU 'N ESKOB,

Teurvezet eo ganeoc'h, Breizad evel ma 'z omp holl a ouenn, a galon hag a spered, e savje ar Brezoneg e vouez evit difenn aman gwirioù kristen hor Breiz. M'am eus aon, evit gwir, e ve gwall zister an difennour oc'h eus dibabet, da vihana, eur wech muioc'h, e roit da yez hon tud koz — a jomo hon hini! — skoazell eur garantez hag a laouennaio kalon an holl Vretoned.

AOTRONEZ BELEIEN HA KANNADED,
VA C'HENVROIZ KER.

Morse, m'oar vad, abaoe amzerioù euzus an Dispac'h bras, ene kristen hor Bro ne dridas gant eur fizians ken nerzus ha ne grenas gant eun imor ker santel...

Piou ez omp-ni, da genta, ha perak eus an arvor hag ar gorre, omp-ni diredet aman a vilierou? (1).

Ni 'zo katoliked, mibien eun Ilis hag he deuz gwir da veva etouez ar boblou, ganet ma 'z eo eus kalon ha gwad eun Doue, harpet ma 'z eo war asant an ugent miliard a gristenien a vevas dindan he c'hazel, war asant an tri c'hant milion a gristenien a zo beo dindan he galloud.

Ni zo katoliked, mibien eun Ilis hag he deuz bet digant he C'hrouer-Doue urz ha gwir da brezeg d'an holl hag e pep lec'h an Aviel, netra nemed an Aviel, met an Aviel penn da benn gant e guzuliou hag e c'houre'hemennoù.

Ni zo katoliked, mibien eun Ilis hag a lavar deomp: menna rit, en eur viret ar gourc'hemennoù-se, ober ho silvidigez etouez tud ar bed? Ho kwir eo. Fellout a ra deoc'h en em rei d'ar Mestr korf hag ene, seveni ar c'huzuliou a baourentez, a zoujans hag a furnez en deus kinnet d'e wella diskibien, kazelia ho sempladurez dindan reolenn eus gouent? Ho kwir eo a berz Doue. Ar bed en deus ezom eus ho skoriou, ho labour hag ho pedennoù ha me, ho Mamm, a ro deoc'h gant va c'houeka bennoz, skoazell va galloud.

An Ilis, evit trouc'ha berr, he deuz, a youl Doue, gwir da veva, gwir da gelenn, gwir da zével breuriezou hag

(1) 20.000 den a c'helle beza e Kemper hag 50.000. da neubeuta, e Folgoat; eun uhel-gomzerez a gase sklér mouez ar prezegez beteg ar selaouer pella dioutan.

eus ar gwirioù-ze, ni, he mibien, hon eus hon lod dre ma n'int bet roet dezi nemed evit gloar Doue ha silvidigez ar boblou.

Bugale d'an Ilis, ni 'zo, war eun dro, sitoyaned a Vro-C'hall. Daou c'halloud evit ar memez sujidi: ha ne zavo ket a enebiez etrezo? N'eo ket dleet p'e gwir, an eil hag egile, e tiskennont euz ar memez Doue evel diou waz eus ar memez eienenn; p'e gwir c'hoaz, da bep unan, Doue en deus roudennet e dachenn: d'ar Vro mad ar c'horfou, eurrusted ar bed-man, — d'an Iliz, mad an enecou, eurrusted ar bed all; p'e gwir, en divez, ar memez koustians, renerez ar c'hristen hag ar sitoyan, a zo gourc'hemennet dezi rei da Zoue ar pez a zo dezan ha d'ar Vro ar pez a zere outi.

Bezomp dinet eta! Ar groaz hag an drapo n'int ket enebourien; breur ha c'hoar int hag unanet e tleont beza e kalon ar broad kristen evel m'o gwelomp unanet a uz d'hon aoteriou.

**

Hogen, sitoyaned katolik, petra glaskomp ha perak emañ hon arme war zao?

Ni a c'hoanta eun dra hepken: ar peoc'h, eur peoc'h hag a ziouante eus lealded eun emgleo etre ar Vro hag an Ilis, eur peoc'h ha ne hell bleunia nemet dindan heol tomm ar Frankiz.

Oh! klevet a reomp, bep sul, en e brezegennou lik, hor c'henta ministr, e zourn war boull e galon hag e zaoulagad warzu an oabl, oc'h embann: « Me 'z eo, emezan, eun hader a beoc'h, a garantez ». Eun hader? Ma chomfe ar c'houer da brezeg war gleuz e bark, ne welje ket druz an eost war e ero! Met selaouit an danevell: d'eur c'hilhog kludet war skourr eur vezenn, eul louarn ijinek, ganet e Treger, m'oar vat, a lavare, flour e vouez: « diskenn, breur, grêt eo ar peoc'h etre tud hor gouenn; diskenn-ta dillo ma roin did pok ar garantez! » Neuze ar c'hilhog, eul leoniad: « Ah! te zo ivez eus liguez ar yer? Diskouez da viou, kamalad! »

Brema, aotrou ministr, an dud a ya buan da goz: ar brezel en deus tennet meur a vlevenn diwar o fenn, pa n'en deus ket sanket meur a damm ploumm en o danvez. — « Peoc'h ha breudeuriez » a ganit-hu? Ni a zell ouz hoc'h oberiou. Hag hoc'h oberiou a zo milliget.

Epad ar c'hantvejou tremenet, an Ilis a zo bet, dre emgleo, unanet gant Bro-C'hall, evel ma 'z eo unanet hirio gant meur a Stad eus an Europ hag eus ar bed, evel ma chom unanet c'hoaz gant eur rann-vro eus ar Frans, an Alzas-Lorren, hervez m'hen anzaou eul lezenn douget d'ar 17 a vis here 1919.

Met petra glask hor ministr « hader a beoc'h »? Teurel

war dal an Alzas yeo mezus al lezennou dizoue; he flega, dre nerz, dindan lezenn falkr an Disparti, hadenn a gasoni, benveg a laeronsi hag a zismantr; astenn kraban ar framasoned war ilizou, eskobtiou, presbytaliou, kloerdiou bras ha bihan an Alzas; tenna digant o beleien an tammig paë dleet dezo hervez lezenn an Emgleo, ha bet miret dezo gant an Allemagn he unan; torfed esthammus: diframma digant an Anaon ar pez a c'horrenjont evit kaout pedennou ar re yeo; teurel arc'herien ha soudarded war an ilizou evit ober ivantor o madou; gwasoc'h: dibezia, daouhanteri koustians hor c'henvrois evit sounna, evit sevel, mar gellont, ar sitoyan a eneb ar c'hristen hag a eneb an Ilis... Labour vrag, n'eo ket 'ta a bers eun « hader a beoc'h », labour eeun a-berz eur ministr hag a zo en e garg seveni ar promesaou solanel, ar promesaou nerzus a zoujans roet ken lies d'an Alzas gant Joffre, Pétain, Mangin ha Gouraud, gant Clémenceau, Poincaré ha Millerand, gant ar Frans, en eur ger!

M'her goulenn diganeoc'h, soudarded ar Viktor, pa gerzemp euz an eil tachenm d'eben, dreist korfou maro eur milion hanter eus hor c'hamaladed, warzu menezioù glaz ar Vosj, ha bet e oa evit sanko, gant broud hor baionnetez, al « lezennou laik » e kalon an Alzas?

Bretouned, evel ma lavare ker brao an aotrou Tremin-tin, hor Breiz hag an Alzas a zo « diou askell ar Frans », — diou askell hag a denn o nerz eus a be lec'h ma n'eo ket eus ar Feiz chomet birvidik en diou vro, euz o yez koz bepred komzet, o gizioù bepred miret, eus o frankizioù karet muioc'h eged ar vuhez: Mat! da vis eost diveza, kannad an Alzas a deuas da Roazon evit kemen d'ar Vretoned: « Breudeur, Feiz ha frankizioù an Alzas a zo en arvar; n'eur labourat evidomp e labourot evidoc'h: ha sevel a reot evit hor skoazella? »

Warc'hoas; kalon an Alzas a drido pa glevo respont ar Vretoned...

**

Torret (1) eo bet an Emgleo etre an Ilis hag ar Frans, ha breman, war gein an Alzas, e venner bruzuna an tamm diveza chomet en e bez.

Da vihana, antronoz ar brezel, Bro-C'hall he doa la-kaet he dourn e dourn hon tad santel ar Pab. An daou c'halloud o doa troket o c'hannaded evit rei d'ar Gatoliked, gwella servicherien ar Vro, eun testeni a zoujans hag a anaoudegez vat, evit rei d'an Ilis e Frans eur reiz, eur stumm-beva diouz he doare. Gwir eo. Met ne fazian

(1) Al lodenn ma euz prezegenn an aot. Madec n'eo bet displeget nag e Kemper nag e Folgoad, dre m'en doa an aot. Fortin diskouezet en e raok pegen talvoudus eo miret an emgleo etre an Iliz hag ar Frans.

ket o lavaret; ma 'z eus diouanet eur vad eus darempred an daou gannad, eo, dreist holl, mad ar Frans.

Pa vennas hor Bro, goude ar viktor, sevel war dron Strasbourg ha Metz daou eskob gall e lec'h an daou eskob allemand, penaos he dije gelllet hen ober ma n'he dije ket kaset eur c'hannad — an aotrou kardinal Amette — da ginnig he goulenn da Vestr an Eskibien?

— Mad ar Frans? ya, hep mar ebed. Du-hont, e bro ar zao-heol, hano ar Frans a zo-meulet gant ar boblou kristen, sujidi an Ilis. Er Frans eo bet fiziet ar gefridi d'o difenn, — kefridi hag a laka etre he daouarn eur galloud dispar, war he zal eur gurunen a enor. Hogen, en despet d'ar brezel yud gret aman d'an Ilis, en despet da c'hoantegez an Allemagn ha meur a Vro all, piou ma n'eo ket ar Pabed, o deuz miret ha startaet etre daouarn hor Bro ar gevridi-se ken talvouduz?

— Mad ar Frans? Na petra ta! Hor misionerien, er Marok, dre nerz eun emgleo gret gant ar Spagn er bloavez 1912, hor misionerien a zo dindan beli eun eskob spagnol. Ma sao vare'hoaz enebiez etre an daou Stad, penaos e vo gelllet koumpeza ar rendaël ha delc'her, war ar rann-vro a zo deomp, gant beleien gall, levezon ar Frans, ma ne deu ket kannad ar Frans da c'hounit asant H. T. S. ar Pab, mestr ar visionerien hag ar boblou kristen?

Ah! pa weler eun tregont bennak eus Stadou ar bed, — evito da veza protestant ha zoken payan kouls ha katolik — o prederia kement da viret kannaded e Rom, pa weler galloud an Ilis o kreski hag oc'h en em astenn bemdez dre bevar c'horn an douar, dall, e gwirionez, ha trubard ma neo ket dall, eur ministr hag a c'hoanta diframma dourn ar Frans euz dourn an Ilis.

Eur gomz a zo koezet gwechall euz muzelloù ar jeneral Bonapart: « grit, emezan d'e gannaded, grit d'ar Pab evel pa en dije 200.000 den a vrezel ». Komz vrudet! Evit he digas hirio da wir, eo red lavaret gant eur skrivagner gouziek: « doujit ar Pab evel pa en dije dek milion a zou-darded ».

**

An emgleo dre gannad etre ar Frans hag an Ilis a zo, evit hor bro eun herrez a beoc'h, eur benveg a levezon. Henma ivez, an dispac'herien a zo pignet, dre laer, e penn Bro-C'hall, o deuz imor d'e derri. Da vihana, ma vagont en o c'hreiz an disterra karantez evit o c'henvroiz, e poagint da zeveni an unvniez etre bugale ar Vro en eur viret al lealded e kenver an holl, en eur zougen, evid ar memez sujidi, hevelep lezennou. Eul lezenn evid eur bobl! Aze ema, aze eo bet a viskoas gwirizienn ar peoc'h evit ar broadou.

Siouaz! A vec'h m'eo ar Franmasoun, marmouz ar

Frankiz, skrimpet war drou Bro-C'hall, eus e imor e tiroll lezennou ilskis.

Douget eo (1 a vis Here 1901) al lezenn griz hanvet lezenn an emglou. Rannet ar Fransizien e daou rummad. Gwir, hervez an artickl 2, gwir da neb a gar da zevel emgleo gant neb a garo, heb ma rankfe dilskleria e venoz-na goulenn aotrê. Grit emgleo, skolaerien; grit emgleo, framasouned, grit emgleo dispac'herien ruz-wenn ha ruz-tan. Al lezenn a zo brokus! Ya, met gwelit an ltron vrao a ra war eun dro noz ha deiz, sec'hor ha glao; a lavar, dre ar memez lezenn, gwenn ha du, pik ha bran, ya ha nann. — Frankiz d'an holl, emezi, d'an holl! Met ma c'hoantâ kristenien en em voda, beva tri e goudor ar memez toenn hag ar memez reolenh evit pedi, labourat, studia, prezeg, kelenn ar vugale, prederia gant an dud, koz pe glauv pe vac'hagnet, neuze an ltron vadeleuz a zav war he zreid hag a c'hourdroûz: liberte d'ar re all, met d'ar re-man difenn a grenn, difenn krak ha berr d'ena em voda... Kountell ar c'hilhotin n'eo ket primoc'h da zibenna eun den.

Hag e rankint, ar relijiuzed — brasa madoberourien ar bobl e diabars ar Vro, brasa madoberourien ar Vro en tu-all d'hon arzo — kestal ar gwir da veva war zouar o c'havell, astenn o dourn da genta warzu ar Gramb, warzu ar Sened goudeze, kaout aotrê eul lezenn digant stabeze-rien lezennou, o enebourien touet. Hag e vo gwelet neuze — war an 59 breuriez a blego da c'houlenn aotrê — e vo gwelet eur ministr, kenta ministr Bro-C'hall, Combes e hano miliget, o kemeret 55 evit o rahna e tri rumm, evit o fourra, — hervez komzou Waldeck-Rousseau, tad al lezenn — e tri zac'h evel chatal barnet d'ar maro hag a stlapa anezo er mor da veuzi..

Ha neuze — kals a glasko enebi: e dra ' zo c'houek da bep unan, stag e chom ar galon oc'h an ti en deus hor goudoret — neuze da heul eur c'homiser hag eun dibrenner dofojou tennet euz ar galiou, dirak pobladou tud an imor en o c'hreiz hag an daerou en o daoulagad, neuze — ruzia ran gant ar vez evit Bro-C'hall — difennourien ar gwir, soudarded ar Frans, a vo galvet da ziframma eus o c'houentchou-ha da deuler war hent an harlu hor breudeur hag hor c'hoarezed!

Brezel bihan araog ar brezel bras.

**

Tremenet ar brezel bras a eneb ar Boched: digor a nevez e Frans, ar brezel yud a eneb ar Fransizien.

Mat, setu ama petra lavar ar Skiant, da genta: ar wazed, ar merc'hed-se, nac'het outo, hag outo hepken, ar gwir o deuz an holl da zevel breuriezioù, — ar wazed,

ar merc'hed-se a zo ganet e Frans, douget e Frans war gahier ar beo, gwad Frans en o gwazied; paea reont an tailhou evel an holl; mont a reont d'an armê pa vezont galvet da vont; sitoyned int ha sitoyned direbec'h; da lezenn an emgleviou grêt evit an oll, gant joa e plegint. Met ar reolennoù 13 ha 14 savet evit o skei a eneb al lezenn gommun, ar reolennoù-se a zo eun torfed eneb ar gwir: Ni o brêvo!

Ar Gwir a lavar: bet e 'zeus, e Frans, gwazed ha merc'hed hag a c'houlenn ober skol. O micher eo.

N'ho deus na disenoret o spered na saotret o buhez. N'eo ket warno eo e kouez dourn ar barnar. Fur int ha gouziek re ouziek m'oarvat, rak o skolioù a oa gwall leun. En eur ober difenn d'ezo da gelenn e vreser o gwir, da genta. Ar vistri-se a skolie bugale: diarbennet war eun dro gwir ar vugale da veza kelennet ganto. Ar vugale-ze oa bet fiziet er vistri-ze gant o c'herent; diarbennet ivez gwir ar gerent. Tiez skol a oa bet savet evit digemeret ar vugale-se; an darn vrasa zo bet laeret: diarbennet c'hoaz ar gwir en deuz ar perc'hen war e dra. Eul lezenn evel al lezenn 1904 hag a ziskar kement a wirioù, eun henvelep lezenn a breiz hag a vres, me lavar e c'hell kaout c'hoarezed e Moscou: n'eo ket mat evit Fransizien dis-hual, nebutoc'h c'hoas evit Bretoned digabestr: ni he douaro!

Kristenien e Breiz evel ma 'z eo hor breudeur en Alzas, evelo, ni fell deomp kaout skolioù kristen ha mistri kristen evit bugale gristen.

Oh! n'emaomp ket en amziyin. Mennad hon renerien framasoun eo startaat c'hoaz las ar groug war hor frankizioù: youl o deuz da ober eur skol hepken, ar skol unik, ar skol « national », mar plij! war zigarez unani ar sperejou en eur rei d'ar vugale ar memez kelennadurez. Hunvrê diskiant! — Ar memez kelennadurez? Pehini? Kelennadurez ar skol laik ne 'z eo nemed eun hekleo eus menoziou ar C'houarnamani. Hogen ar C'houarnamant a chench mevelien ken alies hag ar yar he flun pe an aër he c'hroc'hen. He skolioù bet hervez Doue, a glaskas beza neutr da lavaret eo dizoue araok trei eneb Doue; radikal dec'h, socialist hirio, da c'hortoz beza kommunist varc'hoas, n'int ket gouest da unani, ne c'hellont nemet dibezia ar sperejou. Evit unani ar sperejou, n'eus bet kavet c'hoas ha ne vo kavet morse nemet an Ilis katolik dre ma neuz nemeti hag a c'hell rei ar memez traou da gredi, ar memez Credo da gana dre ar bed. — « Skol national », war he lavar, skol ar Vro, ar skol laik-se hag a zo enni hirio an deiz — kreski reont! — 70.000 mestr pe vestrez nac'het ganto o bro goude o Doue? Gwir skol ar Vro eo an hini a skigno menoziou, kredennoù ar Vro. Hogen al loden vrasa, al lodenn wella eus ar Fransizien a zo chomet beo an o c'hreiz ar Feiz kristen ha karantez

ar Frans. Gwir skol ar Vro, dre-se, eo ar skol-libr a zesk d'he bugale karet ar groaz hag an drapo. Ma fell d'ar C'houarnamant gouzout hag eeun eo va c'homzou, n'eo ket dies: n'en deus da ober nemet rei d'ar skol gristen, gant ar Frankiz; he lod eus kef an Deskadurez, he lod eus arc'hant ar Vro, tennet eus godell an holl. Neuze, dizale, ar gaoued laik a vezo dilezet; neuze vo gwelet var be seurt gwézenn e nijo laboused bihan ar Frans.

**

Ra blijo gant Doue — n'eus reket ebed dounnoc'h en hor c'halonou kristen, rak mall eo ganeomp oll labourat didrabas, a unan gant hor breudeur, evit hor Feiz hag hor Breiz, hor Familh hag hor Micher — ra blijo gant Doue e teufe dizale renerien ar Vro da zelaou mouez ar skiant, hag al lealded ha da résteurel d'ar gatoliked ar gwiriou roet heb marc'hata d'an oll zitoyaned all.

Ma n'her greont ket, ma chomont aheurtet en o c'hasoni, eur vouez a zo hag a dregerno, m'oar vat, uhelloc'h eged o imor. Tavet eo kurun ar c'hanoliou; mouez ar brezel n'eo ket mouget evelato. Keit ha ma chomo eun elfenn a vuhez e korf ar brezelour divêza, mouez ar brezel ne baouezo da youc'hal: neb a stourmas evit al liberte a dle bale libr dre ar bed ha zoken war zouar e vro. D'an 2 a yis eost 1914, eur ministr a roas urz da zinerza ar reolennou direiz a stabeze al lezenn gommun. — Peoc'h d'ar relijiused, emezan! Ah! en dro-ma n'eus nemed eul lezenn evit holl vugale Bro-C'hall. An emgleo zantel a zo aozet. N'eo ket re abred p'e gwir emä e bole kloc'h an argad hag an drailh. Hogen, epad ma klasko dek kanfart — hirio ministred — eun toullig kloz bennak evit goudori o c'hroc'hen tener, ar relijiused a zistroïo eus an harlu; diskenn a raint e pri, e tan, e goad an emgannou; 4.000 a zo maro evit silvidigez ar Frans. Unan am eus anavezet, eun tad Jesuit, skoet e kreiz eun asailh. Beziet dillo, e vrec'h zehou, sounnet gant ar maro, a zao er mez eus ar bez. Digant Doue hag an dud, o ministred kalonek, dourn ar manac'h-se astennet warzu an oabl a c'houlenn digoll, a c'houlenn Frankiz ha lealded evit e vredeur hag evit holl gatoliked Bro-C'hall.

**

Va c'henvrois ker, hor gwir a zo skler hag anat. Met, evesaomp, ar peoc'h hor beus an youl zantel da ziazeza, en hor Breiz da genta, war lezenn gommun ar Frankiz hag al lealded, ne anavezo ar gounid nemed ma ouezomp skoazia hor gwir gant nerz galloudek an emgleo.

Selaouit hag e klefot gwell a ze! Eur reolenn nevez a zo da embann, eviti da veza, war eun dro eeun ha kamm:


Unan hag unan a ra pevar! — Pevar, eme c'houi? ze zo mat kenan evit neb a baë, fall avat evit neb en deus da gaout. — Re wir eo; met pa lakeont o fevar droad, nann en eur votez met e peder, pa n'ema ket o c'hostou a-big met a-hed, p'en em lakeont e pevar, na petra-ta! daou zen unanet a dalv pevar distag an eil diouz egile. Unan hag unan a ra daou dre gount, pevar hag ouspenn dre emgleo.

Hogen, soudarded, va c'hamaladed a vrezel, evidompni eun emgleo a zo digor, a gals nerzusa hini a zo bet savet evit harpa gwiriou ar vrezelourien goz. Hanvet eo e galleg: *Union nationale des Combattants*. Pa vo graet en ho parrez eur gevrenn eus an unvaniez vras-ze a zo bodet enni 800.000 eus hor breudeur, m'am selaouit, c'houi roïo d'ezi hoc'h hano ha dreizi e reno' menozion ar re a c'hounezas ar brezel, bet espernet gant Doue evit gounit ar peoc'h.

Bremaik, urz an Aot. 'n Eskob, hor mestr a-berz Doue hag an Ilis, a dregerno. Eus ar rezad kenta betek an diveza, ne gavo, etouez an hanter kant mil katholik bodet ama, nemet gwazed prest da veska nerz o spered, nerz o c'halon ha, dioc'h red, nierz o izili evit difenn gwiriou kristen hor Breiz.

Gwech-all, pa welas tri c'hant mil euz e genvrois dastumet en dro dezan hag en o sav evel eun den, « quasi vir unus », evit dishuala o bro, Saul a youc'has d'ezo: « Warc'hoas, emezan, araok ma vo uhel an heol, Israël a vezo libr! »

Warc'hoas, pa zeui tri c'hant mil Breizad pennok ha sentus da rei an dourn da gatoliked Bro-C'hall sklerijen-net, kelennet gant o Eskibien, renet war dachenn ar vro gant ar c'hristen holl-vrudet ma 'z eo ar jeneral Castelnau, warc'hoas ivez Bro-Vreiz ha Bro-C'hall a vezo digabestr!



Endro da Eteo Nedeleg

Derou mat Alan Per

War ribl koad ar C'hranou, eun ti-soul kropet din-dan ar skourrou. E brenestr bihan, evel eul lagad ruz, a ra eun toullig sklér e kreiz tenvalijenn an noz. Goulou zo; tan ivez, ken e weler a-wechou fulennou o sevel en ér, dre c'henou ar chiminal izel. Riskl ebet, avat, ne grogfent er c'hoad, rak gant erc'h eo sammet ar skourrou, erc'h a c'holo ar parkou hag erc'h a gouez dre vare. Ar goanv a zo krog da vat gant e labour: goude bezan diwisket ar méziou, krazet ar glazur gant reo, frim ha skorn, skubet an deliou, e led breman war bep tra e zae voug ha gwenn. Met noz Nedeleg a zo, na petra 'ta! Evit digemer an aotrou, n'helle ket bezan kaeroc'h noz-vez goanv eget ma zo fenez, an oabl glas ha digoumoul karget a stered aour; an douar kempennet a-nevez gant eur vantell wenn-kann...

An dud ivez, e ti Alan Per, a zo war c'hed eus ar nevezenti vras. Emaint holl endro d'an oaled, nemet tan daou vihanan a zo ét d'o gweleou. Eum tantad-tan, gant eur pikol eteo savet war c'horre, a zev en eur skrabat hag en eur skei e deodou ruz uheloc'h eget mantell ar siminal. Daou bodad jistr a zo unan a bep tu d'ar glaou; e kichen an tad, ez eus eur podad; egile a zo ouz treid an amezeg, Olier Visant, deut gant e zaou vab da dremen beilhadeg Nedeleg, da c'hortoz mont d'an oferronn hanter-noz. Ar c'hognou uhelan a zo d'ar re-man, war ar bank-tosell, en daou du d'ar fornigell. Gwreg Alan, e verc'h hag e zaou hôtr a zo azezet war eur bank-tôl, a-hed gant an oaled. Hag an teodou a ya endro: keleier dastumet ac'han hag alesont hag en em dremener an eil d'egile: Alan a oa bet dec'h er foar; Olier a oa bet er barrez nesa o prena ed da hada:

— Ker eo ar gwiniz, emezan. Sonjit em eus ranket paea 65 lur ar c'hant!

— Va Doue, eme Soaz, gwreg Alan, da belec'h ez eomp, tud kèz? Hag aman n'ez eus bara nemet en eur breña! Seiz, bemdez, war ar boued!

— Alo! eme Alan, lezomp fenez hon trubuilhou a-gostez. Nedeleg ne vez nemet eur wech ar bloaz hag a c'hourc'hemenn d'eomp beza laouen.

Deus aman, Monig, e kichen ar goulou. ha kan d'eomp eur werz pe eun nouel bennak! « Spered sakr ha divin », alo!...

Mouez ar plac'hig, flour, seder ha skanv, a zavas e

Kreiz sioulded an ti, an holl o vezan tavet da zelaou. Pa voe achu an diskan ganti, an tad a grogas war he lerc'h, gant eur vouez kurun, ken na goueze ar poultr diouz treustou an doub (1).

Spered sakr ha divin, m'ho ped, reit d'eomp ar c'hras!...

Va Doue! eme Soaz, daoust ha red eo huchal kement-se war an Aotrou Doue? Dihuna 'ri ar vugale, da vihana!

Monig a zavas ar poz all hag an eil e teujont war-lerc'h egile, an ti o sklokal bep tro gant an diskan adlavaret a-bouez penn gant an holl.

E keit ze, eteo Nedeleg, gant an teodou ruz o lipat anezan a bep tu a oa kroget da flamina da vat hag a dôle nerz diwarnan vel diwar genou eur forn c'hôret; red e voe kas ar bank-tôl war drev. Ar bôtred, harp o c'hein ouz ar gweleou, a jache o diouhar ganto gwella ma hellent.

— Pebez eteo! eme Olier; ès eo gouzout ez omp aman tost d'ar c'hoajou hag eo Alan eur c'heunteaer mat!

— Awechou! eme Alan. Sonj az peus, emezan, en eur zizrei warzu e wreg, eus an eteo am oa digaset d'it... spenzek vloaz zo bet abaoe disul?

— Va Doue! emezi; biskoaz n'am eus bet gwasoc'h gaouad eget en noz-ze!

— Petra 'ta? eme ar re yaouank, savet o skouarn ganto; eun eteo penôs e oa hennez neuze?

— Oh! eme Alan; eun eteo seurt ne weljoc'h biskoaz, na den ebet ivez. Evit gwir, n'eo ket eun eteo e oa...

— Petra 'ta? eme ar re yaouank.

— Kont ze d'eomp c'hoaz! eme Olier.

Alan a grogas er podad jistr, a reas eur jach warman ha, goude bezan grêt eun torch d'e vuzellou gant kil e zorn, e stagas ganti:

— Olier aman, emezan, en deus sonj mat eus ar reuz a voe aman, gwechall, gant ar bleizi. Ne dremene goanvez ebet na vije tizet ganto tud, bugale, da vihana... Dont a rént en noz er c'hériadennou distro hag e samment ganto piou bennak en em gave diwezat o vale, nemet eur gwaz e veze hag eur benveg bennak en e zorn d'en em zifenn... Ar bloaz ma lavaran d'eooc'h, bloavez kriz ken e varve al lann war ar girzier, denved, leueou, saoud ivez a oa bet kollet eus ar parkou ha betek eus ar c'hreier, aman, wardro d'ar c'hoad. Tud, zoken, a oa bet e riskl o buhez gant eur bleiz bras, eur « bleiz kezeg » hag a lake ar spouron dre holl. Ne grede ket ken ar mamou kas o bugale d'ar skol; ar merc'hed ne gre-

(1) An doub: le plafond.

dent ket ken bale goude serr-noz; ar bôtred, e meur a di, a ranke kas boued d'ar moc'h ha d'ar zaoud diouz ar beure ha d'an noz.

An ôtrou Person a zisklerias er gador, an eil sul eus an Azvent, ne vije ket lavaret oferenn noz Nedeleg, rak ne felle ket gantan gwelet an dud o tont, e riskl o buhez, d'an iliz da greiz an noz: nevez a oa, eur bugel a oa bet sammel diwar dreujou ti e dud, gant ar « bleiz kezeg ». Al loen-ze, kement hag eun ouner vloaz, a oa bet gwelet, meur a wech, e pevar c'horn ar barrez; n'en doa ket aon da vale, zoken, war greiz an deiz kaer, ha da lammat war ar vesaerien koulz ha war o loened.

Klasket e oa bet tizout anezan; ki ebet, avat, ne grêde mont warnan hag an holl chaseerien a oa dizroet d'ar gêr gak. Digarez a-walc'h d'an ôtrou Person da gloza dor e iliz da noz Nedeleg.

Kement rak se, me a fellas d'in ober ar gouel, gwel-la ma helljen, aman en ti. Bep bloaz e pourhasen, eur pennad a-rôk, eun eteo Nedeleg eur reor gwezenn zero bennak pe eur pezh fao-put, ar seurt-se ha n'hell ket ar vouc'hal mont enno. Eur zadorn d'abardaez, — en deiz warlerc'h e oa pevarê sul an Azvent, — ha me ha tapout eur vouc'hal troad berr hag eur zac'h a zervije d'in da lakat va skodou e zonzj mont da geuneuta. Soaz aman, o c'houzout pelec'h e vennen mont, a reas he seiz posubl evit derec'hel ac'hanon er gêr: « Ba ! ba ! mon-me ! D'ar vugale e vez grêt aon gant ar bleiz ! Met da vleiz-marc'h ne spont ket ac'hanon-me ! mar her c'havan, me lako anezan em zac'h. »

Hag ar pôtr endro. Yen e oa ken na suilhe: erc'h skornet ha teo a oa war an douar hag an amzr a oa stummet adarre diouz ober erc'h. Al loar en he c'hann a bigne du-hont, ruz-tan, dreist bolz ar c'hoajou. Ar stered a oa krog da ziouan en oabl, e giz bleun aour en eur flourenn c'hlaç. Trouz ebet war ar mêziou na kristen ebet war vale...

Goude eur pennad kerzet, en em gavis el lanneg elec'h am oa d'êlet evez ouz eur chouch dero, noaz ha kalet, diwisket ar wignenn diwarnan gant an amzer evel ar c'hig diwar eun askorn. Lann hir, uheloc'h kalz egedoun, a garge al lanneg betek war ar c'hleuniou; eun tammig gwenojenn hepken, grêt gant al loened pa deuent d'ar peuri d'ar park-se, a hede ar girzier trodro. Hag e sonjen, en eur dreuzi al lann hag ar strouez: Aman ez eus bodenn vat ha frank d'eur bleiz ha da veur a hini.

Bale a raen eta gant evez, va bouc'hal em dorn. Pa voen arru gant ar chouch, e renkis, ken doun ha ma oa an doufez dindanan, krapat gant ar harz da gaout va zu warnan. Tenna ris an erc'h diwar e dro gant va

daouarn ha pa 'moe dizoloet ar wrizienn vras, e skois warni eun tól pounner gant va bouc'hal... Dao!... ker-kent, eur yudadenn spontus, hag eul loen pounner a lammas dious an doufez, gozik a-zindan va zreid, hag a zizroas warnon, diou c'hlaouenn ruz hag eur skilfou gwenn en e benn: Ar bleiz! emon-me. Ha ne voen ket peli evit gouzout eo ar « bleiz-kezeg » e oa. Eul lamm all a reas war ar c'hleun, evel ma rafe eur c'hi, da goueza warnon a-ziadrenv. Ne voen ket pelloc'h egetan o lammat dreist d'an doufez el lanneg; ma lavarais d'ezan neuze, e brezoneg mat: « Aho, pôtr, deus breman! » Ma oa lemm e zaoulagad, va re a oa ivez ha va dorn, war va bouc'hal, ne grene ket.

Al loen a chomas eur pennadig difinv, chouchet, prest da gregi. Hag hen hag ober adarre e lamm. Va bouc'hal a yudas ker prim all hag hen tizas arôk m'oa kouezet... Eur yudadenn gounnaret; met ne oa bet nemet gloazet... Dampred, tudou, fromma 'ra c'hoaz va gwad pa zonzjan!... Ar bleiz-marc'h a zizroas krenn hag a frammas warnon; diou gammed a-drenv ha va bouc'hal a gouezas adarre war e gostou. En dro-man, e oa bet gwasoc'h tizet, rak asoupa a reas war e zivesker. N'am boe ket amzer, rak askoude, da rei eun all d'ezan ma oa 'n e zav ha warnon... Va zôl a chomas berr; ne dizas ket anezan a-bloñ. Koueza ris war ma glin gleiz, gant ar bleiz e dreid arôk war va diouskoaz ha, war va dremm, e alan entanet. Skei a ris va fenn dindan e c'harr dehou, kregi en e greiz a-dro vriad ha da starda ma ouien ober!...

Alies em buhez em boa grêt krogou gouren; biskoaz seurt hini! Gwad ar bleiz a rede war an erc'h ha va hini ivez, rak e ivinou a skrabe va c'hein ha va diouvorzed. Kregi n'helle ket, dalc'het evel ma oa ha red d'ezan tennan stank e alan gant a vec'h a laken warnan. Her moug a felle d'in, hep bezan red d'in chench lec'h, rak neuze e skilfou o dije labouret. Hag e starden ken e strake ma diouskoaz: Hogen, eskern ar bleiz a strake ivez. N'em zifreta rê vel eun diaoul, met me oa harpet mat diwar va daoulin ha va zreid ha va diouvrec'h ne oant ket o vont da ziskoulma! « C'hoari 'ta! emeon; loen vil! » Eur momed c'hoaz hag e lôskas — respet d'eo'h! — eur foueriadenn ken teo ma vennis stonka gant ar flêr... Poueza ris gwasoc'h-gwas gant an holl nerz a chome em c'halon hag em izili!... Santout a ris souden, dre e c'heol entanet, ar gwad tomm o vera war va c'hein; e benn a gouezas gantan hag e gorf a zistennas. Eur jachadenn pe ziou hag en em dezaz da vont flak etre va diouvrec'h... Maro oa... Piou a lammas a-drenv? Me, a dra zur, ha, kregi em bouc'hal! Eun tól kounnaret a-dreuz d'e c'houzoug hag e ruilhas e benn

en doufez... Ar gwad a blommas diouz ar gwazied trou-
c'het hag à ruzias an erc'h tro-dro...

Me a deuas an derzien d'in neuze. Vel eur barr deliou
en em lakis da grenna, da grenna, ma kouezis hanter-
zemplet d'an douar: arru e oan e penn va nerz. Eun
dornad erc'h sunet a dammou a reas vad d'in; met ma
vije 'n em gavet eul loen all war an töl, e oan ét sur e
k... bleiz.

Eur pennad e voen o tenna va alan. Pa 'n em gavis
sounn adarre war va zachou, e sonjis e tlie Soaz bezan
nec'het ganin, dreist-holl mar he doa klevet ar bleiz
o yudal, ha me tapout va zac'h... Ya, met ne oa eteo
ebet ebarz? Mat, setu aman an hini am eus disklonset,
penn ar bleiz. Teurel anezan er zac'h hag ar zac'h war
va choug'ne badas ket pell ouzin d'ober. « D'ar gêr bre-
man! 'mon-me. Va c'halon a dride; nijal am bije grêt...

— N'eo ket gwall deo an eteo a zo deüt ganit! eme
Soaz, p'am gwelas o tont en ti gant va zac'hadig.

— Mat! Start eo bet da gaout, da vihanan!

— Ne peus ket klevet ar bleiz o yudal? emezi, an
dour en he daoulagad.

En eul lavaret ze, he doa tapet krog e lost va zac'h
hag e tiskargas anezan war leurenn an ti. Va Doue!
Pebez skrijadenn a deuas ganti! Da rei da gredi e teue
sod. Lammat a reas da gern an tar en eur guzat he
daoulagad gant he daou zorn:

— Soaz! Soaz! emeon; gwelet a réz eo maro! Ne zi-
frommas ket ken na voe da zaou deiz goude... N'eo ket
gwir, va gwreg?

Ar bôtred a oa dirollet da c'hoarzin hag ar re
yaouank a zelle gant doujans ouz an hini a oa bet o
c'houren gant ar bleiz-marc'h.

— Me ivez, eme Alan, a chomas eur pennad evel no-
tet va izili ouzin... N'eus forz an deiz warlerc'h, pa voe
gouezet e oa maro ar bleiz bras, an holl a voe stad enno.
An aotrou Person a lavaras e vije grêt oferenn hanter-
noz.

— Ya, eme Soaz, hag eur bater a lavaras evidout ive
e pron an oferenn-bred.

— Red e voe d'in, eme Alan c'hoaz, mont da gestal
gant kroc'hen va bleiz. Da dri bloaz goude, n'am boe
ket ezomm da laza penmoc'h ebet... Seurt derou mat
n'am eus ket bet abaoe.

Unnek eur a zonas e traon an ti. Soaz a zavas da ger-
c'hat dour da deurel war eteo Nedeleg. Ar bôtred a za-
vas ivez, kaoz ar bleiz ganto bepred, hag a yeas da ofe-
renn an hanter-nouz.

Breizadig.

Pedervet kenstrivadeg ar C'hardinal Dubourg

Eur zell war al labouriou

Labouriou mat ha re fall am eus kavet, bugale etouez
ho teveriou; er re falla gouskoude e vez kavet eun dra
bennag a vad, hag ar re-man en eur gendelc'her a dostao
ouz ar penn kenta; poania kals a rankint avat.

Skoliou merc'hed Leon ha Kerne a zigas deveriou; ar
skoliou paotred a jom atao mouzet; unan hepken a zo bet
divorfilet, skol Lesneven, hag evit an taol kenta he deus
digaset 55 dever: Daoust ha bugale ar skoliou all o defe
tapet klenved ar c'houset?

Evel er bloaveziou all kalz geriou kamm, tort ha luch
a gemerit. Me a gave d'in ho poa daoulagad mat; fazia
em eus grêt; rei a ran deoc'h eta an ali da gemeret eul
lunedou. Gwelet a reot gwelloc'h penaos e vez skrivet ar
geriou, ha ne gemerot ket ar re c'hallek evit ar re vre-
zonek.

AL LABOURIOU

I. — *En ugent linenn, d'ar muia, displegit buhez Jezuz:*
a) *bugel*, b) *micherour*, c) *ar c'henteliou kaer a ro deomp*
dre e vuhez kaer ha kuzet.

Ar goulenn a lavar: *buhez Jezuz bugel ha nann gini-
velez*; ha gouskoude an diou drederen ac'hanoc'h a ge-
mer bugaleac'h evit ginivelez. Sellit eta piz ouz ar gou-
lennou hag e kollot neubentoc'h a amzer.

a) *Jezuz bugel.* — N'oa ket a ezom da zua kalz paper
evit hen displega.

D'e zaouzeg vloaz ez aes gant sant Joseph ha Mari e
vamm da Jeruzalem evit goueliou pask. Kollet e voe ha
kavet etouez an Doctored, en Templ, estlammet holl o
welet e furnez hag e ouiziegezh. Dizrei a reas da Nazareth
hag eno e tremenas e vuhez o labourat hag o senti beteg
an oad a dregont vloaz.

b) *Micherour.* — Labourat a rae evel an distera eus
an dud. War be seurt micher? Sant Joseph a oa kalvez,
Jezuz a zeskas gantan ar vicher-se, hag a c'hounezas e
vara diouz c'houezen e dal.

c) *Ar skoueriou a ro deomp.* — 1) D'ar vugale e tesk
beza sentus e kenver o zad hag o mamm; beza madelezhus
e kenver ar vugale all. E veach e Jeruzalem a lavar d'ezo
poania da zeski lezenn Doue, beza aketus da vont d'an
Iliz, d'ar c'hatekiz hep sellet ouz hirder ha skuisder an
hent.

2) Deut en oad e lavar d'eomp dre e labour, rei skoazell d'ar re o deus hor maget hag hor savet. Da bep micherour kristen e tesk talvoudegez ha kaerder al labour. Pa en deus eun Doue labourer gant e zaouarn evit gouñit e vara perag hon defe mez o rankout ober eveltan?

II. — *Ar skouer fall. a) Petra eo? b) Pegen bras eo an torfed-se? Penaos rapari ar gaou graet?*

a) Rei skouer fall a zo ober pe lavaret eun dra bennag a hell dougen an nesa da offansi Doue. Rei a heller eta skouer fall: dre oberiou, dre gomzou, dre leziregez pa lezer an dever da ober. (An den a vez douget da bec'hi, pa vez roet dezan kenteliou, aliou ha gourc'hemennou fall, pa vez meulet evit an droug a ra, pa vez goapaet evit ar vad a heulh, pa vez torret lezenn Doue dirazan en eur c'hiz bennag rag troet oar da ober ar pez a weler ar re all oc'h ober). A. CAER. — *Kelennadurez kristen.*

b) Ar pec'hed-se a zo grevus, rag an hini a ro skouer fall a laz buhez an ene hag a labour da garga an ifern. Jezuz en deuz lavaret anezan: malloz d'an hini a ro skouer fall; gwelloc'h e vije d'ezan e vefe staget eur maen milin ouz e c'houzoug, hag e vefe taolet e goueled ar mor.

Ar skouer fall gouskoude n'eo ket atao pec'hed marvel, beza ez eo bras pe vihan hervez an droug a ra. Kreski a ra avat hervez ar volontez en deus an hini hen ro da ober droug hag an anaoudegez en deus eus an droug a raio. Kreski a ra c'hoaz hervez stad an hini her ro. Eur skouer fall roet gant ar zuperioed a zo atao grevusoc'h dre ma teuio buanoc'h ar re a zo dindanno d'ober evelto.

c) An hini en deus roet skouer fall a dle goulenn pardon digant Doue eus e bec'hed-ha-zoken eus ar pechejou en deus lakaet da ober. Dizrei war an hent mat dre e skoueriu hag e aliou kristen ar re en deuz lakaet da goueza, ha d'an neubeuta pedi evito pa n'hell ket ober muioc'h.

III. — *Ar C'hatekiz a lavar deomp: e tleomp klevet an oferenn gant evez ha devosion. Pere eo an doareou gwella da zont a-benn a gement-se?*

Aman ar responchou n'int ket eus ar gwella.

Kalz ne reont nemet eil skriva ar pez a zo er c'hatekiz. Lod all a lavar er giz-man: arabat chom hanter gousket war ar gador o trailha pateriou. Beza ez eus tud, eme unan all, a jom e toull an nor evit mont kentoc'h er maez. — Meur a hini, eme eun trede, a zo en iliz evel peuliu.

Traou gwir a lavarit, hag ar re a en em zalc'h er giz-se a ra goap eus an Aotrou Doue. N'oa ket avat goulennet diganeoc'h penaos en em *zerc'hel* epad an oferenn, met penaos *klevet* an oferenn; n'eo ket ar memez tra.

Evit klevet an oferenn ez euz teir zoare.

1) An doare kenta hag an aesa eo kemeret eul leor oferenn, klask oferenn an deiz hag heulia el leor ar peden-

nou a lavar ar beleg. Arabat mont re vuan, ober bep an amzer eur zell ouz ar beleg evit e heulia hag en em unani gwelloc'h a-ze gantan.

2) An eil doare eo lodenna an oferenn e peder lodenn.

a) Eus an Introit beteg an Aviel e c'heller adori Hor Zalver, anzaou hon neubeut a nerz, hag e anaout evit hor Mestr.

b) Eus an aviel beteg ar Gorreou, goulenn digantan ar pardon euz hor pechejou.

c) Eus ar Gorreou beteg ar Gommunion e drugarekaat.

d) Goude ar Gommunion goulenn digantan e c'hrasou. Sant Alphons a Ligori a alie kalz ar gristenien da glevet an oferenn en doare-se:

3) An trede doare eo sonjal e Pasion Hor Zalver.

a) Gant ar beleg e traon an aoter e welomp Jezuz stouet er Jardin Olivez, pe o koueza dindan pouez pechejou ar bed.

b) Ar beleg o vont eus an eil penn d'egile d'an aoter eo Jezuz kaset, euz an eil varn d'eben.

c) Ar beleg o walc'hi e zaouarn eo Pilat o walc'hi e re.

d) D'ar Gorreou pa zao ar beleg an Hosti e sonjomp eo Jezuz savet er groaz.

e) D'ar Bâter e silaouomp komzou diveza Jezuz.

f) D'ar Gommunion gant ar Werc'hez e kemeromp truez ouz Jezuz lakaet er bez.

Sant Franses a Zal a gare kalz an doare-man.

Kemerit an doare a blij' d'eoc'h ar muia. Eun dra vat eo chench bep an amzer; ne glevot an oferenn nemet gant muioc'h a evez, ha ne dennot anezi nemet muioc'h a c'hrasou.

IV. — *Anna, bugel dievez ha froudennuz he deuz bet ar renk diveza er c'hatekiz: Droug enni e skuilh malloz war ar vugale all da dreist holl var he mestrez. Reketi a ra e teufe ar merc'hed da jom berr en examin; e vefent klanv, n'hellfet mui deski tamm hag e vefe kaset he mestrez da logota da venez Are.*

Goulenn a raer: 1) Anna hag hi he deus pec'het marvelamant? 2) Ha blasfemet he deus? Displegit.

D'ar goulenn-man ez eus bet respontet fall du, ha displeget falloc'h c'hoas. Setu aman unan bennag eus ar responchou, hag an darn vrasa a zo er giz-se. — Anna n'he deuz graet nemet dizenti — Anna n'he deus ket a volontez parfet. — N'he deus ket graet eur pec'hed marvel, rak logota e Menez Are n'eo ket eur vicher eo. (*An holl a oar an dra-ze*). — Anna he deus graet eur pec'hed kapital, an Avi.

Blasfemet he deus dre m'he deus gwall gomzet eus he mestrez. — Drouk pedennou he deus graet. Hag erfin ar respont-man hag a zesko deoc'h kalz traou: Anna he deuz graet eur pec'hed marvel pe eur pec'hed veniel. Dal! setu aze eur respont sklêr ha n'em befe ket kavet buan.

Eun hevelep goulenn a oa nevez evidoc'h, ha n'oun ket souezet ho pefe en em zruilhet ganti; dont a reot buan da gemeret an tu da zibuna hevelep goulennou.

Setu aman eun doare da zont a-benn:

- 1) Anna hag hi he deus pec'het marvelamant? Nann.
- 2) Ha blasfemet he deus? Nann.

Perag? — Teurel malloz ha c'hoantaat gwelet droug o figouezout gant an nesa a zo fall. Ar pec'hed-se a zo bras pe vihan hervez ma torr kalz pe nebeud lezenn ar garantez kristen.

Evit ma teufe ar malloz-se da veza eur blasfem e ran-ker en em gemeret ouz Doue pe ouz an traou santel.

Anna a c'hoanta e chomfe ar vugale all berr en examin, e vefe kaset he mestrez da logota. Ar merc'hed a vije poaniet o chom berr en examin, kement-se koulskoude n'eo kemeret gant den evit eun droug bras; Anna eta n'he deuz graet nemet eur pec'hed veniel.

N'he deus ket blasfement ken nebeut, rag n'he deus ket komzet nag a Zoue nag a draou santel.

V. — *Yvonig a laër bemdez d'eun den pinvidik daou wenneg.* 1) *Ha pec'hi a ra?* 2) *Pe seurt pec'hed?* 3) *Lakomp ne ra nemet eur peched veniel, ha dont a c'hell da veza eur pec'hed marvel?*

Ar c'heaz Yvonig a zo bet lardet mat ive ganeoc'h.

Yvonig eme unan en devezo graet eur pec'hed marvel pa en devezo laeret tregont lur.

Dont a c'hell eme unan all da ober eur pec'hed marvel rag meur a bec'hed veniel a c'hell rei dapvez eur pec'hed marvel. — Fazi bras. Gwelet ho peus, paotr, ar c'harotez en eur park o trei e beterabez? Nann, na me kennebeut. Ar pec'hejou veniel a zigor hent d'ar pec'hed marvel, morse avat pegen niverus bennak e vezint ne raint eur pec'hed marvel.

Ar respont eta a oa er giz-man.

- 1) Ha pec'hi a ra? — Ya.
- 2) Pe seurt pec'hed? — Pec'hed veniel.
- 3) Dont a c'hell da veza eur pec'hed marvel? Ya ha nann.

Perag? — Laërez a zo atao pec'hed, e c'hell beza avat bras pe vihan hervez ar pezh a laërer. — Pa raer meur a laëronsi bihan gant ar volontez da gaout nebeut ha neu-

beut eur yalc'had vat, e raer eur pec'hed marvel bep wech ma raer eul laëronsi vihan; rag ar volontez a zo fall beteg ar pec'hed marvel, hag an holl laëronsiou bihan a zo holl unanet er volontez-se. Ma n'en deus ket ar volontez-se ar pec'hed a jomo atao veniel.

Rag-se eta Yvonig a bec'h; ne ra avat nemet eur pec'hed veniel, rag daou wenneg a zo neubeut a dra.

Daoust ha bolontez en deus da zestum nebeud ha nebeud eur zomm vras. Neuze e ra eur pec'hed marvel bep wech. Ma n'en deus ket ar volontez-se, ma ne ra kement-se nemet dre c'hoariellerez, e bec'hed pegen alies ben-nag a raio e laëronsi a jomo atao veniel.

VI. — *Eur bugel a lavar deoc'h: disul eman ar pardon em farrez, pebez plijadur!*

Karet a rit ar bugel-se hag evit ober dezan vad e tis-plegit e berr gomzou: a) *petra eo eur pardon,* b) *penaos en em brepari d'ar pardon,* c) *penaos tremen ar pardon.*

Pep hini hervez e c'halloud en deuz respontet madik a-walc'h d'ar goulenn-man. Holl e kondaonit ar re ne welont er pardon nemet an dro da ziskouez dilhad kaër, n'ho peus nemet disprij evit ar re a glask en deiz-se an dansou hag an ebatou. Mat tre! Hini ac'hanoc'h avat ne fell dezan mont d'ar gêr heb ober eun dro var ar c'hezeg koat ha karga e c'hodellou a vadigou. Prenit madigou ma plijont deoc'h, ha kasit o lod d'ho preudeur ha c'hoarezed a zo chomet er gêr. Met, me ho ped, lezit ar c'hezeg koat, ha stalikou all a gostez. N'eo ket pec'hed mont warno na sellet outo; masterenna a reont d'eomp avat hor pardonioù. Dizrei a reont an dud eus ar bedenn, ober a reont eun drouz ma torrout penn an holl, kemeret a reont kement a hent ma en deuz bec'h ar brosesion o tremen ganto. Diwar hon tro an holl vekanikou-ze deiz ar pardon; ha chom a raint pell ma karfe holl vugale Vreiz chom heb mont warno, ha mont da zigeri o genou dirazo.

Petra eo eur pardon? — Ar pardon eo Gouel Sant Patron ar Barrez. Hen eo hor skouer, hon difennour dirag Doue, en eur ger Hon Tad. Eur bugel a dle enori e dad, bale war e roudou, evit-se e tleomp bep bloaz ober d'ezan eur gouel kaër; setu ar pardon. An Tad-se a zo e zell var-nomp, deiz e c'houl dreist oll; en e zaouarn Doue en deuz laket grasou puilh; deomp da gaout hol lod outo, hervez an aked a lakaimp da dremen mat ar pardon.

Penaos en em brepari? — Lenn buhez hor Zant Patron; peb den er barrez a dle anaout ar vuhez-se evit tenna anezi skouerioù talvoudus. Klaskomp ive hon dilhad kaëra evit an deiz-se? Penaoz? O vont da walc'hi hon ene e douar ar binijenn. Eün ene gwenn, kaëra gwiskamant evit eur c'hristen hag a lakaio gant dudi daoulagad e Dad da bara warnañ.

Deiz ar pardon. — Mont da gommunia, Doue en hokalon hag ho Sant Patron e zell varnoc'h, c'houi a raioeun dervez mat. D'an oferenn-bred, an holl barrisioniz a vezo aze hag en o c'hichen ar gerent deuet d'o gwelet. D'an deiz-se eo diskouez ho mouez evit heulia an toniou kaëra, digeri ho tiskouarn evit klevet meuleudi ho Sant Patron, ha lakaat stard en ho penn ar c'henteliou a rodeoc'h.

Goude an oferenn, buan d'ar ger da zebri ar pred; arabat d'ar gwazed chom da c'hlaourenni en hostaleriou, na d'ar merc'hed lakaat eun hanter dervez etre pep plad, ma o deuz fardet eun tamm pred bennag. Anez e vezo gwelet an daolenn iskiz-man: (hag e vez gwelet e meur a barrez) an Iliz leun chek d'an oferenn bred, hanter c'houllo d'ar gousperou.

An Iliz a dle beza ken leun d'ar gousperou ha d'an oferenn. Heuilhit mat ar brosesion. Arabat chom da ober kae dezi, ha neubetoc'h c'hoaz chom er prenestou evel evit he goapaat.

Goude ar brosesion e lavaret c'hoaz eur bedenn en Iliz, d'en em lakaat dindan skoazell ar zant Patron... ha d'ar gear. Prena a c'hellot mar kirit eun dra bennag da gas lod ar pardon d'ar re a zo choumet er gear, met ouz ar staliou sell ebet, hag ar gwella lod pardon a c'hellfec'h rei eo ar pedennou c'houek ho pezo lavaret evit an dud n'o deusket gellet dont da enori ar zant Patron.

J.-B. MARTIN.



Ar baleer. — Pebez gwall amzer a zo adarre; an holl a en em glemm eus ar glao!

Al labourer. — A gav d'eoc'h? Goulennit ouz ar melfed ma n'int ket laouen o welet ar glao-se o koueza.



Eun den oajet hag eur plac'h yaouank. Hen. — Ah 'ta Annaig, gwall d'eval e kavan da benn hizio; o klask petra emaut?

Hi. — O klask an hent da vont da Paris.

BUHEZ JENOVEFA A VRABAN

skrivet gant GLAODA 'R PRAT, ha skeudennet gant an Dimezell O. DE VILLERS, loreet he labour gant Skol-veur Ijinou-kaer Roazon.



XII

Jenovefa a gouez klanv

An Ankou, evit gwir, a deu d'he zaludi,
Hag he mab a c'hoanta mervel ive ganti.
Doue a gas eun el da rei d'ez i yec'hed
Ha buhez ken na vo embannet he glanded.

MEUR a vloavez a dremenas en doare-ze evit Jenovefa hag he mab. Seiz goanvez a oa aet ebiou d'ez i abaoe ma oa bet kaset kuit eus kompagnunez an dud-all. Ar goanv betek neuze ne oa bet morse re galet; er bloavez-man avat Jenovefa he devoe kalz poan da c'houzanv eus e berz. Eur gwiskad teo a erc'h a c'holoe ar c'hoad; skourrou ar gwez a blege gant ar zamm betek an douar. Jenovefa he doa poaniet kalz da stoufa toull dor ar c'heo evit miret ouz an erc'h da zont ebars; 'en aner, siouaz! Kaer he devoa en em vouta dindan berniou mab lakaet ganti da ober he gwele, ne c'helle ket miret he c'horf diouz ar yenien. An domder a deue eus an heiez n'oa mui a walc'h anezi da domma eul lec'h skornet evel ma oa ar c'heo

Hag er mêz, ar bleizi 'a yude, al lern a glemme en noz hag' en deiz. Jenovefa ne gouske taken gant aon na deuje al loened gouez d'o debri, hi hag he bugel. Benoni a c'houzanvas kalz nebeutoc'h eget e vamm o veza m'oa boaz diouz an dienez; n'en d'oa gwelet ken. Jenovefa avat, savet ken dibikouz, a voe darbet d'ezi mont da fall en toull-ze ken terval ha ker yen. Hag e ouele, hag he daelou, kerkent, a veze troet e frim.

— « M'am bije, emezi, eun tammig tan da vihana ! Gant pegement a anaoudegez vat e trugarekafen Doue evit eun hevelep madelez ! Gwelet a ran, siouaz ! e vezo ret d'in mervel gant ar riou pa 'z eus kement a goad endro d'in ! Evel a gerot atô, va Doue ! Plega a ran a greiz kalon d'ar pez a fell d'eoc'h. »

Dont a reas da veza treut ha drouk-livet; he daoulagad a oa ét doun en he fenn ha n'o doa ken kement a sked : Jenovefa n'oa mui warni nemet liou an dienez, ar boan hag ar reuz.

— « Petra hoc'h eus, mammig ? a lavaras d'ezi Benoni, leun a anken ; n'oc'h mui henvel ouzoc'h hoc'h-unan ! Va Doue ! va Doue ! petra c'hoarvez ganeoc'h ? »

— « Va bugel ker, ar pez a c'hoarvez eo ez eun klanv ha klanv bras... Me gred emañ o vont da vervel hep-dale. »

— « Mervel ? eme ar pôtr bihan, petra eo an dra-ze ? Morse c'hoaz n'ho peus lavaret d'in petra eo mervel. »

— « Mervel a rin, da lavaret eo ec'h en em roin da gousket evit mad ha ne zihunin mui biken ; va daoulagad ne welint mui sklerijen an heol ha va diskouarn ne glevint mui da vouez sklêr o c'hervel ac'hanon ; va c'horf astennet war an douar ne finvo mui hag a vezo sklaset. A-benn eur pennad e teuio da vreina ha da veska gant an douar. »

— « Va mamm ! va mamm ! arabat eo d'eoc'h mervel ! me ho ped hag hoc'h asped, arabat mervel ! » a lavaras Benoni o tiroll da ouela hag o lampat da bokat d'e vamm a-dro-vriad.

— « Bugel ker, arabat ouela evel-se ; n'eman ket em galloud na beva na mervel hervez va c'hoant : an traou-se a zo etre daouarn an Otrou Doue. »

— « Doue ? eme ar bugel, lavaret hoc'h eus atô d'in eo dreist muzul e vadelez... Ac'hanta, neuze eun dra evel-se ne c'hoarvezo ket, rak me ne garfen ket ober an disterra droug d'eoc'h, n'em befe ket ar galon da laza-eul labous bihan zoken. »

— « Ar wirionez a zo ganez, va bugel, a lavaras Jenovefa; ar pez ne rafes-te ket. Doue her graio nebeutoc'h c'hoaz. Mar hevomp ervad war an douar-man e renimp gantan da virviken en e varadoz. Gwelet ez peus ac'ha-

non, va mab, o stlepel va dilhad koz hag o wiska re nevez digaset d'in gant Doue ? Ac'hanta, pa blijio gant Doue ive e raio d'in lezel ar c'horf truilkek-man da zizec'ha ha da zizrei d'an douar... Va ene, neuze avat, a zilammo, a nijo, da gaout hon Tad eus an nenv ; hennez a roio kaeroc'h d'in. Netra da veza lakaet e kemm gant an eürusded a vezo va lod er Baradoz ; eno, n'em bezo mui da c'houzanv a-bers ar goanv, ar yenien, nag ar c'hlenved ; eno ne skuilhin ket a zaelou, ne huanadin ket, ne deuo koummoulenn ebet da denvalaat va zâl. Di eo ez a an dud a ren buhez fur hà santel war an douar. »

— « Mat, va mamm, me a yelo ganeoc'h, a lavaras Benoni ; me ne jomin ket aman va-unan e-touez al loened gouez ; ar re-ze ne gomzont ket otuzin pa c'houlennan eun dra bennak outo. Me a zo o vont da vervel evel-doc'h, da deurel, evel a livirit, va gwiskamant truilhek. »

— « Nann, va bugel ker, eme Jenovefa, ret eo da bep unan gedal e eur : dont a ri divezatoc'h d'am c'haout d'an nenvou, ma talc'hes da veza fur ha devot evel ez eot breman. Selaou mat bremañ ar pez am eus da lavarret d'it. Pa weli ne gomzin mui, pa ne halanin ket ken, pa weli ne finvo mui va daoulagad em fenn... neuze e vezin maro. Goude e chomi c'hoaz tri dervez aman, ha pa glevi c'houez ar vreinadurez gant va c'horf, neuze ez i ac'han o vale dalc'hmat war-zu ar zav-heol. Pa ez pezo baleet epad daou pe dri dervez e tigouezi e penn ar c'hoad bras-man hag o weli eur pez plenenn dirazout. Eno ez eus tud o veva a villierou... »

— « A villierou end-eün, mamm ? Me gave d'in betek-hen n'oa nemedomp hon daou a dud o veva war an douar ! Asa, mamm, perak ive 'ta n'ho peus ket lavarret an dra-ze d'in kentoc'h ? Ma vijec'h krenv a-walc'h, ni a yaje dioc'htu da gaout an dud-se. »

— « Siouaz ! mab ker, an dud-se eo o deus digaset ac'hanomp aman da vervel en diouer a bep tra. »

— « O neuze, mamm, n'em eus ezom ebet anezo ; me a grede oa an holl madelezus evel-doc'h. Livirit d'in, mamm, daoust hag an dud-se ne dleont ket mervel eün deiz a deuo ? »

— « Eo, va mab, eme Jenovefa, den ne c'hello tec'het dirag ar maro. »

— « Ac'hanta neuze ne ouezont ket, ken nebeut na ouien-me a-rôk hirio. Mont a ran d'o c'haout d'o skolia. Me a lavaro d'ezo : « Tudou, c'houi a varvo, ha ma na deuit ket da wellât, ne 'z eot ket da rouantelez an nenv. » Ha neuze, ma klevfent va c'homzou !... »

— « Paour kêz ! eme Jenovefa, pell a zo o deus klevet an dra-ze ha ne wellaont ket. Ne vank netra d'ezo, traou eus ar gwella o deus da zibri ha da eva, gwisket

kaer int, alies zoken e weler mein a dalvoudegez vras o lugerni war o bruchedou, evel ma lugern ar stered en noz e bolz an nenv. Ne zalein ket da zisplega d'it penôs eo o ziez, o c'hambjou : tommet e vezont er goanv ha ne vez morse a denvalijen enno. An darn vuia eus an dud-se koulskoude ne zaleont ket an disterra da drugarekât Doue evit donezonou ker kaer. Alies e vezont oc'h en em beilhat, o skei an eil gant egile, ker gwas ha ma c'hellont. Mervel a ra bemdez meur a hini anezo ; ar re-all ne reont van ebet evit-se hag a zalc'h da veva en dizurs evel ma tlefent chom atô er stad-se. »

— « Doue ra viro ouzin da vont morse da jom gant tud evel-se, a lavaras Benoni. Sotoc'h int eget an heiez hon eus aze ha ne glev seurt eus ar pez a lavaromp. Gwelloc'h e kavan beva aman gant al loened gouez, eget mont da danva o frejou aozet gwella. Me a jomo aman ; n'ez in biken da gaout an dud-se. »

— « Ret e vezo d'it mont, va mab ; n'ec'h eus ezom ebet da gaout aon razo. Selaou mat ar pez a jom ganen da lavaret d'it c'hoaz. Betek-hen n'ec'h eus klevet hano ganen nemet eus an Tad hon eus en nenv. War an douar ec'h eus eun tad ivez evel ma 'z oun-me da vamm. »

— Eun tad hag a welin evelloc'h, mamm ? Eun tad hg a roio d'in e zorn evel ma roit d'in hoc'h hini breman ? » a c'houlennas ar bugel leun-barr a levenez.

— « Ya, va mab. Gwelet a ri anezan ha koms a ri outan. »

— « O !-eme ar bugel, koms ouz va zad ! Perak ivez 'ta, mamm, ne deu ket an tad-se da welet ac'hanomp ? Perak e lez ac'hanomp aman el lec'h gouez-man ? N'eo ket hen koulskoude marvat eus an dud fall-ze ho peus komzet d'in anezo ? »

— « Nann, va bugel, eun den mat eo, a respontas ar vamm ; da dad ne oar ket e pe stad emaomp-ni aman ; kredi a ra omp bet lakaet d'ar maro : evitan, me eo ar falla maouez a zo bet biskoaz war an douar. Tud fall-lakr o deus roet an dra-ze d'ezan da gredi, o lavaret gevier spontus diwar va fenn. »

— « Lavaret gevier, mamm, petra eo an dra-ze ? »

— « Lavaret gevier, eme Jenovefa, a zo lavaret evel gwir traou hag a ouezer a zo a eneb ar wirionez. »

— « Daoust hag ober a c'heller kement-se ? a c'houlennas ar bugel. Evidon-me n'em dije morse sonjet ober an dra-ze. »

— « Mat, va mab, evel-se eo bet troet da dad da ober droug d'eomp. Hag e kontas d'ezan petra oa c'hoarvezet, da vihana ar pez a oa hervez e dammig skiant. »

— « Sell ouz ar walenn-man, emezi, da dad eo en deus he roet d'in. »

— « Va zad ? eme Venoni. O va mamm, diskouezit anezi d'in, mar plij, ma sellin a-dost outi. Gwelet em eus betek-hen kalz traou grêt gant va Zad eus an nenv, evel ma 'z eo an heol, al loar, ar stered, ar bokedou, n'em eus gwelet netra c'hoaz hag-a ve bet grêt gant va zad eus an douar. »

Jenovefa a lammas he gwalenn diwar he biz hag a lakas anezi etre daouarn he mabig.

— « Brao bras eo, emezan. Daoust hag hen en deus c'hoaz va zad gwalinier-all evel houman ? Ha kaout a ra d'eoc'h, mamm, e rofe unan bennak d'in ? »

— « Ya, va mab, eme Jenovefa o lakât ar walenn adarre war he biz. N'ankounac'ha ket kemeret ar braoig-se diwar ya biz pa vezin maro da gas d'az tad. Betek va maro e chomo aze, evel ma virin atô ar garantez em boa touet d'ezan hag am eus miret atô divlamm. Ar garantez-se a oa glan ha digailhar evel an aour a zo oc'h ober ar walenn-man. D'ezan oun bet ha d'ezan hepken, evel eo bet bepred ar walenn-ze war va biz. Pa vezi digouezet e bro an dud e c'houlenni gwelet ar c'hont Si-froa, hennez eo hano da dad. Goulenn outo kas ac'hannout d'e gaout ; arabat e vezo d'it avat lavaret da zen all ebet na piou out na petra glaskes. Ha gant a ri diouall da ziskouez ar walenn da zen. D'az tad e roi anezi hag e liviri d'ezan :

« Va zad, setu aman gwalenn va mamm ; hi he-unan he deus lavaret d'in digas anezi d'eoc'h evit ma welot ez oun ho mab. Marvet eo breman ez eus eun foullad derveziou. Ober a ra d'eoc'h he gourc'hemennou diveza. Karget oun ganti da lavaret d'eoc'h ez oa divlamm hag he deus pardonet ho torfed. Fiziants he deus d'en em gaout ganeoc'h adarre e baradoz an Otrou Doue, p'eo gwir n'he deus ket bet an eurvad-se war an douar arôk mervel. Pedi a ra ac'hanoc'h da veva bepred hervez lezennou Doue ha re an Hiz, hag arabat e vezo d'eoc'h, emezi, gouela warni. Goulenn a ra ouzoc'h karet ha sevel ac'hanon evel he deus grêt he-unan. »

« Va bugel ker, arabat e vezo d'it, dreist-oll, ankounac'hat da lavaret d'ezan ez oan divlamm ha fidel, ha lavar d'ezan ive eo bet ar re-ze va c'homzou diveza o vervel ; lavar em eus karet anezan betek va huanadenn ziveza. Konta a ri d'ezan penôs em eus bevet ha penôs oun marvet el lec'h gouez-man pell dioc'h an dud. Lavaret a ri d'ezan e karfen e ve savet va t'horf ac'han d'e gas d'an douar santel da gichen korfou va zud varo, rak ne gredan ket ena befe grêt morse netra hag a c'hellje ober an disterra mez d'ezo. Eun dra-all am eus c'hoaz da zeski d'it : bez' em eus war an douar, evelout, tud hag

a garan kenan. Va Doue ! pa zonzan ! n'ouzon ket ha gellat o deus chom hep mervel mar o deus klevet ar pez a zo bet grêt d'in. Mar n'int ket maro c'hoaz e pedi da dad da gas ac'hanout betek enno, prima ma c'hello : ar blijadur o devezo o welet o mab-bihan a raio d'ezo ankounac'hât seiz vloaz anken. O va zad ! a lavaras Jenovefa o tiroll da ouela dourek, mag a wech ho pezo-hu huandet warlerc'h ho merc'h ! ha c'houi, mamm dener, dizec'het ho pezo eienen ho taelou o ouela war stad reuzeudik ho merc'h Jenovefa ! Va zud ker ! pegement e kafen lavaret kenavo d'eoc'h c'hoaz er bed-man ! Siouaz ! lavaret a rafec'h kement-all mac'h oufec'h ez pun beo c'hoaz. Hogen, kredi a rit, hep mar, ez oun beziet pell a zo e korn pe gorn ar gouelec'h. A drugare Doue ! duze, er Baradoz, ni a en em gavo holl adarre. Hep ar gwel a gement-se petra ve hor buhez war an douar-man ? Re a hoaniou hon dije hag an dizesper a c'hounesfe hor c'halon... Ouela a res, va bugel ? Digarez ac'hanon ma ran poan d'it. O koll da vamm evit gwir e kolli kalz, rak me a gar ac'hanout kement ha ma c'hell ar vamm wella karet he bugel ; hogen, Doue a zo o vont d'az tigo ! o roi d'it eun tad hag a garo ac'hanout evel am eus-me grêt. Sec'h eta da zaerou, rak ranna a reont d'in va c'halon. Da dad a garo ac'hanout eus e holl galon ; kemeret a raio ac'hanout war e varlenn hag e lakaio eur bern pokou tener war da dal. Starda a rai ac'hanout war boull e galon o lavaret : ô va mab kêz ! Ha neuze e komzo ac'hanon hag e c'houlennno diganez lavaret d'ezan va doareou dre aman. O sellet ouzit e ouelo gant levenez da veza kavet ac'hanout, e ouelo ive, siouaz ! gant keuz ha gant glac'har da veza kollet ac'hanon-me. »

An daerou a viras ouz Jenovefa da zere'hel da gorn pelloc'h ; koueza a reas war he gwele man hag eur pennad brao e chomas hep gellout lavaret ger, ken dinerzet 'oa.



XIII

Jenovefa war c'hed eus ar maro

Me eo ar maro kris, dinatur ha digar,
N'em eus truez ouz den; me zo dall ha bouzar;
Me n'em eus nep mignon, ha zoken n'am bo ket
Rak den c'hoaz betek-hen n'em eus bet espernet.

HEPDALE koulskoude e torras ar yenien, eun avelig dous a oa deuet da c'hoeza e léc'h avel viz ar goanv. Da greiz-de e teue ar c'heo epad eur pennadig, bannou klouar an heol. An erc'h hag ar frim dre-oll a deuze, klenved Jenovefa avat a yea, siouaz ! war wasât : an Ankou a zirede daveti. Kemeret a reas ar groaz koad grêt ganti he-unan hag hi da lakât he ene e stad da vont dirak Doue.

— « Siouaz ! emezi, n'eus beleg ebet war va zro en eur-man, pa 'm bije kement a ezom anezan d'am c'hovez ha da roi d'in ar bara a vuhez. Gwir eo emao'h dalc'h-mat tost d'in, Otrou, c'houi ar Beleg a hep amzer ! Ya, e-kichen an dud e poan eo e tleer dreist-oll kiask ac'hanoc'h. Dont a rit da welet ha da frealzi an nep a c'houzanv hag a c'haly ac'hanoc'h. C'houi eo ho peus lavaret : « Setu me o skei war an nor ; an neb a glevô va mouez hag a zigoro d'in, hennez a welo ac'hanon o vont da jom gantan. »

Goude beza lavaret kement-se, Jenovefa a jomas pell bras da bedi a galon, he daouarn kroaziet gant devosion vras hag he daoulagad serret.

Benoni a jome noz-deiz war he zro. Ker sammet oa e galon ma ne c'helle mui na dibri nag eva. Lenn a rea e daoulagad e vamm kement a felle d'ezhi hag e veze mall gantan senti ; ober a rea eus e wella evit ma vije eas ; gant eur vozad man e tizec'he al leizded eus ar mogerioù evit na gouesje ket an diveradou warni. Dastumet en doa eur bern man epad an hanv ; ganto e reas eur gwele nevez ha fresk d'e vamm. A-wechou e tigase d'ezhi dour eus ar feunteun en e grogen : « N'ho peus ket a zec'hed, mamm ? Tamm eo d'eoc'h hag ho muzelloù a zo sec'h ! » a lavare-hen. Goude e lampe da vriata e vamm : « Va mamm ! va mamm ! emezan, na me a garje beza klanv en ho lec'h ! Mar gellfen mervel evidoc'h ! »

Eun nosvez he doa kousket eun tamm bennak, ha pa deuas ar beure, pa zihunas, setu ec'h en em gavas kalz easoc'h. Epad he c'houk, Jenovefa he doa lezet he c'hroazig da goueza, ha breman e klaske anezi. Ar mab a zivinas. « Petra eo an dra-ze, mamm ? » emezan.

— « Pell a zo, va mabig, em bije komzet d'it eus mister hon Dasprenedigez, panefe ma kreden em boa amzer da c'hedal. Gwelet a ran eo arabat apell eun dra vat da ober. Gouzout a res en deus an Tad eur Mab henvel oufan e pep tra. Re yaouank out c'hoaz da glevet ervad kement en deus grêt Mab Doue evidomp. Lavaret em eus d'it ez eus war an douar eur maread tud ; an dud-se n'int ket holl deal hag eun. Klevet ec'h eus ganen petra eo mervel, ha gwelet a res da vamm baour o c'hedal ar maro. Ac'hanta, mont a ran da zisplega dirazout ar pep brasa eus ar pez en deus grêt Mab Doue evit an dud. Neuze e ouezi perak e karan kement ar c'hoad-man a zo em dorn.

Jenovefa a zisklerias da Venoni mister bras Dasprenadeduz an dud. Pa lavaras d'he mab petra reas ar Yuzevien da Jezuz, Benoni a zerras e zaouarn hag a lavaras, droug ennau :

— « An dud fallakr ! Penôs ive e lezas Doue an Tad ober kement-all d'e Vab ? »

— « Va mab, Jezuz e-unan a bedas e Dad da gaout truez outo : « Va Zad, emezan, bezet truez outo, rak ne ouzont ket petra reont ! » Marvet eo evit an holl, zoken evit e vourrevien. E varo, va bugel ker, a oa eun dra ret, rak hep ar sakrifis-se den ebet na vije aet d'ar Baradoz, na ni nag ar re-all. »

An daerou a deue eus daoulagad ar pôtrig.

Ar wech kenta oa d'ezan da glevet an traou-se, ha setu perak e skoent kement e galon.

— « O peger mat eo Jezuz ! emezan, o sec'ha e zae-rrou. Livirit d'in, mamm, Jezuz, n'eo ket 'ta ? a zo breman en nenv ? »

— « Ya, va bugel ker, en nenv eman a dra zur. Pa var-

vas e voe distaget dioc'h ar groaz ha lakaet en eur bez henvel a-walc'h marvat ouz ar c'heo-man, nemet e voe boutet eur mên bras da stanka toull an nor. Hogen, tri dervez goude e teua's er mêt eus ar bez anezan e-unan ; leun a vuhez. An holl dud n'oant ket drouk koulskoude, arabat e ve d'it kredi, darn zoken a oa tud vat, tud eun ; ar re-man a zelaouas mouez ar Mestr hag a deuas da veza gwelloc'h c'hoaz. En em staget oant ouz Hor Zavier, hag e varo a dôlas anezo en anken. Pebez levezenez evito pa weljont anezan beo a-nevez ! Lavaret a reas d'ezo ez ea d'an nenv da gaout e Dad. O klevet edo adarre o vont diganto, an diskibien a zirollas da ouela. Ha Jezuz a lavaras d'ezo : « Na ouelit ket evel-se hag arabat d'eoc'h beza trubuilhet. Mont a ran da bourchas ho kadoriou e-kichenik va Zad. Grit kement am eus gourc'hemennet d'eoc'h hag e teuet d'am c'haout ; eno e vlot eürus e gwirionez, ha den ne c'hello lammet diganeoc'h hoc'h eürusded. Mont a ran hag evelato e chomin ganeoc'h, en doare ma c'houzoc'h, keit ha ma pado ar bed. »

Benoni a jome sebezet ken kaer e kave an traou-se.

— « Kement-se a oa dudius da welet ha da glevet, emezan. Asa, mamm, livirit d'in, daoust ha gouzout a ra Jezuz emañ aman o c'houzanv, pell dioc'h daoulagad an dud ? Daoust ha ni a yelo ive eun deiz d'an nenv da welet Doue ? »

— « Doue, hep mar, a wel ac'hanomp aman evel ma wel pep tra : karout a ra ac'hanomp, digas a ra d'eomp menozioù mat hag e skoazell a ro d'eomp da vont war wellât. Te, Benoni, a zo eur bugel eus ar re wella, ha koulskoude n'emaout ket e penn uhella ar zantelez. Gwelet a ri an dra-ze dreizout da-unan, ma keres teurel evez. Mar o dije an dud lakaet ac'hanout d'ar maro, n'ez pije ket pedet evito, evel ma reas Jezuz-Krist ; lavaret ec'h eus end-eun ez pije bruzunet anezo mar ez pije gellet. N'out ket hegarat evel Mab Doue ha n'eo ket da garantez ker bras hag e hini. Ret eo d'eomp bale war roudou Jezuz, mar fell d'eomp tizout al lec'h m'eman, da lavaret eo e tleomp beza evel dan dinamm, kunv, karantezus ha die'hoar. Benoni, va bugel ker, gouzout a res breman perak e karan ar groaz, perak e tale'han anezi bepred em dorn : digas a ra sonj d'in eus karantez an Hini a zo maro warni evidon ; lavaret a ra d'in eo dre ar boan hag ar maro ez eer d'ar baradoz. N'em eus netra-all da lezel ganez, bugel kèz, evit kaout envor ac'hanon ; pa vezin maro e lammi anezi eus tre va daouarn sklaset hag e viri anezi, ha divezatoc'h, pa vezi bras ha galloudus, arabat e vezo d'it kaout mez o lakât anezi ouz ar voger, a-wel d'an holl, en ez kambr kaera. Sonjal a ri, hep tro ma well anezi, e madelez divuzul an

Hini en deus roet e vuhez evidomp, sonjal a ri ive en da vamm, a zo hirio o vont da vervel.

Mar fell d'it ober d'in eur blijadur ziveza, va mab, ro d'in da c'her e laki atô da boan da ren buhez c'hlan ha divlamm. Kar an dud ha gra d'ezo ar muia ma c'helli a vad ; ro zoken da vuhez evito, mar deo talvoudus bras kement-se evito, ha goude n'o dije tamm anaoudegez vat ebet evit kement-se. Ma teu c'hoant d'it da ober an dra-se o sellet ouz kroaz da vamm, ar groaz-se a vezo talvoudusoc'h d'it eun tamm mat eget an holl denzorieu a c'hello da dad roi d'it eun dervez. »

Ar brezegen hir-ze a heur-zinerzas ar paour kêz Jenovefa. Ma chomas goude pell bras dilavar. Pa deuas adarre eun tammig nerz bennak d'ezi e lavaras :

— « Gant ma c'helli mont betek da dad, pôtr paour ! Ne vezo ket eun dra eas d'it mont eus ar c'hoajou gouezman. Doue, gwir eo, a vezo ganez, hag hen e-unan eo a gaso ac'hanout betek an tad en deus roet d'it war an douar. Arabat e vezo d'it ankounac'hât kas ganez eur banne mat a lez evit n'ez pezo ket re a naon ; kas ganez ive va fenn-baz, ma c'helli en em zifen ouz ar bleizi, evel em eus grêt m'eo va-unan. Bugel kêz ! yaouank out, ha dinerz, hep mar ; bez dienkreuz, Doue eo ar Mestr ha kemeret a ray ac'hanout en e warez. An nep a lakay e fizians ennan n'ez ay ket da goll. »

Gwasât a reas d'ezi wardro ar pardaez ; mil boan he doa o tenna he alan hag eur c'houezenn builh ha yen a zivere penn da benn he c'horf. Dastum a eure neuze kement tamm nerz a jomie ganti hag he lavaras d'he mab :

— « D'an daoulin, mabig kêz ! mont a ran da roi d'it va bennoz, evel ma roas va mamm d'in he hini pa deuas evidomp eur an disparti. »

Ar bugel a gouezas d'an daoulin en eur ouela ha Jenovefa a astennas war e benn he daou zorn da lavaret gant kalonad :

— « Va mab kâret, ra vezi benniget gant Doue ! Ra vezi bleinet gant e Spered-Santel betek ar baradoz el lec'h ma vezimp unanet da yiken ! »


Starda a reas anezan war he c'halon hag e pokas d'ezan gant teneridigez.

« Arabat e vezo d'it morse, va mab ker, kemeret skouer war an dud fall ! Bez atô devot ha dinamm. »

Siouaz ! ne c'hellas ket lavaret hirroc'h : koeza a reas war he gwele, skoet gant ezenn ar maro.

Daoulinet tost d'ezi, Benoni ne ouie ket pe oa kousket e vamm pe hi a oa aet gant an Otrou Doue. Hag eo'h hirvoude, e tifronke, e pede :

— « Otrou Jezuz-Krist, ho pezet truez ouz va mamm, deuit da zihuna anezi ! »



XIV

**Rann-galon Sifroa
o kredi eo maro Jenovefa**

O Jenovefa gêz, ranna 'ra va c'halon !
Penôs demeus ho perz kredi gedal pardon !

..... Va glac'har, va anken
Goude m'am bezo gret eur binijen galet

A c'hello marteze bihannât va fec'hed ;

Pa 'z eo gwir eo ker bras trugarez hon Doue,

M'em heus fizians ganec'h monet d'her gwelet d'an ne.

UR gouli grevus a zalc'he Sifroa prizoniet en e delt. Eur zac'had kounnar a yeas ennan pa lennas tamallou gaou e evesaer, ha war an töl e roas urz da zibenna e bried. Wolf, e skoueder hag e gamarad brezel, a oa d'ar c'houlz-se pell ac'hano. Raktal ma tizroas ez eas da c'houlenn kelou digant e vestr eus doare e yec'hed. Ar c'hont a zisplegas d'ezan war-eün kement a skrive Golo d'ezan eus ar gêr. Ar zervicher koz a yeas fall o klevet kement-all.

— « O va mestr ! va mestr ! emezan, petra ho peus grêt ?... tui a rafen dirak Doue ha dirak an dud n'he deus grêt ho pried droug ebet, pell ac'hano end-eün. Eun den savet evel m'eo bet Jenovefa, eur plac'h ken devot ha ker fur ne c'hell ket en em lezel da vont ken prim-ze d'ar gwas dizursiou. Me a zo koz, otrou kont,

hag em eus gwelet kement-se dalc'h-mat. Sellit, ho Kolo n'eo nemet eun den fallakr. Dre finesa, dre droiou louarn eo deuet a-benn da c'hounit ho krad vat. Kredit ac'honan, otrou kont, an nep ho meul dalc'hamat hag a lavar « ya » d'eo'h bepret, hennez a zo trubard hag eo mall diouall dioutan : n'en deus evidoc'h nemet disprij e goueled e galon ha ne glask nemet e vad e-unan. Eur gwir vignon a lavaro d'eo'h atô ar wirionez evel m'eman, daoust ha ma vefe kasaüs da glevet. O va mestr ker, en han' Doue ! klevit va fedenn : Freuzit prima ma c'hellot an urz hoc'h eus roet re vuan. Ha n'eo ket gwir ne varnec'h ket an disterra eus ho sujidi hep beza kleket e zifennou ? Hag ho peus kredet, evel-se, dre eun töl penn, eur froudenn, barn d'ar maro ho pried santel ? Ha n'ho peus-hu ket bet an disterra douetans e c'hellehi beza divlamm ? Doue ra viro, ôtrou, ho pefe da ruzia gant ar vez ha da skuilha daerou gwad evid an urz-se roet re vuan !

Aon am eus na ve breman divezat evit miret ouz an torfed da c'hoarvezouf !... »

Sifroa a anzavas oa aet gwall vuan gant e varnedigez. Koulskoude, Jenovefa pe C'holo, unan anezo o daou a oa kablus... Pehini ? N'oa ket evit lavaret piou.

Lizer Golo a oa steuet gant geyier livet ker brao hag al louarn en doa douget al lizer en doa desket ker mat e gentel ma voe dallet ar paour kêz kont ken douget d'ar gwarizi ha d'ar vuanegez !

Kerkent Sifroa a gasas eur c'hannad da gemenn d'e evesaer kloza Jenovefa en he c'hambchou ken na ziroje eus ar brezel, elêc'h laza anezi. Ouspenn-se e roe urz d'ezan da ober braoa ma c'hellje d'ezi. E wella loen a roas d'ar c'hannad evit ma 'z aje difre hag eur yalc'had mat a arc'hant a roje d'ezan, a lavare, ma tigouesje duhont abret a-walc'h ha ma tigasje d'ezan endro kelou mat eus e dud.

Tristidigez ar c'hont ne reas nemet kreski keit ha ma voe ar mevel oc'h ober e dro. Gwech e kredê ez oa divlamm e bried, gwech-all e krede, en eneb, en doa grêt re vrao da C'holo evit ma teuje breman da c'hoari d'ezan eun dro fall evel hounnez. Ne badê ket gant ar boan spered. Ouspenn dek gwech bemdez ez ea Wolf eur pennad war an hent da welet hag hen e tizroe ar c'hannad : alies e tremene an noz en he hed hep kousket takenn ebet. Eun dervez bennak e tigouezas ar c'hannad gant kelou fall, siouaz ! Evel en doa gourc'hemenet an otrou, an itron hag he mab a oa bet lazet e kuz en eur c'hoad bras. Kement-man a voe evel eun töl eur skoet war benn ar c'hont. Adalek neufe e dal a deuas da veza tenvalloc'h c'hoaz ha Wolf a vennas mervel gant ar c'hlac'har. Holl zoudarded Sifroa bodet endro d'e

delt a douas a rajent da C'holo paea ker e dorfed euzus.

Sifroa a voe pell c'hoaz o c'houzanv gant e c'houli, seul helloc'h ma oa brasoc'h e c'hlac'har hag e dristidigez. Kerkent ha ma c'hellas ehom en e zav e c'houlennas dizrei d'ar gêr, ha roet e voe d'ezan e c'houlenn, p'eo gwir oa trec'het ar Vorianed. Dizrei a eure tenval e benn, mantret e galon, Wolf hag e zoudarded war e lerc'h.

Pardaez oa pa lakâs e dreid war douarou e zamani. An holl, pötred, merc'hed, bugale, a deue er mêz eus o ziez da zellet outan o tremen. Ar c'hont a ziskennas diwar e varc'h da zaludi anezo ha da lavaret eur gomz vat da bep hini. Goulenn a reas goude petra oa tremenet keit ha ma oa bet pell eus ar gêr. An dud-man a reas holl meuleudi Jenovefa hag a zispakas dizamant doareou divalo Golo.

War gement-se ar c'hont a yeas larkoc'h, sammet müioc'h-mui. En noz-se zoken e tigouezas ea e gastell. An holl brenestou a oa sklerijennet hag ar muzikou a rea eun trouz da youzara. N'edod ket war c'hed eus an otrou kont koulskoude. Golo eo a roe pred bras d'e vignoned feal. Lakaet en doa en e benn e tlie an otrou kont mervel er brezel gant e c'houli hag ez ea, hen, Golo, da veza savet da vestr war leveou Sifroa. Klask a rea ive moug e kreiz an trouz klemmou e goustians bourrevet. Oc'h e welet ouz eun döl servichet mat, hi-niennou a lavare etrezo a-vouez zeli : « Sur a-walc'h e sailhfe Golo gant e vadou ma tigouesfe d'hor mestr ker mervel ! N'em eus ket a avi outan avat. Sell ouz e benn, pegen tenval eo ! Gwall grinet e rank beza gant an enkreiz. — Gwir a-walc'h a leveres, eme unan all, poezion a zo en holl blijaduriof a gemer. Chom a ra zoken serret e galon dirak ar bern friko-man. Sell outan 'ta ! Azezet eo evel eun torfetour o c'hedal eur varnedigez a varo ! N'eo ket me a garfe beza en e groc'hen ! N'eo ket me a garfe mont evitan d'ar bed-all ! »

Pa voe digouezet dirak dor yras ar c'hastell, ar c'hont a roas urz d'an trompilhous da dregerni evit rei da anaout oa dizro. Ar zoudard a rea ar gward war veg an tour a ziskouezas en doa klevet. Ar frikoterien ive o doa klevet hag a jomas mantret, evel skoet gant ar gurun. « Ar c'hont ! ar c'hont ! » emezo. O krena evel eur bern deliou, Golo a ziskennas hag a yeas lostok da gregi e kabest marc'h Sifroa. Henman a zellas outan en e zaoulagad hep lavaret ger. Golo a blegas e benn ; mar hen dije gellet neuze diskenn en douar ! kredi a rea e lenned e holl dorfejou skrivet war e dal gant lizerennou tan. Hag ec'h henchas e vestr a-dreuz ar porz bras, e ziwesker oc'h horjella dindannan. Miñ boan en doa ive o terc'hel

ar goulou en e zorn. Ar c'hont a welas dre-oll roudou dispignou direiz, an dizurz, traou foranet. Ne wele nemet pennou estren, liou ar spont warno. Eun toulladig mevelien koz a zalude anezan o ouela. O veza aet er zal vras, Sifroa a ziskennas war an dôl e dok houarn hag e gleze ; goude e c'houlennas digant Golo roi d'ezan al c'houeziou ar c'hastell hag e kasas Wolf da lakât serri ha diaouall mat an holl doriou, evit n'ez aje den er mêz. Roi a reas urz ive da bleal gant e zoudarded, da roi d'ezo kement o doa ezom. Neuze e lavaras d'ar re a oa endro d'ezan mont diwar e dro.

Sifroa a yeas war-eün da gambr Jenovefa : prennet oa bet gant Golo kerkent ha grêt gantan e dorfed hag abaoe ne oa ket bet enni. Pep tra a oa eno evel en deiz m'oa lakaet ar brinsez er bac'h. Ar c'hont a gavas eur gurunenn lore hanter c'hraet d'ezan ganti a-benn ma teuje en dro ; e-kichen, telenn Jenovefa hag eul leor kantikou savet darn anezo ganti he-unan ; var an dôl edo an doubl eus al liziri a skrive hi d'ezan : hini ebet anezo ne oa aet morse betek ennan. Sifroa a lennas al liziri-ze leun a garantez tener. Jenovefa a lavare e pede-Doue bemdez evitan, he doa mall bras d'e welet dizro d'ar gêr hag ez aje d'hen diambroug gant he bugel (edo war c'hed anezan). Lavaret a rea ouspenn pegen enkrezet oa gantan o veza ne skrive morse ger ebet. Hag evit gwir, Golo n'en doa morse roet d'ezhi liziri he fried ken nebeut n'en doa lezet da vont eus ar c'hastell liziri Jenovefa d'he fried.

Hanter-noz oa. Sifroa koulskoude a jome eno beuzet en e c'hlae'har. Setu Bertha o tigeri hag o tont er gambr. Lakât a eure etre daouarn an Otrou al lizer skrivet gant e bried e « Tour ar bec'herien ». Diskouez a reas d'ezan ive ar c'hoMier perlez. Sifroa hen anavezaz raktal. Ha Bertha neuze da gonta kement he doa gwelet ; n'her greas ket avat hep skuilha daerou puilh.

Glac'har ar prins a oa bet didrouz betek eno ; neuze avat e tarzas hag e krogas da zifronkal, ma 'z oa eun drez e welet. N'en doa ket a ezomm a gement-se evit kredi start oa divlamm e bried. Pokat a reas kalonek da lizer Jenovefa, hag e skoe war e galon, e tamalle d'ezan e-unan e dorfed. Sevel a reas en e zav hag e c'houlennas e gleze evit mont da laza Golo raktal. Wolf, koulskoude, a deuas a-benn da rei d'ezan da glevet ne c'helle ket barn eun den, n'eus fors peger fall eo, hep beza e glevet, da vihana.

Sifroa a reas chadenna ar fallakr war an eur hag e deurel en toull tenval el lée'h en doa bet e-unan ar grisder da deurel pried fur ha santel e brins. Kroget e voe ive en e gompagnunez.

Antronoz e voe digaset Golo dirak ar prins. Sifroa a zellas ouz an evesaer digalon gant madelez ha dousder :

— « Pe seurt droug, emezan, am eus -me grêt d'it evit ma rajez d'in ken divalô ? Pe seurt droug o d'oa grêt d'it va gwreg ha ya mab ? N'oas nemet eur paour kèz bugel emzivad pa 'z out bet digemeret er c'hastell-man, hag abaoe hon deus grêt d'it an holl vad a c'hell-lemp. Perak 'ta paea ac'hanomp gant kement a fallo-niou ? »

Golo a oa war c'hed da glevet ar gurun o krozal, chom a reas mantret dirak eur basianted ker bras ha ker sioul, hag e lavaras a-drez e zaerou :

— « Siouaz ! Otrou, daliet oun bet gant eur c'hoant direiz. Ho pried a zo fur ha glan evel eun el. Me, fall evel an diaoul, am eus poaniet da lakât anezi da goueza er fank, hag o veza ma stourme atô ouzin em eus grêt d'ezhi paea ker. »

Sifroa a voe dizammet o klevet kement-se. Golo e-unan a anzave oa divlamm Jenovefa ! Kas a reas ar bourreo d'an disheol hag e tirollas adarre da zifronkal. Mil gwech e reas e valloz d'an tôl kounnar en doa grêt d'ezan barn e wreg santel d'ar maro.

Adalek neuze Sifroa a jomas evel serret, tenval e-benn, kloz e c'hinou ha klanv e galon. A-wechou e c'hlae'har a rea d'ezan alteri. E vignoned, ôtroned ar c'hell-tell a dro-war-dro, a deue gwech ha gwech-all d'e welet, koll a reant o foan oc'h esa diroufenna e dal. Sifroa a jome breman e kambr e bried ha ne deue ac'hano nemet evit mont d'ar chapel. Kas a reas tud da glask bez Jenovefa evit ma 'z aje di da bedi ha da ouela hag ive evit sevel he c'horf ha rei d'ezan muioc'h a enor. Ne voe kavet netra, rak an daou zen karget gant Golo da laza Jenovefa a oa aet pell a oa e-mêz, ar vro ha den n'en doa morse abaoe klevet hano dioute.

Ar c'hont a lakas eur zervich bras en iliz parrez evit Jenovefa hag he mab. Daoust ma 'z oa bras an iliz, an darn vrasa eus an dud a rankas chom er-mêz. Sifroa a reas aluzennou bras d'ar beorien en deiz-se ha savet e voe en iliz eur mèn bras kizellet en envor eus ar brinsez.


TRO VREIZ

Gellet hon eus dont a-benn da anaout an hent a rae ar re goz pa 'z aent da bardon ar Seiz-Sant; pennadou eus an hent-se a zo bet dispennet ha n'int ket kalz ledannoc'h ken 'eged eur wenojenn, met pennadou all 'a jom ivez hag a zo ledan evel baliou eur c'hastell ha goloet gant leton flour ha glaz; pa dremener dreizo n'oar ket evid en em viret da zonjal er Vretoned o deus heuilhet an hent santel-se edoug ar c'hantvejou tremenet, saludet ar c'hroaziou-se goloet a ginvi louet, pedet er chapeliau-se a zo o koueza, siouaz, an eil goude eben, en o foull, diskaret gant avel an dizouelez kement ha gant ivinou yut an amzer. An A. chaloni Ab-grall eus a Gemper, hag e vignon Loeiz ar Guennec, a zo deuet a-benn o daou da c'houzout dre be hent e tremene gwechall goz pardonerien ar Seiz-Sant, e Kerne hag e Leon azalek Kemperle betek Pont-Menou. Eus a Wened da Gemper ec'h heulient an hent bras ledan hag eün bet graet breman 2.000 bloaz, gant ar Romaned. En hanter 'n heut e kavent Kemperle, eur gerig koant azezet, etre iliz Sant-Mikel hag iliz abati ar Groaz Santel, o walc'hi he zreid e dour an Izol hag an Elle; goudeze e tigouezent gant chapel an Dreinded e Meigwen, ha Lok-Maria an Hent, e Sant-Divy. E Lok-Maria e weler c'hoaz eun aoter en enor d'ar Seiz-Sant, met siouaz, dre eur fazi graet, n'eus ket a c'hwall bellou, gant tud ha ne anavezent ket eur seurt eus istor o bro, seiz mab santez Perpetua eo o deus digadoriet seiz Sant Breiz. Dre ma tostaent ouz Kemper e kavent, e parrez Ergue-Armel, klanvdi santez Anna ar Gelenn savet gant menec'h sant Yann Jerusalem; pemp pe c'houec'h klanvdi a oa e Kemper d'o digemeret ha chom a c'hellent eun dervez pe zaou e ker vat sant Kaourintin.

Kenderc'hel a raent o hent dre Gerfeunteun, Peniti sant Ronan, ar Guellen, e Brieg, el lec'h ma welet gwechall skeudenn eur falz-doue a verke eur marc'heg o flastra unan bennak, dindan e dreid, eul lost aer d'ezan.

Pelloc'hik, e kavent chapel ar Vadalen, a oa war lez eun hent hanvet hent Iz hag a 'z ea eus a Geraez da Zouarnenez; pelloc'h c'hoaz, dre ma tostaent ouz reier ha chapel Ilijour e c'hellent kaout eun taol-lagad eus ar re gaera war ar meneziou Du, gourenez Kraozon, Menez-Hom; mor Douarnenez ha plas ar C'horn; ac'hano pa vez an amzer en e c'haer eo eun dudi sellet ouz Bro Gerne.

Goudeze ec'h en em gavent gant chapel Itron Varia ar Feunteuniou, e Gouezeg, eur gwir iliz, el lec'h ma



TRO-VREIZ

- == An hent a vezo graet hiviziken.
- Pennadou eus hent ar Seiz Sant a raet gwechall ha ne vezint ket heuliet ken.

trementas ha ma pedas sant Erwan hervez skridou proze e zantelez. Goude beza chomet eur pennadig da ziskuiza dindan ar gwez a zo o waskedi ar chapel hag evet eur banne dour fresk e feunteun ar Werc'hez, ar bardonerien a stage da bignat ar menezioù Du; pa en em gavent war o c'hern e kavent dirazo eur gwel meur dudius: er pellder, etrezek ar c'huz-heol, menez Are hag; ouz o dispartia dioutan, eun draonienn, ar ster Aon o redet en he c'hreiz.

Treuzi a raent ar ster e Pont-Koblank, hag e pignent da Bleyben; p'en em gavent eno ne gavent ket dirazo an iliz kaer a welomp breman, rak n'oa ket savet c'hoaz, na ken nebeud ar c'halvar a zo en he c'hichen, met kaout a raent eun iliz all hag e pedent enni ket c'houek hag o divije graet en hini vremen, ar pezh ne vire ket outo da jom a-zav pelloc'hik da zaludi Itron Varia Lannelleg.

Goude beza graet eur bedenn en eur chapel all d'ar Vadalen, en tu dehou, e treuzent ar Pont-Bras da vont e Brasparz; en eur vont dre lanneier ha menezioù ar barrez-se e teskent an eil d'egile ar c'hrenn-lavar o doa desket gant ar re goz :

Kompeza Brasparz, diveina Berrien, diradena Plouye A zo tri dra dreist galloud an Aotrou Doue.

En amzer-se, en iliz, ec'h enoret c'hoaz ar gwir batron, sant Ispartz, en deus roet e ano d'ar barrez. (Bre-Ispartz; bre = uhelenn, menez.)

Hor pardonerien a gendalc'he o hent dre **Gastell Du**, Bodenna, Roquinac'h ha Roudouderc'h, a-dreuz Gwaremeier divent, el lec'h ma tev an heol, en hanv, ha ma suilh an avel er goanv; p'en em gavent war gern ar menez e choment eur pennad da ziskuiza ha da zellet ouz Bro-Leon a welent en he fez, dindan o zreid, ha diouz tour Kreisker e ouient betek pegeit o doa da vont evid en em gaout e Kastell-Paol.

Ne lakaent ket kement a amzer da ziskenn ar menez ha m'o deveze laket d'e bignat ha dizale ec'h en em gavent gant klanvdi Sant-Yann Vougo, e Comanna, el lec'h ma oa eur chapel, teir vilin hag eun dolmen eus ar gaera. Ar bardonerien skuiz a c'helle chom eno da ziskuiza ha da breja; en dra ma chome darn er Vougo, darn all a ziskenn betek Comanna hag eno ar barri-sioniz hag ar veleien a rea eus o gwella evid o digemeret.

Antronoz e rankent loc'h abred, rak a-raok ar par-daez e ranket en em gaout e Kastell-Paol hag eur pennadig brao a vale a zo etre Komanna ha Kastell-Paol. Eur vro c'houez, lann donv ha kerreg enni, a dreuzent a-raok paka maner Koad-ar-Roc'h ha ster ar Penze; goudeze ar vro a deue da veza sevennoc'h; kaout a

raent war an hent chapel Sant-Donval ha chapel Krist; eur manati savet gant abati sant Jacut-ar-Mor, en eskopti Sant-Malo a oa e chapel Krist; merenna a raent e Pleyber, el lec'h ma oa ivez eur c'hlanvdi evid ar bardonerien ha dioc'htu goude ar pred ec'h en em lakaent adarre en hent, en acoun d'en em gaout, re zivezat e Kastell-Paol. Heulia a raent eun hent eun ha ledan han-vef atao **Hent Kastell**.

E Trebompe, e Sant-Sev, e kavent chapel Santez-Pompe, mamm sant Tugdual, hag e treuzent lann Penhoad, koajou tro-war-dro d'ez, bleizi enno ha setu pe-rag ne gerzent enni nemed a vandennadou. Trement a raent dre Lokmikel hag ec'h en em gavent e Penze; er geriadenn-se, diazezet ker brao, etre an daou zour, an dour dous hag an dour sall, ar berc'hirined a veze roet d'ezo aluzen ha bevans ha goude eur pennadig diskuiz e-tizent Pont-Eon, chapel Sant-Yann, mouster Plouenan ha chapel Sant-Gregor. Pell a oa m'o doa ken da ober, evit kaout o hent, nemet sellet ouz beg tour Kreizker; noz e veze peurlies a p'en em gavent er ger santel, met daoust da-se ez aent d'an iliz-veur dre ma tiguement da zaludi an Aotrou Sant-Paol; antronoz o deveze muioc'h a amzer da bedi dirag e relegou. Eus a Gastell ez aent da Landreger, dre Bont-Eon, Penze, ar Vadalen ha Montroulez; eno e choment da loja; antronoz, ebiou I. V. ar Feunteun, ar Vadalen, Garlan, Kermouster, Pont-Menou, Plestin ha Lanhuon ec'h en em gavent, gant an iliz-veur a vir skoaz-ouz-skoaz, relegou daou vreizad hag a zo daou zant bras : sant Tugdual ha sant Erwan.

G. P.



Hen d'ez. — Fall ez a ar bed evid ar beorien; o paouez goulenn aluzen emañ ouz ar bourc'hiz-se hag en deus lavaret d'in e oa ker paour ha me!

Ar c'higer d'ar plac'h. — Sellit! setu aze eun tamm kig brao; evid 20 lur e roan anezan d'ec'h met lavaret a c'helloc'h d'ho mestrez ho peus e baet tregont lur.



DIVINADENNOU 1925

Digeri a reomp adarre etre hon all lennerien bras ha bihan; koz ha yaouank, eur gentstrivadeg divinidadennou nevez a bado seiz miz hag e stagimp outi 30 priz kaer: 20 luriad levriou nevez flamm d'ar c'henta; 5 skoejed d'an eil, peb a 10 luriad d'an trede, pevare ha pempet ha peb a 20 realad d'ar 25 all. Ar re a fell d'ezo gounid prizioù, arabad eo d'ezo chom miz ebet hep respont, ha red eo d'ezo staga, na petra 'ta, adalek ar miz kenta; anez e vezint re zivezat! Ne zellimp nemed ouz skridou ar re a stago gant al labour e miz Genver.

I. — DIVINADENNOU MIZ GENVER

I. — Kalon houarn ha kein koad
Hentchet gant dourn ha gant troad.
20 p. ar r. Digaset gant Y. Deniel, S^r Pabu.

II. — Treuzi ra 'r ster skanv war eun troad
en e benn n'eus met eul lagad.
20 p. ar r. Digaset gant P. Abiven, Plouneour.

III. — Peder dimezell wenn o vont dre ar memez hent
Ma en em douchfent, en em lazfent!
20 p. ar r. Digaset gant Franseza Gourmelen, Plougastel.

IV. — Yann a lavaras d'e vab: « Daou vloaz a zo e oan
eiz gwech kosoc'h egedout hag abenn bloaz
aman ne vezin ken nemet pemp gwech! » Pe
oad o deus an tad hag ar mab?
20 p. ar r. Digaset gant Tanguy Creignou, Cleder.

V. — Goulen a raer ouz eur mesaer pet danvad en
deus.

— « N'ouzoun ket, emezan; met mar o c'hontan
tan daou ha daou e chom unan; mar o c'hontan
tan tri ha tri e chom unan; mar o c'hontan pe-
var ha pevar e chom unan; mar o c'hontan
pemp ha pemp e chom unan; mar o c'hontan
c'houec'h ha c'houec'h e chom unan; met mar
o c'hontan seiz ha seiz ne jom hini ebet ken! »
Pet danvad en doa?

20 p. ar r. Digaset gant mesaer Menez Are.

Digas ar responehou hag an divinidadennou nevez a gavfet
abenn ar 25 eus ar miz da:

M. le Directeur du **Feiz ha Breiz**, à Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou. — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{ce}) | Y. LE MOAL, Coadout, pr Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildut*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) : 5 f. l'an

PUBLICITÉ
*Toutes les insertions sont faites
à l'année*
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Kenstrivadegou ar Bleun-Brug. —
Pempvet kenstrivadeg ar C'hardinal Duboufg, L. AR GOFF.
— Penaos e teskas Fanchig Wegan ar vicher pôtr yaonank,
BREIZADIK. — Gwall nozvez, J. — Etre daou, D. N. D. —
O va Breiz, sav ! Y. K. — Mikael Marion, G. P. — Labouriou
ar merc'hed wardro an ti, TINTIN ANNA. — Buhez Jénevefa
a Vraban. — Divinidadennou.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ C'HOUEVRE

- 1 a viz C'hovevrer. — IV^e sul goude ar Rouanez. An ofe-
renn p. 248; e levr an A. Uguen.
Gousperou ar Chandelour, p. 650.
- 2 a viz C'hovevrer. — I. V. ar Chandelour, p. 651.
- 8 a viz C'hovevrer. — Sul ar Septuajesim, p. 257.
- 15 a viz C'hovevrer. — Sul ar Sexajesim, p. 262.
- 22 a viz C'hovevrer. — Sul an Ened, p. 268.
- 25 a viz C'hovevrer. — Merc'her al Iudu, p. 273.

Goueliou Bleun-Brug Gwengamp

9 ha 10 a viz Gwengolo 1925

KENSTRIVADEGOU

I. — **KOMZ-PLEN. (Prose).** Klevet ho peus, — ma n'ho peus ket gwelet, — penaos edo an traou war ar miz epad ar brezel bras; ar gwazed galvet da zifenn ar vro; ne jome er gêr nemed ar merc'hed, ar vugale, ar re goz.

Grit, e 2 pe 3 bajenn, eun daolenn eus doare Breiz war ar miz, epad ar brezel. Diskouezet ar merc'hed, ar re goz, ar vugale, o labourat an douar. Poan a zo bet, met al labour n'eo ket chomet da ober.

II. — **BARZONIEZ.** — Sevel eur rimadell farsus, da zispenn eur c'hiz fall bennak a welit oc'h en em zila en-dro d'oc'h.

III. — **KENSTRIVADEG AN AOTROU ROUDOT. (Enklask war yez ar vro).**

Abaoc pegoulz, perak, penos? —

Aberz piou ha petra, eman ar brezoneg o koll taehen en ho parrez?

Penaos diarbenn an droug euzus-ze? —

IV. — **KENSTRIVADEG ARZUR DE LA BORDERIE.** — Grit eun daolenn eus an amzer ma veve Breiz en he frankiz (460-1491); —

Amzer ar Rouaned (460-938); —

Amzer an Duked (938-1491).

V. — **DISPLEGADED.** — Ar pez a vo da zisplega er bloaz-man eo « Dihunomp », a gaver moulet aman warlerc'h.

VI. — **LENNADEG VREZONEG.** — Evit bugale etre 12 ha 15 vloaz. — Barnet e vezint war eur pennad bennak a lennint e « Feiz ha Breiz » pe « Arvorig ».

VII. — **KENSTRIVADEG AR BREZEGEREZ (Concours d'éloquence).** Ce concours inauguré en 1921, avec succès, comporte trois prix: un premier de 200 fr., donné par le **Feiz ha Breiz**, un second de 150 fr. et un troisième de 100 fr.

Le jury d'éloquence sera présidé, comme toujours, par **M. E. Ernault**, chevalier de la Légion d'honneur, professeur à la Faculté de Poitiers et président de la **Breurie-Veur ar Brezoneg**.

Le Concours d'éloquence est ouvert à tous les jeunes Bretons de 17 à 25 ans, sans distinction, quel que soit le dialecte dont ils se servent. En l'honneur du 60^e anniversaire du **Feiz ha Breiz** et du 20^e anniversaire du **Bleun-Brug** nous dérogeons à l'usage établi, et nous permettons à tous les anciens lauréats de participer à l'épreuve de cette année. Ce concours comprend une épreuve écrite et une épreuve orale, sur le sujet suivant qui est imposé à tous.

— Displegit evel ma welit, doare ar vuhez en ho parrez, d'ar zul ha war ar pemdez; gant petra e kemer an dud ar muia preder breman, e ker ha war ar miz; pe seurt vad ha pe seurt droug a gavit e doare-beva ho kenvroiz.

Les dix concurrents dont les épreuves écrites obtiennent les meilleures notes peuvent seuls prendre part à l'épreuve orale.

Les dix concurrents admis à participer à l'épreuve orale devront se présenter devant les membres du Jury, à Gwengamp, le 10 septembre prochain et recevront à cet effet une indemnité de déplacement de 20 francs.

VIII. — **KENSTRIVADEG J. P. CALLOC'H** : Priz a 500 lur evit ar c'haera pezh-choari, evel warlene; sellit ouz « Feiz ha Breiz » Genver 1922.

IX. — **KENSTRIVADEG AR C'HAN** a vo embannet er miz a zeu.

D^r L. DUJARDIN,
Rener ar « **Bleun-Brug** ».

Lennit mat. — Holl skridou ar peder genstrivadeg kenta ha re ar **zeizvet** hag an **eizvet** a ranko beza digouezet a-benn Hanter-Eost da zivezata gant M. le D^r Dujardin, président du « **Bleun-Brug** », Saint-Renan (Finistère).

DIHUNOMP !

Hirio, tudhentil à Vro-C'hall
A c'hoarz ouz hor gwiskamanchou
Hag, allas! meur a Vreizad dall
A goll ar penn ouz o selaou,
Hag a daol chupenn e zadou.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp;
Man ar Gizioù koz o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
Hôn flastr gant o lezennoù kri,
Gwerzet o c'halonou d'ar fall
Kas o deus ouz hon traou kaer-ni;
En o eneb ne zav hini.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp
Man ar Frankizioù o vervel,
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
Gant eur c'horvad droug a lavar:
« Komzit galleg 'vel ar re-all! »
Ha kaout a rîz war hon douar,
Tud hag a zielez o lavar.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp,
Man Yez hon Tadou o vervel
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
En o shridou verk evellen:
« N'ez eus na Doue na bed-all! »
Hâ lod, o klevet o stultenn,
A vev, difeiz ha dibedenn.

An ankou digor e askel
A glask an tud da skei warnomp;
Man ar Feiz kristen o vervel:
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall,
A venn gwaskan an holl draou-ze,
O veza m'o deus grêt gwechall
Enor Breiz hag he nerz ive;
Ha ni 'bleg evel bugale.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp
Man hor Mamm vroig o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

J. P. Calloc'h.

Pempvet kenstrivadeg ar C'hardinal Dubourg

Diarbenn an traou a ranker kredi

KENTA GOULENN

Per Glabouser a zo o tont eus ar foar. Heol bero a ra c'hoaz war an henthou-bras hag ar c'helien a c'hoari. Broudet ganto, marc'h Per a zo en dihabaskder, setu ma 'z eo enennet holl. Ha Per en em laka da damall da Zoue. n'edo ket e skiant vat gantan pa grouas hevelep loened, mat hepken d'ober droug.

Ac'hano e kemer tro da lavaret e 'z a fall-fall an traou er bed-man. Sklear eo ma 'n dije bet An Aotrou Doue an drederenn eus ar skiant en deus hen, Per Glabouser, ar bed a vije bet grêt dresoc'h eged an dra-se, — ha ne vije ket gwelet a dud fallakr o frita plijadur war billig an eürusted, — ha ne vije ket gwelet a vrezellou etre ar boblou, na pôtréd yaouank kaër ha direbech falc'het dious klaz er brezellou-se kouls hag al lampoued a zo a re war an douar, etc.

Eun toullad genaouerien a zo oc'h ober hent gantan, ha dare int da lounka komzou Per evel krampoez lardet, pa en em laka Yann Pennkalet da enebi outan — da zifenn Providans an Aotrou Doue — da ziskoues petra 'zo penn abeg ne ya ket ar bed atao war eün — da zislavaret hini hag hini kaoziou Per.

Grit an diviz etrezh (pe ma kirit lakit pep hini da gôzeal d'e dro): 40 p. da c'hounit.

EIL GOULENN

Da zeiz ar zabbat araok ar zul Fask, er bloavez 33, ar zoudard Lonjin a skriv d'eur mignoun eus a Roum da lavaret d'ezan ar pezh en deus gwelet ha klevet en derc'hent war menez Kalvar, e kichen Jerusalem.

Grit al lizer-se, 20 p.

Diarbenn an traou da ober

TREDE GOULENN

Thivizio Landouar a zo trafikere kezeg. Eur marc'h en deus gwerzet 4.000 lur da Zesny Pagan. Nemet ar marc'h a oa tik ha Thivizio en deus gwerzet anezan evit mat. Ar perc'hen nevez a fell d'ezan digas ar marc'h en dro.

— Mat eol eme Dhivizio. Set 'aman an daou vil lur ez peus roet d'in evit ar marc'h.

— Pevar mil lur am eus diyale'het, eme Zesny, pevar mil lur a fell d'in kaout.

An affer a ya dirak ar barnèr. Eno hep na ve galvet d'hen ober, Thivizio a dou n'en deus bet nemet daou vil lur.

Kondaonet eo goulskoude hag o tont eus al lez-varn e pec'h goasoc'h eget seiz diaoul hag e tou terri e zivesker ouz Sezny Pagan. Dont a ra d'en em zonzal ez afe mar-teze d'ar galeou, ma rafe kement all, hag e chom hep seveni e le.

Klevet a ra eman ar c'houarnamand o vont da werza leve ar Zant en e barrez. Hag hen d'ar werzidigez, hep goulenn aotre den ebet, gand ar zonz da brena al leve-ze, hag e gwirionez prena a ra anezo an hanter eus ar pezh a dalvezont rak ne voe kavet den all ebet da deuler warnan.

Distro d'ar gear, fouge ennan, ne ehan d'en em bompadi diwar e daol kaër. E vab kosa a gred goulskoude lavaret d'e dad n'en deus ket grêt mat. Thivizio a ya en egar hag a ro eur zaëad vazadou d'ar marmouz-ze a gred kemeret abeg en e dad.

A enep pe seurt gourc'hemennou ha penaos en deus pec'het Thivizio? 30 p.

PEVARE GOULENN

Klet Poulc'han a zo mear e Poul-raniked.

Arôk mont d'ar vorc'h e lavar da C'haïd, e briéd, eman en e zonz kinnig d'e guzulierien ti-kear ober redadeg ha c'hoariou da zeiz pardon ar barrez, evel ma vez grêt er parrezio diwar dro.

— Pera? mil boulc'huik! a lavar Gaït. Hag ec'h en em laka da ober d'he fried eur brezegenn evel ma n'en deuz morse klevet na gant persoun na gant kure: Gaït a ziskouez d'ezan ne dlefe ket beza grêt hevelep goueliou laïk da zul, ha pa ve pardon ha pa ne ve ket. Ar framasoned a zo o poulza d'ober anezo evit laërez e zevez-sul digant Doue. Er vro-man ez eont war o fouezig gand aoun da spounta an dud. Krignat a reont goulskoude a nebeudou an deiz-sul, ha, kement e c'hoariont dre guz, m'o deus lakët ar veared katolik da labourat evito.

Evit Gaït ar goueliou laïk-se a dlefe beza lakët da zeiz pemdez, ha neuze ar re o deus c'hoant da gemeret o flijadur, her c'hemerfe diwar goust o amzer o-unan, n'eo ket diwar goust amzer an Aotrou Doue, ha ne ve nemet leal.

Lakit emac'h e lec'h Gaït o prezeg d'he fried, penos e lavarfec'h e stal da Glet Poulc'han? 20 p.

Diwarbenn an traou a ro sikour d'eomp d-en em zantifia

PEMPVET GOULENN

Tud-zo hag a lavar, pa vezont bet o kovez: « N'ouzoun ket pegeit am eus ranket d'ale e kichen an dribunal das c'hortoz va zro. »

Ha ne faziont ket an dud-se o komz eus an « dribunal » pe al lesvarn?

Ha, ma ne faziont ket, piou eo ar barner? Piou eo an hini a zo tamallet? Piou a zo test en e cneb?

Ha ne c'heller ket dre eno diskouez eo red d'an hini, en deus c'hoant da veza pardounet, kovez da vihana e holl bec'hejou marvel? 30 p.

C'HOUEC'HVET GOULENN

— Buan-buan, moereb Anna! Deuit prim du-man; eme Baulina Lestudy o tiroll e ti Anna Kerrien.

— Petra 'zo ta Paulina?

— Tin a zu-man, 'm eus aoun, ne danvo mui ar chist: toc'hor eo!

— Chè!

— Ya, an dersienn vras 'zo gantan. Ar beleg a zo galvet. Moarvat Tin a vezo nouennet touchantik. N'ouzoun ket e pelec'h ema ma fenn; ne gavan netra; n'ouzoun ket zoken petra 'zo red da bourchas. Moereb Anna, bezit eta ar vadelez da zont du-man da renka an traou ha da zigas-ganeoc'h kement a zo da gaout evit an nouenn, hag abenn ma teuo an Aotrou Doue ive, ma c'hell Tin kommunià en abardaez-man.

Petra ranko ar voereb Anna kas ganti ha penaos e kempennno an traou e ti Baulina Lestudy? 20 p.

KANT LEVR, nevez flamm, a zo kinniget gant **Feiz ha Breiz** d'ar gwella labouriou ha levr an hini a c'hounezo ar priz kenta a dalvezo 30 lur.

Ar vugale, azalek 11 vloaz betek 16 vloaz, a c'hell labourat evid ar genstrivadeg-mian.

Lakat skler, e penn pep labour, an adres penn-dabenn, da lavaret eo al lez-ano, an ano, ar geriadenn, ar barrez hag ar bureo-post; lakit ouspenn hoc'h oad hag ar skol a heuliit, ma heuliit eur skol bennak.

Digasit ho labouriou kerkent ha ma vezint graet; ar re zivezata a dle en em gaout a-benn an deiz kenta a viz mae. Va adres eo: **M. l'abbé Le Goff, aumônier de l'école libre de Lesneven.**

L. AR GOFF.

Penôs e teskas Fanchig Wegan ar vicher pôtr yaouank

Evelen ec'h arruas gant Fanchig Wegan, deiz pardon Sant Herbot ha, mar doa gwir eno, eo ken gwir all aman.

Goude ar gousperou, ar merc'hed yaouank a yeas, evel kustum, da azeza war ar girzier, endro d'ar chapel, da c'hedal ma teuje Yann Gouer, gant eur zalud dereat, da bedi anezo da vont d'ober eun tammig tro. Perak ez eont, emedoc'h, ar merc'hedigou, da azeza evelse war ar c'hleuziou? Evit gelout gwelet pelloc'h, m'oarvat, ha gouzout hag 'hen e vez e Yannig war an dachenn. Ar bôtred yaouank ivez a zo aesoc'h d'ezo ober o dibab, pa vez evelse arenket mat ar... vare'hadourez; 'n eun töl-lagad, ec'h ouzont p'eman Janedig eno pe n'eman ket.

Fanchig Wegan a oa nevez et da bôttr yaouank: ne oa ket eur miz c'hoaz m'en doa bet ar skourjez digant e dad ha ma oa bet laket da bôttr harnez. Kement ha lavaret eo ne oa ket gwall ampart war an hini e oa e sonj slaga ganti en deiz-man.

N'em denna a reas, gant daou pe dri gamarad, da eva eur chopinad en eun deltenn stignet e harz eur wezenn gistin, demost d'ar c'hleuz marellet ar stanka gant bleunioù ar yaouankiz. Ac'hano e welje ar bôtred o tont beb eil, d'ober o lez hag o goulennoù, hag e teskje e berr amzer penôs en em gemer evit tostât ouz Janedig ha bezan digemeret mat.

Hogen, Fanchig a chomas pell da zellet. Eur chopinad a yeas gantan hag eun all, ha daou c'hoaz, ha hepred ne gave ket e du da zevel en e zav ha da dostat ouz ar c'hleuz strañhus. Ken lies a lagad a bare ac'hano war an dachenn! Biken n'hellje gouzanv kemend-all a zelloù o koueza warnezan. Hag ar c'hôzioù eta! — « Sell! n'eo ket hennez eo pôtrig Gwegan! Gwel anezan pegen abof eo! Oh! ar pôtrig paour! Krogit unan bennak en e zorn, en han' Doue! Koll a ra e zaoulagad! »

Ha Fanchig a c'houlenne eur chopinad all evit beuzi e aboder.

Gouzout a rit, avat, petra a c'hoarvezas? E tec'has an holl bleunioù a bep liou a steredenne war ar girzier, endro da chapel Sant-Herbot, kutuilhet, hini ha hini, gant dora pôtrid yaouank ha ne oant ket ken spontik ha Fanchig... Pa ne chomas nemet peder pe bemp, heman a renkas ober diouz mont pe chom. Mont a reas hag, e dog en e zorn, e pedas eur verc'hig bleo du-pod, melkoniet kaer he lagad, da vonet gantan d'ober eun dro yale. Houman a laouenaas raktal ha ne c'he-das ket bezan pedet eun eil gwech. Diskenn a reas en eul lamm diwar ar c'hleuz hag e kinnigas, kenta tra, he disklavier da Fanchig da zougen. Fanchig a grogas ennan gant

muio'h c'hoaz a stad, a dra zur, eget ne reas er skourjez pötr-harnes en deiz ma voe kinniget d'ezan gant e dad. Starda reas eur penn anezan dindan e vrec'h, ar penn all o stoka ouz errienn e dog voulouzet, ha setu hen hag o kemer renk etouez ar re all ha da « gudenni », evel ma vez lavaret.

Neuze e kredas ober ouz e Janedig eur zellig a-gostez. Fichet kaer e oa; eun tartan ruz-moug, gant brouderez seiz, hag eur vroz voulouzenet, gant tri renkad voulouzenou; ar pezh a dalveze da lavaret he doa ar verc'h yaouank teir gwech mil lur leve. Kalon Fanchig a dridas en e greiz o sonjal e oa kouezet brao evit e döl kenta... M'oarvat, eur ger bennak a oa dioutan lavaret ive d'e zousig » ? Chileo a reas eur pennadig o klask klevet pesort kaoz a oa gant ar re-all, met daoust d'e skouarn da vezan tano, ne voe ket evit tapout ger ebet eus ar pezh a lavare pötrek ha merc'hed yaouank o kuzulikat endro d'ezan. Red, koulskoude, ranna eur ger bennak; anez e kredje gant e « zousig » e oa kouezet gant eur pötr hanter-vut. — Brao an amzer hirio! emezan, goustadik! — Brao kenan! emezi. — Pell ac'halen e chomit? emezan. — Diou leo bennak! emezi. — Hent treuz ho peus da vonet d'ar gêr? — Tost d'eul leo, a-dreuz girzier ha brouskoajou...

Arabad d'in displega hiroc'h közeadenn Fanchig ha Loeiza, — he hano e oa, — rak war an tön-ze e padas penn-da-bent. Fanchig a roas da c'houzout d'ezi en doa daou vreur ha teir c'hoar; hi a oa penherez o chom gant he mamm e Kernebeudig. Ar pötr ne glaskas ket gouzout diganti ped karr houarnet a oa « war gornig leur he zad »; he zeir renkad voulouzenou, he zartan bras seiz a ziskoueze sklér hag anat e oa eur benherez a-zoare. Pa doe grêt diou pe deir zro ha kri-gnet eun nebeut madigou, Fanchig a lavaras, en eur zellet ouz kuz-heol: — « Ma plij d'eoc'h, me yelo d'ho kas d'ar gêr? » Ar benherez ne lavaras ket ya raktal. Setu int, da vihana, war hent Kernebeudig. — Gwir e oa kaoz ar plac'hig: henchou treuz, girzier, brouskoajou da dreuzi; red eo m'he doa Loeiza Kernebeudig kalz a zevosion d'an aotrou Sant Herbot, benn ma teue, dre seurt henchou, da c'houlenn digantan he mennad.

Eun dro bennak e lavaras d'he c'honsort: « Arru omp! » Eun ti bras glas a skede e brenestrou dirazo, ouz goulou kuz-heol, ha Fanchig a c'houzas e galon gant al lore'h, o sonjal pelec'h ec'h ae da vezan digemeret hag e teuas an dour en e c'henou o sonjal pesort koan en divije da zibri. — « C'houez vat a zo! » emezan, ha gwell a ze, rak naon du am eus! »

Sell 'ta! Tremenet Loeiza dirak an ti glas! Pelloc'hik, eur foukenn harp ouz eun torr-kleuz, siminal koad d'ezi, o tivo-gedi dindan bodou eun ivinenn. Loeiza a zigor an nor ha, ker-ent, eur vouez a-zibarz:

— N'eo ket re abred! Pell zo a-walc'h, emae bet o klask an dilhad-ze da gas d'ar gêr!

— Tavit 'ta! mamm, eme Loeiza, goustadik; eur pötr yaouank 'zo aze ouz toull an nor!

Ya 'vat, chomet oa Fanchig bamet ouz toull an nor, o klask gouzout petra da zonzal. — Kas an dilhad-ze d'ar gêr? Neuze 'ta, eviti da vezan penherez, Loeiza Kernebeudig n'he deus ket, zoken, he dilhad d'ezi hec'h unan?! N'eo ket souezus e oa chomet e dilere'h war ar c'hleuz, du-hont, e kichen chapell Sant-Herbot? Petra reio hen? Monet kuit? — Met ar vamm a zo ouz an treujou: « Deut en ti, pötr yaouank; nevez skubet eo! Ne zaotroe'h ket ho potou! Koan a vo bremaik, pa vo bet hou-man o c'horho bi... Kouezet eo e veud en e zorn gant Fanchig. Soubenn al leaz gavr, en eur foukenn valan, setu 'ta dre betra e tigor e vuhez pötr yaouank! Ah! dramped e vo! Gwasoc'h eget pa en dije diskaret e garr, en deiz ma voe laket da charretour!

Monet a ra en ti, betek pan eo tapet, pouezet ive gant ar c'hoant dibri eun dra bennak. — Azevit er c'hougn, pötr yaouank; breman souden e vo prest koan!

Loeiza a zo o c'horho bi aze, e korn al lochenn; an hini goz, gant he c'hrabanou du ha kromm, a zrailh krampouez louedet er skudellou. Fanchig mezek, ne rann ger, pleget e benn e-tal an tan.

— Eur banne soubenn vat! eme an hini goz, p'eo bervet leaz ar bi. Breman, n'eus ken nemet eun dra d'ober; gouzout piou en do ar skudellad vrasa. An hini a lammo ar pella erioez, dreist d'an treujou, da henez e vo! D'eoc'h da lammet da gentan, pötr yaouank!

Fanchig a reas eur zell ouz ar skudellad soubenn domm bag eun all ouz Loeiza. Ar zoubenn, da vihana, ne oa ket hini tromplus.

— Ne vo ket start d'in, a zonzas, gounit ar skudellad vrasan! — Koulskoude e tennas e chupenn evit gellout lammat pelloc'h. Eun töl lusk ha setu hen da greiz an hent... Rrraou!... Kerkent serrat an nor ha morailhet a-zibarz, ha c'hoarz ha skriñ gant Loeiza hag he mamm. Koustout a ra kêr deski ar vicher pötr yaouank!

Fanchig ne gredas ket lakat reveulzi e Kernebeudig. N'en doa ken, neuze, nemet mont d'ar gêr heb e goan hag e chupenn.

An noz a oa deut hag ar pötr a renke dizrei war e giz da Zant-Herbot evit tapout hent ar gêr.

(Ar pennad diveza er miz a zeu).

Breizadig.



GWALL NOZVEZ !

Da bardaez ar pelgeut, an Aotrou hag an Introun n'oant ket chomet da veilha e korn an oaled, en eur domma o izili skornet ouz tanflamm eteo Nedeleg: aet oant d'o gwele d'ar mare ma sav ar yer d'o glud, kalz abretoc'h eget kustum. Eno, sanket doun er c'holc'hedad pluñv, chouchet mat dindan al linsel wenn dantelezet hag ar palennou gloan fetis, hor ministr bras Herriot a c'hortoze ar c'houked.

War e veno, gounezet brao en devoa adarre eun tam-mig diskwiz, goude eun derveziad labour evel an hini en devoa peurachuet, ha, dre ze, fizians en devoa da c'helout bñan en em rei, daoust d'an tregas a gave e penn ar c'houarnamant, d'an tamallou a zastume war e ano, d'ar gounnar a zave en e eneb.

Hogen, kaer en devoa gedal, war e zaoulagad kloz, ar c'houked ne deue ket; ha kaer en devoa en em lakat di-zoursi, ar sonjou ne gwitaent ket e spered. Ha pebez sonjou! Sonjou trist o vont hag o tont, oc'h en em vñnta hag oc'h en em dourta an eil eben. Sonjou du-pod o tansal, mesk ha mesk gand ar sonjou gris-tenval! Eur bern traou kudennou rouestlet, afferiua divalo, a zirede hep paouez da zieza hon den. Siouas! muzul an dichans n'oa ket c'hoaz barr awalc'h evelse, ha setu d'e dro sac'h ar boued o c'hoari da fall hag o vouzat.

« Asa 'ta! a zonjas Herriot, pebez pouez war va sto-
 » mog! Eur stomog yac'h, evel va hini me, n'eo ket kouls-
 » koude eun tamm stomog dimezell! Souezusa tra! Gand
 » an aered a bep ment a roer d'ii ken alies da lonka; ne
 » c'houzanvan morse an distera poan, hag, hirio, setu me
 » distreset net, marteze war zigarez m'em eus debret
 » d'am c'hoan eur bastellad kig leue rostet? Kerniel an
 » diaoul! Emichans yun ha vijil an Iliz n'int ket graet
 » diouz va seurt-me! Sorc'hennou diskiant eo ar re ze,
 » goest da blijout d'ar sperejou bihan ha striz, met di-
 » c'halloud-krenn war sperejou ker bras ha va hini, digor,
 » ledan ha diere evel ma 'z eo! D'eur stomog vat, n'eo
 » ket falloc'h ar c'hig hirio eget eun dervez all... Ha kouls-
 » koude, ne fazian ket! Nann, rak ne c'hellan mui fazia!
 » Ni 'oar vat, ar gatoliked daonet-se eo a zo penn abeg
 » eus an drubuilh man. Ya! ya! i o-unan, gand o c'har-
 » dinaled, o eskibien, o beleien, o leanezed! Ha ne ve ket
 » eur c'hoz manac'h bennak en dije hirio strobinellet
 » ac'hanon, taolet warnon eun arouez a valloz?... Klev!
 » emaint holl o sini ar c'hleier: eur zon-galv eo! Kleier
 » ar brezel eo! Sell! sell 'ta. Pebez arme diniver o tont
 da zailha warnon o klask diskar va Republik!..... »

Hag ar sonjou a droe, a zaoulamme, a zanse, bern war vern... « Petra nevez e Bro-Zaoz? Va mignon koz taolet d'an traon? Pa seurt froudenn a zo eta e penn ar Zaozon ze?... »

Hogen, gand ar skwizder, malvennoù an Aotrou a deue da veza pounneroc'h. Ha setu hor ministr o tiskenn e puns ar c'houked. Noz eo! noz tenval!... Met, asa 'ta! n'eo ket sioul tamm ebet an nozvez. Eun trouz a zo, hag eun tompi, hag eur jolori! Peadra da youzara re vut pe da zihuna re varo! Brasoc'h trouz ne glever ket en ifern pa vez an diaoulou e kounnar oc'h egari ouz o mestr!... Strakadeg daouarn a zo, ha founnus, ha padus! Youc'hadennoù a zo ivez, ha niverus ha skiltrus! « Buhez hirr d'hor mestr! » Biskoaz den ne voe en e vuhez ker brudet ha ker meulet. A vec'h eur zutadenn bennak...

En eun taol, an toullad meuleurien hag an dornad suferien o devoa tec'het: aet oant kwit evel m'oant deuet... Kampr an deputeed he unan he devoa teuzet. Klozet gantan e brezegenn, Herriot, an den helavar, kountant bras eus e daol evel bepred, a laoske e levenez da nijal: « Pe- » bez den a zo ac'hanon! Pa varvin, ne vezo ket dister » ar c'holl evid ar Frans hag ar bed a bez! »

Breman edo hen, e-unan-penn, e kreiz ar ziouled, kloz ha mut e ziou vuzell. An dristidigez a veuze e galon. An hunvreou a grigne e spered. Hunvreou fall, hunvreou c'houero! Evelse e c'hoarvez peurvuia gand ar galouder pa rank dastum e strakerez!... Gwelet a reas dirazan eur vri divent, eur gompezenn hirr ha ledan, hep kae na kleuz, hep yeotenn nag edenn, met enni aman hag ahont toullou spontus, ha warni gwez diskaret, dismantret ha pulluc'het. Eun dachenn brezel, unan da ober aon hag euz... « Asa 'ta! oc'h ober petra an diaoul, emoun me » dre aman, a zonje ar ministr. »

Ha prestik, e galon gwasket etre skilfou begok ar spont o kregi ennan; e spered dianket diwar e zonjou pemdez-iek. Herriot, er maez anezan e unan, a youc'he: « Chau- » temps? Chautemps? e pe lec'h e chomes? O! n'am » dilez ket er vro c'houez-man. Te, ar brezelour-meur, » te a anavez an traou man gwelloc'h egedon-me. Den » a galon, deus da gennerzi da gamalad koz! Chautemps? » Chautemps?... » Respont ebet: na ger, nag grik. Hag Herriot, pouzet war araog daoust d'ezan, e valee hep gouzout na da be lec'h na perak e kerze. Poan ha skwizder en devoa, eur bec'h pri stag ouz e voutou. War an douar glep, eur rinkladenn a reas ha setu e droad distreset: « Ai! Ai! emezan... »

— « Petra zo 'ta, va c'halonig, a c'houlennas an intron, » e wreg, dihunet gand eur griadenn glemmus..

— » Han? Ne d'eo netra, netra... Ar c'hig rost, m'oarvat, » eo a zo adarre o waska ac'hanon. Pebez merzerenti,

» maouez paour! Dre jans, te a jomo ganen hepred evit
» va frealzi!...

— » Ya-sur! evit ranna ganez, va labousig koant, ar
» boan hag al levenez, a lavaras an durzunell. N'eus
» forz! En dro-man, n'ho peus d'en em gemeret nemet
» ouzoc'h hoc'h unan. Perak kousket atao, evel ma rit,
» war an tu kleiz? Eur voazamant fall ho peus aze!... »

A benn eur mare, ar c'housked a zizroas, ha gantan
adarre an hunvreoù. Eun eilvet gwech, hor ministr a oa
e unan, kollet e kreiz an dachenn skrijus, d'an abardaez.
Brumenn a goueze. Eur c'hlizenn skanv, met padus, ha
teo, teo! Ganti, an noz a goueze war an douar. En drém-
wel, netra! Ar baleer-noz en em zante evel klozet en eur
prizon, graet he mogerioù gant glao, mogidell ha tenva-
lijenn. O! ma c'hellje da vihana demwelet du-hont er
pellder, ha pa ne vije nemet eur c'hoz ostaleri, ar falla
hini, unan dizoare, unan flierius zoken, unan o koueza
en he foull, met goest c'hoaz da c'houdori eur pennad
gand he lastez toenn o prenvedi war dammou moger dis-
frantel. Awalc'h hepken evit terri nerz ar beradennou
glao! N'eus forz petra, an distera lochennig soul, leun he
diabarz a spern hag a loened lous, n'eus forz petra a vije
gwelloc'h eget prizon ar vogidell... Evel eur bern deliou
hejet gand eur sourrad avel, hon Aotrou a grene; hag e
zent gand ar spont a strake. Da vihana mar gellje lavaret
eur gerig, disteurel eur youc'hadenn. Nann! e vuzellou,
prennet, a oa mut. E ziskouarn, deuet a daol da veza
bouzar, ne gleyent nag an dent o strakal nag ar galon o
lammet. Pebez darvoud! Mut ar prezeger dispar! Hag en
dro d'ezan sioulded ar re vut, sioulded ar maro! Hor
ministr bras, en e strafuilh, en dije roet, a galon vat, holl
denzorioù e vro evit klevet an distera trouz, trouz ar
vuhez: eur gweskile o koagal, eun touseg o krial, eur
gouenn o lenva, eun delienn o koueza. Siouaz! netra,
netra... En eur vale, e droad a stokas ouz eun dra. Hag
hen soubla e gorf, astenn e vrec'h ha krabanata an douar.
Klask ha kaout a reas, hag e tornatas... petra? eun as-
korn seac'h, askorn eun den-marô.

« Allaz! émezan, e park an emgann eo emañ adarre
» evit doare! Doue ra viro na stokfen beg va boutou
» ouz eur voléd-kanol bennak. Tra gaer anezo a dle beza
» c'hoaz dre aman, hag e tarzint pa vezo sonjet an ne-
» beuta. Gwall inkinou an traou-ze! N'eus ket da c'hoari
» ganto!... »

Edo gand e zonzou, pa reas eur skrijadenn: eun dorn
pounner a boueze war e skoaz. Dirazan, evel eur peul,
eur brezelour a oa plantet, gantan eur wiskamant pri
kentoc'h eget dilhad glaz. Eur c'horf hurr a zen, treut
evel skoul, beuzet en eur vantell re ledan ha toull-didoull.
En e zremm, goloet a wad ha kailharet a loustoni, daou

lagad bras, glaz wenn, glac'haret ha trist, diou lenn beuzet
enno hag ar fizians hag al levenez... Daoust d'an den-
valijenn, Herriot o gwelas, hag e vennas krena gant an
dersienn ha koueza gand ar spont.

« Allo! eme ar zoudard, lak buñan da strakerez en
» dro, ha komz difazil! »

O burzud! Teod ar ministr a oa distagellet en e c'he-
nou, hag e c'houlennas:

— « Ac'hanta, soudard, pe seurt sonj a zo en da spered
» evit beza, ken diwezat all, o pourmen ar maeziou? Eus
» a belec'h e teues?

— » Eus a Paris.

— » Ha pe hano ac'h eus?

— » Her gouzout a ri, hep dale pell!

— » Feiz! va mignon mat, na c'h eus ket kalz doare eun
» den eürus.

— » Ne gaves ket?

— » Nann, sur! Ha souezet oun e vijes ken...

— » N'eus ket a dro, koulskoude, da yeza mantret: va
» buhez n'eo ket bet atao eun ebat: graet em eus ar
» brezel, me!

— » Ar brezel? Eur pez kaer! Selaou! Me 'm eus
» kalz gwelloc'h: siellet em eus ar peoc'h... »

Eur c'hoaradenn divent ha skiltrus a droc'has an diviz
war ar ger-ze: tarzet en devoa a zindan an douar, en
eur lakat ar volzenn a bez da grena, ha breman an
hekleo anezan a greske heb ehan, a strake hep paouez,
a dregarne hep termen. Hor ministr bras, er strafuilh, en
devoa kollet ar skiant: henvel oa ouz eur vag distur, tao-
let ha distaolet gand ar c'hoummou diroll war eur mor
direiz. Ar zoudard, hen, ne rea van, ne finve tamm: sell
e zaoulagad, o para, a goueze, rust evel hini eur barner,
war an Aotrou; hag e lavaras, pa voe tavet ar c'hoarz:
« Komz a reant a beoc'h ha peoc'h ebet ne oa... » —
« Ha peoc'h ebet ne oa! » a respontas, evel eun hekleo,
mouezioù diniver a zindan an douar.

— » Nag a vouezioù! eme ar ministr, hardisaet eun
» tammig. Nag a vouezioù!

— » Ya! nag a vouezioù, a respontas ar zoudard:
» 1.500.000 a zo anezó. N'o anavezet ket? Ar re ze kouls-
» koude eo mouezioù an dud az peus lazet!

— » Am eus lazet, me?

— » Ya! te ha da genseurterd; gand ho politikerez
» diaotulek, rannet ho poa ar Frans e diou gostezenn,
» bemdez oc'h en em zrailha. Ha setu perak hon enebou-
» rien a zonzas neuze dont da gemeret pep hini e damm.

— » Gevier, an diotachou ze! Biskoaz, n'em eus c'hoan-
» taet lakat va bro a dammou. Atao va youl c'houeka
» a zo bet ober unvaniez ar sperejou hag ar c'halonou,

— » Mat feiz! neuze ez peus en em gemeret fall a-
 » walc'h gant da labour. Disc'hriziennet as peus ar feiz,
 » gwella ma c'helles, eus kalon ar Fransizien hag hadet
 » az peus e pep lec'h greun ar vreinadurez. Petra zo
 » c'hoarvezet? Ar Boched o deus lavaret: « Allo! setu-deuet
 » ar mare. Ar Frans, dinerzet, ne c'hello mui harpa
 » ouzomp war an dachenn. Bec'h d'ezi! » Fazia o deus
 » graet, bennoz da Zoue! Met evit o sklerijenna, paea
 » hon eus graet eur gwall briz, gloazet pe lazet.

— » Gaouiat, an tamallou ze! Eus ar brezel, me a zo
 » direbech kaer! Goulennet em eus atao frankiz evit pep
 » koustians! Leina am eus graet, ouspenn eur wech, e
 » serr al leanezed. Ar gatoliked o unan eo o deus da genta
 » klasket trabas...

— » Na petra 'ta! An oan ivez eo a zo bet, m'oavat,
 » penn abeg mar deo bet lonket gand ar bleiz. Toull eo
 » da zac'h, kanfard, ha re goz da istor... »

Ar c'hoarvadeg skiltrus a grozas adarre a zindan an
 douar, a bignas beteg ar ministr, a zailhas warnan, evel
 laño-ar mor war an aochou. Muzellou kuzet a skourne e
 jotou gand o alan sklaset, a c'houeze en e ziskouarn ge-
 riou a valloz. Hogen ar zoudard, dizeblant, atao, a gen-
 dalc'he:

» Ya! politik al lazerez, derc'hel a rez d'ezi hirio c'hoaz
 » N'eus nemet pemp pe c'houec'h vloaz abaoe m'eo tre-
 » menet ar drailh, hag e roes dor zigor d'ar blezi koun-
 » naret, en dra ma tiarbennes ar vesaerien. Gervel a res
 » dispac'herien eus ar Rusi, enebourien eus an Almagn,
 » hag e kasez da bourmen kannad ar Pab. Den fallakr,
 » muntret da vro, diou wech.

— » Gwir eo! gwir eo! eme ar moueziou, en eur you-
 » c'hal malloz.

— » Ha klevet a res o gourdrizou? Dasprenet o deus
 » ar re ze gant priz o gwad, pep tachenn eus an douar-
 » man. Ha te, en da fallagriez, te a zo divergont awalc'h
 » evit diframma hirio o zi hag o bro digant leanezed ha
 » relijiuzed, kablus hepken da veza pedet evidout? Klev
 » 'ta! Douar ar re varo a zo douar sakr. Teir gwech mal-
 » loz war an nep a gaso diwarnan an dud a galon evit
 » sacha warnan dizertourien ha treitourien!

— » Ya! met... hag al lezenn? Va dever d'in me eo la-
 » kat an holl zujidi da zouja d'ezi!

— » Al lezenn? Te ra forz, sur, anezi. Selaou! O komz
 » evel ma res, ne d'out nemet eur fallakr dre zindan-
 » Etouez ar re veo, meur a hini a gav'er eus ar seurt-se;
 » n'eus ket eun unan en hon touez-ni.

» En ho touez d'eoc'h c'houi?

— » Ya! etouez ar re varo, soudarded ar brezel bras.

— » Te zo-eta eus spes?

— » Ya! dont a ran eus bro an Anaoun; karget oun
 » gant va mignoned d'as tamall ha d'az barn fenoz. A
 » vremen kondaonet out e lez-varn ar re varo. Doue mar-
 » teze a vir evidout kastizou all; evidomp-ni, ni a stlap
 » warnout malloz ha dismegans. Eur gwall zamm evidout,
 » n'eo ket 'ta! Met n'eo ket re vras evid eun torfetour
 » eveldout! An hini hel lavar d'it eo Zoudard Disano.
 » Kenavo!... »

An Aotrou ministr a zihunas, eur c'houezenn sklaset
 o perlezenna war e dal. Sklerijenn morlivet ar c'henta
 goulou deiz en em zile er gampr. En eul lamm, Herriot a
 voe war zav.

« M'eus aon, va mignon, ho peus bet eur gwall nozvez,
 » eme an Introun?

— » Ya! ne 'm eus ket gallet diskwiza; hunvrou dis-
 » kiant o deus torret d'in va fenn ha trelatet va spered.
 » Ha siouaz! an abadenn n'eo ket achu. Bremaik, e kampr
 » an deputeed, Bergey, Victor Balanant hag all a hejo
 » dirazon eur spontailh: ar gatoliked o tihuna er c'hres-
 » deiz, oc'h en em zével du-hont e Breiz Izel, 20.000 e
 » Kemper, 50.000 er Follgoad!... C'houenn a vezo adarre
 » em lerou... Ha! pebez micher fall eo va hini-me! Koll
 » a ray d'in va yec'hed ha va buhez! Ne gav ket d'eoc'h
 » e ve mall d'in rei va dilez???

J.

BREURIEZ AR BREZONEG

Petra eo BREURIEZ AR BREZONEG? — Bez 'ez eo eur Vre-
 riez kristen savet etre bugale vretien, etre 8 ha 14 vla, da zeski
 lenn ha skrivan brezoneg ha da zeski ive toniou hag istor Breiz,
 o Bro.

Petra 'zo red 'vit mont er VREURIEZ? — Kas e hano, e
 oad, e chomaj ha 16 real, d'an Ao. Georgelin, 4, Ru ar C'has-
 Brest.

Petra a c'honezer o vont er VREURIEZ? — 1° Eur gouma-
 nant, boaz da Feiz ha Breiz (20 real elec'h 8 lur).

2° Peurz er prijouz roet eur wech ar bloaz da vihana, e pep
 parrez, d'ar vugale desketan war al lenn hag ar skrivan bre-
 zoneg.

3° Peurz e peder oferenn er bloaz laeret da Nedeleg, da ouel
 an Anaon ha da oueliou S. Erwan ha Santez Anna, patron ha
 patronez ar Vreuriez.

4° Diplomou ha medalennou kinniget en hano an « Associa-
 tion bretonne », (Breuriez Breiz) d'ar vugale desketan.

5° Daou vanniel, unan 'vit ar botred, eun all evit ar mer-
 c'hed, hag a vo roet da zougen epad eur bloaz, d'ar parrouzioù
 o devo bet ar muian a boenchou.

Etre daou

(Pennad diwezan)

DIVIZ

FRANSEZ

Va c'henvroad a oa mab eur miliner a anavezet mat hag en doa gounezet forz arc'hant epad ar brezel. Ar pôtr koz n'oa ket eun diot hag, elec'h lakat e holl vounez da brenâ mêmériou d'e vab ha fanfarluchou d'e verc'hed, e lakas heman war ar studiou bras... Deut e oa da Bariz d'o achui; medesin oa e c'hoant bezan.

Eur pôtr evelse n'am oa mez ebet o pleustri gantan ruiou Pariz. Ar re all a oa studierien ivez, nemet daou hag a oa micherourien evel-doun. Pegwir ar seurt-se a grede anzav e oant Bretoned hag hen diskouez divorc'hed, — rak darn a zouge gwiskamant Kerne, — me oa mat d'in hen anzav ive... Met ar Breton e oan bet betek neuze, heb her gouzout, a rankas teurel e goz kroc'hen! Eur benn traou a zesken bep wech ma 'z een d'hor bodadegou; ha bep wech, o tizrei d'ar gêr, e veze eun tamm muioc'h a stad ennon o vezan Breton...

KORANTIN

Petra'ta a zeskes eno?

FRANSEZ

Pôtr kêz, n'oun ket evit hen diskleria e ken berr amzer! Sell aman hepken ar peza c'hellan da lavaret d'it: Kristof Kolomb, en deiz ma tizas aochou an Amerik, ne vœ ket ken sebezet ha me dre ma save dirak va daoulagad mougenñ an amzer dremenet, o tizloi, evit ar wech kenta, va bro Vreiz!...

Eun dra c'hoaz hag a rae plijadur d'in oa o c'hlevet o lenn brezoneg... Eur brezoneg tamm ebet kar d'an hini a gomzer dre aman hag a zo penseliet gant peziou galleg...

KORANTIN, o c'hoarzin

E Pariz ive e peus desket ar brezoneg? Fentus mat! Brezoneg Pariz!!

FRANSEZ

Na rez ket a c'hoap, va c'hamarad, rak o c'hoarzin diwar-benn ar peza ne ouezes ket, e c'hoarzez diwar da goust da unan.

KORANTIN

N'am eus c'hoant ebet d'ober goap, kred ac'hanon, nemet e kavan fentus evit eur Breton mont da zeski brezoneg... da Bariz!...

FRANSEZ

Desket em eus eno e oa eur brezoneg ha ne dleo netra d'ar galleg. Ar brezoneg-se, ha n'eo ket anavezet ganeomp, a zo bet adkavet gant tud gouiziek...

KORANTIN

Ni n'omp ket tud gouiziek...

FRANSEZ

Eno eman hor si! Dall omp war hon c'hont hon unan. Sell, ar brezoneg-ze, a rez anezan brezoneg Pariz, a ziskouez ez eus finv ha lusk c'hoaz en ene Breiz... An Uhel a lavare:

Te, yez koz, eo buhez Breiz!

Me lavar kentoc'h:

Te, yez nevez, eo buhez Breiz!

KORANTIN

Lavar seurt a gari war ze, me ne welan nemet eun dra: kavet az poa eur Vreiz nevez e Pariz, hag ivez eur brezoneg nevez hag a blije d'it kenan; gounit a rês frank da vuhez; darempred mat az poa gant mignoned diouz da zoare;... penôs e c'hellez te dizrei d'ar vro-man? Aman, paour kêz Fransez, ez eus eur vuhez all! Aman, ne glevi ket komz eus Breiz ebet, na koz na nevez; ar brezoneg a glevi a reio poan d'az tiskouarn... Spered an dud n'eo ken troet nemet gant traou dister: al labouriou hag ar c'honversou... Me gred, 'vit da blijadur, e tlejes kentoc'h beza chomet e Pariz.

FRANSEZ

Korantin, n'eo ket va flijadur a glaskan o tizrei d'ar gêr. Ar c'henteliou am eus tapet e Pariz ne deuint ket da veza talvoudek nemet er Vro. Bezan em beus em c'hreiz eur menoz, evel eur blantenn, hag a fell d'in planta aman.

KORANTIN

Poan beva he do da blantenn!

FRANSEZ

Da c'houzout eo! Ne vezin ket va unan. Hep dale, eur Vretonez hag he deus desket eveldon karout he bro e Pariz a deuo da rei an dorn d'in...

KORANTIN

An dra-ze eo! Da zimezi e teuez!

FRANSEZ

Ne zimesfen ket ma ne gavfen eno eur skoazell da gas va menoz da benn!

KORANTIN

Pesort menoz eta?

FRANSEZ

Ac'hanta, fellout a ra d'in, — ha da re all, rak n'emaon

ket va unan, — lakat da adkregi aman ar gwir vuhez vreton diazezet war ar spered breton a-unan gant ar feiz.

Va fried am zikouro; e skoaz labourat ha beva, ni a zalc'ho sur hon buhez pemdeziek troet warzu ar pal a fell d'eomp tizout; ne zellimp ket petra raio ar re all, nemet bale war eün gant hon hent.

Va c'hamarad medisin a deuo breman souden da chom ivez demdost aman; eun all hag en deus studiet, e kenver gant e vicher, ijinou kaer ar Gelted, a zavo eur stal leoriou e kêr, aman. Etrezomp hon zri, ni a zalc'ho d'en em henti ha da lakat da skedi, dre hon oberou, ar menoz kuzet en hon c'hreiz.

Sell aze, em godell, em beus paperou skeudennet warno tresou ha tôlennou da gempenn va zi...

KORANTIN

Eun ti nevez a zavi?

FRANSEZ

Nann, nemet kempenn a-nevez an hini koz. Diavêz ha diabarz, fellout a ra d'in e vefe lavaret, pa hen gwelfed: « Setu aze ti eur Breton! » Sell aman skeudenn eur puns... Gwelet a rez ar vardell-ze, evel eun houarn marc'h, ha harpet warni teir herminig krommet, a zalc'h, egiz pezh lein pe tôlenn, eur men evel eun dolmen? Eur groaz keltiek a zavin e toull va forz, dindan dervegn penn al liorz, liouiet war he c'helf teir dôlenn eus buhez va fatron, Sant Erwan.

KORANTIN

Marvailhou eo a gontez d'in breman?

FRANSEZ

Tra; ar wirionez penn-da-benn!... Danvez va fried he deus desket c'hoari an delenn, ha me, mar ouezen kanan gwechall, n'am beus ket ankounac'haet...

KORANTIN

Labourat a ri ivez?

FRANSEZ

Labourat va douar, va mignon! Danzen ar pezh a zebriñ hag a evin ha kaout c'hoaz da zioueret... N'em eus ket ankounac'haet va micher gwechall. Mall eo ganen kregi e pao an alar...

Sell, amzer am eus c'hoaz dirazoun em buhez ha va hent a welan sklêr. Doue arôk, Korantin, ha ni warlerc'h!... Gouzout a rez petra a zigasan ganin a gaeran diouz Pariz? Ar spi!... Ne lavarez netra ken?

KORANTIN

Da gomzou o deus laket da zével em c'hreiz arvar ha melkoni... N'ouzon ken...

FRANSEZ, o sellet er mêt

Ah! Sell erru gwetur ma c'henderv Joson d'am c'herc'hât... Deus ganeomp da eva eur banne, arôk ma 'z eio pep hini ac'hanomp war e du, ha ro d'in an darn da gas va mal ermêt!

(Kas a reont ar mal er mêt ha dizret war o c'hiz).
N'ankounac'haan netra? (O sellet).

KORANTIN

Gortoz 'ta! gortoz 'ta!... Henman... ar mal-man...

FRANSEZ

Hennez a vo d'it!... N'eo ket?...

KORANTIN, nec'het

Eo! eo! D'in-me eo!...

FRANSEZ

Deus! Erru Jozon!

KORANTIN, o kregi souden en e val

Krog aman ganin eta!

FRANSEZ, souezet, a grog er mal

Da belec'h ez ez?

KORANTIN

Da lakat anezan e karr Jozon!

PÔTR AR GAR, o tont er zal.

Voyageurs pour Paris, en voiture!

KORANTIN, o vont er mêt

Trugare! N'an ket pelloc'h! (Da Fransez).

Te ez pezo ezomm eus eur mevel!

DIWEZ

D. N. D.



Ar pinvidik. — C'houi a c'hellfe labourat rak n'oc'h na koz na kianv.

Ar paour. — Ha c'houi a garfe, marteze, e kemerfen plas eun tad eleiz a yugale d'ezan?

An hini teo. — Penaos, n'ho peus ket a arc'hant d'am faea; me ho lakaio da gaout!

An hini treut. — Mat a-walc'h a rafec'h! Ma rit eür gavadenn vat e rannimp anezi etrezomp.

O va Breiz, sav !⁽¹⁾

*Solve vincuta colli tui.
Torr ereou da c'houzoug.
Trede kentel Isaias e kan ar Pelgent.*

O Breiz, sav, a-nevez,
Pell 'zo ez out maro ;
Eus drouder yen ar bez,
Sav, a-nevez, va bro !

Hon Tadou koz, gwechall,
Pa c'halves anezo,
enep Saoz koulz ha Gall
A voe, war zav, ato.

Eur maen meurbed pounner
Zo bet laket warnout,
Ha, lore'hus, da vuntre
A zifenn da garout.

Bretoned, tud kalet,
O deus skuilhet o gwad,
Evidout, bro garet,
E kant ha kant stourmad

C'hoant en defe zoken
Da zifenn ouz Doue
Ren war ar gristenien
Ha war o bugale.

Siouas, mil gwech siouaz,
Eun deiz e voe klevet,
Kleier o seni glaz ;
Hor Bro a oa gwerzet.



Met ni zo tud-a feiz
Hag a zavo ar groaz
War gern uhela Breiz
Da lintra splann ware'hoaz

Abaoe, tamm ha tamm,
Breiz, da vrud 'zo kouezet,
A zo ankounac'hët.
Ha da ano, o Mamm,

Ni gomzo hor yez koz,
Hor bro n'eo ket maro ;
Prestik 'vo 'r mez ar foz,
Sav, a-nevez, va Bro.

Y. K.

(1) Eur c'hernevad ugent vloaz en a zigas, evel derou-mat, da Feiz ha Breiz, ar werz kaer-man, ar genta, emezan, en deus-klasket sevel. Evid e daol kenta n'en deus ket skoet re fall; tud yaouank evelse, niverus hag unanet a zavo, er vann, ar pezh a zo bet laosket da goueza en e boull, gant o zadou. E Kemper hag e Folgoad, p'en em vodas eno katoliked Eskopti Kerne ha Leon, d'ar 7 ha d'an 8. a viz kerzu diveza n'eus ket bet marteze a gomzou hag a vije aet-ken eun er speredjou, ken doun er c'halonou ha laket kement a youc'h hag a strakadeg deouarn da zevel evel re an A. Madec, Rener ar « Militant » pa-lavaras ano eus a Vreiz hag eus an ezomm he devoa da zevel, war he zreid, da derri an ereou a wask he feiz-koulz hag ar re a wask he broadelez; diwar ar c'homzou helavar-se eo diouanet, m'oarvat, gwerz hor mignon Y.-K. ha fizians hon eus-ne vezo ket ar genta ha diveza.



Mikael Marion

An hini a anavezaz ar gwella Istor Breiz, Arzur de la Borderie, a oa eun deiz o-sellet ouz paperou koz lez hon Duked, miret en Nao-ned, pa gouezaz e zaoulagad war ano eur c'hernevad a garas, en eun doare dispar, e vro, hag a oa ankouna-c'haet a-grenn gant e gen-vroiz, tost da bevar c'hant vloaz a oa. Adskriva a eure, gant preder, ar pezh a gavas, hag en eur embann kement-se goudeze e roas da anaout penaos ar vro a garie hon tadou, evel m'her greomp c'hoaz, a drugarez Doue, oa Breiz ha Breiz heptken :

: « Hor paour kez Breiz, emezan, ne voe morse eur rouantelez vras; ne gasas, tro ebet, soudarded d'ar broiou pell evit lakat tud ar broiou-se da blega d'he le-zennou, da gomz he yez ha da gemeret he gizioù; met ar pezh a ra brasder eur vro n'eo ket gounidou evelse eo; ar pezh a ra eur vro eo he c'halon hag eun dra all hag a zo skedusoc'h eget holl c'hloariou an douar: ar

enor. Hag e pe lec'h e kavoc'h, er bed, eur ouenn dud, muioc'h a galon en o c'hreiz ha muioc'h a enor war o zal eged ar Vretoned? E pelec'h e kavoc'h eur ouenn dud hag o deus gouezet rei hag en em rei evid o bro, al lealded hag ar feiz, eveldo? E pelec'h e kavoc'h eur ouenn dud kaletoc'h ouz ar boan, startoc'h en o menozioù ha troetoc'h egeto d'ober vad d'ar re a garont? E pelec'h e kavoc'h eur ouenn dud da gemeret evif ger o bro ar ger-se hag a youc'h atao kement kalon a zo yac'h ha glañ he gwad : **Potius mori quam fœdari**, kentoc'h mervel eged en em zaotra ?

Pa ziskenner eus eun hevelep lignez n'eus ket a ezomm da gaout c'hoant da ziskenn eus eul lignez all, rag arabad eo hen ankounac'haat, epad mil bloaz, azalek Ebestel kenta an Arvor betek an Dukez Anna hon tadou ne voent nemet Bretoned ha laket o deus kement a vrud vat da goueza war an ano-se, m'o deus lammet evid atao pep gwir digand o bugale d'hen nac'h, en amzer da zont, daoust pegement a zigareziou a c'hellfent kaout d'hen ober. »

Pa rankas dimezi gant Charlez VIII, roue Frans, an Dukez Anna a reas gwella ma c'hellas evit miret gwirioù hor bro en o sav; an diou vro, dre an dimezi-se a oa **a-unan**, met ne dlient morse beza laket **en unan**.

Breiz a vira's he lezennou, he frankizioù, he galloud da c'houarn he danvez; met petra eo ger tud a zo? Ar roue ne zaleas ket da glask ober e vestr e bro e bried hag ar pez a voe sebezusa eo gwelet neuze pennou brasa Breiz o stoui, an eil goude egile, dirak roue Paris; ar bobl, ar vourc'hizien, ar veleien, an noblans paour a jomas stag mat ouz o Bro hag o Duk, met, etouez an noblans pinvidik, tiegeziou bras hag o devoa heuliet betek neuze a hent eün, hent an enor, a en em gollas; trei a rejont kein d'o bro evit gounit arc'hant hag en em zavel, dreist ar re all; gwelet e voe tud, dre zindan o werza Breiz; re all her greas, a-wel d'an holl, evel Judas e vestr! En o zouez, hag er penn kenta, edo aotrou Rohan; e vab, 16 vloaz hepken d'ezan, o welet kement all a rankas ruzia gant ar vez, met ne heulias ket skouer fall e dad; gant kement a galon ha kaloneka brezelour a zo bet biskoaz, daoust peger yaouank oa, e stourmas, e Sant-Aubin du Cormier, — 1488 — ouz ar C'hallaoued renet gant e dad hag henman, diouz an noz pa glaskas e bôtr etouez ar re brizoniet, glazet ha maro, goude beza turiet pell hag hir amzer a gavas an den yaouank treuzet e gorf evel eur sil, dindan eur bern korfou maro.

Ar gwir vreizad hag a zo bet dizoloet e ano hag e oberou gant an A. de la Borderie ne oa ket a lignez uhel evel mab Aotrou Rohan ha pa varvas ne voe ket kement

a gaony endro d'e vez, met ker skedus e voe e varo; evel aotrou yaouank Rohan e ouezas rei e wad hag e vuhez evit Breiz: e ano oa Mikael Marion; ginidik oa eus a Gemper; diskenn a rae eus ar vourc'hizien vreizad-se a zo meur a diegez anezo en hor c'heriou koz, ouenn dud eün ha leal, ne c'hellont ket beza taget gant ar warizi evel ma ne c'hell ket an dir beza taget gant ar mergl; tud hag e lec'h beza o tispenn ar re a zo uheloc'h egeto a en em glev ganto evit brasa mad ar vro.



MANER PENARGER

Gwelet a raer c'hoaz, pa 'z aer er maez eus a Gemper ha pa gemerer hent Pont-n-Abad ar pez a jom eus a vaner Penarger; eno, war a leverer, eo e voe gant Mikael Marion; da vihana, an ti-se a oa d'e dud; an douribell a oa ouz e skora hag a zo deuet eur skeudenn anezi betek ennomp n'eman mui en he sav, met an ti, en deiz a hizio, n'eo ket gwall zishenvel diouz ar pez ma oa gwechall ha kaout a raer en diabarz, chiminalou bras duet gant ar maged ha prenecher ledan bet kroaziou maen enno kentoc'h.

Mikael Marion, da genta, a en em lakeas da ober konwerz dre vor ha goudeze, er bloaz 1483, e kemeras, diouz ferm, failhou ha leveou an Duked e Kerne. En amzer-se an traou a oa war var hag eun hevelep karg a oa dies en em denna enni, rak n'oa ket a gant vloaz c'hoaz abaoe ma ranket paea failhou, e Breiz, hag an dud n'o doa ket gallet en em voaza c'hoaz diouto ha ne baent nemet dre heg hag an nebeuta ma c'hellent.

Mikael Marion a ouezas an tu d'en em denna brao bras, rak er bloaz 1486, e voe roet ar garg-se d'ezan a-nevez evit tri bloaz all.

Er bloavez warlerc'h e strakas ar brezel etre Breiz hag ar Frans; ar C'hallaoued o doa laket o zreid war zouar hor Bro, ha, — gwas a pez a oa — hon tudhenti-til vrasa, aotronek Rohan, Rieu, Avaugour, Pont-n-Abad, Rostrenek hag all a oa a-du ganto.

E Kerne, kostezenn ar C'hallaoued a oa galloudus, rak aotrou Rohan hag aotrou Rieu o devoa dre eno eur bern leveou adalek Penmarc'h betek ster Elorn. Ar Vretoned a jome stag ouz kostezenn an Duk Fransez II a veze lavaret d'ezo n'o devoa ken da c'hortoz nemed al laeroni pe ar maro; Marion a glevas ar gour-drouzou-se, met ne reas ket eur van evid an dra-se; kendele'her a eure da zenti ouz gour'hemennou an Duk ha da vale, dindan e armou, el lec'h ma veze galvet da vont gant Mestr ar Vro.


Dal ma klevas, e deiziou kenta miz mezeven, edo ar C'hallaoued o vont da lakat ar seziz war an Naoned e-welas e oa mall d'ezan mont war raok; lezel a eure agostez e vad e-unan, e garg hag e dud; gant an tam-mig peadra en doa e savas 120 brezellour hag eun dervez, evit lakat ar re a oa e Kemper a-du gant kostezenn ar C'hallaoued, da gounnari, e treuzas ker e penn e dud dindan o armou, darn o tougen bannieloù Breiz ha darn all o seni gant an drompil'h; pignat a eure gant e-wazed war e lestr, ha dre ma tiskenne an Odet an he-kleioù tro-war-dro, a dregerne e traoniennou Erge-Armel, Klohars ha Plomelin gant son an drompilhoù hag ar c'hanaouennou brezel.

E Benodet al lestr a zavas e lien hag a gerzas etrezeg ar Sav-heol. Marion a en em gavas en Naoned, dres p'edo ar C'hallaoued o staga gant o labour milliget. Marion hag e dud ne lezjont ket eur c'hrogad da dremen hep kemeret perz ennan; ne gavent ket e oa awalc'h evito difenn ker diwar he mogerioù; pa gavent an tu ez aent war ar meaz d'en em ganna ouz ar C'hallaoued dreist-holl dirak dor Sant-Per ha war brad ar Vadalen. Marion hag e Kerneviz a veze kavet atao e penn pep stourmad; kavet e vezent e kement korn ma veze eun taol ennan da rei pe da gaout; diwar o lestr zoken e tennent tennou kanol war gamp o enebourien.

A-benn daou viz, potred Bro-C'hall, skuiz maro ha gwall bistiget, meur a hini anezo, a gavas mat en em jacha lostok, eun dervez, kerkent ha sav-heol.

Ha Kerneviz? Kerneviz o devoe ar c'haera maro a c'hellent c'hoantaat; an darn vrasa anezo a gouezas war dachenn an emgann, deuet da veza evito eun aoter e roent warni o buhez evit silvidigez o bro; kabiten

al lestr a voe tizet gant eun tenn fuzul hag al lestr e-unan, toullet gant ar bouliji, a yeas da strad an doue. Mikael Marion a c'hellas gwelet ar C'hallaoued oc'h en em denna, met eun nebeut derveziou goudeze, re skuizet ha re c'hlazet, e tremenas; an Aotrou Doue a oa bet mat evitan p'eo gwir en devoa roet d'ezan ar c'hras a-raok mervel da welet an Naoned digilhet hag ar C'hallaoued o tec'het, trec'het gant ar Vretoned; ne lezas ket e galon da veza gwasket gant an anken a rann kalon an hini a wel o tiskenn er bez ar pez en deus karet ha difennet; nann, pa bignas ene kaer Mikael Marion d'an nenv. Breiz, m'hel lavar d'eoc'h, a oa brao, an traou ganti; kredi a c'helle n'en doa ket roet e boan, e amzer, e zavez hag e vuhez, en aner, evid e vro hag ar gredenn-se a laouenneas e dremen-



AN NAONED E AMZER HON DUKED

Mikael Marion en devoa roet d'e vro n'eo ket hepken e vuhez, met e holl beadra ha ne leze na ti nag oz gant ar bennherez a jome e Kemper war e lerc'h.

Dispignet en devoa e beadra oc'h harpa kostezenn ar Vretoned e bro Gerne, o vaga, o wiska hag o paea an dud a vrezel a oa deuet gantan, eus a Kemper ha n'en doa ket bet a ezomm an Duk da rei eur gwenneg evito; en dra ma ruzie mogerioù an Naoned gant e wad, e enebourien, e Kemper, a yac ganto, e skrab, ar pez a jome eus e zavez, destumet gantan, dre boan e zivrec'h ha setu perag e rankas destum die evit paea e-wazed ha lezel e vere'h da goueza en eun dienez ken enorus hag e varo ha ker bras hag e galon vat.

An duk Fransez-II hag Anna Vreiz, e vere'h, n'oant ket tud dianaoudek, pell diouz eno, met o yalc'h a oa goullou hag ar pez a c'hellas an duk da ober a voe dimezi an emzivadez da unan eus e zekretourien, Fransez ar Zaoc.

Divezatoc'h, an dukez Anna a reas eur groaz war eur bern arc'hant a dlie Marion diwar dailhou Bro Gerne hag eus al lizer a skriv da Fransez ar Zaotz ha d'e bried evit kemenn d'ezo ar c'helou mat-se eo en deus an A. de la Borderie tennet istor ar C'hemperad kalonek.

An A. de la Borderie a laka kenver ha kenver Mikael Marion ha Leonidas, ar grek-se a roas ivez e vuhez evit diarbenn enebourien e vro: « Tud Kerné, emezan, a dalv tud Spart ha skouer vat Marion a zo ker kaer hag hini Leonidas, c'hoant am befe da lavaret zoken eo kaeroc'h, rak Marion n'oa na roue, na prins; n'oa nemed eur bourc'hiz; n'oa ket red d'ezan eta beza ar c'henta o vale ha n'oa ket red d'ezan dreist-holl rei d'e vro e zanzev hag e vuhez. Marvet eo didrouz hep beza klasket ober netra nemed ar pezh a oa dleet! »


Siouaz, e genvroiz ne ouezont ket zoken e ano; breman tri bloaz, Bretoned vat, a c'houlennas, ouz kuzulierien ti-kear Kemper, ma vije roet e ano da bennad hent Pont-n-Abad a zo harp ouz maner Penargêr.

Ha gouzout a rit petra respontas ar guzulierien ?

— « Perak mont da henvel evelse ar pennad hent-se? Biskoaz den dre aman n'en deus klevet ano eus a Varion ! »

Betek hanter ar XVII^{et} kantved e oa tud o chom e maner Kerhuel, e Plouneour-Lanvern hag a zouge an ano a Varion ; bugale vihan oant da eun ni da Vikael. Rei a reomp eur skeudenn eus dor vras ar maner-se hag e c'hell difennour bras an Naoned beza tremenet dreizi.

G. P.



LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

III. — *Kelennadurez ar vugale* (Kendalc'h)

Arabad eo morse d'ar re goz en em randaela dirak bugale; Mamm Finig a gemennas d'ezi mont 'da gerc'hat dour, diouz, ar pardaez; eur wech, diou wech e lavaras dioc'htu; ar verc'h ne zente ket — : Pet gwech, eme ar vamm e rankin lavaret d'it mont? Mont a ranki kouskoude!

— Asa! eme ar vamm goz, lez anezi 'ta, gwelet a res n'ema ket e chal da vont! eur gwall labour eo ivez an draze d'ezi, d'he oad! »

— C'houi a vez atao o sevel gant hounnez! met ouzin-me eo e sentoer wech-man; Alo, kerz dillo!

Hag e krogas e dourn Finig d'he c'has etrezeg ar feunteun:

— Mamm, eme houman, perag e rankan me plega d'eoec'h pa ne zentit ket ouz ho mamm? Pa vezin brasoc'h, e c'hellit kredi, ne rin ket ken!

Da c'hedal e pakas eur stavad; evelato he mamm, a anzavas outi he-unan he doa roet skouer fall d'he merc'h, meur a wech hag azalek an deiz-ze e taolas muioc'h a evez war he c'homzou.

Ar vugale a vezo eurus ha laouen ma welont bepred urz vat en ti, peoc'h ha karantez etre o zud, teneredigez en o c'henver. Met war zigarez beza mat arabad eo beza fall!

En amzer-man ez eus eleiz a gerent hag a laka o foan, o amzer hag o freder da ginkla ha da vigna o bugale; ne vez hano ganto morse nag a c'houzrouz nag a gastiz; aoun o deus da zisplijout d'ar c'hrouadur, da lakat droug ennan, d'hen lakat da ouela hag e vez grêt outan e holl lavarou; ar gerent-se ne ouezont ket mui gourc'hemenn; ne ouezont nemet senti. An dra-man a c'hoarvez dreist-holl el lec'h ma ne vez nemed eur pennher pe eur bennher. Ar re goz a lavare:

Neb en deus kalz a vugale
A diz ober d'ezo bale
Neb n'en deus nemed eur pennher
Tremen dioutan eo e breder!

Ha gwir eo! en tiegeziou e vez enno eun neiziad bugale ne vez ket a amzer da ober traou figus hag hegas anezo, d'ober e ziviziou ouz pep hini, ha gwelloc'h a-ze ne vezont ken.

Eur vaouez eus va farrez he deus daouzek bugel beo: « Biskoaz, emezi, n'em eus bet displijadur gant hini anezo; holl int sentus, holl labourerien vat, sot int gant ar gêr, eurus en hor serr, ha ni eurus dreizo! Arabad da zen dont da lavaret d'in eo braoc'h stad an hini n'en deus nemed unan pe zaou; kement-se a zo gevier; anat a-walc'h eo diouzomp! »

E kichen du-man ez eus ivez eun intanvez, eur mab naontek vloaz d'ez; hounnez avat a zo dister ar stal ganti; he fotr a vez mezo bep sul ha bep lun; gounidou mat en deus rak labourat a oar... pa gar! Allas, ar gwenneien a vez lipet en ostaleri. E vamm baour a glasko atao eun digarez bennak evid e zidamall Eur-potr chentil eo! Panefe d'e gamaraded e vije fur, met ne gred ket trei kein d'ezo! E dad ha me n'hon doa nemetan hag hon eus moumounet anezan, evel just, met, me oar en deus kalon vat! »

Pebez kemm etre an daou diegez! etre bugale niverus ha savet mat hag eur pennher mignet ha kollet.

**

Edon o kloza ar pennad-man p'eo en em gavet va filhorez, dimezet n'eus ket a wall bellou, da zont d'am gwelet; lenn he deus ranket va zamm-skrid hag he deus kriet ouzin: « Oh! va noun, ma plij gant Doue fiziout en-noun eur c'hrouadur da zével ne c'hellin biken ober diouzoc'h ha beza rust outan rak n'en defe ast ebet ouz e vamm! »

« Ra blijo gant Doue, m'oun me, rei eun niver bras a vugale d'it da zével, Annaik, ha bez dinec'h, seul-vui ma vezi doujet ganto, seul-vui e kresko o c'harantez hag o anaoudegez vat evidout; kristenien dispar, Breiziz dispount, labourerien kalonek, enor o bro-hag o farrez, setu aze al lezhaniou a renkont da zougen. Fizians am eus e teui a-benn eus da labour. »


TINTIN ANNA.

GWERZ AR BREZEL BRAS. — N'omp ket evit moula ar verzh-man, daoust peger kaer eo he c'homzou, rak he zon, eme varnerien ar c'han, a ziskenn war eun eus a Vontmartr: **gwerziou** brezonek a rank kaout **toniou** brezonek; an hini en deus savet ar verzh-ze a zo gouest da zével traou all hag a vo graet eun digemer laouen d'ezo sur a-walc'h.

Hiviziken ne embannimp nemed an toniou a vo bet kavet mat gant Lez-Varn ar c'han.

BUHEZ JENOVEFA A VRABAN

skrivet gant GLAODA 'R PRAT, ha skeudennet gant an Dimezell O. DE VILLERS, loreet he labour gant Skol-veur-Ijinou-kaer Roazon.



XV

Sifroa a gav Jenovefa

Goulenn a ra outi he hano hag he bro,
Evit petra eo deuet en eul lec'h ken distro!
O sellet pis outi e galon zo mantret;
Kalz muoc'h eo c'hoaz p'her c'hlev o lavaret:

— « Me a zo eur wreg paour a Vraban ginidik
Hag am boa eureujet d'eun strou pinvidik;
« O klevet eun teod fall e kredas oan manket
« Ha e kasas an urz ma vijen distrujet... »



SIFROA a jomas meur a vloavezh hep mont er-mêz eus e gastell. Wolf, e zervicher feal, hag ar vare-heien, e vignoned, a reas ker brao endro d'ezan ma teuas da asanti mont ganto a-wechou da zistana e benn. Unan anezo a roas eur gouel bras en e vaner hag a lakas tud da gana soniou laouen; unan-all a reas eur c'hourinadeg armou, evel m'oa ar c'hiiz d'ar c'houlz-se e-touez an duchentilou;

eun trede a bedas anezan da vont gantan da jaseal. Kement-man eo ar pezh a blije ar muia d'an ôtrou kont. Ha setu e voe savet alies troiou chaseal. Sifroa e-unan a bedas e holl vignouñed da eur chase vras a vije grêt d'ar c'henta dervez kaer a deuje.

An dervez-se a zikouezas. Kerkent ha goulou-deiz ar c'hont a gemeras penn an hent, eur maread tuchentil ouz e heul : holl edont war gezeg ha n'oa ket eur vez o gwelet; warlerc'h e teue ar vitizien gant kezeg sammet a vare hadourez, hag eun-toullad mat a chas.

Hepdale e voe klevet ar c'herniel o tregerni er c'hoad. Eur bern yourc'hed ha moc'h gouez a voe lazec. Ar c'hont a welañ eul loen bennak hag a yeas pell; pell war e lerc'h. Al loenig a dec'has war reier sounn hag uhel goloet a zrez hag a sperr hag a ziskennas prim er c'heo edo enni Jenovefa hag he mab. Eun heiz 'oa.

An ôtrou a ziskennas hag a stagas e varc'h ouz eur wezenn zabr. Oc'h heul roudou an heizez eas da welet war an erc'h fresk e tigouezas hepdale dirak dor ar c'heo. Pegen souezet e voe o welet penn eun den er c'heo-se, eun den strout ha livet fall evel an ankou. Jenovefa n'oa ket marvet evel e kave d'ezhi edo o vont da ober; hogen, ker fall, ken toc'hor oa chomet ma ne badje mui pell ken sur awalc'h.

— « Deus da ziskouez da benn da sklerijenn an deiz mar d'out den ! » a lavaras Sifroa eus toull an or.

Jenovefa a zentas raktal pakedet en he c'hroc'hen danvad, he bleo hir o rodella war he diskoaz hag he c'hein ; he divrêc'h hag he diwesker a oa e noaz, ha krena a rea gant an derzien.

— « Piou oud-te ha penôs e tigouez d'it beza aman da-unan ? » a c'houlennas Sifroa o vont war e giz, sponlet, Siouaz ! ne deuas ket an disterra douetans en e spered edo dirak e bried reuzeudik. Jenovefa hi avat a anavezaz anezan raktal.

— « O Sifroa ! emezi, gant eur vouez dinerzet holl, me eo da bried Jenovefa ac'h eus barnet d'ar maro. Doue a oar ez ouñ dinamm. »

Piour a lavaro pegen eslammet e voe ar paour kèz kont o klevet kement-se ?... Daoust ha n'edo ket oc'h hunvreal ?... Difiziout a rea eus e benn e-unan rak abaoe m'oa kouezet warnan an anken hag ar velkoni en deveze alies evel eur gommoulen war e spered... Kredi a reas gwelet dirazan teuz pe spes Jenovefa te c'het eus ar bed-all evit rebech d'ezan e dorfed.

— « Spes va fried meurbet karet, emezan gant eur vouez da frailha eur galon, perak dont da damall d'in ar gwad am eus skuilhet ? Daoust hag aman eo bet grêt an torfed ? Daoust hag er c'heo-ze eo o deus bet

lakaet da gorf dispennet ? Ya, me wel an dra-ze, da izili a skrij en douar-man dirak o bourreo kris ! Da skeud a zo drouk kontant o veza ma kredan dont ken tost d'ezan da viret ouzit da ziskuiza e peoc'h. Pella diouzin, spered eurus eus ar baradoz. A-walc'h eo d'in kaout va c'houstians d'am bourrevi noz ha deiz. Dizro da vro ar peoc'h ha ped Doue evit eur reuzeudik ha n'eus mui plijadur ebet evitan war an douar. Pe, da vihana, mar d'out evelon, korf hag ene eun den beo, kemer eur stamm laouennoc'h evit en em ziskouez d'in !

— « Sifroa ! va muia karet, n'eo ket eun teuz a zo dirazout, da bried Jenovefa eo ! An daou zen karget gant Golo d'am skei o deus bet truez ouzin hag ouz va bugel.

Ar c'hont koulskoude ne deuc ket buan e spered da gompeza, ker spontet oa gant ar pezh a wele : evel eur mouch teo a oa dirak e zaoulagad ha ne glevet netra eus ar pezh a lavare d'ezan Jenovefa ; sellet a rea outi hep distaga ha koulskoude e krede atô gwelet eur spes.

Jenovefa a grogas en e zorn gant madelez. Hen avat a jachas anezan gantan hag a lavaraz en eur grenad :

— « Lez ac'hanon ! Lez ac'hanon ! Da zorn a zo skla-set evel hini an Ankou ! Nann, ne ran ket mat ; gwelloc'h eo d'it kas ac'hanon ganez d'ar bez e lerc'h m'emaout o chom ; rak evidon-me beva a zo eur groaz pounner, mervel a vije eur c'hras kaer evidoun... »

— « Sifroa, va fried karet, a lavaraz Jenovefa o sellet outan gant daoulagad dous evel re eun èt ; Sifroa, n'anavezaz te ket da bried ? Sell mat ouzin, me eo Jenovefa. Setu aman ouz va biz ar walenn az poa roet d'in da zeiz hon eured. Kred ac'hanon, Sifroa, n'emaout ket oc'h hunvreal. O va Doue ! kompezit e spered ! »

Eur pennad goude Sifroa a oa deuet adarre ennan e-unan. Evel eun hunvre poanius en doa grêt.

Koueza a reas d'an daoulin e-hars treid Jenovefa hag e lavaraz :

— « Ya, te eo va fried Jenovefa ! »

Pell bras e chomas e zaoulagad da bara war dremm distronket ar plac'h ken dishenvel eus ar pezh ma oa gwechall. Ker gwasket oa e galon ma ne c'helle lavaret ger. Hepdale avat e teuas eur stered zour eus e zaoulagad, ha neuze e komzas.

— « Setu aman va fried ! Setu aman va Jenovefa ! Hag e pe stad, va Doue ! e kavan anezi ! Ha lavaret c'hoaz eo me am eus t'let anezi er verzerenti hir-ze ! Nann, nann, ne bar ket heol an Otrou Doue war eun den-all ker fall ha me... O Jenovefa ! Jenovefa ! ne gredañ ket sellet ouzit. Daoust hag ar galon az pezo da zellet c'hoaz ouzin-me gant madelez ? »

— « Sifroa, va fried karet ! eme Jenovefa o ouela ive, biskoaz n'ez eus bet em c'halon an disterra droug ouzit. N'em eus ket paouezet da garet ac'hanout, rak ma ouien ervat ez oa bet livet gevier bras d'it. Sav, ha deus war va c'halon ! Ouela a ran gant plijadur, keit-all a zo em oa mall da bokât d'it ! »

Ar c'hont ne grede ket c'hoaz sellet outi.

— « Pried ker ! emezan, ne rebeches ket d'in zoken va c'hrisder en da genver ! El eus ar haradoz ! Ene glan ha gwerc'h ! Pa zonjan em eus gelllet ober kement-all a boan d'it ! »

— « Ro pege'h, eme Jenovefa ; Doue a felle d'ezan kement-se. Digaset en deus ac'hanoun pell eus an dud gant aon marteze ne vijen deuet da goueza en droug, gant an amzer, ha grêt en deus d'in en doare-se kaout hent ar zilvidigez. »

Benoni a zigouezas endra ma komze e vamm evelse. Diarc'hen e kerze en ere'h, eun toullad yeot gantan dindan e gazell ; en e zorn ez oa eur c'hrizienn da zebri, ha debri a rea gant plijadur.

Pa welas ar c'hont gwisket kaer, armou endro d'ezan, eun tok gant eur bluenn wenn, hir, ar pôtr a jomas mantret. Prestik avat e tivorfilas hag e lavaras :

— « Heman, mamm, a zo unan eus an dud fall-se hoc'h eus komzet d'in anezo ? Daoust ha deuet eo d'ho laza ? »

Hag e redas d'he c'haout.

— « Arabat eo d'eoc'h ouela, mamm, emezan, me a ouezo difenn ac'hanoc'h. A-rôk mont betek ennoc'h en devo lazet mik ac'hanoun-me. »

— « Arabat eo d'it kaout aoun, va bugel ker, a lavaras Jenovefa gant dousder. Sell outan ha deus da bokât d'e zorn, ne raio droug ebet d'it, rak hen eo an tad mat am eus komzet d'it anezan ken alies. Sell, ouela a ra o welet ac'hanomp ken truilhek ! Doue en deus hen digaset evit hon tenna pelloc'h a boan. »

Ar bugel a droas da zellet ouz e dad. Bez' ez oa e-unan ar skeudenn veo eus an ôtrou kont. O welet e vab, Sifroa a zirollas adarre da ouela dirak kement a reuz ! Ranna a rea e galon. Kemeret a reas ar bugel etre e ziwrêc'h hag e pokas c'houek d'ezan hep gellout lavaret nemet :

— « Va mab ! va mab ! »

Sevel a eure neuze e zellou etrezek an nenv'ha gant e vrêc'h dehou e reas an dro da gorf Jenovefa.

— « Va Doue ! emezan, re vras eürusded a zigasit d'in war eun dro ! Setu deuet evidoun an dervez ne greden mui gedal. Setu aman war va brêc'h ar mab a wellan evit ar wech kenta, ha setu aman em dorn-all ar

pried karantezus a zigasit d'in evel pa lavarfen eus bro ar re varo. »

Jenovefa a groazias he daouarn hag a lavaras gant feiz :

— « Gouzout a rit brao bras, va Doue, e nebeut amzer digoll hor c'halonou eus bloaveziou poan ! Trugarez d'eoc'h, va Doue ! evit ho madelez hep muzul ! »

Ar bugel mat a reas evel e dud hag a lavaras warlerc'h e vamm :

— « Trugarez d'eoc'h, va Doue ! evit ho madebez hep muzul ! »

Chom a rejont eur pennad evel-se harpet an eil war egile hep lavaret ger : piou a c'hello lavaro dousder ar sonjezonnoù a oa en o spered ?

Jenovefa eo a gomzas da genta.

— « Daoust, emezi, hag hen eo beo c'hoaz va zud ? koz int ; daoust ha n'o deus ket re a boaniou da heul o c'hozni ? M'oarvat ec'h eus bet lavaret d'ezo ez oun didammall ? Sifroa ! setu seiz vloaz abaoe ma n'em eus bet kelou ebet diouto ! »

— « Ho tud a zo heo, Jenovefa, a drugarez Doue ! hag a oar ez hoc'h didammall. Bremaik e kasin unan eus va mignoned da gemenn d'ezo ar c'helou bras. »

Jenovefa a zavas war-zu an nenv'he daouarn o krena hag he daoulagad leun a levenez hag a anaoudegez vat.

— « Doue leun a vadelez, emezi, selaouet hoc'h eus va holl fedennoù, roet hoc'h eus d'in zoken ar pez ne greden ket ken goulenn. C'houi eo a zirroas va fried eus ar brezel yac'h ha dibistik hag a zeskas d'ezan n'em boa grêt netra fall ebet ; C'houi eo hoc'h eus torret va liammou ha peillaet ar maro diouzin ; c'houi eo a ro d'in hirio al levenez dispar da c'hellout lakât va mabig etre diwrêc'h e dad ; c'houi eo a roio d'it an eurvad da welet c'hoaz va zud ker war an douar-man ! C'houi eo an Doue karantezus ! ya, e gwirionez ! »

Jenovefa ne c'helle mui herzel ouz ar riou, mont a rankas er c'heo. He fried a yeas d'he heul. Peger mantret e voe o welet ar mogerioù leiz ! Gwelet a reas ar groaz koat goloet a van, ar maen deuet da veza flour gant daoulin Jenovefa bet warnan ken alies o pedi !... Gwelet a reas ar gwele paour, ar panerou brouan, ar c'hregen kraon bras a dalveze da bodezou... Hag o veza azezet e-kichen e pried, Sifroa a gemeras Benoni war e varlenn.

— « O Jenovefa gêz, emezan, dre be seurt burzud en deus gelllet Doue miret ac'hanout e buhez keit-all en eul lèc'h ker gouez ? Marvat e teue eus an nenv' eun êl da zigas boued d'it da zibri ? Seiz vloaz abaoe n'ec'h

eus ket tanvaet ar bara ! Tamm tan da domma da iziliñ sklaset ! Na linsel na pallenn da ober da wele ! Penôs ec'h eus gellet kousket ? Da dreid noaz en erc'h !... Va Doue ! va Doue ! pebeus burzud ! Ha lavaret eo merc'h eun duk a zo evel-se er vrasa dienez ! Kalon dener ha bepret fidel, penôs e c'helles c'hoas karet an hini en deus grêt d'it kement a zroug ? »

Jenovefa a droc'has d'ezan e gôz hag a lavaras gant dousder eun êl :

— « Pried meurbet ker, peoc'h war an dra-ze hivi-ziken ! Kavet em eus e kreiz va foaniou plijaduriou c'houek d'am c'halon. Gouzout a-walc'h a rês n'eman ket atô an eürused o chom e tiez ar re binvidik. Lezomp an dra-ze, va muia-karet ! Sell ouz da vab, pegen rus eo e ziou chod, peger krenv ha peger yac'h eo ! »

Neuze Jenovefa a gontas d'he fried penôs oa deuet Doue d'he sikour, abaoe ma welas an heiezh evit an dro-genta. Ar c'hont ne zistage ket e zaoulakad diwarni. Pa he doa echu e lavarâs :

— « Providans Doue a zo bras ! Bepred e kav mil doare da brederia ganeomp. O va mabig, arabat e vezo d'it morse ankounac'hât kement-se. N'oas c'hoaz nemet eun netraig hag e oas gwall gaset gant da dad ; edos o vont da vervel gant an dienez pa zigasas Doue d'it ha d'az vamm eun heiezh kalz lêz ganti. Da vamm a oa toc'hor, ha petra vijes deuet da veza da-unan dre aman e-touez al loened digernezh ? Ne oa den dre aze da ziskleria d'in ho chomaj hag ho tienez pa 'z eo deuet an heiezh-se d'en em ziskouez d'in ha da zigas ac'hanouñ betek ennoc'h. Traou netra, a lavarfed, burzudou a lavaran-mê grêt evidomp gant Doue en e vadelezh d'ar c'houz hon doa ar muia ezomm. Laka bepred da fizians e Doue, va bugel ker, keit ha ma lezo ac'hanout war an douar. »



XVI

Jenovefa a zizro d'he c'hastell

AR C'HEGINER

— « Ne garfen sponta den, met gwelit an dra-man :
Eun diaman aour kaer e kalon ar pesk-man !
Dalit, setu aze. N'em eus ket e zavet
Ken n'ho piñe, ôtrou, outan piñ, sellet !

SIFROA

— « Doue, Krouer an nenv, petra eo kement-man ?
Eun deiz em boa roet gwalc'h ha diaman
D'ec'h-hu, Jenovefa, pa 'z omp bet eureujet
En eun templ a Vraban ; em hano eo merket.

NE c'hellent ket chom pelloc'h er c'heo ; dont a rejont eta er-mêz o daoulagad leun c'hoaz gant an daelou o doa skuilhët el lêc'h-se. Sifroa a grogas er c'horn arc'hant a zouge ouz e gostez hag a c'houezas ebars evit gervel an duchentil, e vignoned. Benoni a lampas gant ar blijadur hag an dudi, biskoaz n'en doa klevet kement-all. Kemeret a reaz e-unan ar c'horn eus a zaouarn e dad hag e klas-kas ive son gantan.

An ôtronez, o klevet korn an duk, a hastas diredet, darn war droad, darn war varc'h. Holt e-chemjont sebezet o welet eur wreg ken treut, livet fall ha gwisket.

ken truilhek, krog e dorn Sifroa, hag o welet eur bugel koant war e vrêc'h. Ober a rejont ar c'helc'h endro d'ezan ; hini anezo ne grede lavaret grig ebet.

— « Otronez a ouenn uhel, ha c'houi, mitizien fidel, a lavaras Sifroa, setu aman va fried Jenovefa ha va mab Benoni ! »

Ar c'hont a gontas d'ezo istor vurzudus e bried. Kalonou an dud-se a voe skoet kenan ha daerou a deuas zoken e daoulagad meur a hini. Daou varc'heg a yeas war an eur da vit dilhad da Jenovefa hag eur gador d'he dougen. Lavaret e voe d'ezo ive roi urz er c'hastell da lakât an traou e tu da zigemeret ar brinsez. Grêt e voe eun tantad war eur roc'h ha pourchaset eur pred a-zoare. Sifroa e-unan a astennas eur pallenn e-kichenik an tan da Jenovefa da azeza. Goude e tôlas e vantel war he skoaz, hag eur gouel dantelezet war he fenn. Anaout a reas Jenovefa an holl dudhentil a deuas pep hini d'e dro da stoui dirazi, da ginnig d'ezi o gourc'hemennou, ha da ziskouez d'ezo o levenez. Wolf a deuas da genta a douez ar mitizien ; poan a rea d'ezan gedal ken na vije bet an holl dudhentil.

— « Va itron vat, emezan, o skuilha daerou puilh war he dorn, breman eo e kavan ar vrasa plijadur da veza bet diouallet dioc'h klezeier ar Vorianed, p'eo gwir e ra Doue d'in ar c'hras d'ho kwelet hirio e buhez. Breman e varvin e peoc'h hag hep keuz, »

Goude e kemeras Benoni etre e zivrêc'h hag e pokas c'houek d'ezan war bep chod.

— « Ra vezi deuet mat, bugel ker ! Henvel mil out ouz da dad ! Ra vezi war eun dro kalonek evel dan ha dous evel da vamm, hag, evel do o daou, madelezus ha devot. »

Da genta, Benoni a voe nec'het o welet kement-all a dud gwisket kran. Hepdale avat e kavas adarre e deod lemm hag e rea eleiz a c'houlennou war gement a wele evit an dro genta. Kenta tra a skoas e spered a voe ar varc'heien, da lavaret eo an duchentil war varc'h. Hag e tigouezas gantan ar pez a en em gavas gant an dudou kenta a welas pôtrêd war varc'h : e kredas ne rea ar pôtr hag ar marc'h nemet unan !

— « Tata ! emezan, he ouien ket ez oa tud o vale var bevar droad ! »

Ar varc'heien a oa diskennet diwar o loened. Unan anezo a deuas da ginnig eul loen kaer d'ar pôtrig.

— « Tad, emezan, e pelêc'h ho peus kavet al loened-se ? N'em beus gwelet hini ebet eus ar seurt-se er c'hoad. »

Tostât a reas tostoc'h da zellet ouz ar marc'h, hag e welas en e c'henou ar westegn goarniset a aour hag a arc'hant, hag e voe meurbet souezet, rak kredi a reas e

tebre ar marc'h ar westegn-ze. Souezetoc'h e voe c'hoaz o welet an tan.

— « Mamm, emezan, daoust hag an dud o deus tapet krog el luc'hed a deu eus ar c'houmoul du, pe roet int bet d'ezo gant Doue ? Kaera donezon a Zoue, emezan o sellet ouz an teodou tan hag o tomman outo e izili sklaset. O mamm, mar hon dije gouezet, ni hon dije pedet Doue da rei d'eomp an dra-ze ive : vad en dije grêt d'eomp er goanv-man ! »

Chom a reas bammet o welet ar frouez kaer a zigaset da zibri. Krog ez oa en eun aval aour hag e lavaras :

— « Marvat, du-ze, en ho pro, ne vez ket a c'hoanv, va zad ? p'eo gwir ho peus digaset aman ar frouez kaer-ze... Me gred e vezo brao d'in mont da jom ganeoc'h ! »

Goude e sellas ouz eur werenn ; ne grede ket lakât e zorn warni, da genta. Abenn eur pennad e krogas enni hag e chomas da zellet outi, souezet.

— « Penôs e c'hell chom hep teuzi, emezan ; rak marvat eo grêt gant skorn ! Doue velkent en deus grêt eur bern traou kaer ha ne anavezet ket c'hoaz ! » Hag e sellas ouz Jenovefa hag ar re-all a-dreuz e werenn.

Eur mevel bennak a zigasas dirak ar pôtr eur pladig hag a luc'he kenan ; Benoni a welas e benn ennan, ar pez a reas aon d'ezan da genta.

An duchentil a c'hoarze gant plijadur hag ar gerent a ankounac'hae a-nebeudou o foaniou tremenet.

N'oa ket peur echu ar pred pa en em gavas ar marc'heg gant dilhad ar brinsez. Jenovefa a yeas er c'heo, hag a gouezas d'an daoulin raktal da drugarekât an Otrou Doue. Goude e wiskas he dilhad. O vont er mêz e kavas ganti ar groaz koat goloet a vâ. Edo neuze gwisket adarre evel eur brinsez vras.

O veza ma vije ret ober eun dro vras gant ar gador evit tizout betek ar c'heo, ar vitisien o doa poaniet da ober eur c'hravaz. Ar c'hont a ledas pallennou kaer war ar c'hravaz-se ha goude ec'h azezas warni e bried hag e vab. Pa voe dastumet ha klozet pep tra, ar c'hont hag e gompagnunez a loc'has da zizrei d'ar gêr. Edont hanter-hent pa gavjont ar gador-hent. Jenovefa ha Benoni a zavas enni. Dre-oll e kavent eur bern tud diredet a bep lêc'h da welet ar gontez vat hag he mab, rak ar c'helou eürus a oa nijet dre ar c'harter evel douget gant an avel. Ar goueriaded o doa lezet ar parkeier ; holl e teurent gant o dilhajou kaera da ziambroug o mestrez vat : eur gouel dudius evit ar vro. Seulvui e fostae Jenovefa ouz ar c'hastell, seulvui e kreske niver an dud deuet d'he gwelet. Daerou laouen a oa e kalz a zaoulagad hag eur maread tud a youc'he o strakal o daouarn. E-touez ar bobl tud-se, eas oa gwelet daou berc'hirin, mantellou hir ganto, ha war o fenn tokou.

ledan, kroegen Sant-Jakez tro-war-dro d'ezo. Ganto o daou ez oa pep a benn-baz. Koueza a rejont d'an daoulin dirak kador Jenovefa douget gant pevar bôtr kreñv. An daou-ze a oa an daou zen karget gant Golo, seiz vloas a oa, da rei tól ar maro da Jenovefa ha d'he bugel. O daou e c'houlennjont trugarez digant ar brinsez, Konrad muioc'h koulskoude eget egile; gwelloc'h o dije grêt, a lavarent, he c'has da di he zud, daoust da bep riskl, kentoc'h eget he zeurel er c'hoajou. Lavaret a rejont d'ezhi c'hoaz e oant bet o welet bez Hor Zalver, o veza ma ne gredent ket chom tost da C'holo. Aon o doa ive rak kounnar an ôtrou kont, ha setu pe-rak n'oant ket en em ziskouezet nemet d'o zud. N'o doa douetans ebet e oa maro Jenovefa hag evit miret da zigeri gouliou koz o doa kredet ez oa ar gwella tra da ober level a-grenn war ar pezh a oa c'hoarvezet.

Jenovefa, gant madelez, a astennas he dorn d'ezo da boket.

— « D'eoc'h, emezi, goude Doue, eo e tleomp ar c'hras da veza heo c'hoaz, va mab ha me. Trugareka an daou zen-man. Int-hi eo; sentusoc'h ouz mouez Doue eget ouz hini an dud, o deus lezet da goueza d'an douar ar c'hleze a dliz skei ac'hanomp. N'eo ket gwir, emezi, n'ho peus ket a geuz hirio da veza lezet hor buez ga-neomp ? »

— « Siouaz ! emezo, eun dra a diemp ober : kas ac'hanoc'h da di ho tud ! »

Goude ez ejont d'en em strinka da dreid ar c'hont, da c'houlenn pardon outan ive ha d'e drugarekat evit an holl vadoberou en doa skuilhet war o gwragez ha war o bugale. Rak klevet o doa, emezo, gant souez vras, he doa pedet Jenovefa he fried da gaout truez outo hag en doa selaouet he fedenn.

— « Me n'e ouien ket, eme an ôtrou kont, petra ho poa grêt evit va zud muia karet, pa gomzas d'in eus ho tud ezommek. Hep her gouzout eta eo em eus sevenet komz Hor Zalver Jezuz : « Bezit trugarezuz hag e kavot hoc'h-unan trugarez. « It e peoc'h ha kredit n'hoc'h ankounac'hain ket. »

O daou e savjont hag ez ejont da heul ar brinsez.

— « Ankounac'haet ec'h eus, konsort, eme Roger, ar pezh a lavaren d'it en deiz-se, « n'eus ket a ezom da gaout aon oc'h ober ar vad, e kaver digoll a-zoare evit-se abret pe zivezad ? »

Tost oant d'ar c'hastell pa voe klevet ar c'hleier e bole a bep tu. Ar bobl eo, anezi he-unan, a oa o c'hedal gwelet an duchentil o tont hag a oa lamet gant kerdenn ar c'hleier kerkent ha ma voent gwelet o tispaka. Eur bobl tud diniver a oa diredet; o c'haout a read dre-holl : war an henchou, war ar c'hleuziou ha betek e blenchou

ar gwez. Peb unan a felle d'ezan gwelet ar brinsez karet a greded maro pell a oa. An holl zellou a oa troet warni. Kement e youc'he ar bobl he levenez ma 'z oa goloet mouez ar c'hleier gant o re.

Azezet en he c'hador, Jenovefa a blege eun tammig he fenn hag a en em gave sammel gant kement-se a enor. A-zehou d'ezhi edo an ôtrou kont, war varc'h, hag a-gleiz, Wolf, ar zervicher koz ha fidel. An daou ber-c'hirin a deue warlerc'h; werlerc'h e teue ive an heiez hag a zaoulampe evel eur c'hi bihan.

Jenovefa a gavas bodet er c'hastell holl itronezed ha demezelled ar c'harter diredet da ober enor da vertuz ar gontez santel. Gwisket o doa o dilhad kaera. Dirazo hag arôzo ez oa eur plac'hig koant kenan eur c'hollier perlez a briz bras endro d'he gouzoug. Dougen a rea en he daouarn eur gurunenn grêt gant bokedou mouk : « Digemeret, Itron, eme houman, hor c'hurunenn dister; Doue a vir d'eoc'h en nenv eur gurunenn eun tamm mat kaeroc'h. »

Ar plac'hig koant a ouele dourek. Jenovefa n'he ana-vezas ket dioc'htu hag a c'houlennaz piou oa. Lavaret voe d'ezhi ez oa hounnez Bertha, an hini a oa bet ouz he gwelet er bac'h : pevarzek vloaz he doa neuze.

Dont a reas da Jenovefa ar zonz eus an nosvez skri-jus, an hini ziveza, he doa tremenet en tour. Starda a reas ar plac'hig vat war he c'halon.

— « Va Doue ! emezi, n'edon ket en zonz da zizrei mui d'ar c'hastell-man pa voen diframmet en noz-se eus va frizon evit va c'has d'eur maro kris ! C'houi hepken, va Doue, a ouie pe seurt enor a vije grêt seiz vloaz goude d'ho servicherez zister. Mar deo ker bras war an douar-man ar baeamant a roit d'ar re a vir ho lezenn, petra root d'ezo eta er bed-all, va Doue ? »

— « Ar wirionez eo, a lavaras Wolf. Koulskoude an dud fur ha santel ne gavont ket atô er bed-man, evel-doc'h, Itron, eun digoll kaer. Ar seurt grasou a zo rouez, end-eun, marvat evit kreski hor santelez war an douar ha kaerât hor c'hurunenn en nenv. Otrou kont, emezan, pevar-ugent vloaz a zo emeon o chom war an douar, alies oun dizroet d'ar c'hastell-man gant lore gounezet er brezellou, biskoaz avat betek-hen n'em boa gwelet c'hoaz eur gouel da veza lakaet war ar renk gant he-man. »

— « Ar gouel-man, va den mat, eme an ôtrou kont, a zo savet gant Doue e-unan evit enori ar vertuz tamallet e gaou. »

Jenovefa a oa skuiz bras gant kement a draou kalonus. Gant pegement a blijadur e welas adarre ar gambr-se ez oa bet ken eurus enni ! A-nevez e trugarekaas an Otrou Doue hag ez eas d'he gwele.

Lez ar c'hont koulskoude a jome e kanv evel diarok. Wolf a yeas war varc'h da gemenn da gerent Jenovefa e oa kavet o merc'h. Pa en em gavas edo an dud e chapel ar maner o kana seizvet servich dez ar bloaz maro Jenovefa. An ôtrou 'n eskob Idulf a rene al lidou.

Piou a lavaro petra dremenas e kalon an dud-man pa gleyjont ez oa beo Jenovefa. Kemeret a rejont war an eur penn an hent da vont da welet o merc'h, hag hepdale o devoe an eurvat da starda war o c'halon Jenovefa hag he mab.



I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ GENVER

I. — Eur wrierez. II. — Eun aval. — II. — Bannou eur vilin avel. IV. — 34 ha 6. V. — 301.

II. — DIVINADENNOU MIZ C'HOUEVRER

I. — Ken teo hag eur varrikenn
Skanvoc'h eged eur bluenn.
20 p. ar r. Digaset gant Sane Iliou, Brest.

II. — Petra n'en deus na penn na troad
hag en e benn meur a lagad?
20 p. ar r. Digaset gant Th. Ollivier, Plouneour-Trez.

III. — Eur paotr koz war an hent
Keit e varo hag e zent.
20 p. ar r. Digaset gant J. Thomas, Plouider.

IV. — Me 'm eus eur gamprig wenn
Aic'houezet en daou benn
Ne vern peseurt a ri
Ne 'z i ket 'bârz hep he zerri.
20 p. ar r. Digaset gant E. Boucher, Plougerne.

V. — Eun tavarnou n'en deus nemet tri muzul, unan
a eiz kart, unan a bemp kart hag unan a dri
c'hart.
Penaos e rai an tavarnour evit servicha d'e
hostizien eul litrad gant ar muzuliu-se.
20 p. ar r. Digaset gant E. Boucher, Plougerne.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet
abenn ar 25 eus ar miz da:
M. le Directeur du **Feiz ha Breiz**, à Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{ce}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
Fr. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildut*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — 1625 — Ar Zizun veur — 1925, J. BULEON hag
E. AR GARREC. — Goude Kemper, ar Folgoat, etc..., E. A. M. —
A-benn miz mae, EUR C'HUZULIER koz. — Penñs e teskas Fan-
chig Wegan ar vicher pôtr yaouank, BREIZADIG. — Pevar gour-
c'hemenn kenta an Eimzao breizek, EUR BLEUN-BRUGER. — 1425
— Jili Breiz — 1925; G. P. — Plijadur ha displijadur, P. TR.
— Buhez Jenovefa a Vraban. — Son ar bleo trouc'het, FRANCIS
MOAL. — Keleier ar miz. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOULIOU MIZ MEURZ

- 1 a viz Meurz.** — Kenta sul ar Ckoraiz.
An ofis p. 281 e levr an A. Uguen.
D'ar 4, 6 ha 7, Pevare amzer.
- 8 a viz Meurz.** — Eil sul ar Choraiz, p. 288.
- 15 a viz Meurz.** — Trede sul ar C'koraiz, p. 292.
- 22 a viz Meurz.** — Pevare sul ar C'koraiz, p. 298.
- 25 a viz Meurz.** — Gouel Varia Veurz, p. 672.
- 29 a viz Meurz.** — Sul ar Baston, p. 303.

1625 - Ar Zizun veur - 1925

Burzudusa tra a welas Yvon Nikolazig a voe d'al lun. 3 a viz meurz 1625.

Al lun 3 a viz Meurz

diouti, tu ha tu, evel en troiou all, ha n'eo ket an dra-ze hepken; elez a gleved ivez o vont d'he heul, en eur gana.



Santez Anna a en em ziskouezas d'ezan, en deiz-ze, gant muioc'h a sked eget bis-koaz; sklderder vras a daole
En taol-man e teue da lavaret he c'homzou pouezusa; dizrei a eure war ar pezh he doa lavaret betek neuze; ne c'hellet mui gedal pelloc'h; Yvon Nikolazig a dlle dizrei raktal da gaout e Berson da lavaret d'ezan e felle d'ezi a-grenn kaout eur chapel er Bosennou hag edo o vont da gemeret perz a-nevez e Keranna. Ha neuze emezi, testiou ho po, ne vo ket pell, hag a ziskouezo splann piou

eo an hini he deus fiziet ennoc'h eur gefridi.

Rei a eure da anaout, dreist-holl, e vije gwelet, dizale, eur c'houlouenn o skedi, er park, a-zioc'h al lec'h m'edo ennan he skeudenn goz.

Gourc'hemenn a eure d'he c'hannad rei da anaout kement-ze holl da dud vat eus e anaoudegez gouest da rei skor hag ali d'ezan raktal hag a vije divezatoc'h e destou.

Teir eur e padas ar weladenn-ze. Pa zizroas, e c'hoar a c'houlennas outan e pelloc'h e oa chomet er maez ousspenn zig, hag a gave d'ezan ne oa ket chomet er maez ousspenn eun hanter eur, ne lavaras ger hag a yeas d'e gampr.

Ar meurz, 4

Antronoz, ha setu hen e penn an hent da vont da Bluneret da gaout an Aotrou Person, met ne falvezas ket gantan mont e-unan; pedi a eure Yann Lezulit, hag a oa e kuzul an iliz, da vont gantan.

Daoust ha digemeret gwelloc'h e vije en taol-man? Daoust hag an Aotrou Person a-raje ar pezh a c'houlenned outan? Da vihanan, ar c'hannad en divije graet ar pezh a oa dleet ha divec'hiet e galon.

Siouaz, ar Person ne voe ket dishenvel, en taol-man, diouz ar pezh m'oa bet en taol kenta ha ne ziskouezas laouenedigez ebet da Nikolazig.

Yvon a lavaras en devoa gwelet adarre Santez Anna hag e teue d'e gaout, eus he ferz, da c'houlenn outan ma vije adsavet he chapel e park ar Bosennou. An Aotrou Roduez a voe kalet e gomzou: « Gaou a rit ouzoc'h hoc'h unan, Yvon, emezan, hag ouz ho tud, o vont da gredi sorc'hennou evelse; betek hen, e oac'h kemeret evid eun den a skiant vat; petra vo lavaret a c'hanoc'h, hiviziken, ho po kollet ho penn, hep mar ebet, ha ne vo ket faziet kalz? »

Droug a yeas ennan hag e c'hourdrouzas ar paourkez Nikolazig: « Ma ne ehanit ket da gomz eus an traou-ze, e tifennin ouzoc'h, dizale, mont en iliz; ne lezin ket ken a c'hanoc'h da dostaat ouz ar zakramanchou ha ma varvit; er stad-ze, e vezoc'h kaset d'an douar, evel eur c'hi! »

Ar Person, evel ma ne ouesje ket mat a-walc'h petra lavare, kement a zroug a oa ennan, a gendalc'has: « Daoust hag ouz tud eus ho stad eo e komz an nenv? Ma 'n deus eun dra bennak da lavaret e komzo kentoc'h ouz tud gouizieq ha santel eged ouzoc'h c'houi. Sevel eur chapel? Biken. Aman ez eus chapeliou a-walc'h ha re ent-eeun; hag en hent-se, roit peoc'h d'am penn gant an traou-ze; setu aze va ger diveza.

Nikolazig a jomas sioul hag a en em dennas gant e vignon Lezulit; n'oa ket fallgalonet, mar kirit, rak gouzout a rea ervat e teuje Santez Anna a-benn da gaout he chapel, en eun doare pe zoare, met trist oa kenan.

An noz eus ar 6 d'ar 7

D'ar Yaou da noz, Santez Anna a deuas adarre da greski e fizians, met, en hevelep amzer, e lavaras e

oa d'ezan oa da staga da genta gant ar chapel nevez: « Ha neuze, emezi, n'ho peus ket a ezomm da veza nec'het, a bep tu e kavoc'h tud da rei an dour d'eoc'h ».

Nikolazig, ken eun ha tra, a lavaras gant doujans: « Grit eta, eur burzud bennak, va Mestrez vat, ma welo splann, va ferson hag ar re all ho peus c'hoant, e gwirionez, e vefe labourer war ho chapel? »

« Lakit ho fizians e Doue hag ennoun emezi, traou burzudus a-walc'h a weloc'h ha niver divent an dud a deuo aman d'am fedi a vezo ar brasa. »

Evel ma n'oa ket evit gortoz ken, Nikolazig a en em lakeas da glask, en e spered, an doare gwella da gas al

labour da benn hag e teuas da gredi e oa dleet d'ezan gwerza kement tammig leve en doa evit kaout an arc'hant en doa ezomm.

Met Santez Anna ne c'houlenne ket kement-se outan.

Ar Gwener, 7

tri bern; a belec'h e teue an arc'hant-ze; n'oa ket neuze a beziou henvel outo en ti ha gouzout a rea ervat n'oa ket bet eur penn-kristen, en he c'her, epad an noz; Mont a eure, d'ar red, d'o diskouez d'he gwaz a oa kousket, er gampr tosta.

Nikolazig a gredas dioc'htu e ranke Santez Anna, he-unan, beza bet o tigas d'ezan an arc'hant-se evit ma c'hellje staga kerkent gant e labour. Koulskoude ne falvezas ket gantan kregi enno; lavaret a reas d'e vaouez o lakat hag o renka evel m'he doa o c'havet; gervel a eure Lezult hag e tiskouezas d'ezan ar gavadenn edo o paouez ober; raktal e lakeas ar peziou en eur c'horn eus e vouchouer a skoulmas warnezo hag i, o daou adarre, etrezeg ar presbital.

C'hoant o devoa da ziskouez ar peziou-ze da veleien o farrez, da genta, evit digeri d'ezo o daoulagad, ha goudeze da Dadou sant Fransez Alre.

An Aotrou Roduez, en deiz-ze, n'edo ket er gêr; ne gavjont, en ti, nemed ar c'hure, an Aotrou Thominec; ker fall hag e berson e tigemeras anezo; gwall-gomz a reas zoken ouz Nikolazig, o tamall anezan da glask fouelli an dud gant ar peziou-ze o oa mil bell a oa en e armel.

Menech Alre a voe dereatoc'h ouz Yvon ha setu aman petra leverjont d'ezan: « N'ouzomp ket, emezo, pe ez eo Santez Anna en em ziskouezet d'eoc'h pe n'eo ket, met evid ar pezh a zo sur, eo, n'eus ket a lec'h, e doare ebet, da zavel ar chapel a livirit, e park ar Bosennou! »

Nikolazig a voe souezet maro o welet tud ker gouiziek ha ker santel o tiskredi warnan ha poaniet e voe o welet e klaskent miret outan da zavel ar chapel, a c'houlenne outan e Vestrez vat.

Penaos tremen diouz ar Zantez pa zave an holl en e eneb.

Nikolazig a oa ken doaniet e galon ma ouelas, met e fizians a jome atao ker start ha biskoaz ha p'eo gwir ne felle ket d'an dud e zelaou an nenv, sler eo gouzout, a deuje adarre war e zikour.

Pa zigouesjont diouz an noz, e Keranna, kalon Nikolazig a oa laouennaet; Lezult en doa kement a fizians hag e vignon, rak o kimiada diouz Yvon e lavaras d'ezan: « Ha gant a reoc'h, arabad eo d'eoc'h chom hep gervel ac'hanoun da welet ar burzud! »

Nikolazig a roas d'ezan e c'her ne ankounac'haje ket anezan.

An noz etre ar 7 hag an 8

Er pardaez-ze, war-dre unnek eur, endra m'edo e vevelled war zav c'hoaz, er gegin,

Nikolazig a oa, en e vele, o lavaret e rozera, evel m'oa boaz d'hen ober, da c'hedal ma teuje d'ezan ar c'housket.

En eun taol, e gampr a en em gavas sklerijennet, evel m'oa bet alies; war an daol e wel eur c'houlouenn skedus meurbet hag ar Zantez oc'h en em ziskouez kerkent a daolas warnan eur zell karantezus; sonet oa an eur a c'hortoze; Santez Anna a lavaras d'ezan gant eur vouez c'houek ha tener: « *Yvon Nikolazig, galvit hoc'h amezeien evel ma z'eus bet lavaret d'eoc'h ha kasit anezo ganeoc'h da heul ar c'houlouenn-man; hoc'h hentcha a raio betek va skeudenn ha p'ho pezo he c'havet an dud a welo pelloc'h eo gwir ar pezh a lavarad d'eoc'h!* »

Santez Anna dal m'he devoe komzet a dec'has, met ar c'houlouenn a jomas war he lerc'h.

Nikolazig, e galon o tridal gant al levenez, a zavas hag a en em wiskas ouz sklerder ar c'houlouenn a rea an neuz da jom d'e c'hedal. Pa oa prest da vont er maez, ar c'houlouenn a gerzas dirazan; p'en em gavas er porz edo ar c'houlouenn en e raok. En hent edo da vont d'ar Bosennou pa deuas sonj d'ezan e oa bet lavaret d'ezan kas testou gantan; dizrei a reas eta war e giz; gervel a reas e vreur-kaer Louis ar Rouz a oa c'hoaz ivez, war zav hag e lavaras d'ezan digas gantan eur bigell; en eur vont e tihunjont o amezeien, Jak Lukas, Fransez ar Bloenneg, Yann Tanguy ha Julian Lezult; ar re-man a zavas raktal. Ar c'houlouenn a skede atao, en hevelep lec'h, hag an daou vreur-kaer a deuas d'he c'hichen; ar re all a deue warlerc'h, mil mall ganto gwelet ar sklerijenn vuzudus.

— E pelec'h eman 'ta? a c'houlenne ar pevar diek. Nikolazig a ziskouezas anezi gant e viz; daou anezo her gwelas kerkent hag an daou all ne weljont netra; divezatoc'h ec'h anzavjont o-unan ne c'hellent ket gwelet ar goulou-ze dre ma n'edont ket e stad a c'hras.

— Ha breman, tudou, eme Nikolazig, laouen evel ar Spered Santel, d'eomp en hent warlerc'h an Aotrou Doue hag an Itron Santez Anna!

Ar c'houlouenn a gerzas; mont a rea pemzek kammed bennak en o raok; ha tri droatad e oa dibrad diouz an douar; kemeret a reas an hent-kar a yea eus ar gerriadenn d'ar feunteun hag ar goueriaded a deue warlerc'h ken eurus ha kel leun a fizians hag ar rouaned p'edont gwechall o kerzet warlerc'h ar steredenn a dlie e c'has da graou ar Mabig Jezuz.



Digouezet dirag ar Bosennou ar c'houlouenn a zavas er park dreist ar c'hleuz hag a gerzas a-zioc'h an ed o tiouan beteg al lec'h m'edo bet warnan, ar chapel goz.

Eno e chomas a-zav. Ar goueriaded hag a oa atao o-daoulagad o para warni hergwelas neuze o sevel hag o-tiskenn teir gwech dioc'htu, evel evit lakat da deurel muioc'h a evez hag ec'h en em gollas en douar.

Nikolazig ha n'en devoa ket tennet eul lagad diwar ar c'houlouenn a redas raktal etrezek al lec'h m'oa en em zanket ar goulou en douar

hag a daolas e droad warnan: « Toull aze, emezan, d'e vreur-kaer! » N'en doa ket skoet Louis ar Rouz ouspenn pemp pe c'houec'h taol pigell ma voe klevet evel trouz eun tamm koad o seni gant ar benveg o skei warnan.

Holl e kredjont dioc'htu e oant kouezet war ar skeudenn a glaskent.

Evel ma ne welent ket skler, Nikolazig a lavaras da unan anezo mont d'ar red da gerc'hat goulouenn ar Chandelour: « Kemerit, emezan, goulouenn venniget ar Chandelour, gant eur c'hef tan d'he enaoui! »

Graet e voe evel ma lavare. Neuze ec'h en em lakejont holl da doulla ha ne voent ket pell evit tenna eus an douar eur skeudenn goz a oa kuzet eno 900 vloaz a oa.

Goude beza sellet outi, eur pennad, e lakejont anezi, gant doujans, war ar c'hleuz tosta, laouen e oant gant o c'havadenn hag ez ejont da gousket evit gellout dont kentoc'h a-ze d'he gwelet pa vije deiz.

Nikolazig a oa barr-leun e galon gant al levenez.

Kerkent ha goulou-deiz e tizroas adarre d'ar Bosennou, gant e vignon Lezult e oa bet, adarre, o kerc'hat da zont gantan; o daou e chomjont pell da zellet ouz ar pezh koad o devoa dizouaret; eur skeudenn oa, e gwirionez, nemed e oa krignet, ha n'eo ket souez, he daou benn, keit all e oa bet chomet eno, en douar leiz; met evelato e oa anat ar penn, braoik a-walc'h c'hoaz hag al livaj zoken, e meur a lec'h.

Ar Zadorn, 8

En dro ma teue tud Keranna gant an testou all da welet ar zantez Anna goz a oa bet kavet epad an noz, Nikolazig ha Lezult a reas adarre an dro o devoa graet en derc'hent hag e lavarent, an eil d'egile,

en eur vont, ne c'hellje ket ar velleien, en taol-man, chom hep o c'hredi, p'eo gwir, o devoa, en taol-man merkou anat, da ziskouez edo an Aotrou Doue a-du ganto.

Yvon a ziskouezas, d'an Aotrou Person, ar peziou ar c'hiant n'en doa ket gwelet c'hoaz hag a roas d'ezan da anaout pebez kavadenn en doa graet, en e bark, dirak testou: « C'houec'h e oamp, emezan, ha Lezult aman a oa ganeomp! » Lezult a rannas eur ger bennak da harpa lavarou Nikolazig.

An Aotrou Roduez a zelaouas anezo o daou; met, dies eo gouzout, petra gredas, e gwirionez, diwarbenn o lavarou; ar pezh a zo sur e reas evel ma ne gredje netra; kaletoc'h eget biskoaz e voe zoken ouz Nikolazig p'eo gwir e kemeras anezan evid eun den chouchet hag eun toueller: « Ar peziou-arc'hant-ze, emezan, n'oa ket dies d'eoc'h o c'haout, war ho taol, p'ho poa o lakat eno a-raok hag an tamm koad brein-ze ho peus kavet en douar, petra gav d'eoc'h a c'hellfen-me da ober gantan. An diaoul eo a zo o lakat e gorn en holl gudennou-ze! »

An Aotrou Thominec, evit diskouez edo a grenn a-du gant e berson, a lavaras e oa red beza diskiant evit kredi hevelep marvailhou!

— « Aman, eme Nikolazig, n'eus netra da ober! » hag ec'h en em dennas, gant doujans, hep ranna eur ger.

An daou diek a gendalc'has o hent hag a yeas da Alre dre welet an Aotrou Kerloguen. Nikolazig a gawe e oa dleet d'ezan lavaret ano d'ezo eus e gavadenn p'eo gwir oa ar mestr ha p'eo gwir en doa lavaret e roje plas, pa vije c'hoant, da zavel ar chapel.

An Aotrou Kerloguen a voe skoet gant ar c'helou-ze, met pa glevas penaos e oa bet digemeret e verour gant person Pluneret, e c'hoanteas komz eus an nevezenti a oa o paouez digouezout gant Menec'h sant Fransez, da welet petra lavarjent.

Selaou a rejont Nikolazig, met kenderc'hel a rejont da lavaret d'ezan ar pezh o doa lavaret en derc'hent: « N'oa lec'h ebet atao, emezo, da zavel eur chapel nevez er Bosennou! »

En dizro, hag a-raok mont d'ar ger, an daou vignon a c'hoanteas gwelet adarre ar skeuden goz ha setu i da dremen ebioù ar Bosennou.

Eun toullad tud a oa eno; en o zouez, daou veleg deuet a-ratoz kaer, an Aotrou Yvon Richard, eus ar geriadenn hag an Aotrou Mazur, beleg al listri-brezel a oa neuze war aochou Bro-Wened; daou vanac'h eus a urz sant Fransez a oa digouezet eno ivez, n'eo ket eas gouzout perag.

Ar pezh a jache evelse an holl oa ar skeudenn goz; breman pa oa gellfet he gwalc'hi hag he c'hempenn e oa eas gwelet warni, daoust peger prenvedet e oa he daou benn,

plegou he sae ha zoken, tra souezus, liou he dilhad, « gwenn ha glas »; fri droatad bennak a uhelder a c'helle kaout ha koad kalet kenan a oa bet laket d'hen ober. An daou diek a lakeas anezi en he sav, war ar c'hleuz hag a yeas d'ar gêr.

Ar zadornvez-ze, 8 a viz meur, a oa bet, evel an derc'hent, skuizus bras evid Nikolazig ha daoust da vuzud bras an noz tremenet, n'oa doare ebet d'ezan c'hoaz da veza tost da zont a-benn eus e daol, rak breman, p'eo gwir edo menec'h Alre en e eneb, nemed esoc'h a-ze e vije d'e berson derc'hel penn d'ezan muioc'h-mui.

Ar Zul, 9

Trubuilhus e oa buhez Nikolazig. Antronoz e c'hoarvezas gantan eun darvoud gouest da rei da gredi da veur a hini edo an nenv e-unan en e eneb; en dervez-ze e oa deuet kalz muioc'h a dud d'ar Bosennou eged en deizioù all: ar zul a oa.

Nikolazig, e-unan, a oa o vont etrezeg ar Bosennou gant Jak ar Pelikart, e amezog; o lavaret ano d'ezan edo eus an trubuilhou en devoa bet en deizioù tremenet ha Jak a glaske e laouennaat gwella ma c'helle; en eun taol, unan bennak a-dre o c'hein a en em lakeas da youc'hal: « An tan! »

Yvon a zizroas d'ar red, war e giz: e lab eo a oa o tevi.

Dont a reas tud; klask a rejot laza an tan-gwall; sllapet e voe dour warnez an a-zoare; met kaer a-voe poania, an tan o gendalc'he gwasoc'h gwas hag al lab a-bez a voe pulluc'het.

An darvoud-ze a lakeas an dud da gomz: « An Aotrou Doue a deu d'e gastiza », a lavare meur a hini, met an darn vrasa, o sellet mat, a welas e oa eno eur burzud nevez. An tan en doa graet e labour ken dillo ha ker mat ma oa devet ar vein o-unan, met, diouz eun tu all, daou vern ed hag a oa eno e kichen, harp el'lab, hag an avl a-du da gas an tan warno, n'o devoe droug ebet. An holl vinviachou a oa ebarz al lab ne oa ket graet an disterra gaou outo.

En dro ma troe an dud e diou gostezenn, Nikolazig a welas dioc'htu' perag e oa kouezet tan an nenv war e lab; al lab-ze a oa nevez flamm hag e dad evit he sevel en doa kemeret mein ar chapel goz; Doue n'en doa ket a c'hoant da welet o servichout d'eun all mein hag a oa bet roet d'ezan.

Al Lun, 10

D'al lun, diouz an noz, eur sklerijenn zouezus a leunas ar Bosennou hag a baras dreist-hol: war ar skeudenn zantel. Meur a hini, estreget Nikolazig, a welas ar burzud-ze ha klevet a rejod evel trouz eur bobl o vaie er Bosennou pa ne oa den ebet o kerzet dre eno, met kement-se a dlle en em gaout divezatoc'h.

Antronoz, en hevelep lec'h e voe klevet an hevelep trouz, met an taol-man e oa trouz, e gwirionez; ar bardonerien a zirede niverus ha n'eo ket hepken eus ar parrezioù tosta, met eus a beil.

Piou en doa gellet kas ar c'helou d'ezo?

Brud ar burzudou a oa c'hoarvezet er Bosennou a oa aet, evel eul luc'hedenn, betek penn pella Breiz-Izel, betek lec'hioù keit diouz Keranna ma ranke an Aotrou Doue e-unan beza bet o kas ar c'helou enno rak a-nez n'en divije ket gellet en em gaout ken trumm.

Darn eus ar birc'hired a lavare e oant deuet eus ar gêr d'an deiz-ze, dres, ma oa bet kavet ar skeudenn, hag arabad kredi e teuent di, dre c'hoant gouzout pe tra dremene; nann, dont a reant da bedi ha da rei o frofou.

Ar peziou arc'hant rouz hag ar peziou arc'hant gwenn a goueze, en eun douez, war eun tamm lien gwenn dispaket e-harz treid ar Zantez. Fransez ar Bloennec, a yeas d'e di da gerc'hat eur skaonig vihan hag eur bladenn staen hag a lakeas anezo e kichen ar c'hleuz da zestum ar profou.

Koulskoude ar c'helou edo an dud o tiredet niverus da Geranna a en em gavas dillo er voure'h; pa glevas ar Person ar pezh a zigoueze ez eas e kounnar vras ha war an taol, e kasas an Aotrou Thominec, e gure, da ober d'an dud mont ac'hano, dioc'htu, pep hini d'e gêr.

Ar c'hure pa en em gavas, a zavas ar gwad d'e benn; war eun ez eas da gaout ar skeudenn goz hag e strinkas anezi diwar ar c'hleuz d'an douar hag o trei warzu ar skaon e tistagas eun taol troad ganti hag e kasas anezi, pladenn hag arc'hant hag all, da rodella pell ac'hano; neuze ec'h en em lakeas da c'hourdrouz Nikolazig dre m'en devoa bodet kement all a dud eno; pedi a reas an dud-ze da zizrei d'o c'her, en eur lavaret da re Bluneret e vijent eskumunuget ma ne garent diouall: « Beleg ebet, emezan, ne roio an absolvenn d'eoc'h ma ne zizroit ket raktal d'ar gêr pe m'ho peus an hardisiegezh da zizrei aman c'hoaz! »

Ar c'homzou kasaüs-ze a reas kalz trouz er barrez. Yvon Nikolazig, hen, ne ziskouezas ket e vije tamm



droug ebet ennan evid an dra-ze; hep lavaret ger, ec'h en em lakeas da zestum ar profou-fuilhet war an douar, an aluzenou kenta da zikour sevel ar chapel nevez.

En deizioù warlerc'h e teuas adarre kalz pardonerien hag o niver ne rea nemet kreski hep ehan.

Diwar J. Buleon hag E. ar Garrec.

**Goude Kemper,
Ar Folgoat,
Sant-Brieg,
Roazon,
Gwened,
An Naoned...**

Ar c'hazetennou a zigas d'eomp ar c'helou emañ o vont da voda e Pariz pennou-bras an holl Unvaniezoù katolik evit klask eun diazez d'al labour eo red, ha tremen red, ober ma fell d'eomp dere-hel hor bro en he sav ha, gant ar Vro, pep hini e diegez hag e beadra.

War ze, J. Guiraud a skriv e « Kroaz » Pariz: « Il appartient à tout catholique qui réfléchit et interprète l'expérience du passé de chercher et de définir, sinon le contenu, du moins la nature et les conditions du programme catholique ».

E kichen ar c'houarnamant a zo o ren e Pariz ha n'eo gouarnamant ebet, n'eo nemet eur stlabez tud diempennet digouezet, dre laer, en uhelan kargou ar vro, votadeg pennou an Unvaniezoù katolik, hounnez a vo ar gwir Vro: ganto e vo mouez ha kalon ar vro.

O c'homzou, o divizou a vo sklêrijenn, lealded hag, en doare-ze, e vezint buhez. Klask ha disklêria a raint an droug penn-da-benn evel gwir vedisined hag o deus c'hoant da rei ar pare hag a zizolo ar c'hlenved, gwri-zienn ha gwri-zienn, evit o zroc'ha holl. Lakat a raint goude an urz da ren, hep damant da zen na da netra, elec'h m'o do kavet e vo dizurz.

Hogen, eun dizurz bras hon deus maget en hon touez abaoe niver a vlavezioù: bevet hon deus o tizanzav pep hini ac'hanomp e gorn-bro, e vamm-vro, mammea e vuhez; maget hon eus an dizurz gant gred, gant mall; hen, avat, en deus koulz ha taget ac'hanomp.

An dud a yelo souden da Pariz, galvet gant ar jeneral

a Gastelnau, ne 'z aint ket heb ober eur zell piz warne o-unan, da c'houzout ha mont a ra ganto kement a zo red d'ezo da gaout 'vit o labour, ha, da gentañ, amañ-degez ha karantez o Mamm-Vro.

Biskoaz abaoe m'eman Breiz nasket gant gant ar Revolution, n'he doa bet tu, evel hirio, da 'n em ziframma diouz he ereou. Eur ger hepken da lavaret hag e vo gellet kregi da adlakat anezi en he flomm hag ar ger-ze eo heman: An Unvaniezoù katolik a vo bodet dre Vro, arôk bezan unanet war an hevelep ano: Frans. Ré hon hon bro-ni, adalek Naoned betek Brest, a zougo hano Breiz, **Strollad Unvaniezoù katolik Breiz.**


E kement bodadeg vras zo bet en hon bro, e Kemper, er Folgoat, e Sant-Brieg, e Roazon, meuleudi Breiz hag ar Vretoned a zo strinket eus muzellou hag eus kalon ar brezegerien. Komzou, avat, n'eo ket a-walc'h: Breiz, ar wezenn-ze hag he deus maget he bugale, a beb am-zer, gant frouez ken c'houek, ken yac'h, a zo krog da zec'han; red eo rei buhez d'ezi a-nevez-flamm: hogen, n'eo ket gant komzou, forz pegen kaer ha pegen flour e vezint e vo silet enni eur vuhez nevez. **Oberoù zo ezomm** ha, da genta, **ma vo anavezet hag anzavet Breiz.** Unvaniezoù katolik bodet, er Frans a-bez, dre eskopti hepken, da lavaret eo, war dachenn ar relijion, daoust hag awalc'h eo?

Brezoneg ha Feiz 'zo breur ha c'hoar e Breiz. Da 'n em heul ec'h eont bepred, pe e tleont-mont, da vibana, hervez ar wirionez hag al lealded. Daoust hag an Unvaniezoù katolik ne dleont ket eta bezan ivez unvaniezoù breizad, ha kemeret Breiz da stern?

Er mare ma vevomp, me gred eo ken dleet sevel e vouez ha lavaret e zont, evel m'eo dleet plega ha senti d'ar pezh a vez bet divizet ha gourc'hemennet.

Lavaret am eus eta ar pezh a zontjen diwarbenn eun doare da ziazezan, eur wech savet, an Unvaniezoù katolik.

E.-A. M.



A-benn miz mae

— Ya mignon a lavaras d'in:

— Ma kares, me 'gaso ac'hanout e-berr d'eur vodadeg sur n'out bet biskoaz en hini!

— Ha? — Chom a ris eur pennad da zellet outan, kas gouzout pesort bodadeg a c'helle beza hounnez.

— Arabad d'it klask, emezan, rak ne gavi ket!

O welet ma daoulagad dispourbellet, e reas eur mous-c'hoarz.

— Ged ac'hanon e-berr da noz; wardro eiz eur, me deuo d'az kerc'hat.

— Lavar d'in, da vihanan, eur ger bennak?

— Ac'hanta, gouzout a rez 'zo votadegou da vezan er bloaz-man 'vit henvel meared nevez ha kuzulierien nevez?

— Ya.

— Ac'hanta, eur vodadeg a zo da vezan e-berr da voulc'han an abadenn-ze. Ha, m'hen tou d'it eno e vo dibunet eur gudenn ha ne oa ket bet a hano anezi abaoe pell 'zo. Kenavo e-berr!

**

En eun ostaliri vras, e ru vrasan kêr. Eur zal distro, daouzek pe bemzek a dud bodet enni, yaouank, peurvuian, hag int a bep stad hag a bep micher, bourc'hizien gant chupennou blêvek, micherourien gant o dilhad labour.

Unan, pa voe deut ar c'houlz, a zavas en e zav hag a bedas da zigas evaj ha da c'houezan tan. Pa voe grêt an eil hag egile, e pedas an holl d'en em dostat ha neuze e komzas evellen, e brezoneg yac'h:

« Arôk staga da lavaret d'eoc'h ar pezh a zell ispisial ouz hor c'hêr, va lezit d'ober eur zell-tro, peadra da harpa ha da c'hronna ar pennad diweza eus va c'haezeadenn.

En eur c'horn 'zo eus an Europ, bet tôlet ar Gévredigez pe Sôsieté diwar an diazez roet d'ezhi gant an natur ha gant Doue, hag eo krog eno ar bed da vreina. Ar flêr anezan a zo deut betek ennomp. Gwasoc'h 'vit ar flêr eo a deu hirio; ar c'hontamm a zo en em zilet en hor bro hag en em zil muioc'h-mui, bemdeiz.

Seul êzetoc'h, en em led ma kav plenech ha kompesoc'h an hent dirazan, da lavaret eo, ma 'z eo bet skubet gant lezennou ar Revolution kement strollad ha kevredigez a zalc'he gwechall lod eus o nerz hag o galloud anezo o-unan. A drugarez Doue, skouer an Alzas hag al Lorren

en deus roet d'eomp da entent da betra e talv ar strolladou-ze, da rei d'an dud eun doare, n'eo ket hepken nerz-zusoc'h da dereatoc'h, met ivez startoc'h ha galloudusoc'h. Ez-eün d'ar Rusi, henvel ouz eur c'horf maro taget gant ar prenved, gant amprefaned ar « bolcheviked », an Alzas hag al Lorren o deus diskouezet d'eomp eur skouer splann a bobl, eün en he spered, gwerc'h en he c'halon, o kerzet dindan lezenn yac'h an natur ha lezenn sakr Doue. Ouz ar sklêrijenn a baras ac'hano d'hon daoulagad, hon eus bet gwelet pelec'h e oamp ni hon unan, pegen izel kouezet, pegen dinerz, pegen disunvan, pegen dibourvez! (Ar binvidigez a bar a-ziavêz n'eo nemet eur seblant hag, e kement ha m'eo eun dra bennak, ne ra nemet maga gwarizi e kalon darn ha krizder e kalon darn all). Harpet war skouer Alzasiz, evel war eur vrec'h krenv, hon eus divizet sevel en hor sav ha lakat, da stourm ouz breinadur ar Rusi, kement tamm nerz a c'helljemp da c'hounit ha, da vihana, hor bolontez vat.

Setu eno an diazez ledan a zo bet roet d'ar Gévredigez vras gatolik emañ o sevel dre holl er Frans hag ez omp ni holl aman en em laket enni.

Hôgen, menez ar gevredigez-ze eo d'eomp ni, laiked, pep hini diouz e gostez, êsat kas anezan da benn. Evit se, ez eus kevredigeziou all savet a-ratoz e pep bro hag evit pep bro. E Breiz, ez eus unan, he hano ar *Réunion-Brug*. N'eus ket gwelloc'h, ha n'heller ket, kaout gwelloc'h eviti. Hervez spered ar gevredigez-ze eo e fell d'eomp hirio boulec'ha, en hon c'hêr, eul labour a dle adarre ober gant Breiz, kêr ha kêr, bourk ha bourk, eur vro veo.

Bretoned omp holl er gêr-man, nemet an dud-e-karg; peurvuian e ouezer ar brezoneg; ni, da vihana, hag hon deus studiet anezan gant aked, her goar braoik a-walc'h, hag a anavez istor hor bro, gwechall ha breman. Eun dra bennak a respont doun en hor c'hreiz, na petra 'ta, pa gomzer eus a Vreiz.

Gwasa pezh a zo, ne glevomp nepred ano anezi nemet pa en em gavomp aman etrezomp. Hon c'hêr hag he deus eun istor ken brudet, en amzer ma oa Breiz digabestr, a zo deut da vezan, ne lavaran ket gall. — lavaret a ran eo êt he spered da netra.

Nag etouez ar bobl, nag etouez an noblañs; nag etouez ar vourc'hizien, ne glever ano, tro c'bet, eus Breiz. Sellit endro d'eoc'h...

Bezan hon eus anioù d'hor ruiou; pet ano breton a gavit en o mesk?

Bezan hon eus eun teâtr; pegoulz e vez ano ennan a beziou-c'hoari, da vihana, tennet diouz hon istor?

Bezan hon deus eul leordi; ne gavit ket ennan eul leor hepken skrivet e brezoneg, na zoken, leoriou a gement a dalv skrivet e galleg, diwarbenn Breiz hag hon tadou-koz, ar Gelted.

Bezan hon eus eul liorz vras ha kaer, gant skeudennou tud vrudet er pevar c'horn anezi; pet Breizad a gavit en o zouez? Unañ hepken. Eur mirdi hon eus ive, met ne gavomp ket ennan eur c'horn evit Breiz...

Kement tra a en em ziskouez evelse d'hon daoulagad, en hon c'hêr, n'eo nemet ar mezellour kasaüs eus traou ha n'int ket nez d'eomp, traou hag a laka disparti etrezomp hag hon bro c'hinidik...

Setu ma teu d'eomp c'hoant da chench penn d'ar vaz. Ret eo d'eomp en em voda etrezomp da zével eur rollig kuzulierien hag a roio da anaout hor mennad d'ar bobl, dre gomz ha dre skrid... Setu aman, en eur ger, petra a c'hoantaan: diabarz ha diavêz, adstumma hor c'hêr diouz ar pezh ma 'z eo, eur gêr vretien.

N'eus ezomm ebet, evit se, da groui traou nevez, koustus ha labourus; n'eus nemet ober implij, e doare vat, gant ar pezh a zo. Gant se, prezegennoù hon deus ive, e kreiz ar goanv, evit ar bobl; greomp ma vo tennet eul lodenn vat anezo eus istor, douaroniezh ha buhez Breiz...

Evelse, an den-man a zisklêrias dirazomp penôs lakat dremm Breiz, da bara dirak sellou an holl hag ec'h achuas en eur bedi kement a oa ouz her selâou da zonjal ervat en e gomzou. « Pa hon devo, emezan, merket etrezomp betek pelec'h ha penôs e c'hellomp bale, neuze en em gargimp, an eil hag egile, da vruda hor menozioù hag e kinnigimp d'ar bobl voti warno... »

Seder ha laouen, ar zelaouerien en em gwitaas, en eur lavaret an eil d'egile kenavo.

Va mignon, en eur zizrei d'ar gêr, a c'houlennas diganin va ali: « Me ive a ya da brederia gant komzou da vignon, emezan; stad a vo ennon o veska va mouez gant ho hini. »

Eur c'huzulier koz.

KENSTRIVADEGOU AR BLEUN-BRUG (1)

PRIZIOU. — Tri briz a 25, 15 ha 10 lur e levriou, pe en arc'hant, a vo kinniget evit pep hini eus ar pemp kenstrivadeg kenta ha 200 luriad levriou evid ar c'houec'hvet.

Ar *merc'hed* a c'hello kemeret perz en holl genstrivadegou, zoken e *kenstrivadeg ar brezegeréz*.

(1) Sellit ouz Feiz ha Breiz miz c'houevrer diveza, p. 42.

**Penaos e teskas Fanchig Wegan
ar vicher pôtr yaouank**

Fanchig, e korf e chupenn divanch, a haste buan te-c'het ermêz diouz ar gêriadenn, betegout na vije gwel-let. Tec'het a rae zoken, diouz ar gwenojennou gant aon d'en em gaout-gant tud eus e anaoudegez. Evelse, ne voe ket pell evit trei diwar e hent...

Setu hen chomet en arvar, war lein eur c'hleuz, ha ne ya ken na war hu na war dia. Sellet a ra 'us-d'e benn hag e well, a bep tu, stered eleiz krog da lintri. Al loar a zo sklêr, nemet eur goumoulenn bennak a deu da dremen warni, poulzet gant an avel. Ar re-ze a oar pelec'h o deus da vont; Fanchig ne oar ket... Setu du-bont da vihana, ar c'hastell-karr bras; hennez a bar bep noz, en oablou, drêk ti e dad; koulz mont warzu d'ezan; sur-roc'h eo d'en em gaout. Eul lamm e-traon diwar ar c'hleuz ha... boudoudouf! setu hor Fanchig er fontigell betek e ziougroazel... Ah! va Doue, n'eo ket ar mor eo, met tost da vat! Eur c'hreuneugell goloet gant yeot flour ha man alaouret: eur groc'henenn war c'horre; morfont dindan. Fanchig, gant e bouez, en deus freuzet ar groc'henenn, evel m'en dije, en eun taol dorn, treuzet eun delienn baper, ha setu hen breman, evel eur ran, er fank betek e c'houzoug... Rak ar c'hreuneugell a rank bezan doun; dre ma tifrink ar pôtr, o klask kaout troad, e sant, gant spont, al lec'hid o tigeri dounoc'h-doun dindanan. — Ah! va Doue! eme Fanchig; digemerit va ene! Otrou S. Herbot, ho pet truez ouzin! — E chupenn; da vihana, ne vo ket mastaret! An dra-ze a laouenna eun tamm bihan e galon. Eur chupenn nevez-flamm! — Ne vo ket mastaret, a dra zur; met kollet eo; hag e vuhez eman o vont da goll ivez... Arôk eun eur aman, kaer en do klask harp er bodennou yeot ha man, e vo bet lounket gant ar c'hreuneugell treitour... Ah! va zad paour; va mamm gez! pelec'h oc'h c'houi, ha pelec'h eman ho mañ?

Ha Fanchig en em laka da lenva dourek, ha da vlejal, zoken ha da c'harmat, heb aon ebet da vezan klevet. Nemet ha tud a zigouezfe, ne deuo ket ermêz ac'hano: « Sikour! oh! la! sikour!... »

N'eo ket tud a zigouezas gant e griadennou, met unan benak a zigouezas evelato, ha hennez a voe eur bleiz, eur bleiz o klask preiz, eul loen klanvaet o klask peadra da zibri. Fanchig a wele anezan o tont goustadik gant ar prad, — rak en eur foennog eo e oa bet

Iamm, — hag e ouie a-walc'h n'eo ket eun den e oa. Benn neuze, n'en doa ken nemet e benn hag eur skoaz a zioc'h d'ar morfont... Ar bleiz a dostae, war evez, o santout e oa skeudik an tól gantan, rak n'eo ket eur penn-danvad, kenneubeut, eo a wele aze o trei hag o tistrei rez da doanenn ar prad.

Biskoaz Fanchig n'en doa gwelet bleiz ebet, nemet klevet komz anezo. Pa wefas daoulagad ruz al loenn, e skilfou gwenn hag e greo a-bik, e savas en e izili c'hoant mont da guz, c'hoant mont e-kuit... Paour kêz! Ar pezh a chome gantan a oa gellout dibab etre daou seurt maro: bezan lounket gant ar c'hreunugeñ pe bezan lounket gant ar bleiz. — Va Doue! va Doue! na pebez planedenn!

Ar bleiz a oa tastaet ha grêt eur c'houesa d'hor mignon Fanchig. Ne oa ket ken gantan c'houez ar zou-benn leaz, na c'houez vat ebet ive, nemet ar bleiz n'int ket ken figus-ze, dreist holl, pa o devez naon. Hor bleiz — eur bleiz marc'h, mar plij! — en doa eur c'hamarad bennak demdost, hag hen da drei e lost ha da lakat e droad en e c'henou d'her gervel da zont d'ar friko davetan: Hô! lo! hô! lo!... Piou a gasas neuze da Fanchig ar zonz-ze? An oitrou Sant Herbot, kredabl! Kregi reas, kêr prim ha lavaret, e lost hir ar bleiz troet warzu ennan, en eul leuskel eun hopadenn skiltr evel ma rê war e gezek pa o dije d'ober eur gwel grog bennak: « Diu! Diu! » eme Fanchig. Benn neuze, e oa hanter deut ermêz; ar bleiz a reas eur jach all, hor fôtr peg en e lost gwasoc'h gwaz... Aha! ha setu Fanchig war leurenn ar prad, fank ha labez holl, henvel ouz eul leue nevez tolet gant e vamm! Diboaniet e oa, hag ar bleiz, gant ar spouron, a dec'he d'an daou-lamm, e lost gantan etre e ziuhar...

Berniou foenn a oa er prad. Fanchig a gemeras dor-nadou d'en em dorchan ha, goude, e tivizas n'ez aje ket pelloc'h, ken na vije deiz, betegout ne c'hoarvezje gwasoc'h gantan.

Mont a reas eta ha digas pevar pe bemp bern foenn en eur bern; er c'hreiz e reas eun toull hag en em bakas ennan da gousket. An dro-man, da vihana, e oa fin d'e drubuilhou! Kenavo, Loeiza touellus, kenavo, kreunegel traitour! Nag e ver brao en eur bern foenn pa vezer o paouez tec'het diouz eur-poull lec'hid ha diouz genou eur bleiz-marc'h!

Heb e goan ha heb e chupenn, pell diouz ar gêr, e-unan, en nôz, e kreiz eur prad, Fanchig a zo laouen evel eur roue hag en em ro da gousket evel eur broc'h.

Pegeit amzer e tiroc'has evelse en e wele foenn? Pa zihunas, da vihana, ne oa ket ken e-unan er prad. Daoust ha deiz e vefe hag an dud arru war o labour?

Prim, Fanchig a zigas e benn ermêz, betek gwelet... Noz eo bepred, uhel al loar ha lemm ar stered; hunvreal en deus grêt o kredi e oa tud er prad. Eman o vont da jacha e benn gantan pa wel treid eun den o tigouezout kichen e vern foenn hag e klev eur vouez o lavaret: « Sell aman eur bern mat! Heman a rankan da gas gannen! » Kerkent e wel dispaka eul landonou hir hag, eur momeg goude, en em zant paket etre diouyrec'h an den, savet ha lakat, foenn hag all el landonou; e diou vriad, al laer en deus dastumet foenn leiz e landonou ha breman, setu hen da starda e vec'h arôk samma anezan. Darbet eo da Fanchig hopal, pan arru glin al laer da vresa gwalenn e gein. Met arabad d'ezan lavaret ouf... Piou oar hag hen ne rafe ket al laer-ze e stal d'ezan? En deare-ze, n'en deus nemet reuzi d'ober ha gortoz penôs e troio adarre an abadenn-man?

Pôtr ar foenn a oa en em lakat war e zaoulin da zamma e vec'h. Meur a grog a reas ha bep tro e kouezas war e fri: « N'em foeltri a rin! emezan, kas gounit ma zamm bara! » Eun dro bennak e c'hellas digeina ha setu hen, war e bouez, en eur dermal, warzu eur brouskoad e tu traon d'ar prad. Pa 'z eas dreist d'ar c'hleun, Fanchig a dennas e zorn ermêz eus ar bec'h. Pa voe ét al loar er c'hoad, dorn hon fôtr a bege barz eur skourr aman, barz eur blantenn du-hont... Gwall grogou evit al laer, a jache diouz eun tu, keit ma jache Fanchig diouz an tu-all: « Ne deuin ket ken dre ar c'hoad-man! eme hôtr ar foenn; chom a rei va foenn ouz an drez!

N'en doa fin ebet da goueza, da dermal, da zavel ha da goueza adarre: Eur viltans eo! emezan; n'in ket ken da laerez foenn! » Hag e stage ar bec'h a-nevez-flamm. Bep tro, Fanchig a deue eun tamm anezan ermêz. P'en doe tapet tenna e ziuvreac'h ha kaout krog gant e zaou zorn, e pegas a-vriad en eur blantenn fô. Eno e voe ar c'hrogad diwezan hag a voe ken tenn ma vennas al laer mouga gant ar gounnar. Pa ziflipas Fanchig diouz ar bec'h, pep hini a yeas war e du: al laer a gouezas, stok e gorf dindan e vec'h; Fanchig a skampas war e lérour ken skanv hag eun heizez.

An deiz a c'houlaoue: Fanchig a glaskas hent ar gêr, dichupenn, goloet a fank hag a foenn evel ma oa, met gounezet gantan ivez eun tenzor a skiant-prena a-walc'h evit ar peur-rest eus e vuhez.

Breizadig.



Pevar gourc'hemenn kenta an Emzao breizek

A damm da damm, dre studia ha prederia, ha, dreist-holl dre gemeret amzer ha lezel ar menozioù d'ober o hent, d'ober o c'hresk er sperejou, evel ma ra an had 'barz an douar, ez eus krouet hirio, diwarbenn an *Emzao breizek*, eun nebeut menozioù stur hag a zo digemeret, evel diazez labour, gant kement hini a deu da zigeri e zoulagad ha da drei e zellou war Vreiz.

Tri anezo a welan en eur strollad ha setu int aman:

1. Da genta, Breiz a zo eur gwir Vro (*nation*). — N'eo ket, dre natur, eul lodenn bennak eus Bro-C'hall, eus ar Frans; — n'eo ket, zoken, ar pezh a c'halver, e galleg, eur « *province* »; eur vro eo, eur vroadelez, koulz ha n'eus fors pe vro all war an douar. An dra-ze ne c'heller ket hen dislavaret; skrivet eo ken doun en istor, ha war gentes lies a bajenn anezi, ma n'en deus den ebet galloud a-walc'h d'hen diverkan. (Anez, e vije bet grêt pell amzer 'zo).

Chomet eo ivez skrivet e kalon ar Vretoned: o yez o deus miret, an testeni uhelan eus o broadelez; an hevelep korn-douar hag o deus pleustret, epad pell amzer, en o frankiz, a zo bepred dindan o zreid hag a ro d'ezo bepred bara, koulz ha gwechall; — ar relijion deut gant o zud koz, breman ez eus 1400 vloaz a zo bepred o relijion int. Breiz eta a zalc'h da vezan eur Vro, daoust ma n'eo ket ken digabestr.

2. Staget eo bet Breiz ouz Bro-C'hall, breman 'z eus tost da 400 vloaz. Ar skoulm grêt neuze a zo deut da starda war c'houzoug Breiz betek he mouga. Gouarnamant Pariz, hirio benveg a zizurz, a zispac'h, a waskerez, en deus muioc'h-mui bemdeiz pouezet war spered ar Vro ha hirio eo deut a-benn da gas ar spered-ze hogoziq da netra. Bretoned a zo ha n'eus dalc'h ebet ken en o diabarzh hag a zo koulz ganto bezan Gallaoued evel Bretoned, ha koulz ganto bezan Alamaned evel Gallaoued, ha gwelloc'h ganto c'hoaz bezan « *citoyens du monde* »!!... Da lavaret eo, bezan *netral*

Ar « *citoyen du monde* », hag a zo krouet e kalon kement den a nac'h e vro c'hinidik, eo ar « *sauvage civilisé* » a gomzer anezan alies hirio. Kentan merk a ro da anaout an den-ze eo ma n'ez eus netra hag en defe talvoudegez evitan nemet an arc'hant hag ar pezh a zervij d'her gounit.

An eil merk eo ma tec'h, forz pelec'h, « warlerc'h e vara », ha ma ne chom stag ouz eur vro nemet keit ha ma ro d'ezan peadra da garga e gof hag e c'hodell.

Gouarnamant Pariz a zo o sevel ar « *sauvage civilisé* », e Breiz evel elec'h all, e kement ha ma wask Spered Breiz hag he frankizioù natur.

Neuze 'ta, red eo en em zispartia diouz gouarnamant Pariz? Nann; *lakat anezan en e renk*, ha netra ken. Ar poent-man a vefe da *studia piz* etre Bretoned a zalc'h d'o Bro hag a oar ivez eo red kemer harp diwar ar pezh a zo evit mont ac'hano war wellaat. P'eo gwir, hon eus hirio darempred, hag e renkomp kaout gant Pariz, penôs eo dleet intent an darempred-ze en amzer da zont? D'eomp da bouezan war Bariz, e doare ma frankaio war Vreiz...

Setu eta daou venoz-stur: Breiz a zo eur Vro; — Breiz a zo, a-unan gant broiou all, dindan eun doare renadurez bennak hag a zo da zivizout, dre ma 'z eo an hini hirio falloc'h evit netra.

An trede menoz eo heman: Breiz, evit en em adsevel, n'hell ket en em lakat a-ziavêz d'ar relijion gatolik. — Broadelez ha relijion a zo grêt evit kerzet harp-ouz-harp; diboell an neb a gred e c'heller hirio war zigarez ma 'z eus *tud* digredenn e Breiz, adsevel ar Vro heb ar relijion. Gwelloc'h eo, evit al labour-ze, eun den hepken gant ar relijion, eget ne'o dek mil hep relijion ebet. Ar gredenn-ze a deu d'en em zanka dounoc'h-douna e spered ar Vretoned. Gwaz a-ze pa n'eo ket et c'hoaz krenvoc'h ha dounoc'h e penn milierou anezo. Mar en dije bet ar *Bleun-Brug* eur 100.000 a izili dre Vreiz-Izel ha Breiz-Uhel, n'ouzoc'h ket petra en dije gallet ober en deziouman?

C'houi oar eo bet torret e Pariz al liamm nevez graet etre gouarnamant Bro-C'hall hag an T. S. ar Pab; da lavaret eo, gouarnamant Bro-C'hall, o konta ar Vretoned evit netra, a deu da zisklêria ne anzavomp ket ar relijion gatolik nag e-diabarzh ar Vro, nag a-ziavêz. Hogen, e diabarzh ar Vro, ar gatoliked, pa ne roe ket gouarnamant Pariz skol vat d'ezo, o deus savet skoliou kristen e pep parrouz; — a-ziavêz, gouarnamant Pariz a embann dirag ar bed holl n'eo ket kristen, en eur derri etrezan hag ar Pab. Piou, aman, e zislavaro, n'eo ket hepken dre skrid pe dre gomz, met en eur gas eur c'hannad da Rom, evel ma 'z eo dleet? Ar Vro hag ar vro hepken a c'hell hen ober, evel m'he deus grêt, war a glevan er Savoia, evel m'he dije grêt Breiz, dre vouez ar *Bleun-Brug*... Ar gatoliked o dije bet kavet eno tu da ziskouez peger mat ha peger red eo e vefe « Ar brezoneg hag ar Feiz breur ha c'hoar e Breiz ».

Ar menoz broadel en dije bet kavet eno e zihun ar c'haeran. War an digarez-ze, eo e vije bet gallet lavaret neuze, *gant gwirionez*: Dihunet out breman, ma Breiz!

Ar pevare menoz-stur a zell ouz ar yez. Penôs en em gemer aman 'vit ober labour vat? Diou wirionez a zo hag

a ziskouez d'eomp dre he hent e tleomp, kas ar yez evit ma teuo d'en em gaout er pal m'eman yezou ar broiou all. Disklêriet zo bet, ha gwir eo, e teu eur yez d'en em goll dre ma teu d'en em lodenn e re holl a rann-yezou; eur yez, pa ne vez nemet komzet, a deu d'en em zistresan e genou an dud, diouz an eil parrez d'eben, e doare ma kaver êzetoc'h, 'benn ar fin, kemer, evel ma rêr, ar galleg evit en em intent, ha ma tilezer ar brezoneg.

Kemend-all a c'hoarvez, diouz an tu all, ma klasker ober re brim, gant ar brezoneg, eur yez unvan, tenna diouz ar rann-yezou, diouz ar brezoneg koz, diouz brezoneg Breiz-Veur, danvez eur yez skrivet hag a vo Yez Breiz. Skrivet e c'hell bezan; met ne vo ket intentet ha, gant se, ne vo ket lennet, hag ar Vretoned a zalcho da vont muioc'h-mui d'ar galleg.

Mat bezan 'zo, da vihana, etre daou, eun doare da labourat hag a dec'h koulz diouz eur garreg 'vel diouz eben; kemer a ra diazez ar rann-yezou ledanaet, e kement ha ma c'hell bezan, hep tasounat dent al lenner gant geriou ha ne intentfe ket dre ma vefent lod eus eur brezoneg re triz pe eus eur brezoneg re ledan. Arabad diskenn re izel na skei re uhel; mont, a gammejou bihan, warzu ar yez unvan, hounnez eo al lezenn wellan.

Setu ar pevar menoz a zo deut da vezan evel pevar gourc'hemenn kentan an *Emzao breizek*. Re all a vo krouet a hini da hini, dre ma teuo ar Vretoned da vêrêr muioc'h mui en o spered an holl draou a zell ouz o Bro.

Eur Bleun-Bruger.



Hen. — Marianna, mont a ra da ober eur bale; ma teu unan bennak d'am c'hask, c'houi a lavaro d'ezan e ti-zroin da 4 eur.

Hi. — Ya, aotrou, met ma ne deu den petra rankin da lavaret?

Henman. — Kea 'ta ebarz. Ma paem eur banne d'it.


Egile. — Bennoz Doue, ne 'm eus ket a zec'hed, met mar keres, e kemerin pemp boestad alumetez.



Pa varvas Yann V^{et}, ar gwella eus hon Duked, en Naoned, d'an 28 a viz eost 1442, e leze tri mab da Jann a Frans, war e lerc'h, Fransez, Per ha Jili; an daou genta a vo duked evel o zad; Fransez, bet ganet d'an 11 a viz mae 1414, a renas adalek miz eost 1442 betek ar 17 a viz gouere 1450 hag a varvas disher daoust d'ezan da veza bet dimezet diou wech; e vreur, Per II, bet ganet d'ar 7 a viz gouere 1418, a voe duk war e lerc'h, adalek 1450 betek 1457; an trede, Jili, a dlie mervel, en eun doare estlamus, evel eun torfetour, a toull-bac'h tenvala eur c'hoz kastell kuzet e kreiz ar c'hoajou bras ha gouez.

Eur pôtr kaer oa :

Kaera mab a wiske dilhad, laouen, brokus hag eun tamm skany-benn, marteze; e berziou mat hag e berziou fall a lakeas anezan da goueza en eun islonk el



D'an nec'h, siell an Duk Fransez; e kreiz, golo bez Jili Breiz; en traon, ar pez a jom eus kastell Guildo.

lec'h ma kavas e varo hag e ano a zo chomet moulet e kalon ar Vretoned evel ano reuzeudika den a zo bet biskoaz o vale war zouar Breiz.

Jili a deuas er bed wardro ar bloaz nevez 1425, met ne ouezer ket pe da zeiz mat a-walc'h; ar pez a zo sur, kenta gwech ma weler meneg anezan eo war eur skrid savet d'ar 16 a viz c'houevrer 1425. Kemeret a reomp tro eus ar 500^{te} bloaz tremenet abaoe e c'hinivelez, evit rei da anaout d'hor c'henvroiz, e zarvoudou hag e dru-builhou sebezus.

Istor Jili Breiz eo istor kalz a dud yaouank ha, hep beza fall, a glask, dre vrabanserez, bresa lezennou Doue pe lezennou an dud, an eil re hag egile a-wechou, hag a weler kastizet goudeze, ker gwas, ma teuer; daoust ma ouezer ervat e oant bet aet e gaou, kalz pe nebeud, da gaout truez bras outo.

**

D'e zeiz vloaz hanter, Jili hag a oa karet gant e dad, muioc'h eged e vreudeur all, a voe kaset da Londrez, e penn kannaded Breiz a yea di, renet gant ar sieller Yann a Vailestroit, evit gwelet ha gouest e vijed da lakat ar C'hallaoued da ober ar peoc'h gant ar Zaozon. An Duk en doa karget daou vedesin, ha daou skouejer da deurel evez war ar prins yaouank keit ha ma vije er maez eus ar gêr.

Sieller Breiz a voe kinniget d'ezan profou eus ar re gaera met ne deuas ket a-benn da lakat an diou vro d'en em glevet; lezel a reas ar prins Jili, war e lerc'h, gant e vamm goz, intañvez an Duk Yann IV, eil dimezet da Herry IV, tad koz Herry VI, roue Bro-Zaoz; pevar bloaz hepken e oa henman kosoc'h eget Jili; an daou brins bihan a deuas buan d'en em anaout ha d'en em garet ha daou vloaz hanter goude pa zizroas Jili da Vreiz, Herry VI ne lezas ket anezan da vont dioutan nemet rei a raje e c'her da gaout atao gantan, hiviziken, darempredou eus ar re wella.

Pemp bloaz goudeze, er bloaz 1440, e voe sinet eul lizer-marc'had etre Roue Bro-Zaoz ha Yann V^{et} diwar benn ker ha porz Sant-Malo evit ma chomjent, hep mont a-du gant kostezenn ebet ken alies gwech ha ma vije brezel etre ar C'hallaoued hag ar Zaozon, hag ar Roue a c'houlenne ma vije gouarnet ar gêr hag ar porz-ze gant « hor c'henderv mat ha karet Jili Breiz ».

An dra ze oa mell kenta ar jademn alaouret a dlie dont da veza ker pouner ma voe mouget ganti ar paourkez prins e bleun e yaouankiz.

Jili n'en devoa nemet seitek vloaz pa varvas e dad; 6.000 lur leve en devoa bet digantan evid e lod, ar pez a dalvezfe eur milion en deiz a hizio; keit ha m'oa beo

Yann V, Jili n'en em glemme ket, met pa bignas e vreur Fransez, war an tron, ec'h en em lakas da randaelat an Duk nevez, war zigarez ma n'edo ket e zañvez e Breiz; e gwirionez e leveou a oa e bro Anjou; evit tremen dioutan, Fransez her c'hasas, da viz mezeven 1443, da Vro-Zaoz, da c'houlenn ma vije adroet d'ezan douarou Richefont, leveou bras hag a oa bet da Zoked Breiz, en amzer goz, hag a oa bet lammet diganto a-c'houdevez, gant Rouaned Bro-Zaoz. Herry VI, hep rei e c'houlenn d'ezan dioc'htu, a reas eun digemer eus ar re garantezusa da Jili; Charlez VII, roue Frans, pa glevas an nevezenti-ze, a voe kement a zroug ennan, ma laeras da Jili, **daoust ma oa mab e c'hoar**, Chantose hag Ingrand, da lavaret eo an holl leveou en devoa e Frans.


E c'hellit kredi n'eo ket taoliou evelse eo a deuje da lakat Jili da garet ar C'hallaoued; d'her pellaat diouto, avat, ne lavaran ket; ar prins a jomas c'houec'h miz e Bro-Zaoz ha rei a eure d'ar roue e c'her da gerzet d'ar brezel, dindan e urziou, zoken a-eneb ar Frans, gant ma roje roue Bro-Zaoz kement a beadra d'ezan hag a oa lammet digantan gant hini Frans.

Dal ma oa dizro d'ar gêr, Jili a zimezas da Franseza Dinam, oajet a eiz vloaz hepken, pinvidika pennherez a oa e Breiz, p'eo gwir e oa d'ez, a-leve, Chateaubriant, ar Guildo, Montafilant, an Hardouinae, an Huguetières, hag e Breiz-Izel Gwikasnou, e Plougasnou ha Bodister, e Plourin: — Ar bennherez-ze a oa goulennet ivez da zimezi gant meur a hini all, dreist-holl gant Arzur Montaupan, eun tostenner, mar deus bet unan, hag a oa deuet mat dreist d'an duk Fransez, dre ma oa eur potr koant hag eur spered kaer a zen. Kounnar ruz a grogas ennan pa welas e oa bet trec'het gant Jili hag azalek neuze e kemeras anezan evid e enebour ha ne reas d'ezan nemet gwasa ma c'hellas.

Jili, neuze, da welet a oa eun den ha ne vanke netra d'ezan; na yaouankiz, na yec'hed, na danvez; eur marc'heg oa a lavar d'eomp tud e amzer, evel ma ne vez ket gwelet kalz, korfet bras ha kaer; eur bern mignonned a veze war e-dro ha gwech e veze o chom ganto er c'hastell-man, gwech er c'hastell-z-hont.

Karet e oa gant an holl, rak brokus oa ha mat da gomz ouz kement hini a gave war e hent; e amzer vrasa a dremene, er Guildo, e kichenik Sant-Malo; ac'hano e c'helle aes a-walc'h kaout keleier eus a Vro-Zaoz; en amzer-ze, ar Zaozon a rae o mistri en Normandi, hag ac'hano e teue alies unan bennak eus o c'hostezenn da welet an Aotrou Jili evid e lakat, na petra ta, da drei muioc'h-mui a du ganto.

Jili, eur pennad a oa, n'en em glevet ket kaer gant



Penn an Duk Fransez I

e vreur hena; c'hoant en devoa e vije rannet a-nevez al leve evit ma c'hellje kaout e beadra e Breiz, ha nann en Anjou, el lec'h m'oa aes da Roue Frans lakat e grabannoù warnezan.

Er bloaz 1445, — ugent vloaz en doa neuze, — e kasas eun den eus e zourn, Thomas Lez-Gwenn, da gaout roue Bro-Zaoz, evit goulenn outan poueza, war an Duk d'e lakat da ober outan e lavarou. E traon al lizer a gase da Londrez, Jili a roe da anaout da Herry VI e vije a-du gantan hag

e c'hellje henman lakat e zoudarded e kerioù bras Breiz a vije war e leve.

Fransez, pa glevas ar c'helou-ze, a yeas e kounnar; Arzur Richemont, breur e dad, a c'hellas lakat emgleo etre an daou vreur; met an emgleo-se ne badas ket pell. Charlez VII a en em gargas ive, diouz e du, da lakat trouz da zevel a-nevez etre an daou vreur.

Eun dervez, Fransez a glevas gant Yann Hengant e lavare Jili en divije, pa garje, 5 pe 6.000 soudard saoz hag e teuje ganto a-benn da gaout al lodenn zanzév a deue d'ezan; strafuilhet o klevet kement-se, Fransez a lakeas tapa Jili en e gastell, d'ar 26 a viz mezeven 1446 gant eun toullad soudarded gall hag e lakat en disheol da genta e Chateaubriant ha goudeze e Montcontour; soudarded saoz, eus o zu, o klask dont war e zikour, a gemeras kêr Fougères hag a en em glozas en he c'hastell d'ar 14 a viz meurz 1449.

An duk Fransez a glemmas, met eus a Londrez e voe respontet d'ezan ne vije ket restaolet Fougères d'ezan ken na en divije dezet e vreur Jili da vale.

E lec'h lezel kabestr gant e vreur, Fransez a lakeas diouall anezan gwelloc'h gwella hag en dra m'edo o klask diframma Fougères eus a dre daouarn ar Zaozon en devoe tro meur a wech da ziskouez ar gasoni en devoa ouz e vreur yaouank: « Laouen e vije, a lavaras eun dervez da Olier Meel, m'her gwelje aet d'ar baradoz! »

An Olier-ze oa gouarner Jili hag ar prins a oa klozet gantan neuze en eun toull enk ha tenval e kastell an Hardouinae, e parrez Merdrignac, e kreiz ar gouezeri; eno ar prins yaouank ne wele den hag evid en em zidui e c'hoarie war eur fleüt an toniou kaera en devoa desket en e vugaleach.

Olier Meel a oa eun den en em werzet da Arzur Montauban, enebour brasa Jili; an daou dorfetour euzuze, pa weljont mab an Duked dindan o galloud, a glas-kas rakta en em ziober anezan. — Da genta e klaskjont dont a-benn eus o zaol dre ar c'hontamm; Arzur Montauban a gasas, d'an Hardouinae, tri druilhen, Roussel, Maletouche ha La Chaise; ar re-man, kenta tra a c'houlennjont ouz Olier Meel a voe kas diwardro Jili ar zervicherien a jome gantan c'hoaz ha chom hep rei d'ezan nemed an nebeuta ma c'helljed da zibri evit ma c'hellje ar c'hontamm e ziskar kentoc'h a-ze.

Ar prins kez, du gant an naon, a c'houlenne da zibri, en an Doue, ouz ar re a dremene ebiou da vegeriou e gampr vaen; eur vaouez paour, war a leverer, a zigasas bara d'ezan epad meur a vervez hag a yeas da gerc'hat eur manac'h eus a Zinam da zont d'e govez.

D'an 13 pe d'ar 14 a viz ebrel 1450, Arzur Montauban a gasas da ziouallerien Jili tri bakad kontamm eus ar re wasa deuet d'ezan eus an Itali; roet e voe eus al louzou-ze da welet pegen nerzus e oa da chas, da gizer ha da yer, hag al loened-ze, dal m'o deveze e danvet a goueze a-stok korf d'an douar maro-mik.

Neuze, unan eus potred Montauban, La Chaise, a aozas eur banne soubenn vat a gasas da Jili goude beza laket enni eur meutad mat a gontamm; ar prins, kement a naon en devoa, a lonkas ar zoubenn-ze, d'ar red; klanv bras e voe, met ne varvas ket; neuze ar vourrevien a lakeas an hanter muioe'h a gontamm er boued; an Aotrou a voe klanv, met n'en devoe droug ebet a-hent all; al louzou, da gredi eo, a oa re goz hag en devoa kollet eus e nerz; koulskoude ne c'hellet ket lezel an traou da jom en doare-ze; dont a ranket a-benn eus an taol, n'oa ket da lavaret nann; an tri dorfetour, deuet pemp all war o sikour, Rageart, Oreille-

Pelue, Brerond, Salomon ha Garspern, — henman di-
veza, ginidik eus a Blougonven, e kichen Montroulez, —
a en em glevas evid en em zizober eus ar prins paour.
— En noz etre ar 24 hag ar 25 a viz ebrel 1450 ez
ejont didrousa ma c'helljont en e gampr; kousket oa;
teurel a rejont eul linsel en dro d'e c'houzoug hag i
da jacha, pevar diouz eun tu ha pevar diouz eun tu all
evid e vouga; met Jili n'en devoa nemet 25 bloaz;
stourm a eure; gellout a reas tapa peg en eun tamm
koad a oa e penn e wele hag ec'h en em lakeas da skei
a-gleiz hag a zehou, en dra c'helle war e vourvien,
met ar re-man a oa re niverus; stlepel a rejont ane-
zan war e wele; eur c'holc'hed a lakejont warnezan hag
a-bouez chom da boueza warnezi eur pennad mat, o
eiz, e teujont evelato, an dud gouez 'z anezo, a-benn
d'e vouga.


Graet e oa an torfed ha graet en eun doare estlam-
mus ha ne jome netra ken da ober nemed e guzat gwel-
la ma vije gellet o klask an tu da rei da gredi d'an holl
e oa maro Jili, dre glenved, ha netra ken.

Ar vuntreien a walc'has ar c'horf maro, a stankas
e fri hag e ziskouarn da viret ouz ar gwad da redet hag
a lakeas anezan ker braoik ha tra adarre en e wele,
evel ma vije kousket.

Olier Meel, kerkent hag an deiz, a yeas d'an oferenn
d'an iliz tosta hag a jomas eno da bedi ken devot ha
tra betek dek eur ken na deuas eur floc'hig, en eur
ouela da gemenn d'ezan edo an Aotrou Jili o paouez
tremen; Meel a ziskouezas kerkent eur c'hlae'har vras
hag a zigasas tud gantan da zellout ouz ar c'horf hag
o veza ma c'houlenne ar re-man penaos e oa marvet
e lavaras d'ezo en devoa bet kement a rann-galon o
klevet e oa bet trec'het ar Zaozon e Formigny, d'ar 15
a viz ebrel 1450, ma n'oa ket bet falvezet gantan na
dibri nag eva netra abaoe; an dorfetourien all a yeas
ivez eus o zu, kerkent ha goulou-deiz da redet ar c'had
d'ar c'hoajou tosta, en aoun da veza tamallet da veza
graet an taol.

Menec'h Boquien, e parrez Plenee-Jugon, a deuas,
antronoz, da gere'hat ar c'horf hag a zebelias anezan,
gant lid, en o iliz, dirag an aoter vras; war ar bez e la-
kejont skeudenn ar prins kizellet e koad; her gwelet a
c'heller c'hoaz en deiz a hirio, e mirdi Sant-Brieg; ne
virer ken skeudenn nemet hounnez eus ar paourkez
Jili.

An duk Fransez a oa o stourm ouz ar Zaozon, e
Avranches, pa en em gavas gantan kelou maro e vreur;
daoust m'en doa ioul d'e welet o vervel n'en devoa ket
gourc'hemennet e lakat d'ar maro hag evel ma lavaret
d'ezan e oa maro dre glenved, e c'helle kredi, marteze,
en devoa an Aotrou Doue selaouet e bedenn.



Kastell hon Duked en Naoned

Ar c'helou e ranke ar maro-ze beza digouezet dre
dorfed a redas koulskoude, evel eul luc'hedenn, eus an
eil penn d'egile da Vreiz; dont a rejod d'illo da damall
Montauban da veza graet an taol. Skuiz ha klanv, an
Duk a gemeras penn an hent da zont d'ar gêr e deiziou
kenta mezeven; tremen a eure ebiou menez Sant-Mi-
kael, el lec'h ma lakeas kana eur zervich vras evid ene
e vreur.

P'edo o tremen an aod, war e varc'h, ec'h en em ga-
vas gantan, war a leverer, ar manac'h en devoa kove-
saet Jili hag a gemennas d'ezan e oa galvet d'en em
gaout a-benn 40 dervez e lez-varn an Aotrou Doue. An
Duk a voe ker strafuilhet, goude ar weladenn-ze, ma
reas e hent, pell ha hir, hep lavaret ger; terzien a
grogas ennan; p'en em gavas e Gwened e oa gwall
glanv ha mervel a eure eno d'an 40^{vet} dervez goude
m'en devoa kavet manac'h Sant-Mikael war e hent.

Fransez I a varvas e kastell an Herminig, e kichen
Gwened, 84 dervez hepken goude e vreur Jili, d'ar 17
a viz gouere 1450; n'en doa nemet 36 vloaz; Mont a
eure dirag e Varner da respont eus ar pez en devoa
graet d'e vreur; n'oa ket bet atao mat a-walc'h outan;
marteze en devoa c'hoantaet e varo, met, ne weler ket,
koulskoude, e nep lec'h, en divije gourc'hemennet da
zen e laza.

War e lere'h, e vreur Per a azezas war dron Duked Breiz; war ali e eontr, Richemont, henman a lakeas rak-tal digeri prosez ar vuntrerien; Olier Meel a oa tec'het eus ar vro hag aet da guzat d'ar Normandi da di vreur kaer Arzur Montauban; met Richemont a lakeas e dapa eno e miz gwengolo 1450 hag eun nebeud miziou goudeze e voe dibennet e Gwened; an truilhou all o devoa mouget ar prins a voe lazet ivez hag o c'horfou laket a dammou a voe kaset da geriou brasa Breiz, tamm d'ar ger-man, tamm d'ar ger-z-hont, ha staget, er vann, ouz peulioù, gant eur skritell outo da lavaret perag e oant bet barnet d'ar maro.

Garspern hepken, goude nao bloaz prizon, a voe lezet da vale; met an torfetour brasa, Arzur Montauban, a c'hellas chacha e skasou gantan; aet e oa da lez Charlez VII ha kaer en devoa Duk Breiz kas kemennadurez d'ezan da zont d'e Lez-varn ne rae ket eur van; en aoun ne deuje Richemont, eun deiz pe zeiz, d'e dapa pa ne vije ket war c'hed, evel Olier Meel, ez eas da vanac'h; tostennat ker brao a ouezas ouz Louis XI, ma voe anvet da abad, gant ar Pab, e Redon, met an Duk Fransez II a viras outan da lakat e dreid e Breiz; neuze Louis XI, evid e zigoll, a lakeas anezan da vont da arc'heskop da Vourdel, er bloaz 1468, el lec'h ma varvas er bloaz 1478; an Aotrou Doue hag a zo divent e drugarez, en devezo marteze digoret d'ezan e varadoz, daoust peger bras torfetour eo bet e penn kenta e amzer.

Franseza Dinam, intanvez d'he fevarzek vloaz, a zimezas da C'hien XIV a Laval, tad Fransez a Laval, eun den yaouank hag en devoa he goulennet a-raok Jili hag a oa ivez koz a-walc'h da veza tad d'ez.

Setu aze istor druezus Jili Breiz; re droet oa, mar kirit, gant ar Zaozon, met e vreur a oa ken troet all gant ar C'hallaoued ha setu perag ne c'hellent ket en em glevet; evid o brasa gaou an eil hag egile anezo o devoa graet dishenvel diouz o zad a oa e c'her: na saoz, na gal, breizad hepken!

G. P.




Plijadur ha displijadur

Gwerz a vro Iverzon troet e brezoneg

N^o 1 euz ar 14 kanaouenn keltiek kaer-dispar, dastumet hag eil-tonet gant BOURGAULT-DUCOUDRAY.


Andante



'Tre ma strink an heol tom-der war ar



mor o trou - zal, an dour doun a c'hell be - za cho - met



yen ha ten - val 'Tre ma vez dremm an - den O vous-c'hoar-zin la-



ouen E galon a li - es a vez leun a an - ken

1

'Tre ma strink an heol tomder war ar mor o trouzal,
An dour doun a c'hell beza chomet yen ha tenval;
'Tre ma vez dremm an den o vouse'hoarzin laouen,
E galon alies a vez leun a anken.

2

Plijadureziou gwirion ha poaniou didruez
A zigouez bep eil warnomp epad hon hol buhez
Kalz a deu ne reont forz; p'o deuz tanvet peb tra,
Nag euz a drubuilhou nag euz a wir joa.


3

Ar galon, p'he deus tanvet an trubuilhou garo,
'Jom evel ar skour sec'het dindan an heol beroc:
Kaer eñ deus strinka 'n heol tomder ha sklerijen,
Ar skour maro, siouaz, ne advleunio biken!

P. Tr.

BUHEZ JENOVEFA A VRABAN

skrivet gant GLAODA 'R PRAT, ha skeudennet gant an Dimezell O. DE VILLERS, loreet he labour gant Skol-veur Ijinou-kaer Roazon.



XVII

Penôs ec'h echu istor Jenovefa a Vraban

IDULF, eskob Trev

— « Ho menoz, Palatin, a zo d'am grad meurbet, Hevelep c'hoant am oa; Doue ra vo meulet! D'ar Werc'hez e vezo ar chapelig gwestlet, Hag « Itron a Druéz » ganeomp vezo hanvet. »

An holl gwez er c'hoad bras a stoue o skourrou
'Vit dont da enori gant hast ar relegou:
An evned 'a nije uz da gorf ar brinsez
Evit kana d'ezhi meuleudi en o yez.

DOUDE ma 'z oa dizroet Jenovefa, pep unan a felle d'ezan gwelet dremm ar brinsez. Gwisket e veze peurvuia e gwenn ha kalz amzer a dremene en eur gador vourret. Ar c'houbari anezi a oa dous evel hini eun el hag endro d'ezhi e vije lavaret e skede kele'h ar zantelez. Da gement den a

deue d'he gwelet e kave eur gomz vat da lavaret, hag ar c'homzou-ze a jome skrivet, evel moulet, e kalon ar re o c'heve.

— « Mignoned ker, emezi, plijadur a ra d'in kenan gwelet ac'hanoc'h o tont d'am zi. Bennoz Doue d'eoc'h evid ar garantez a ziskouezit kaout evidoun hag eus ar perz a gemerit koulz em poaniou hag em plijaduriou. Da c'houzanv ho peus ive, m'her goar; hogen, me hel lavar d'eoc'h, lakit ho fizians e Doue. N'en em lezit morse da vont d'an dizesper; hor Mestr a oar miret e dud dioc'h an droug, hag evit ar re a gar anezan, pep tra a dalv da gaerât o c'hurunennou. Gwelet a rit sklêr kement-se er pez a zo c'hoarvezet ganen. Grit a galon vat gant an nebeut ho peus; er vrasa paourentez e c'heller beza an eürusa: desket em eus an dra-ze er c'hoajou gouez. N'oc'h ket paourôc'h ha ne c'hellit ket beza paourôc'h eget ne oan. Eun ti-soul ho peus evit ho koudori ha dilhad da c'holo hoc'h izili. Eur gwele ho peus da ziskuiza en noz, hag er goanv eur banne soubenn ha tan da domma ac'hanoc'h. Mar d'oc'h fur, petra c'hoantaot en tu-hont da-ze evit beza eürus? Arabat eo d'eoc'h staga ho kalon ouz madou ar bed-mañ; troit kentoc'h ho sellou war-zu Doue. Gellout a ra eus eur mare d'egile kas da baour ar pinvidika, evel ma c'hell sevel ar paoura den betek uhella pazenn an enoriou hag ar binvidigez. Gwelit petra a zo en em gavet ganen hag ar pez a zo en em gavet ganen a c'hell en em gaout gant ne vern piou.

« Pedit alies an Otrou Doue ha grit eus ho kwella evit ma vezo bepred ho koustians e stad vat. Er bedenn e kavomp nerz da ober hon dever; hi eo a vir ouzomp da goueza pa 'man an traou o stourm ouzomp. »

Dre an aliou fur-se ha kalz re-all henvel outo e klaske Jenovefa lakât he skiant prena da dalvezout d'ar re a deue betek enni. Alia start a rea ar priejou da gaout dalc'hmat fizians an eil en egile. D'an tadou ha mam-mou e lavare sevel o bugale e doujans Doue.

— « Gwreg, emezi eun dervez da eur plac'h hag a zouge eur bugel war he brêc'h, n'ouzoc'h ket petra e teuo ar bugel-se da veza eun dervez. Gwelit anezan breman o vousec'hoarzin dizelblant ouz traou ar bed; eun dervez a deuo, ar penn-ze a vezo tenval, an daou-lagad-ze kel laouen a ouelo dourek, e savo roufennou war an tâl-ze. Gant a reot, savit ho krouadur, da vihanan, e doujans Doue, ha neuze e vezo krenvoc'h da zougen sammou ar vuhez-mañ. Pa edon etre diwrec'h va mamm, houman, kredabl bras, ne ouie ket petra em bije da c'houzanv a boaniou a bep seurt epad seiz vloaz leun; hogen, ez-vihanik he doa desket d'in karet Doue ha lakât ennan va holl fizians. Anez, penôs e kav d'eoc'h

em bije gellet herzel ? Petra vijen deuet da veza ? Petra vije ar vuhez-man hep ar feiz, an esperans hag ar garantez ? Va mignonned, lakit feiz krenv e kalonou ho pugale : n'oufec'h ket ober kaeroc'h d'ezo. »

Jenovefa he doa karget Benoni da rei eun donezon da bep bugel. Kement a vadelez a-berz an itron a yeas war-eün da galon an holl hag a lakeas meur a hini da skuilha daerou tener. Skoueriou Jenovefa, he feiz, he fasianted, a reas eur vad dispar er vro a-bez. Tiegeziou leun a drouz hag a zizurz betek neuze a deuas da veza tiez a beoc'h, a garantez hag a eürusedd.

Ar vugale a blij dezo gwelet an traou a-dost; setu perak, goude beza gwelet Jenovefa ha Benoni, o dije c'hoant ive peurvuia da welet an heiez. Houman a veze lezet dishual da voñt ha da zont dre borz ar c'hastell, hag a-wechou zoken, pa droe en he fenn, e save gant an deleziou hag ez ea war eün betek kambren Jenovefa. Chom a rea eno ken na vije digoret d'ezi. Ken donv oa ma tebre eüs dorn n'eus fors piou. Ar chas he anaveze ha ne reant droug ebet d'ezi. An holl vugale o deze plijadur o floura he c'hein hag he fenn hag o rei bara d'ezi.

— « Va Doue ! a lavare ar mammou, petra vije deuet hor mistri da veza heb an heiez-ze marvet e vijent o daou du-ze gant an dienez. »

— « Setu perak ive, e lavare ar mevel a veze wardro al loen dous, ne dleer morse ober poan d'al loened. Petra rafemp ma n'hon dije na kezeg da gas an alar na saout da rei lèz d'eomp ? An douar heb al loened a vije eur gouelec'h divent; nebeut a barkeier a vije labouret, hag ar c'haera prajeier n'o dije falvoudegez ebet. Rak-se 'ta, gant a reot, diouallit da veza drouk ouz al loened ha mirit anezo evel eun donezon kaer digant Doue. »

Golo a oa bet barnet d'ar maro. Jenovefa a bedas kement he fried evitan ma voe tólet er bac'h betek e varo. Beva a reas c'hoaz meur a vloavez a-c'houdevez, bourrevet gant ar c'heuz d'e dorfejou, er gwsa dizesper. Konta reer zoken e pedas unan bennak da rei d'ezan tól ar maro.

Ne ouezer ket d'ar just betek pegait e vevas Jenovefa; ar pez a ouezer eo e vevas eürus hag e peoc'h goude he foaniou hir hag e varvas evel eur zantez. Ar peurrest eus he buhez a voe evel eun nevez-amzer goude eur barrarne hag a vije padet seiz vloaz. He maro a voe henvel ouz an heol o kuzat, a dól e sklerijenn dous keit ha ma 'z eus eur bann dirak hon daoulagad hag a zav a-nevez e broiou-all gant kement a sked ha biskoaz.

Eur bobl vras a dud a deuas d'he anterramant. An holl a skuilhas daerou, den avat evel a reas Sifroa ha Benoni. An heiez a heuilhas ar c'horf d'ar vered; gour-

vez a eure war ar bez ha kaer a voe kinnig boued d'ezi, ne falvezas ket ganti dibri eur begad. Eur beure e voe Ravet maro gant an naon hag ar c'hlae'har.

Ar c'hont a reas sevel eur bez kaer da Jenovefa.

Jenovefa he doa goulennet ouz he fried sevel eur gouent e lèc'h he doa bevét epad seiz vloaz pell diouz an dud, er bedenn hag er rusta pinijenn. Ar chapel a oa a-zehou d'ar c'heo; war ar mogerioù e welet livet buhez Jenovefa. Kroaz koat ar brinsez a voe goloet gant eur gwiskad aour ha lakèt war an ôter goude maro Benoni. En tu kleiz d'ar c'heo edo ti ar venec'h. Eur maread tud a deue di a bep lèc'h e perc'hirinaj. Unan eus an tadou a zisplege d'ezo ar burzudou c'hoarvezet war al lèc'h santel. Diskouez a rea d'ezo ar maen e taouline warnan Jenovefa hag ar feunteun a roas d'ezi dour fresk da derri he sec'hed. Da echui, e lavare d'ezo kemeret skouer war ar brinsez santel, hag heulia he vertuziou.

Jenovefa a voe enoret evel eur zantez.

Kastell ar c'hont Sifroa ha Jenovefa n'en deus ket gellet herzel ató ouz tóliou an amzer; gwelet a reer c'hoaz evelato dismantrou anezan demdost da Goblentz. Koulskoude devosion ar bobl evit Jenovefa n'eo ket kouezet gant an amzer: savet 'zo bet d'ezi zoken ilizou kaer, ha kalz a verc'hed a gendalc'h da zougen he hano.



Son ar bleo trouc'het (Evid ar merc'hed)

Andantino Son ha ton nevez,

Er vro 'z eus deuet eur c'hiz nevez Di-gaset
 euz Pa-riz pe Lon-drez Hag e Kas-tell breman ar merc'h
 hed Zo'vel pa vijent holl di-rollet.

1

Eur vro 'z eus deuet eur c'hiz nevez,
 Digaset eus Paris pe Londrez.
 Hag e Kastell breman ar merc'hed
 Zo'vel pa vijent holl dirollet.

2

Gwelet e vezont o pourmen kear,
 Soun o fennou, o friou en ear,
 O vousec'hoarzin hag o lavaret:
 — Sellit, sellit ouz va bleo trouc'het! »

3

Betek war ar meaziou, ar merc'hed
 Da drouc'ha o bleo a zo staget:
 Gwelet e vezont o vont d'ar park
 Gant o bleo trouc'het « à la Jann Dark ».

4

— « Breman ni gavo gant hor bleo berr
 Tud a zoare d'hon digas d'ar ger,
 Ha pa 'z aimp ganto d'ar pardonioù,
 E vezimp karget a vadigou. »

5

Goulskoude, merc'hed, sonjit ervad,
 Ne vezo ket deoc'h holl eun dra vad:
 Mar ho peus labou kuzet en ho penn,
 War ho kouzoug e teuint da bourmen!

6

Gant kalz ac'hanoc'h eman ar c'hiz
 Goalc'hi ho kouzoug eur wech er miz:
 Allaz! breman, gant ho pleo trouc'het,
 Bemdez e ranko beza goalc'het!

7

Ha pa 'z ay kuit ar c'hiz divalo,
 M'orvod c'houi vezo nec'het-marò:
 D'ober bleo nevez yo red d'oe'h-kaout
 Peb a deir dousenn a lostou-saout!

8

Selaout 'ta, Janig ha Janed,
 Mar ho peus c'hoant plijout d'ar gwazed,
 Ha c'hoant da gaout eul labourer mat,
 Lezit ho pleo buan da hirraat.

Francis MOAL.

KELEIER AR MIZ

A-RAOK BLEUN-BRUG GWENGAMP



Lenn a reomp en *Arvorig* miz c'houevrer:

Ne 'z eus kont er vro, adalek Sant-Nikolas betek
 Gwengamp, adalek Kallag betek Kintin, nemet eus ar
 gouel a zaver e Boulvriag gant « Potred ar c'helec'h ka-

tolik », hag a lako holl yaouankiz hon farrouziou d'en em vodan, dre vil ha dre vil, evit gwelet traou ha n'int bet biskoaz gwelet, nemet e Kemper e vefe, er bloaz tremen.

An devez kaer-ze 'zo hanvet « Gouel ar Minibriag », dre ma vo enoret douarou, kestell koz ar Minibriag.

Unnek parrouz a vo skeudennet ardameziou (armoiries) o c'heriadennou, kestell, maneriu, m'êrieriu, war bannielou koant douget gant pôtrede ha merc'hed yaouank eus Boulvriag, Sant-Drien, Sant-Pever, Plijidi, Senven-Lehart, Magor, Keriên, Sant-Negant, Pont-Melvez, Mousteru ha Koadou. War bep hannel vo merket ha livet an he c'hêrig.

Daou-c'hant plac'h yaouank gwisket gant dilhad seiz ha voulouz, gant koefou bras dantelezet, vo merc'hed a enor e kichen kant potr yaouank klasket e pep parrouz evit dougen ar bannielou e Boulvriag.

Goude ar gouel, ar bannielou-ze a vo kinniget gant ar yaouankiz da ilizou an unnek parrouz.

Tri-ugent marc'heg, pe ouspenn, gwisket evel soudarded koz Breiz-Izel, a vo war varc'h. En o zouez e vo ana-veet kalz a dud vrudet, Derok, Gui Penteür (Guy de Pen-thièvre), Charlez Bleaz hag e servicherien eus Plijidi..., Duked Breiz.

War o lerc'h, bugale vihan kempennet brao, ha Sant Briag hag e venec'h.

An amzer goz a vo desrevelet en de-ze en Boulvriag.

Grêt e vo eul lid en iliz parrouz: ar bannielou a vo binniget ha goude an holl a rei tro kêr. Er penn e vo muzik Boulvriag, hini P... sonerien biniou ha bombard eus Keraez.

Kreiz al leurenn vras, dirak skeudenn ar Zoudarded, ar Vretoned maro er brezel diwean a vo salutet gant o C'hentadou, e kreiz kêr ha soniri Breiz-Izel.

Goude eur pennad amzer, pôtrede Boulvriag a dihuo eur pezh-c'hoari e brezoneg. Kaniri a vo c'hoaz gant kanerien ha Barzed ar Vro.

Biskoaz ne zo bet gwelet kemend all na gant ar re goz na gant ar re yaouank. Eur mor a dud a deui da welet gouel ar Minibriag.

Perak eur gouel 'n eun doare nevez? Kazetenn vihan Sant Briag a gas bep sun da 700 tiegez kelou ar barrouz, he buhez tremenet, istor ar parrouziou all hag a oa merc'h pe tost-kar d'ez. Embannet he deus kalz a neventiou diwarbenn ar Vro hag, arôk achui al labour-ze prizet gant lennerien ar « C'hloc'hdi », 'zo deut e penn pôtrede ar C'helc'h katolik sevel eur gouel da lakat an amzer dremenet hag an amzer a ren da rei dorn an eil d'egile.

Kement-ze zo herve spered ar Vretoned. Gouel all ebet n'hellje ober kement a blijadur. Eur Breizad a zo stag ouz e dud koz, ouz an amzer dremenet dre ar chadenn

hanvet an hengoun (tradition). Houman ne dorro biken, keit ma vo kavet tud, leoriou, skridou da zispakan buhez ar Vro.

Ar gouel-man a stardo muioc'h c'hoaz ar Vretoned ouz o sent, ouz o gouenn, ouz o yez... Lakat a rei ive frealzi-digez ha dudi er c'halonou. Bannielou, gwiskamanchou, muzik ha kaniri, yez hon C'hentadou, brud vat ar zent a valeo e Boulvriag hag a vo enor ar Vro.

Parrouziou all, Gwengamp, Laruen, a c'houlenn kemer peurz er gouel... Digemer mat a vo grêt d'ezo ha d'an holl gant

Pôtrede Kelc'h katolik Boulvriag.

TOLIT EVEZ. — Reolenn ar gouel a vo embannet en *Arvorig* gant miz meurs hag a vo laket ivez e F. ha B., d'hor mignonet da vont en deiz-ze betek Boulvriag, ar re a c'hello.

ENEZ MOLENEZ HAG AR BREZONEG

Avel a-benn, ha red an dour, ne gas nemet da dourtal reier ha da strad ar mor... An hevelep dour, a c'hras Doué, diouz al lano pe an trec'h, a zav hag a dec'h diou wech bemdez. Hag an avel a dro bep mare...

An avel gornaouok, a zo breman da zigas barr-amzer ha glavachou, a ray bremaik Avel Réter, avel an amzer gaer hag an heol tomm...

Breman e vo daou vloaz, en evez Molenez, e oa avel gwall ha mor diaes gant ar Brezoneg; eun amzer da goll bag ha martolod, da vihana, an hini en dije graet diouz anaout ha karout komz ar Brezoneg e diabarz pe e dia-veaz an ti hag ar skol; hag an deiz a hizio ho peus dirazoc'h eun enezenn distroet war he zu mat... ha ma kredit ac'hanoun ni a rayo d'ez ar maout hag hep marc'hata.

Selaouit kentoc'h; e miz Kerzu ez eus bet kavet gwerz da hanter-kant *Soniou Feiz ha Breiz*, ugent *Soniou poblusa Taldir*, hag e miz Genver, dindan pemzek dez, ez eus aet er maez talvoudegez 250 lur a levriou brezonek... Deuit ganin breman d'ober tro an tiez da vare ar veilha-deg; goulennit gant ar vugaligou vihan perak emaint ker sioul hizio en dro d'ho mamm?... Perak? Aze el levr-bras nag a istoriou koant... richennou kaer, konchennou burzudus: re « *E Korn an Oaled*, evel hini Dom Yan ha hini ar c'housker; re « *ar Sac'had marvailhou* » evel al Labous hag ar c'haper Droch; re *Gwechall goz* evel hini Mab Roue an Hiberni (peger brao) hag hini ar pevar troad bioc'h (peger farsus!)...

D'eomp en ti all... Etouez eur bern gwragez a relijion, hag eur bern tud a iliz, selaouomp ni ive lenn *Salaün ar Foll, Nikolazik, Dragon, Sant Pol, An Aotrou Keriotelet*... pegen devot!

D'eomp c'hoaz pelloc'h... aman eman an dud a galoun; tana a reont « Yann Landevenneg a zo ganto » Normaned milliget c'houi a bakfe, ma ve red!... Ar yaouankizou o unan a denera o c'haloun... Meur a vab prodik anezo a gavo doare an distro o lenn *Mouez ar Gwad*.

Met gwelloc'h eget an dra-ze a zo. Skol Sant Mikael eo red lezel ganti Mestr an holl vaouted!

Lennomp da genta war ar mogerioù anezi. « Skol Sant Mikêl... Piou a zo par da Zoue! » D'eomp ebars... ha goulennomp digant ar beleg mestr-skol... eun tól bomm kan... Dioustu, unan; daou, stagit, bugaligou! *Gwir Vretoned, tud a galoun war zao... Dalc'h sonj o Breiz-Izel... Barz an Arvor, lavar d'in me... Dudi Maeziou Breiz, Hirvoudou bro Skos. An heol a zo kuzet... ha kemend-so; epad eur eur orolaj pe hirroc'h ma karit e vo distaget d'eoc'h gant ar Vartoloded vihan, holl ganaouennou « Sonioù Feiz ha Breiz », darn eus a re Kanaouennou Kerne, eun nebeut eus Barzas Breiz ha meur a hini all dastumet duman ha duhont...*

Ma n'eo ket a-walc'h c'hoaz, gortozit an abardaez-noz ha ni a zistroio d'ar skol gristen da boent an anjelus evit ar studi-noz. Eno e tesker da dregont paotr yaouank konta dres, gallegat brao, gouzout mat diouz ar verdaederez hag ivez anaout ha karout Breiz... Pa blijo ganeoc'h e krogo adarre ar ganaouenn krenfoc'h ha nerzuzoc'h... *Kerz en hent, Morvran benniget tra la la, kelrz en hend da bake pesked... o Breiz-Izel o kaera bro ha me a oar me... ha da achui war zao holl da gana Bro goz ma Zadou... Tra ma vor mor vel mur 'n he zro... Ra vezo digabestr ma bro...*

Ne vank mui d'eomp nemet mont abenn disul d'an ofereunn-bred da zelaou ar merc'hed o kana ker flour ha ken devot Kantikou Breiz ha da zikour ar Vartoloded (sikour ha n'o deus ket a ezomm) da ziskana d'ezo nerzuz ha kalounek.

Ma n'ho peus ket a c'hoant gant an traou-se holl da gana da heul Molenez pe da zeski hen ober, chachit ho freid ganeoc'h diouz ar vro-man ha kenavo hep distro. Met livirit d'in araok oc'h bouzar, pe vut, pe goasoc'h c'hoaz digomprenn penn da benn.

Evidoun-me me a gano:

Enor da Vretoned vat Molenez;
Bebet ar Brezoneg en enezenn
Ha bevet Breiz da virviken.

Gwir eo ar pezh a lavar unan desket eus Molenez: « Aman dibaoue pell amzer, an dud a ra e galleg ouz ar vugale, ha, respet d'eoc'h ouz ar chas... Gwir eo e klever ar yaouankiz o c'hallegat tre ma c'hellont... ha n'eo ket eston, met gwir eo ivez, ne zav ket ar galleg e skourrou war bez ar Brezoneg... Ar vartoloded a ra gant an eil hag egile ha tal oc'h-tal, ha gouzout a reont prizout ar

pezh a zo mat ha kaer en eil hag egile... Ar vugale a ra implij vat eus « *Vocabulaire* » an Aot. Kolin eus a Blabennec; deski a reont istor Breiz e levr an aotr. Alan ar C'hleuziou... hag ar vrasa plijadur a c'hellfer ober d'ezo er skol eo lenn dirazo gwerziou *Barzas Breiz* evel *Fontanella, Seziz Gwengamp, bosenri Elliant, stourm an Tr-gont, Kanaouenn al Levier, Ar re c'haz, Janedik-Flam, Dronk-kinnig Nomenoe... ar beleg forbannet, etc...*

Ar re-ze divezatoc'h a vo Bretoned vat, tud a galon ha tud a benn... gouest n'eo ket hepken da gomz e galleg evelse ouz ki an ti, met ive galleg dres ha Brezoneg freas ouz ar vugale a zigaso Doue d'ezo...

Eur bern en ti.

Eur bern e toull an nor.

Danvez kristenien d'an Iliz, difennourien d'ar vro, ha sent d'ar Baradoz.

Evelse bezet graet.

ER PONT-E-KROAZ. — D'ar zul 25 a viz genver ez eus bet bodadeg potred yaouank kristen er Pont. Wardro 400 a oa anezo, deut da heul o beleien. Darn a oa en em gavet diouz ar mintin abenn nav eur, ha darn all ne zigouezjont nemed goude kreiz-deiz abenn ar brezegenn a oa da ziv eur.

Meur a brezegenn a oe graet diwarben an droug a ra d'hor bro al lezennou fallakr fardet a ratoz-kaer evit klask diskar ar relijion. Helavar e oe ar prezegerien, dreist holl an hini yaouanka, Y. Kerouedan, en deus skrivet, er miz tremenet, eur werz ker c'houek e **Feiz ha Breiz**. O frezegennou, kempennet ha stummet brao, a blijas d'an holl botred yaouank. Mes, perak en nac'h, ne zejont ket gouiskoude tre betek gweled o c'halon rak e galleg eo ez oant displeget. — Pa vez c'hoant da c'hou-nit kalonou yaouankizou hor bro e ranker komz d'ezo ar yez o deus desket war barlenn o mamm.

Aotrou person ar Pont, an aotrou Koatarmanac'h, a oar an dra-ze pell zo. Rak-ze pa zigwezas ar mare da drugarekat ar botred yaouank da veza deuet ken niverus, en despet d'an amzer fall, e reas e brezegenn e « Brezoneg ». A vec'h m'en doa lavaret ar c'homzou kenta ma krozas ar zal gand ar strakadeg daouarn. Mar d'oa kavet brao ha selaouet gand evez ar prezegennou all, prezegenn an aotrou Person a oe kavet dreist ha ne vo ket ankounac'haet gant potred yaouank ar C'hap hag ar parreziou tro-war-dro. — Bennoz Doue d'eoc'h, aotrou Person! Ho skouer, fizianz hon deus, a vo heuilhet hiviziken e pep lec'h. Ar Brezoneg a dlefe kaout atao ar plas kenta e kement lec'h ma 'z eus bodadeg Bretoned.

Eur selaouer.



I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ C'HOUEVRER

I. — Ar skeud. II. — Soubenn ar c'hg. III. — Eur bosad kaoc'h kezeg louet. IV. — Eur vi. V. — Da genta an tavar-nour a leuno ar muzul 'a eiz; eus an hini a eiz e taol pemp en hini a bemp, hag eus hennan a bemp, tri en hini a dri; goullonderi 'a ra, en dizro, an hini a dri en hini a eiz hag e taol an daou a chom, en hini a bemp, en hini a dri; leuna a ra unan evit peurleuna an hini tri, setu ma ne chom mui gantan en hini a bemp nemed eul litrad.

II. — DIVINADENNOU MIZ MEURZ

I. — Pesurt kemm a zo etre eun treitour hag eur mellezour?
20 p. ar r. Digaset gant J. Abolivier, Kernoues.

II. — Petra ranker kaout da ober eur c'hristen?
20 p. ar r. Digaset gant H. Roudaut, Goulc'hen.

III. — Petra n'en deus na liou na saour,
Red d'ar pinvidik ha d'ar paour?
20 p. ar r. Digaset gant Gaby Pelleau, Plouguin.

IV. — Pa vez ganen m'her c'hask bepred;
Pa vez aet kuit, n'her c'haskan ket.
20 p. ar r. Digaset gant Eujen Abjean-Uguen, Plouneour-Trez.

V. — Eur glaoustre, (glaoustre = pari, e galleg) a lavar Herveig da Dinig, e welan muioc'h pa zerran eul lagad eget ne weles-te gant da zaou lagad?
— N'eo ket gwir, avat, eme Dinig, koll a ri.
— Pa lavaran d'it, eme Herve, sko, aze!
An daou botrig o deus laket eur glaoustre ha Ting eo en deus kollet. Penaos?
20 p. ar r. Digaset gant Yann ar Go, Pouldergat.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet abenn ar 25 eus ar miz da: **M. le Directeur du Feiz ha Breiz, Plouguerneau (Finistère).**

Er miz a zeu e roimp anioù ar re o deus bet ar muia poenchoù e daou viz kenta ar bloaz nevez-man.

Ar 17^{vet}, 30^{vet} ha 39^{vet} war roll ar prizioù warlene n'o deus ken tra da ober nemet digas d'eomp e adres evit kaout o levrioù, evel ar re all.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

REDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (Fⁱⁿ) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Bruged* de l'Emgleo Sant Ildu
Yv. DREZEN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
• FEIZ HA BREIZ • et • KORN-BOUD •
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITÉ
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Diou Frans, J. U. — Istor Breiz, THENENAN GOURIOU. — Pedenn martoled Molenez. — Kente-liou Tintin Anna. — Da bep hini e labour, LOEIZ AR FLOC'H. — Marvonig Keryell. — Jakez Queinnee, G. P. — Er Japon, J. U. — Roue al Laz, DIR-NA-DOR. — Em bro emañ koulskoude, C. C. C. — Divinadennoù. — Leorioù Emgleo Sant-Ildu.

GOUELIOU MIZ EBREL

- 5 a viz Ebrél. — Ar Zul B'leunioù, p. 309.
- 12 a viz Ebrél. — Sul bras Pask H. Z. J. K., p. 377.
- 13 ha 14 a viz Ebrél. — Lun ha Meurz Pask, p. 379 ha 384.
- 19 a viz Ebrél. — Sul ar C'hasimodo, p. 388.
- 25 a viz Ebrél. — Gouel ha prosesion Sant Mark, p. 676.
- 26 a viz Ebrél. — Eil sul goude Pask, p. 333.

DIOU FRANS

Unan eus ar rebechou a ra ar framasouned d'ar skoliou kristen eo hen man: « Ar skoliou-ze a laka dispartietre an dud e Frans. Abalamour d'ezo, ez eus en hor bro daou seurd tud: da genta, ar re a zo savet e skoliou ar c'houarnamant, ne vez komzet d'ezo nag eus Doue nag eus relijion, hag a oar reizha o buhez hep mont na wardro iliz na wardro beleg; ha da c'houde, ar re a zo bet savet er skoliou kristen, a zo bet desket d'ezo o c'hatekiz hag o relijiou, hag a gendalc'ho pa vezint bras, da vont d'an ofereñn, d'ober o fask, d'ober o deveriou kristen. Biken an daou rumm dud-se ne c'hellint en em glevet mat, en em garet; bez e vo etrezo enebiez, brezel mar-teze. Ar re a zo kristenien a zo heb ehan oc'h en em glemm; ne blij netra d'ezo! ar skoliou-laik, war o meno, a zo fall, hag e karfent gwelet ar c'houarnamant o sevel d'ezo skoliou kristen. Nann, divergont int, ne ouzont ket petra c'houlennont. Ar c'houarnamant a ginnig d'ezo skoliou neutr. Ma ne blijont ket d'ezo, gwaz a-ze evito... Evit ma vo peoc'h hag unvaniez er vro, e ranker klask laza ar skoliou kristen. Neuze e vo an holl henvel, an holl hep relijion ebet, hag hevelep tud a en em garo, a en em zikouro evel breudeur, ne vo morse tamm trouz, tamm freuz ebet etrezo, an douar a vo evel ar baradoz. »

Setu aze komzou brao. Jul Ferry gwechall, Watdek-Rousseau, Combes, hag Herriot hag e vignoned, holl enebourien ar skoliou kristen, a gomz evelse, hag emaint atao o klask digareziou evid ober droug d'ar re ne zontont ket evelo e pep tra.

Tud fallakr n'int ken. En o genou eman ar ger liberte, met ar ger-ze n'eo lavaret ganto nemet evit touella an dud diskiant; e gwirionez int brasa enebourien al liberte, ne glaskont nemet lemmel o liberte digant ar re all.

Ganto hepken, emezo, eman ar wirionez, ha n'eus netra vat nemet en o skoliou war zigarez ma tifennont komz eus a-Zoue. Ar vugale savet mat eo ar re ne ouzont tamm katekiz ebet. E lec'h katekiz, e vo desket d'ezo traou all evel ar pezh a verk ar ganaouenn c'hallek-man:

« Nous voulons manger, boire,
Danser, rire et chanter.
Nous ne voulons plus croire,
Mais savoir et penser. »

Hevelep bugale a labouro, pa vezint bras, a c'houzanvo poan heb en em glemm, a vezo fur, a en em ziwallo diouz ar veventi (nous voulons boire), a zifenna ar vro pa vezo ret, a vezo laouen o skuilh o gwad evid ar Frans (danser, rire et chanter).

Ar baradoz a zo da glask war an douar-man, ha nann goude ar maro. Setu aze ar relijion nevez, ar relijion laik, an hini a vez desket er skoliou dizoue.

Gand hevelep relijion, eo acs gwelet petra c'hoarvezo. Ma n'ez eus Doue ebet da lenn er c'halonou, da varn an dud ha da rey da bep hini hervez m'en dezo gret, petra dle an den ober nemet klask plijadur, hag ar muia ma c'hello? Diskiant neuze an hini ne oar ket en em denna war an douar-man, an hini n'eo ket pinvidik, rak an doue a zo da adori eo an arc'hant, p'e gwir gantan e c'heller kaout pep tra. Arc'hant, ha kalz arc'hant, ha n'eus fors penos, evit kaout kalz plijadur. Ha mat a reont ar re a c'hell laerez hep beza paket, ha ma z'eo ret laza evit kaout arc'hant, perak ne ve ket gret?

Ne lavaront ket eo tortefourien an dud holl a zo savet hep relijion. Bez ez eus tud hag a zo doujans Doue en o c'halon, hep ma oucsfent, a zo mat, karantezus, leal, a zent ouz lezenn Doue skrivet en o spered, a vev evel tud santel, daoust m'o deus doare da veva hep relijion.

Met etouez an dud hep feiz eo e kaver an niver brasa a dud fall, a laeron, a vuntrerien, a hailhoned. Ha n'eo ket souezus. An den a zo douget d'an droug gand e youlou, ha ma ne harp ket outo, e tiskenna izel e fank ar pec'hed. Ar relijion, o lavaret d'an den tec'het diouz an droug, ober ar vad, a zikour anezan da jom war an hent eun.

O lavaret d'an den e c'hell heulia, e youlou, senti ouz e natur, an doktored laik a zigor an nor d'an droug, d'ar pec'hed, d'an holl draou mezus.

Ar varnerien a zo spoutet o welet-pegement a dorfejou a vez graet bemdez, ha gant tud youank, gant bugale zoken. Met gwasoc'h a welint c'hoaz, ha dizale. Potred an drailh, ar freuz a gresk bemdez o niver, ha diskleria a reont e raint e Frans ar pezh a ra er Rusi, abaoe c'houec'h vloaz, an dispac'herien kriz.

Diou Frans! A drugare Doue, ez eus diou Frans.

Setu aman tud all, ha stank e Frans, dishenvel krenn diouz potred ar freuz hag an drailh. Savet e tiez kristen ha gant mistri kristen abred o deus desket karet Doue hag e zervicha. Diouz ar mintin ez cont d'an daoulin da c'houlenn bennoz Doue war al labour o deus d'ober epad an deiz. Diouz an noz e pedont adarre, hag a-raok mont da gousket, e c'houlennont pardoun digant Doue eus ar pec'hedjou a c'hellfent beza graet. Kregi a reont el labour bemdez heb en em glemm, kinnig a reont da Zoue o foaniou, poaniou a gorf, poaniou a spered, hag o c'havont neuze skanvoc'h. Pa 'z a mat an traou ganto, int laouen hag eurus; pa z'cont fall, ma 'z int skoet gand eun droug bennak, e lec'h koll o fenn, e lavaront: « Ho polontez, va Doue, bezet graet. »

An dud-se, pa zonas ar c'hleier da c'helver an holl evit mont da zifenn ar vro, a-voe poaniet, glac'haret, skler eo, a gavas dies dilezel o zud, o labour, met mont a rejont, hag ober a rejont o dever penn da benn. N'eo ket i a glaskas chom da guzat nag ober freuz, nag en em zével ouz o mistri, na chom hep senti, hag abalamour d'an dud-ze, tud a urz, soudarded kalonek, eo hor beus bet an trec'h war enebourien ar vro.

Goude ar brezel, ar re anezo n'int ket bet lazet evid ar Frans, a zo distroet adarre d'al labour a reant a-raok ar brezel, lod er c'heriou an darn vrasa war ar meaz; gounit a reont bara d'o zud, n'emaint ket o c'houlenn o boued digand ar c'houarnamant, pell ac'hano, rak sikour a reont ar c'houarnamant o paea bep bloaz an tailhou, daoust peger pouanner int.

Ar pezh a c'houlennont hepken eo ar peoc'h hag al liberte; liberte da zervicha o Doue, liberte da zével o bugale e doujans Doue, d'ober anezo kristenien vat, ma vezint ive, deuet da veza bras, tud fur ha tud onest.

Diou Frans a zo. Ya, siouaz! Dishenvel diouz an dud a beoc'h hag a urz, eman an dud hep feiz na reiz, *kommunisted*, ne fell ket d'ezo labourat, met hepken debri, eva kaout plijadur, hag a c'houlenn ma vo lammet o madou digand ar re binvidik, ma vo rannet, dre nerz ha dioc'h tu, holl danvez ar vro, hag e c'heller kredi, n'e ket al lodenn vihana a gemerint, met an hini vrasa. Ha ma teufent (Doue ra viro!) da veza ar vistri er vro, an dud onest a c'hellfe en em lakat en hent evit mont a belbro, rak e Frans ne c'hellfent ket beva.

Diou Frans a zo. Met pehini eo ar wella? Kement den a zo eun tamm furnez en e benn a lavaro hep mare'hata: « Gwelloc'h eo an urz vat eged ar freuz hag an drailh; gwelloc'h eo ar garantez eged ar gasoni; gwelloc'h eo ar zantelez eged ar pec'hed. Gwelloc'h eo eta eur Frans kristen eget eur Frans digristen. An dra-ze a zo skler evel an deiz. »

Ar re a lavar dishenvel a zo kollet ganto o skiant vat, hag ar re a labour da laza ar feiz e kalon ar vugale, a ra labour an diaoul, rak an diaoul a zo enebour Doue abaoe ar penn kenta.

Poania a dileomp holl da zalc'her ar feiz start en hor bro. Dre he feiz eo he deus ar Frans graet traou kaer en amzer dremenet: *Gesta Dei per Francos*, labourou Doue dre ar Fransizien, evel ma lavared gwechall. En amzer da zont ne raio labour vat nemet dre ar feiz ken nebeut.

Eur Frans evel ma c'hoanta ober ar framasoued a ve eur vro koundaonet da vervel Hen diskouez a raimp.

J. U.



ISTOR BREIZ

— 3 —

Ar Vretoned o tont en Arvor

Doare ar vro-man d'an ampoent

Lennerien goz *Feiz-ha-Breiz* — ar re a lenne ar C'hannad-man eur pevarzek pe bemzek vloaz, zo — o deus dalc'hel sonjmariteze eus pennadou Istor Breiz bet d'nevellet amañ gant eur skrivagner, e anv loen an Tour-Guén — Displeget en devoa eus a belec'h e-fer gouenn ar Vretoned — ar ruihou brasa a rejont, epad meur a gont vloaz, en o bro *Breiz-Veur*, hanvet choaz *Enez Breiz* (e galleg: *la Grande-Bretagne*, pe *les Iles Britanniques*). — hag erfin an emgannou spontus a darzas etre ar Vretoned ha pobladoù gouez deuit eus ar Jermanna-an-Skosed, ar Pikted, an Angled hag ar Zaozon dreist-holl.

Eun darn vras eus hon Tadou-koz, trec'het gant o enebourien ha rankas tec'het kuit eus bro o ginnivelez, eur c'halz anezo a deuas da glask beyans, peot'h lazhañ, er c'horniad douar-man eus Bro-C'hall, hag a c'halved an Arvor.

Euz kompren gwelloc'h istor ar Vretoned, non Tadou eo mat dileomp ober eur zell ouz doare ar vro-man d'an ampoent.

Ar rummadoù kenta a guitas o mam-vro vardo ar bloavezh 150. Hag eun toulladig brao e lliet beza zoken dre mare-ze o treuzi ar mor. Ar pezh hen diskouez eo e kellas trumm ar vro-man he anv hag he yez, e lec'h *Arvor* ar read anezha, ziadent, e kemeras hirviziken ar anv *Ar Breiz-Veur*. Kement-se n'en dije ket gallet en em gaout a dra zuz, ma ne vije deuet Breiziz enni nemet a-uhanoù.

Ouspenn an anv ar yez a jenchas ive ker buan al vroadou daou-c'hanf vloaz a oa ne veze komzet en Arvor nemet eur breiz latin, refoel, chomet a zidre'n ar Romaned. Hogen, an anv ha deus deket kantved, melec'het, eber kens eus a latin gant tud an vro-man, ar war o brezelou e vrede eur brezoneg flour ha yac'h, henvet pech ouz an hini a lakea an rabi glas hag ar mor doue da dregenni, da bigne ar Vretoned war o lastri en em gann, kanvado Enezenn, mirra, karek.

An divroa, a lavaren-me bremaik, a gomansas var-dro hanter ar pempvet kantved. Met, evit lakat an traou var an eun, eo red d'omp gouzout breman pegeit e padas hag e pe zoare ec'h en em ziruilhas.

Arabad eo d'eoc'h kredi e vefe deuet ar Vretoned holl asamblez da zifoll evel eun tarz kurun war c'hourenez Arvor. Oh nan! Sioulc'h eget an dra-ze e tremenas an traou.

Breiziz ne guitajont douar-leve o zadou koz nemet dre ma voent gwasket, peur-skuizet gant ar Zaozon. N'eo ket en eun devez nag en eur bloaz e voe graet an diloj; met a neubeudou ha dre hir amzer; pa 'z eo gwir e padas tost da zaou-c'hant vloaz.

Hag ouspenn-ze, fazia kalz a rafec'h o kredi ne veze harluet ar Vretoned kuit eus o bro nemet pa goueze bandennadou Saozon, evel goalinier, war an enezenn, evel goude ar brezelioù bras am eus graet ano anezo. Nag a bet gwech all ne c'hoarvezas ket, zoken er mareou a beoc'h, gant korniadou-douar beza breset ha dispennet, keriadennoù beza pulluc'het ha dismanret, hag o zud lac'het pe vac'hagnet! Neuze eo e veze gwelet familhoù a-bez o testum an neubeut peadra a jome ganto, o lavaret kenavo da di o c'havell, evit lammet, ar buanna ma c'hellent, war o bagou, hag oc'h en em losker da vont evelse, poulzet gant an avel, etrezeg eur vro all bet-nak el lec'h ma vije didorroc'h ar vuhez ha laouenoc'h sklerijenn an heol. En doare-ze e c'heller lavaret, heb aoun da fazia, e padas ar Vretoned da guitât an enezenn keit ha ma kendalc'has ar Zaozon da zont ebars, da lavaret eo eus ar bloaz 450 betek wardro ar bloavez 600...

Eur poent all hag a bedan ac'hanoc'h da deurel outan evez mat, evit kompren freasoc'h a-ze ar pezh a lennoc'h aman er gevrenn-man en troioù kenta, eo an dra-man: e penn ar strolladou Bretoned a zouare, koulz lavaret heb ehan, var c'hourenez Arvor, ne veze ket atao prinsed na brezellourien vrudet, met ive alies-alies eskibien pe venec'h. Iliz Vreiz he doa enebet startoc'h eget n'eus forz pe seurt galloud all ouz an divroidi, ha poaniet en dra c'helle da zalc'her broadelez Vreiz plomm en he sav. N'eus neuze netra zouez ma weler gant pep rummad nevez a zigouez en Arvor eur zant bennak ouz o bleina hag ouz o c'hennerzi en o gwall zarvoud.

Ha breman taolomp, d'ar red, eun taol lagad, diwar nij, var stad hor bro en amzerioù ma en em skignas dreizi ar Vretoned.

Ar pezh a lakea nec'het ar Vretoned, p'en em gave o bagou a-wel d'an Arvor, eo dre ma ne remerkent dirazo, n'eus forz pe du d'ezo trei o daoulagad, nemet eur c'helec'h-teo a goajou tenval, ledet dre-holl war an aochou.

Dre ma savent, e kreiz an douarou, e rouesae eun neubendig ar gwez, met en o gwaskou ne ziouane, ker-koulz all, nemet drez gouez ha koz tammou spenn fall. War ar mezioù distu-ze e rene eur ziuouder skrijus; trouz ebet ken, nemet, pa deue tenvalijenn an abardaez, vouc'hadennou gourok al laboused-noz o tifoucha diouz o glud, pe jilpadennou skiltr al lern o pildrotat warlerc'h o freiz.

Roud ebet eus a zen beo e neb lec'h, nemet a bell da bell eur c'hoz lochennig valan, el lec'h ma teue bep ar mare eun dioualler chatal bennak da glask lojeiz. Kement all a zispac'h hag a freuz a oa bet graet, er beg douar-ze, gant ar gouezidi diranvet! Ha c'hoaz an hiniennou a jome, e kora pe gorn eus ar vro deuet da veza hanter-c'houez, ne oa etrezo darempred ebet. Re zinerz ha re a-strafouilh evit astenn an dorn an eil d'egile da vare an danjer, e c'hortozent kentoc'h skoazell digant ar Vretoned-se bannet eus o c'her ha digaset gant Doue beteg an Arvoriz, evit beza, evel pa lavafen, ar goell hag ar maen-diaze eus ar bobl nevez en doa menoz da zével er vro-man...

Hirio ne jom mui tres ebet ken, koulz lavaret, eus ar c'hoajou divent a c'holoe ar vro wechall: ar re vrasa a welomp breman (evel koat ar C'hranou, koat ar Forest hag ar re all) ne d'int nemet bodennou e-skoaz re an amzer goz. Selaouit ar pennadig istor-man hebken hag e weloc'h.

E bloavezioù kenta ar c'houec'hvet kantved, sant Paol Aurelian a deuas eus a Vreiz-Veur da zouara e goueled Leon, e kichen eur geriadenn a anver breman Gwitalmeze. Ouz e heul e oa beleien ha menec'h a-leiz. Hervez m'edo ar c'hiz gant leaned Breiz, pep hini eus ar venec'h-se a yeas da ober e ermitach en eur c'horn sioul ha distro bennak, pell an eil diouz egile, e kreiz ar c'hoajou. Unan anezo, e ano Jaoua, en doa savet e lochenn e kichennik eur feunteun hag a oa eun dudi klevet an dour sklêr o redek anezi en eur zourral. « Allo! eme Jaoua, setu emaoen brao aman breman va unanik-penn, da bedi Doue ha da ober pinijenn e peoc'h ha didrabas. » Siouaz! fazia 'rea, ar paour-kez sant. Eun amezeg en devoa ha n'oa ket eus ar re jentila, m'hen assur d'eoc'h. Eur mellad taro, resped d'eoc'h, an hini oa. Hag an anaval gouez, beteg-hen roue ar vro, a yeas en egar o rankout daou-hanteri gant eur manac'h! Ar gwel eus al lochenn dreist-holl a lakea anezan da vont e breskin. — Eun deiz eta, ma 'z oa aet Jaoua da bedi, da gana meuleudioù an Aotrou Doue, gant e genvreudeur, setu ar c'hole, savet friantiz ennan, da zailha var al lochig paour, da zanka e gerniel e kreiz ar skourrou ha da ingala toenn ha mogerioù tamm du-man tamm du-hont.

« Koz tra fall, eme ar manac'h pa deuas en dro, ha

gwelloc'h out breman? » Hag hen staga adarre var e bouezig da zevel e di. Met an taro, kounaret gwasoc'h-gwas, ne zaleas ket d'hen troc'holia evit an eil gwech. Pennou breizad o devoa o daou, ar zant hag ar c'hole-hini anezo ne felle d'ezan plega d'egile. Peder gwech dioc'htu e c'hoarvezas ar memes abadenn. Hag ertia Jaoua, nec'het-maro, da c'houlenn skoazell digant sant Paol: « Ro d'in da lochenn, eme ar zant, ha kemer va hini-me. » En dervez-ze diouz an noz, pa welas an den-Doue, var benn e zaoulin dirak e ermitach, an aneval a deuas da c'hourvez mezek eharz e dreid, e lost gantan en e c'harbedenn; sant Paol, eme an histor, a reas warnan eur peziad sin ar groaz; hag al loen gouez a redas d'an daou lamm da guzat e dounder ar c'hogjou. A c'houdevez, morse den n'her gwelas ken... »

Goude beza chomet c'hoaz eun tachadig el lec'h-se, galvet abaoe Lann-Baol, ar zant a yeas en hent gant e ziskibien evit gwelet doare ar vro. Ar c'henta a gavjont var o hent a voe eun denig bihan, dioualler-moc'h eus e vicher. Hen-man a vleinas ar genseurted dre wenojennou kamm-digamm, dre douez ar c'hoajou, betek palez ar roue Wizur, en Enez Vaz...

Ar pennadig istor-ze, pa ne ve ken, hag a c'hellit da lenn en holl skridou koz, a zo a-walc'h evit kompren petra oa doare an Arvor ha stad an Arvoriz pa deuas ar Vretoned kenta er vro: an douarou holl goloet a vez, hag an dud, rouez, paour ha dister, diouallerien chatal an darn vuia anezo.

THÉNÉAN GOURIOU.

Er skol

— Herve Lagadeg, a c'houlenn ar mestr-skol, pegement a ra pevar ha c'houec'h?

Unnek, a respont Herve Lagadeg, e lagad dehou serret gantan, unnek aotrou.

— N'eo ket. Allo, pevar ha c'houec'h. Sonj mat 'ta.

— Daouzek.

— Nann.

— Nao.

— Asa, genouek.

— Trizek neuze.

— Med, sac'h ar bier, perak ne lavares ket dek. Pevar ha c'houec'h a ra dek, michans.

— N'eo ket posubl, eme Herve Lagadeg, digor frank gantan e zaoulagad, penaoz a gav d'eoc'h, pegwir pemp ha pemp a ra dija dek.

MELEGAN.



Pedenn martolod Molenez

An noz o tont, a-diz, ar stered o sevel,
Ar bagou didrous-meur ha pep tra o tevel,
A verk eo deut ar c'houlz d'ar c'horf d'en em astenn
« A-raok, war an daoulin, martolod, d'ar bedenn! »

O Tad a zo en nenv, Tad d'an holl, Tad d'in-me,
Ano, teir gwech santel ha meulet noz ha de,
War blench kalet e vag, dirazoc'h daoulinet,
E ped martolod Breiz, abarz mont da gousket.

Ne oa ket c'hoaz sonet Anjelus ar mintin
Ma oan krog da bedi, em zav, war ar c'herdin,
Sell, va daouarn tanet, sell, va divrec'h morzet
Ganto, a hed an deiz, ganto em eus pedet.

Skuiz oun ha skuiz maro; va c'horf a zo brevet,
Gant dour-mor ha dour-c'houez, n'ouzoun pet gwech gle-
Sevel kevell goullou ha kevell divouetet. [biet;
A ran, bemdez, siouaz, ha nebeud a besked.

Oh! ma talv va labour, ma talv da binijenn
Ne baean tamm ebet re ger va c'hurunenn;
Met pa 'z eo ar bara da c'hounit ken diaes,
Ni zant omp kastizet gant an nenv alies.

Ar c'hadoriou goullou da zul d'an oferenn
A bella ar pesked diouz kavell hag higenn,
Kalon vlonsët Doue a ra d'e zourn sevel;
Malloz d'ar pesketour, mor diaes, gwall avel!

Sempl evel ar re all, siouaz d'ar zul ive,
Va bag 'zo bet er maez ha va zud en dere.
Fustit war ar pec'hed... truez ouz ar pec'her;
Gwalc'hit e c'houlou e gwad tomm Hor Zalver.

E toull doun ar Fromm-veur, ar mor ne rafe ken
 Eus va bagig zister nemed eul lonkadenn...
 Setu eun intañvez, tri baotrig emzivad,
 M'o gwel o ouela d'in, o tougen kaony d'o zad.

Oh! nann, Tad ar bed holl, ne vin ket kollet c'hoaz,
 Er Fromm-veur ne vin ket lonket gant ar mor bras,
 Gant ar vag-savete, war ar mor-gwenn vel lèz
 Pet gwech oun bet er riskl da goll va zamm buhez?

Va c'hredenn eo ez in da vered Molenez...
 Ar mor glaz eo va fark, met ne vo ket va bez...
 Va diouallit, en noz, Gwerc'hez, steredenn-vor,
 Ha va hentchit, en deiz, o Porz bepred digor.

Etre Konk hag Eusa, Lok-Maze ha Porsall,
 Daouzek tour-tan a zo hag a lavar diouall,
 En aoun rag ar reier... Eveldo, gras Doue,
 Diouz hentchou ar pec'hed, a viro va cne.

Koulz eo en em astenn, koulz eo d'in ' va Ael mat,
 Dindan ho tiouaskell, etre divrec'h va Zad,
 Ha war barlen va Mamm, chouchet kloz em lien,
 Ehana eur pennad, da ziskuiza va fenn.

Breman an tadou all a ro d'o bugale,
 Eur pok tomm ha tener a-barz mont d'o gwele;
 Me ranko, va-unan, kloza va daoulagad,
 Ha den ne roio d'in an ano c'houek a dad.

An tri elig am eus, du-ze, e Molenez,
 O devije d'o zad poket gant levenez,
 Dienkrez int o zri, kousket en o gwele,
 Heb anaout va foaniou, a drugarez Doue!

Va lezit, va Jezuz, me ivez ho pugel,
 Da boket en noz-man, teir gwech d'ho treid santel,
 Ma c'hellin evito, lakat va muzellou,
 El lec'h m'eo bet toulllet ho treid gant an tachou.

Evelse bezet graet.

EUN ALI. — N'omp ket evid embann skridou, heb anaout
 an hini o sav; pedi a reomp eta **Treguren** da rei — ha goude
 ma ne vefe nemet d'eomp hepken, — e wir ano pa zigaso
 d'eomp eul labour all bennak; moula a raimp gant plijadur e
 werziou rak troet e vezont gantan a-zoare.

F. h. B.

LABOURIOU AR MERC'HEDE WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

IV. PENNAD. — AR BOUED

Evel eur mekanik dre dan, al labourer-douar a ya en
 dro, bemdez, heb ehana, nemet da zul. Poania a ra gant
 evez ha zoken gant plijadur evit beva e wreg hag e vu-
 gale ha dastum eur gwenneg bennak; met, evel ar me-
 kanik ivez e rank beza bouetet pe e chomo a-zav krenn.

M'en deus bet an eur vat d'en em gaout gant eur vaouez
 kempenn hag a glask atao e vrasa mad e welo, gant
 laouenedigez, o tostaat poent ar prejou; gant eur vouez
 tener, e bried a c'houlenno outan ha n'eo ket re skuilz;
 Jakaat a raio, etre e zaouarn, eul lien fresk evit terchi
 c'houezenn e dal, hag an holl, bras ha bihan, a en em
 renko ouz taol, goude beza lavaret ar *Benedicite*.

Seblantout a ra d'in klevet o diviz. — « Digeri a ra
 va c'halon, bep tro, ma azezan aman da zibri, eme an
 ozac'h; al listri-kegin a zo ken dilastez; ar boued a vez
 aozet gant kement a breder, ma ne zonjan mui em skuilz-
 der. Oh! Fevaig, va muia karet, eur vaouez hep par out! »

— Eur vaouez kempenn n'oun ken, Fanch, hag, a dru-
 garez Doue, ez eus meur a hini evel-doun er barrez!

Hag ar wreg, sederaet he c'halon gant komzou he hini
 koz a stag da zeski he merc'h hena: « Klev, Loeizaig,
 peger mat eo bet ouzomp an Aotrou Doue! En hor par-
 keier e sav gwiniz, kerc'h, patatez, irvin; en hol liorzou,
 kaol, ognon, karotez ha pour; pep tra evid hor maga, ni
 hag hol loened; pep tra a gavomp dindan hon dourn;
 dour skler ar feunteun veur a red demdost d'an ti; pa
 fell d'in ober krampoez e kavan pep tra dindan va dourn:
 pa vez unan klanv bennak n'em eus nemed ober eur gam-
 med evit kaout viou fresk; er siminal ez eus anduilh ha
 kig moc'h a-benn ar pardon; boued yac'hus, a dra zur,
 ha n'eus ket a ezomm da gaout aoun e rafe droug d'an
 den, evel eun darn vat eus a vouejou ar c'heriou.

— Va mamm, eme Yvonig, me a garfe kaout kig, bep
 pred; kig druz, ken druz ma tenuo ar c'hlaourenn eus va
 genou.

— Chom peoc'h, pôtrig, beza ker marlonk-ze a zo di-
 valo d'eur c'hristen! Arabad eo d'eooc'h kredi eo red kaout
 kig bemdez evit beva; ar c'hig a zo mat, met hepdan e

c'heller beza krenv ha yac'h. Ar venec'h a labour an
Jouar ne zebront tamm kig ebet morse; an Turked, bru-
det evid o nerz a en em vag gant riz ha frouez poaz; an
nebenta a gig hag an nebenta a alkool eo ar gwella; er Ja-
pon, ar bobl a vev gant légumach ha koulskoude eno e
kaver soudarded ha labourerien eus ar c'henta. Daoust
hag eur vro a zo er bed, tud krenfoc'h ha kaeroc'h enni
eged e Breiz? M'hen tou, ar Vretoned koz n'oant ket dis-
kiant p'o d'eus kavet an doare da ober yod silet! Ar ve-
desined a gred o deus graet eur gavadenn pa deont da
alia ar re glanv da zibri yod kerc'h: « eur boued skanv
ha yac'hus eo », emezo. Hon tadou ouie an dra-ze mil bell
a zo ker koulz hag ar re ouiziek, breman hag o veza m'her-
gouient eo o deus kendalc'het, a-rumm da rumm da ober,
eus ar yod silet, ar pep wella eus o magadurez! »

— « Echu eo, eme an ozac'h; kaer ez pezo sorbc'hat
ne deuy ket ar yod en-dro.

— « Siouaz! sotaat a ra an dud; a-gleiz hag a-zehou ne-
glevomp ano nemed eus a gig-rost, viou ha kafe... Me a
oar 'vat, ez eus tud hag a lavar penaos ar yod n'eo ket
boued kristenien eo ha neuze, emezo, mantrus oa an
amzer a veze kollet oc'h aoza yod! Mat, me a lavar
d'eooc'h n'eus gant an dud-ze nemet digareziou toull, di-
gareziou savet gant merc'hed ha ne glaskont nemet
tec'het diouz al labour, hag a gollo ar ouenn ma ne vez
ket gellet o diarbenn. Loeizaig, va merc'h, deski a-ri ga-
nen purchas boued, derc'hel kempenn eun tiegez, ma
plij gant Doue va lezel, c'hoaz, eur pennad ganeoc'h, met
ne zeskin ket d'it frita kig yar war ar billig, na drailha
kig leue, na strapa viou e giz ker; me a zesko d'it ober
yod, farz, krampouez, soubenn ha meur a zoare da boazet
patatez, met deski d'it aoza traou lipous n'her grin bi-
ken! »

Ar wirionez a zo gant ar vamm-ze; en amzer-man e vez
graet fae war ar giziou koz ha koulskoude eleiz anezo a
zo mat hag ar re a deu en o lec'h n'int ket koulz; war-
lerc'h tud speredok em eus klevet kement-man: « Kaera
soudarded a vez savet bep bloaz, e bro ebet, eo e Bro-
Leon, etre Kastell-Paol ha Kerlouan, el lec'h ma vez graet,
dre al laez, an darn vrasa eus ar boued ha debret yod
silet bemdez! »

Klevet em eus ano ivez eus eun den koz eus a C'horre-
Leon, pemp troatad hanter a vent d'ezan hag a lavare:
« Pemzek vloaz ha tri-ugent am eus ha ma 'm eus kement
a yec'hed, n'eo ket dre ma 'm eus debret kig eo, rak
morse n'am eus tanvaet tamm; n'ouzoun ket muioc'h pe-
seurt blaz a zo gant louzeier ar vedesined, rak n'oun bet
gwech ebet war o zro! »

Ma n'eo nemet dre lezieregez ar merc'hed eo e ya ar
yod silet d'an traon e c'heller lavaret e chach ar mer-

c'hed eur bec'h spontus war o c'hein ha keit ha ma
chomo, e Breiz, danvez eul loa yod e vezo ivez eur vamm
goz bennak prest da gregi enni ha d'he zerri war gein ar
merc'hed lezirek.

E penn kenta ar vagadurez e lakan al lez; mat eo d'ar
c'hrouadur, d'an den klanv, d'an tad koz; hel lakaat a
c'heller er yod, er riz, er c'hrampoez, er c'hafe; gant e
zien e vez graet aman hag al lez-ribot a zo mat tre da
zouba; n'eus ket gwelloc'h da goan eget boued lêz, eun
tamm aman rouzet warnan. Ha c'hoaz ne gomzan ket eus
al lez-gouedenn, nag eus ar « fromaj » ker magus ha tra.

War-lerc'h al lez e teu ar patatez; meur a zoare a zo
d'o aoza; trouc'het a dammou evit lakaat war ar boue-
jou; frigaset gant al loa pe gemmesket gant lez evid ober
yod pe gouignou; poazet en o fez evid ober kefalennou
gant pe laket er fourn da grienna gant eun tamm fres-
kad, e pep giz e plijont d'an neb a zo digor e galon.

Ar piz, ar fa, hag ar fa-munud « haricots », e galleg,
a zo traou bleudek ha fetiz, magadurez eus ar gwella
enno; pell e vezont o poazet, met n'eo ket diaes, er
goanv, dreist-holl, o lakaat, war an tan, diouz an noz, pa
vez an dud en dro d'an oaled, pe e kichen ar pod-bras,
er eur pod-pri, goloet evit tremen an noz; antronoz e
leveroc'h d'in me ha ne deuzint ket en ho kenou evel
aman rous? O frita a rankoc'h da genta, gant soa pe
Iard; pe c'hoaz grit soubilh rous, gant eun tamm ognoa
pe chalotez ebarz, ma vezo blazet gwelloc'h.

Giz ar c'hafe a zo deuet re stank en holl etouez an dud;
ne-lavaran ket e vefe fall eva kafe eur wech an amzer,
lakeomp bemdez da verenn; met n'eo ket eur boued krenv
ha gaou bras a c'hell da ober ouz meur a hini rak skej a
ra war an nervennou; n'oa ket dleet e vefe roet d'ar vu-
gale ha breman kerent ha ma vezont deuet war an douar
emaer o strani rei kafe d'ezo. Adarre e leveroc'h ne ran
nemet meuli an amzer goz; mat an dud a oa krenfoc'h
neuze eget n'int breman. Bara ar gêr a oa founusoc'h
eged ar bara prena ha diwar boued lêz pe zoubenn ar
wazed a oa gwelloc'h da labourat. Ar fourniou, war ar
mêz, a zo kouezet en o foull; n'eo ket gwellaet kalz ar
geustereñn ganeoc'h abaoe, merc'hed, met da vihana ma
karfec'h poania da aoza soubenn vat ez afe ar c'hafe war
e giz hag ho tud a vefe yac'hoc'h.

An holl a oar lakât ar pod war an tan met an holl ne
ouezont ket ober soubenn vat.

Pa vez unan klanv pe vlank en ti, neuze dreist-holl,
eo e c'hoantaer kaout soubenn skanv da rei d'ezan.

Prenit e ti ar c'higer eun tamm kig saout; ma kavit
eun tamm askourn beoc'h pe leue n'ho pezo ket a ezom
kement a gig. Seiz pe eiz eur a zo red evid ober soubenn
vat; en eur pod pri pe houarn e lakeoc'h dour; an dour

feuntcun a zo gwelloc'h ha skanfoc'h eged an dour puns; kement a litrad dour a lakeoc'h hag a lur gig pe askourn; holenn a vez laket dioc'htu goude ma vez aet ar c'hig er pod; arabad ober re a dan, pe a hent all e lec'h fuilha e zun, en dour, ar c'hig a deuo da boazat re vuan ha d'en em starda ha ne vezo ket kerkoulz ken ar zoubenn, Diéonennit ho soubenn abarz ma vervo an dour ha lakit neuze legumach, da lavaret eo teir pe beder garotezenn ha kement all a bour, eun ognonenn pe ziou, eun irvinenn pe ziou; ma vez laket re a irvin e vezo goular ar zoubenn. Kignenn ha kaol a zo mat ivez, met neuze ne vez ket koulz d'ar re glanv hag e teu buanoc'h da drenka gant ar c'haol a zo enni.

Pa vez c'hoant da ober soubenn vijel e vez laket legumach a bep seurt er pod: karotez, ognon, irvin, patatez, kaol, fa hag eur banezenn ouspenn; seul-vui e vez laket traou enni ha seul-welloc'h e vez ar zoubenn; pa vezont poaz e laker eun tamm aman pe lard er pod, hag e lezer anezi eun hanter eur all da virvi. Alia a ran ac'hanoc'h da aoza eur podad dioc'htu: soubenn ar vijel a zo divi-soc'h kalz eget soubenn ar c'hig ha gwelloc'h gwella e teu da veza dre ma vez astommet.

Evit chench e c'heller drailha eur guchenn bour gwenn hag irvin, o frita gant eun tamm amann rouzet hag o zeurel en dour bero ha sall. A-wechou all e c'helloc'h mala karotez hag ober ganto evel ma lavaran uheloc'h diwarbenn an irvin.

Ijin a-walc'h he deus eur vaouez, pa gar, evit rei traou dishenvel bep pred, ha lakaat an dud da gredi ec'h aoz ar peza gay gwella pep hini. Rak-se me garfe e c'helle ivez bihanaat plas ar c'hafe en he c'her; ar sukr a zo ker, ar c'hafe a zo ker ha n'eo ket souezus p'eo gwir e teuont eus ar broiou estren! Ma vije evet nebeutoc'h a gafe, debret nebeutoc'h a zukr, e teufe o frizioù d'an traon.

Gwelit eta pebez galloud he deus eur vaouez! Lod a lavar: Dies e kavan anzav aman ar peza em eus klevet. Mat, lod a lavar eo « dre lipouzeret ar merc'hed eo ez eduet ar c'hafe da goll ar stal, er vro! N'eo ket gwir, evelato! Leziregez ha lipouzeret! O Santez Anna, va fatronez, pebez brud o deus tapet merc'hed Breiz; en an Doue, roïf ho skoazell d'ezo ma c'hellint diarbenn an daou vank-se, pe anez, dizale, ne gavoc'h ket gwall enorus beza anvet « Mamm ar Vretoned ».

*
**

Deskomp ar re yaouank da ober pep tra *a-galon vat*; an hini a vez en despet d'ezan o labourat ne ra nemet eul labour didalvez.

Doue m'en deus laket eun dever e pep plijadur en deus laket ivez eur blijadur e pep dever.

E pep stad en deus ezomm tud da labourat *evitan*, evel ma rank an hini a c'hoanta sevel ti kaout danvez ha binviajou evit dont a-benn eus e daol.

« N'eus dever dister ebet pa vezont holl hervez ioul Doue », setu aze komzou hag a ranker sankar abred e penn ar vugale, dreist holl e penn ar merc'hed yaouank, rak evel ma m'eus lavaret c'hoaz: « mar d'eo diazezet an tiegez war bevar bost, ar vaouez a zo krog e tri », ar peza a ziniñ e c'heder diouti ma rafe al lodenn vrasa eus al labour.

An hevelep labour, a c'hell beza skuizusoc'h pe skanfoc'h, hervez an hini her gra; el levrig am eus lavaret ano anezan c'hoaz aman, em eus lennet:

Diou blac'h yaouank a oa o walc'hi dilhad er memez poull; e miz du edod; an avel-biz a yude wardro ar gwez bras hag a lakea o skourrou da blega; a-dra-zur n'oa ket re vras beza er poull, en dervez-ze!

Unan eus an diou blac'h a gane hag eben a glemme: « Te a zo brao d'it, a lavare ar glemmeret, pa n'emaout ket diouz tu an avel ha pa 'z out kalet ouz ar riou! »

— Perag n'out ket deuet em lec'h 'ta, Janig, eme eben, p'eo gwir edos da genta er poull? Evelato, ma 'z eo gwel ganez, deus breman c'hoaz, mar keres!

Ha setu ar plac'hed o chench plas, met, a-benn eur pennad Janig a zav he mouez adarre: « Ar maen-man a zo diskompez! an dilhad ne rinsont ket; da zaron te a zo gwelloc'h eget va hini-me, n'oun ket nec'het! »

— « Nann! Janig, eme ar ganerez, met c'hoant e peus da glevet ar wirionez; en despet d'it emaout o walc'hi ha me a zo a-galon vat; lorc'h a zo ennoun o sonjal oun bet gouest da ober al labour-man e lec'h va mamm, he deus an hanter re da ober er gêr! Ma karfes kana evel doun, e lec'h gouela ne gavjes ket keit an amzer! »

Janig ne zentas ket ha diouz an noz n'he doa ket gwalc'het an drederenn eus he dilhad.

Setu aze hag a ziskouez splann pegen talvoudek eo staga d'al labour a-galon vat; an diou blac'h yaouank-ze n'o doa na muioc'h na nebeutoc'h da ober an eil eged eben; ma kroge ar riou e Janig, he c'hamaradez a c'hellit kredi a zante ivez e oa kropet he daouarn ha skournet he diskoaz! Met, gant, nerz-kalon, e lavare: « Va c'horf eo servicher va spered-ha me a fell d'in e chomfe aman ken n'am bezo echu va labour; yaouank oun, va mamm a zo koz, d'in me eo labourat! » ha ne ehane ket da gana. An tenna labour hag an distera micher e teuer a-benn anezo p'en em roer d'ezo a-zevri; an hini a zo boaz da zeveni e zevel pemdeziek, gant laouenedigez, a gavo plijadur en e labour.

TINTIN ANNA.

Da bep hini e labour

Breman ez eus war-dro eun tri-ugent vloaz, edo o veva e Kerlapig, Fanch ar Roudous hag e wreg Katou Rilhen. Fanch, Doue r'e bardouno, a oa eun diskramailh a zen, ha gand an dra-ze eur marc'h-labour. Ar baourez kez Katou, gwall gaset gant he fried, a varvas goude eur c'hlenved hir, n'he devoa ket c'hoaz tregont vloaz. Tri bugel a leze war divrec'h he gwaz, tri bôtrig gwelzel.

Fanch, daoust d'ezan beza bet kriz ha re zizamant ouz e wreg, daou vloaz goude maro Katou, a zimezas adarre, en taol-man da Janton Mouren, intanvez ivez gant diou verc'hig koant evel eledigou. Janton a anaveze mat doareou Fanch, n'oa ket hep gouzout edo o vont e-serr eur glaouch, hag e vije red d'ezi mont d'ar park ken alies ha bemdez da heul he gwaz.

Eun dervez Janton a rankas chom en he gwele, n'en em gave ket war he zu. Fanch a-raok mont d'ar park diouz ar mintin a lavaras d'ezi ne c'houzanvje ket pell ganti he gwelout o chom da domma he liseriou ha da vaga c'hoenn en he gwele. « Emichans evelato goude merenn e teuot da gas ar c'hezeg d'in-me da arat, an dra-ze n'eman ket dreist ho kalloud, pe ma 'z eman ne dalvezit ket nemeur a dra war-dro eun tiegez! »

— Mont a rin, mar gallan, ha da c'hortoz, it da lavarout da Chefig an ti-all dont da ober al labour war-dro an ti, rak sur oun n'hallin ket sevel a-raok merenn, terzienn am eus ha krenienn kenan. Fanch en eur vont d'ar park, a droas e ti e amezogez, hag a gemennas d'ezi mont d'e di a-raok merenn da ober war-dro an ti, rak Janton a oa gand an derzienn ha n'halle ket sevel a-raok kreisteiz. « Penaos a rit, Janton, a c'houlennas Chefig pa voe digouezet e ti Fanch ar Roudous.

— Me, Chefig n'oun ket klanv, met c'hoant am eus da denna eun taol-chilbourdoun da Fanch, hag ober a rin. C'hoant am eus ivez da barea va fried diouz ar c'hlenved en deus. Fanch a gav d'ezan n'eus netra da ober war-dro eun ti, ha gantan, pa ne vezer ket bet er park o palat pe o varrat, ne vez graet netra 'n holl, ne vezor nemed eun dra didalvez.

— Kalz gwazed a zo henvel ouz Fanch! War o meno n'eus nemeto o labourat, o gwraez ne dalvezont ket eur penn pour. Ha koulskoude!...

— Just a-walc'h, Chefig!... Emberr, ma vez re a c'hlabous war e c'henou, me a lavaro d'ezan chom er gêr da ober al labour ha me a vezo laouen o vont en e lec'h d'ar park da ober ar pezh a zo da ober ennan.

Fanch, da unneg eur a deuas d'e yod-kerc'h, ha tenval e benn e tostaas ouz gwele e bried.

« Hag an derzienn-ze? a c'houlennas, grons.

— Torret eo warnoun, eun tamm, Fanch, met evelato n'oun ket barrek da zével, evit c'hoaz!... ha marteze e ve gwelloc'h gervel ar medisin d'in.

— Alo! Kamambre!... Aer yac'h ha netra ken da gas an derzienn-ze da vale da Venez-Are!... Medisined!... da c'hourc'hemenn d'eoc'h chom e-doug eiz dez en ho kwele da lonka sonjou! nann, nann!

An noz a deuas, ha Fanch pa ne wele ket ken a sklerijen da labourat er park, a reas e zonj da vont d'ar gêr. Al labour a oa graet gant Chefig, ar zaoud hag ar moc'h a oa koaniet, hag ar gazeg koz a oa boued en he laouer ouz he gortoz pa deuje eus ar park.

Goude m'en devoa debret Fanch e yod fritet d'ezan war eur billig lostennek, e lavaras: « Breman emoun brao ganti, pa rankan maga 'ha paea eur plac'h evid ober ho labour-c'houi Janton!... ha mar teufe d'eoc'h rankout chom pell c'hoaz en toull-ze, ne vezin ket pell evit mont d'ar bern ganeoc'h!... ha c'hoaz e livirit klask medisin d'eoc'h?... met eur rivin e ve!

— Marteze, Fanch, e c'hallin sevel warc'hoaz vintin hag ober eun draig bennak war-dro an ti. Ma c'hallankousket mat en noz-man, tan an derzienn a ziskenna, a zonjan.

— Salo e rafe avat! rak dienez am eus diouzoc'h, pa rankan rei he boued ha pemp gwenneg bemdez da Chefig evit labourat en ho lec'h!... Hag ar pezh a zo da ober war-dro an ti-man n'eo ket tenn, tra!

— Me gav d'in, Fanch e roit d'in eun ali mat, pa livirit d'in mont d'ar park da avela va fenn, ha sonjal a ran evel doc'h e tremeno buanoc'h va zerkenn en aer-yac'h eged en toull-bac'h-man.

— Petra tal... petra ta! Janton.

— Warc'hoaz vintin ar park a vezo d'in, ha labour an ti a vezo d'eoc'h. Dioustu ma savot, c'houi a c'horioi ar zaoud, o c'haso da bark ar Bugu. Ar gazeg koz a gasot da zirounna he izili da waremim Inistien. Goudeze e tamouezet hag e lakeot an toaz e gê. P'ho pezo achuet gand an dra-ze e ribotot, e lakeat ho ribot war an oaled e-tal ar regedenn, ha dioustu goude e c'hallot aoza eur podad yod evit merenn, ha ra vezo dare ganeoc'h war-dro unneg eur.

Ar wiz koz a c'hallot da lezel er-maez gand he zorrad moc'h bihan, an aer-yac'h a ra vad d'ar chatal koulez evel d'an dud, evel a ouzoc'h, Fanch.

— An dervez warc'hoaz a vezo evidomp holl eun dervez aes, rak me a vezo ebat va doare war-dro an ti, ha

c'houi ne vezo ket brevet ho korf o touara ar patatez, ha pa viot peder oc'h ober al labour-ze ec'h ententan e vezo achu ganeoc'h a-benn ho merenn, hein!

Antronoz, kerkent ha goulou-deiz, Janton a oa war-zao, pare klok pa n'oa ket bet klañv. Eur skudellad sou-benn ar brignenn a skarzas, ha yao d'ar park da zouara patatez gant teir maouez all goulennet evid an deiz-ze.

Fanch a reas e gousk mintin, rak sonjal a rae ne vije ket pell evit dibrada al labour gourc'hemennet d'ezan da ober gand e hanter-diegezh.

Evelato e savas, e lipas e skudellad, hag e-tal ar rege-denn e lakeas an tan war e vutun en eur zonzal er pezh en devoa da ober. Tapout a reas eur bodez-pri, ha yao da c'horv e ziou vioc'h. Pa voe gorret ar vioc'h ruz e tigasas al laez d'an ti, hen lakeas war an daol. Kemer a reas eur bodez all, ha trumm da c'horv ar vioc'h zu, mar gouie! Pa voe o tont eus ar c'hraou d'an ti gand e laez, e welas eul laer, eur c'hrennard o redek gant peder anduilhenn laeret! Fanch ne reas nag unan na daou; lezel a eure e bodezad leaz war ar bern teil, hag en hent war-lerc'h al laer bihan. Siouaz evitan, e amzer en devoa kollet, rak al laer n'en devoa ket gallet da dapout. Pa voe distroet d'ar gêr, e welas daou gi a-zevri o tiskampa goude beza evet al laez ha torret ar bodez-pri a oa war an teil.

Imor ennan ez eas d'an ti, da welout ar bodez all gouillo, ha Minous e-tal an tan o lipat e vourrou ken direbech ha tra!

Kollet ar c'horoadenn vintin!... ha nav-eur a oa o seni. Fanch, diaes e spered, ha piou ne vije ket, a zistagas e zaoud, ha yao ganto da bark ar Bugn! poent oa! Ar gazeg koz a oa kaset d'an daou-lamm, Fanch war gein, da waremm Inistien.

Eun dervez a walleur e ranke beza an dervez-ze evit Fanch, rak p'edo o vont da lakat an toaz e go, taolet gantan e zour klouar war ar bleud, e klevas ar yar goz er vaoz o ragachat hag o wikal en-dra c'halle! Fanch a deuas da welet Petra oa a-nevez gand e yar goz, ha strafuilhet holl oa bet o welout edo Lanig al louarn o tec'hout gant eul labous bihan a-dreuz en e c'henou ha daou all lazet gantan ha lezet e-tal ar c'harz.

Fanch neuze a gemeras eur bellenn neud, a stagas a-zibouez o divesker ar c'houec'h labous bihan a jome c'hoaz gantan ouz lost o mamm. Tapout a reas ar c'hilhog koz, hag hen staga a reas a-zibouez e c'har ouz gar mamm al laboused bihan. La! a lavaraz Fanch o sellout ouz e labour, en doare-ze ar re vihan ne dec'hint ket pell diouz an daou goz, ha mar teufe d'al louarn an hunvre da zont adarre da glask danvez friko, e kavo eiz beg d'hen taga ha d'hen disvlevi.

Ha Fanch d'an ti da welout e damoezadenn! Sed aman kempennou d'in-me avat!... Yen va dour, tri labous bihan lazet, va goroadenn e kof ar chas hag ar c'hizier! O va Doue! bremaik pa deuy Janton d'ar gêr e klevin va ano mat!... ha ne vezo ket a-raok ar poent! Fanch a 'n em lakeas war e buch da ober tan en oaled ha trumm dour er gaoter da ober toaz. Pa gave d'ezan oa tomm a-walc'h e zour, hen taolas war an hini yen en toull graet e-kreiz ar bleud. Siouaz, ma oa a-raok a-walc'h a zour da ober an toaz, e oa breman eun hanter re, ha va den, kaer en devoa meza ha diveza, ne rae nemet kaod re dano, hag e kouñnar-ruz e serras an daol. Kollet an toaz, kollet ar bara, eun arreal en e bez mat da rei d'ar moc'h! ha setu!

Deg-eur ha kart, eme Fanch, o sellout ouz an orolach! e feac'h mall eo d'in lakat an dienn er ribot ha va yod war an tan!... o va Doue! bremaik eman an dud er gêr o klask o merenn, ha tamm prest ne vezo d'ezo!

Fanch tiz warnan, a zigoras an armel goz, a daolas an diou bodezad dienn er ribot, hag ar ribot war an oaled. Trumm ha trumm pod ar yod a oa lakat war an tan lann, ha bec'h d'ar vaz-ribot ha d'ar vaz-yod o diou a-gevred.

« Va yod, pa lavaraz, a vezo dare da unneg eur, ha va ribotadenn emichans a vezo ivez, a lavare Fanch outan e-unan!

Edo Fanch a-zevri o sacha war e ziou vaz, pa glevas ar c'hilhog hag ar yar goz o karnachat er vaoz! Al louarn a ranke beza o klask e verenn! Ha va ozac'h ermaez mar gouie! An daou labous koz strafuilhet gant Lanig al Louarn, a oa nijet war-gorre ar c'hraou-kezeg, hag evel just, p'e gwir oant stag an eil ouz egile, ar c'houec'h labous bihan a oa aet da heul, setu ma c'a eur muzik kaer war lein ar c'hraou, Fanch a 'n em lakas d'o dichoual, da deurel tammou mouded warno, ha setu va laboused war ar c'hardi, nijet diwar ar marchosi.

Fanch ne gavas netra gwelloc'h da ober eget mont war o lerc'h, ha setu ar yer diwar ar c'hardi e park al leur. Fanch a redas war o lerc'h da glask o zapout hag o digas gantan d'an ti, pell diouz skilfou al louarn. Siouaz berr oa bet, ha pa erruas en ti e kavas e yod pilet en tan hag e ribot a-stok e gorf war leur an ti, ar wiz koz hag an eiz pemoc'h bihan a oa a-zevri o lipat o mourrou diwar ar yod ha diwar an dienn ha n'oa ket bet dare d'ezo tec'hout evit gwelout Fanch o tont en ti, ha ne hoc'hent ket nebeutoc'h evit-se! Fanch gand ar gounnar-ruz a oa ennan, a dapas krog er vaz ribot, a zistagas eur mestaol gand ar wiz koz diwar he fri ken he ledas war ar plas! Fanch o welout Petra en devoa graet a astennas e bevar ibil war ar bank e-tal e

wele, hag a zirollas da ouela. Eur c'hart-eur goude. Chanton hag an teir maouez all naon-du d'ezo, a oa deuet da glask o merenn.

« Petra zo digouezet ganeoc'h ta, Fanch?... e pe lec'h eman ar yod? Petra zo c'hoarvezet gand ar wiz koz? »

— Ah!... Chanton, va Chanton gez, roit peoc'h d'in, n'am gourdrouzit ket en ano Doue, rak keuz am eus! Aman ez eus aet peder anduilhenn gand al laer abaoe ar mintin-man! An diou bodez a zo torret, al laez aet e kof ar c'hizier hag ar chas. Aet al laboused gand al louarn, ar yod pilet en tan hag ar ribotadenn findaonet d'an douar gand ar moc'h deuet en ti keit ha ma oan o klask savetei va yer diouz skilfou al louarn daonet a zo bet er mintin-man war-dro aze.

— Hag an toaz, lakaet eo e gô?

— Ya, ya! lakaet eo e gô... met moarvat!... hum!

— Heum petra!... mec'hiok paour!... dec'h da noz edoc'h o lavarout gant ho kenou glapez e vijech aet buan d'ar bern ganen-me, ma vijen chomet re bell em gwele gand an derzienn, ha padal me eo a vezo kaset war an teil ganeoc'h c'houi, mar kendalc'hit da c'houlenn chom da ober labour ar gêr.

— Ne rin ket!... ne rin ket!... va Jantonig kez!... me a zo dizonet en eun taol diouz labour an ti, ha breman ewelan sklêr talvoudegez lagad eur vaouez war-dro eun ti, hag hiviziken labour ar parkeier a gavin skanv!

— Labour vat hoc'h eus graet, hag evid an dro genta n'eo ket fall! lazet ar pemoc'h, skuilhet ar ribotadenn, tamm da verenn ganeoc'h, va yer e kof al louarn, va laez en teil ha va anduilh lipet! Hop a la!

— N'am gourdrouzit ket muioc'h, Chanton, rak breman c'houzon ez eo red da bep hini chom da ober al labour na oar da ober, ar gwazed er parkeier hag ar merc'hed war-dro hag e diabarz an ti.

LOEIZ AR FLOC'H.

Goude JENOVEFA A VRABAN a blijas kement d'eoc'h, lennit breman


Roue al Laz

Kaera marvailh a zo bet savet biskoaz, war amzer an Dispac'h.


Ar pennad kenta anezan a voulomp er miz-man.

MARVONIG KERYELL (1)

Buanik (♩ = 100)



E Keryell 'z eus eur plac'hig, Mar - vo - nig, va dou - sig E



Keryell 'z eus eur plac'hig, a gar va c'ha-lo nig, a gar va c'ha-lo nig.

E Keryell 'z eus eur plac'hig,
A gar va c'halonig.

Kaer eo 'vel an heol pa bar,
En hanv, war an douar.

Breskoc'h eo eged ar roz
Glebiet gant ar gliz-noz.

He c'horf ker mistr ha ker moan,
Vel al lili 'zo glan.

Bihan ha skanv eo he zroad
Lemm ha glas he lagad.

He bleo 'zo hir ha melen,
Hag he c'halon laouen.

He sell a zo birvidik
He c'han, hini 'n eostig.

He diouchod a zo ruz-wenn
Henvel ouz diou rozenn.

He dent 'zo vel diou renkad
Danigou gwenn 'n eur prad.

Gant he halan 'z eus c'houez vat
Vel gant spern-gwenn ar c'hoad.

Braoa ma vez da welet,
Da zul en ofern-bred.

Koef dantelez war he fenn,
Kroaz aour en he c'herc'henn.

En holl barrezioù tro-dro,
N'eus ket eun all er vro.

Ker koant, ker fur ha Monig,
Marvonig, va dousig.

Emaoun krog em ugent vloaz,
Soudard e vin warc'hoaz.

Oh! ra blijo gant Doue,
Va diouall en arme.

Ma tizroin ker seder,
Ha m'oun breman d'ar gêr.

Ar Person hor badezas
Hor skoulmo neuze c'hoaz.

Dirag aoter hor parrez,
Dindan sell ar Werc'hez.

Hag e chomimp unanet
Keit ha ma vimp er bed.

(1) Ar zon-man eo hini Yvona Gerizel, savet gant F.-M. an Uhel, nemet eo krennet ha kempennet eun tammig, evit ma vezo gallet he c'hana war uan eus an foniou kaera dastumet gant an A.-M. Duhamel en e levr dispar *Kanaouennou Breiz-Izel*.



Jakez Queindec (1755-1817)

Etre Penze ha mogerioù hanter gouezet kastell koz Penhoat, war eur grec'henn a zav he fenn, en tu kleiz, a-zioc'h ar ster kamm digamm a red a-dreuz ar foenneier, evel eur zeizenn arc'hantel, maner Kervorvan a ziskouez c'hoaz e vogerioù kinviet hag e liorzou mat da rei frouez gwechall ha n'eus nemed ed enno breman. Daoust ma 'z eus staget eun douribell goat outan n'eo mui netra eskoaz m'eo bet gwechall. Eur maner kaer a oa anezan p'edo aotronez Boïseon (a weler o skoued war groaz ruz ar c'hroaz-hent tosta) hag ar Bourdonnaye o chom ennan: eun tiegez diwar ar mêz n'oa ken pa varvas ennan, d'ar 26 a viz cost 1817, Jakez Queindec, unan eus ar gannaded a oa bet kaset gant ar « Finister » da labourat war draou ar vro, e Gampr a anvet neuze « Convention nationale ».

Eun nebeut bloaveziou arañk ar brezel ez eus bet moulet eun foulladig liziri bet skrivet gantan hag e

weler dreizo pegement a drubuilh a gouezas, epad amzer an Dispac'h, war gein an den kêz-ze a voe dare d'ezan bezan dibennet, gant ar bourreo Samson, evid an torfed en doa graet o chom hep voti maro ar roue Loeiz XVI.

Jakez Queindec a voe ganet e Kerbolot; e Gwimiliau, d'an 23 a viz meurz 1755: An Aotrou Yvon ar Bras, person Berhet, e eskopti Treger, a oa e haeron hag a lakeas anezan da ober e studi e skolach Landreger. Er bloaz 1779, d'e bevar bloaz war n'ugent e timezas da Louisa Madec, eus a Blouncour-Menez hag ez aes da jom di; eno edo pa voe dibabet gant e genvroiz da vont, en o ano da Bariz, er bloaz 1792, rak neuze, ar Vretoned a oa ken dall ma oant deuet da gredi ne c'hellet ket dibuna ervat kudennou Breiz nemet kaset e vijent da Bariz; abaoe e oar deuet da welet ar fazi bras a reas hon tadou, met an fraou, ma vezont troet dillo war an tu eneb, a ranker lakat poan hag amzer d'o zrei, a-nevez, war an tu mat.

Eun nebeut sizuniou goude, pa voe graet prosez ar roue, gant ar re hag a oa war eun dro, hervez ger brudet De Sèze, e damallerien hag e varnerien, Queindec, evid e ziframma eus a dre daouarn e enebourien touet, a c'houlennas, evel kannaded all kostezenn wella ar Gampr, ma vije graet d'ezan mont er maez eus ar vro; en doare-ze da vihana, ar Frans he divije eun torfed euzus nebeutoc'h war he c'halon.

Azalek an deiz-ze, bleizi ar Gampr a gemeras al leonad evid eun enebour, ha d'an 9 a viz here 1793 pa c'houlennas Amar prizonia 73 eus deputeed ar gostezenn vat e lakeas ano Jakez Queindec war ar roll, gant unan eus ar re genta. Kerkent, — rag an norioù a oa diouallet gant soudarded, — an deputeed anvet a voe tapet peg enno ha laket en eur c'hloz da c'hortoz ma lavarje Robespierre, — a oa neuze oc'h ober e vestr e Pariz, — petra da ober outo; c'houec'h eur diouz an noz e c'helle beza ha n'o doa bet tamm ebet c'hoaz d'o merenn; daoust peger strafuilhet e oant e kemerjont ar pezh a zigasjot d'ezo; en-dre m'edo o fibri e goan, ar C'heinnec a glevas eur vaouez, a oa o sellot outan a-dreuz kloued houarn e brenestr, o lavaret d'he amezogez: « Tiens! ces j. f. de conspirateurs, c'est qu'ils mangent bien! ».

Da eun eur goude antronoz, goude beza chomet eno epad an holl amzer, en o sav, dre ma ne oa na plas, na netra da azeza, e voent kaset d'an ti-kêr, peder renkennad archerien war loan ha soudarded gant fuzulioù o kilha anezo; goulou, douget aman hag a-hont, a sklerijenne an hent hag ar boñ a gerze da heul en eur youc'hal ma oa skrijus he c'hlevet. Digouezet en ti kêr, e voe lammet diganto o mantelloù hag o c'hartennou a

zeputeed hag e voent kraouiet en eur zolier goloet a blastr, el lec'h ma oa 60 bennak all en o raok. Eun noz-vez wenn a dremenjont; antronoz e voe roet, da bep hini anezo, eur gwennegad bara hag eun hanter vou-tailhad win fall ha goude beza o c'haset, pep hini d'ar gampr en devoa e ker, evit gwelet lakat ar siell war o faperiou, e voent kaset d'ar prizon anvet La Force, ha klozet eno en eun ti nevez savet d'al laeron ha d'ar vuntrerien. Red e voe d'ezo pignat d'ar pevare estach hag en em renka eno 80, gwella ma c'hellent; ar re a c'hellas tapa golo'hejou a ledas anezo, war ar zolier, hag a c'hourvezas warnezo; ar re all a rankas gourvez war ar c'halet, pe jom en o sav; ar C'heinnec a oa eus ar re-ze; d'ar pempvet dervez goude ma oant en em gavet eno e c'hellas kaout eun tamm gwele distrantall da lakaat dindannan. Wardro dek eur, ar re a oa kar-get d'o diouall a deuas, hanter-vezo, chas drouk ouz o heul, da c'hervel ar brizonierien, ha goude beza gwelet ne vanke hini ec'h en em dennjont en eur alc'houezh an nor gant eun trouz bras.


Antronoz vintin, ar brizonierien a rankas diskenn ha mont dindan eun disc'hlavenn enk ha tenval, mogerious uhel en dro d'ezi, goloet a holenn-moger hag a ginvi. Aer ar porz-ze a oa kontammet gant ar flaer o tont eus ar privezou, a oa en eur c'horn, hag a oa ker pounner ma teue an dour gantan en daoulagad. En toull lous-ze, ha war an douar pe ar vein da daol, eo e rankas an deputeed dibri o fred. E c'hellit kredi, ne oant ket heb-enkrez; anaout mat a raent o enebourien ha gouzout a raent ne c'hellet gedal diouto na truez, na lealded, rak gwasoc'h e oant eget loened gouez. En o solier, e kichen an nor, e oa eur bailh da ober ennan o ezom-mou hag a oa eun donjer evito e gaout en o c'hichen; diouz ma veze serr pe zigor ar prenestr a oa a-zioc'h o fenn e vezent devet gant ar c'hor pe zuilhet gant ar riou.

Eun nebeut deziou goudeze, dre ma kreske atao niver ar brizonierien, e voe ranket lakat 14 da ziskenn, — ar C'heinnec a oa unan anezo, — en eun toull keo el lec'h ma oa daou zen ha daou gi d'o diouall; eur gloued-houarn a oa o stanka ar c'heo ha setu ma oant eno evel en eur gaoued a 8 metr hed war 5 metr lec'hed. Evid chom eno e rankent paea 15 lur er miz, dre benn, rak mistri an Dispac'h ne brizonient ket an dud evit bennoz Doue. Unan eus an deputeed keiz, Doublot, eul labourer-douar eus an Normandi, a grogas eun derzienn vras ennan; epad teir zizun e voe dalc'het eno da verzeria; medesin ebet ne voe digaset d'ezan ha tamm louzou ebet ne voe roet d'ezan.

Pa voe war e dremenvan e voe douget d'ar c'hlanvdi

el lec'h ma varvas en eur ziwaska poaniou skrijus hag en eur youc'hal: « Pez fall a Robespierre ma 'z out; te eo a laz ac'hanoun! »

Tra nemet ken nemet klevet ano eus ar c'hlanvdi-ze a lakea ar brizonierien da skrija; ar medesin a oa ennan, n'en doa ken louzou da rei d'an holl nemed eur banne tizan; e glanvourien a veze gantan war c'holl-c'hejou donjerus; ar C'heinnec a welas eno unan maro hag unan gwall glanv gourvezet o daou er memez gwele; eur mevel a deuas, kemeret a reas an hini a oa war e dremenvan, dre e dreid, evid e jacha diwar e wele hag evel ma enebe: « Sell 'ta, emezan, n'eo ket te eo an hini maro; perak ne peus ket komzet kentoc'h? »



Kouent Karmez e Pariz

En aner eo e skrive an deputeed, klanfoc'h holl an eil eged egile, da c'houlenn beza kaset da eun ti all bennak da barea; renerien an Dispac'h ne veze ket dare d'ezo lakat o zreid er prizon, kement a c'houez fall a oa ennan; dont a raent hepken war an treujou hag eno, en eur voustra war o fri e raent goap eus ar brizonierien hag evit o sponta e lavarent anodirazo eus an aotenn vras « le rasoir national » edod o paouez dibenna ganti, d'an 31 a viz here 1793, 23 depute a oa e penn kostezenn ar Jirondined.

Eun dervez, Wietrich, eur c'here Alaman, unan eus pennou brasa dispac'herien Pariz, a deuas d'o gwelet; ar brizonierien a glemmas dirazan dre ma n'o devoa ket a zavon da ober o baro: « Oh! mat, emezan, dizale e vo desket d'eoc'h diskar ho paro hep dour! » hag e

tec'has, goude beza lammet digant unan eus ar brizonierien eun houarn da rodella ar bleo.

D'ar 7 a viz kerzu e voent kaset da brizon « La Dette ». Eno e oa bravoc'hik beza; ar c'hampreier a oa kaer ha leir renkennad wez tilh a roe disheol da eur porz bras; ar prejou ne vezent ket re fall ken nebeut hag evel ma pedent ar re a veze ouz o diouall da vont ouz taol ganto, ar re-man a veze aecoc'h a-ze kaout affer outo. Digas a raent d'ezo kazetennou an Dispac'h hag ouz o lenn e welent ne wellae tamm ebet an traou da vont en dro. En eur gazetenn anvet ar « Père Duchêne », Hebert, an den gouez, a skriva e oa mall ober d'ar brizonierien ar pezh a oa bet graet d'ar Jirondined: « Keit ha ma chomo beo ar brizonierien-ze, emezan, mignoned wella ar bobl, **les sans-culottes**, n'o do ket a vara da zibri ! »

Eleiz a c'houlenne ma vije digoret raktal o frosez ; Henriot, jeneral bras soudarded Pariz, a glaske lakat ar bobl da nevezi an torfejou he doa graet e miz gwengolo diveza en eur lavaret dezi, feuler evez, gant a raje, war ar prizoniou, rag « cno, emezan, eman hor brasa enebourien ! »

Epad daou viz, ar brizonierien a veze atao war c'hed eus o maro; koulskoude, evit evit kaout berroc'h o amzer, ec'h en em lakent da c'hoari 'r peziou, gant tam-mou maen-sklent; er c'hampreier, pa veze glao e raet c'hoariou all, pe ec'h en em laket da zevl gwerziou. Evid en em voaza diouz ar c'hilhotin, ec'h en em astennet war eun daol a veze laket eur penn anezi da winta.

An urziou warno a deuas da strisaat, setu ma feujont da gredi ez ae falloc'h falla an traou evito; ar re a oa ouz o diouall ne dennent lagad ebet diwarno ken ; c'houllia a raet e pep lec'h; ne veze lezet gwenneg ebet gant den. Eur pennad, Fleury, depute ar « C'hôtes-du-Nord », a c'hellas savetei arc'hant an holl ouz e guzat a-dre kein eur mellezour etre ar gwer hag ar c'hoat ; met d'ar 6 a viz mezeven 1794, eun enklask piz a voe graet hag ar guzadenn dizoloet.

Eun nozvez, eun evesaer a deu, gant eun toullad soudarded, da Jemmel digant ar brizonierien, o c'hontelli hag o aotennou; difennet e voe outo lakat digas o boued eus an diavéz; servichet e rankent beza evel ar brizonierien all, eur pred bemdez, eun hanter voutailhad win, 30 gramm kig gant eur guc'henn legumach hanter vrein; daoust pegen difigus den e oa ar C'heinneg, n'oa ket evid e voued hag epad ma chomas eno e rankas tremen gant bara sec'h; ne veze ket roet eur seurt, zoken eur banne lèz, na d'ar re goz, na d'ar re glanv.

Daoust da-ze, mistri an Dispac'h a gawe e raet re

wrao c'hoaz d'an deputeed; d'an 19 a viz gouere e voe kemennet d'ezo e vijent kaset, antronoz da brizon ar « Madelonnettes » unan eus prizoniou lousa Pariz.

Eno, pa ne roet netra d'ezo da zibri, e fiskennjont er porz da lounka avel; ar porz-ze en doa 23 metr war 17 ha ne oa ken porz nemelan da 316 prizonier; pa deuas an noz e renkjont en em astenn war an dereziou, etouez al loustoni; meur a nozvez a rankjont da dremen evel-se da c'hortoz ober plas d'ezo en eun tu bennak all.

Er prizon-ze, an deputeed a veze graet gwasa ma c'helled d'ezo; laket e oant cno, er memez renk, gant al laeron hag an dorfetourien; ne c'helled lakat digas netra eus an diavéz; dibri a ranked er memez plad gant tud hag o devoa klenvejou spegus; ne c'helled skriva d'ar gêr nemed evit goulenn dilhad; ar pezh a skrived a hent all a veze roget pe ziverket.


D'an 22 a viz gouere er fin, daou eus pennou bras an Dispac'h, Amar ha Vouland, a deuas da welet ar brizonierien; daou zen kriz ha digalon e oant ha daoust da ze e teuas an daelou en o daoulagad o welet e pe stad trist e oa laket an deputeed hag e rojont urz d'o c'has d'eur prizon all el lec'h ma vije bravoc'hik o doare.

Antronoz, e gwirionez, ar brizonierien a voe kaset da gouent menee'h saoz Sant-Beneat, e kichen ar Val-de-Grâce; eus ar zolier uhel, el lec'h ma voe graet d'ezo pignaf, e welet ar mêziou a-bell hag ar gwel-ze, goude ifern ar « Madelonnettes », a roas da Jakez Queinnec kas e spered warzu traoniennou glas Gwimiliau ha Plouneour. Eul liorz bras, disheol ennan a oa a-dre kein an ti; en eur baradoz eo e oa kouezet ar brizonierien goude ar pezh o doa gouzanvet edoug ar miziou tremen; ar brizonierien all, Saozon, an darn vrasa anezo, a oa mat outo; kement a drubuilhou a oa kouezet betek neuze war o diskoaz, ma feuent, o welet ar pezh a zigoueze, da gemeret fizians; met n'oant ket en em gavel c'hoaz war lein o c'halvar.

D'ar 27 a viz gouere, goude kreisteiz, e voe gwelet o tont d'ar prizon, eun toullad soudarded a en em lakeas da ober tro ar c'hampreier, o c'hleze noaz ganto en o dourn; da eiz eur diouz an noz ar brizonierien a voe graet d'ezo mont d'o gweleou ha lezel alc'houez e c'hampreier en nor; kredi a raent edo o eur ziveza warnez seni; hini anezo ne zerras eul lagad, nemet ar C'hôrbel en doa prenet, evid en em laouennaat, eul litrad kog-nag hag en doa evet anezan en e bez; astennet war e wele, e roc'has epad an noz; ar re all a lakea o skouarn en noriou pe er prenecher da zelaou an trouz a deue eus an diavéz.

Da 10 eur, kloc'h an tan-gwall a zonas e touriou ilizou ker; an taboulinou hag an trompillou a glevet o

lakat ar ruiou da dregerni; hep mar ebet, nozvez ziveza ar brizonierien a oa digouezet; klevet a reont eun ofiser, e liorz ar prison, o lavaret d'ar zoudarded karga o armou ha beza prest: « D'an taol hag arabad e c'hellfe eun unan tec'het rak n'int nemet truilhou! »



Robespierre hag e genseurted laket d'ar maro

Eun nozvez skrijus e voe an nozvez-ze evid ar brizonierien, a c'hellit kredi; trouz ar c'hanoliou; strap an drompilh, tourni an taboulinou, son ar c'hleier, youc'h ar bobl, pep tra a lavare d'ezo edod o vont da goueza warno. En em voda a rejont ha toui a rejont ec'h en em zifennjent eus o gwella, ouz ar re a deue d'o lakat d'ar maro. Antronoz a zonas ha den ne deuas; kloc'h an tan-gwall, koulskoude, a zone atao ha youc'h an dud, er ruiou, a glevet hepred. Da bemp eur ar brizonierien a welas e oa aet ar zoudarded kuit ha ne jome war o zro, nemed o diuallerien. Wardro 10 eur e klevont eur gwerzer kazetennou o youc'h al: « Diskaret eo Robespierre hag e genseurted! »

An nevezenti-ze a zouezas anezo kement ma o devoa poan ouz her c'hredi, met, goude kresteiz, e weljont war ar ru, gwreg ar Mercier, unan anezo, o ficha eur skour glaz, evit rei fizians d'ezo; d'an 29 a viz gouere, unan bennak eus eun ti, e kichen o frizon, a zispakas dirazo eur gazetenn e c'helled lenn warni e lizerennou bras: **Barnedigez ha maro Robespierre, Couthon, Saint-**

... hag all. Neuze eme ar C'heinnec eur dant
 ... a baras war iron tal, o welet ewel e ar
 ... an droug, o weletomp da gredi e ar
 ... a-baz spell, lazet da vale en hor frankiz ha da
 ... nevez ar garg fiziet ennoomp gant ar bobl
 ... no devoa ket a adun ken da goll o buhez
 ... e kel d'fin c'hoaz d'o fannou. Kaset e
 ... Hotel des Fermes, eno e c'helljont di
 ... camp drouz o giz, lakat digas o boued diezo
 ... ha gwelet zoken unan bennak eus o im
 ... pennad goude e voent kaset ar hano adar
 ... pemp ti, er fin ar C'heinnec a en em
 ... gant daou genseur, dezan eus ar Finister, Blad
 ... ha meun sa hini all e koret karnoz, er
 ... z'ez o muz gwengol a rack eo e oa bet ameze
 ... bras a velerien gant an Dispac'herien
 ... c'hoaz o gwad secl'war ar mogerion
 ... ankas an Deputeed, brizonnet eun bodenn
 ... ane ar vro d'ofidi da gaout brez
 ... dezio pellorh o eneo, a Bloaz a zo
 ... her er prisonou 60 kannad he
 ... ma paer diezo gouzant eun
 ... e hieze atao o lugerha z'ach
 ... a haon a raet d'omp palneton eus gnel
 ...
 ... a voe salaouet ha d'ar 26 a viz here
 ... genseurted a voe lazet da vale e
 ... prison o devoa bract. Ne voent koulsgoude
 ... eun o'chang, nemet o honoc'h sizun goude, d'an
 ... daoust ma klaske ar Jakobined
 ... e c'helljont mont adarre d'ar Gamp
 ... war an treujou, o mignoned
 ... d'ezet p'oa dleet dezio dent war o
 ... sav, en o enor, en dre ma
 ... an nebud kenseurted en devoa
 ... Robespierre. Eun digemer e voe hennez ha
 ... an kuzul ar Pemp Kant, Pa
 ... an lakas adarre da labourat
 ... hag e welas neize e oa eun
 ... e Breiz
 ... eun palc' salaouet e
 ... gouez eged ouz tud
 ... Penze, e
 ... 1817, e enebourien
 ... bras epad ma oa
 ... he lezas ket kalz a bea
 ... Yann-Louis Ouerme
 ... general ha barnor ar
 ... a lez bras, en e 86
 ...

E vab-bihan, Fransez, Queinnec, m'et koz Gwielan, a vire c'hoaz er bloaz 1910, e zilh'ad deputé gant ar boned youlouz; e baperiou a zo atao etre daouarn e ni, Bernard Queinnec, eus a Sant-Thegonnec.

G. P.

ER JAPON

Eun amiral o tifenn ar relijion gatolik

Ar Japon n'eo ket eur vro gristen. Kristenien a zo enni, ha kristenien vat, met an darn vrasa eus an dud o deus fals-kredennou. Sant Fransez Xavier gwechall a brezegas eno an Aviel hag a c'hounezas eun niver bras a dud d'ar feiz. Dont a reas da c'houde, siouaz! eur brezel bras ha kriz war ar gristenien; eur c'halz anezo a vez laket d'ar maro, ha Merzerien ar Japon o deus kresket niver Merzerien an iliz.

Epad daou c'hant vloaz eo bet evel maro ar relijion gristen er Japon. Er c'hantved diveza ez eus bet aet di, a-nevez, misionerien da brezeg an Aviel. Kavet o deus bugale vihan d'ar gristenien, d'ar verzerien a-wechall, hag a anaveze kalz traou diwarbenn relijion Jezuz-Krist, diwarbenn ar Werc'hez Vari, ar veleien. Aes e voe o gounit d'ar feiz, hag hirio ez eus kalz kristenien er Japon. Er gear-benn, Tokio, ez eus eur skol vras, hanvet *Stere-denn ar Mintin*, gouarnet gant Relijiuzed eus Frans, hag a zo enni pemzek kant bennak a vugale hag a dud yaouank.

Eur c'halz eus ar re a zo bet er skol-ze a zo kristenien vat hag a zo savet e kargou uhela ar vro.

Er bloaz 1916 o deus grêt e Tokio eun Unvaniez yaouankiz kristen a zo enni hirio pemp kant c'houezek den yaouank, Poania a reont da startat en o eneo ar feiz kristen ha da c'hounit o c'henvroiz da relijion Jezuz-Krist. O rener eo an amiral Yamamoto a zo bet meur a vloaz e Frans hag en deus laket e hano e Trede Urz sant Fransez.

Entanet e galon gant an youl en deus da c'hounit e vreudeur payan da Jezuz-Krist, e skriv en eur gelaouenn vizek, *Tokio-Seinen-Koi*, a vez enni bep tro 96 pajenn hag a zo gret evid ar bayaned desket, evit sklerijenna o spered. Ouspenn-ze, abaoe daou vloaz, ez eus eur gelaouenn all, bep pemzek dervez, evid ar gristenien.

N'eo ket skriva hepken a ra an amiral, met ato eman war evez evit difenn e pep giz e relijion pa vez taget gant ar bayaned.

N'eus ket pell beleien fals-relijion Boudha, ar bonzed, ha em vodas 700 anezo d'en em glemm o veza ma kase ar Japon eur c'hannad d'ar Pab a Roum; « ar pezh, emeze, a oa eun dra risklus evit relijion o zadou koz ».

Evit respount d'an heskinerez-ze, an amiral a gasas d'ar ministr eur c'hatekiz katolik, henvel ouz ar c'hatekiz a vez laket etre daouarn ar vugale en hor bro. Diskouez a reas d'ezan ar gentel a gomz eus deveriou ar gristenien e kenver ar re a c'houarn ar vro. Hag ar ministr, souezet, a ziskouezas d'e dro ar c'hatekiz da Gambr an Deputeed, hag a veulas kalz kelennadurez ar gristenien, kelennadurez uhel ha fur meurbet ha gouest da zalc'her an urz vat er vro.


O lenn an dra-ze, penaos ne zeufe ket hor spered da zonzal er pezh a dremen e bro Frans? Gwelet a reomp ar c'houarnamant oc'h en em harpa war ar zosialisted, ar gomunisted zoken, potred ar freuz, an drailh, ne gomzont nemet eus ranna an danvez, kregi e madou ar re all. Mignoned int d'ar c'houarnamant evelato, o veza m'int enebourien d'an-Iliz.

Met ar re a zo kristenien vat n'o deus da c'hedal nemet brezel, fallagriez, dislealded. Mat da baea an failhou, mat da veza touzet, setu stad ar gristenien e bro ar frama-soned.

Ha goulskoude e c'hellont lavaret ive da vinistred o bro: « Lennit ha gwelit. Setu aze ar c'hatekiz a vez laket etre daouarn ar vugale en iliz hag er skoliou kristen. Kement a zo mat ha santel a zo gourc'hemennet gant ar c'hatekiz. Kement a zo fall a zo difennet. Ar vugale a zalc'ho mat d'ar gelennadurez-ze a garo ar peoc'h, an urz vat, a vo divezatoc'h tud fur, a labouro, ne glaskint trabaz ouz den, a vo enor ha nerz ar vro ».

Tenna ar c'hatekiz eus daouarn ar vugale evit rei en e lec'h levriou a gomzo euz pep tra nemet eus Doue, a zo beza diskiant. Hag an dra-man a zo skler evit kement hini en deus daoulagad da welet.

J. U.





ROUE AL LAZ

Danevell pe « roman » eus amzer an Dispac'h

Evit heuilh penn-da-benn an danevell nevez-man, eo red anaout an hini a voe moulet gwechall gant Kroaz ar Vretoned, Kloareg Kersôzon.
Setu aman, berr ha berr, « Kloareg Kersôzon ».

D'ar 27 a viz meurs 1793, ez eo barnet gant lezvarn Lanuon Kloareg Kersôzon, eus maner Kersôzon, bet paket gant ar Re C'hlas. E vreur-mager, Kevareg e ano, en deus touet e tennje ar c'hloareg a-dre daouarn an dispac'herien.

Eman eno, gant kamaraded deut da welet ar varnedigez. P'eo digaset e vreur ermêz, e kav an dro da gemeret kezeg an archerien ha da dec'hout kuit gantan 'trezek eur c'hoad du-ze, warzu Ploubêr.

Eno ez eus eun toull kuz, Toull-an-Houc'h, hag eo red anaout pelec'h eman 'benn e gaout. Di e c'hellont en em jachan arôk an dispac'herien.

Met a-vec'h int diskennet en toull, eur c'hemener, — enebour de Gevareg dre ma karont ar memez plac'h o-daou, — hag a oa kuzet demdost eno, a zav evit diskuliaz anezo d'an archerien a zo er c'hoad o furchal. Mont a fell d'ezan, koulskoude, da welet Janig, he zousig, da gontan, d'ezi an doareou. Eno eman, pa zigouez Kevareg en ti, d'e dro, nemet e rank tec'het kerkent, rak an archeriere a zo war e zeuliou, hervez m'eo bet digemennet d'ezan gant eur c'hanfard. Setu m'eo Julig ar c'hemener eo a zo kavet en ti ha paket gant an archerien o deus disfizians anezan. Eman o vont ganto, liamm et zaouarn, pa zigouez war o hent Kevareg chomet da c'hedal betek gouzout petra o'hoarvesfe.

O welet stad truezus ar c'hemener, Kevareg gant ar nerz spontus en deus, a ra diouz tennan anezan a-dre daouarn an daou C'hlas. Et Julig d'ar gêr, Kevareg a zizro

da Doull-an-Houc'h hag eo divizet e vo kerc'het, en deiz warlerc'h. Janig hag he c'hoar rak ar Re C'hlas o deus desket an hent d'o zi hag a grogo warnezo hep mar ebet.

E Toull-an-Houc'h, Kloareg Kersôzon en deus distunet amou, plom, boultij, poultr, boed hag all. E Kastell Kersôzon ne chom, koulz lavaret, petra. E Toull-an-Houc'h, eman breman ar c'hastell krenn, koufrou zo ennan leun a listri aour hag arc'hant, holl vadou Kersôzon, gwestlet da adc'hounit he frankiz da Vreiz. — kentoc'h eget o lezel da vont gant an dispac'her gall. E kalon eur skeudenn dero koz, skeudenn sant Gweltas, eman kuzet alc'houezion ar c'houfrou a vir tenzor ar Vretoned.

A-vec'h en deus disklêriet kement-ze da zaou eus e vignoned, e keit ma 'man ar re all kousket, ma tired an hini a oa er c'hoad oc'h ober gward: An tan! emezan, an tan! ... An tan a flamin war lein tour uhelan kastell Kersôzon, seblant ez eus bec'h war an dud a zo chomet ennan. Hogen, c'hoar ar C'hloareg a zo unan anezo...

Piou a oa kiriek ma oa et ar Re C'hlas da glask kemer ar c'hastell? Ar c'hemener, aliêt gant e vamm, a oa bet et da Lanuon da gerc'hat ar zoudard hag en doa digaset anezo betek toull ar maner. Ar bôtred a oa e diabarz a oa war evez ha, pa zigorjont an nor d'ar Re C'hlas, leusket chas warnezo eo a rejont. Sevel a reas eun emgann spontus. Unan eus ar mevelien a c'houezas neuze an tan er c'heuneud war dour kastell Kersôzon, hervez ma oa bet divizet, da c'hervel sikour. Kevareg hag e bôtred o tiredek buana ma c'hellont a gav ar c'hemener o tont endro hag a zigas anezan ganto. Ar gann ne bad ket pell ken; an trec'h a zo da Gevareg. Nemet pa voe klasket Julig da vont da c'houzout ha gallet he doa an dimezell Kersôzon kemer an tec'h, den n'en doa gwelet roud anezan. Skampet e oa adarre ha lezet ar re all d'en em jachan. E zonz a oa mont da di Janig ha mont a reas, Ti-Janig, avat, a oa goullo; tremenet e oa ar Re C'hlas dre eno: Ar c'hemener, glac'haret bras, a glaskas he roudou hag e kavas war eur c'hleun eur bakadenn hag e oa enni dlhad plac'h: ar Re C'hlas o doa laket Janig en zoudard, kuit d'ezi da vezan anavezet! Ha Julig adarre warlerc'h, ar bakadenn dindan e vrec'h. Met n'eo ket gant ar Re C'hlas eo en em gavas; gant bandenn Kevareg an hini voe; ar re-man a oa o tizrei da Doull-an-Houc'h. Julig en em zilas en eur parkad balan hag eno, na petra 'ta! e wiskas dlhad Janig, en aoun ne vije anavezet gant pôtrred Kevareg hag en doa digarez a-walc'h da dec'het dirazo. D'an daou bôtred deut war he lerc'h e respontas eta an « hini goz » he doa gwelet Julig ar c'hemener o tec'hout ebioù, dre ar parkad balan. 'N em jachet en doa c'hoaz eur wech. Hag heñ da zerc'het gant e hent hag o kouezan hepdale war ar Re C'hlas bodet en harz eur c'hleun da zibri eun tamm. Eur zoudard yaouank a oa ganto ha ne zebre ket:

Janig e oa hennez. Adalek neuze, ar c'hemener gwisket e plac'h hag e zilhac'e unan paket dindan e vrec'h a zal- c'has a-ziabell gant roudou ar zoudarded.

Eun dro bennak e rejont adarre eur poz. A-boan ma oant chomet a-zav, ma 'n em gavas Kevareg warno, Kevareg bet ive o klask Janig en he zi.

Julig a gavas e oa deut adarre ar c'houlz da dec'het kuit. Gwelet e voe avat, ha gant e zilhac' plac'h, Kevareg a gemeras anezan evit Janig. Ha da redek war e lerc'h a dreuz d'ar c'hoad...

Dont reas, da vihanan, an tól da vat, ha Janig a voe diframmet digant ar zoudarded. Kevareg a ya neuze da Doull-an-Houc'h hag ac'hano da Gersôzon da glask kelou eus an dimezel. Tec'het e oa gant eur mevel, dre eun nor guz, da vont da Roz-an-Ivinenn, da di eur mêrer, nemet abaoe ne oa bet kelou ebet. Ar c'hemener en devoa diskuliet d'ar zoudarded an nor guz!...

Setu hon tud 'trezek Roz-an-Ivinenn, Arru demdost, ar c'hloareg a ya da glevet an doare, o lezel e vignoned kuzet en eur park. Ne oa ket et a-bell, pa welas souden tri zoudard glas o tont eus adre eur roc'hell. Pelec'h en em guzet ? Linseliou a oa eno o sec'ha astennet war vegou ar bodennadou lann. Ar c'hloareg a blegas hag a en em zilas dindan eul linsel. Nebeut goude, eur plac'h yaouank a deuas evit serri al linseliou hag ar zoudarded en em ziskouezas d'ezhi da c'houlenn diganti hent Lanuon. Diouz he mouez, ar c'hloareg a anavezaz e c'hoar. E oa o tont da zepel al linsel e oa kuzet dindani...

An dro-man adarre an traou a droas mat; a-benn eur pennadig, ar c'hloareg, e vreur-mager, Janig, holl e oant e Roz-an-Ivinenn.

An noz-ze, e voe oferenn er véveri lavaret gant eur beleg a oa dindan guz er vro. Setu ma c'houlennas Kevareg digant Janig ha bezan 'vije hounnez o oferenn-eured. Ne lavaras ket nann; en doare-ze e voe kempennet an traou diouz ober eun tamm lip-e-bao goude an oferenn.

Julig ar c'hemener a oa deut ive war ar c'houez, siouaz d'ezan, rak aman e tapas e fall. Ar Re C'hlas, deut da glask tizout ar beleg, a gavas ar paour kèz war o hent, pa oa o tont da rei kelou da dud ar véveri, hag hen skoas a bevar dól kleze. Eur gann skrijus a voe adarre, gwasoc'h 'vit an hini a oa bet e Kersôzon.

Warlerc'h ar gann, ar mêrer a roas daou eus e vibier da vont d'ar stourmad. Hep dale pelloc'h, ar c'hloareg hag e dud a ya en hent.

ROUE AL LAZ

Milin Traon-ar-Run

Miliner! Miliner!...

— Diaoul biskoaz! eme heman, o tihuna, morgousket ma oa 'n e goaze war eur zac'had ed. Hunvreal am eus ebet, peotramant 'zo unan bennak o c'hervel ac'hano?

Hag hen o tont didrous betek an nor hag o tiglianchedi anezi. Ar stered a lintre e bolz an nenv ken splann ha ken-kaer evel pa ne vije ket, a bevar bloaz abaoe m'edo an dud o tiwaska poanion a bep seurt, trubuilhet, gwall-gaset, hailhoset ken n'o doa plijadur ebet ken o veva.

Ar miliner ne zellas ket ouz krec'h; e pep korn ar porz e-tôlas e zellou, en eur zelaou gant evez. Trouz na glav ebet ken. Hen neuze o kuitat toull an nor hag o vont gousadik d'ober eun dro er porz hag el liorz. Ne oa ket eur c'haz war vale. Ne veze klevet nemet tak tak ar vilin ha trouz an dre ar tiruilh war ar rojou hag o vont gant kas d'ar stêr dre ar c'han mein touillet dindano. An dour a oa bras. Ar sklujou a oa goloet, daoust ma kerze an diou rod; mein ar roudouz (1), plantet kammed ha kammed, eus an eil tu d'egile d'ar stêr, ne ziskouezent nemet eur tamm bihan eus o fennou ermêz an dour. Ar miliner en devoa gwelet en eun tól-lagad ne oa den en tu-ze hag e tizroe d'e vilin en eur c'hrozmolat. Pa zigouezas, avat, e kichen an treujou, e c'henou a chomas digor gantan; an nor-ze hag en doa lezet digor a oa serret; et e oa unan bennak er vilin.

— Dampsik! emezan; houman n'eo c'hoari ebet! An nor-ze a oa digor breman souden, ken gwir hag eo me eo Fanch ar Skailh, mab Pipi Sailh, miliner 'n em rôk e milin Traon ar Run!...

Ar c'homzou-ze a oa deut gantan a vouez uhel, hep sonjal-netra. Neuze e savas klanced an nor hag ec'h eas ebarz war e bouez, en eur zellet piz a bep tu. Ne fave seurt nemet ar rojou o vont endro, Fanch ar Skailh a oa o tont d'azeza war e zac'had ed, pa welas, en amc'houlou, eur miliner all 'n e goaze warnan hag o sellet outan dre ma tostae.

Fanch a hurusunas hag a zantas e vleo o sevel a-bik en e benn. Sonj a deuas d'ezan d'ober e zin ar groaz, rak ar miliner-ze n'halle bezan nemet e dad pe e dad-koz deut da c'houlenn pedennou.

(1) Roudouz = gué.

Egile a zavas neuze en e zav:

— N'ho pet aon ebet, emezan, ha sellit ouzin ervat!
Eun den bihan kruset, dilhad dister war e gein hag i
goloet a vleud. Fanch ne ranne ger. Hag egile adarre:
— N'ho peus ket a ezomm, emezan, eus eur portezet?
— Eur portezet? eme ar miliner dinec'het eun tamm;
c'houi a oar eo et va fortezer e-kuit?
— Me a oa marc'hadour reun betek vremen; met ar
vicher n'eo ket mat evidon ken!

— Bah! eme Fanch; c'houi eo an ôtrou kure! — Hag
hen o tenna e voned.

— Ya, Fanch, ouspenn d'in-me e rafec'h vad, mar karit
va c'hemer en ho ti. Evelse, me a c'hello derc'hel d'ober
en ho touez va c'harg a veleg. N'ho peus ket aon?... Rak
breman souden 'm eus ar gredenn ec'h arruo soudarded
war va lerc'h. Setu perak am eus laket bleud war va
dremm ha war va dilhad...

— C'houi a oa o c'hervel ac'hanon breman souden?

— Me a oa, hag a zo deut er vilin keit ma oac'h oc'h
ober ho tro... Selaouit!

O-daou ec'h ejont da doull an nor da selaou, e kreiz
sioulded an noz.

— Netra, eme ar beleg; koulskoude, o deus heuilhet
ac'hanon eur pennad mat. Va zac'h am eus tôlet er stêr
ha va baz... Abaoe m'oun bet e Roz-an-Ivinenn emañ
war c'heñ noz-deiz. Gouzout a reont oun marc'hadour
reun... Setu perak e renkan chench micher, paour kez
Fanch!

— Mat eol eme Fanch; warc'hoaz e stagoc'h da vont
da borteza, Aotrou Kure, ha setu petra a gontin me d'an
dud diwarbenn ze. C'houi 'oa eur botaouer, eun tamm
kar d'in, o chom gant e wreg e koajou Koad-an-noz... Ho
kwreg a zo maro hag oc'h deut da glask repu gant ho niz.

— C'hanta mat! eme an ôtrou kure, en eur vousec'hoar-
zin. Mignoned e vezimp, da vihana, na pa ne vefemp ket
kerent.

Da c'hortoz an deiz, me garje ober eun tamm diskwiz,
rak chench neiz a renkan d'ober alies hep kousket en
hini...

— Deut; me 'ya da ziskouez d'eoc'h ho kwe...

Eun hanter eus ar ger a chomas en e c'henou. Eun
trouz treid o tont d'ar pevar-lamm a dreuzas sioulded an
noz hag a-rôk m'o doa gelllet an daou zen en em zonzal,
an nor a zigoras 'vel gant eur gaouad avel ha tri, pevar,
c'houec'h pôtr ha diou blac'h a deuas er vilin en eul
lamm.

— Tremen a c'heller, Fanch? eme unan anezo.

— Kevareg! eme ar miliner. Piou a zo war da lerc'h?

— Ugent, tregont, me oar ped Glazard! Touet o deus
kaout va c'hroc'hen, rak ker e talvezfe d'ezo! Lavar d'in
'ta ha gellout a rêr tremen ar sklujou?

— Deut! eme ar miliner. Tremen sur a reoc'h... nemet
an diou blac'h-man...

— Unan war ma choug; eben war choug eun all! Deas
da ziskouez d'eomp! Mall eo!... Ha breman souden, pa ve-
zimp tremenet, serr an dailh kloz ha kerz da gousket...

Ar beleg a oa chomet war dreurjou ar vilin; den n'en
doa anavezet anezan. Ober a reas sin ar groaz warnezo
pa oant o tec'het o c'houec'h, daou bôt ar mêrer Tepot,
Riwall ha Per, Kevareg hag ar c'hloareg, Janig hag an
dimvezell Kersôzon.

Eur pennadig goude, ar miliner a zizroas: « Et int!
emezan. — Neuze e serras an dailh kloz ha kercent an
dour a greskas hag a c'holoas ar vein, kas gantan ken ne
oa nemet eun eonenn e tu traon d'ar sklujou.

— Dont a c'hell ar Re C'hlas, ma karont, eme ar mili-
ner; met ne vo ket malet o arveval d'ezo fenoz...

Mall e oa mont d'ar gwele, kuit avat, da zerri lagad ebet.
Ar miliner a zihunas e wreg hag a gontas d'ezi an doare.

— Va Doue! emezi; kuz an Aotrou Kure, da vihanan!...

— Nann, eme ar miliner; gwel eo chom, war zav. Ha
neuze, emezan, n'eus ket amzer! Klevet a rez? Emaent
o tisken hent ar roz!

Kercent e strakas dor an ti gant an tôliou fust fuzuilh...

(Da heuilh).

DIR-NA-DOR.

BLEUNIOU BREIZ

Kanaouenn an alc'houeder

Sant Per, digor d'in,
Biken mui ne bec'hin,
Digor ' ta, digor,
Digor d'in da zor;
Kemer truez ouzin
Pe va gouzoug a dorrin;
Sell an douar, pegn izel
Ha me pegn uhel!
Bouzar out
Pe n'ez out
Mouzat a rez,
Hag e rez?
Mat, Per, gra da benn,
Me zo ' vont da ziskenn,
Hag adarre e pec'hin,
Hag e rin, rin, rin...

YANN GUERE,
persoun Kastellin.

Em bro emañ koulskoude

Eur c'hernevad yaouank, desket gantan e vicher mansoner, a yeas da Gastell-Paol, da glask labour, o veza klevet lavaret e oa eur bern labouriou da ober wardre enc ha peo gwir en e gorn-bro ne c'helle ket gounit e vara.

En eur zigouezout e Kastell, e welas eur maread tud o labourat war eun ti; hep marc'hata ez eas da c'houlenn beza kemeret en o zouez. Dres, e vanke unan, a gemennas d'ezan ar mestr, hag e roas urz d'ezan da gregi dioc'htu gant al labour.

Souezet e voe ar pôtr dioc'htu, war an taol, o welet an holl vicherourien o komz galleg ken etrezo; outan e unan zoken e lavare: « Daoust ha n'emaoun ket mui em bro? »

Kaout a rea d'ezan, koulskoude, e ranke beza an dud-ze Breiziz penn-kil-ha-troad e pep giz, diouz o dremm, o gwiskamant, hag ivez diouz o doare da gomz galleg.

Ne zalcas ket ar pôtr yaouank da c'houzout e oa ar mestr eur gall ha ne entente seurt en hor yez-ni ha gant aouin o divije ar vicherourien gret goap anezan e c'hour-c'hemennas d'ezo komz holl e yez ar C'hallaoued keit ma vijent war o labour. Ar c'hernevad yaouank-ze en dije kavet easoc'h, koulskoude, komz yez e dud, yez e vro, ar yez-ze hag en devoa komzet bemdez azalek e gavell betek neuze, met,

ouz red

n'eus louzou ebet.

ha setu ma sentas, evel e genvroiz, en eur zistaga bom-mou gallek ivez gwella ma c'helle.

Eun dervez, unan eus ar vansonerien, an hini a oa o labourat a-gevred gant ar pôtr yaouank a lavaras d'ezan: « Envoyez-moi l'équerre! » ar c'hernevad tregaset evel ma oa gant e labour ne entetas ket mat a-walc'h ar pez a c'houlennet outan ha ne gredas ket ivez goulenn evid eun eil gwech; dirazan e oa eur maen kizellet; astenn a reas anezan d'e genseurt; ar mestr test a gement-se a yeas d'ar red, raktal, betek ar mansoner yaouank en eur lavaret d'ezan evellen: « Comment, tu ne connais pas encore les noms de tes outils? »

Ha kerkent ar pôtr yaouank a lavaras d'ezan ken habask ha tra: « Pardon, Monsieur, je n'ai pas encore travaillé en français et je n'ai guère l'intention de le faire », hag en eur ziskouez d'ezan, gant e viz, kestall, touriou hag ilizou ker, e kendalc'has: « Regardez ces édifices: admirez leur solidité; ils défient les siècles: ils ont été construits en breton; dès chefs-d'œuvre comme ceux-là on n'en fait pas en français. »

An Aotrou a jomas abafet ha diwar an dervez-ze al labourerien a c'hellas komz brezoneg, evel ma karent.

C. C. C.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (Fr°) | Y. LE MOAL, Coadout, p' Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildu*
YV. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
• FEIZ HA BREIZ • et • KORN-BOUD •
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) . . . 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Distroada gevier! E. AR MOAL. — Penaos e voe bemeret Pont-ar-Veuzenn, G. P. — Roue al Laz, DIR-NA-DOR. — Paotr ha paotrez, P. TR. — Prosession sant Mark, EUN TEST. — Hor pardonou, E. A. — Kentel an A. Terrel, AL LABOURER. — Dallet gant ar gason, J. U. — Levriou nevez, D.-N.-D. — Labouriou ar merched, TINTIN ANNA. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ MAE

- 3 a viz Mae. — III^e sul goude Pask. Gouel ar groaz kavet, p. 669 e levr an A. Uguen.
Ober a c'heller hizio ivez gouel sant Joseph, patron an Iliz, p. 661.
- 10 a viz Mae. — IV^e sul goude Pask. Ober a c'heller hizio gouel Santez Jann d'Arc, p. 673.
- 17 a viz Mae. — V^e sul goude Pask, p. 393.
- 21 a viz Mae. — Gouel ar Yaou-Bask, p. 402.
- 24 a viz Mae. — Ar zul goude ar Yaou-Bask, p. 407.
- 31 a viz Mae. — Sul bras ar Pantekost, p. 411.

Distroada gevier !

Abaoe ar bloaz 1877, eur gevredigez deut, er mare-ze, da vestrez war Vro-Frans, kevredigez ar franmasoued, he deus troadet mil ha mil gaou evit touella ar bobl hag ober diouz skarza, eus buhez ar vro, Doue. Barrek e veze, diouz an eil pevar bloaz d'egile; diwar c'horre pe dre zindan, an tu krenv a veze bepred ganti hag ez eo bet betek hirio hag ez eo hirio muioc'h eget biskoaz, pegwir ez eus er Gambr 232 kannad franmason ha 10 ministr.

Ha kouskoude, kaer o deus bezan krenv, deut int da grenn, rak krog emañ da zistroada o gevier.

Ar pep brasa anezo o doa silet en eun nebeut lezennou hag e oa chadennet ganto ar paour kez tud ma 'z omp. *lezenn ar skoliou* hag a zizorne ar gerent; — al lezenn diwarbenn ferri ar briedelez hag a zizorn ar prijeou, an eil e kenver egile; — lezenn an disparti hag a ra ac'h-nomp dirak ar bed holl, eur bobl digredenn, bezet droug ha mad ganeomp... Bezan eo al lezennou-ze 'vel ken lies a dour-krenv savet gant ar franmasonerezh, — Iliz Satan, evel m'eo bet hanvet, — e kreiz hor bro, evit dont a-benn da veza mestrez enni evit atao. Arabad e oa da zen stoka ar biz, outo, rak disklêriet e oant bet sakr « intangibles ».

Hogen, d'an 10 a viz meurzh, Kardinal hag Aarc'heskibien Frans, bodet e Pariz, o deus skoet gant al lezennou-ze gwasatôl a zo bet darc'haot ganto biskoaz ha distroadet ar gevier zo'keit 'zo oc'h ober diazez dindano.

Tridal a reas en e greiz kalon pep den reiz ha, dreist-holl, kalon pep mab mat d'an Iliz katolik, Iliz an Urz hag ar Sklêrijenn, o welet dizoloñ gwirizioù hudur al lezennou laïk, ha trouc'ha anezo e doare ma n'o do ket a grog ken war spered den onest ha poellek ebet.

**

Alies, e kerz ar c'hantvejou, ez eus bet ezomm bras da zispartia ar gwir diouz ar gaou; biskoaz muioc'h eget hirio, rak en eun hevelep spered den, zoken, c'houi 'gav alies ar gwir hag ar gaou kemmesket, en eun doare sebezus.

Eur c'houlz a deu neuze, vez re zislivet holl ar wirionez gant ar gaou, hag ar bed n'hall ket ken beva, henvel ouz eun den hag en em gavfe mouget gant eun êzenn bunumus.

Neuze eo red dispartia.
Met piou her graio?

Pa oa ar brasa ezomm 'zo bet biskoaz d'ober an disrann-ze, Doue eo a deuas, hen e-unan, rak re vras labour

a oa evit eun den: Abaoc, en deus dalc'het d'hen ober ha, pa en deus kuitaet ar bed, en deus karget an Iliz katolik da varn en e lec'h ha roet d'ez, war an dro gant ar c'halloud, ar sklêrijenn d'hen ober. N'heller ket tremen hepdi rak n'eus nemeti hag a oar disrann.

Gant se, ni, katoliked, a c'hell hag a rank lavaret eo hor Feiz hag hor c'hrédenn ar re n'ez eus nemeto, rak int a zalc'h er bed sklêrijenn ar wirionez ha lezenn ar vad. Ar c'hrédennou all ha, dre forz kostezi, a zo tec'het diouti pe a zo en em zavet a-ratoz en he eneb n'int nemet falz-kredennou.

Anez anzav kement-ze, e seblantomp sellet donedigez Doue war an douar 'vel eun dra c'hrêt en aner ha galvedigez an Iliz katolik 'vel eun hunvre pe eur waskerezh.

N'ouzon ket ha bez ez eus hirio brasoc'h merk a zallentez; hirio, ha zav e kalon pep den, dirak ken lies a venoz dishenvel o troidellat dirak an daoulagad, ar goulnen enkrezus: « Daoust ha piou a zizoloio d'eomp ar wirionez? » hirio, pa 'z eus ken lies a falz-profed hag a lavar d'eomp, pep hini diouz e du: « Ganen emañ ar wirionez! » hirio, gwasoc'h c'hoaz, pa deu eur vougen denval d'en em leda war ar bed ha da glask morgan, n'eo ket hepken sklêrijenn ar feiz, met pep sklêrijenn natur.

Ya, dreist d'ar yezou ha d'ar broadeleziou, eur c'halloud nevez savet a gas ac'hanomp warzu an dizurz bras, an dismantr diweza ha n'eus hini ebet ken e tu all d'ezan: dizurz ha dismantr ganet diwar al liberte rik: liberte an eil e kenver peadra egile, liberte ar pried e kenver e bried; liberte ar bugel e kenver tad ha mamm; liberte pep den e kenver e vro; liberte an holl e kenver Doue. Pep « chadenn » a vo torret etre an dud, re an natur ha re ar C'hrouer, — an hevelep re int. — Nemet e vo gofeliet unan, hag a vo eur wir chadenn, ne vo enni netra nag, a-beurz natur nag a -beurz Doue, an hini a stago ac'hanomp holl keit ha keit ouz ar, Gouarnamant, doue, an « Etat ».

Hirio; omp digouezet er pal ma kred d'ar C'halloud eneb-natur a zoug an ano a « Gommunisme » eo dare, da lavaret eo, breinet awaloc'h kalon ar poblou, da c'hellout erea anezo evel sklaved. Daoust hag an emgann diweza eo heman? Stumma rafe da veza, da vihana, diouz gwelet gant pebez kounnar a stag ganti pôted an dismantr.

Kollet ar bed, mar n'en em gavfe ket eur vouez nerzus a-walc'h, selaouet a-walc'h, da droc'ha breman raktal, etre ar Gwir hag ar Gaou! E poull glogor ar « c'homunisme », e vefe beuzet ar broadeleziou !

A drugarez Doue, hon Iliz hag he c'helennadurez n'o deus ket koac'het; Iliz Bro-Frans, an hini a zo adarre, evel breman zo dek vloaz, e penn ar stourmadeg, a zav he mouez, eur vouez hag a vo bet klevet dre ar bed holl.

Lavaret a ra n'eus nemet frouez fall da zastum diwar al lezennou laik, hag eo dieet ha red-o diskarr...

Kaerat barnedigez!

Pesort Relijion, pesort Kredenn he dije gelllet disklêria kemend all? Anat eo n'eus nemet an Iliz katolik. Hi eo a zalc'h dindan hon zreid an dachenn hag endro d'eomp an êr hon deus ezomm evit beva, ni, hor yezou hag hon broadeleziou. Hi eo eta ar feiz hag ar gredenn n'eus nemeto.

N'oa nemeti dec'h; n'eus nemeti hirio; ne vo nemeti warc'hoaz.

**

Ar ministr Herriot a zo bet ét droug bras ennan p'en deus lennet barnedigez ar gardinaled. An den-ze hag en deus en em werzet evit kaout madou hag enoriou, a zo pignet e kador ar Gampr, d'e vouez da dizout pelloc'h hag en deus youc'het a-bouez penn e oa Iliz Frans eun Iliz gwerzet d'an dud a arc'hant!...

Abaoc m'he deus lavaret eo al lezennou laik lezennou dinatur daoust pesort gopr he deus bet? Kalz dismegans ha goaperez...

Goulennit digant piou bennak a lavar ar wirionez pesort frouez a dalvez d'ezan e gomzou? Daoust hag arc'hant a gouez ac'hano en e c'hodell?

Komz ar ministr Herriot a lak da skedi adarre unan eus merkou kaera an Iliz katolik, he faourentez, evel ma skede breman souden hec'h eünded, he reizded. He c'houenchou, he c'hloendiou, betek he chapellou hag ilizou a zo bet laeret hag a zervij hirio da loja piou?... ar re a damall d'ezi he madou!...

Sevel a ra ar galon dirak eur seurt tôlenn...

Na dayomp ket eta! Mui eget biskoaz, red eo disklêria n'eus nemet an Iliz katolik ha penôs, a-ziavêz d'ezi n'eus nemet gaou ha demc'haou, buhez a-lastrez ha maro.

E. AR MOAL.

Bleun-Brug Gwenganp


D'an 9 ha 10 a viz Gwengolo 1925, eman ar Bleun-Brug e Gwengamp; er miz a zeu e vo embannet reelenn ar goueliou hed-a-hed; tud yaouank speredok, it d'ar goueliou-ze a zo savet evidoc'h c'houi hag a zo gouest da rei an dourn da adsevel Breiz kae-roc'h eget n'eo bet biskoaz!

Penaos e voe kemeret Milin Pouldrierenn Pont ar Veuzenn gand ar chouanted er bloavez 1795

D'ar 16 a viz mezeven 1795, pe, evel ma veze lavaret d'ar mare-ze, d'an 28 « prairial », an trede bloaz d'ar Republik da ren war ar Vro, e tigouezas eun dra zouez gant René-Mari Ar Soueff, koueriad onest eus Kastell-nevez-ar-Faou, etre Kastellin ha Keraez. Aet oa d'ar foar da Roudoualleg, war harzou Bro-Wened, gand ar c'hoant gouzout pe briz e yae al loened. Eno, e voe lavaret d'ezan e kavje kezeg da brena e mereri kastell Kersalaün e parrez Leuhan; eno e oa beteg ar Revolution kalz a gezeg da werza. Anaout a rae merour ar c'hastell, ar Floc'h a raed anezan, hag hen dillo di.

Kersalaün a oa eun ti bras ha tenva eus ar XVII^{te} kantved, savet etre eul lenn vras hag ar ster Odet, e-harz menezioù Laz. Ar c'hastell-man a oa neuze etre krabanou ar c'houarnamant, laeret ma 'z oa bet da varkiz koz Kersalaün ha d'e vugale aet da ziavaez-bro. An Aotrou Euzénoù Kersalaün en doa gwechall taolet brud war e ano dre m'en doa difennet kalonek gwirioù Breiz; prizoniet oa bet er Bastille, er bloaz 1788. Pa zizroas da Vreiz, e voe digeret mat e pep lec'h, ha dreist-holl e Kemper gant kalz a levnezh hag a anaoudegez vat. Diwezatoc'h, koulskoude, ar gêr-ze hag he devoe graet d'ezan eur c'haer a zigemer, a daolas dismegans warnan, hag a reas d'ezan tec'hout diouti en aon na vije lakaet d'ar maro ha kement-se dre ma kendalc'has da zifenn dirag ar Republik koulz ha dirag ar Roue, gwirioù Breiz. Dre ma 'z oa deut mat d'an holl, n'oa ket bet red d'ezan tec'hout da ziavaez-bro. Mont a reas da jom da Paris. Pa zisklerias dirak pennou bras ar Republik piou e oa, e lavaras d'ezó e oa gwechall penn Rener Lez-Varn Breiz. Ar skrivagnour gand an diegi skriva kemend a draou ne lakeas nemed an dra-man: Kersalaün, skrivagnour. Ar markiz koz, a dleas da ziegi ar skrivagnour-ze, beza kemeret evid eur c'hoz skrivagnour dizrouk hag a zalc'has e benn sounn war e ziouskoaz. Mervel a reas oajet tost da gant vloaz, e 1819, goude beza gwelet ar Vourboned o pignat adarre war an tron.

Ar c'hastell a oa, eta, e 1795, dilezet ha digenvez; brud fall, avat, a oa kouezet warnan, ha tud ar vro e bellae dioutan. Lavarout a read e teue, awechou, epad an noz, ar prenestrer anezan da sklerijenna; gwelet a raed feuzou oc'h ober an dro d'ar c'hoajou; anavezet oa bet zoken unan eus mibien ar markiz hag a oa aet koulskoude da Vro-Zaoz. Ar Soueff, moarvat, n'ouie netra en holl a ge-



ment-se, rak dinec'h e yeas dre ar vali; lammout a reas a-dreuz ar vilin ha yao d'ar vereri, pa zigouezas gantan pevar zen livet fall o dremm, ganto fuzuilhou ha pistolen-nou, gwisket e giz Gwened. Sebezet-marô, edo o vont da jacha e skasou gantan. Siouaz d'ezan, tapet e voe krog en e choug ha buntet e porz ar c'hastell. Eno, e komprenas petra a oa c'hoarvezet gantan: kouezet oa e-tre krabanou ar Chouanted; ar gwall-dud ze a gomzed anezo kement hag a oa kemend aon razo e Kerne; betek-henn n'o devoa ket c'hoaz lakaet o zreid en hor rann-bro. Bez' e oa eno, wardro eur pemp pe c'houec'h kant den, holl paotred krenv ha start war o diwesker, o zal dispont ha garo, d'ezo baro ha bleo hir, ganto peb a fuzuilh a zaou denn ouz o bandenn, eur bistolenn krog ouz o gouriz vezer marellet; d'ichek oa an doare anezo gand o chupenn verr, o jiletenn digor-bras hag o bragez lien gwenn. Holl, koulz lavaret, e tougent

gwiskamant parrez Baud, ha war o fenn e oa ganto eur

mellad tok du. Diouz o gwelout, e vije lavaret e oant oc'h ober eur pennad-ehan, gouvezet en disheol, war al leurenn vaen, o komz a vouez izel an eil ouz egile.

Ar re o devoa kroget er Soueff her c'hasas en eul lec'h distro a oa ennan dija daou brizoniad, eur goueriadez gwisket farzus e goaz hag eun denig all a oa, emezan, skrivagnour e parrez ar Zant, e Bro-Wened.

Setu aze penaos e teuas koueriad Kastel-nevez-ar-Faou da veza lakaet, dre heg, e-mesk chouanted Lantivy evid ober ganto ar sezis war bouldrierenn Pont-ar-Veuzeun, e Sant-Segal; n'eus ket kalz a daoliou brezel a vije bet par d'hennez en hor bro e-pad ar Revolution. Soudarded Tinteniac ha Kadoudal a oa berr ar binvioù brezel ganto ha n'hellent ket dont war zikour ar re a oa aet da zia-vaez-bro hag a dlee — siouaz d'ezo — eur pennadig goude ober o diskenn e pleg-mor Kiberon. Ar pennou-bras anezo en em glevas ken etrezo: « Mat, eme Lantivy, p'eo gwir n'hon eus ket a boult, mar kirit ez in da gerc'hat e lec'h ma 'z eus ». Hag hen rakal da gempenn e alou-badenn ha yao en hent ken dillo ma teuas a-benn eus e daol.

Ouz e heul edo Leissègues, Kersalaün, mab Kerstrat, daou vab Keroulas, tri veleg n'o doa ket touet; ar re-man n'oa ket a fuzuilhou ganto, met bizier; ganto e oa ivez pemp pe c'houec'h kant den dispont ha n'o devoa ket a aon da laza ar re-all dre ma 'z oant prest o-unan da goll o buhez evit difenn o feiz hag o bro. Holl e oant war zroad ha kalz anezo, zoken diarc'henn, nemed an Aotrou Lantivy a yae war varc'h en o raog. Unan pe zaou eus ar vro a ziskoueze an hent d'ezo.

Ar Soueff ne zalaas ket da c'houzout ervat pebez taol a oa c'hoarvezet gantan, rak kercent ar chouanted en em rannas a-strolladou hag a dec'has diouz Kersalaün. Graet e voe d'ezan bale en adrenv gant skrivagnour ar Zant. Ar vaquez, a oe gwisket e koueriad, a ziskoueze beza unan eus ar re a oa e penn ar strolladou ha red oa d'ezi ivez anaout mat doareou ar vro. Goude tri gilometr war vale e tigouezjont e Tregourez. An dud holl a dec'has raktal diouz ar vro; turiet e voe tiez mignoned ar Revolution ha moarvat ma vijent bet tapet e vije bet graet ganto. Met nijet oa al laboused eus o c'haoued; o arrebeuri a voe goulonderet hag o armou kemeret.

Neuze, e kendalc'hjont gand o hent hag e kerzjont warzu Edern, diou leo eus Tregourez. War-dro pemp eur ar chouanted a oa war dreuzou milin kastell ar Veuzeit. Tapout a rejont mab ar miliner Loranz Sizun hag e rejont d'ezan bale en o raog evit diskouez d'ezo an hent. AA. Kersalaün, Kerstrat hag eun nebeudig all ganto a zigouezas araog ar c'halz eus ar strolladon all war leurrenn ger Edern. Kaout a rejont eno, eur c'hoz mestr-skol,

ar Predour. Al labous-man oa e vicher diskulia ar veleien chomet feal d'o Doue hag ar gatoliked o-unan, ha dre ma n' oa ket evid ar c'hlabous a oa gand e c'henou e c'houlennas diganto o faperiou: Hag ez an d'o diskoubz d'it, eme Gersalaün, en eur zarc'haoui gantan eun taol sabr war e benn epad m'edo Kerstrat (a voe diwezatoc'h fuzuilh e Brest evid an torfed-ze) o tenna warnan eun taol fuzuilh a ledas anezan war gwenn e groc'hen. Trouc'ha a rejont gwezenn al Liberte ha goulonderi a rejont ivez tiez mignoned an Dispac'h.

E Brieg e oa eur beleg touer, e ano oa Goraguer; heb an distera difizians e kerze en deiz-se hag ez edo dres war hent Ederm pa zigouezas warnan ar chouanted. Tapet e voe krog ennan: « Kas ac'hanomp d'az ti, eme ar vistri d'ezan, ha laka da ene e stad da vont da welout Doue ». Mont a reas ganto d'ar presbital hag e roas d'ezo an alc'houeziou; lavarout a reas d'e blac'h: « Kemerit va dihad ha va zae zu, rak dizale e vezo graet ganen ». Dis-kenn e reas er porz, ouz e heul daou chouand. Neuze, e blac'h a glevas eun tenn fuzuilh hag eur youc'hadenn skiltrus. Pa ziskennas da welout petra oa c'hoarvezet, e kavas he mestr maro-mik, e benn treuzet gand eun tenn hag e gof treuzet gand eun taol sabr.

Ar chouanted o devoa eleiz a vignoned e Brieg, en o zouez Darcillon eus a Gerennou hag ar Ster eus a Goatkain a zeuas d'o c'haout di. Mont a rejont eun nebeudig, dre fazi m'oarvat, war hent Kemper, hag a greiz-holl e teuas en o fenn trei war-zu Pleyben. An noz a deue d'an daou-lamm hag ec'h en eum vodjont e meur a lec'h. Kredi a ran ec'h en em vodjont dreist-holl e kichen chapel I. V. ar Feunteuniou, e Gouezeg, eun iliz kaer en-dro d'ezi gwez fao ha dero. Hep mar ebet, n'oa ket eur fall kousket war ar c'hinvi hag al letonenn fresk. Met, kerket ha ma c'houlaozas an deiz — ha buan e tarz an deiz e miz mezeven — e oant adarre war zav. D'ar 17 a viz mezeven, da 4 eur diouz ar mintin, mear Gouezeg, Rene Breut a welas o tont d'e di, gand o armou, 16 den ha ne anaveze ket: Arabad eo d'it kaout aon, a lavaras unan bennak d'ezan hag a dlie beza eun « Aotrou ». Ha karout a rez da vro?

— Ya, emezan — ya, evel Charett, a lavaras en eur c'hoarzin unan eus an dud-se. — Ha mear out er barrez-man? — Ya — Na 'z pe aon ebet; ne reomp ket an distera droug d'it. Ro d'eomp hepken eun dra bennak da zebri ha kas eur zailhad mat a gerc'h d'am loaz. Gwelet ez peus c'hoas tud divroet? — Nann — Hirio e welez hiniennou anezo ». — Ha Lantivy a yeas en ti goude beza lakaet tri c'hedour e-kichen an noriou; ar paour kaez mear a oa mall gantan digas war an daol kement tra en devoa: bara, amann, kig, krampoez, laez ha



chistr; ar Chouanted o lonkas beteg an tamm diweza — « Ha mont a rez da oferenn beleien touerien? a c'houlennas Lantivy, an tamm en e c'henou — Ya, aotrou — An dra-ze ne dalv da netra; na da mui! » Goulenn a reas kaout e fuzuilh. « Mouman a zo mat; he derc'heil a ran ». Hag en dizro e roas d'ar mear eur goz hini. Eun all e bedas da rei d'ezan eur roched, eun all ugent skoed arc'hant. Renan Breut o veza diskouezet n'en devoa nemet paper, ar chouan ne zeilas ket outo hag a dechas droug ennan.

Goude beza debret mat, darn anezo, en dre ma tiskenne ar re all da Bont-Koblank, a yeas da fuzulia ar person touer, Youen David. Heman pa zigouezas ar Chouanted warnan a oa o tont er maez eus e presbital eur voutailh gantan en e zourn. Kemeret a reas an dud-man evid eur guchenn laeroun hag e klaskas o gounit en eur ginnig d'ezo da eva eus ar gwin edo o paouez prena. Met ar Chouanted a reas d'ezan pignat en e gampr, rei e arc'hant ha diskregi eus e alc'houeziou; goudeze e tennjont warnan eun taol fusuilh; tizet, ar beleg a grogaz en eur groaz, en em daolas war an dereziou hag a ruilhas d'an traon war an treujou: eno ar mear e gavas maro eun eur ac'houdevez, e kreiz e arreburi bruzunet hag e zilhad ingalet. Tud ar barrez spontet o devoa tec'het; ar

Chouanted a gemeras e varc'h hag a zeuas daved o c'henseurted.

En eur guitât Pont-Koblank, elec'h kendelc'her gand o hent etrezek Pleyben, ar Chouanted a droas a greiz dre venez ar Ster-Aon evit kemeret an hent koz ha diaes a gase, a ziou leo hanter ac'hano, dre Linlouet, ar Moustier ha Koatilliger, da vourc'h Sant Segal. Ar pennad bale a

oa kalet. Setu perak ne zigouezjont e penn o beaj war-dro kreisteiz nemet-ken. Evel kent ez ejont war-eeun d'ar presbital a oa ennan, d'ar c'houlz, ar person touer ar Guillou o tebri e vern gant skolaer Kast. Kroget e voe enno, stlejet e voent war al leur-gêr hag eno ar Chouanted a drouc'has gwezenn al Liberte hag a reas d'o daou frisonier daoulina evit beza fuzuliet. Met eur c'hrennard eus ar vandenn o veza diskleriet ne zelleze ket ar skolaer, ar maro, heman a voe laosket ha kemennet e voe d'ezan tec'het dioustu ha dillo. Goude beza roet taol ar maro d'ar person reuzeudik, ar Chouanted a furchas e di, a zammas e galur hag e arc'hant hag a breizas unan bennak eus tiez mignoned gouarnamant Pariz. Epad an amzer-ze, ar vistri a zrebe e ti Herri Vigouroux a voe lonket d'ezan e holl vevans; neuze e c'hourc'hemenjont da Youen Milin ha da Loiz Vigouroux o heulia betek Pont-ar-Veuzenn, eul loan gant pep hini ha sier, evit kemeret poultr.

Tostaat a raed ouz diwez an aloubadenn, hag hep mar ebet Lantivy, Kersalaün ha Kerstrat a wele pell a zo o defe eur gwall-grogad gand ar soudarded a ziwallo ar bouldrierenn. Houman a zo azezet wardro eul leo eus Sant Segal e traonienn doun an Doufin. Hizio, ha dreist holl abaoe ar brezel, eo deut da veza eul labouradeg vras, met neuze ne doa c'hoaz nemed eur stalig vihan n'oa ket enni muioc'h eged eur c'hant micherour o labourat. O tigouezout war ar menez a weler diwarnan ar vilin-boultr, Lantivy a gasas tennaterien en eur c'hoad a oa dem-stag ouz he mogeriou gand urz da denna wagemant hini en em ziskouezfe el leuriou. Strafulet gand an tennou a zeuas ken trumm warno, ar vicherourien en em guzas: ar zoudarded, a ziwallo ar bouldrierenn ne enebjont ket muioc'h, setu ma voe lakaet an dourn warni hep m'he defe redet eur veradenn wad. Lantivy a yeas e ti an hini en devoa da welet war ar poultr, eur bistolenn en e zourn, hag a ginnigas d'ezan e lezel e peoc'h ma rofe alc'honeziou grignoliou ar poultr. Egile a blegas, n'helle ober netra welloc'h. Ar Chouanted a sammas kement ha ma c'hellent a boultr, kement ha ma c'hellent dougen war o diskoaz ha lakaat war gein o c'hezeg, hag evelse o devoa c'houec'h pe seiz mil lur. Teurel a rejont ar pez a joine, daouzek pe drizek mil lur e aoz ar vilin.

Da 4 eur, lorc'hus eus o zaol ha laouen dre m'oa bet kaset da benn ganto, e kreiz eur vro treuzet dre-holl gand armeou ar Republik, eul leo bennak diouz Brest, ar chouanted a oa dizro da Zant-Segal. Gourc'hemenn a rejont da Henri Vigouroux starna e gezeg ouz an tri garr a oa berniet enno sier leun a boultr. Red oa d'ezo breman digouezout er Morbihan disbitik, eno edo an dalc'h. ha dre m'oa aet ar stronz anezo dre ar vro a-bez adalek Tre-

gourez betek Gouezeg e oa red d'ezo klask eun hent all evid an distro; ar vistri o devoa taolet evez ouz pep tra. Hag hep koll an distera amzer ec'h en em lakajont en hent hag e kerzjont warzu ar C'hloastr ha Plonevez-ar-Faou an hent-ze a ya war eun etrezeg eun dorgenn uhel goloet a lanneier hag a warimier. Dre eno, d'ar mare-ze dreist-holl, e c'helled bale hir-amzer hep digouezout gant den.

Pemp leo a zo eus Sant-Ségal da Blonevez-ar-Faou. O veza m'oa leun-tenn o c'hirri hag o veza m'oa red teurel evez mat, ar Chouanted a lakeas seiz eur horolaj d'ober ar pennad bale-ze; mont a raent sioulig, n'hellent komz nemed a vouez izel; en o fenn, e kerze eul lodennig anezo o klask gouzout e pep kroaz-hent ha n'oa ket bet gwelet soudarded o tremen. E kichen ar C'hloastr, e voe lavaret d'ezo e oant o paouez tremen pemp minud a oa. Awalc'h oa ze evid ar chouanted, frank oant adarre. Da hanter-noz edont e bourc'h Plonevez-ar-Faou; eno, er vro-ze e oant anavezet mat. An dud eus ar barrez-ze o devoa kas ouz ar Revolution a zamme o c'hein gant tailhou re bounner ha adaleg ar bloaz 1793 korn-vro-Keraez a ziskuilhe ar barrez-ze egiz « ar wasa eus ar rann-vro hag an hini a dlied da zouj ar muia ». Er bloaz 1794, daou archer o devoa lakaet o c'hraban war eur beleg feal d'e Zoue, an A. Cevaer eus Pleyben; eur strollad koueriaded ganto bizier ha ferc'hier a ziframmas ar prizoniad diganto ha goude beza bruzunet o izili a daoliou bizier ha ferc'hier o zaolas en dour; bec'h awalc'h o devoe o klask tapout ar zec'h. O welet kemend all, tud ar vourc'h o digemeraz e-giz mignoned. Servichet e voe d'ezo bara, krampoez, amann ha chistr e-leiz: digoret e voe dirazo al labour evit diskuiz war ar c'holo o diwesker skuiz-maro gand an troiou bale hir-ze. E c'hellit kredi e oa trouc'het gwezenn al Liberte ha ma n'oa ket fuzuilhet ar person, Jigouc, eo dre m'en devoa dilezet e barrisoniz, bloaz e oa, gwall gaset hag harluet ma 'z oa bet ganto e meur a zoare.

D'an deiz warlerc'h, 18 a viz mezeven, da eiz eur diouz ar mintin an A. Lantivy a gemennas oa poent loc'ha. Red oa d'ezo tizout Landeleau, eul leo hanter ac'han. ha mont dillo, rak, hep mar ebet, soudarded Keraez oa bet kaset kelou d'ezo epad an noz gant mignoned ar C'houarnamant. Kerzout a raed atao en hevelep urz, ar c'hirri leun a boultr e kreiz ar strollad ha lod all en o fenn evit diskouez an hent.

Ar Soueff, ar prizoniad, epad m'edo ar re all o kemeret o c'houck, a dec'has hag a zizroas d'an daou-lamm ruz d'ar gêr. Ar vro a oa torgennek, goloet a goajou hag ouz he zreuzi kalz a draoniennou. Etre 10 ha 11 eur, ar chouanted a zigouezas e Landeleau. Ar beleg tquer

ar Bris eo a voe gweladennet ganto da genta, met douetus-bras, ne dlie ket beza ken drouk hag e genvreudeur rak ne voe ket raktal lakaet d'ar maro. E di a voe turiet eus eur penn d'egile hag an traou a oa ennan a gasjont ganto, al lienaj, e hanaf, ar bevans. Rebech a rejont d'ezan e vuhez blac'h ». Hag e lavarjont d'ezan pignad war marc'h person Gouezeg. « Ma tleit va laza, emezan d'ezo, koulz eo ma ven lazet war an douar eget va laza war varc'h ».

Diwezatac'h e welimp petra d'ober ouzit, e respontjont d'ezan hag e kerzas ganto.

E traon menez Landeleau, ar strollad a drezas ster Aon, e Pontrifen, hag a gemeras hent Sant-Hernin war-dro 2 eur. Ofiserien ar Republik, war varc'h, a zeue eus Keraez, a welet o tont da Landeleau. Eur vaouez a lavaras d'ezo: « ar chouanted o deus kemeret hent Pontrifen; heuilhit anezo, n'eus ket gwall-bell abaoe n'int tremenet dre eno » met, dre ma n'o devoa ket kalz a c'hoant d'ober eur c'hrogad gant gwall bôtred ar Morbihan, an ofiserien a respontas o devoa urz da vont da Gastel-Nevez a oa en tu enep hag ar zoudarded deut di a gerzas ganto hag a lezas da goll an dro vat a gavent da gemeret ar c'hirri leun a boultr.

Epad an amzer-ze, ar chouanted a zigoueze war-dro 1 eur goude kreiz-deiz e



bourc'h Sant-Hernin. Ehana a rejont da zebri. En em glevet a rejont ken etrezo evit gouzout ma tliet fuzulia ar Briz: met, person koz Sant-Hernin hag en doa ive touet a zeuas da zaludi an A. Lantivy a bedas evid e genvreur hag her saveteas.

Yann ar Bihan, eus Sant-Segal deut ganto da vleina unan eus ar c'hirri a voe lezet da zizrei d'ar gêr.

Da 3 eur e oant adarre war hent Les-cleden. Da bemp eur diouz an noz, ar chouanted a dremene dre Votreff. Chom a rejont e ti Loeiz Guillemot, kuzulier an ti kêr hag e tebrjont kement tamm kig-moc'h, bara ha kram-poez a oa en ti, hag e kendalc'hjont da vont dre vaner Brenolo.

O c'houzout n'oa ket a zoudarded e Keraez, ar vistri a zonjas eur pennad ha mont a rejont d'ober ar rins er gêr-ze. An dud eveziek en o zouez a roas d'ezo da entent edont deut a-benn eus o c'hefridi: kemeret o devoa poultr Pont-ar-Veuzeun. Arabad e vije d'ezo eta klask trabas ouz Keraez. An taol a hallje trei da fall. Goulennet e voe digand ar Bris ar pezh a zonje war gementse. Heman o alias da jom hep stourm ouz Keraez dre m'oa eno, emezan, kalz a zoudarded. E ali a voe heuliet hag ez ejont diouz ar Finister evit digouezout epad an noz e Plevin e kastel Kerlouët ha goudeze e kastell Tregarantec e Melhionneg a oa toullou-kuz chouanted ar vro; e kaviou ar c'hastell e lakajont ar poultr o devoa kemeret dre gement a nerz-kaon.

Setu aze penaos ec'h echuas an abadenn he devoa taollet ar strafuilh hag ar spont e-mesk pennoù-bras ar vro hag ar zoudarded eus ar Finister, kel lorc'hus betek-hen da veza miret ar vro ouz « dismantrou an dispac'herien ».

Kaset e voe d'an daou-lamm soudarded eus Brest ha Kemper da Bont-ar-Veuzeun ha da Geraez, met re ziwezatac'h; al laboused a oa nijet.

Marteze e kavfot ar chouanted didruez kenan o veza m'o deus evelse fuzuilhet ar mestr-skol hag an tri zen all. Venji a raent evelse, en o giz, kemend a veleien vat diskuilhet, harluet, dibennet pe varo en eur stad reuzeudik en toullou bac'h, kemend a dud onest prizoniet, diframmet o madou diganto ha kaset d'an harlu pe d'ar chafod. Boaz o welout ar gwad o redek, o c'halonou a oa deut da veza kalet evel dir hag e tiskarent didruez evel anevaled binimus ar re anezo a dremene evit beza o gwsa enebourien. A hend all, ne rajont taol fallagriez bet. E Plevin, Milin ha Vigouroux a hallas kerzout e frankiz gand o c'hezeg. Paet e voent zoken ganto. Person Landeleau e-unan hag e blac'h feal a oa lezet en o frankiz. Gand ar vall o devoe da zigouezout en o bro e kolljont o hent hag e valejont e kreiz lagenn ar geuniou, eurus c'hoaz da gaout war o hent eun tiig a roas bod d'ezo epad an noz. Antronoz vintin e tigouezjont er gêr.

Ar Briz ne zaleas ket da vont da Gemper da zisplega e zoareou ha da c'houlenn ma vije digollet eun tammig rak e arrebeuri a oa bet graet ar rins warno.

Daoust d'ar gounnar ruz a oa e kalonou an dud a oa e penn ar vro ha daoust d'o c'homzou garo a-eneb ar chanted deut da zigas ar freuz hag al lazerez en o maeziou didrouz, eur c'halz eus koueriaded Kerne a lavare c'hoaz ken etrezo ar ganaouenn vrudet-man savet gant Guillou ar Vern:

Ar Chouanted a zo tud vad, a zo gwir kristenien
Savet da zifenn hon bro koulz evel hon beleien;
Mar skoont var tal ho tor, m'ho ped, digoret d'he:
Doue evelse, ma zud vad, digoro d'hoc'h, eun de.

G. P.

Eur mor a gan

Selaouit holl ha selaouit mat; d'an 10 a viz gwengolo a zeu eman ar « BLEUN-BRUG » e Gwengamp; Breiz-Uhel ha Breiz-Izel, Breiz-Vihan ha Breiz-Veur, a vo eno; kêr Intron Varia 'r Wir-Zikour a dregerno, en deiz-ze, gant kanaouennou kaera hor bro: GWENGAMP A VO EUR MOR A GAN.

Kanerien ha kanerezed Breiz, prenit eta dillo KANAOUENNOU BLEUN-BRUG 1925 ma fell d'eoc'h mont da gana d'ar goueliou dispar-ze. Evid 16 real e vo kaset d'eoc'h, levr kanouennou nevez ar bloaz-man, dre ar post; goulennit anezan hep dale en eur skriva d'an A. Drezen, 4, rue du Château, Brest.

C/C 6238, Rennes.

Hepdale e vo kavet da brena

“Lizer an hini maro”

GANT J. RIOU

Eul leor kaer meurbet evid eiz real

Kas an anoiou diwar-vreman da « Emgleo-Sant-Iltud », 4, rue du Château, Brest.

ROUE AL LAZ

(Kendalc'h)

Ar miliner a lavaras d'e wreg:
— Sav, emezan, rak ar re-afian a roio darbar d'eomp breman souden. Gant a ri gra diouz rei d'ezo ar peza c'houlennint.

Hag ar miliner da zigeri, hanter wisket, evel eun den o sevel eus e wele.

— En ano al lezenn! a youc'he eun ofiser bihan e tu all d'an nor.

— Deut ebarz! deut ebarz, tudou eme ar miliner. N'am bije ket serret an nor mar am bije gouezet e tleec'h en em gaout fenez!

— 'N em gaout fenez?... Miliner an tanfoeltr! eme eur zoudard; ober a rafe goap ac'hanomp!

— Alo, eme an ofiser, pa 'z out ken seven, gra da zibri d'ar zitoianed-man ha n'o deus bet koan ebet kas redek warlerc'h da chouanted... Daoust hag hen, da vihana, ne guzez ket aman hini ebet anezo?

— Milin Traon-ar-run na ro ket a repu da enebourien ar Republik!...

— Pevar den d'ober ar furch raktal! eme an ofiser bihan, ken t'er lagad ha ma oa drouk-livet e c'henou.

Mar klaskont tec'het, hon tud, hag a zo war evez er parkou tro-dro a dapo anezo!...

Ar vilineraz a oa diskennet hag he doa laket war an d'ol kig, aman, bara ha jistr.

— Stagomp! eme ar mestr, rak n'eo ket da d'eomp chom aman da voredi, mar deo et hol lapoused pelloc'h...

E oa o trei ouz ar miliner, eur goulenn bennak en e c'henou, pa deuas ar pevar zoudard en ti hag eun den ganto en o rôk.

— An den-man, emezo, hon deus kavet kousket en e wele.

— Va fortezer! eme ar miliner. Eun den koz dizrouk! Gellout a rit leuskel anezan da vale!

— Gwelomp da genta ar stumm anezan! eme an ofiser.

An ôtrou kure a deuas da greiz an ti hag an ofiser a zellas piz outan.

— Da fortezer, emezan, n'eo ket barrek da zamma eur zac'had ed.

— Koz eo ha boutaouaer eo bet er penn kenta cuz e amzer.

Ar portezet ne lavare grik, rak anaout a rea hiniennou eus ar re a oa dirazan... Daoust hag anavezet e vije ive?

— Me a oar doare eus unan bennak, eme eur zoudard, hag a dle beza tost-kar d'ar portezez-man...

Hag e lavaras eur ger ouz skouarn an ofiser.

— Azez, pôtr koz, eme heman, ken n'hon do debret hag evet.

E lagad a yae eus an eil d'egile da dud an ti hag e welas he doa ar vaouez chenchet liou.

— Peuret mat hon deus, n'ez ti, miliner. Peb a damm a yelo ganeomp d'hon tud a zo oc'h ober ged ermêz hag ar pôtr koz a zougo ar zamm, pegwir eo portezez! Destum prim en eur zac'h bara, kig, aman ha jistr... ha war rôk!

— Va portezez a ya ganeoc'h? eme Fanch Skailh.

— O! eme an ofiser, dizrei a raio, marteze, p'en do roet kelou d'eomp eus... e vreur a oa kure gwechall er barrez nesa.

Brema, ni ya da dreuzi ar stêr... Kea rôk gant da zamm, portezez!

— An dour a zo krenv hag a c'holo ar sklujou.

— Sav an dailh eta, miliner!

Ne oa ket da chom da zigarezi.

Eur pennadig goude, ar vein en em ziskouezas ouz sked al loar.

— N'am oa ket lavaret d'it? eme an ofiser glas. A! emezan, aman e rank beza kuziadellou!... Chomit aman pevar ac'hanoc'h, ha bezit war evez ouz kement kammed a raio ar miliner-man! Ni a zizroio e-berr, a-benn kuz-heol, ha mar ne reomp ket, kemerit hent ar gêr ha kasit ar miliner ganeoc'h...

Ar portezez a oa ét war ar sklujou, e zac'h ouz e gein.

Ar miliner a zizroas d'e di, pevar soudard ouz e heul, enkreaz a-leiz e greiz.

Ar Re C'hlas, ha na oant ket bet o tibri, en em lakas ouz taol, d'o zro, ha da baka boed, evel dre fent.

An deiz a oa o tarza, eul liou dudius war an oabl, du-ze, liou roz tener evel ma vez e kerc'hen ar yaouankiz. Diwar dreujou e zor, Fanch a zell ouz ar sklêrijenn o kreski hag e sant gwasoc'h e boan, paour kêz ma 'z eo prizoniet en e di. Nag an aotrou kure? Tôl chans mar gell en em jacha ac'hano...

Betek hen, Fanch, pa 'z ae d'ar vourc'h pe e kêr, a glev komz eus an dispac'herien; e Traon-ar-run, avat, an traou o devoa dalc'het bepred da gerzet evel gwechall...

Setu, en eun taol kount, an draoniennig sioul ha distro dihunet, d'he zro, gant safar ha gourdrouzou an dispac'herien, tud ar freuz hag an dismantr.

Klevet an dud-ze o vallozi aze, en e di, ha n'hell netra d'o argas, kement-ze a deu da leski kalon ar miliner evel pa vefe eur c'hlaouenn dan en e greiz. E vugale a zo savet hag a wel an dra-ze; o daoulagad glan, o diskouarn tener a zo sôtret gant leou-douet ha komzou flêrius...

E bried, o vont hag o tont dre an ti 'zo 'vel eun den archedet... Ha koulskoude, n'en deus ket lavaret d'ezi e tlee mont e-berr gant an dispac'herien, d'ar prizon... d'ar maro, marteze, evel kalz a re all! Dibennet, hen, Fanch? An taol-ze, a grêde d'ezan, ne zigoueze nemet gand an noblans, ar veleien; an dud izel ne gouezje ket ar bec'h warno, pa n'o doa netra da goll nemet o bubêz... Ac'hanta, ar bobl koulz hag an noblans, koulz hag ar veleien, a oa tapet dindan gwask an Dispac'h; kontell an dic'hougerez ne c'houlenne nemet boed, forz pehini...

En eur lakat e vilin da vont endro, Fanch a zonzj daoust piou a gaso ar bleud d'ar gêr d'e ostizien. Sonj penôs en doa kavet eur portezez, en noz-man, ha bremaik ne vo ken na portezez na miliner!... A! Dispac'h milliget! Gwir eo eta, nemet re wir eo eman ar reveulzi vras er Vro hag an dud gwasket ganti evel loened mut!

Ha ne zavfent ket d'en em zifenn ouz an tôliou yud a skoer ganto? Eo, pa n'eo ket dour a zo en o gwazied. Gwell mil gwech mervel, ar fuzuilh en e zorn, o tifenn e dud, e Vro, e relijion, eget klucha evel eur yar-dour dinuan pao an dud divadez-man eun dizenor chom eur vunutenn hepken en o serr!

Tor e benn! Kentoc'h mervel!... Evurus an neb n'ea deus ket, en eur-man, eun tiegez da vagal! Hennez ne rank ket chom, evel al lapous war e neiz, da zifenn e re vihan ouz ar sparfell.

Sonj Kevareg ha Kloareg Kersoôn a deu neuze war spered Fanch. Pelec'h emaint-i breman?

Daou eus ar Re C'hlas a zo ét da gousket; daou all azezet e kreiz ar porz a zo war ged, o fuzuilh harp ganfo war o morzed. Konta ha brâgal a reont evel tud hag o deus amzer gaer.

— Sell 'ta, eme unan anezo a greiz c'hoarzin, eur mous o trenzi ar stêr dre ar sklujou! Daoust ha hennez a deufe a-bers ar c'habiten?

Evit gwir, eur pôtrig diarc'hen, gant e ziou votez dindan e vrec'h kleiz a lamme eus an eil men d'egile hag a voe hep dale e kreiz porz ar vèreri. Chom a reas souezet da zellet ouz ar zoudarded.

Ar re-man a c'halvas anezan evel gervel eur c'hi : pstt! pstt! hag a wignas d'ezan tostet outo:

— Petra zo ganit aze, marmouz fall?

— Eur zac'h, eme ar pôtr, da gerc'hat bleud kerc'h d'am mamm.

— Yod a vo da lein e-berr?

— Nann, warc'hoaz! Varc'hoaz eman ar gwener!

An daou zoudard a zellas an eil ouz egile hag a zirolas da c'hoarzin:

— Ar gwener? eme unan; aman e vez bepred gand ar c'hiz koz! Klev 'ta, mabig, n'eus ken na gwener; na sul.

Ar Republik he deus chenchet an traou-ze holl! Lavar ze d'az mamm ha debr kig bemdez pa gavi.

Ar pôtrig a reas ouz an daou den eur zell treuz gant e zaoulagad glas hag a redas gant e zac'h d'ar vilin. Neuze, prim, e tennas eur paper eus e vrucher hag hen roas d'ar miliner. Heman a zerras anezan ken prim all, heb eur ger; n'en doe nemet amzer da gregi neuze e bisac'h ar bugel pa deuas an daou zoudard er vilin. Sellet a rejont ouz ar miliner o karga ar val hag e kasjont ar pôtrig betek ar sklujou war e giz, en eur jacha war e skouarn vit ober d'ezan derc'hel sonj ne oa ket ken na sizunvaniez, na sul, na gwener...

E keit ze, Fanch, kuzet drek eur gern, a lenn e baper. skrivet oa warnan gant beg eun ibilh bet trempet en eun dra ruz bennak, gwad marteze.

« Ar Re C'hlas o deus lazet va mamm ha chadennet ar beleg. E-berr e vezint du-ze. Ni 'vo ive. KEVAREK.

O sevel e gein, Fanch a skoas ar paper e kreiz ar ger-niad ed.

**

Kloareg Kersôzon hag e vignoned, p'o devoe treuzet ar stêr e Traon-ar-Run, a en em zispartias e diou vandenn: daou bôtr ar mêrer Tepot, gant Riwall ha Per, a voe kaset da gerc'hat armou, plom ha bouliji da Doull-an-Houc'h. N'em gaout a dleent da zerr-noz el lec'h ma oant en em zispartiet o eiz; ar pevar all, ar c'hloareg, e vreur-mager hag an diou blac'h a skoas warzu Kerbeniti, e parrez Ploulec'h, elec'h ma oa mamm Kevareg o chom. C'hoant en doa heman da c'houzout eus he c'helou ha da ziskouez d'ezi e bried.

Dre forz 'n em guz, troiata, ha bale dre an henchou treuz, n'en em gavjont er gêriadenn nemet goude kreiz-teiz. Ti ar vaouez koz a oa e-unan, eun tammik distag diouz ar re all. Mont a rejont d'ezan war eun. Ar chimimal ne zivogede ket.

Perag e kavas da Gevareg e oa eno eur seblant fall? Astenn a reas e gammed. Arru ouz an treujou, e voe dalc'h et eno gand ar spont. Hen, an den krenv, a rankas klask harp ouz ar voger: klevet a rê en ti moueziou o pedi hag anavezout e rê hini ar baouez koz a lavare ar pedennou gand ar re varo. Ober a reas eur gammed en ti, hep gouzout mat awalc'h petra rê hag e kouezas, koulz lavaret, e harz treid e vamm astennet war ar varv-skaon.

An diou pe der wrêg a oa ena daoulinet a zouzas adrenv spontet... Ar c'hloareg hag an diou blac'h a oa chomet mantret ouz an treujou; hen, ar mab, stouet e harz an dôl, a denne diouz e greiz huanadennou ken glac'harus ma strinkas an daerou diouz daoulagad an holl. Sou-

den, e savas e benn da deurel eur zell war dremm karet an hini he devoa roet d'ezan ar vuhez. Kerkent e voe gwelet e zaoulagad o tilonta en e benn hag e vrec'h astennet, evel da guzat eun dôlenn frommus, e c'houlennas, gant eur vouez youst ha moan:

— Petra? Kouezet... eo bet? Frailhet... frailhet eo... he zal!...

Eur vaouez koz, unan eus ar re a oa en ti o pedi, a zavas en he sav:

— Nann, va mab bihan, emezi; laza anezi d'it o deus grêt!...

— Piou? emezan, gand eur vouez ker spontus, ma krenas an dôl o oa warni astennet ar c'horf maro. Hag an ter maouez, en eur vouez; a respontas:

— Ar Re C'hlas!...

Neuze e voe gwelet o soubla e c'hlin hag o tostet e vuzellou disliou da boket, gand eun dousder dispar, d'an tal gouliet:

— Selaouit, emezan, en eur adsevel, ker sounn raktal hag eur barner, hag en eur asten e vrec'h 'us da benn ar c'horf maro, selaouit!

— Me c'houlenn aman Doue da dest ne vo ket kaset d'an douar korf va mamm ken n'am bezo bet buhez he zorfetourien!... — Piou int?... ped e oant?...

Ar merc'hed a droas ouz an hini gosa. Houman a lakas he doñ war brec'h Kevareg:

— Digouezet int aze, emezi, wardro kreizteiz, pa oa da vamm o paouez lakat he zamm merenn war an tan... Me a oa en ti, deut da gas d'ezi eur banne leaz... Eun ofiser bihan, sellou sparfell en e benn, a c'houlennas ken garo: « Pehini ac'hanoc'h eo intañvez Kevareg? — Me! emezi. N'he doe ket amzer da lavaret eur ger ouspenn; raktal e kouezas d'an douar, faoutet he fenn gant eun tôl kleze. Kevareg a lakas e zorn war e zaoulagad hag a loskas eur yudadenn.

— « Me, eme ar vaouez koz, en em dôlas warnezi en eur grial forz. An ofiser yudas a lavaras d'e dud: « Endro! » ha kerkent e skarzjont hep ger ebet ouspenn.

— Ped e oant?

— Nao, dek, daouzek marteze. Neuze Kevareg a grogas e doñ ar vaouez koz:

— Trugarez! emezan, trugarez!... Ha breman, beilhit anezi betek warc'hoaz d'ar c'houlz-man. Me 'n em gavo aman, nemet maro e vefen!... »

Da Zoazig, e bried, a oa daoulinet o tifronkal ouz penn an dôl, e lavaras 'n eur boket d'ezi:

— Ged ac'hanon! Me deuio warc'hoaz!

— Me a chomo ganti! eme an dimezell Kersaozon.

— Deomp ni 'ta ! eme Gevareg. Ar c'hloareg hag hen, o-daou e tôljont dour binniget war ar c'horf hag e tec'hjont ermêz.

Ouz toull an nor, eur plac'h, hag a oa eur pennad a oa o c'hedal anezo, o galvas pa oant o tremen:

— Kevaregl! Me 'm eus da gomz ganeoc'h.

Eur c'hrennard a oa en he c'hichen hag a zavas war an daou den sellou dispont.

— Heman, emezi, goustadik, a oa o vèsa ar vioc'h er park, aze, e tu all d'an hent, pa 'z eo erruet ar Re Chlas... Eur beleg dizroet a zo ganto, herve ma lavar...

— Eur beleg?

— Ya; eme ar pôtrig. Goulennet o deus digantaer ha beleg e oa hag en deus lavaret ya. Me oa krapet war ar c'hleun da selaou.

— Ya, ar beleg-se en deus roet an absolvenn d'he mamm, eme ar wreg, p'en deus gwelet anezi o koueza. N'eo ket 'ta peus klevet, Perig!

— Ya, hag en doare-ze o deus anavezet e oa beleg.

Ar c'hloareg ha Kersôzon, o sonjal e kement a dle beza digouezet, na voent ket evit harz da skuilh daerou.

— Ha goude? eme Gersôzon.

— Goude en deus lavaret ar c'habiten liamma e zaouarn d'ar beleg ha lakat eun nask d'ezan ouz e vrec'h ha kregi unan e penn an nask-ze. Ha neuze 'n deus lavaret c'hoaz. « Ha breman, d'ar vilin! »

Eun devez mat, emezan, hon deus grêt! » Eur zoudard en deus respontet neuze: « Kabiten, n'eo ket noz c'hoaz! »

— Nann, eme Gevareg, an tan o virvi en e zellou, n'eo ket noz c'hoaz!... D'ar vilin int ét, emezan. Ar vilin-ze a rank beza milin Traon-ar-Run; an hent-ze o doa kemeret dec'h da noz war hol lerc'h... Klev ta, pôtrig. Ha te 'oar dre belec'h mont di?

— Ya, sur, eme ar vamm, pegwir ez a bep sun da gerc'hat tammou bleud.

— Mat! eme Gevareg. Kemer eur zac'h da gerc'hat bleud; ha ro ar paper-man d'ar miliner. Tôl evez na ves gwelet! Marteze e kavint ac'hanout o tizrei.

Kevareg a ziskouezas ar paper d'ar c'hloareg. Heman a reas eur zin gand e benn ha na lavaras netra.

Ar pôtrig a yeas da gerc'hat eur bisac'h, hag o zri e kemerjont penn an hent etrezek milin Traon-ar-Run.

(Da heulia).

D. N. D.

AR VOTADEGOU

Bretoned, lakit Bretoned e penn ho tiez-kêr; an diavezidi m'o deus c'hoant da gaout gwir, war eun dra bennak, n'o deus ken da ober nemet dizrei d'o bro!

Paotr ha paotrez

Sôn a Vro-Shes troet e brezoneg


N^o 2 eus ar 14 Kanaouenn getfiek, dastumet hag eiltonet gant Bourgault-Ducoudray.

All^o-moderato

Goustatoc'h



Ma ti-gouez Yan-nig gant Ja-ni war ri blou ar ster



Ha ma teu da bo-kat de-zi, na la-va-rit ger.



Pep plac'h yaouank! deuz he mi-gnon. Nann e-me Jann-Y-voan; Gwir



eo ar bao-tred o tre-men A c'hoarz ou-zin la-ouen!

I

Ma'tigouez Yannig gant Jani
War riblou ar ster
Ha ma teu da bokat dezi,
Na lavarit ger.

DISKAN

Pep plac'h yaouank, deus he mignon:
— « Nann! eme Jann Yvon;
Gwir eo ar baotred o tremen
A c'hoarz ouzin laouen! »

II

Ma tigouez Yannig gant Jani
Barz er c'hériou bras,
Ha ma chom ganti da strani,
Na youc'hit ket c'hoaz!

III

D'am mignon koant me zimezo
A lavar Janned
Met nag e vro nag e ano,
N'o lavarit ket.

P. TR.

Prosesion sant Mark hag ar Rogasionou

Da zeiz gouel sant Mark avieler, 25 a viz ebrel, ha d'ar Rogasionou (lun, meurzh ha merc'her araog ar Yaou-Bask) e vez graet en holl barrezioù, prosesionou a binijenn en eur gana. Litanioù an Holl-Zent evit tenna bennoz Doue war an tiegeziou ha war madou an douar.

E Rom wardro ar bempvet kantved e veze-graet, a vare da vare, eur prosesion a binijen evit tenna bennoz Doue war ar gristenien ha war o madou. Sant Gregor I pap (590-604) a lavaras e vefe graet hiviziken ar prosesion-ze d'ar 25 a viz ebrel. Diwezatoc'h, pa 'z eo bet savet gouel sant Mark ha lakaet d'ar 25 a viz ebrel, ar prosesion a gendalc'has da veza graet da genver an hevelep deiz hag a zo deuet da veza hantvet prosesion sant Mark. A viskoaz ez eus bet graet vijil e Rom da genver an deiz-se, ar yun a zo bet lezet a gostez dre ma 'z oa en amzer Bask. E Frans ar prosesion ne vez graet nemet abaoe amzer an impalaer Charlez Veur. Wardro ar bloavez 800. Lezenn ar vijil a zo bet miret evel e Rom beteg an amzer ziweza.

Prosesion ar Rogasionou a zo bet savet war zouar Frans, tu ar c'hreizdeiz, e kreiz ar bempved kantved. Sant Mart, eskop Vienn († 474) a c'hourc'hemennas 3 dervez a bedenn hag a binijenn evit diarbenn buanegez Doue a zeblante beza kouezet war e eskopti; dibab a reas an tri dervez araog ar Yaou Bask. An eskibien all a gemeras skouer warnan hag a zindan nebeud amzer ar Rogasionou a en em astennas dre ar Frans a-bez ha dre ar broioù all tost d'ez. E Konsil Orleans, er bloavez 511 e welomp oa gourc'hemennet ar yun hag ar vijil da dri dervez ar Rogasionou, gourc'hemenn a reer zoken d'ar vistri lezel an devezourien hag ar vicherourien da gemer perz er pedennou-ze. Epad ar prosesion, a bade alies 5, 6 eur dioc'h renk, e veze kanet al Litanioù, psalmoù ha kantikou. E Milan ar prosesion a ziblase da c'houlou deiz hag a bade betek 3 eur goude kreisteiz o vizita 13 iliz d'al lun 9 d'ar meurzh, 11 d'ar merc'her. An holl a gerze diarc'henn, gwelout a reer zoken ar rouaned o unan o tenna o botou hag o heuilh ar groaz e mesk o zujidi, evelse e rae an impalaer Charlez Veur, Santez Elizabeth a Hongri, sant Charlez Borrome, arc'heskop Milan... E meur a lec'h e veze lakaet ludu war bennou an dud araok diblas, evel ma reer breman da verc'her al ludu.

Rom, pa zigemeras ar Rogasionou en he lidu, a lezas a gostez ar yun, dre ma 'z oar en amzer Bask, hag a c'hourc'hemennas hepken, ar vijil. En amzerioù diweza-man an dud en hor bro a zo deut da veza ken lezirek da heuilh lezenn ar vijil ma 'z eo bet red da galz a eskibien goulenn ma vefe savet al lezenn-ze diwar o zujidi.

N'eus ket c'hoaz pell ar prosesionou-man a veze heuilhet gand eun niver bras a dud, pep penn tiegez a gase unan bennak eus e di, ma ne c'helle ket mont e unan, da c'houlou ouz ar zent a zo breman en nenv teuler eur zell a drugarez war o breudeur a zo c'hoaz war an douar, ha pedi Doue da skuilha e vennoz war ar re man evit ma c'hellint ive d'o zro tizout an eürusted peurbadus. En hon amzer, siouaz, e welomp bep bloaz an dud o laoskaat war ar poent-se, ha koulskoude, hirio evel gwechall, Doue a glev ar pedennou a gaser d'ezan hag a skuilh e c'hrasou war e zervicherien evid o zikour da ren eur vuhez e gwirionez kristen. Setu aman eur merk sklear a gement-se:

D'ar 25 a viz ebrel 1907, en eur barrez a vro Gerne, e oa vestrez tiegez, ha n'eo bet morse falvezet ganti chom hep kas unan eus he zi da heuilh ar prosesionou-ze pa ne c'helle ket mont he unan; da zeiz gouel sant Mark eta e sav mintin mat, pell araok goulou deiz, evit ober he labour wardro he zi, rak n'he deus na matez, na mevel, hag ar vugale a zo c'hoaz bihanik. Kas a ra o boued d'ar moc'h, o gwelien d'al leueou bihan, meska ra an dien, goro ra ar zaout, renka ra ar zoubenn evit ma c'hella an tad aoza lein d'ar vugale ha mont d'ar park pa vezo deuet ar mare.

Goude lein, ar c'hosa eus ar vugale, oajet a 9 bloaz a zeu da luskellat ha da c'hoari d'e vreur bihan oajet a 5 pe 6 miz, an tad a ya da gas ar zaout er maëz, pa oa o vont gand ar gazeg d'ar park e tremenas dre gichenn ar puns, an ebeul, ha ne wele ket c'hoaz gwall sklear, n'hen doa nemet tri dervez, a-stokas e vruched ouz penn moger ar puns; pa ne c'helle ket mont larkoc'h e savas war e dreid adrenv hag e klaskas lammet dreist ar pez a vire outan da heuilh e vamm, hag, evel a c'hellit kredi, e lammas war e benn er puns. Ar paotrig a oa o sellout dre ar prenestr hag a welas an darvoud o c'hoarvezout; strafuilhet holl e teuas er maëz en eur lenva; kredi rae e c'helle ober e gaonv d'an ebeul bihan, rak ar puns en deus 60 troatad dounder. An tad, o tizrei da gas ar gazeg endro d'he c'hraou, a lavaras d'ezan: « Kit buhan, va mab paour, da c'houlenn skoazell eus eun tu bennag ». Hag evit gwir Petra c'helle eur c'hrouadur 9 bloaz nemet kas kelou d'an amezeien. Ar paotr bihan a ias eta en eur zifruka betek kear e amezeien wella; ar vestrez p'e welas o tont el leur a ziskredas raktal war eun darvoud bennak, buan e teu d'e gaout da c'houlenn Petra oa erruet. Kerkent ha m'en doa gallet ar mousig rei d'ez. Da intent Petra oa digouezet e c'halvas he faotred, hag e klaskas lakaat eun tammig levenez e kalon ar paotrig paour, glac'haret bras, en eur lavaret d'ezan e vefe bet tennet an ebeul er maëz araok m'en defe amzer da vervel en dour.

An tad kennebeut ne jome ket da varc'hata na da skrabat e benn, rak, evid eun tiegez paour, koll eun ebeul

bihan a zo eur gwall zarvoud. Penaos e vezo paet gouel Mikaël ma n'e vez ket eul loan bennak da werza? Penaos e vezo dalc'het bara hag aman war an daol, savet ar vugale ha kaset ar stal endro?

E unan er gear, an tad a glaskas diskenn er puns kenta ma c'hellas; gwasa zo ar voger ne ya nemet beteg an hanter, goude ar puns a zo ledan bras, ar gordenn oa ouz ar marp evit tenna dour n'oa ket krenv awalc'h evit dougen eun den; red mat oa d'ezan dont er maëz, hag o welout ne zeue den c'hoaz ez eas en eur redadenn beteg ar geriadenn dosta. Tud ar geriadenn, o zri el leur, a gemeras kerdin hag a zeuas buana ma c'helljont. Pa oa skoulmet ar c'herdin ganto, e oa eur paotr yaouank eus ar geariadenn all (bet galvet gant ar paotrig bihan) o tont er porz... Breman n'oa mui nemet diskenn ar mestr er puns evit staga an ebeul bihan, an amezeien hen tenno er maëz buana ma c'hellint.

Pa oa diskennet ar mestr er puns e welas e ebeul bihan en e zav, dibistig ha divac'hagn, an dour n'oa ket doun, eun troatad hanter pe zaou, awalc'h evit dont da douch ouz kof an ebeul. Pa welas e pe stad oa e loan oa laounnaet e galon, eun tammig fizians a gemeras, hag e c'houlennas sier ha liseriou da lakaat endro da gorf ar paourkaëz loan evit galloud her staga hep hen diaeza re. Gant kemer kalz a evez e oa tennet an ebeul er maëz hep ober re a zroug d'ezan. Pa oad oc'h hen tenna war ar porz edo ar paotrig o tigouezout an daolou c'hoaz en e zaoulagad, met buan e teuas al laouenidigez da bara war e dal o welout n'oa c'hoarvezet droug ebet. Kerkent ha ma oa diskoulmet ar c'herdin ha tennet kuit ar sier a oa endro d'e gorf, an ebeul a zavas anezan e unan hag a c'balvas e vamm en e yez, edo o vont en ti pa yeas unan d'e vleina d'ar c'hraou; en eur erruout e kichen e vamm ec'h en em lakeas da zena, hag e gwirionez, sec'het a c'helle kaout, rak me gred oa bet tommet oc'h ober eun hevelep tro, hag an dour e strad ar puns a oa divlaz e kichen laëz ar gazeg. An dud oa en em gavet war al lec'h a jomas, evel sebezet, eur pennadig da zellout outan, ne c'hellent ket kompren penaos en doa gelllet eun ebeul a dri dervez dont euz eun toul evelse hep an distera kignadenn, holl ec'h anzavent e oa eno eun dra vuzudus hag a zo dreist galloud tud ar bed ma, « rak goude kemer ar brasa evez, emezo, ne c'hellfemp ket diskenn an ebeul endro er puns hag e denna er maëz hep ober muioc'h a zroug d'ezan, e riskl e vemp d'her mouga. »

Goude e oa red tenna ar mestr e unan er maëz; heman ne oueze penaos turgarekaat awalc'h e amezeien evid ar skoazell o doa roet d'ezan. Eur pennadig goude oa kaset ar gazeg hag an ebeul da bark al leur, an amzer oa eus ar braoa. Nebutoc'h eged eun hanter eur e oa padet ar reuz bras-se.

Keit ha ma tremene an traou man ar vestrez a oa o pedi gwella ma c'helle, goulenn a rae ouz ar zent a zo en endro. Eun dra bennak a oa koulskoude en he spered rak er eur dremen dre di eur c'hoar gaër ez eas eun diou pe deir gwech da zellout ouz ar puns, ha ne c'hellas ket azeza eur pennad da eva eur volennad kafe, mall bras he doa da erruout er gear. En eur dremen dre an ti-forn ez eas da gerc'hat eun dorz vara; eno e klevo ar reuz, a zo bet en he zi abaoe ar mintin. Kredi a ra ez eo kouezet an ebeul er puns, met ne gred ket ez eo tennet er maëz dibistig, sonjal a ra ez eo kollet evit mat, ha ma n'eo ket amaro c'hoaz ne zaleo ket da vervel. Buana ma c'hellas e sammas he zorz vara hag e kerzas warzu ar gear, he spered nec'het bras. A vare e rae eur bedennig verr d'an Itron Varia-Lorretta, da zant Mark ha da zant Alar, patron ar c'hezeg, he japeled a zo ganti en he dorn, hogen re enkrezet eo evit hel lavaret. En em gavet tost d'ar gear, e wel an daou vrasa eus he bugale o vont, dienkrez kaër, da welout eun neiz pig. Ar re man a lavaras d'ez e oa gwir ar pezh he doa klevet en ti-forn, ha n'oa c'hoarvezet droug ebet, setu ma teu he spered da ziuulaat eun tammig.

En eur erruout el leur e welas he ebeul bihan er park e kostez e vamm, n'oa ket c'hoaz sec'h tre ar bleo warnan, met n'en doa ket a zoare da gaout eun distera diaëzant. Neuze ec'h azezas eur pennad da gemer he alàn hag e lavaras eur bedennig evit turgarekaat ar Werc'hez, ar zent hag he el-mat da veza beilhet war he ziegez gwelloc'h eget m'he dije gelllet hen ober he unan. C'houi, lennerien, a lavaro hag a zonjo ar pezh a gerot, evidoun me a gred hag a gredo en deus Doue lezet an dra-man da erruout evit diskouez ne zilez ket ar gristenien a laka e gwirionez o foan evit plijout d'ezan. En tiegez-man en deus dibabet daou eus ar vugale evit en em woestla d'ezan, ar c'hosa a zo nevez aet d'ar gouent evit beza beleg ha manac'h, hag ar yaouanka he deus ivez kwitaet ar bed evit mont da leanez.

Eun test.

(1) E parrez Plogonnec eo ez eo digouezet ar pezh am eus lavaret uheloc'h.
Lakaat a ran aman anotou an testou a zo c'hoaz beo:
Jérôme Le Corre, Plogonnec;
Jean Le Bris, Plogonnec;
Jean-François Le Bris, Guengat;
Jean-René Le Corre, Plogonnec (heman n'en doa nemet 4 bloaz d'ar mare-ze).

Diwar-benn hor pardonioù

« Tadou ar Vro, c'houi Sent koz holl doujet
Ho pezit sonj eus hor mez, eus hon trubuilhou holl,
Na lezit ket hor Bro da vont da goll ».
J.-P. CALLOCH.

E kalon pep Breizad, diou garantez a zo gwriennet ken doun an eil hag ebenn:

Karantez Doue ha karantez ar Vro.

Ar garantez-vro zo diazezet war garantez Doue hag an eil ne gerz ket mat heb ebenn.

Karout ar vro eo karet tud ha traou ar Vro: hor familh, hor c'henvroiz; al lec'hioù dudiùs ma vevomp enno, hor bro abez; ene ar vro-ze, ar yez hon eus desket war barlenn hor mamm, ar gwiskamanchou a zouge hon tadou, ha dreist holl ar feiz a bare war o spered seder ha laouen hag a reizent diouti o buhez, an holl vadou-ze eo a dleomp da garout.

Hor pardonioù a dleomp da garout, rak diskouez a reont n'eo ket brein-pezell hadenn ar feiz en hor Bro, eo fresk-beo roudou ar Zent enni ha gleb c'hoaz gand o c'houezenn an irvi o deus digoret gant poan, diskouez a reont omp troët gant holl gizioù hor Breiz.

An diavezidi, pa dremenent gwechall dre hor bro evit gwelet he doareoù, a jome alies sebezet oc'h arvesti, o sellet a-ban ouz hon tud a yae a strolladoù, a vandenadour d'ar pardonioù, diarc'henn, diskabell kaër, heb ober van nag eus kignadenn, nag eus avel yut, nag eus ban-nou bero an heol.

Mantret, souezet e choment o welet traou ha n'oant bet morse boaz diouto hag e c'hellent, hep mar, lavaret ken etrezo ar c'homzou kaër-man: « Ar Vretoned a zo tud a feiz ».

Tud a feiz e oant: hon tadou pe zeuent d'ar pardonioù a zakramante peurliesha hag e dour meur ar binijenn e koezient, e walc'hent o eneoù kailharet hag ennan e kavent « ar gwir bardon », o zae badiziant a-lintre a nevez skedus, deuet adarre da veze gwenn-kann-erc'h.

War eun dachennig glazvezet an oferenn a glevent hag a heuilhent: eun drugar oa klevet mouezioù drant ha nerzus, ar gwazed, ar merc'hed, ar vugaligou, mouezioù eur boblad tud toueziet hag a unvan evit meuli o Doue, evit kana meuleudi, gloar patron o farrez, patron o bro. Lakaat a raent da dregerni ar maezioù tro-war-dro; ar pen-nou ed melen o tarevi a zeblante gouestadig daoublega ha rodella evel koummou ar mor dindan c'houez o mouezioù egiz pa vijent bet hejet gand eur mouch avel. Eur brao oa gwelet o kildrei, o c'hoari an dro, o troidellat evel eur ster arc'hantet dindan sked an heol, ar prose-

sionou hirr gand o banielou dantelezet aour ha seizennet kaër, stummet warmo dremmou Sent Breiz, a oa douget gant goazed gwenv, merc'hed ha bugale divorfil, pep hini gand e wiskamant marellet, dishenvel a liou ha ker kaër a zoaë ma tride, ma lammè gand ar joa hag al levenez kalon kement Breizad a garie tanva c'houekder, dousder eur pardon.

Ar re, a fell d'ezo, eme ar Barz, gouzout petra zo e goueled eneoù ar Vretoned, n'o deus ken nemet mont d'al lidou katolik lec'h m'eman daoulinet goazed ha merc'hed hor parrezioù, goulou ar bedenn war o zal... neuze e komprenint marteze...

En doare-ze eo e pardone eur c'halz eus an dud gwechall; a drugare Doue, n'omp ket evit kredi e ve aet da hesk, e ve dizec'het ar ouenn eus an dud-ze, ha bez' ez eus c'hoaz lec'hioù benniget ma teuer da bardona enno er c'hiz-se en hor Bro, met war ziskar ez eont...

Klevout a reomp hirio, e pep lec'h, hirvoudou doanious ha klemmou truezus, ha tro a zo, e gwirionez, da huanadi.

N'eus ket gwall bellou e lennen war an *Arvorig* ar c'homzou-man:

« Sevel a ran gant nerz, eme ar Yeodet, enep d'ar pleg fall kemeret gant re a dud eus hor bro, hirio. Mont d'eur pardon n'eo ket mont d'ober eur valeadenn eo. Neb a ya d'eur pardon a dle mont dre zevosion.

Hogen, eur c'hristen hag a ya d'eur pardon n'hell e bardon dougen frouez ha talvezout d'ezan nemed ober a rafe ennan e zevosionou. Er stumm-ze hag er stumm-ze hepken e vez graet eur pelerinaj, e vez heuliet eur pardon, e vez darempredet chapelioù ar zent. Mont d'eur pardon a hend all, n'eo nemed eur pleg fall, a lamm eus kalon ar Breizad karantez ar pardonioù evid ober outan eun « touriste » eur paotr hag a yelo da vale ha nann da bardona, eur paotr hag a yelo da redek bro ha nann da welet ar zent en o chapelioù brudet.

An dra-ze, Bretoned, a zo fall ».

Dre ma 'z a ar feiz eus hor pardonioù e welomp gouelioù safarus ha dizurziou stronsus a bep seurt o vouga-hor pardonioù hag o kemeret o flas.

N'eus ket eur Breizad kalonek, nec'het maro o welet an darvoudou a c'hoarvez gand e vro hag a venn he diskar a nebeudou, hag a jomfe evelse dizeblant hep kas davet hor Sent ar bedenn glac'harus man: « Gouzout a rit, c'houi, o Sent Breiz-Izel, gouzout a rit petra eo deuet da veza hor pardonioù, ar pardonioù-ze m'en em zispake enno kel ledan ha ker splann, en o c'haer, feiz, spered hag ijin hor ouenn. Ma ne deuit ket d'hor skoazella, ma ne deuit ket d'ar red d'hon harpa, hor pardonioù ne vezint mui nemet gouelioù distrantell, gouelioù trouzus evel ar re a weler e pep korn bro, gant redadegoù a bep seurt,

c'hoariellou divalo gouest da vouzara tud, ha gwasoc'h da lakaat sperejou ar yaouankizou, zo siouas krog enno klenved ar skanvadurez da drelli, hag o c'halonou da ziaela diwar an hent eün ma ne deuont ket zoken d'o c'hailhara, d'o zao tri gand ar strodenn louz a strinkont hag a lezont war o lerc'h.

Teurvezit, o Sent Breiz, ni ho ped, mirout hor pardonioù, ha grit na vezint morse lakaet mesk ha mesk, toueziet gand ar gouelioù a lez war o lerc'h eur vlaz c'houero: gouelioù donjerus ha danjerus n'int ken, o veza ma 'z int digristen ha divreizad ».

« Tadou ar vro, c'houi Sent koz holl doujet. Ho pezit sonj eus hor mez, eus hon trubuilhou holl. Truez, na lezit ket hor Bro da vont da goll. »

Na lezit ket hor Bro da vont da goll... hag evit diarbenn eun darvoud ker spontus, Breiziz, evit derc'hel divlamm, digemmesk ho pardonioù, sankit doun en ho penn ez eus, dreist an heol a bar skedus e kreiz an nenv glas, eun heol skedusoc'h c'hoaz hag a dle para en ho spered, hag an heol-se eo ar feiz. An heol-se, mar sklerijenn ho spered a dle ouspenn tommât, entana ho kalon-ouz traou ho Pro.

Lavaret a reer, ha n'eo ket heb abeg, sur awalc'h, eo dies kenan karout eun dra bennak pa ne vez tam m anaoudegez ebet anezan: « tra dianavezet n'heil ket beza karet.

Mar deo gwir kement-se, deskit buhez Sent ho Pro-deskit pebez galloud dispar o deus ar Zent-se war galon dener an Aotrou Doue, pebez c'hoant o deus da skora, da harpa, da skoazella ac'hanoc'h war an douar, pebez youl vras o deus da veza enoret, meulet, pedet ganeoc'h. Evit m'ho pezo gwelloc'h anaoudegez eus ho Sent, e saver breman e meur a lec'h, peziou c'hoari a zispleger enno burzudou ar Zent, Sent hor Bro. Dounoc'h e chom er spered ar pezh a weler gand an daoulagad eged ar pezh ne reer nemet kleyet gand an dioukouarn. Kit eta da welet an traou kaer ze hag ho kelenno war buhez ho Sent ho peus ezomm da anaout ma fell d'eoc'h karet ar pardonioù a zalc'h envor eus ar Zent o deus hadet ar feiz en hor Bro. Anez, e c'hellimp abarz nemeur mont da glask hor pardonioù, ne gavimp roud ebet anezo ken, lazet e vezint didruez, mouget dindan ar gouelioù ma 'z eer enno dorn-ouz-dorn. kazet-ouz-kazel, lec'h ma 'z eer evit beza gwelet hag evit gwelet, ha gwaso pezh a zo evid en em vezvi, evit koroll. hag evelse, diouz ma lavare eur c'hantik a ganed gwechall e Bro Gwened, e lec'h kaout ar pardon e kaved eno an daonasion. Red eo trei kein a-grenn d'ar gouelioù-se, gouelioù eneb ar feiz ha dreze enep Breiz.

Gwelet e vro kaer-gwisket gant he farkeier leun a eost, he zraoniennou, he stankennou didrouz, he menezioù gand o lanneier alaouret hag o mantelloù brug ruz, gand ar mor bras a gelc'h anezi, a ruilh e darzioù tro-dro

d'ezi, a zoug ar Breizad da fougeal, da garout startoc'h ha kalonekoc'h anezi. Gwelet ivez gwiskamanchou marellet hon tudou dispaket, o tiloueda deiz ar pardonioù, hon doug da garout muioc'h traou hor Bro, da zarempredi muioc'h, aliesoc'h hor pardonioù. Warlerc'h gwiskamanchou ar vro, warlerc'h gwiskamanchou ar parrezioù e vennont koueza d'an traou d'o zro. D'an droug-man, Breiziz, eo red terri e benn, ha d'eoc'h c'houi eo staga d'al labour trumm ha trumm.

Gouzout a rit eo diboell, divoued spered ar re a zonzj trei kein da gement tra en deus taolet brud vat war o c'hentadou. En doare-ze, e tiskouezit beza berrwelet, merc'hed, pa zonzit eo gwelloc'h gwiska dilhajou kêr evel ma teufe d'eoc'h spered ha gened gand ar c'hoz traouezioù a gaver eno o rodella war an dispalu.

Ma ouije ar Vretonezed n'eus, e nep lec'h, kaer o dije klask, tud, merc'hed hag o dije kaeroc'h gwiskamanchou egedo p'o deus gwisket o mouchoueroù hirr, o zavanjeroù brondet, o lostennou pe o broziou eo ar riblennet aour pe arc'hant, ma oufent pegen dudius ez ar gwel anezo gand o c'hornetennou dantelezet-gwenn, ne gredan ket e tilezfent buan ar pezh a c'hoanta mirout ar merc'hed ar pella, daoust da bep tra, da lavaret eo: o gened.

Merc'hed, goazed, dalc'hit d'ho kwiskamanchou, dalc'hit d'ho kened; anez, hor Breiz a vo dishenvel he doare, hor Breiz ne vo mui hor Breiz p'o devezo an dud enni echenchet o gwiskamanchou ha dreist holl p'o deveze dilezet gwiskamanchou ar pardonioù.


Dalc'homp eta mort da c'hizion hor Bro; met evit he ober eo red aman adarre derc'hel mat d'ar feiz, rak ma teu an dud yaouank da bennfolli ha da redek gant kemend a herr hag a diz warlerc'h ar ficherez displeg ha dreist holl warlerc'h ar c'hoarioù eo, o veza m'eman ar feiz o semplaat, o laoskat, o koll eus he levezon, eus he nerz war ar sperejou. Eno eo eman penn abeg hag eienenn an holl zizurzioù-ze.

Bevit eta ho feiz ha neuze an nevezention touellus ha direiz, ar boazioù fall a zeu a ziavaez-bro ne gavint digemer ebet en hor Breiz. Pedit ivez alies Sent ho Pro, pedit anezo c'houek ha kalonek ma tiredint eus lez an nenv d'hor selaou ha ma adsavint Breiz ker splann ha gwechall; adnevezet he ene, adnevezet he nerz, adkavet he spered ganti, estlamm a ray c'hoaz ar bed koz gant he feiz.

O Sent Breiz...

« Truez, na lezit ket hor Bro da vont da goll ».

E. A.



Kentel an Aotrou Terrel

An den a rank debri, hag ar boued a deu eus an douar. Hag e tle eta an douar beza labourer, pe e vanko boued da zebri.

N'eo ket red e ve an holl o labourat, met red eo e ve a-walc'h a dud war ar mēz. Ar mekanikou nevez a zo breman stank e pep lec'h, al labour a vez gret buanoc'h hag aesoc'h, met endro d'ar mekanikou e rank ato beza tud ha kalz tud.

Hogen, e pep lec'h, e teuer da zilezel ar parkeier evit mont d'ar c'heriou.

En Amerik, er Stadou-Unanet, eus 1910 da 1920, e dek vloaz, eo deuet an dud war ar mēz da veza 26 war 100, e lec'h 33

En Allmagn, ez oa e 1882 42 war 100, hag e 1907 n'ez oa mui nemet 20 war 100.

E Bro-Zaoz, ez eus pell amzer, ousspenn 300 vloaz, abaoue m'eo en em lakeet an dud da vont d'ar c'heriou. Hirio, e Bro-Zaoz, n'eus mui nemet ar bempvet eus an dud o veva war ar mēz. Ar re all a zo er c'heriou. Rak-se douar Bro-Zaoz a ro a vec'h an drederenn eus ar boued a zebri an dud, hag epad ar brezel, ma ne vent ket trec'h war vor, ar Zaozoun a vankfe boued d'ezo hag a rankfe soubla d'o enebourien.

E Frans, ez omp ive war hor c'hiz, ha bep bloaz ar meziou a goll gant ar c'heriou. E 1850, ez oa war ar mēz 75 dre 100 eus an dud. E 1901, n'ez oa mui nemet 59 dre 100, hag hirio ez eus a vec'h an hanter. Ma kendalc'h an traou da vont evelse, dizale e vo kalz muioc'h a dud e kêr eget war ar mēz.

Red eo enebi ouz ar c'hlenved-ze a laka an dud da zilezel ar meziou. Seul-vuioc'h a dud a vo o labourat an douar, seul binvidikoc'h e vo ar vro. Boued a vo da zebri, an arc'hant ne vo ket roet d'an Amerikaned evit prenaed; muioc'h a urz vat, a furnez a vo ive, rak peurliesia ar re a zo o labourat douar hag a gar chom en ti m'int gant ennan, ar re-se a zo tud fur, tud a gar ar peoc'h hag al labour. Yac'h int ive alies, krenv, o veza m'o deus ear vat, e lec'h tud ar c'heriou, o veva e toullou tenval a-wechou, hep finval a-walc'h o izili, a goll buan o nerz hag o yec'hed, ousspenn ma kollont o furnez o vont da heul tud ar freuz hag an drailh.

Ar c'houarnamant a dlefe sonjal muioc'h en dra-ze, ober ar pezh a c'hell evit dalc'her an dud war ar mēz. Ar vistri-skol, dre o c'henteliou, a c'hellfe lakat ar vugale da garet ar parkeier, diskouez d'ezo ez int eun tamm mat eürusoc'h war ar mēz eget er c'heriou.

Ar re a boanio da lakat an dud da jom war ar mez, a labourou evit mad ar vro.

AL LABOURER.

Dallet gand ar gasoni

Evel ma skrive Aotrou 'n eskob Kemper en e Lizer korreiz diweza, ar framasoned a zo en o c'halon eur gasoni spontus, diaoulek. Kement a zigas d'ezo da zonj eus a Zoue, eus e Iliz, o laka e kounnar, hag o flijadur eo skei war al Leanezed, merc'hed santel ha didrouz, ne c'houlennont nemed ar peoc'h evit pedi ha servicha an Aotrou Doue.

Gwelet eo bet adarre an dra-ze warlene, kercent ha ma krogas ar framasoned e stur ar Frans, goude elekcionou an unnek a vae. Dioc'htu ec'h en em gemerjont ouz al Leanezed hag e klaskjont kas adarre d'an hariu, eus Alençon hag Evian, Leanezed eus a urz Santez Klara.

Perak e reant kement-se? Heb abeg ebet. Evit senti ouz o fallagriez, ouz ar gasoni a oa en o c'halon enep merc'hed a gare ar relijion gristen. Ouz an Alamanted e komzent goustadik ha zoken gant doujans, met rok int ha dichek ouz merc'hed dinerz n'o deus d'en em zifenn nemed o feiz.

Tud kriz ha dinatur, hardis hepken ouz Doue, tud disleal, digalon, setu petra eo ar framasoned.

An holl dud onest e Frans a voe glac'haret ha poaniet pa glevjont edo adarre ar c'houarnamant o vont d'ober brezel d'ar c'houenchou, hag er broiou all an dud a voe souezet ive hag a lavare: « Eman adarre kollet he fenn mat gand ar Frans... Ha gand ar vez, ar c'houarnamant a lezas e peoc'h al Leanezed, evid eur pennadig da vichana.

Klevit breman petra o deus gret Leanezed eus urz Santez Klara, nann re Alençon na re Evian, met re all eus o urz, c'hoarezed d'ezo. « Ni ive hon eus gret ar brezel. Harluet er Beljik, omp bet, e miz east 1914, dindan boliji kanoliou an Alamanted; bevet hon eus e kreiz ar spont hag an anken, etouez enebourien kriz ha lorc'hus, epad tri bloaz hanter. Gret hon eus ar brezel o rei sikour da zoudarded Frans chomet war an dachenn goude gwall stourmad an 23 a viz east e D... er Beljik.

Bete-vreman omp chomet sioul, n'hor beus lavaret ger eus ar garantez hon eus diskouezet e kenver hor breudeur mac'hagnet. Evit Doue hag hor bro eo e labouemp, ha, n'hor bije ket komzet eus an dra-man, paneve an traou a zo c'hoarvezet e Alençon.

Ni, Leanezed a urz Santez Klara, harluet gant lezennou fallakr ar bloaz 1901, hon eus saveteet o buhez da ousspenn 80 soudard a Frans, chomet war an dachenn a vrezel. An Alamanted o-unan o deus lavaret d'omp: « Ma n'o dastumit ket, e chomint aze da vervel... Holl int bet dastumet ganeomp, digaset d'hon ti; hag hon eus gret

d'ezo gwella ma c'hellemp. Ar gear m'edomp enni o chom a oa bet laeret ha devet ouspenn an hanter anezi; mil boan hor boa o kaout eun tamm boued. Tri dervez penn da benn omp chomet hep debri tamm, ne gemeremp nemet dour, evit gellout rei peadra d'ar zoudarded, hag epad dek pe zaouzek dervez hon eus kousket war an douar pe war eur plankenn, hor penn harpet war eur gador pe delezenn eur skalier, hag e c'hellemp diskuiza eun tammig; dindan ar zoudarded edo kement a oa en hon ti.

Klevet a rajomp Beljed o lavaret d'eomp evelhen: « A! Ar Fransizien o deus ho kaset er mez eus ar vro gwechall. Breman int eürus o kaout ac'hanoc'h d'o louzaoui ha da entent outo ».

Eat omp beteg en em lakat e riskl da veza fuzuilhet o sikour ar brizonerien da zistrei d'o bro dre ar Holland, o rei d'ezo dilhad a reamp epad an noz en eur lakat eur pallenn dirag ar prenestr evit kuzat sklerijenn ar gou-lou, rak difennet oa kaout sklerijenn epad an noz.

Unan eus ar brizonerien a oa eus Reims, hag a rede abaoe bloaz er Beljik; eun all a oa eus Begard (C.-d.-N.). Ma ve bet gouezet petra reamp, e vijemp bet lakeet d'ar maro...

Digaset omp bet d'ar Frans dre ar Suiss gand an Alamanted, e 1917, bloaz araok fin ar brezel, ha resevet mat e voemp er Frans: hen diskleria a rankomp evit meuli ar c'houarnamant a oa neuze... Met ar c'houarnamant a hirio a glask en em c'holo a vez o paea dre an harlu ar pezh hon eus gret da zoudarded Frans. Met, e c'heller kredi, n'ez aimp kuit nemet dre nerz; ar c'houarnamant a c'hello, ma kar, hon dougenn er ru, en doare m'hon eus douget ar zoudarded diwar an dachenn a vrezel betek leandi evit louzaoui anezo. Evelse e vo gwelet skleroc'h pegen dianaoudek e vo bet ar c'houarnamant en hor c'henver ».

Setu aze petra skriv Leanezed Santez Klara, nann evid en em veuli, met evit sevel eun tammig o mouez d'en em glemm. Rak, lec'h o deus d'en em glemm.

Penaos? An dud fall, ar re o deus en em guzet epad ar brezel, ar re zoken o deus labouret eneb o bro, a zo roet aotre d'ezo da zistrei e Frans! Ha merc'hed santel, o deus kemeret kemend a breder gant hor zoudarded ma c'hagnet, ne c'hellint ket chom e Frans da bedi ha da veuli Doue?

Al lezenn a zifenn, eme ar framasoned.

N'ho peus ket a vez o komz evelse? Ma 'z eus lezennou da zifenn kement-se, al lezennou-ze n'o deus talvoudegez ebet. Torret hag eünet e rankont beza, ha buan rak mezus int evid ar vro he deus o douget.

J. U.

LEVRIOU NEVEZ

« Sketla Segobrani »⁽¹⁾

vit bale war a-raok, forz gant petra, eo red d'an den kaout pe lakat dirazan eur pal bepred pelloc'h da dizout.

X^e hag o deus skrivet gant kalz a ouiziegez an daou levri « Sketla Segobrani » o deus laket, vit ar yez, eun dramskeud eus ar pal-ze du-ze, dirazomp. Studiet o deus piz ar geriadurioù brezonek ez eus enno eun tenzor gemou n'int ket ken laket en impli; savet o deus gerioù nevez, pe dem-nevez, ouz en em harpa war gerioù anavezet hag a astennont en eun doare pe zoare.

Grêt o deus d'ar gerioù brezonek adveva etre o daouarn, dont d'ober evel boutou nevez, da groui daouarn-lavar nevez hag a respont da holl ezommou ar spered.

Nemet spered ar bobl n'en deus ket kemend all a ezommou hag ar pezh en deus, e klask mui-ouzmui kaout tro d'o diskleria e galleg.

Eun hent hir en deus ar bobl da ober a-benn arruout er pal merket gant brezoneg ar « Sketla ».

Ha c'hoaz en hent-ze e renko bezan renet ha harpet a-zoare!

Brezoneg seurt gant heman a zo brezoneg skol; er skol e rank bezan desket. N'eo ket brezoneg diwar barlenn ar vamm eo; ar re o deus hen savet n'eo ket eno o deus bet o c'hentan kentelioù brezonek. Gant-se, ijin ar bobl, pa c'houezo ennan, a reio en e douez gwenojennou nevez; met eun diazez eo, koulskoude, hag eo red ober gantan; diouz an töl-êsa kentan-ze e vo grêt ar re all, da gas ar brezoneg da heul hon amzer.

Ya, al levriou-ze ha n'int ket bet savet er skolioù a c'halv ar mestr-skol d'o studia ha da ranna an danvez anezo etre ar vugale...

Siouaz, aman an eil a zo diouer anezan evit egile. Mar 'z eus mistri hag a c'hed levriou brezonek, stankoc'h eo ar skolioù hag a zerr outo o dor!

Alies em eus sonjet en eur skol savet ha dalc'het gand ar Vretoned a gar o bro, na pa ne vije nemet unan hepken, en eur c'horn a Vreiz, a gelenne ar vugale hervez o yez, o spered hag o istor... Keit ne vo ket eur skol evelse

« Sketla Segobrani » henvel ouz eur varc'hadourez c'houek, met dizanvez, n'hellou nemet boulc'ha etouez ar Vretoned ar vad eo galvet d'ober.

D. N. D.

(1) E gwerz e ti: M. F. Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieuc.

Atlas linguistique

Atlas linguistique de la Basse-Bretagne, par P. Le Roux, chargé du cours de celtique à la Faculté des Lettres de Rennes.

En vente chez Plihon et Hommay, 5, rue Motte-Fablet, Rennes et chez Champion, 5, Quai Malaquais, Paris.

Ar pikol labour-man, kentan hini er stamm-ze a zo bet savet e Breiz, a zo ennan 100 kartenn geriou pe zoareou-lavar brezonek. Gant ze, ar ger alan, *haleine*, a zo merket war eur gartenn Breiz an doare ma tistager anezan en 77 parrouz adalek inizi ar Morbihan betek Brest ha Plouha: *alan, éton, anal, anar*, etc.

Al labour-ze a zo kaset da benn vit 134 ger pe zoare-lavar.

Kentan lodenn an « *Atlas linguistique* » a zo moulet hag a zo e gwerz.

Laouen e vezer o welout an dud gouziieka, elec'h 'n em drei gant ar galleg pe gant yezou all o lakat o studi hag o amzer da adnevezit o yez o-unan.

Trugarez d'an Ao. P. Le Roux en deus gouestlet kement a ijin hag a boan da rei d'ar Vretoned tu da anaout gwelloc'h o yez.

LA NATION BRETONNE, conférence sur l'Histoire de Bretagne, faite à Quimper, le 8 septembre 1924, par M. le marquis de l'Estourbeillon, Président de l'U. R. B.

L'ex. : 0 fr. 50; les 50 ex. : 22 fr.; les 100 ex. : 40 fr.
Demander cette excellente brochure de propagande en écrivant à l'Auteur, M. de l'Estourbeillon, 4, rue du Vieux Colombier, à Paris.

TAD KOZ, Récits et souvenirs, par le Dr V. Thésée.
Prix: 7 fr. 50.

Le demander à l'enseigne de l'hermine, 41, rue du Casino, Dinard.

CHANOINE PÉRENNÈS. — LA MORT EN BASSE-BRETAGNE. Prix: 1 franc.

S'adresser à la Direction diocésaine des œuvres catholiques de jeunesse. Rue Fenteunnig-al-Lez, Quimper.

Librairie Le Goaziou, 7 rue Saint-François, Quimper
F. CORNOU. — HISTOIRE et GEOGRAPHIE du FINISTÈRE, avec une Lettre-préface de Monseigneur DUPARC, évêque de Quimper et de Léon. Brochure de 56 pages (185x260) sous couverture illustrée.

12 Cartes dont une hors-texte (235x235) 40 gravures dont 3 photographies prises par avion.

Prix: 2 fr. 75 sans majoration. (Remise de 10 % aux Ecoles et Institutions).

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

V^{et} PENNAD

An Evach

Dimerc'her, ez eus bet pemzek dervez, edon gand ar zaout hag e sonjen penaos e c'hellfen trei ar pennad marvailhou-man, pa deuas davedoun Jakou, potr ar post, eul lizer gantan en e zourn.

— « Aman 'z eus eul lizer d'eoc'h, tintin, digant ho nizez vihan, me ' gred ». Kregi a ris er paper, lakaat a ris va lunedou, ha setu aman petra ' lennis:

VA ZINTIN ANNA,

E-doug ar wech em eus bet fizians ennoc'h; rak-se e teuan hizio, gant hardisegez, d'ho kaout dre al lizer-man.

Meur a dro hoc'h eus va frealzet; konta ' rin d'eoc'h eta va nec'hamant, evel ma raen p' oan yaouankik; neuze ma hoc'h eus sonj, e lakéc'h ho tourn war va fenn, ha gant teneredigez e c'houlennec'h ouzin: « Petra ' c'hoarvez ganez, merc'hig? » Hizio koulz ha gwech-all, e respontin freaz: Daou vloaz a zo abaoe emañ aman dimezet d'eul labourer yac'h ha krenv, mat em c'henver. Hervez va zonzj, Glaoda n'en deus si ebet; ne deo ket ailhon; kempenna ma c'hell e ra, koulz ha me, gand an nebeut hon eus: derc'hel tiegez a goust hir, forz pegen dister e vez, hag eur maread mizou hon eus bet betek-hen.

An traou a zo dilastez ganen, ar prejou aozet mat; eur skudellad laez dirak pep hini; eur picher neat ha braodalc'hmat e kichen eur podad dour fennteun.

Hogen, va zintin, eno eman an dalc'h! Glaoda; hep beza eul lonker, a gav mat ar banneou, hag er gêr, evel just, n'en deus ket. Nec'het oun! pe rei evach d'ezan pe chom hep hen ober. Ma roan, eman va gwaz e riskl d'ober eur mezvier, kemeret a ray ar voaz fall da eva er gêr! Ma ne roan ket eo ker gwaz all rak eva a ray e lec'h all pa 'n devezo tro. Eur wech bennak em eus gwelet n'edo ket war yun oc'h en em gaout er gêr; ha disul da noz, da betra hen nac'h, oa anet warnan! Roit eun ali d'in, me ho ped, ha pedit Doue evit ho nizez vihan a-wel da veza reuzeudik. »

Eur pennad oun chomet mantret! Eun dizenez eus va chapeled am eus lavaret raktal evid ar wreg yaouank-se,

ha diouz an noz, p'oa achu va labour ganen, em eus klas-
ket eur bluenn, eun tamm paper gwenn, hag ouz ar gou-
lou, e penn an daol em eus graet ar respont-man:

« Marc'haridig, nijal » ra va c'halon war-zu ennout:
ne vezi biken dilezet gant da voereb goz. Evelato e keme-
rez re a boan-spered, rak ne deo ket kollet ar stal a dru-
garez Doue. Glaoda a zo eun den fur: ne day ket dillo
d'ober mignoniez gant lokerien ha re gempenn eo ouz
e wenneien d'ober e-unan kofajou en osteleri!

Hep mar ne fell ket d'in gwall-gomz eus an dour. Ben-
noz da Zoue, pa 'n deus lakêt en douar eienennou fresk
evit terri hor sec'hed! Bemdez ec'h en em servichomp eus
an dour: yen pe vervet, er c'hafe pe er soubenn e reomp
impli anezan, ha ne sonjomp ket a-walc'h trugarekaat
hor C'hrouer eus e zonezon kaer. Ha, koulskoude, petra
' rafemp hep dour? An douar sec'h-korn a deufe dillo da
veza ker skarnilet ma varfe an traou warnan, rak an dud
koulz hag an anevaled hag an distera yeotenn a rank kaout
dour evit chom beo ha beza seder da labourat. Mat e rez,
eta, kerc'het bemdez en ti eur podad dour feunteun,
skanvoc'h eget dour puns; met... estreget dour a c'hel-
ler da eva. Er gwin ez eus dour ive-hag eur banne gwin,
pep an amzer a ra vad, gant ma ne ever ket re anezan.
Ar gwin a ziskuiz hag a gennerz an den, hag a laouenna
ar galon.

Evel a lavar kanaouenn trede *Arvest Mouez ar Gwad* a
zo gwir:

Ar gwin a ro nerz d'an dud keiz.

Lakit gwin ruz, lakit gwin gwenn,
Ken a vo karget ar werenn,
Ar gwin a fuilh spered er penn
Kanomp holl 'ta breman!

Ohe! ohe! yec'hed d'eoc'h c'houi!

Mestr eus an ti

Ha d'ar vestrez yec'hed ivez

Ohe! ohe! yec'hed d'eoc'h c'houi,

Mestr eus an ti

Ha levenez hed ho puhez!

Ya, ya, Marc'haridig, ro gwin d'az kwaz heb aon! Eui
litrad, pep sul, a lakaio anezan eürusoc'h er gêr hag e
bellaio diouz an osteleriou. Gwin a lavaran avat pe
c'hoaz chistr ha nann gwin-ardant. Ne oa ket da d'in end-
eeun hen henvel aman na konta d'it ar c'hant mil torfed
graet gantan. Ma ra vad eur banne gwin, ma tiskenn ar
boued d'an traon gand eur picherad chistr, an « hini
krenv » ne ra nemet droug. Kontammi a ra ar gwad, sevel
a ra d'ar penn, diskar 'ra ar yec'hed hag an tiegez; dis-
kianta 'ra an den. Hag a bet a c'hellfe beza kizellet war o
maen-bez ar c'homzou-man: « *lazet gand an alkôl* ». Hag

a bet az peus anavezet, te yaouank c'hoaz, hag a zo bet
kollet gantan?

Sonj az peus eus Laouig an Ti-Nevez a voe kavet maro
en eur stread, antronoz morlarjez? Ha Per ar Ger-goz, en
doa hanter-lazet e wreg hag e vamm eur sulvez m' oa
mezo? Ha Marivonn goz a zo en em veuzet en eur poull
o tont d'ar gêr deiz friko he filhor? Rak, ar merc'hed, pa
stagont da eva, a zo ker gwaz hag ar wazed pe wasoc'h.
Ha tost eo d'in lakaat ar bec'h warno pa dro eun tad, eur
breur, eur pried da eva.

Merzvierien diskiant, gwin-ardant milliget! Ha c'hoaz
ma ne rafent gaou-nemed outo o-unan! Siouaz! bugale
ar mezvier a vez anavezet mat! En o c'horf pe en o spe-
red, eman arzeziou boazamant fall o zud. Eur maread a
varv ez yaouank; ar re-ze, da vihana, a vez eürus. Lod
n'o deus na yec'hed na nerz, lod na skiant na kalon;
lod-all douget d'ar brasa torfejou a lazo, a laero ken na
varvint war ar chafod! Pebez rann-galon evid eun tad pe
eur vamm! sonjal int kiriek d'o bugale da gaout poan er
bed-man, hag, ar pez a zo gwasoc'h, da goll o ene da
viken.

Met pell emamp diouz ar gear ha n'em eus ket a c'hoant
e teufes da inoui ganen, te, merc'h vihan va breur Dôf.
Eur ger all araog echui: eman arrou an hanv, mare ar
gwall labouriou hag ar skuizder; o c'houezi epad an deiz e
vez sec'hed. Perak ne rafes ket, da-unan, eun evach fres-
kus na c'hellfe noazout da zen ha distanus d'al laboure-
rien? Ma plij ganez e kasin d'it, dre ar post, an doare
d'hen ober, pe welloc'h, deus beteg ennoun d'ar goue-
liou kenta hag e teskin d'it hen ober. Yac'husoc'h e vezo
eget dour kriz, eget laez ive, rak warlerc'h eur
medesin em eus klevet ne deo ket mat eva laez yen
pa c'houezer; dirisklusoc'h e vezo eget ar gwin hag ar
chistr na c'heller ket lonka re anezo; hag erfin, ne gusto
ket keit na tost! Bez dinec'h, Marc'harid ha kenavo ar
c'henta! A greiz he c'halon e pok d'it, da dintin Anna. »

Abenn ar zadorn edo va nizez em c'hear! — « En em
lakeomp dioustu, tintin, emezi, warc'hoaz eo d'in mont
kuit: mall am eus e tiskouezfec'h d'in penaos ober bier ». —
« Bier! piou a lavar eo bier? Estreget bier e c'houzon
ober michans! Hizio 'man tro ar piketez, va flac'h, rak
bier am eus graet pemp dervez a zo. Evelato e klevi ganen
da genta penaos em eus her graet; selaou mat! Prena 'm eus
graet, pa n'em boa ket, pevar lur vrenn winiz; o c'ha-
set am eus da di Loiz evit beza lakaet er founn da graza
pe da sec'ha nemet ken, epad eun hanter dervez. P'eo
deuet va brenn d'ar gêr em eus kerc'het daou zailhad
dour, da lavaret eo: war dro pemp litrad war n'ugent,
hag em eus lakaet an dour-ze da virvi war an tan; pa
verve, em eus taolet ar brenn ebarz, ha diou eur orolaj

goude em eus silet an dour brenn ha lakaet adarre war an tan da virvi epad diou eur all; met araok lakaat ar pod war an tan evid an eil gwech em eus taolet ebarz daou lur bleud-louzou, anvet « fekul » e galleg, hag eur c'hartoron-houpez (1) am boa kavet e ti an Apotiker; gand aon e vijent pouloudet em eus o glee'het hag o c'hemmesket en eur volenn. Abenn diou eur em eus lammet va fod diwar an tan, da yena ha divesket en eur skudell eun tamm goell-bier abarz hen teurel etouez an traou all.

Echu oa: en eur varikenn pe eun tonnellig neat eman va bier a c'hiz nevez da c'hedal ma vezo lakaet er boutailhou. Ne lakan stouvell ebet war ar varikenn. Kentoc'h a ze e teu ar goadur, me ' gred.

'C'han ' tal derc'hel a ri sonj?

E-lec'h respont, Marc'haridig a dapas peg em fluenn, em faper-lizer hag a gemeras ar pezh am boa diskleriet, gand aon da ankounac'haat.

— « Souezet oun ganeoc'h, moereb! Emaoc'h o vont d'ober piketez, ha ne welan tamm rezin ebet en ti!

— « Dioterez a leverez! ar re o deus rezin pe avalou a ra ganto: ar re n'o deus ket a rank... ober gant traou all! Pa 'z pezo drebet da verenn e tigasi d'in ar pakad deliou, a zo er zolier, em frez ».

Pa deuas d'an traon gant he c'hefridi, eur mouse'hoarz goapaüs war he muzellou, Marc'harid a c'houlennas:

« Pe seurt deliou eo ar re-man, maeronez va mamm?

— « Deliou-ön merc'h vihan. Bec'h az peus o kredi ar re goz ' ta? Kea breman, d'ar red, beteg ar feunteun gand ar zailh; ne deui ket ken dillo en dro bez ' sur rak an dour skanv a zo pounner. Pa 'z pezo karget da zailh seiz pe eiz gwech e vezo deuet kant litrad bennak ganez. Dindan an amzer-ze em bezo niveret kant delienn ac'hallen; neuze e lakaimp anezo en eur pod daou pe dri litrad dour ganto; hag ouspenn, da rei liou, eun hanter pakad chikore e-touez eun tamm lien fresk, skoulmet mat evel eur zac'had farz.

C'houez an tan breman ma vervo ar re-man epad diou eur; lakeomp hanter leun a zour er varikenn. — En armel e kavi nav lur sukr malet: laka anezo en eur bodez vras da deuzi gand eur banne dour tomm ha kemer da stamm mar kerez; me a zo o vont da c'hor ».

Noz oa dija pa deuas ar mare da gemmesk an dour diwar an deliou, silet evel just, hag ar sukr teuzet mat. Evit kaout an holl sun a zo ebarz an deliou e lakin anezo war an tan evid an eil gwech gant dour fresk.

— « Gortoz, eme-ve; araog o lakaat er varikenn, ez an da gemmesk en eur skudell: dek gramm goell-bier ha dek gramm ha pevar ugent eus eul louzou all anvet: « acide

(1) Houpez: houblon, e galleg.

tartrique », etouez eur banne dour, ken a vezint tano awalc'h da lakât gant an traou all. — Kea da glask eun abil koad d'o c'hemmesk adarre pa vezint en donell d'he leunia.

Lezomp distouv, evel ma 'm eus grêt d'ar bier, hag abenn eiz pe bemzek dervez e c'helli dont da danva va piketez hep rezin ha va bier marc'had mat.

— « Ha, ma ne deo ket kement ar varikenn du-man pe ma 'z eo brasoc'h?

— « Ginaouezez, e laki muioc'h pe nebutoc'h kredabl! Diouz an troad ar votez ». Ma c'hellez lakât daou c'hant litrad e laki daou c'hant delienn, triwec'h lur sukr hag all; ma ne deus tro da lakât nemet hanter kant litrad, hanter kant delienn-ön, pevar lur hanter a zukr hag ar rest henvel ».

Antronoz va nizez a yeas d'ar gêr, ha dec'h em eus bet diganti al lizer-man: « Tintin garet, poania 'n eus graet a hellit kredi, d'ober an daou seurt evach hoc'h eus desket d'in, kerkent ha m'oun en em gavet aman. N'em boa ket graet kalz betek gouzout ha plijout a rafe: diouz klevet Gloada, n'en dije ket ezomm d'o zanva. Setu 'm eus heuliet hoc'h ali ha plantet gwin d'ezan war an daol; ne deo ket hanteret ar voutailh c'hoaz, ha meur a litrad bier en deus lonket dija. Va zud-kaer a zo gwelloc'h ganto pike- tez a strink evel gwin Champagn, hag a zo koulz blazet ha limonad. Dizale e rankin redi va gwaz da eva eur banne gwin eur wech an amzer. Tremen en deus graet diou wech dre ar vourc'h hep chom a zav e kichen ar bod lore mil- liget. Gras d'ezan da genderc'hel ».

Dindan daoulagad va lennerien em eus lakêt al lizeri man; ne deo ket dre m'o deus talvoudegez, met marteze eur vaouez bennak eveziek ouz eurved he ziegez a denno eur gentel eviti, a glasko ober gwelloc'h eget m'he deus grêt betek hirio, gant muioc'h a gempennadurez c'hoaz, mar gell! »

TINTIN ANNA.

DIVINADENNOU

I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ EBREL

I. — An dour er villin. II. — An amzer. III. — Sevel egile. IV. — An dienn. V. — Azeza.

II. — EVIT RESPONCHOU TRI MIZ KENTA AR BLOAZ

O deus bet 300 poent :

Bugel Breiz, Gwitalmeze.

M^e Cabon, Guisseny.

Clet Coz, Cleden-Cap-Sizun.

M. D., St-Marc.

Louis Floch, Plomeur.

A. M. ar Goff, Gwinevez.

J. B. ar Goff, St-Thégonnec.

Victor Gouriou, St-Thonan.

Ch. ar Guen, Lambhezlec.

Euj. Guillermou, Coat-Meal.

M. Guyader, Lannefred.

René Jacolot, Gulpavas.

G. Le Jean, Pont-Melvez.

Mari Kervella, Plougastell.

L. Lars, Plouzané.
 Mari Laurent, Guipavas.
 F. Mear, Trézilidé.
 Felix Moal, Enez Vaz.
 J. P. Moal, Tregarvan.
 Penn-Kalet, Gwitalmeze.
 Yann Perrot, Rosko.
 M. Postec, St-Thonan.
 Fr. Pouliquen, St-Thegonnec.
 Ifr. Rolland, Mayenne.
 J. M. Salaün, An Trehou.
 M. A. Ségalen, Gouesnou.

O deus bet 260 poent :

August Abarnou, Plouvien.
 F. Evillard, Kastell-Paol.
 Mari ar Gall, Plougastel.
 Fr. Gourmelon, Plougastel.
 Yann Guere'h, Kastell-Paol.
 Azilis Kerrien, Plouenan.
 G. Kersimon, Plabennec.
 Henri Madec, St-Divy.

O deus bet 240 poent :

Yann Cadiou, Kastell-Paol.
 Hekleo, Lannurvan.
 Henri Larvor, Meilars.
 Josephina Lossouarn, Guisseny.

Annaig ar Stum, Plougastell.
 Jann Tanguy, St-Thegonnec.
 Nijerien Breiz, Tours.
 U. B., Kastell-Paol.
 Tanguy Creignou, Cleder.
 J. F. Diverrès, An Trehou.
 Michel Drevès, Plouzane.
 J. M. G., Goulsen.
 J. ar Goff, Pouldergat.
 Noël Joly, Cleden-Cap-Sizun.
 Marie Lalost, Sizun.
 W. L. V., Sant-Nik.
 Fr. Lucas, Lesneven.
 Pez Lez-Herve, Lanhouarne.
 P. Pinvidie, Gwikar.

O deus bet 220 poent :

St. Boucher, Plougerne.
 Mari Kermarrec, St-Divy.
 J. Thomas, Plouider.

O deus bet 200 poent :

Eujen Abjean-Uguen, Plouneour.
 Yv. Deniel, St-Pabu.
 Jann Diverrès, An Trehou.
 J. M. Queff, Kastell-Paol.
 Eun Tregorad, Plougoulim.

III. — DIVINADENNOU MIZ MAE

- I. — Eun tad a c'houlenn ouz e vab
 Lavar d'in 'ta, Perig, va mab,
 Piou an hini a ya en hent
 hag a gerz atao war e zent?
20 p. ar r. Digaset gant F. Lucas, Lesneven.
- II. — Bizied he deus hag eun tread
 Met n'he deus na penn na lagad
 Ha koulskoude, da bep friko,
 e kav an hent da vont atao.
20 p. ar r. Digaset gant F. ar Borgn, Pluguen.
- III. — Peseurt kemm a zo etre eur bizenn,
 hag eun azenn?
20 p. ar r. Digaset gant Yv. Deniel, Sant-Pabu.
- IV. — A vez kemmesket bemdez
 Gwenn ha du asamblez.
20 p. ar r. Digaset gant Tanguy Creignou, Cleder.
- V. — An Tad a zo rouz, touz, miliner, ar vamm a zo
 rouzez, touzez, milinerez, hag ar vugale a zo
 holl rouzien, touzien, milinieren.
20 p. ar r. Digaset gant J. Nicolas, Plouguerne.

Digas ar respencou hag an divinadennoù nevez a gavfet a-
 benn ar 25 eus ar mi da :

M. le Directeur du Feiz ha Breiz, à Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONEZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
 ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^o) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
 du **FEIZ HA BREIZ** :
 FR. GEORGELIN,
 Brest — 4, rue du Château — Brest
 c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
 du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildu*
 Yv. DREZEN,
 BREST — 4, rue du Château — BREST.
 c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
 * FEIZ HA BREIZ * et * KORN-BOUD *
 Bretagne 8 f. l'an
 France 9 f. l'an
 Etranger 10 f. l'an
 Abonnements collectifs
 Feiz ha Breiz (seul)
 (à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITÉ
 Toutes les insertions sont faites
 à l'année
 Une page entière 300 fr.
 Une demi-page 175 fr.
 Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Petra eo gouel ar Bleun-Brug,
 E. AR MOAL. — Kimiad da viz mae, J. L'HELGOUAC'H. — Ar
 c'houlled, AL LABOURER. — Guy-Eder Fontanella, K. P. —
 Istor Breiz, TENENAN GOURIOU. — Ar pezh a welas Marijannig
 Truten. — Roue al Laz, DIR-NA-DOR. — Labouriou ar merc'hed,
 TINTIN ANNA. — Keleier ar miz. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOULIOU MIZ MEZEVEN

- 1 a vezeven. — Lun ar Pantekost. Gouel devoision e levr an
 A. Uguen. An ofis p. 417.
- 7 a vezeven. — Sul an Dreinded, p. 421.
- 14 a vezeven. — Sul bras ar Zakramant, p. 427.
- 19 a vezeven. — Ar Galon Zakr. Gouel devoision, p. 681.
- 21 a vezeven. — Sul ar Galon Zakr, p. 681.
- 24 a vezeven. — Ginivelez sant Yann Vadezour. Gouel Nede-
 leg an hanv, p. 686.
- 28 a vezeven. — Pevare sul goude ar Pantekost. An oferepp,
 p. 446. Gousperou kenta an Ebestel
 Per ha Paol, p. 692.

Petra eo gouel ar Bleun-Brug?

Bezan hon eus digarez da gredi ha, gant se, tu da lavarret, n'eus ket eur c'hendalc'h, eur gouel grêt e Breiz, e kerz ar bloaz, hag en defe talvoudegez gouel ar *Bleun-Brug*.

Re nebeut anavezet eo ar *Bleun-Brug*; pa vo muioc'h, an holl Vretoned a ziredo davetan.

Kentan hini a ententas mat pesort pouez en doa ar *Bleun-Brug* eo an Ao. de Mun. Ezomm ebet da lavarret piou oa an Ao. de Mun. Eun enor eo kaout eur seurt den da baeron. Bezan e voe paeron ha skoazeller feal ha kalonek ar *Bleun-Brug*, p'edo oc'h ober e gammejou kentan.

Petra eta a vad a gave ennan? Eun den brudet, ar chaloni Stephen Coubé, a skrive kement-man, eur pennad a-rôk ar brezel, diwarbenn Kannad-Leoniz er Gambr: « Breman 'z eus eur 25 bloaz bennak, mar em beus sonj mat, an Ao. de Mun a glaskas sevel, etre ar gatoliked, eur gostezenn vras hanvet ar « Contre-Révolution ». Eur mennoz kaer ha mat e oa hennez. Mar vije bet kaset da benn, en dije bet salvet ar vro kalz gwelloc'h eget an « Action libérale populaire... »

An Ao. Coubé a damall goude ar re o doa bet distroet an Ao. de Mun ha grêt d'ezan dilezel eur mennoz ken yaoc'h, ken eün, ken kristen.

Ar pezh a felle d'an Ao. de Mun ober ez-vras evid ar Frans a-bez, her c'havas boulec'het e Breiz, dre ar *Bleun-Brug*. Setu perak en em stagas outan.

Spererjou tounn, pennoù ezenn savet ha maget e skolioù ar gouarnamant, er skol laik, pa glevont komz eus Breiz, eus hec'h istor hag he brud gwechall, a youc'h a-houez penn e vezer o klask « dizrei d'ar « Moyen-âge », o klask « diskar ar Republik », o klask lakat « noblans ha beleien da ren a-nevez war ar vro... » E gwirionez, an dud-ze a zo mibien d'ar Revolution hag e fell d'ezo kas anezi da benn, dre ar Republik dizoue — harpet war « Les Droits de l'Homme », — dre ar « Socialisme », goude, hag erfin, dre ar « Communisme ». Evito n'eus ken na Bro, na tiegez — her gwelet hon deus e kerz ar votadeg-man! — n'eus nemet ar politikerezh diwirion ha treitour.

Eneb d'ar re-ze, en em zav ar *Bleun-Brug*, o vezan ma klask da vuhez an den pep diazez gwirion. Breiz, ha gant Breiz, an Tiegez; gant an Tiegez, ar Berc'heniez ha, da genta ha d'an diweza, ar Relijion, a gloz en he c'hreiz: hag a vag an holl frankizioù evel ma vag ar mor ar pesked.

An Ao. de Mun a welas er *Bleun-Brug*-eur « Contre-Ré-

volution » beo anat, ha ne glaske nemet kreski evit adober d'an den, eur vuhez nevez-flamm adkompouezet war he holl diazezou.

Setu perak an Ao. de Mun a zalc'he d'ar *Bleun-Brug*, evel ma talc'h eun den d'e gredennoù, d'e venozioù douna. Gwelet a rê drezan n'eo ket eur Vreiz nevez ouz en em adober, met, kentoc'h, an den o adkaout e c'halloud, e frankiz, e ene, dre Vreiz...

**

Eun dra vras eo eta ar *Bleun-Brug*, n'heller ket hen nac'h. Darn a responto: « Eun dra vras? A belec'h? N'eo ket anavezet. Pelec'h eman e dud, e izili? » En deiz a hirio, talvoudegez eun den a vez muzuliet diouz an arc'hant en deus ha hini eur gevredigez diouz niver hec'h izili. Hogen, eur muzul berr eo hennez alies. Ar *Bleun-Brug*, adreizet er bloaz-man, a ya adalek breman da stagan a-zevri gant e labour; hogen, ne glask ket dastum endro d'ezan tud a-leiz, met, dreist-holl, tud a-zoare. Pouezet e Reolennoù; studiit roll e gendalc'hiou, hag ac'hano e tefot prim da anaout talvoudegez ar *Bleun-Brug*.

Ne gomzin ket eus ar Reolennoù; doare ar gouel bloaveziek eo a fell d'in disklêria. Peder lodenn a zo e kendalc'h bras ar *Bleun-Brug*: eur retred; — eun devez studi; — eur genstrivadeg; — eur gouel poblus.

I. *Ar retred*. — Labour vras ebet ne vez grêt hep Doue; abalamour en Doue hepken e kaver sklêrijenn ha nerz. Gouzout, e pep koulz, petra 'zo red ober, penôs en em gemer, setu eun dra ha ne weler ket nemet ha sellet a rafet alies 'trezek ar gwirioneziou brasa, ar re n'o deus na finv na lusk, a zo henvel ouz an touriou-tan war an ôd. Gallout, e pep koulz, ober ar pezh a zo red, setu eno c'hoaz hag a zo startoc'h, rak ar galon a deu alies da wanaat, pa deu an enebourien da stourm pe ar vignoned da drei kein. Ha koulskoude, red eo derc'hel... Piou a zalc'ho? N'eo ket an den; Doue eo a zalc'h ennomp, pa vez pedet.

Ar retred eo eta penn kenta kendalc'h ar *Bleun-Brug*; ar gammed kenta a rêr eo warzu Doue.

II. *An devez studi*. — Ac'hano e tizroer warzu Breiz. Sklêrijenn a zo: gwelomp eta pelec'h eman ar wirionez e kement a zell ouz stad ar vro. Setu an devez studi. Divezatoc'h, pa vo achu ar gouel, pep hini diouz e du, hervez ma vo bet divizet, en em lako da labourat; mar en deus danzeet nerz er retred, gwell a-ze evitan neuze. Ezomm en devo.

III. *Eur genstrivadeg*. — An diou lodenn genta a zelle kentoc'h ouz izili ar *Bleun-Brug*; an diou lodenn ziweza a zell ouz an holl. Ar genstrivadeg, prijou kaer stag outi,

a zo savet da rei tòn d'ar yez ha d'ar muzik brezonek; da rei ive da anaout ar *Bleun-Brug*, brudet ma vezo gant ar re a vo bet loreet gantan.

IV. *Ar gouel poblus*. — Red eo ive eun dra bennak evit an daoulagad, eun dra hag a skoio war ar spered, hep skwiza ar penn: eun ambrougadeg veur (cortège historique), eur pezh-c'hoari, kanaouennoù, tonioù muzik. Ma oa an devez kenta evit eun dibab, heman a zo evit tizout kement hini n'eo ket eun enebour, evel ma tigouez hirio da veur a hini bezan. Aman n'eus ken nemet diduamant, en eun doare breton, avat. — Pedi, studia, labourat, kemer e blijadur, setu ar vuhez penn-da-benn.

Netra nemet a-ziavêz evelse, kendalc'h ar B.-B. a zo eta evel eur framm a vuhez yac'h ha reiz, stummet m'eo diouz lezenn Doue ha hini ar Vro.

Hep poueza hiroc'h e lavarín, en eur gloza, ar pezh am eus lavaret en eur gregi: ar *Bleun-Brug*, pa vezo anavezet gwelloc'h, ar *Vretoned* a ziredo a-leiz davetan!

E.-A. MOAL.

Goulenn e ti *Emgleo Sant Iltud*, 4 streat ar C'hastell Brest:

Manuel pour l'étude du français par les Bretons

gand an aotrou Ernault. Eul levr nevez eo hag a zo galvet d'ober kalz a vad d'hor skoliou. Harp a roio d'ar vistri ha d'ar mestrezed-skol d'ober gand ar brezoneg evit ple-naat d'ar vugale diêsteriou ar galleg. Brema dirak seurt diêsteriou en em gav re ziharp ar bugel-skol. N'hall ket o zrec'hi dre e nerzig e-unan, ha kement-se a zo kiriek d'ezan da ziski, e-lec'h galleg reiz, eur vriz-yez iskis ma rae Brezeux goap anezi:


Un langage incorrect et d'un mélange amer.

Gand al levr nevez e vo aesaet d'ar mestr diluzia d'ar vugale kudenn an diou yez ma teufent d'o rouestla, hag e vo tizet ar pal:

Komzomp ha skrivomp holl e Breiz Brezoneg yac'h ha galleg reiz.

Eus ar gwella en deus an aotrou Ernault kaset e labour da benn. « Ce livre est un petit chef-d'œuvre » a skrive d'comp unan eus hor barreka mistri. Ha n'ema ket ar veuleudi en tu-hont da zellid al levr.

Fizions hön eus e vo heb-dale ar « Manuel » etre daouarn kement-hini en deus da emellout en hor Bro eus deskadurez ar vugale.



Kimiaad da viz Mae

O MIZ MAE, buan kuit out aet,
Ha va c'halon a zo faoutet,
E nep lec'h ne da welan ken
Ha va c'halon ' zo en anken.

C'houek, o Miz Mae, eo da ano,
Va mouez, hep ehan, da gano,
Da gana a ray, deiz ha noz,
Miz a c'hened, miz a vennoz.

War da dal, o Miz hep da bar,
Heol ar beure skedus a bar,
War da jod an abardaez rus
A daol aour e vannou lufzus.

War ar bleun dihun er jardin
Puilh e skuilhes gliz ar mintin,
Hag el liorz eus pep rozenn
Da bok a ra eur berlezenn.

Da c'hlaö skanv ha da goumpu-gor
D'an had, er park, a ro digor
Hag en deliou, ouz an avel,
D'ar frouez e toullies eur c'havell.

War ar prad ha war ar waremm,
A-hed ar goanv, skornet o dremm,
Tamim goude tamm, sioul e ledez
Eur vantell glasoc'h-glas bemdez.

Ar ster ganez digabestret,
Warzu ar mor, laouen a red,
Ha dibrennet an nor dezi
Ar vammenn a lanm euz he zi.

War gein dizolo ar c'hleuz paour,
D'az heul, e kouez bokedou aour
Hag outo ar c'hinvi voulous
A zell gant eul lagad jalous.

Laboused nijet da bell bro,
 En hon touez, ganez a zistro
 Ha dec'h o c'hleven, gant dudi,
 Holl o kana da veuleudi.

Miz Mae, kaer dreist miziou ar bloaz,
 Diganin e lames va gloaz
 Ha doun em c'halon e fennez
 Dour frealzus da levenez.

Met d'in, Miz Mae, kaeroc'h c'hoaz out,
 Dre ma teu d'in, bep bloaz, dreizout
 Deiziou laouen, deiziou gouestlet
 Da Rouanez kaer an Eled.

Gouestlet holl da Vari dinamm,
 Mamm va Jesus, ivez va Mamm,
 Hag en o fad, bleun ha pedenn,
 A zougan dirak he skeudenn.

Ya, Miz Mae, c'houek eo da ano
 Hag hep paouez me da gano,
 Met, gant eur galon ledanoc'h,
 Mari, e kanin ac'hanoc'h.

Ho kana, o Gwerc'hez, a rin,
 Bemdez dizehan ho karin
 Ho karout a rin muioc'h c'hoaz,
 Pa deuot d'am c'herc'hat warc'hoaz.

Pa z'in ganeoc'h du-hont d'ho Pro,
 Pell diouz stourm an harlu garo
 E liorz an nenv, er gwasked,
 Da gutuilh bleun ne c'hwenvint ket,

Ha pa c'hellin, o Mamm, ganto,
 A hed ar Mae a bad ato,
 Pleza mil ha mil kurunenn
 A vo kinniget d'eoc'h ganen.

J. L'HELGOUACH, O. M. I.

Hepdale e vo kavet da brena

“Lizer an hini maro”

GANT J. RIOU

Eul leor kaer meurbet evid eiz real

Kas an anoiou diwar-vreman da « *Emgleo-Sant-Iltud* », 4, rue du Château, Brest.

AR C'HOULED

E penn kenta an hanv, ar vugale o deus plijadur o c'hoari gand ar c'houiled. Redek a reont war o lerc'h, ha mat a reont. Ra lazint ar muia ma c'hellint anezo, rak kement-se nebeutoc'h a enebourien a jomo gand al labourer. Ar c'houiled a zo loened eus ar re falla, a ra droug bras d'an traou a zo en douar.

Ar c'houiled a bad tri bloaz o buhez. N'int ket c'houiled epad tri bloaz, met hepken epad al lodenn ziveza eus o buhez.

Ar c'houiled, ar parezed, a zov viou araok mervel. Dozvi a c'hellont, e diou pe deir gwech, betek pevar ugent vi. Lakat a reont ar viou-ze dounna ma c'hellont en douar. Goude 25 dervez pe wardo, e teu eus ar vi eur prenv gwenn, penn kalet d'ezan ha gouest, gand e c'henou, da ziframma kalz traou. Buan e kresk, rak debri a ra gwella ma c'hell. E groc'hen, gwak da genta, a nebeudou a zeu da galedi. Beva a ra en douar. Pa vez skorn, e tiskenn doun, met d'an nevez-amzer, e sav war c'horre an douar, hag e tebr an holl c'hwriziou a gav, ha pa vez en eur park eun niver bras a brenved, e vo droug bras.

Beva a ra evelse, evel prenv, daou vloaz. D'an trede bloaz, ar prenv, leun e gof, en em laka en eun toull en douar; ne loc'h mui; eus e gorf e teu eur seurd eol pe lard, danvez d'ober dilhad nevez; dont a ra d'ezan a-nebeudou eskell, hag abenn eun eiz miz bennak eman c'houil. Pa zeuio tomm an heol, e fin miz mae, e mezeven, e wêlot ar c'houil o nijal eus eur wezein d'eun all, o karga e gof gand an deliou ha broustour a zebr. En em blijout a ra, dreist-holl, war ar gwez-dero, hag abalamour da-ze eo hanvet ar c'houil-melen, c'houil dero.

Ar c'houil ne vez, o nijal, nemet eun ugent dervez bennak. Da c'houde e varv, met ar viou a jomo war e lerc'h a lakaio prenved ha c'houiled all da zont.

Pa vo bet, eta, eur bloavez c'houiled, e c'hellot gedal, tri bloaz da c'houde, kalz c'houiled adarre.

Evelato, nebeutoc'h a vezo ma karit laza c'houiled ar muia ma c'hellot.

Ha n'eo ket labour gollet al labour tremenet o laza c'houiled. Mat e ve zoken da labourerien eur barrez en em glevet d'hen ober.

Diouz ar mintin, pa vez c'hoaz ar c'houiled hantergousket, n'eus ken nemet heja, gant bizier, skourrou ar gwez, hag e laker ar c'houiled da goueza stank d'an douar. Da c'houde e ranker o dastum e sier hag o laza gant dour bero, pe gand dour raz, pe en eur c'hiz all bennak.

Mat eo ive dastum ar prenved gwenn goude an alar; pa vez aret dre amzer domm, ar prenved a vez lakeet war c'horre an douar gand an alar, hag e c'heller neuze distruja eun niver bras anezo.

Ar piked, ar brini ha laboused all a welit o tont war ar douar fresk, da glask prenved eo e teuont, hag o veza m'eo lemm o lagad ha krenv o beg, ne vezont ket pell evit netât eur park.

Kalz laboused ive a ra brezel d'ar c'houiled ha dre-ze vad d'al labourerien.

Ra vo eta aliet ar vugale d'ober brezel d'ar c'houiled, nann, avat, da freuza neiziu, rak al laboused a zo mi-gnoned ha servicherien al labourer.

AL LABOURER.

Karantez evit Breiz-Izel

— N'eus breizad ebet ken o karet Breiz-Izel, Karantez ar vamm-vro 'zo aet gand an avel! Setu komzou goullou, komzou diboeil ha faos Kouezet eus a c'henou eur Gallig pe eur Zaoz.

Gwelit 'ta ar reier war aochou Breiz-Izel
Piou 'n deus gelllet o loc'h? Ar mor pe an avel?
— Keit ha ma vo reier war aochou Breiz-Izel
E vo ivez Breiziz o karet o c'havel.

Gwelit lann ar c'hleuziou gand o bleuniou melen
Ha livirit d'in peur ne vint ket gwelet ken...
— Keit ha ma vo melen lanneier Breiz-Izel
E vo ivez Breiziz o karet o c'havel.

Pa vo aet ar reier eus aochou Breiz-Izel,
Loc'het gand eun tarz-mor pe gand eur barr-avel,
Pa ne vo mui kavet ebarz ar c'hoajou glas
Eun tamm trujenn zero 'vid ober eur penn-baz.

Pa ne vo mui gwelet ebarz ar menezioù
Al lanneier melen o tiskouez o bleuniou
Neuze me a gredo, 'vel komz an Aviel
Ne vo mui a Vreiziz o karet Breiz-Izel.

An deiz-se a zo pell, rak en hor c'halonou
Ez eus c'hoaz karantez 'vit bro goz hon Tadou,
'N hor gwazied e red diou pe deir veradenn
Eus gwad ar Gelted koz o deus krouet hor gouenn.

Karomp hor bro, Breiziz, gant eur wir garantez,
Karomp ervat hor Breiz hag hon Doue ivez
Ha neuze marteze ne vo mui lavaret.
N'eus ket a garantez etouez ar Vretoned.

E. DOURMAP.

Breizad 16 vloaz eus a Lanarvily.

Guy-Eder FONTANELLA

Spontailh Breiz-Izel (1574-1602)

Marteze e vije bet gwelloc'h d'in displega d'eoc'h buhez tud hag a zo bet, dre o c'halon, dre o spered, pe dre o zantelez, enor ha skoazell Breiz-Izel. Hogen istor eur vro n'eo ket graet hepken eus he eurusted tremenet nag eus oberiou kaer he bugale. Graet eo ive siouaz eus he gwal-leuriou hag a-wechou zoken eus he zorfejou pe eus torfejou he bugale. Pegwir eta eo mat ec'h anefezfemp kement tra a zo tremenet en hor c'horn-douar en amzeriou koz, e fell d'in hirio rei d'eoc'h buhez unan eus hor c'hen-vroiz ha n'eo brudet nemed abalamour m'eo bet eun torfetour bras: hennez eo Fontanella, spontailh Breiz-Izel.

E ano gwirion 'oa Guy Eder, eus a lignez Beaumanoir-Eder. E dud a oa o chom e kastell Beaumanoir e kichen Kintin e Gorre-Kerne. Eno e voe bet ganet war dro ar bloaz 1574 an hini a dlle beza dre e vuhez diroll ha fall-lakr, rann-galon e gerent, ha mez e vro. Kaset e voe abred da skolach Boncourt e Pariz. Ha kerent ec'h en em ziskouezas ar pezh e dlle beza divezatoc'h. Atao e veze o klask trouz ouz unan-bennak, hag o c'hourin ouz e genseurted, ha p' urlies a an emgann a yea beteg ar gwad. Yaouank-flamm oa c'hoaz pa ziskoueze ar galon griz a dlle lakaat kemend a zismantr e Breiz-Izel. Eur seurt kalon-den n'helle karout ar skol. Setu ma werzas e holl levriou hag ive e zilh-dskol evit prena eur c'hleze hag eur c'hour-gleze; en em skraba 'reas dre guz diouz ar skolach, ha setu hen el leo (1) war du Orleans evit mont da gaout arme an Duk a Vayenne, kabiten ar gatoliked. Hogen ne deas ket pell eun toullad laeron a zigouezas warnan, a lammas digantan kemend en doa hag e loskas paour-Job. An dienez her buntas a-nevez da Bariz. Ne jomas ket pell eno; hep dale e teuas da Vreiz. D'ar mare ma oa evelse o redek an henchou, Guy Eder n'en doa c'hoaz nemet pemzek pe c'houezek bloaz.

Hogen d'ar mareou-ze an Duk de Guise a voe lazet dre vuntreuz. Ha kemend all a c'hoarvezas gant Roue Bro-C'hall, Herri III. Piou 'vije roue en e lec'h? An tosta kar da lignez ar roued oa a dra-zur Herri a Vourbon, roue Navarr. Met heman a oa protestant ha Bro-C'hall, bro gatolik, ne falveze ket d'ez i a briz ebet kaout evit mestr eur roue heretik, hag evit miret ouz kement-se ar gatoliked en em unanas etrezo evit brezelli a enep roue Navarr. Anvet e oant « ar re unanet », « les Ligueurs » e galleg. Kement-se a rannas ar Vro e diou gostezenn a reas brezel an eil d'eben, epad dek vloaz.

(1) « El leo » = « en hent ».

Neuze eo ec'h erruas Guy Eder e Breiz, ha kercent en em lakeas etouez ar re a oa dindan an armou evid an tu katolik. Ar re-man laouen bras o welet en o zouez eun den eus eul lignez brudet, hag eus ar vro, hag o welet e oa eur paotr dispount a ouie gourc'hemenn, a zenté outan gant plijadur. Neuze e kemeras an ano a Fontanella abalamour m'en doa eun tamm leve hag a zouge an ano-ze. Destum a reas da vont d'e heul eun nebeut mevelien eus ti e vreur hag ive eur strollad ailhoned eus e barrez.

Hardiz ha dispount, prest d'ober kement tra a dremene dre e spered, Fontanella a stagas da genta da laërez ar vourc'hadennou, da dapa prizonerien n'eus forz a be du e vezent, ha m'o deze arc'hant e veze tennet daspren pe ranson diganto. Kement dispac'her ha kement torfe-tour a oa er vro en em vade en dro d'ezan. Niver ar vandenn a greske bemdez hag hep dale e reas troiou tro-war-dro, zoken en eskoptiou sant Brieg ha Treger; meur a wech Gwengamp, a zalc'he d'ar roue, he devoe da evesaat. Fontanella en dije karet kaout ar gêr-ze, hogen dre, ma n'helle ket dont a-benn eus e daol, e troas e zellou war-zu kastell Koëtfrek e parrez Plouber, harp ouz Lanhuon. Krenvaat a reas al lec'h-se evel ma c'hellas hag eus ac'hano e tirede de zismantri Lanhuon, Pempol ha meur a gêr all. Mont a reas zoken betek Leon; Landerne a voe graet skrab enni; goueled-Leon ive her gwelas. Met buan e tistroas da Goëtfrek, rak aon en doa rak soudarded Brest a oa eus tu ar Roue. O welet peseurt dismantr a oa digaset er vro gant Fontanella, holl dud a vrezel Treger en em glevas evit lakaat seziz war Goëtfrek, ha Fontanella d'e dro a voe trec'het. Kuitaat a ra neuze Treger hag e teu da Gerne, da Geraës. Ober a ra eus iliz sant Tremeur eur c'hastell krenv, eno e kavo repu goude bep tro a raio evit laerez ha preiza ar vro, ha koulskoude ar vro-ze an holl a zo a du gantan. Met gant ma c'hello laerez ha laza, ne ra ket a forz piou a gouezo dindan e graban ha dindan e glezê.

Fontanella goude beza lakaet ar freuz ha digaset ar gernez en eur vro, a yae larkoc'h evit kaout adarre traou da laërez, droug da ober, ha tud da laza. Pa zigoueze en eul lec'h pinvidik, ar c'henta a rae oa beza mestr war eur c'hastell krenv bennak, evit gellout en em guzat ennàn ma teuje re a vec'h warnan. Setu ma klaskas da viz mezeven 1593 teuler e graban war ar Granek e parrez Plonevez-ar-Faou, e treo Kollorek d'an amzer-ze. Ar c'hastell-ze a oa krenv meurbet ha difennet mat, ha Fontanella n'oa ket bras-awalc'h niver e zoudarded evid ober eur seurt taol. Petra ober? Kila? O nann, Fontanella n'oa doa meur a dro en e zac'h. Peurvuia pa ne veze ket mestr dre nerz, e veze mestr dre laer ha dre drubarderez. Ha setu aman peñaos ec'h en em gemeras evit kaout ar Granek.

Aotrou ar Granek hag an aotrou Rosampoul gouarner Montroulez a oa mignoned vras, ha Fontanella her gouie. Gouzout a rae ive e teuje Rosampoul da zikour ar Granek kercent ha ma vefe lakaet seziz warnan, ha biken Fontanella n'oa gouest da stourm ouz kemend a enebourien. Neuze e teuas eur zonz ijinus en e spered: kas a ra dek soudard dirag ar Granek gant urz da rei da glevout e teuont eus a berz an aotrou Rosampoul en deus, war o meno, klevet e lakje Fontanella ar seziz war ar c'hastell araok tri devez, ha abalamour da-ze e tigas sikour evit diouall diouz al laër bras. An dek soudard a ya gant an urz faoz dirak dor vras ar c'hastell. An aotrou, re he-gredik eun tamm, a ro urz da ziskar ar pont, laouen ma z'eo o welet skoazell o tont d'ezan hep m'en defe goulennet, a ro d'ezo dont ebarz, a ro urz da rei lein d'ezo.

Soudarded ar c'hastell o kredi e oa an dek-man mignoned, a lezas o armou en ti-gward war eun daol. Met an ostizien nevez a zalc'he atao o re war o diousoaz, ha pa weljont ne daole den ebet evez, e tapjont krog buan e armou an ti-gward, o zaoljont du-man du-hont, hag e rejont tro an ti prest da denna war ar c'henta a finve. An aotrou hag holl dud ar c'hastell a voe liammet, ha taolet en dourell vras: « Prizonerien ez oc'h, eme ar riblerien, rak ni zo soudarded Fontanella, hag en e ano eo e talc'homp o maner. » Ar c'helou a voe kaset buan da Fontanella, erruout a reas tri pe bevar devez goude, ha daoust ma oa aotrou ar Granek ha hen eus an hevedep kostezenn, da lavaret eo eus tu ar Re-Unanet, an aotrou a gollas kement tra en doa, arrebeuri kaer ha kement a zo red evit brezelli, hag e-unan e voe taolet er-maez eus e di.

War dro eur miz goude ma oa Fontanella mestr er Granek, ar perrezioù tro-war-dro en em unanas hag a gelc'has ar c'hastell; gouzout a raent n'oa ket kalz a dud ennàn evid e zifenn; chom a rejont eta dirazan eiz pe zek devez en esper trec'hi dre an naon hag an dienez. Hogen eun nozvez ma oa ar goueriaded an nebeuta war c'hed ha ma kouskent holl, setu Guy Eder gant hanter kant pe dri ugent marc'heg o tont eus tu Montroulez, o koueza warno en eun taol-kount, eun hanter-eur araok goulou deiz. Al lazadeg a voe skrijus, 700 pe 800 a jomas war an dachen, ha panefe ar gwez hag ar c'hleuziou a guze ar goueriaded e vije bet lazet muioc'h c'hoaz. Krizder Fontanella a voe ker bras ma ne roas ket aotred da gerent ar re lazet da zont da gerc'hat ar c'horfou na da anavezout ar re varo. Urz a roas d'o diouall noz-deiz evit mirout an vijent beziet; chom a rejont eta war c'horre ar douar noaz ha den ne grede lavaret grik: Eur wech koulskoude unan bennag a lavaras d'ezan: « Peñaos e c'hellit-hu gouzant ar fter a zav eus ar c'horfou brein-ze? » Hag an den kriz-se a respontas: « Diouz

korf eun enebour maro e teu c'houez vat atao ! »
Eun druez oa gwelet ar goueriaded keiz lazet ha laosket
da vreina ha da veza debret gand ar chas epad an de ha
gand ar bleizi epad an noz. Ha ma klaske unan bennak
dout da gerc'hat eur c'horf maro e veze lazet raktal.

Fontanella o veza mestr war ar c'hastell, her c'hren-
vaas en eur ledanaat hag en eur zounaat ar foziou. Foeltra
a reas ar c'hoajou-uhel tro-war-dro evid ober savennou-
douar en dro d'ar c'hastell. Eus an neiz kaer-ze, al laer
bras a reas e di, en eur vro n'oa ket c'hoaz rivinet hag
en eul lec'h ma oa kalz tud pinvidik. An eskopti a-bez a oa
en e c'halloud, rak kastell Kremenec'h e kichen ar Faouet
ha hini Korlay a oa d'ezan ive, ha bep mare ez ae eus
an eil kastell d'egile. Kalz dismantrou a reas dre-holl,
hag atao gant nebeut a enor, rak morse n'en em riskle
a eneb an dud a vrezel, met atao a eneb an dud diwar
ar maez hag atao dre douellerez.

E miz gwengolo 1594, gouarner Breiz a deuas d'ar
Grannek hag a lakeas an tan er c'hastell: an neiz a voe
devet, met al louarn n'oa ket lesket. Fontanella a gendal-
c'has e laeronsiou kaeroc'h eget biskoaz. Eus Lanhuon
ez eas da Rosko a oa pinvidik-mor d'an ampoent. Eno
e tigouezas gant Magnan, eul laer bras all. Al laeron n'int
ket atao mignonned, dreist-holl pa zigouezont war an he-
velep sac'h. An daou-man a laeras e kevred, met pa zeuas
ar mare da ranna al laeradenn, e savas trouz etrezo hag
e lakejont o zoudarded d'en em ganna e Pontplenkoet e
parrez Plougoulm. Kalz tud a voe lazet adarre. N'oa ket
awalc'h evit Fontanella, araok kuitaat bro Leon e labou-
ras evel eur c'higer etouez ar goueriaded.

E Kerne, ar rivin a oa ker bras ma n'heller ket hen
diskleria dre gomzou; n'oa espernet na tud, na loened,
na tiez. An dud n'oant ket lazet a ranke en em guzat el
lanneier, etouez ar reier, ar balan hag ar strouez, hag
eno e varvent gand an naon hag an anoued. Ar bleizi a
deue d'o debri awechou zoken araok ma vezent maro.

Fontanella en Enezenn Tristan. — Da fin miz mae
1595, Fontanella a gwhiteas Kremenec'h gand e zoudar-
ded, tremen a reas dre Lokournan hag hep dale e tigoue-
zas e Douarnenez hag en enezenn Tristan. Gwad a redas
adarre evel just, tud a voe krouget evel kustum. Douar-
nenez evid ar roue, a voe tapet en e wele ha prizoniet
ivez. Fontanella a gavas e Douarnenez kalz preiz, arc'hant,
arrebeuri kaer ha bep seurt traou all. Ar brizonerien a
voe skrijus o doare, bep seurt poaniou o doa da c'hou-
zany, rak Guy Eder a glaske dre-ze tenna ar muiâ ran-
soun diouto. Mervel a raent reuzeudik er bac'hou doun
ha tenval, hag en toullou brein. Ar re a baec daspren a
deue er maez hanter-varo, henvel ouz teuzou euzus, kar-
get a fler hag a lastez, hag hep dale e varvent.

Fontanella 'n doa merzet oa enezenn Tristan eul lec'h
distro hag e oa es en em zifenn enni. Dont a ra eta eus
Kremenec'h gand armou, benvijou ha kemend en doa, evit
dout da jom en enezenn. Ar goueriaded diwar dro, spon-
tet holl o velet Fontanella o chom en o c'hichen, en em
lakeas dindan an armou evit dont d'e ganna. Ar goueria-
ded en em unanas e Plogastell-Sant-Jermen. Spierien
Fontanella a zigasas buan ar c'helou-ze d'o mestr, ha
kerkent e teuas d'o diambroug gand an niver brasa eus
e zoudarded, gouzout a rae ervat pegen dister eo koue-
riaded enep tud a vrezel. E dud a gerze etre ar girzier
hag adrenv ar c'hleuziou evit chom kuzet; 10 pe 12 hep-
ken a gerze araok evit troumpla ar goueriaded hag o sa-
cha war al lanneg e kichen. Kerkent ha ma welchont an
10 pe 12 marc'heg, an dud kez heb urz na furnez, mesk-
a-mesk, a redas war-lerc'h an enebourien-ze en eur vle-
jal a bouez o fenn evel kustum, hep sonjal e c'helle beza
c'hoaz enebourien all kuzet tro-war-dro. Ar zoudarded o
welet ar vigoudenned war o lerc'h a-ra van da gaout
aon hag a deb'h kuit buan. Pa oant holl e kreiz al lanneg
setu 300 pe 400 soudard war varc'h oc'h en em strinka
warno, hag er wech-man adarre tud Fontanella a reas
eul lazadeg spountus. Lazet e voe ouspenn 1500 kouer;
ar re all 'n em zaveteas gant skoazell ar girzier. Goude
an taol-man ne gredchont mui enebi ouz Fontanella a
voe neuze e-unan eneb ar roue. Leun a lorc'h al laer bras
a zavas tailhou war an holl barrezioù 6 ha 7 leo tro-dro.

Fontanella e Penmarc'h. — Penmarc'h a oa en am-
zer-ze eur ger vras ha pinvidik. Marteze e c'helle kaout
2.500 soudard, a-walc'h evid en em zifenn ouz kalz ene-
bourien. Hogen tud Penmarc'h a zavas c'hoant ganto beza
digabestr, ha beza evel eur vroig mestrez d'ezi hec'h-unan.
Evit-se hag ivez evid en em zifenn ouz Fontanella, e rejont
daou grenvlec'h pe daou gastell, unan eus iliz Treoultre,
egile e Kerity, hag e lakechont o holl danvez er c'hestell-
ze. Fontanella a glevas ar c'helou. Ober ' reas van da
veza o brasa mignon hag e teuas eun deiz d'o gwelet gand
eun nebeud eus e dud. Komz a reas ker brao ha ker flour
ma kredchont anezan. Eva ' reas ganto ha zoken c'hoari
' reas kilhou ganto evit gellout o strobinella gwelloc'h.
Hag e keit-se e vevelien a zelle ouz ar c'hestell evit gou-
zout e pe stad e oant, peger kreñv e oant, pegemend a
draou a oa enno ha pegemend a zifennourien a c'hellent
kaout.

Eun nebeut miziou goude, al laer bras a zistroas da
Benmarc'h. An dro-man n'oa ket evit c'hoari kilhou. Ker-
kent an holl geriz, deut aon d'ezo, a yeas er c'hestell.
Fontanella, er wech-man adarre, a reas da gredi oa o
mignon hag o skoazeller. Tud ar c'hestell a deuas da ze-
laou lubannerez ar prezeger, holl en hevelep tu, o lezel

an tu all hep difennour. An enebourien a bignas neuze dre an tu-ze, a zavas war ar mogeriou araok beza gwelet hag a lazas kement ha ma c'heljont. Mont a rejont goude da gastell Kerity; heman en em rentas kerkent. Ar preiz a voe bras kenan. Fontanella a laeras 300 hag, o c'hargas gant frouez e laeradenn, hag a deuas ganto da Zouarnenez.

Penmarc'h a oa er mare-ze eur gêr gaer hag a rae kalz kemwerz gand ar Spagn ha Bro-Zaoz. Da gredi eo ' oa ker bras ha ma 'z eo Kemper hirio. Fontanella he dismantras dre an tan hag ar c'hleze; lazet e voe ouspenn 5.000 gwaz, ha devet ouspenn 2.000 ti. Biskoaz abaoe, ar gêr, vras-se n'he deus gellet sevel eus he ludu, ha n'eo mui hirio nemed eur vourc'hadennig. Ar vein skignet en dro d'ezi a ziskouez he brasder tremenet.

Fontanello e Pont-Kroaz. — Ar C'hap a jome en e bez; skilfou yud ar Bleiz n'oant ket c'hoaz bet sanket ennan. Hogen ar vro n'oa ket heb aon, gouzout a rae ervat petra oa ouz he gortoz. Setu perak tud ar C'hap en em lakeas da grenvaat iliz Intron Varia Roskudon, e Pont-Kroaz, rag ar gêr n'he doa ket a vogeriou. Fontanella, o klevet meneg eus an trouz-se, en em lakeas en hent gand e holl zoudarded. Kerkent ar goueriaded a zornas ar c'hleier en holl parrezioù tro-war-dro, hag a ziredas niverus d'ar Pont. Stanka a rejont an henchou evel ma c'helljont, foziou a voe toullet, met an enebour a zigouezas hag a strafuilhas an dud paour. Lod a redas kuit, lod all en em zastumas en iliz, en tour, en o zouez an aotrou Villerouault, kabiten ar goueriaded hag an aotrou Yann Kosker, person Pouldreuzik, a oa ginidik eus ar Pont.

... Tri c'hant vloaz divezatoc'h e voe gwelêt a-nevez Pontekruziz war zav, hag eur strollad paotred yaouank e tour uhel o iliz o sellet ouz hent bras Douarnenez, hag o furchal ar maeziou evit gwelet peur e vije souldarded o tout er pellder. N'eo ket Fontanella a c'hortozed an droman, met arme Bro-C'hall a deue da deuler al leanezed er-maez eus o zi. Hag evel ar wech kenta nerz an armou a voe trec'h da nerz-kalon Pontekruziz! Ne gredan ket e c'hounezas coudarded hag archerien Bro-C'hall muioc'h a enor en deiz-se eget na reas al laer bras Guy Eder Fontanella tri c'hant vloaz kentoc'h...

Fontanella eta a deuas buan da veza mestr war gêr hag eus ar goueriaded chomet er maez; dont a reas neuze da gelc'hia an iliz. Dies e vije bet d'ezan dont a-benn eus e daol m'o dije bet an difennourien armou awalc'h, hag ive muioc'h a nerz-kalon. Met strafuilhet oant holl o wetlet pegen nebeud oant enep kement a zoudarded. Abarz nemeur doriou an iliz a gouezas; an emgann koulskoude ne echuas ket evit-se, rak an difennourien a bignas holl

en tour. Eno e c'hellent beza dinez'h, aes ' oa d'ezo en em zifenn, rak dor an tour a oa striz kenan. En aner, e klas-kas Fontanella stourm, e zoudarded n'hellent pignat nemet beb eil an dereziou striz, hag a veze buntet kuit dre ma tigouezent e toull an nor. Neuze an enebour a c'houezas tan en dereziou gant balan glas o sonjal dre-ze mogedi ha moug an dud kez. Ne voe tamm gwelloc'h: ar moged a zave dre an tour heb ober droug ebet. O veza ma n'helle dont a-benn dre heg pegwir n'en doa pezh kanol ebet evit-diskar an tour, e sonjas beza mestr dre gaer ha dre finesaou. Rei a reas da glevout d'an dud e c'hellent diskenn, ne vije graet droug ebet d'ezo, hag ar muntrer bras a douas war e le e talc'hche d'e c'her. Kerkent an aotrou Villerouault hag e wreg a ziskenn, d'o heul e teu ar re all, hag ez eont da zaludi Fontanella en dra ma ra e zoudarded ar rins war gement a zo en iliz. Kalz traou a gavchont rak tud ar Pont o doa digaset en iliz kement tra vat o doa, en esper ma vijent espernet eno. Hogen ar zoudarded a laeras holl, ha ne jomas netra war o dilerc'h.

Ar pezh a oa gwasoc'h, Fontanella a yeas a enep d'e c'her hag a roas urz da grouga war an eur Villerouault, an aotrou Kosker hag eun nebeud re all. Ar pezh a voe graet: an dud-man a-voe krouget ouz gwez ar vered, hag an Intron Villerouault a voe graet d'ezi a bep seurt dismigansou dindan daoulagad he fried.

An dud all a oa kouezet etre daouarn Fontanella a voe ive lazet pe stlejet da enezenn Tristan, e lec'h m'o devoe kemend a boan da c'houzany ma vije bet gwelloc'h evito beza marvet evel ar re all. Kalz a varvas en eun doare reuzeudik er prizoniou tenval ha ferius, goude beza gouzanvet poaniou skrijus bemde. Lakaet e vezent da azeza e noaz war trebeziou tomm-ruz o deve beteg an eskern, a-wechou-all, e kreiz ar goanv, e vezent lakaet e noaz e barrikennou dour skornet. Ker stank oant er prizon, ma n'o doa ket a blas da c'hourvez na da drei, nemet war o zeil hag a-wechou e vezent ennan beteg o daoulin. Goude o maro n'o doa gwered all nemet kof ar pesked, rak kerkent ma vezent tremenet, o c'henseurted a ranke o zeurel er mor, pe o derc'hel da vreina en o zouez. Hag ar re a stleje evelse ar c'horfou maro, a veze stlejet d'o zro eun nebeud devezioù goude.

Setu aze oberioù Guy Eder Fontanella hag e dud miliget, pe gentoc'h e vandennad vleizi. Ar vro a bez a voe dismantrèt ganto betek 1597. Ha koulskoude ar vro-man a oa a du gant Merkœur hag ar Re-Unanet, ha Fontanella ive a lavare ' oa a du gand ar re-man. Petra vije bet neuze ma ne vije ket bet a du ganto?

Abaoe m'en doa eur c'hastell krenv e Tristan, spontailh Kerne a oa deut da veza hardiz. N'en doa aon rak den na rak netra. Ne felle mui d'ezan beza dindan den ebet, ha ne zelaoue ket kalz urziou an duk Merkœur.

Dre guz a reas eun dro e bro Leon, hag e skoas betek maner Mezarnou e parrez Gwiniventer. Ne gavas eno nag aour, nag arc'hant da laerez, rak ar maner a oa bet laeret eun tammig araok, met kaout a reas eur plac'hig koant, Mari ar Chevoir, eur bennherez daouzek vloaz, pinvidik bras. Guy Eder he diframmas digand he zud hag a gasas anezi gantan da enezenn Tristan, ha dem-goude he c'hemeras da bried.

Goude beza laeret war zouar, e sonjas laerez ive war vor. Setu mac'h armas listri gant laeron evit rédek ar mor. Eun nebeud listri saoz a voe tapet, laeret, ar martoloded a voe stlapet er mor, hag al listri leun a varc'hadourez presius a voe digaset da Dristan.

C'hoant a zav gantan ober eur veach d'an Naoned, evit gwelet an duk Merkoer, marteze abalamour ma oa kemennet d'ezan mont, kentoc'h evid e blijadur, evid en em ziskouez. Mont a reas dre vor. Hag evid en em ziskouez gwelloc'h e lakeas ober dilhad kaer ha koustus. Beza en doa dreist-holl eur vantell eus an dibab, strobet gand erminik, goloet a berlez hag a vein presius. Gwisket 'oa kaeroc'h eged eur roue. O welet kemend all, an Duk a lavaras d'ezan en eur c'hoapaat: « Aotrou Fontanella, ped den o deus sikouret paea da vantell? » Al laer a vousc'hoarzas ha ne respountas netra.

Lakaet e voe seziz meur a vez war Dristan. Ar c'henta er bloaz 1595. Ar roue a roas urz d'an Ao. Sourdeak, gouarnier Brest, da vouta Fontanella kuit. Sourdeak a c'houlennas soudarded Gwengamp, Tonkedek, Lanhuon, Montroulez, Korlay, Landreger, Sant-Brieg, Konk-Kerne ha Kemper, dre holl 4.000 den, koulz war droad ha war varc'h. Ganto ha gand eun nebeud peziou kanol e kelc'hias Tristan. Da genta e fellas d'ezan beza mestr war Gerity-Penmarc'h, el lec'h m'en doa Fontanella soudarded, gand aon na vije deut ar re-man da skei warnan a-drenv-kein. Holl koulz lavaret e oant lazet epad an emgann, hag ar re-all a voe krouget. Evelse edo ar c'hiz.

Seziz Tristan a gendalc'has epad 5 pe 6 sizun. Dienez a voe etouez tud Fontanella, hag ober a raent o zonz d'en em renta, pegwir n'o doa esper ebet da gaout skoazell eus a nep lec'h, pa weljont Sourdeak o sevel ar seziz Koulskoude m'en dije gouezet Sourdeak oa aet bihan er boued e Kastell Tristan, e vije deut a-benn eus al laer bras en dro-man, met ne ouie ket oa krog ar gernez en enezenn. Ar seziz a goustas ker meurbed, kêr Kemper a rankas paea an die, hag e voe 15 pe 16 vloaz abarz gallout e baea a-bez.

Fontanella a glask kemer Kemper. — O welet n'oa den all ker krenv hag hen, Fontanella a droas e zellou war Kemper. Klask a reas beza a-unan gand eur brezelour a Gemper evit beza aesoc'h d'ezan ober e daol. Ar

c'habiten *de Clou*, evit kaout arc'hant emichans, a zelaouas e ginnig. Hogen an aotrou *de Saint-Luc* a zouetas oa eun dra bennak etre ar c'habiten ha laer Tristan. Neuze de Clou evid en em zidammall a douas e rafe Fontanella prizonier. Ober 'ra van da gendalc'her da drubardi, hag e skriv da Guy Eder da zont d'e gaout en eul lec'h hag eun eur merket evid en em glevout gantan. Pedi 'ra anezan da zont dre guz hep den d'e heul. Fontanella a brometas dont. Neuze de Clou a gasas epad an noz el lec'h e tlie an daou genseurd en em gaout an deiz war lerc'h, eun 30 soudard bennak en em guzas a-drenv ar girzier tro-war-dro. De Clou a zigouezas d'an eur merket, hag ive Fontanella gant *la Bouille*, e vevel bras. Goude beza poket an eil d'egile evel kustum, de Clou hag al laer a grogas da gomz diwar-benn: Kemper. Kerkent ar zoudarded kuzet a zilammes a bep tu en eur denna, hag en eur youc'hal. La Bouille hag ar mevelien all spountet-holl, a redas kuit, la Bouille war varc'h, ar re all evel ma c'heljont. Ha Fontanella, laer ha müntrer, a oa tapet ha liammet. Digaset e voe da Gemper dirag an ao. de Saint Luc. Ar vro a-bez a voe eurus eus eur seurt taol, rak an holl a zonzje e vije kondaonet Fontanella d'ar groug, evid an holl dorfejou en doa graet. Ya, met an ao. de Saint-Luc a gare an arc'hant; el lec'h kas e brizonier da Roazon evit beza kondaonet, e kavas gwelloc'h tenna dioutan eur ransoun vras hag e lezel da vont d'ar gêr dibreder.

Distro da Dristan goude beza paet e ransoun, Fontanella n'eus ken eur zonz en e spered: en em venji. E youl eo beza mestr war Gemper evid he freiza, he laerez hag he dismantri. « Eno e kavin, emezan, muioc'h a arc'hant hag a draou eget n'am eus ranket rei evit kaout 'va frankiz. » E ofiserien hen alie ive, abalamour d'ezo da veza pinvidik da viken gant preiz ar gêr-ze.

E miz ebrel 1597, Fontanella a glaskas mont e Kemper e kreiz an noz dre finesaou. Met Kemperiz a oa war evez, hag an taol a voe manket. Neuze e klaskas beza mestr dre nerz, e kreiz an deiz. D'an 30 a viz mae 1597, mintin mat Fontanella a gerzas war Gemper gant 1.200 den. War e veno, oa sur da gaout ar gounid; kas a reas zoken dre vor eur maread bagou, ha kalz kirri a zigasas gantan dre zouar evit karga an traou a oa e sonj laerez. Da zek eur, ar gedourien diwar mogeriou kêr a welas soudarded Fontanella e kichen Pratanras. Kerkent Kemperiz holl a yeas d'ar mogeriou evit difenn kêr eneb an enebour. Heman o veza digouezet e kichen chapel Sant Sebastian (el lec'h eman hirio skolach ar merc'hed), ar zoudarded a ziskennas diwar varc'h hag a deuas betek plasenn Sant Vaze. Hogen, paotred yaouank Kemper a deuas neuze er-maez evit diambroug laeron Tristan hag a skoas gant kemend a gounnar ma rankas an enebour kila en eur lezel war an dachenn eun niver bras a dud

lazet, ha muioc'h c'hoaz a dud gloazet. Ar re-man a karget er c'hirri deut evit lakaat an traou laeret, ha Fontanella a zistroas da Zouarnenez hep beza gellet kaout an trec'h. Eun eurvad e voe an dra-ze evit Kemperiz, rak Fontanella en doa roet urz d'e zoudarded da laza holl gwazed Kemper ha da gemer ar merc'hed evito.

Droug ennan, spontailh Kerne a reas c'hoaz ar rins war Blogonnek, Lokournan, Plonevez-Forzay, Ploare ha Pouldergat. Ne jomas var e lerc'h netra met ludu, ha tud a-istribilh ouz ar groug. Diouz ar c'horfou maro a vran-sigelle ouz skourrou ar gwez e c'helled heuilh roudou an den kriz.


D'ar mare-ze, ar brezel a baouezas er Frans a-bez, rak Herri IV a oa 'n em c'hraet katolik. Hag e voe gwelet Fontanella ar muntre, Fontanella ar brasa torfetour a zo bet biskoaz e Breiz-Izel, o kaout an hardizegezh da c'hou-lenn e bardon digand ar roue. Herri IV aet skuiz o stourm, ha mall gantan kaout ar peoc'h her pardonas hag hen anvas zoken da c'houarner Douarnenez.

Evelato, e dorfejou euzus n'oant ket ankounac'haet, hag eur ar c'hastiz a zonas pevar bloaz diwezatac'h. Ar roue a roas urz da dapa krog e Guy Eder, ar pezh a voe graet. Kaset e voe da Roazon hag ac'hano da Bariz. Tamallet e voe da veza klasket en em glevout gand an duk Biron evit trubardi Bro-C'hall. Tamallet e voe ive da veza graet a bep seurt dismegans d'an Intron Villerouault e Pont-Kroaz. Ha war an diou zigarez-ze e voe kondaonet d'ar maro.

E varo a voe kriz, meritet en doa. Stlejet ' voe war eur glouied dre ruiou Pariz, ha goude ' voe ledet war eur rod o trei hag a dorras e holl izili. E basion a badas eun eur hanter. N'en doa nemed eiz vloaz war 'n ugent. E benn distaget, diouz e gorf bras a voe digaset da Roazon ha staget ouz unan eus doriou kêr evit diskouez d'an holl oa maro Guy Eder Fontanella, spontailh Breiz-Izel.

E bried yaouank, hag a oa deut d'e garet kenan war a leverer, a varvas demm goude gand ar vez hag ar rann-galon. N'he doa c'hoaz nemet seitek vloaz. Hag he bugel bihan ne zaleas ket da heulia e vamm er bez.

KAORANTIN P...



ISTOR BREIZ

Ar Vretoned o tont en Arvor

O stad d'an ampoent ; o yez, o gizioù

Gwelet hor beus, er miz tremenet, e pe zoare edo an Arvor d'ar mare ma en em lakeas ar Vretoned da zont enni da jom.

Dizroomp breman hon daoulagad da zellet ouz stad ar Vretoned-se, da welet peseurt yez (langach) a gomzent, peseurt gizioù o devoa, ha peseurt relijion a heulient.

Enez-Vreiz, meur a gant vloaz a-raok ma tirollas er vro gouezidi an hanter-noz, a oa bet perc'hennet gant ar Romaned, eur bobl tud galloudus kenan eus a rouantezh Rom. Ar re-man evit gwir o doa astennet o beli (o galloud) war an darnvuia eus ar broiou anavezet d'ar poent-se: war Vro-C'hall, ar Jermania, ar Spagn, an Afrik hag all. Hag e pep bro ma kemerent, e reant d'an dud kenan o yez (al latin), heulia o gizioù ha plega d'o reizou; n'oa nemed ar relijion hag a loskent didrabas, ha c'hoaz a-wechou. Ar broiou kabestret, elec'h enebi, a gave gwelloc'h soubla d'o renkou. Ar Vretoned ne rejont ket evel ar re-all. Biskoaz ar Romaned, — kaer o devoe ingala kordenadou soudarded dre bevar c'horn ar vro, kaer o devoe boda armeou brezelourien e teir gêr vrasa an Enezenn (York, Chester ha Kaer-Leon), kaer o devoe sevel tiez, manerioù ha kêrioù bras zoken, ha digeri henchoù n'eus forz pegement, — ar Romaned biskoaz ne deujont a-benn da c'hounit kalonou ar Vretoned. Ar re-man a jomas ar pezh ma 'z oant: Bretoned penn-kil-ha-troad. Derc'hel a rejont d'o yez, derc'hel a rejont d'o gizioù.

O YEZ da genta. An holl urzioù a veze roet gant ar vistri e yez Rom, e latin; an holl embannoù a veze gret e latin; an holl nevezentioù a veze skrivet e latin. Met tud ar vro, ma kemerjont eur gerig bennag eus yez o aotrou-

nez da douezia gant o hini, a gendalc'has ken etrezo da gomz kelteieg pe vrezoneg. Hag eur wech ar Romaned en em dennet kuit, e kouezas da netra koulz lavaret al latinerezh dre ar vro: Ha ma veze gwelet a-wechou eur brabanser bennag o kemeret dre lorc'h anioù latin hag a dinte brao d'o diousskouarn, evel *Aurelianus, Pelagius, Paternus*, — evel ma 'z eus hirio en hon toüez tud o rei d'o bugaligou koz-anoù parizian, evel *Narcisse, Anastasie, Louséphrie* — ez oa rouez ar fougeerien-ze etouez ar bobl hag e veze gret d'ezo hejou-skoaz... Ma komze a-wechou Bretoned Breiz-Veur yez Rom, ma 'c'h en em roent a wir-galon d'al latin en eun tu bennag, oa e diabars an ilizou, evit pedi Doue ha kana e veuleudi.

Evit ar pezh a zell ouz o gizioù, o stum-beva, oa ar mezh tra. Ar Romaned, evit ren esoc'h a-ze ar vro, o doa digaset ar c'hiz nevez da lakât e penn pep kêr eur maer hag eur c'honseilh dibabet ganto. Ar pennou bras-se o devoa da welet war gêr ha war ar mêzioù tro-war-dro. Met ar Vretoned ne blegjont morse da reizou estren evelse. Ha kement-se evit daou abeg: da genta, abalamour ar seurt kuzulioù ti-kêr-ze a lake ato ar c'hêrioù dreist ar mêzioù, hag ar Vretoned a oa troetoc'h gant ar mezioù eget gant ar c'hêrioù; — d'an eil, abalamour ar c'huzulioù-ze a ziazeze pep galloud war lezennou aozet ganto, e-skoaz ar Vretoned ne felle d'ezo anaout nemed lezennou ar gwad. — Rak-se ne gavomp roud e Breiz-Veur nemed eus eun ugent kuzul ti-kêr bennag, epad holl vestroniezh ar Romaned.

Tud ar vro a gave gwelloc'h en em voda dre *veuriadou* ha dre *genedelloù*. Ar *meuriad* (tribu e galleg) a oa eun unvaniezh start etre kerent tost. Ar *meuriadou* a en em unane d'o zro en eur gevredigezh vrasoc'h hag a read anezi *kenedel* (*clan* e galleg). Er genedel n'ez oa nemed tud eus en hevelep gouenn, eus an hevelep gwad, betek an navet lignez eus an diou gostezenn. E penn ar genedel edo ar c'hosa den gouest eus ar gerentiaj. Ar penn-kenedel en devoa kalz galloud: gourc'hemenn a rea war ar genedel a-bez, difenn a rea he gwirioù, ober a rea eviti dirak bodadennou bras ar vro. Rak-se ez oa doujet ha skoret mat gant e dud.

Setu aze stad ar Vretoned e Breiz-Veur araok ma 'c'h en em lakejont da dreuzi ar mor evit dont en Arvor. Gwazed oant, evel ma welit, hag a ouie derc'hel start d'ar diou dalvoudusa pinvidigezh he deus — goude he feiz — eur bobl war an douar-man: he yez hag he broadelezh.

TENENAN GOURIOU.

Ar pezh a welas Marijannig Truten da hanter-noz e Iliz Sant-Per-Gwiskri

Eur vaouez fur ha santel eo Marijann Truten,
He zeod, moarvat, n'ema ket stag diouz an daou benn.
Met ma tigouez gantan penseliat an nesa,
Evit pedi Doue 'ya en-dro dreist pep tra !
Eur blijadur, plac'h paour, eo bet d'in a viskoaz
He gwelet en iliz oc'h ober Hent ar Groaz,
O tisonk paterioù ken dibilh ha ker brao
Ha ma tiver an deenn goude eur gaouad giao.
Hi a gar bout gwelet !... Ma ne ve nemeti !
Goustadik 'ya an traou ha startoc'h eo pedi...
Ha meur a wech, siouaz ! e tigouez d'ei kousket,
Harpet var he c'hador, e kreiz eur chapelad.

Eun nozvez, plac'hig paour, Marijann 'oa ken skuiz,
Hag ouspenn-se e oa ken didrouz an iliz,
Ma pakas hi eur c'houk, eur c'houk hir ha pouner !
Sonet an Angelus, aet ar c'hloc'her d'ar ger,
N'ho pe gwelet nemet al lamp bras o luc'ha
N'ho pe klevet nemet Mar'jann o tiroc'ha !
Kousket he defe bet, me gred, tre d'ar mintin ;
Met, wardro hanter-noz, setu eun trouz sklintin
A zihun an Iliz ha... Marijann ive ;
Setu eur sklêrijenn a lugern, va Doue !
Muioc'h 'get ar goulou da noz an Nedeleg :
Marijann 'chom spontet ha digor-kaer he beg.
En eur grena, plac'h paour — hi he deus hel laret —
Setu an traou souezus he doa neuze gwelet...

Gwelet he doa, pa voe sonet an daouzek taol,
Pep sant eus an Iliz : ha sant Per, ha sant Paol,
Sant Lubin, sant Anton, sant Loeiz, sant Korneli,
O tiskenn diouz o flas hag o tont pep hini
Da gemer lec'h er c'heur — evel ar veleien
O-tont d'ar gousperou gant o « surplusou » gwen —
Hag er memez amzer, setu dre an norioù
O tigouez holl ar sent a zo er chapelioù :
Sant Aler war e varc'h, sant Tudal, sant Varzin,
Sant Gwenaël, sant Vaude, sant Dreoc'h, sant Matilin,
Sant Anton, sant Moris ha tri pe bevar c'hoaz :
Leun eo ganto ar c'heur evel d'ar gouelioù braz !
Hag, eme Varijann « Poan am hoia o kredi
E 'oa kement a zent war zouarou Gwiskri ».
P'emaint digouezet holl, sant Per, vel ar Patron,
A gemer plas er c'hreiz, 'lec'h e ve ar Person ;
Sant Paol en e gichen, gant eur pikol kaer ;
Ar re-all tro-war-dro...

Neuze e komz sant Per :

- « Eun El, a herz sant Vae, perseptour an nenvou,
- » En deus digaset d'in 'vit goulenn hor c'honchou
- » Eun tammig paper glas; divezat omp tapet
- » Hastomp eta, breudeur, dispaka 'vel m'eo dleet
- » Dirazan hor c'honchou, holl doare ar barrez —
- » Va mignon Paol, eun den a zeskadurez,
- » A verko holl an traou ker brao war ar paper —
- » Da genta ar profou ! »

Ar moc'h a zo bet ker

- « Ha dihadet o deus, a lavar sant Anton,
- » Muioe'h eget biskeaz. Evit va daou bardon
- » Me am eus dastumet wardro pevar c'hant skoued ».
- Eun tammig war ma lerc'h, rak pemp kant am eus bet,
- » A lar, en eur c'hoarzin, Aler sant ar c'hezeg.
- Va yalc'h-me a zo skanv : kant lur 'met dek gwenneg.
- » Eme sant Matilin, rak n'am eus da ziouall
- » Nemed an dud, siouaz ! eur vare'hadourez fall
- » Pe gwir n'o deus ken sonj nemet euz traou ar bed :
- » An eme n'eo netra, muioe'h a dalv loened !
- E va c'harter Pont-Moen, a 'lar Tudal neuze,
- » Ema ker paour an traou ha tre ken stag ive
- » Ar c'hroc'hen ouz o c'hein... Euruz c'hoaz na ve kin
- » Lapoused 'vel Kola (1) 'vit ober goap-ouzin. »
- Holl ar zent all, pep hini d'e dro a zispak,
- A c'houlondr war an daol o yalc'hou doun ha flak !
- P'en deus kontet sant Paol an argand ha skrivet,
- Sant Per a zav 'darre hag a lar :

« Gwelet 'ret

- » Ema gwall-biz an dud hirio, ema stard bras
- » Ober d'e dispega diouz o faper, siouaz !
- » N'hon eus ket ni ezomm euz traou ken didalvez,
- » Met ar profou gret d'eomp da vihana 'ziskouez
- » E hellont distaga o c'halon a-wechou,
- » Labourat vit an nenv ha dastum gwir vadou :
- » Ar re-ze, va breudeur, n'int ket stank e Gwiskri !
- » Met kendalc'homp breman, mar plich, gant hon studi,
- » Gwelomp an doareou eus ar vuhez kristen :
- » Ma zeu an dud hep sul ha gouel d'an oferenn,
- » Ma n'eus ket da welet er barrez dizurzou... »
- Azeet ar Patron ha klevet e gomzou,
- An eil war egile holl ar zent a daolas
- Sellou diskonfortet, sellou glac'haret bras.
- Evit komans ar c'hlemm, n'ez eus prez war hini
- Rak, — koulz eo hel laret, — e pep korn eus Gwiskri,
- Niverus eo ar re ha n'o deus sonj ebet
- Eus oferenn ar zull.

(1) Meneg eus eun den gwall-vrudet ha goapaer diskredik.

Gant eur vouez trist meurbet

- Gwenael a ziskleri : « An dud eus va c'harter,
- » Ma n'ez eont ket d'ar voure'h, eo rak emaint ken pell,
- » Kalz outo koulskoude a ya da Sant-Thurien (1).
- Ma re, a lar Anton, 've e Lanvenegen (1).
- Loq a zeu tre d'ar voure'h, a lar neuze Sant-Per.
- » Chom a reont el « Loch-Koad » (2) a zo e penn-traon
- » Hag eno, a dra sur, ema kaeroc'h ar c'han. [ker,
- » Fentusoc'h ar zermon ha... krenvoc'h an organ ! »
- Ar merzer Sant Moris a zav ive d'e dro :
- » Eun nebeudig merc'hed, n'ez eus ket c'hoaz pell-zo,
- » A zigoueze bep sul, goude gwerz an aman
- » Da ziskuiz eun tammig en ilizig vihan (3),
- » Ha da c'hortoz e peoc'h ar fin eus ar zermon :
- » Gret e voe goap outo gant an Aotrou Person...
- » Ha breman e chomont da gemer ar « c'hafe »
- » Keit ma ve ar re-all, en iliz gant Doue. »

Kalz a draou a verkas sant Paol war e gailer
 Diwarbenn an dud paour a zo ken dibreder.
 Vit miret ar suliou, vit senti d'al Lezenn,
 Vit lezel al labour hervez ar goure'hemenn
 Vit heuilh ar vijiliou hag ive ar yuniou.
 Vit rei d'ar re vihan skouer vat ha kenteliou.
 Red 'oa d'ezan skriva kalz muioe'h a draou c'hoaz,
 Evit rei da anaout — doareou trist, siouaz ! —
 An dizurzou mezus, festou-noz ha dansou
 A lak ar yaouankiz eus holl ar c'harteliou
 Da vont da goll hep nec'h, d'ankouat hep dale
 Poellegez ha furnez l...

« Ya, eme Sant Vaude,

- » Ne gaver, e pep hent, 'met tavaruiou leuniat
- » Gant tud sot ha diroll — ha potred ha merc'hed —
- » O lammat vel loened epad ma 'ya en-dro
- » Holl zonerez an diaoul, biniou ha piano.
- C'hoant mat am befe me, a lavar Sant Varzin,
- » Diouz an hanter-mantel a zo chomet ganin,
- » Da rei eun tamm bennak d'ar merc'hed divezet
- » Vit hirrat o broziou ha kuzat o bruched ! »

Pa voe echu an traou, pa voe taolet eur sell
 War bep tra, war bep korn, 'vit tenna ar gentel
 Sant Per, goude an holl, a zavas c'hoaz e vouez :
 — Gwir eo e ve kavet feiz kristen ha furnez

(1) St-Thurien, Lanvenegen : diou barrez douar ouz douar gant Gwiskri.

(2) « Loch-Koad » : baraque, salle de danse.

(3) An ilizig vihan : chapel an I. V. a Druetz savet er vered tostik d'an iliz-parrez. Eun nebeud merc'hed a'z ae di e lec'h mont da glevet an oferenn.

» E mesk an dirollaj ha gwir eo ez eus c'hoaz
 » Er barrez-man, breudeur, eneo santel-bras.
 » Met an niyer outo a vihana bemde.
 » A ! e pelec'h emaint ta, e pelec'h va Doue !
 » Tud fur an amzer-goz ? Ne vijent ket spontet
 » Dirak diou leo d'ober vit an oferenn-bred !
 » Ar c'hoazed eus gwechall, gant o brageier-lin
 » A ouie c'hoaz 'n em daol gant feiz war an daoulin ;
 » Ar merc'hed a ouie, gant o c'hapou ken doun
 » O zavacher gloan-rouz, miret en o c'haloun
 » Ar vertuziou kristen...

« Pedomb, va mignoned,
 » Ma vleunio vel gwechall, en hor parrez karet,
 » Ar feiz, ar garantez, holl ar madou hep par
 » Digaset gant hor Mestr 'n eur zont war an douar.
 » Vidomp-ni, kendalc'homb, gant hor skeudennou mein
 » Da chom evel c'hoalen e mesk traou ious ha brein,
 » Da vout d'an holl eur skouer vit o dougen d'ar mad,
 » Da bedi hon Salver ha d'hen pedi dalc'hmat. »
 Marijann a chomas, goude an nozvez-se
 Eiz de gant an derzien, kousket war he gwele,
 An anoued, an aoun hag ive ar c'hlae'har.
 O klevet holl an droug a zo war an douar,
 En doa goasket he c'halonig da Varijann ;
 Met eur wech pareet, gant an aked vrasan
 Ha hep klask bout gwelet, e vije evel kent
 O pedi en Iliz, dirak skeudenn ar Zent ;
 O pedi heb ehan, hep kousket ; o pedi,
 Unanet gant ar Zent, evit parrez Gwiskri !

Hizio hep mank

kasit hoc'h ano da F. Vallée, 23, streat St-Benoit, Sant-Brieg, da rakprener

Trede levr ar SKETLA SEGOBRANI

bravoc'h c'hoaz eged al levriou kenta. Etre kant ha kant a draou marzus all e vo taolennet ennan *an teir linvadenn*. Mar deo barzonius linvadenn kêr Is gant ar Vretoned, na pegen barzoniusoc'h n'eo ket an teir linvadenn gant ar Gelted koz!

Mar karomp sevel hol lennegez, sellomp ouz hon Amzer-Goz:

- Hon Amzer-Goz
- Evel an noz
- Leun-holl a stered!

Ar stered-ze eo a sklerijenno d'eomp hent hon Amzer-da-zont, ha neket fals-loar briz-faoutet ha merglet ar C'hal-laoued!

Prenomp ha lennomp holl ar SKETLA SEGOBRANI !
7 lur hepken evid ar rakprenerien



ROUE AL LAZ

(Kendalc'h)

Eur c'hoad a c'holoe riblou ar stêr, demdost da vilin Traon-ar-Run, eur c'hoad-med, gant torkajoù gwez pin-gwintet war an uhel, reier gwenn o tispaka o zal noaz dindan gwaskedenn denval ar gwez du. Eno, e krap an dosenn, eo e chomas ar c'hloareg ha Kevareg, ar pôtrig o vont e-unan betek ar vilin, gant urz da zizrei war e giz d'o c'haout.

Dizrei a reas. E visac'h war e skoaz leun a vleud kerc'h, hen gwelont o krapat 'vel eur c'havr gant kre-c'hennou Traon-ar-Run; ne voe ket pell 'vit kaout ar c'hleuz dindan ar rec'hel elec'h ma oa en em repuet Kevareg ha Kersôzon da c'hedal anezan.

— Grêt mat e peus da dro? eme Gevareg.

— Ya, eme ar bugel; den ebet n'en deus gwelet am oa me roet eul lizer, d'ar miliner...

— Kont d'eomp petra zo c'hoarvezet ganit? Ar pôtrig a gontas d'ezo penn-da-benn.

— Ar miliner, emezan, a oa evel ar maro, gant pevar soudard glas war e dro o vésa anezan. N'en deus ket gallet lenn ho paper nemet e kuz, rak daou soudard a oa eno er porz; ar re-ze o deus chachet war va dioukouarn, abalamour ma c'houlennet bleud d'ober yod 'benn dir-gwener.

— Mat eo, mignon Perig, eme Gevareg; grêt e peus da gefridi evel ma oa dleet. Breman te 'yelo d'ar gêr hag e lavari du-man, d'am'fried ha d'an dimezell a zo ganti e vezimp distro 'benn warc'hoaz da greizteiz, mar bez holontez Doue.

— Ober a rin, eme ar pôtrig; kenavo warc'hoaz! Hag o samma e visac'h war e skoaz, e tiskennas d'ar rêd trezek an draonienn, ouz en em zila etre ar bodou hez, lakat unan anezo da finval.

— Ar c'hloareg a lavaras neuze da Gevareg.

— Mat d'eomp 'n em renti elec'h m'o deus hon zud da en em gaout ganeomp...

Met pa oant, ar c'hloareg er penn araok, o tanzen klask o hent dre douez ar streujaj, eun trouz, trouz ar bodou o frega, izeloc'h egeto, a reas d'ezo chom krenn a-zav.

— Gourvezomp! eme ar c'hloareg.

'N em lakat a rejont war o c'hrabanou da zellet. Kevareg, da genta, a anavezaz an hini a oa o tont.

— Pierig! emezan. Hag hen galvas demgoustad, pa voe arru en uhelder ganto.

— Pierig!

Ar pôtrig a chouchas kerkent.

— N'az pez ket aon! Ni eo! Petra c'hoarvez anavez?

— Gwelet em eus breman soudan an hini en deus lazet ho mamm o tremen aze en draonienn.

Soudarded a oa gantan; nao, dek am eus kontet... Ar bêleg a oa ivez gant eur gordenn ouz e vrec'h.

Kevareg, liou eun den archedet en e gerc'hen, a lavaraz.

— O vont d'ar vilin emaint! Ha ni, diskennomp da gaout hon tud! Deut eo an eur!

Pierig a zelle outo, nec'het.

— Gra a giri, eme Gevareg; chom ganeomp, mar kerrez, betegout na gavfes c'hoaz gwall dud war da hent. Varc'hoaz, ni a gaso ac'hanout d'ar gêr...

Tridal a reas ar pôtrig pa glevas e c'helle chom gant e vignoned, ha setu hen da heul d'ar paz-ki, gant e zac'had bleud kerc'h bepred var e skoaz.

Eur pennadig bale dre wenojennou ar c'hoad hag en em gavjont o zri el lec'h merket, er beure, en eun enezennig krouet gant kas eur wazig dour. Gourvez a rejont eno dindan ar skourrou, pep hini anezo troet e zellou war eun tu da c'hedal.

— Me 'glev tud o komz! eme Berig, soudan, o sevel e benn.

— En em guz! eme ar c'hloareg.

A-benn eur pennadig, eun den o treuzi gant evez, eus an eil gwezenn d'eben, a en em ziskouezas; plega a reas da zellet dindan ar bodou.

— Riwall, eme ar c'hloareg, oc'h anaout anezan, pelec'h eo chomet ar re all?

— Emaint pelloc'h, gant an armou, o c'hedal ma 'm bo kavet ac'hanoc'h.

— Gra d'ezo eta dont aman, eme Gevareg, pe kas ac'hanomp d'o c'haout, rak mall eo mont etrezek ar vilin!

— Deuit ganen! eme, Riwall.

Ober a rejont daou-c'hant kammed, a gilwid kaer dre ar c'hoad. Riwall neuze, a skoas adreuz d'eun torkad lann hir ha teo. Drek an torkad lann-ze, klenk ha kuz eno evel drek eur gledourenn, edo Per hag an daou Dhepot; fuzuilhou, sabrinier, pistolennoù ha sac'hadou poultr ha bouliji a oa ganto ouz o zreid.

— N'eo ket bet al laer e Toull-an-Houc'h? eme ar c'hloareg.

— Nann, emezo; sant Gweltas en deus mèsaset mat hon traou.

Dremm ar c'hloareg a zederaas.

— Gwrage o kannan hon deus kavet war hon hent, eme Ber, hag o deus youc'het warnomp: « Chouanted! lazerien tud! » Darn a zo ha n'int ket troet mat en hon c'henver. Koulskoude, ni ne lazomp den nemet evit en em zifenn...

— Bezit dinec'h! eme ar c'hloareg; difenn ho pro ar rit, ho relijion, ho peadra, ho kerent, ho pugale... N'eus ket kaeroc'h labour. Treitourien a gavfot er gêr ha tud digalon ive; ne gavfot ket etouez ar chouanted.

— D'eomp war 'raok! eme Gevareg, en doa staget ouz e gostez pounnera sabrenn a oa.

— Eur penn-baz a zo deut ganeomp ivez, eme eun Thepot, unan sec'h hag a zo ken kalet ha ken pounner hag houarn. Da biou e vo?

— Deus aman anezan d'in, eme Gevareg.

Hag e tarc'hoas gantan eun tôl war eur men, en e gichen, goloet a drouskan. Ar men a voe faoutet en-daou bez.

— Dao d'ezo! emezan, e zellou o virvi en e benn. Peñ ec'h omp? C'houec'h? Poultr ha bouliji hon deus, n'eus forz pegement! Sin ar groaz, pôtréd, ha Doue a-raok!

— Doue araok! emezint holl.

— Ar Re C'hlas marteze, a zo kalz niwerusoc'h egedomp, eme ar c'hloareg; met pa vezer o tifenn ar gwir, ne zeller ket, nemet kerzet bepred. An trec'h a zo da neb a gar Doue.

Ar c'hloareg a lavaraz c'hoaz penôs an hini a varvje en emgann a gavje digor er baradoz.

Kalz a draou en dije karet c'hoaz, 'met ne oa ket ar mare, rak red e oa 'n em gaout demdost d'ar vilin a-raok an noz. Mont a rejont eta en hent. Pierig da genta, lorc'h ennan, pa oa laket da ren ar vandenn.

E visac'h a zalc'he bepred war e skoaz da gas ar bleud d'e vamm d'ar gêr, emezan.

Boaz e oa d'ober er c'hoad kant ha kant tro, o klask neziou; kas a reas e dud da lein eur pikern goloet a vrug hag a lann hag e welent ac'hano porz ha toull dor ar vilin ken reiz ha tra.

Gellout a rejont konta seiz soudard o tibri 'barz ar porz, e kichen o fuzuilhou, ha daou pe dri all o vont hag o tont etre an ti hag ar mêz. Kemend all a oa en ti, marvat, marteze ouspenn.

— Azezomp eur pennad d'en em glevet! eme ar c'hloareg.

((Da heuilh)).

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kuzulioù Tintin Anna

V^ot PENNAD

AN NETADUREZ

Nag eurus eo ar merc'hed a c'hell kaout dour-red da walc'hi: ster pe c'houer a lakaio netoc'h an dilhad atao eged ar poull; pa gomzan eus ar poull n'em eus c'hoant ebet da lavaret ano eus ar poullou a zo war ar maez ha ne vez nemet daou pe dri rumm o walc'hi enno, met eus ar re a weler er c'heriou, p'eo gwir, eur maread tud, kentoc'h eget mont war o zro, da zikour diframma o nesa, gand ar re all, a zo gwelloc'h ganto, gwalc'hi o dilhad, en eur bailh pe en eur zailh, en o zoullou-kampr; huanadi a dleont alies, me gred, en eur zonzal en o c'hêr, el lec'h m'eo ken aes kanna an dilhad, en dour skler, hag o lakat da zec'ha war ar c'harz el lec'h ma par an heol ha ma c'houez an avel.

Gant pebez plijadur e welan, bep sizun, va amezogez tosta o treuzi al leur, drant ha skanv, eur ganaouenn, en he genou, eur mousc'hoarz war he muzellou; lavaret a rafen e vefe o vont d'eur pardon pe d'eur pante (1) ben-nak, ma ne welen ket war he fenn... eur boutegad dilhad fank. Eus va frenestr e welan anezi o pucha war eur maen plat, e ribl ar ster, hag o tistronsa he manchou; dispaka a ra eur pezh dilhad hag e soub anezan en dour yen goude beza e droet war an tu eneb, evel just; daou damm soavon a zo deuet ganti; eun tamm soavon gwenn evid an traou tano, hag eun tamm glas, bouk, evid an dilhad teo; en hennez ez eus muioc'h a botas (2). Frota a ra soavon ouz he dilhad; o rinsa a ra en dour; skei a ra warno gant he golvaz ha p'he deus o gwasket mat e laka anezo en he c'hichen; pa dosta ar poent da aoza ar pred, va amezogez a zav, en he sav, hag a gemer hent ar gêr, atao kel laouen ha tra; n'he deus ket kollet he amzer, evit doare; lavaret e vije graet ez eus breman eur boutegad erc'h war he fenn pa bar an heol war an dilhad fresk.

N'em eus ket a c'hoant da gredi e c'hellfen deski netra

(1) *Pante, panteou*, ger anavezet gant an hoil e Gorre-Leon hag a dalv, e brezoneg, keit hag ar ger « assemblée » e galleg.

(2) Ar ger *potas*, eus ar ger alamanek *pottasche*, da lavaret eo tudu-pod.

da zen diwarbenn ar gwalc'hi; evelato e rankan lavaret oun bet, meur a wech, e ti an amezeien, goude lein, pa deu ar poent d'ar wreg da virvi ar c'houez; meur a dro, pa ne c'hellen ket dizaotra eun tavancher, eur c'hoef pe eur mouchoer, em eus, en despet d'am oad, goulennet ali diganti; an aliou-ze a lakin aman izeloc'h; marteze e c'hellint talvezout da unan bennak.

Gwechall e veze laket lichou war an dilhad; met n'eo ket mat pep ludu da ober lichou; ludu an dero a zo mat tre; hini ar c'histin ne dalv netra; breman e kaver da brena eul louzou hanvet « kristo » hag a zo koulz hag lichou da rinsa an dilhad; arabad beza re vrokus gantan rak ma ra vad eun nebeud anezan, re a rafe droug.

An dilhad a vez kailharet peurliesia gant douar pe boutrenn, gwad pe zoa, a vezo gwalc'het en dour yen da genta ha laket da virvi da c'houde; gant ma vezo fro-tet mat soavon outo e tiintring.

Ar c'hoar hag ar rouchin a ya kuit gant terebantinn, alkool, pe zour Kologn ha dour soavon da echui.

War eun tachad merglet lakit al louzou hanvet c'hoalenn trichin. Glepiit an tachad, da genta; lakit eur meutad c'hoalenn warnan ha troit an dilhad ouz an heol; ar c'hempenna-man ne c'hell beza graet nemet pa vez digo'henn kaer an amzer.

An dilhad a zo aet lard karr outo a vez rinset gant terebantinn ha gwalc'het goude.

Ar gwin hag ar frouez a zo diaes da gas kuit; evit kempenn an dilhad saotret gant an traou-ze gwalc'het anezo gant soufr, klor pe ammoniak.

An dilhad intret pe louet a c'heller da rinsa gant laez dous pe laez-ribod hag o lakat en heol da c'houde.

Al loereier gloan du a vez gwalc'het en dour klouar; ar re goton pe... zeiz, en dour yen, met arabad o gwaska.

Estreged ar c'hreziou a rank beza net; en ti, evel ma m'eus merket aman c'hoaz, e rank pep tra beza dilastez! n'eo ket hepken al listri-kegin, an daol, an oaled, met ivez an arreburi, ar sklasennou, an taolennou, ar c'han-toloriou hag all.

D'ar bloaz nevez ez eus bet deuet eun niz d'in, d'am gwelet; da loja e oa chomet ha dioc'h an noz, e korn an tan, em eus goulennet digantan: « N'out ket deuet d'am fedi da vont d'az friko c'hoaz 'ta, Yvonig? »

« Ma n'hoc'h eus nemet va friko d'ho larda, emezan, emac'h er riskl da vervel trent! »

« Merc'hed k'ont ha fur a zo e Breiz, va maob; e pelec'h eman an hini a lako da galon da dridal? »

Hag hen, dic'hoarz: « Siouaz! ankeniet eo va c'halon ha ne drido mui! Selaouit ac'hanoun, kentoc'h; va breur ha me hon doa laket hor sonj e diou c'hoar, potrezed di-

bistik, devot ha savet mat. Va mamm a lavare alies: Diouallit, potred da veza tapet; evesait mat, pa n'eo ket re zivezat ha n'it ket da zigas aman merc'hed diskempenn ha lezirekl » Ni ne zonzemp ket keit-se! Da zul, pa 'z aemp di, veze aozet d'eomp eun alumenn-viou ha diskarget meur a vanne; ar merc'hed a veze laouen ouzomp hag epad ar zizun n'hon doa preder nemet gant hol labour. Derc'hent foar-an-nec'h, e Montroulez e sonjis mont ebiou ti va muia karet, rak he zad a oa d'ezan mont ivez gand eur gazeg tri bloaz, Wardro poent merenn edon oc'h en em gaout.

— Doue r'ho pennigo, emoun-mel!

— Bennoz Doue d'it pôtr! eme an ozac'h; azez aze, sell, ha debr eun tamm ganeomp!

Va dousig a redas da glask d'in eur verenn hag eur volenn, met, kerkent ha m'he doa o laket dirazoun, e savas an heug em genou; ar verenn a oa tenval ha spegus; e diabarz ar volenn e oa chomet roudou he meudou. Ha pebez meudou! o sent Breiz! feunteunioù a-walc'h ho peus kavet ha dizoloet war hon douar benniget, kouskoude, ha

*N'eus nemed eur banne dour
Etre net ha loudour.*

Salaün ar Foll a zoubte bemdez e gorf bras en dour yen, hag ar bizied-man, n'oun ket nec'het, n'o doa ket gwelet an dour abaoe ar zul a-raok. Neuze e sellis, en dro d'in; gwiad kivnid, e pep korn! traou torret ha loustoni dindan ar gweleou; aman, ar c'haol da rei d'ar moc'h; a-hont, tammou yod louet en eur bodez!

Ar skeudennou hag ar c'hañtoloriou a oa war ar siminal a oa brao diouz eun tu ha poultrennet pe verglet, en tu all! Toull va gouzoug a oa stanket gand an displijadur; ne c'hellen na dibri tamm nag eva bannel!

— Mont a ran atao, en hent. emeve d'an ozac'h; ne zaleoc'h ket d'am faka!

Hag e valeis warzu an nor, goude beza bet riklet, diou pe deir gwech, gant va boutou-ler, war al leur-zi, ken lous e oa!

Va hini goz a deuas war va lerc'h er maez: « Petru 'zo en em gavet ganez, Yvonig? Chench liou ez peus graet! »

« Eun tammig eman va c'halon war neunv, met gand ar bale hag eur zigaretenn, an dra-ze a-dremenol! »

« Kenavo disul, atao, emezi! »

« Ya! emeve, kenavo disul! Met disul e ranki dont betek du-man, rak me a zo en oferenn vintin ha va mamm he deus liziri *Breuniez ar Feiz* da rei d'it; gant va zad-koz klanv war e wele, n'eo ket aes d'ezi mont eus ar gêr ».

Ha me, yao, warzu Montroulez, da foar-an-nec'h.

Diaes oa va fenn e c'hellit kredi; seblantout a rea d'in edoun oc'h ober eur gwall hunvre: « Sant Erwan, va dilivrit diouz eur vaouez diskempenn; grit ma welin splann e pe lec'h eman bolontez Doue, rak frailha a ra va c'halon o sonjal oun faziet! »

Pa 'm oa lavaret d'am c'harantez dont du-man da zul, em oa eur menoz. Klevet em oa graet ganeoc'h, va zintin, penaos e veze graet gwechall, en tiez, pa deue eur wreg nevez, evid ar wech kenta, d'he c'her nevez: eur skubellenn a veze taolet a-dreuz, e kichen an nor; pa deue en ti, e ranke he sevel pe ober eur gammed dreist; diouz ma rae e veze barnet; ma kroge enni, evit he lakat en he flas, e oa eul labourerez kempenn, met, ma 'z ae dreist, e oa eur vaouez lous ha lezirek, hep mar ebet. Evelse e ris, eta; ar skubellenn a voe taolet war he hent; siouaz, ne zellas ket outi zoken. Stampa a eure dreisti, laouen he dremm: « Mari, emeve, glazet oun ganez; na 'z feus ket ententet ar gentel; ne fell ket d'in mont pelloc'h; deski a ri breman, diwar da goust, eo an netadurez unan eus ar vertuzioù reta d'eur vaouez da gaout; poan am eus war da zikour hag hiviziken ne 'z in wardro plac'h yaouank ebet ken ».

Va breur 'n en deus ket kredet dont war a-dre, gwaz a ze d'ezan! »

Yvonig a oa an daerou en e zaoulagad ha me ne ouien ket kalz penaos e frealzi: « Mat ez peus graet, emeve, daoust pegen tenn ez peus kavet ober freuz-taol; ne vijes bet nemet reuzeudik e serr ar verc'h yaouank-ze ma kendalc'h gant ar boazioù fall he deus kemeret. Evelato, ma c'hellfen rei skoazell d'it; marteze n'eo ket re zivezat! » Warc'hoaz e kasin lizer d'he zad d'he fedi da zont aman; ma vez lezet da zont e poanin ganti; deski a rin d'ezi frota an arrebeuri, pura an daol hag ar zolier, gwalc'hi piz al listri-kegin, lakat an traou da luia, skuba kement korn a zo en ti! »

« Espernit ho poan, Tintin Anna, eme va ni, me a jomo dizemez; met vad a c'hellit da ober da veur a hini, ma 'z oc'h gouest da zerc'hel eur bluein, displegit ar pez oc'h eus klevet ganen; Mari, he-unan, ma lenn ho skridou a en em anavezo enno ha gant lealded ec'h anzavo:

*Et lec'h ma vank netadurez
Ne jom ket beo ar garantez.*

TINTIN ANNA.



KELEIER AR MIZ

Gouel meur ar Zakramant e Roazon

Roazon, ker-benn hor bro, a dle ober, d'ar 5-a viz Gouere a zeu, eur gouel en enor d'ar Zakramant evel ma n'eus ket bet gwelet c'hoaz e Breiz, eur gouel hag a ziskouezo dirag ar bed-holl. Breiz a-bez, Breiz-Izel koulz ha Breiz-Uhel, stouet dirak Hor Zalver e Sakramant an Aoter, meulet ra vezo.

Ioul a zo e vefe eno eur prosesion bras a raio tro kêr gant bannielou prisiusa Breiz-Izel douget gant pôrted ha merc'hed gwisket evel m'o gweler gwisket e pardonioù bras ar Folgoad, Rumengol, Santez Anna ar Palud ha Santez Anna Wened.

Pedi a rear an Aotronez personed da glask tud da vont d'ar gouel hep par-ze met arabad lezel hini en o zouez ha ne zougfe ket gwiskamant hor bro.

Tud Leon evit mont di, gwella o deus da ober eo kemeret d'ar zadorn da noz an tren a loc'h eus a Vrest da 20 eur 20 hag a en em gav e Roazon da hanter noz 47. Tud Kerne o kemeret an tren a loc'h eus a Gemper da 19 eur 27 a vezo e Roazon da hanter-noz 33. Mont a c'hellint raktal da iliz Intron Varia ar C'helou Mat, el lec'h ma c'hellint kaout oferenñ ha komunnia raktal.

En deiz-ze, end-eeun, e c'hellint dizrei d'ar gêr. An A. Chaloni Le Roy, 23, *rue du Front, Quimper*, hag an A. Chaloni Cardaliaguet, 14, *rue Jean-Macé, Brest*, a glasko tud e Roazon hag a en em gargo da rei digemer deréat da Vretoned Breiz-Izel.

Skor d'an Emgleioù breizek

Miss Malt Williams, eus a Aberclydac'h a zo o paouez rei, adarre, eun aluzen gaer d'an Aotrou Jaffrennou da ranna etre an emgleioù hag ar c'helaouennoù a labour ar muia evid adsevel Breiz.

Feiz ha Breiz, ar *Bleun Brug* hag *Emgleo Sant Iltud* o deus bet 250 lur.

Bennoz Doue ha Sent Breiz war ar Vretonez vadele-zus-ze.

Ar Basion e Kastell-Paol

Ac'hanta! Mont a ri da Gastell? Ma oufes peger brao eo! Evidoun me a garfe dizrei... Bemdez an hevelep komzou, an hevelep kaozioù ne oa ken ano er barrez nemet diwarbenn ar « Basion ». Merc'hed ar yourc'h puchet war dreuzou o ziez a oa ehanet da ziswria chupennoù an dud ha ne gomzent ken nemed eus an traoù kaer o doa gwelet... Ha war ar maez, en tiez, en dro d'ar

poullou, er parkeier, dre holl, an teodou a yae en dro. Marc'harid a zanevelle da Vari kement tra he doa gwelet ha Mari gounezet a roe he ger da vont ive d'ar zui war-lerc'h.

— Ne oa ket em sonj mont er bloaz-man. Met kement a draou a gleven, a gleiz hag a zehou, ma savas c'hoant ennoun da vont da welet; hag eun eiz dez goude eur c'harr-dre-dan am c'hase war hent Kastel.

Petra 'm eus gwelet? Petra 'm eus klevet? Klevet ha gwelet em eus traoù kaer meurbet, traoù ha na sonjen na klevet na gwelet. Gwelet em eus Jezuz o tremen dre ruiou Jeruzalem, azezet war an azenn hag ar bobl dibradet gand eur barr levenez a gane, a youc'he, a daole pallennou ha dilhad war e hent. Hen heuliet, em eus betek Betani hag eno e-harz e dreid ar Vadalen he deus skuillet daerou a geuz hag a binijenn. D'e heul omp dizroet da Jeruzalem, ha kammed ha kammed hon eus kerzet war e lerc'h. Er gambr-lid dirag e ziskibien en deus debret ar goan ziweza, rannet ar bara, kinniget ar gwin; er Jardin-Olived skuilhet daerou c'houero ha c'houezet eur c'houezenn a wad; dirak Kaifaz, Herodez ha Pilat, gouzanvet goaperez ar Bobl hag ar zoudarded; war hent ar Golgotha kerzet daougrommet dindan pouez e Groaz; war ar C'halvar diwasket hep klemm poanioù kalet ha yut...

An holl daolennou dispar-ze a zo tremenet, an eil goude eben, dirak hon daoulagad hep paouez, a-hed pemp eur horolaj. Dre ma kerze an traoù, gouelioù a zave, a ziskenne hag a zispake dirag ar gwel, eur c'horn nevez eus a gear, eun dachenn nevez eus ar vro, en eur ger an holl lec'hioù ma tremene Jezuz dreizo. Hag al leurenn c'hoari, tro ha tro beuzet en denvalijenn pe en tenvalder, a gemere stummou ha doareoù dishenvel hervez m'ho goulenne an traoù an amzer hag an dud... Judaz a youc'h e zizesper e kreiz an noz tenval ha dre ma kouez muioc'h-mui etre skilfoù an dispi, dre ma nac'h selaou mouez e goustians ha ma venn mouga ar menozioù a geuz a glask sevel en e galon. eur sklerijenn damruz en em zil en denvalijenn, ha nebeut ha nebeut, dre ma 'c'h astenn an diaoul a grabanou war ar c'haez Abostol, ar sklerijenn a ya war gresk hag a fuilh tro-war-dro evel eur skleur-ifern... Jezuz a varv dindan eun oabl koumoulet ha pa denn e huanad diweza al luc'hed a darz, an deiz a varv, ar gurun a strak...

Eun strollad c'hoarierien ha c'hoarierzed a beb oad, a bep ment, a bep stad a lakae buhez ha finv en holl arvestoù hag ar musik a zone hep paouez, gwech, krenv, nerzus, laouen, gwech goustad, izel, damvouget ha doanuis.

Ar c'homzer a vare da vare a roe eur gentel, a zisplege eur wirionez a domme ar galon...

Da eiz eur ec'h echuas... An dorioù a zistaolas tud a vernioù. War ar leur-gêr ar c'hirri-dre-dan a voudas. D'ar red e kerzen da glask va hini. Eur mignon, eur paotr

yaouank, breizad kalonek ha dispart a gavan war va hent, « Petra levezet Youenn? » — Eur marz va faotr! Fizians n'eo ket c'hoaz maro ar brezoneg!... »

Fizians! N'eo ket c'hoaz maro ar brezoneg. Ar c'homzou-ze a ruilhas hag a ziruilhas em penn endra ma tizroen war hent ar gear dindan eur glao-dour-bil, ha dre ma sonjen enno e tiwane em spered hunvreoù c'houek, hunvreoù a fizians. Gwelet a raen o sevel e pep korn a Vreiz strolladou c'hoarierien; leun barr o c'halonou a garantez vro hag a feiz kristen; strolladou tud yaouank hag a zisplego dirag ar Bobl oberou meur hon Tadou, burzudou hor Zent koz... Hag ahont pell-pell, damguzet c'hoaz e mougenn an amzer da zont e welen o sevel eur Vreiz nevez, kaeroc'h, krenvoc'h, skedusoc'h c'hoad eged an hini goz.

X...

Eur gouel breizek. — Gouel ar Minibriag

Ar Minibriag!

Setu aze eun ano brudet gwechall en Breiz-Izel ha ne oa ken anavezet nemet gant an dud desket, ha c'hoaz, gant ped anezo! Dre studi, dre labour ha dre ampartiz eur beleg hag eur Breizad kalonek, an Aotrou Loyer, harpet gant mignoned evel an aotronez Cadoudal, Colleter ha kalz all, pôtrek kelc'h katolik Boulvriak, anô ar Minibriag a zo breman e genou an holl Vretoned.

Eul labour vras e vefe disklêria penaos eo bet deut da vat ar penn-ober-ze, adalek niverenn genta ar gazetenn-parrouz « Le clocher de Saint-Briac » ma voe komzet enni eus ar Minibriag, betek lun-fask diveza, pa voe gwelet oc'h adveva adarre dirak an daoulagad.

An Ao. Loyer skoazellet gant e berson, an Ao. Guillou, ken anaoudek war gement a zell ouz Breiz, a furchas ar paperou koz, koulz e Sant-Brieg (archives départementales) evel e parrouziou ar c'hanton, ha pelloc'h, hag a damm da damm e weljod o sevel evelse skeud ar Minibriag gant e gestell hag e diegeziou koz eo bet miret an envor a galz anezo en istor Breiz. Meur a vloavez e padas ar studi-ze moulet a bennadou er « Clocher de St-Briac ».

War ze, e tigouezas goueliou keltiek Kemper. Eno, an Ao. l'Estourbeillon, rener *Keuredigez Breiz*, en devoa iaket ober « gouel an drapoioù » hag e oa merket war bep hini anezo ano unan eus rann-vroioù koz Breiz. Er gouel-ze en em gavas eur mor a Vretoned, en o zouez an aotronez Loyer ha Cadoudal. Adalek an deiz-ze e savas c'hoant ganto d'ober evit ar Minibriag ar pez a oa bef grêt, e Kemper, evit Breiz a-bez. Ha dizro d'ar gêr, da staga gant al labour.

Arabad klask niveri eus a bed ha peñ tu e teuas zikour: eun dra hen roe da c'houzout dilun, kaeroc'h evit an holl gomzou: an doare ma oa kempennet, garlantezennet holl diez hag holl ruiou Boulvriak. C'houec'h

hent a zigas da gêr: war bep hent, eur wareg-enor, gant skridou e brezoneg. Gwelet em eus meur a ouel brezonek hag e meur a gêr; biskoaz kêr n'am oa gwelet fichet, da dostat, zoken, ouz ar pez ma oa kêrig Boulvriak. Eun dra hag a ziskoueze c'hoaz gant pegement a c'hred hag a aked e oa bef labourer eo river ha kaerder an drapoioù: meulodi d'ar re o doa graet anezo! Douget gant 114 pôtr yaouank, peb a ziou blac'h-enor ganto gwisket en o c'haera, na pa ne vijê bet nemet ze, tra a-walc'h e oa evit drella an daoulagad. Met ne oa nemet eul lodenn eus ar gouel. Da heul bannielou ar Minibriag, e teue tud koz ar Minibriag, ar venec'h, war droad, ar brinsed war varc'h, hag evit staga kement-ze holl ouz hon amzer-ni, e oa bugale gwisket e pep doare breton hag ar biniou er penn arôk o kas an holl endro...

Warlerc'h an ambrougaded-man, e voe c'hoariet eur pez brezonek, *Kerenor*, hag e oa dastumet evit e chilaou, pell arôk ar c'houlz, tud leiz skol Sant-Briag. Ar pezman, marvat, a vo moulet ha ne vo ket ar wech diveza d'her gwelet c'hoari. Bezan eo an dôlenn eus eun darvoud c'hoarvezet en amzer ar Re Unanet: tôlenn dispaket 'n eun doare plijadurus-tre, ha gant an oberour na gant ar c'hoarierien. Er zal ni a welas an Ao. d'Herbais, an Ao. hag an itron Even.

Etre daou arvest, an aotronez Jaffrennou (Taldir), l'Estourbeillon, J. Cocaign, a gôzeas beb eil, an daour genta evit rei meulodi d'al labour gaer grêt gant ar veleien evit adsevel ar Vro, hag an Ao. Cocaign evit embann gouel ar *Bleun-Brug*, e Gwengamp, da viz gwen-golo, pedi tud an drapoioù da zont, hag alia ar gerent da lakat o bugale e *Breuriez ar Brezoneg*. Eul *levrig*, grêt gantan diwarbenn ar vreuriez, a voe prenet gant niver a dud.

Daoust da bardon Vourc'h da vezan brudet, koulz ha da bardon Leo-Dro, biskoaz ne voe gwelet enno kement-all a dud evel ma oa, deiz Lun-fask, e pardon ar Minibriag. Panevert d'ar glao a deuas d'ober gaou, e vije bet eno eur gouel seurt biskoaz ar Vro n'he doa gwelet. Beleien goz Boulvriag, an Aotronez May, Riguer, Herve, Keranlec'h, ha kalz all ganto, a oa deut eus a-bell hag eus a dost, en o fenn an Ao. Men, person Gwengamp. En e garg e oa binniga an drapoioù ha disklêria talvoudegez ar gouel. Nag a gomz gouezus a deuas gantan, gouest da rei skerijenn d'ar yaouankiz a oa eno ouz e chilaou! Biskoaz ne voe roet da anaout freasoc'h. 'n eun doare-muioc'h didroidell, deveriou ar Vretoned e kenver o Bro, o yez, o gizioù, o feiz! Salo e vefe moulet eur brezegenn ken c'houek, ken eün, ken reiz!

Devez kaer eta, e gwirionez, pa zizroer da zellet outan, devez breizad, devez leun a bep seurt menoziou mat, dis-hiennel diouz an devezioù goulllo ha yen a vever abaoe eur pennad 'zo.

Trugarez d'ar re her savas, da skouer d'ar Vretoned a volontez vat, d'ezo da gerzet war an hevelep roudou.

DIR-NA-DOR.

An A. Loeiz Nihuellou

D'ar 15 a viz Ebrel diveza, p'edo kanaouennou an nevez amzer o tregerni, gand Alleluia Pask, war mêziou Breiz-Izel, e varvas, e Gwiskri, eur barz eus ar re speredeka hag eur beleg eus ar re zantela, daoust ma n'en doa ket c'hoaz a 30 vloaz, mat a-walc'h, Loeiz Nihuellou; eun den oa hag a vije bet, hep mar, unan eus ar re genta en e eskopti ma vije bet roet yec'hed d'ezan gant an Aotrou Doue.

War *Feiz ha Breiz* miz Ebrel warlene hon doa moulet *Pedenn ar C'hlanvour yaouank*; savet e oa gantan; enni e kavomp ar poz-man:

Me a zello ouzoc'h, Jezuz stag ouz ho kroaz
Ha blotoc'h e kavin va gwelet a glanvour;
Diouz ho re, va foaniou, zo vel diouz ar mor bras
An distera lomm dour!

War *Gorn-boud* miz c'houevrer diveza e voulemp eur c'hantik savet gantan evid an eureujou hag er miz-man ec'h embannomp ar *pez a welas Marijannig Truten*, eur vojenn war dud ha traou e barrez troet gantan eus ar braoa.

Savet en doa eul levrig kantikou evit chapelioù ha sent Gwiskri: « Netra gwelloc'h, emezan, eget kantikou istor ar Zent hag ar chapelioù da viret etouez hor c'hristenien ar wir zevosion. »

Kempennet en doa ivez Kantikou Eskopti Gwened diouz doare Bro Gourin hag ar Faouet hag en eur zigas al labourze da Rener *Feiz ha Breiz* e skrive d'ezan kement-mañ: « P'eo gwir eman kont ar c'hantikou, perak ne ve ket klasket sevel evid an tri eskopti eun hevelep leor kantikou ha kaout, diouz red, e pep hini, eur pennad gant kantikou dishenvel hervez gizioù, devosionou ha « pelerinajou » pep bro? Setu aze eur mennad a ve talvoudus her c'has da vad! eur mennad ha n'eo ket, m'oarvat, eun dra nevez evidoc'h! »

Mennad Loeiz Nihuellou a vezo sevenet, abred pe zivezat, pa vezo desket pelloc'h, ar brezoneg e kement skof a zo e Breiz; abenn neuze e vo bet red da veur a hini c'hoaz stourm ha gant tristidigez eo e weldomp hor mignon, — pa 'zeus kement da ober, — o kuitaat eun dachenn en divije bet graet enni labour vat. Ra deurvezo gant an Aotrou Doue lakaat, er bed-all, gliz e drugarez da goueza puilh war e ene ha labourerien nevez da gemeret e bluenn hag e lec'h en izelved-man.

Ivonig Picard

D'an dek a viz ebrel, deiz Gwener ar Groaz, e rôe ar Barz Ivonig Picard e ene da Zoue en eur c'hlanvdi a Roazon.

Ganet e oa e doun Kerne, er Foulhez, eus eun tiegez mat ha breizat. A-vihanik e oa ennan danvez eur barz, nemet e c'hortozas pell kent hel lakaat da dalvout. Eur harlu a veur a vloaz en Normandi, e lec'h ez oa bet hanvet da gelenner, eo e zivoredas. Pa voe hanvet, goudeze, aman e Sant-Brieg, e reas e venoz da rei da Vreiz e holl amzer vak, da ziski skriva e brezoneg reiz, da zavel d'e vro c'henidik barzoniezoù ma lakaje enno e holl spered, e holl galon.

Ha dalc'het en deus d'e c'her! Peger start e stagas da studia e c'hellan hel lavarout p'am eus e heuliet en e studi. War ar zizun pa leze e labour-skol eun nebeut eurveziou gantan, pe zoken da zul goude merenn, en em rôe da glask kentel ar yezadur, da furcha ar geriadur pe da lenn an « Notennou diwar-benn ar Gelted koz ». Er goanv diweza; hag hen gwall-dizet gand e glenved, e tremenas bemdez an nozvez ganen o reiza notennou war gerioù Leon ha Kerne.

E genta levrig « Kanaouennou Brezel » a voe graet a beziou bet moulet war « Groaz ar Vretoned » e-pad ar brezel. En o zouez ez eus eun taol-micher « Kenavo eur zoudard territorial d'e varc'h Laou », dam-henvel ar mennoz anezan ouz an hini a gaver e « Maro Columcille » e levr an Aotrou Dottin « Les littératures Celtiques ». Spered keltiek ar Barz breizad en deus graet d'ezan keja gant Barz Iwerzon.

E levriou embannet da heul: « E menez Arre », « Gloan ha Pilhou », « E skeud roc'h Trevezel » a dalv c'hoaz war an hini kenta. Picard a gave enno, p'oant savet da Vreiz hepken, gwelloc'h ha dereatoc'h poellad d'e spered ha d'e galon. Peziou eus ar c'haera a zo el levriou-ze, dreist-holl taolennou: micherioù, anevaled, lec'hioù brudet, labourioù ar goueriaded, lidou an Iliz, hag all.

En tu-hont ma 'z eus anezan eun taolennet piz hag ampart, e santer en e oberou eun ene uhel ha kristen. Kentelia, ha neketa didui hepken, eo e vennad-skrivagner. Kelenn a glevomp gantan diwar-benn ar garantez-vro, an derc'hel d'ar gizioù mat, an nerz-kalon hag an dalc'husted el labour, an habaskted e-kreiz poanioù ar vuhez, ar sentidigez ouz Doue hag ar fizians en e Vadelez. Dre an doare kentelioù uhel ha dreist anezo e tellezfe oberou Ivonig Picard beza digemeret en holl skolioù Breiz.

Ha seul aesoc'h e vefe hen ober ma skrive hor mignon, zoken pa zave peziouigoù d'e gornad a Gerne, neketa e yezig eur geriadenn a Vreiz-Izel, hogen e yez reiz hag unvan al lennegezh. Gouezet en deus en em ziwall diouz fazi Bleimor o skriva e levr dispar e yez e enezenn. Skouer

Picard a zo da heulia gant an holl skrivagnerien ha barzed a Vreiz. Anez dont da skriva eur yez reiz hag unvan netra da c'hortoz nag evid hon lennegezh nag evid an diski ar brezoneg er skolioù!

Eur skouer-vat all rôet gant Picard: pleustret en deus, evel m'en doa graet en e raog Milin e Leon, Luzel a Treger, war zastum hon danevellou-pobl, enno eun tenzor evid hon lennegezh da zont. An neb n'her gwel ket ha n'anav nag hended na talvoudegezh an danevellou-pobl lennet al levr nevez-embannet gant Gédéon Huet « Les Contes populaires »... « Bez' ez eus, eme an den gouiziek-man en en eur gloza e levr, en danevellou-pobl-ze a dremen a re da re kantvedou ha kantvedou a zo, tenzorion a Arz hag a Awen d'an neb a ouio o frizout hag ober ganto ».

Goulenn a ran da ene va mignon pedennou an holl Vreiziz am lenno, p'en deus, ar Breizad mat a oa anezan, gouestlet da Vreiz ar pep gwella eus e amzer, eus e nerz, eus e ene.

En eur gelaouenn all e raen meneg eus e vennad diweza:

Savit hepken warnoun eur groazig keltiek

Perak na refemp ket etrezomp-ni holl, Bretoned, eur gest da zeveni ar mennad-za d'ar Barz en deus lezet ganeomp, war e lerc'h, ar vrava skouer a-unan gant ar brava oberou?

A. H.

**

KROAZ KELTIEK. — Ar re o defe c'hoant da rei dourn da zavel eur groaz keltiek war bez hor c'henlabourer mat Ivoñig Picart a zo pedet da gas o frof d'an A. Vallée, 23, rue Saint-Benoit, Saint-Brieuc.

F. h. B.



Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{ve}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du Bleun-Brug et de l'Emgleo Sant Ildu
YV. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 5 f. l'an


PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Congrès du Bleun-Brug de Guingamp. — Mauris Tresiguidy, G. P. — Evel m'emaint, DIRNA-DOR. — Pardon sant Erwan e Tours, EUR BREIZAD. — Viktoria Konan à Zant-Luk, J. U. — Labouriou ar merched, TINTIN ANNA. — Roue al Laz, D. N. D. — Divinadennou.

SULIOU MIZ GOUERE

- 5 a viz Gouere. — V^{vet} sul goude ar Pantekost. En iliz Gouel sant Per ha sant Paol. p. 692 e levr an A. Uguen.
- 12 a viz Gouere. — VI^{vet} sul goude ar Pant. p. 454.
- 19 a viz Gouere. — VII^{vet} sul goude ar Pant. p. 458.
- 26 a viz Gouere. — VIII^{vet} sul goude ar Pant. Santez Anna, Mamm a Werc'hez Vari ha Patronez Breiz. p. 796.

D'ar 26 a viz Gouere, pardon bras Santez Anna Wened, da gloza Jubile an 300^{vet} bloaz m'eo en em ziskouezet Mamm Goz Hor Zalver da Yvon Nikolazig evit goulenn digantan adsevel ar chapel he doa er Bosennou.
Breiz a-bez a vo en deiz-ze e Keranna.



Congrès du Bleun-Brug de Guingamp

8, 9, 10 septembre 1925

Sous la haute présidence de S. G. Mgr Serrand,
Evêque de St-Brieuc et de Tréguier.

PROGRAMME

LUNDI 7, à 18 h. — Ouverture de la retraite-congrès par M. l'abbé J.-M. Perrot, Directeur de *Feiz ha Breiz*.
Exercices de la retraite et causeries par M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire de Saint-Brieuc.

MARDI 8. — 6 h. 1/2. Méditation.

7 h. Messe.

9 h. Sermon.

10 h. 1/2. Causerie sur les Conférenciers populaires bretons sous la présidence de M. A. Bocher, de St-Servais.

12 h. Repas en commun.

15 h. Sermon.

16 h. Causerie sur le théâtre populaire breton sous la présidence de M. J. Maréchal vicaire de la Cathédrale de Vannes.

18 h. 1/2. Prières et Salut du T.-S. Sacrement.

19 h. Souper.

20 h. 1/2. Allocution bretonne par le conférencier populaire « Ar Yeodet ». Conférence par M. G. Le Douarec, de St-Brieuc: *Valeur économique du mouvement breton*.

Braon merc'h ar barrouz, saynète comique de M. l'abbé J. Le Bayon, interprétée par la Troupe de Prat.

MERCREDI 9. — 7 h. Messe de communion à la basilique.
Sermon par M. l'abbé Coetmeur, Directeur au Grand Séminaire de Vannes.

9 h. Séance d'étude. — Compte-rendu annuel du président.



Cliché de la « Bretagne touristique »

I. V. Wir-Zikour, patronnez Gwengamp

1° Organisation régionale du *Bleun-Brug*. Rapport de M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire, président du *Bleun-Brug* régional de Tréguier-Goelo.

2° *Breuriez ar Brezoneg*: sa nécessité, son programme.

Rapport de M. l'abbé Cocaign, vice-président du Bleun-Brug régional de Tréguier-Goelo.

12 h. Repas en commun.

14 h. 1° Les revendications bretonnes et la manière pratique de les faire aboutir. Rapport de M. Ollivier Chevillotte, de Brélès.

2° Les droits de la nationalité et les droits de la famille, rapport de M. Achille Glorieux, de Roubaix.

20 h. 1/2. Représentation bretonne, *Kerenor*, drame historique en 3 actes, interprété par la troupe de Bourbriac.

Entr'actes: Mélodies bretonnes.

JEUDI 10. — 8 h. Grand'Messe solennelle à la basilique.

9 h. Concours divers: choralès, déclamation, éloquence, lecture, etc.

11 h. 1/2. Banquet.

13 h. Cortège historique représentant l'entrée de la duchesse Anne à Guingamp. Défilé des drapeaux armoriés et des anciens costumes de la région Tréguier et Goelo.

14 h. Grande séance à la salle municipale.

Santez Trifina, pièce en 3 actes, interprétée par la troupe de Belle-Isle-en-Terre, sous la direction de l'auteur.

Dans les entr'actes, exécution des morceaux couronnés.

16 h. 1/2. Proclamation des lauréats des divers concours.

17 h. Clôture du XV^e Congrès. Salut du Saint-Sacrement à la basilique de Notre-Dame.

*

**

DEIZIOU BRAS BREIZ. — Pôtrede yaouank ha c'houi holl hag a fell d'eoc'h rei an dourn, da lakaat amzer da zont hor Breiz da veza faouennoc'h eged an amzer-vreman, bezit holl e Gwengamp d'ar 7 a viz Gwengolo a zeu ha chomit eno beteg ar yaou da noz. 15 lur 10 gweneg beme-dez hepken ho pezo da bae, evit beza digemeret dreist e skolach Itron Varia wir zikour; chistr ha gwin ho pezo bep pred ha kafe da lein ha da verenn; en amzer-man, evit ken nebeud all, ne c'hellit ket beza digmeret koulz e nep lec'h; rak-se 'ta kasit hoc'h ano, ar c'henta 'r gwella d'an A. Clerc, Administrateur d'Arvorig, 15, rue des Capucins, Guingamp.

An Otrou 'n Eskob a vo e Gwengamp

d'an 10 a viz gwengolo

e penn gouel ar *BLEUN-BRUG*

An Otrou 'n Eskob en deus bet ar vadelez da gas da rener ar *Bleun-Brug* al lizer-man da rei d'ean da anaout e feurio da Wengamp, da ren gouel ar *Bleun-Brug*, an 10 a viz gwengolo.

EVÊCHÉ DE SAINT-BRIEUC
ET TRÉGUIER

Saint-Brieuc, le 11 juin 1925.

CHER MONSIEUR LE PRÉSIDENT,

Je n'aurais pas la joie de pouvoir présider votre Congrès dans son entier. Les deux premiers jours, je serai au Saint-Esprit, à Saint-Brieuc, et à Broons pour des cérémonies de profession que j'ai promis de présider. Mais je serai bien volontiers votre le dernier jour.

Je fais les vœux les plus ardents pour le plein succès du Congrès et bénis affectueusement vos efforts.

Veillez agréer, Cher Monsieur le Président, l'assurance de mes bien respectueux et tout dévoués sentiments.

† FRANÇOIS-JEAN-MARIE.

Kanerien ma fell d'eoc'h mont da c'houeliou Gwengamp, prenit

Kanaouennou Bleun-Brug 1925

16 real al levr her goulenn ouz M. Drezen, Administrateur d'E. S. I., 4, rue du Château, Brest. C/C 6238. Rennes.

“GWALARN”

kelaouenn skrivet penn-da-benn e brezoneg, moulet bep tri miz ha renet gand eur breizad yaouank, speredok ha kalonek, ginidik eus a Vrest, Roparz Hemon.

Evit kaout GWALARN kas 20 real da — M. l'Administrateur de *Breiz Atao*. — C/C 25-29. — 8-10, rue du Vau, St-Germain, Roazoun.



Mauris Tresiguidy

(1325-1402)

Ar C'hallaoued o deus bet ezomm abred eus ar Vretoned da rei dourn d'ezo da ziouall o bro ouz ar re a glaske hé laerez diganto; er XIV^o kantved eleiz eus ar varc'heien a vrezelekeas evito gant Bertran ar Gwesklen o deus bet brud bras evel ar Mauny, ar Bud, hag ar C'herlouet; unan a zo, koulskoude ha, daoust ma n'eus ket-kement a ano anezan hag ar re-ze, en deus graet muioc'h a daoliou kaer egeto; Mauris Tresiguidy oa e ano; genel a eure e Pleyben wardro ar bloaz 1325; daoust ma ne ziskenne ket a lignez uhel e teuas, dre e nerz-spered hag e nerz-kalon da veza unan eus an dud gwel-gwella a oa e lez roue Frans; Froissart, en e istor en deus skrivet eur ger bennak diwar e benn; an A. Breil a Bont-Briant en deus graet eun enklask war e vuhez ha diwar e studiaden eo e livirimp d'eooc'h ar pez a ouezer war an hini a oa lezanvet gant eur skrivagner eus ar Bourgogn « Kaloneka marc'heg a oa e Breiz ».

**

Evel m'hon eus lavaret uheloc'h, Mauris Tresiguidy a

voe ganet wardro ar bloaz 1325 e maner Tresiguidy, e parrez Pleyben eun contr koz d'ezan, Mauris Tresiguidy evel dan, a oa bet eskob e Roazon eus ar bloaz 1263 d'ar bloaz 1282.

War e skoued alaouret e weled tri aval pin ruz. Aotroned ar Rusquec, e Lokeffret ha Pengwern e Loperec, a ziskenne ivez eus a lignez Aotroned Tresiguidy hag o devoa evel do tri aval pin war o skoued; dirak maner hanter ziskaret ar Rusquec, e kichen Sant Herbot, e weler c'hoaz eur pez laouer vaen, eur renkennad avalou pin kizellet kaer, oc'h ober an dro d'ezi.

Ne ouezer ket ano tad ha maner Mauris, met da gredi eo e voe savet e Kemper ha skoliet, sur a-walc'h, gant Tadou sant Fransez, rak anaoudegez vat a zalc'has d'ezo hag eun dra bennak a roas d'ezo, dre destamant; e gent ivez a voe sebeliet en iliz an hevelep Tadou.

Yaouank oa c'hoaz, — m'oarvat n'en doa ket a 25 bloaz — pa voe dibabet gant Yann Beaumanoir gant 9 varc'heg hag 20 skoueder eus a gazarn Ploermel evit beza unan eus brezelourien *Emgann an Tregont*, an emgann brudet-ze a zavas etre tregont brezelour eus kostezenn Yann Vontfort ha tregont brezelour eus kostezenn Charlez Bleas, e dervenn an hanter 'n hent, etre Ploermel ha Josslin d'ar 27 a viz meurzh 1351.

Eur skrivagner koz a lavar:

*Choisy a Beaumanoir, ainsy come vous ay dit
Guiffroy Le Poulart, Moris de Tresiguidy.*

Eno eo e kavomp meneg, evid ar wech kenta, eus a Voris; Gien ar Borgn a lavar e voe unan eus ar re a stourmas, ar gwello, diouz kostezenn Charlez Bleas. E gamarad, Jaffres ar Poulart a voe lazet hag hen e-unan ne dec'has ket eus a vez-ar-stourm hep gouli p'eo gwir ne oa hini, e nep tu, ha ne vije goloet a c'hlaziou penn-hil-ha-troad ken garo e oa bet an emgann.

Endra ma harpe, gwella ma c'helle, kostezenn Charlez Bleas, e vreur Yvon Tresiguidy a harpe kostezenn Yann Vontfort; e gaout a rear e Honbont, er bloaz 1342, o rei skoazell da Janedig Flamm, e Kemperle, gant Loeiz ar Spagn, hag e daou zeziz Gwened gant Edouard III ha Robert a Artois. Divezatoc'h e kaver anezan c'hoaz e Maoron (1352) o taouarc'henna hag o tismantri, gant kabitened all kostezenn Montfort, soudarded Charlez Bleas.


Er bloaz 1357 e kavomp Mauris Tresiguidy e Vitre; skouejer eo atao; m'oarvat eo dre ma 'z eo re baour evit gellout mont da varc'heg, met koulskoude e kaver eur skouejer ha pevar gwareger dindan e urziou.

Er bloaz 1363 kaset gant Amaury Kraon, letanant ar roue, da vrezelekaat d'an Anjou, e kollas eno e loer; evid e zigoll e voe roet 50 lur en acur d'ezan; er bloaz war-

lerc'h e stourmas e Cocherel, dindan urziou ar Gwesklen hag eno e lakeas ar roue nevez Charlez V da c'hounid e genta viktor; nebeut goude, e weler e oa marc'heg; mar-teze e oa bet graet an enor-ze d'ezan, d'e drugarakaat eus an nerz-kalon en doa diskouezet er brezel; kreski a eure raktal e gimpagnunez, rak d'an 20 a viz gwengolo 1364, pa ziskouezas anezi e Oussoy e oa gantan 5 skouejer ha pevar gwareger. Nao dervez goude, edo emgann Alre, el lec'h ma voe lazet Charlez Bleas; Mauris n'edo ket eno; o vrezlekaat edo, en eun tu bennak, e kichenik Chartr.

Pa voe lezet e frankiz gand ar Gwesklen ha pa voe laket e penn ar *C'hompagnuneziou bras*, — ar zoudarded-ze, a rea brezel evito o-unan, ha gwella ma oant oa da laerez, — evid o c'has d'ar Spagn, ar marc'heg breizad a yeas d'e heul, gand eleiz eus e genseurterd, Evel a ouzoc'h, ar Gwesklen trec'het ha prizoniet e Navarette, ha lezet da redet p'en doa Charlez V roet eur yalc'had vat a aour d'ar prins du, a c'hellas en em dapa ha ne zizroas e Frans nemet goude m'en doa lazet ar prins Per ha laket, en e lec'h war dron ar C'hastilh, ar prins Herri Transtamarre; Tresiguidy a deuas en dro gand e vestr, hag o treuzi an Anjou gantan, e kavas tro da ober eur gwaska d'ar Zaozon a oa dre eno: « *une belle déconfiture d'Anglois* » a lavar Froissart. Ar re-man o doa kemeret kastell Beaufort hag hini Prilly ha laerez a raent ar maeziou tro-war-dro; o veza klevet e tlie Saozon Prilly bale war Zaumur, ar Gwesklen a c'hoarias d'ezo unan eus an troiou kamm-ze a blije d'ezan kement; en em guzat a eure gand e dud, en eur c'hoad tost d'an hent, ha pa en em gavas eno an 800 Saoz, ec'h en em lakejont da skei warno; ar re-man o kredi e oant kalz niverusoc'h a ziskennas diwar o c'hezeg evit stourm gwelloc'h a-ze, met en dra ma skoent, eus o gwella, Mauris Tresiguidy, Jaffres Ricou ha Jaffres Kerimel a gouezas warno diouz an a-dre gant 60 den war varc'h roet d'ezo, gant ar Gwesklen, evid ober al labour-ze. Ar Zaozon strafuilhet a dec'has, o lezel ouspenn 300 eus o zud war an dachenn. Pa voe laket ar Gwesklen da vestr-bras war holl armeou Bro-C'hall, Mauris Tresiguidy a yeas d'e heul; diskouez a eure e anpartiz e krogad Pontvallain (1370) hag er bloaz warlerc'h endra ma tiframment eus a-dre kraban ar Zaozon ar Poatou hag an Auvergn.

Daou vloaz goude, ar breizad kalonek, dizro en e vro, a voe laket, da c'houarnner Dinam, gand an Duk Yann IV. E Breiz edo neuze, siouas, ar Zaozon hag ar C'hallaoued, oc'h ober o bres, muia ma c'hellent; an Duk Yann a oa troetoc'h ouz ar Zaozon eged ouz ar C'hallaoued; ar re-man gwarizi enno o welet kement-se a drabasas anezan kement ma rankas tec'het da Vro-Zaoz. — Eur wech tec'het an Duk, ar C'hallaoued a gredas n'o doa netra ken da ober nemet lakat o c'hrabanou war Vreiz. Duk Bour-



bon, gand e zoudarded, a gemeras kastell Jugon hag hini Tinteniac; mont a eure zoken betek Dinam; Tresiguidy hag e letanant Ploesquelec, pa weljont al liziri a oa gantan a eneb an Duk a zigoras d'ezan doriou o c'hêr; nebeut goude, pa gemeras ar Gwesklen Henbont, e lakeas Mauris Tresiguidy da c'houarnner ar gêr-ze; eun deiz, koulskoude, e savas mez gant Mauris hag e vestr, o welet edont o stourm ouz o bro hag ez ejont da ober brezel d'o enebourien goz, ar Zaozon.

E sezig Bergerac edo er bloaz 1377; kemeret a eure meur a gêr all hag e tizroas adarre da Henbont.

Estreget brezelekaat a ouie d'ober; roue Frans a gasas anezan, evel kannad d'an Aragon ha d'ar Spagn er bloaz 1379; marteze en doa goulennet tec'hout diouz e vro evit ma n'en divije ket a ezomm da vont da heul e vestr, Gwesklen an trei-

tour, a oa neuze o klask gwerza Breiz d'ar C'hallaoued; e vab, da vihanan, Yann Tresiguidy a garie e vro, agreiz e galon, rak sina a eure d'ar 25 a viz east 1379 *Engleo noblans Breiz* savet da viret ouz ar C'hallaoued da gemeret hor bro hag er bloaz 1381 e kavas skrid-peoc'h Gwerrann, mat evel m'edo.

Pa deuas ar Gwesklen ennan e-unan ha pa 'z eas a nevez da stourm ouz ar Zaozon, Mauris a gerzas d'e heul. Dem-goude, ar Gwesklen a voe lazet e Chateaufort-Randon; Mauris goude beza gouelet d'ezan a gemeras penn an hent da vont da bardona da Jerusalem, marteze evit seveni eul le graet gand e vestr a-raok mervel. Graet e oa gantan e dro e bro Hor Zaiver, er bloaz 1381; Duked ar Bourgogn hag an Anjou, o welet e oa diaes derc'hel ar peoc'h er vro, ker yaouank oa ar roue Charlez VI, a anvas anezan da c'houarnner Paris; er bloaz 1387,

ez eas gand ar roue bihan da rei harp da gont ar Flandr gwasket gant Philip Arteville; ar pezh a oa en e garg oa diouall banniel sant Denez. Pa c'hounezas ar C'hallaoued e Rosbecque, (1382), Mauris a oa ganto.

Daou vloaz ha tregont a oa edo, hep paouez, o vrezelekaat, gwech e Bro-C'hall, gwech er Spagn hag er Flandr; mall oa d'ezan diskuiza; koulskoude e viras atao e garg a c'houarner Paris hag a guzulier ar roue; Charlez VI evit diskouez d'ezan e anaoudegez vat a roas d'ezan kastell Anneville, en Normandi, a oa nevez bet diframmet digant eur marc'heg saoz.

Moris Tresiguidy a varvas e Paris er bloaz 1402; dre an testamant en doa graet d'an 30 a viz eost 1399 en doa goulennet beza sebeliet e iliz sant Erwan ar Vretoned, el lec'h m'en doa savet eur chapel da zant Mauris, e baeron. An testamant-ze a ziskouez peger pinvidik a oa bet ha peger kristen e oa chomet; goulenn a rae ennan ma vije lavaret 10.000 oferenn Requiem evid e ene.

Broudet e c'helle beza e galon gant meur a bec'hed en doa graet o redet eus an eil brezel d'egile hag e klask evelse lakaat trugarez an Aotrou Done da goueza war e ene.

Ouspenn ar pedennou a lakea e Paris, e roe arc'hant eur zervich er bloaz da venec'h sant Fransez Roazon, an Naoned, Gwengamp ha Kemper, da venec'h sant Dominik Kemperle, Montroulez ha Gwengamp, da venec'h Karmel Henbont, Kastell-Paol ha Pont 'n Abad, da venec'h sant Augustin Lanhuon ha Kerhaez.

Ober a eure ivez aluzennou bras d'ar beorien, d'ar beorien, d'ar c'hlanvdiou, d'e vevelien, d'e vignoned, met, tra sebezus, ne roas koulz lavaret netra d'e vugale; ne jome war e lerc'h nemet diou verc'h, rag e vab Yann hag e verc'h kaer Jenovefa a oa maro en e raok; d'ar yaouanka eus e verc'hed ne lezas nemet 1000 skoued aour hag en doa roet urz zoken da jom hep rei netra 'n holl d'ez, d'an distera ma klemmje eus he lod; da gredi eo e ranke beza dimezet da unan bennak, heb e asant; e verc'h hena, he doa bet, emezan, ar pezh a oa dleet d'ez kaout hag arabad e oa d'ez gedal ken.

Mauris n'eo ket bet biskoaz perc'henn d'ar geriadenn a zoug e ano; d'e vreur hena 'oa an douar-ze; merc'h vihan henman, Kateil Tresiguidy a zimezas da Aotrou Kimerc'h; dre zimeziou o bugale, douar Tresiguidy a gouezas goude gant Aotroued ar Palud, Montdragon ha Montmorency.

Eus kastell koz Tresiguidy a oa perc'hennet er XVII^{te} kantved gant Paol Kerlec'h ar C'hastell, skouejour marchosi ar roue, ne jom mui nemed eur pennad moger bennak a zo savet warno eun ti nevez ha neus netra o verka eo bet ganet ennan gwechall goz gouarner Paris, hag


en iliz sant Erwan ar Vretoned, ru sant Jakez, e Paris, pa voe freuzet, er bloaz 1796, pelli a-oa ne welet roud ebet ken enni eus e vez: tremen ra pep tra!

G. P.

N'EUS BET HINI BISKOAZ !



Koulz ha me d'am c'houe-zek vloaz, Tra-ma - li - ra lan - lè - re.



koulz ha me d'am c'houe-zek vloaz, n'eus bet hi - ni bis - koaz.

1

Koulz ha me d'am c'houezek vloaz,
N'eus bet hini biskoaz!

2

Nag er fest, nag er panté (1)
N'oa ket evel don-me.

3

Ar zonerien a zone
Ha skanv me a zailhe.

4

Ar bal hag al laride,
Ar rigodon ive.

5

Ar yaouankiz a dremn,
Evel bleun ar flourenn.

6

Met, me betek va maro
Hep paouez a gano.

Tennet eus pezh kaer an Aotrou Bayon « BRAOA
MERC'H AR BARREZ ».

(1) Pante: assemblée, e galleg; eur ger hag a zo anavezet gand an holl e Gorre-Leon.



Evel m'emañt !

Ar c'homunist.
Ar mestr-skol.
Fanch Kouer,
Yann Gouer,
Pipi Gouer,

labourerien ha pesketaerien.

E ti ar mestr-skol. Noz eo.

DIVIZ I

AR CHOMUNIST, eur zac'h lér ouz e zorn

Dre ar falz hag ar morzoll! Salud, kamarad mestr-skol!

AR MESTR-SKOL, gant doujans

Salud, kamarad... n'ouzon ket hoc'h ano!

AR C'HOMMUNIST, eur paper 'n e zorn

Ne vern! Kamarad ha netra ken! Sell aman Sin ar Mestr!... Eur gwele e peus evidon?

AR MESTR SKOL, o sellet ouz ar paper

Daou, mar bez red!

AR C'HOMUNIST

Tôl evez na ouesfe den oun deut en ez til!

AR MESTR SKOL

Den ne ouezo.

AR C'HOMUNIST

Me 'yelo kuit a-raok an deiz.

Grêt ez peus ar pezh a oa bet gourc'hemiennet d'it?

AR MESTR SKOL

Ya, savet em eus eur « société » pesketaerien ha bodet enni dek pe daouzek eus pennou-tiegezh ar gomun.

AR C'HOMUNIST

Mat eo! Kelenn a rez anezo?

AR MESTR SKOL

Alies en em vodont aman, tri, pevar, goude koan, hag e teskan d'ezo an a, b, c eus lezenn nevez ar « falz hag ar morzoll ».

AR C'HOMUNIST

Kregi a ra?

AR MESTR SKOL

Evel en eur c'hoari! Ar Republik frammason he deus o divadezet, hep gouzout d'ezo; setu m'eo digor an nor d'comp...

AR C'HOMUNIST

Ha petra lavarez d'ezo?

AR MESTR SKOL

Ez eo ar Republik ar gouarnamant n'eus nemetan; an hini a lez pep hini d'ober e benn; an hini ne gas ket an dud heli o fri; an hini a ro pansionou d'an holl; an hini a gresk ar pae hag a verza an devez labour... Ha neuze e lavaran d'ezo penos gwechall e oa ar c'hontrol gant gouarnamant an noblans hag ar veleien; heman a zalc'h an dud stag, a gas anezo heli o fri; a ra d'ezo labourat noz deiz evit netra; ne ro na sikour na pansion ebet nemet d'ar re binvidik!...

C'hanta, emeon, eur gouarnamant all a zo c'hoaz hag a zo dreist da hini ar republik; an hini a lako ar c'hal-loud, an arc'hant, an enoriou etre daouarn an dud a vicher, ar re a c'honit o bara war bouez o diouvrec'h, etre daouarn ar re a zoug ar benvidou sakr, ar falz hag ar morzoll...

Hag e lavaran d'ezo c'hoaz: ar beleg a zoug ar groaz. Pesort servij a rent ar groaz da vaga ar bed? Da betra eo mat ar beleg?... Ar skrivagner a zoug ar bluenn, hag e ra petra ganti? Mastari paper. Da betra e servij ar bluenn, pa vo komzet eus maga an dud?

Dreist d'an holl eman al labourer hag ar micherour! Hag an neb ne labour ket gant e zaou zorn ne dle ket dibri!...

AR C'HOMUNIST

Ha hini ebet ne zislavar ac'hanout?

AR MESTR SKOL

Unan, eur wech, a respontas d'in penos an dud o doa ouspenn eur c'horf da vaga, o doa ive eur spered hag eun ene hag a oa dreist d'ar c'horf. Gant se, ar bluenn hag ar groaz a oa pell dreist d'ar falz ha d'ar morzoll.

AR C'HOMUNIST

Eun den danjerus, henez! Petra ez poa respontet d'ezan?

AR MESTR SKOL

Me lavaras d'ezan ne gerze ket gant e amzer ha ne oa

nemet eur chouan bréin! Ar re all a youc'has warnan: Hou! la calotte! hag e voe tolet ermêz raktal!

AR C'HOMUNIST

Eun den out, mestr-skoll!... Ha goude?

AR MESTR SKOL

Me a lavar d'ezo c'hoaz: Piou a zo m'êr er barrouzman? Eun ôtrou, eur bourc'hiz, eun den pinvidik, asur! Piou a zo kuzulier, e ti-kêr? Tud pinvidik, asur! Daoust ha c'houi etrezoc'h n'oc'h ket barrek da vezan m'êr, kuzulier? Warc'hoaz, mar karit, c'houi vo m'êr, c'houi vo kuzulier ha c'houi vo pinvidik d'ho trol!

AR C'HOMUNIST

Ha petra leveront?

AR MESTR SKOL

E tigoront bras o daoulagad hag en em zellont en eur vouc'hoarzin. Gwelloc'h deut eo ganto va frezegenn eget hini ar person!...

AR C'HOMUNIST

Ya, me gred omp barrek... Ar re all ne stourmont ket?

AR MESTR SKOL

Ne vezont ket kredet! Lava'et em eus ar re-ze a zo chouanted, enebourien ar republik ha setu a-walc'h! Oh! va labour a zo bet ês da ober!

AR C'HOMUNIST

Souezus eo, evelkent, e teufent d'omp ken prim all!

AR MESTR SKOL

Klevit! Laket em eus pa 'm eus gallet, enebiez da zevel etre ar familhou, etre an amezeien; laket sevel brujou fall diwarbenn heman, hen-hont, gopraet an teodou falla — ar merc'hed a zo dreist evit ze! — da embann gevier a bep tu. E kichen pep den onest, didrous, 'm eus klasket eun amezeg da enebi outan, da evesaat e gammejou, hag em eus laket er ger-man da redet: « N'eo ket brao bezan paour e kichen eur pinvidik ».

AR C'HOMUNIST

Eur galon komunist az peus, kamarad! Bec'h d'ezi hag ar bed a yelo bremaik war an tu gin!

AR MESTR SKOL

Trugarez 'vit ho kourc'hemennou!
Ar gwsa zo, arc'hant a fell d'hon tud..

AR C'HOMUNIST

Lavar d'ezo e vo kemeret e godell ar re binvidik. Met diouz hon godell, netra! An nebeuta, ar gwella! Peadra d'o derc'hel ganeomp ha netra ken. (O c'hoarzin). Arabad eo, evel ma lavar an Aviel koz, teurel boued-ar vu-

gale d'ar chas. Hogen, ar re-man a zo oc'h ober chas ganeomp da daga o breudeur, bourc'hizien, kristenien hag all; goude, avat, ma vo grêt o labour, ar chas a vezo staget... Evel er Rûsi, an eskern a vo mat a-walc'h evito! (Klevet a r'êr trouz).

Piou a deu aze? Arabad e ouesfe den oun me deut d'az ti, rak arabad d'ezo gouzout ez int kaset ganeomp heli o fri, seurt n'int bet biskoaz!

(C'hoarzin a ra).

AR MESTR SKOL

N'eus den, evit c'hoaz. Breman souden, avat, ec'h ar-ruo daou pe dri eus hon... chas. Mar kirit koach aze drek ar stalaf, e klevfet hag e welfet kement a dremenno.

(Klevet a r'êr trouz).

Arru int!

(Ar c'homunist a ya da g'uzat).

DIVIZ II

PIPI, FANCH, YANN GOUER, AR MESTR-SKOL

PIPI, FANCH, YANN

Salud! Salud, ôtrou mestr-skoll!

AR MESTR SKOL

Salud d'ac'h, tudou! Azevit! Devez mat ho peus grêt, Yann? Tapet az peus kalz a besked?

YANN

Saperbie! Hini ebet! Ne grogont ket ken ha, koulskoude, e komzan brao outo!

FANCH

Pa vez bouetaet mat an higenn, tro pe dro e renkont dont ermêz!...

PIPI, tomm d'ezan

Oh! Ya sur, avat!

AR MESTR SKOL

Evit peb a vanne jistr, ha goude ni a gêzeo! D'ho yec'hed!...

Arsa, Yann, te hag a oa karget da glask an tri diweza hon doa ezomm da zougen ar banniel ruz, er votadeg kenta, ha kavet ez peus anezo?

YANN

Kavet em boa, nemet int bet tec'het kuit...

AR MESTR SKOL

Perak?

YANN

Roet zo bet d'ezo da gredi e oamp ni kommunisted. Hogen, ar « gomunisted », c'houi oar, a zo gwelet falloc'h c'hoaz eged ar « chouanted ».

AR MESTR SKOL.

Evit ar bobl, bezomp republikaned ha netra ken! Arabad klask mont pelloc'h evit ne c'heller. Prezegit 'vel eur c'homunist, met tavit ho ano, ha pa vezit tamallet, nac'hit krenn.

YANN

Ober diouz an dud, ha nann mont a-benn d'ezo. Klevet a rez, Pipi?

PIPI

Oh! Ya sur, avat!

AR MESTR SKOL

C'hoarzin ouz hon enebourien, pa vezer dirazo, komz brao outo, starda d'ezo o daouarn, lavaret d'ezo omp holl kamaraded, bet a-viskoaz hag e vezimp da virviken!.. Ha pa vo troet o c'hein, larda anezo a-zoare, ober goap anezo!..

YANN

Eno 'man 'n taol!

AR MESTR SKOL

Aman e renkomp c'hoari evelse, ken na vezimp krenvoc'h. Koulskoude, mat eo a-wechou ive spounta hon enebourien...

YANN

Pipi aman zo mat da ze!

PIPI

Oh! Ya, sur, avat!

FANCH

Krabich ar Gô en doa huchet disul: *A bas la calotte!* war ziou blac'h an otrou mêr.

YANN

Ha Soaïk Sabatu en doa roet e laz da bôtr ar zakrist, disadorn da noz.

AR MESTR SKOL

Evelse! C'hoari en eil stumm hag eben. Ha lakat mesk abalamour d'eomp! Lakat kôzeal ac'hanomp!.. Ha grêt ho peus ive diouz sevel brujou fall diwar goust ar chouanted?

YANN

Bezan zo tud hag eo diês d'ezo dont ganeomp, o vezan m'emaïnt mat gant o amezeien hag a zo 'barz an tu all. Ni a glask digarez d'ezo neuze da chench tu. Ni lak tabut da zavel etrezo, abalamour da zaoud, pe da yer, pe da gi pe da gaz, pe da zeveziou hent bras, pe da « soutien de famille », pe me oar?..

AR MESTR SKOL

Daou am eus gounezet er stumm-ze!

Ar re o deus pansionou, roit d'ezo da grêdi e vezint tennet diganto, mar ne votont ket evidomp, hag ar re n'o deus ket, touit d'ezo o devo, mar votont en hon tu..

Hada, 'n eur c'hoarzin, gevier ha kasoni, met chom sioul war c'horre, ni, ar pennou-bras; — Iezel ar brud hag an tabut gant ar grennarded ha bouta anezo dre zindan... Lavarit ze d'hon mignoned. Ha gant a reot, poaniit, hastit! Tostat a ra devez bras ar votadeg!

FANCH

Ah! an deiz-ze, mar teu an trec'h ganeomp, evel ma teuo, pebez diskrap a vo d'abardaez-noz! N'eo ket 'ta, Pipi?

PIPI

Oh! Ya, sur, avat!

FANCH

Prest eo an drapo ru; va merc'h he deus gwriet anezan; va gwreg he doa prenet an danvez...

YANN

Ha te hen dougo! Dleet eo d'it!

FANCH

Kanfarded Yann Droll o deus desket an « Internationale!... » War raok! Dao d'ar person! Dao d'ar chouanted!

AR MESTR SKOL

Arabad gwerzan kroc'henn ar bleiz a-raok ma vo bet tapet! Gounezomp moueziou bepred, forz dre benôs! Aman 'zo gwasoc'h 'vit marc'had; red eo arruout!

YANN EO FANCH

Arruout a raimp!

PIPI

Oh! Ya, sur, avat!

AR MESTR SKOL

Bec'h d'ezi 'ta! Kenavo vare'hoaz, kamaraded!

O ZRI

Kenavo vare'hoaz, ôtrou mestr-skol!

(Mont a reont ermêz).

DIVIZ III

AR MESTR SKOL, AR C'HOMUNIST

AR C'HOMUNIST, o sellet ouz ar nor

Ya, hec'h d'ezi! Me a gas ac'hanoc'h evel bleizi etouez an derved!

(D'ar mestr-skol).

Kamarad mestr-skol; deomp da gousket. Me 'gred hep dale pôtre ar « falz hag ar morzol » a rento darbar da bôtred ar groaz!

DIR-NA-DOR.

Pardon Sant Erwan e Tours

D'ar zul 24 a viz Mae, Bretoned Tours a lidé gouel sant Erwan; youl d'ezo da jom Bretoned zoken er mēz eus o c'hēr, ez int en em vodet da zevel goueliou kaer evel ar re a, rea o levenez en amzer m'edont c'hoaz en o bro; etouez ar goueliou-ze, ar pardonioù a zalc'h ar penn-kenta; ar re-man o deus graet en amzer dremenet hag a ra hirio c'hoaz brud vat hor bro; pep Breizad o c'har evel ar pep wella eus e vuhez, delc'her a ra dezo evel d'e vrasa tenzor.

Wardro 11 eur 1/2, Bretoned Tours a zo bodet en Iliz-Veur, evit klevout an oferenn lavaret gand eur beleg ginidik eus o bro; ar c'hreiz eus an iliz a zo leun, gwelet a raer amañ hag ahont kals koefou eus ar Vro, dishenvel a stumm hag a vrouderez, met kaer atao, hag ive mouchouerou ha tavancherou a liou; er c'heur ez eus eur sirollad Bretoned, an darn vrasa anezo gwisket gant dillajou o bro, dreist-holl gwiskamanchou Goueled Kerne; en o zouez ez eus tud a bep oad hag ive meur a zoudard; tregerni a ra ganto an Iliz-Veur, pa stagont gand ar c'hantig-brudet: « *Nous venons encor; du pays d'Arvor...* » kanet e boulc'h an oferenn; ar merc'hed a respount hag eun dudi eo o c'hlevet; kredi a vije graet emomp en unan eus hon ilizou diwar ar maez, e kaver enno kaniri ker brao, ha dreist-holl unvaniez a galon evit meuli Doue. Kantik Santez Anna, « *Sainte Anne, ô bonne mère* » a ganomp ive a-raok m'eo savet an Aviel.

Ha setu ar brezegenn; karout hon dije graet, ni Breizis, gwelet eur Breizad o sevel er gador evit lavaret d'eomp eur ger bennag en hor yez; an oferenn a vije bet tostoc'h c'hoaz d'ar galon, hag ar brezegenn graet e brezoneg a vije bet ganti blaz ar gêr; kredi hon dije graet beza a-zevri, en hor Bro. Ao. Persoun an Iliz-Veur a deñ da gomz d'eomp a oar an dra-ze ha staga a ra en eur c'houlenn diganeomp digarez da veza kemeret eul lec'h dleet d'eun all. E brezegenn n'eo ket hirr; goude beza lavaret deomp e reamp mat delc'her d'ar giziou a feiz hag a relijion a zo ker c'houek d'hor bro, e pedas ac'hanomp da gas heb ehan pedennoù d'hor sent, dreist-holl da zant Erwan ha da Santez Anna, patron ha patronez ar Vretoned; pedi a reas ac'hanomp ive da jom start ouz Bro-C'hall evit ma vezo hor feiz hag hor giziou kristen evel ar goëll a lakaio ar Vro da zevel war he diazez kristen. Komzou berr met komzou fur; aet int betek kalon pep hini ha delc'her a raimp mat dezo. Ar Greto a zo kanet goudeze; a vec'h m'eo echu ma teu kleier ar gorreou da lavaret d'eomp eman Hor Zalver o vont da ziskenn war an aoter; an « *Adoromp Holl* » hag araok kuitaat « *Patronez dous ar Folgoat* » a ganomp c'hoaz. Eul « *Libera* » a zo kanet ive evid an holl Vretoned maro er Brezel. Edoug an oferenn an ogrou a zisplegas dirazomp toniou dudius evel hini « *Kousk, Bro Goz, ma Zadou ha gwir Vretoned* ».

Echu eo an oferenn, ha pep hini a ya en e hent da zebri eun tamm bennak, rak n'eus ket a amzer da goll. Goude lein ar gouel a gendalc'h.

Eur frapadig a oa abaoe m'oad staget da embann gouel Sant Erwan; ar c'helaouennoù o devoa kaset ar brud anezan dre ar vro hag evit ker Tours hag ar c'heriadennou tro-war-dro, a oa goloet o mogerioù gant an embann anezan. Wardro 1 eur hanter da vont da 2 eur, an holl a zo war c'hed; deus ar pount a en em led ker brao war al « Loire » betek liorzou Grammont dre ar Streat Nationale ha Streat Grammont, ez eus bernioù tud o c'hedal, enk mat an eil ouz egile. An neb a anavez Tours a oar ez eus tostik d'eul leo eus ar pount betek liorz Grammont; diou c'harziad vat a dud a zo a bep tu d'an hent ha dre ze eo aes gwelet ar mor a dud a zo deuet da velet ar gouel; pep hini a fell dezan dreist-holl gwelet an ambrougadeg embannet; Charlez VIII Roue Bro-C'hall hag Anna Dukez Breiz, a zo bet eureujet e Langeais; erruout a reont e Tours gand o zud. Setu petra c'heder, ha setu petra 'n deus renket kemend a dud bed an hent — an amzer daoust d'ezan da veza bet fall du en dervez a-raok ha ker fall all, en dervez warlerc'h, a jom braoik a-walc'h; Sant Erwan a ioa war evez ha bennoz a lavaromp dezan; gouzout a rea n'eo ket evit c'hoari nemet ken oar savet ar gouel-ze; ma c'hellfer avat kaout dreizan eun nebeudik gwnenneien evit gellout sevel eun ti da Vretoned Tours, setu aze hag a vije mat!

Prest goude 2 eur e loc'h an ambrougadeg; er penn kenta e kavomp Banniel Breiz herminiget du war gwenñ; kaer eo, douget gand eur paotr yaouank war loan, gwisket ive o daou, loan ha den, en o c'haer; eur strollad varc'heien a deu warlerc'h; c'hoari a reont d'eomp eur wech an amzer eun taol korn-boud, ha setu an Dukez hag ar Roue; kaer int o daou, dreist-holl an Dukez gwisket gant dilhajou a briz, goloet a herminigoù; demdost dezo eman an dud enor, potred ha plac'hed a ra d'ar brinsed eur c'helc'h dudius; eun tamm a-raok eman tudjentil Breiz gand o drapoioù: 9 pe 10 a zo anezo ha gwelet a ran dreist-holl re Bont 'n Abad, Kemper, Konk-Kerne, Gwengamp, ar Roc'h-Bernard, Boulvriak hag all... Holl emaint war loan, warno pallennoù kaer. Warlerc'h bleinet gand ar Biniou hag ar Vombard, ar Vretoned hag ar Vretonezed en o gwiskamanchou kaer. N'int ket gwall niverus met kaer kemend ha ma z'int, ha dre ma tremenont ar strakadeg daouarn a ra dezo ar gwella digemer; gwelet em eus zoken er Streat National, eus unan eus an uhella prenestrer, eun introun o teurel bleunioù war o hend. An holl a oa laouen hag a jome a-ban dreist-holl dirag ar gwiskamanchou kaer dougenet gant tud ar Vro. Mont a reont war araog ha dre ma kerzont an holl a ya d'o heul, chachet evel ma 'z int gand an traou kaer a gavont en am-

brougadeg; evel-se pa zigouezomp e tal liorz Grammont ez eus eur bern tud o c'hedal mont ebars evit kemeret perz er gouel.

Diou-zor a zo evit mont el liorz; dre ar genta ez a an holl Vretoned o deus kemeret perz en ambrougadeg; araok avat e kavomp eun daolennig koant dreist; eur strollad Bretoned ha Bretonezed vihan a ra d'an Dukez eun digemer eus ar re vraoa; goude beza lavaret dezi eur gerig, e kanont ouspenn eun nebeudig kanaouennou, hag eur blijadur eo o c'hlevet. Epad an anmzer-ze an dud a ya el liorz dre an eil dor. Pevar bilhed loteri a ro urz da vont ebars, stris a-walc'h eo an hent ha c'hoari 'zo o c'houzout piou a yel da genta; a-nebeudou an dud a erru hag al liors daoust d'ezan da veza bras-tre, a zo leun brao. Aman e kaver c'hoariou ha staliou a bep seurt.

En unan eus ar staliou kenta, setu c'hoari ar « champagne breton »; daou Vreizad c'houek a zo ganti: bez o deus eur bern ruilhennou, 2 pe 3 renkad boutailhou ha dao dezi, an nep a laka ar ruilh e gouzoug ar voutailh hergounid; youc'hal a reont kement ma 'z eus dalc'hmat kals-tud war o zro. Demdost eman stal ar boderez eus Kemper; enni e kaver pojou pri, plajou ha fañans a liou a bep seurt; e kichen ive, stal ar vrouderez: peziou dantelezeus ar re vraoa a gaver enni. Eun tammik pelloc'h setu stal chistr Fouesnant; kals pres a zo enni; en he c'hichen eman gwin Rouvray ha pelloc'h krampoez Kerne: ar stal-man a jach ar muia-tud, rak pep hini a fell d'ezan tanva ar c'hrampoez.

E kreiz ez eus eur strollad Bretoned ha Bretonezed gwisket e giz ar Vro; ar Biniou hag ar Bombard a zo ganto ha diskouez a reont da dud Tours korollou (1) kaer ar Vro; dipitus eo gwelet ar c'horollou-ze o vont da goll a-nebeudou en amzer a hirio rag ouspenn ma-z'int kaer ez int onest, ar pez-ne c'heller ket lavaret eus holl gorollou an amzer vremen.

Edoug ar gouel ez eus bet kanaouenn: eur strollad kanerien galvet evid an dra-ze o deus kanet deomp « Bro Goz ma Zadou » ha soniou all evel-se.

An dukez Anna he deus tremenet ive dirag ar staliou: gand he flac'hed-enor.

Gouel kaer e gwirionez, dre ha keit ha ma 'z eochomet gouel breton; Breiziz Tours o deus kaset ar brud anezo; roet o deus da anaout d'ar re n'oant ket c'hoaz bodet ez eus eun emgleo vreizek e Tours, ha diskouez o deus graet o bolontez da jom unanet. Ra vezint niverusoc'h c'hoaz, ha ra o dezo bep bloaz eur gouel evel hini miz Mae 1925!

P. S. — D'an 28 a viz gouere e vezo tennet ar billeji loteri ha wardro ar memez mareou e vezo ar c'henstrivadegou (lenn istor, grammadeg) evid ar vugale.

Eur Breizad divroet evid eur pennadig...

(1) = danses; koroll = danser.

VIKTORIA KONAN A ZANT-LUK⁽¹⁾

Leanez e Retred Kemper gilhotinet e Paris d'an 21 a viz Gouere 1794

An tiez a retred

An holl a oar petra eo an tiez a Retred. E Kemper, Kemperle, Brest, Lesneven, ez eus anezo. Retrejou a vez roet evid ar wazed, ar merc'hed, meur a wech ar bloaz, ha n'eus netra gwelloc'h evit netat ha krenvat an eneo, rei d'ezo eun nerz nevez da garet ha da zervicha Doue. Kalz vad o deus gret ar retrejou-ze en hor bro.

Diou vaouez eus Gwened, an dimezell a Gelen hag an dimezell de Francheville, eur Jesuist, an Tad Huby, hag eur beleg, an aotrou a Gerlivio, eo o deus laket en o fenn sevel an tiez a Retred. An ti kenta, e Gwened, a voe gret er bloaz 1674, e Raozoun e 1678, e Kemper e 1678, e Kastel-Paol e 1680, e Naoned e 1689.

Eur retred a bade eiz dervez. Diou brezegenn bemdez a veze, unan diouz ar mintin, eun all d'ar pardaez. Al Leanezed a boanie gand an dud a veze er retred, a lenne dirazo leoriou santel, a roe d'ezo aliou, kenteliou mat, a zisplege dirazo an taolennou evel m'en doa gret Mikel an Nobletz.

E Kemper e veze a-wechou retrejou gallek, hag aliesoc'h retrejou brezonek.

E gwirionez, Leanezed ar Retred n'oant ket Leanezed. Beva a reant, evel al Leanezed, eur vuhez santel, met ne veze ket goulnnet outo ober veu ebet. Hanvet e vezent Itrounezed pe zimezelled ar Retred. Ober a c'hellent evel

(1) N'eus ket pell, an Iliz he deus laket, war roll an dud eürus en Nenv, Leanezed a Urz Karmez eus Kompiegn, bet dibennet e Paris er bloaz 1794. Er bloaz-man, Leanezed eus ker Oranj a vo gret d'ezo eun hevelep enor, rak mervel a rejont ive evid o feiz epad an Dispac'h bras.

Dont a ray dizale tro ar veleien a zo bet mac'hagnet e Paris e prison Karmez ha prizoniou all, e miz gwengolo 1792, hag a oa pevar anezo eus hor bro.

Re all a zo c'hoaz ha niverus, a zo bet dibennet aman hag a-hont dre gasont ouz Jesus-Krist hag o deus skuilhet o gwad evid o feiz. N'int ket ankounac'hae gand an Iliz.

Hirio e kinnigomp da lennerien F. H. B. eun diverra eus eur leor gallek skrivet gand an aotrou Crosnier, beleg eus a Angers, hag a ziskouezo d'ezo vuhez eur zantez ha merzerez a Vreiz, Viktoria Konan a Zant Luk. N'eo ket c'hoaz laket e renk an dud eürus. Met dont a ray he zro. Hon lennerien a ray eur bedenn evit ma vo gret d'ez-hep re a zale, an enor-ze, a vo ive eun enor bras evid ar vro-a-bez. Levr an A. Crosnier, a zo e gwerz e ti: Gabriel Beauchesne, 117, Rue de Rennes, Paris.

ma karent eus o danvez. Senti a reant ouz an hini a c'houarn an ti, pedi a reant a-unan; en eur ger, henvel oant ouz Leanezed, hep beza Leanezed gwirion.

Er penn kenta Itrounezed ar Retred a oa holl eus familioh tud-chentil. N'oant ket niverus. E Gwened ez oa eun dek bennak, e Kemper pemp pe c'houec'h hepken, met daoust da-ze, dre o nerz-kalon, o aked, e reant labour vat, ha Doue hepken a anavez pegement a eneoù a zo bet santelaet en o ziez.

Viktoria Konan a Zant-Luk

He zad, Jili Konan a Zant Luk, a oa den a lezenn, kuzulier e Lez-Uhel Raouzoun. He mamm a oa Franseza ar Bot, eus maner ar Bot, e Kimerc'h. Viktoria a zo bet ganet e Raouzoun d'ar 27 a viz genver 1761. Badezet e voe gand he contr, chaloni a Raouzoun, hag a zo bet eskob e Kemper eus 1773 betek 1790. Teir c'hoar he devoe ha daou vreur.

Eun tiegez kristen meurbet oa hini Konan a Zant Luk. An tad hag ar vamm a oa tud santel hag a zoujans Doue. Ar vamm a vage he-unan he bugale hag a en em lake abred da zeski d'ezo o fedennoù ha gwirionezioù ar feiz, ha skol a roe d'ezo, ousspenn, war bep tra.


Tremen a raent o amzer e Raouzoun hag e Kimerc'h, e maner ar Bot. Eun deiz, epad eur veach e Breiz-Izel, Viktoria a glevas an Tad Corret, eus a oñs ar Jesuisted, o lavaret d'ez i ar c'homzou-man: « Viktoria, va merc'hig, c'houi ho pezo ar viktor var ho techou fall. » Ne ententas ket neuze ar c'homzou-ze, met divezatoc'h ec'h ententas anezo.

Viktoria, ez-vihan, a oa leun a vuez, hedro, buanok, met kenteliou he mamm ha re he contr, a reas d'ez i en em zizober a-nebeudou eus he zechou fall. N'he doa ket c'hoaz nao bloaz, pa voe laket e skol Leanezed ar Vizitasion e Raouzoun. He mamm n'ez ae nemed eur wech an amzer d'he gwelet, rak c'hoant he doa e vije eünet he merc'h gand al Leanezed karget d'he skolia. Hag ar peñ a c'hoantaë en em gavas. Viktoria a blegas, a zeskas senti, a voe ken mat da bedi, ma voe kavet din da gommunia da zeiz Nedeleg 1770, araok m'he doa c'hoaz dek vloaz, ar peñ ne c'hoarveze ket alies en amzer-ze.

Setu aman al lizer a skrivas d'ez i he mamm, lizer a ziskouez pebez maouez oa ar vamm-ze.

« Va merc'h ker, klevet em eus gand ar vrasa levenez ha frealzidigez ho pezo an eurvad da gommunia da zeiz santel Nedeleg. Ah! c'houi a vo ken eürus hag an Elez. Ar re-man, en Nenv, a wel Doue; met c'houi a zougo ho Toue en ho kalon. Preparit d'ezan eur c'havell dereat. Gouzout

a rit, dre garantez evidoc'h, evid ho tenna eus daouarn an drouk-spered, an Doue Holl-c'halloudek, an eil Ferson eus an Dreinded, a zo en em c'hret den; ganet eo, nann en eun ti pinvidik, el lec'h ma vije bet gret stad d'ezan, met en eur c'hraou, war eun dournad foenn... Ah! va merc'h ker, pegen teneraet e vez ar galon, pa zonjer er Mabig Jesus o c'houzanv yenienn ha paourentez!



Maner ar Bot, e Kimerc'h

« Dre ho santelez grit eus ho kalon eur c'havell da blijout d'ezan. Ar vertuziou a ziskouezot a dle beza ar bleuniou a ginnigot d'ezan: habaskted, sentidigez, izelled a galon. Rak Doue ne gar ket an dud lorc'hus. Bezit mat da bedi, ra vo ho pedennoù eün ha didroidell, ra zeuint eus a greiz ho kalon, rak ho kalon eo a dle komz ouz Doue. Rak-se, hep diskouez d'ar re-all, savit alies ho kalon war-uz Doue e doug an deiz, ha lavarit d'ezan ennoc'h hoc'h-unan: « Va Doue, va c'halon a zo war c'hed ac'hanoc'h. Deuit, Bugel karantezus, ha digasit d'in an holl vertuziou a c'hell ober d'in plijout d'eoc'h. » A-wechou all e c'hellot lavaret: « Deuit, va Jesus, ha preparit hoc'h-unan va c'halon. Gouzout a rit n'em eus netra. Met, c'houi eo an Holl-C'halloudek, ha va c'haret a rit: a-walc'h eo.

« Al Leanezed santel a ra skol d'eoc'h, hag hoc'h contr beleg, a zesko d'eoc'h, kalz gwelloc'h egedon, ar peñ a dleit ober ha lavaret. Ma 'm eus skrivet d'eoc'h al lizer-man, eo o veza m'oun laouen abalamour d'ar grasou a ro Doue d'eoc'h, hag o veza m'emaoun a-spered ganoc'h.

« Erbedet em eus ac'hanoc'h d'ar Werc'hez Vari, hor patronez ha Rouanez an Nenv. Goulennet em eus evidoc'h

eun oferenn en eur chapel vurzurdu a zo eul leo ac'han. Goulnnet em eus diganti ma skuilho warnoc'h, gand aotre he Mab Santel, an holl grasou, an holl furnez ha doujans Doue ho peus ezomm evit plijout d'ezan. Pedet em eus ar Werc'hez Vari da gemeret ac'hanoc'h evid he bugel. Araok m'oaç'h ganet, em boa erbedet ac'hanoc'h d'ezi. Fizi et oc'h bet enni ganen. Pedit ive, c'houi, ar Werc'hez, ma vezo en ho kalon, ar feiz, ar garantez he doa pa zouge ar Mabig Jesus, an Hini a resevot da zeiz santel Nedeleg.

« Kenavo, va merc'h ker. Karit Doue a greiz kalon, hag e vezot benniget gantan. Ar brasa tenzor eo kaout Douer galon. Hag an tenzor-ze eo a hetan d'eoc'h, o veza m'am eus evidoc'h ar vrasa karantez. »

Lavaret a rer, en deiz ma kommunias, da c'houel Nedeleg 1770, Viktoria a lakeas en he fenn mont da Leanez.

Ne jomas e skol al Leanezed nemet bloaz hanter. Da c'houde he mamm en em gargas da beurzeski anezi. Chom a reas eun nebeut bloaveziou e Raouzoun, nemed epad an hanv e teue da vaner ar Bot, da Gimerc'h. Er bloaz 1771, d'he dek vloaz, ez eas gand he mamm hag unan eus he c'hoarezed da Vrest, da welet eun itroun, mignonez d'he familh. Eun deiz, an itroun-ze a bedas ar vamm da vont d'ar c'hoarilec'h da welet eur peç-c'hoari. An itroun Konan a Zant Luk ne falvezas ket d'ezi mont. « Da vihana, lezit ho tiou verc'h da zont; plijadur o dezo, ha traou decreat hepken a vo diskouezet er c'hoari-lec'h. » Evit kaout peoc'h an itroun Konan a Zant Luk a respontas. « Mat, ma lavar va diou verc'h o deus c'hoant mont, e roan va aotre. » An itroun eus Brest a gave d'ezi e vije laouen ar vugale o veza pedet, hag e lavarfont ya hep marc'hata. Met Viktoria a lavaras nann hep troidellat. He c'hoar, yaouankoc'h, a oa nec'het, ne ouie ket petra da respont. « Penos? eme Viktoria, hag ez afes, va c'hoar, da veza touellet gant plijadureziou ar bed? Gouzout a rez hon eus, dre hor Badiziant, troet kein d'ezo? Hor mamm a ro aotre d'eomp da lavaret ya pe nann, o veza ma kred omp poellek a-walc'h evit ober ar peç a zo gwella. Heuilhomp he skouer hag he c'henteliou... »

Abred, evel a weler, e tiskouezas he nerz-kalon. Kendelc'her a reas da studia evit pinvidikat he spered, hentchet gand he mamm ha mistri all a zikoure ar vamm, rak ar vamm, o veza m'he doa da entent ouz kalz a vugale, ne gave ket a amzer a-walc'h evit ren he-unan deskadurez Viktoria hag he bugale all. An eontr, beleg ha chaloni, a-raok beza hanvet da eskob e Kemper, a zikouras ive Viktoria da zeski he religion ha skianchou all.

E Raouzoun, o veza m'edo an tad en eur garg uhel, ar familh Konan a Zant Luk a oa brudet, hag hervez ar c'hiz, e rankent digemeret en o zi kalz tud, pedi da leina alies a-walc'h, hag o-unan e ver'nt pedet ive. Pa dosteas ouz

pemezek vloaz, Viktoria a heuilie a-wechou he c'herent d'ar festou bras, hag evel ar plac'hed all eus he oad, e voe lak et da zansal. Eur plac'h koant oa, ha plijadur a gemeras o vont d'ar festou ha da zansal. Evel holl verc'hed Eva, e klaskas plijout d'ar bed, hag e kare kaout dilhad kaer, kempenn he bleo braoa ma c'helle, ha kalz amzer a golle o renka he c'hoef. Ar vamm a oa war evez, ha ne lezas ket he merc'h da goll he fenn. Gant madelez e roas d'ezi ar c'henteliou he doa ezomm da glevet, ha Viktoria a voe kerent sklerijennet he spered. N'he doa gret netra fall, met evelato e teuas keuz bras d'ezi... Edon o vont d'en em goll, «mezi. » Hag e lenvas dourek war ar peç a c'halve follentez he yaouankiz.

Da fin ar bloaz 1775, an tad a roas an dilez eus e garg, hag a zeuas da jom evit mat da vaner ar Bot, e Kimerc'h. Tostat a rae evelse ouz e vreur hanvet e 1773 da eskob e Kemper. Eur beleg, an aotrou a Bennanros, a zeuas da vaner ar Bot, evit lavaret an oferenn ha kelenn ar vugale, ha dreist-holl an daou baotr. Gwechall oa bet Jezuis, met Urz ar Jezuiset a oa bet diskaret, e Frans, gand ar roue Louis XV, hag ar Jezuiset a rankas mont du-man, du-hont, el lec'h ma veze ezomm anezo.

Ar vuhez pemdeziek, e maner ar Bot, a oa henvel a-walc'h ouz ar vuhez a ren ar venec'h en eul leandi. Pep tra a veze gret d'an eur merket gand ar c'hloc'h. Da zeiz eur diouz ar mintin, an itroun a Zant Luk a veze er chapel gand he familh; lavaret a rae ar pedennou ha da c'houde e lenne eur pennad eus eul leor santel bennak, hag an aotrou a Bennanros a lavare an oferenn. Goude kreisteiz, a-raok kregi el labour, an itroun a lenne Buhez ar Zent pe eul leor all, ha diouz an noz, eun eur a-raok koan, e veze bodet an dud adarre er chapel. Eno e veze lavaret ar chapelad ha gret adarre eur pennad lenn en eul leor santel. Eun eur goude koan, e veze lavaret ar pedennou diouz an noz, gret eur pennad lenn, hag ar vugale, a-raok mont d'o gwele, en em lake war o daoulin evit beza benniget gand o c'herent.

Edoug an deiz peb hini a rae e labour. An daou baotr a veze o studia e kichen o c'helenner. An tad a daole evez war e zouarou hag al labourou. Ar vamm a boanie gand he merc'hed evit peurzeski anezo ha lakat doun doujans Doue en o c'halon. Ouspenn-ze, poania a rae gand an dud a veze endro d'ar maner. Diouz ar mintin, bugale ar verourien ha re all a zirede d'ar maner, hag an itroun a zeske d'ezo o fedennou hag o c'hatekiz. Viktoria a zikoure he mamm el labour santel-ze. He zikour a rae ive da louzaoui ar re glanv. D'ar mare-ze n'oa ket kalz a vedisined war ar maez, hag an dud klanv ha gouliet a veze louzaouet alies gand an itrounezed vat a veze er manerou. Viktoria he deze plijadur vras oc'h entent ouz ar re glanv,

hag en eur louzaoui anezo, e kave komzou karantezus da lavaret d'ezo evid o c'hennerza hag o frealzi.

Karet Doue ha karet an nesa. Setu aze al lezenn gristen. Al lezenn-ze a oa heuliet e maner ar Bot. Ar c'hiz a oa da gaout er maner eur paour, paour ar maner, a veze bevet ha lojet eno. Pa varve unan, e veze kemeret eun all.

Ouspenn da eur paour e veze gret aluzenn. Da zerveziou merket e veze digemeret ar beorien er maner ha roet d'ezo-soubenn ha dilhad. An derveziou-ze a veze derveziou, a levenez evit Viktoria hag he c'hoarezed a veze karget da zervicha ar beorien.

Ma z'eus bet, etouez an dud-chentil gwechall, hiniennou hag a oa fall, kriz, digalon, re all, evel a weler, ha stank c'hoaz, a oa mat, karantezus, hag ar gouerien a veve din-danno a veve eürus meurbet. Meur a hini eus tud pinvidik an amzer hirio, e lec'h dispenn an dud-chentil gwechall, a rafe gwelloc'h kemeret skouer warno hag en em ziskouez eveldo madelezes e kenver o nesa.

Eskop Kemper a zeue bep an amzer da vañer ar Bot. Epad ma chome, e veze c'hoaz muioc'h a bedennou er maner. Kovez a rea ar vistri-hag ar zervicherien hag ec'h alie anezo da garet sakramant an Aoter. Viktoria a zigore he c'houstians d'he eontr, a c'houlenne kuzul digantan, rak kizidik oa neuze he c'houstians, aon he doa ato da veza gret eur pec'ned bennak.

D'an oad a bemzek vloaz, Viktoria a reas he zonzj da veza Leanez. He spered a droe wardu Leanezed sant Fransez a Zal e leandi ar Vizitasion e Raouzou, el lec'h m'oa bet gwechall er skol. Met, o veza bet eun nebeut amzer e Kemper evid jubile 1776, e klevas ano eus Leanezed ar Retred ha meuli ar vad a reant. Goulenn a reas penos e tremenent o amzer, mont a reas d'o zi, gwelet a reas « Dimezelled » ar Retred. Hag o sonjal el labour santel gret en ti-ze, Viktoria a lavaras enni he-unan: « Ober labour an ehestel, sikour an eneoù d'en em zavetei, petra zo kaeroc'h! Ha ma 'z afen, me ive da veva gant Dimezelled ar Retred? »

Goulenn a reas kuzul digant he eontr. An aotrou 'n Eskob a lavaras d'ezi komzou ar profed Daniel: « Ar re a vo bet desket a vo lugernus evel sked an oabl, hag ar re o dezo hentchet kalz re all war hent ar wirionez a vo evel stered peurbadus. »

Goude ar c'homzou-ze, Viktoria ne voe mui en arvar. D'ar Retred eo ez aio.

Distro d'ar gear, e lavaras d'he c'herent petra c'hoantae. Ar vamm a roas kerkent he asant. He zad, hep lavaret nann, marteze evit gwelet ha start oa mennoz he verc'h, marteze ive glac'haret da goll anezi, a zisklerias d'ezi n'ez afe d'ar Retred nemet p'he dije eur bloaz war 'n ugent leun.

Viktoria a reas meur a naved, a reas pinijennou bras, a skuilhas kalz daelou evit kaout aotre he zad da vont buan d'ar Retred, Doue a felle d'ezan evelse startat an ene kaer-ze. Viktoria, hep fall-galoni, a gendalc'has da veva evel a-raok, da zikour he mamm, d'ober skol d'he c'hoarezed ha da vugale ar vro, da entent ouz ar re glanv hag ar beorien, d'en em zantelaat muioc'h mui bemdez. O c'houzout e veze e Kemper diou wech muioc'h a retrejou brezonek eget a retrejou gallek, ec'h en em lakeas a-zevri da zeski ar brezoneg, rak ne ouie ket mat a-walc'h ar yez-ze c'hoaz.

Evelse e tremenas he amzer da c'hedal mont d'ar Retred. D'an oad a driouec'h vloaz, hervez m'o deus diskleriet he c'hoarezed, Viktoria a c'houlenne ar c'hras da veza merrerez. « Mervel da dri bloaz ha tregont evel Jezuz-Krist ha mervel merrerez!... » Ar pez a c'houlenne a zo bet roet d'ezi gant Doue.

J. U.



Al laer. — Da arc'hant buan, pe anez me a zo o vont da derri da benn ouzit.

An tremeniad. — Koueza fall a res, paourkez, rag o paouez paea va zailhou emacoun ha breman ne jom ket eul liard toull ganen ken.

An Itron. — Petra ho peus graet, Mari, evit louza an tavancher-ze am eus roet d'eoec'h ez-fresk egettaou.

Ar plac'h. — O kempenn ho kamp d'eoec'h c'houi, Itron eo em eus louzet anezan evelse!

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kuzulioù Tintin Anna

Wardro ar re glanv

N'eo hepken ar garantez, met zoken ar yec'hed eo a ya er mēz eus an ti pa ne vez ket dalc'het kempenn.

Ma 'z eo mat beza neat ha derc'hel dilastez an traou en ti, pa vezer yac'h, ez eo red beza netoc'h c'hoaz, pa vez unan bennak klanv.

Ar c'hlenved a gouez warnomp pa zonzomp an nebeuta, met dillooc'h e spego e tud eun ti louz eged e re eun ti neat.

An neladurez a vir ouz kalz a glenvejou da zont en ti; het lavaret am eus c'hoaz, ar vugale vihan a vije yac'hoc'h ha krenfoc'h ma vijent dalc'het neat, dalc'h mat.

Arabad eo d'eur vamm beza souezet ma teu penn he c'hrouadur da glenvel gant an dogen: hanter-amzer e vezo bet kiriek d'an dra-ze, hi he-unan. Ma karfe gwalc'hi alies e benn gant soavon ha dour klouar, brosa e vle gant eur bros gwenn, eur bannē eol-dous outan, ne zavje ket warnan an truskennou divalo-ze a zo ken hudur da welet ha ken diaes da barea.

P'en em gav unan bennak da drouc'ha e viz, e lec'h kregi en torch-listri pe en eun tamm truilhou da d'archi e c'houl, e lec'h klask stanka ar gwad gant gwiad-kivnid pe uzul, pe draoul all heugusoc'h c'hoaz, e vije gwelloc'h d'ar vamm pe d'ar wreg kerc'hat eur banne dour bet ber-vet da walc'hi ar biz glazet hag eun tamm lien fresk d'e baka; anez, abenn eun dervez bennak, e vije fudor ha koenv en dro d'ar gouli, ha poan da gaout marteze epad teir zizun pe ouspenn!

Me 'oar n'eo ket aes kaout atao daouarn gwenn, war ar mēz, met evelato ma vijent gwalc'het aliesoc'hik e vije rousesoc'h ar biziadou; ar viskoul, an droerez hag all.

Ar boan-dent, poan eus ar re egasusa, e vije pellaet ivez, ma vije gwalc'het ar c'henou bemdez gand eur bannne dour bervet.

Ha pa vez eur c'hlenved spegus gand unan bennak eus an ti, ma vije graet diouz ar medesin, da lavaret eo ma vije dispartiet ar c'hlanvour diouz ar re all, gwalc'het e zilhad disparti dioc'h re ar re all, laket en eun toull, en douar, ar pez a deu dioutan e sailh an dour fank, e vije stanket e hent ouz an Ankou.

**

Fur vaouez vat ha kempenn a skubo alies he zi, a zigoro ar prenecher da rei ear, bemdez, goude m'he devezo fichet ar gweleou; aoza a raio boued yac'hus; war evez e vezo da rei d'ar re a zo en he serr, dilhad tomm, er goanv, dilhad tano, en hanv.

Tri gwaz a oa dindan an amzer oc'h ober an hevelep labour: o freuz eur waremm diwar o dispign edont. Gwall-avel ha barro kazarc'h a skoe warnezo: « Ni a bako hor maro aman, a lavaras ar c'henta! » Ne lavare ket a c'henvier: antronoz e chomas war e wele, trec'het gand ar paz; an eil a bakas sifern hag an trede nētra; perak?

Ar c'henta en doa eur vaouez lezirek; n'oa ket dare e tein d'ezan pa loc'has da vont d'e zervez hag an holl her goar: mont war yun d'al labour a zo digeri an nor d'ar c'hlenvejou; an eil a oa toull e chupenn, freuzet he gloenn hag an hent-se e pakas riou; gwreg an trede he doa poaniet da bourchas boued tomm d'he gwaz, aliet he doa anezan da lakaat e zae-stamm; fourra he doa graet en e vjsac'h, eun tamm kig moc'h hag eur chopinad gwin; evelse e c'hellas derc'het penn d'an amzer fall.

Arabad e vefe d'ar wazed kemeret tro eus an danevell-man evit tamall d'o merc'hed n'eus fors petra a en em gav ganto, met eun ali eo d'ar merc'hed da ober kement a vezo en o galloud, evit derc'hel ar peoc'h hag ar yec'hed en o c'hēr.

En despet d'o foell ha d'o freder, ma teu, Doue ra viro, ar c'hlenved da dizout unan pe unan eus o zi, e rankint beza war evez muioc'h c'hoaz, dreist holl ma 'z eo eur c'hlenved spegus.

Ar c'hlanvour a vezo kaset d'ar zolier ha laket en eur gwele reas; hep trouz e vo red entent outan; red e vo bale diarc'hen, komz a vouez izel, renka an traou sioul, ha digeri an nor hag ar prenecher, goustata ma c'heller. Arabad e vezo debri e kichen e wele, na lezel tost d'ezan al louzeier, pe an tammou boued a jomo eus e zilerc'h; gorrēnet e rankint beza ha kinniget er poent ma vezo ezomm anezo; ar c'hig, an amann, ar sukr ha pep tra a vezo go-loet en aoun ne 'z afe ar c'helien warnezo.

Pa vezo unan bennak, en ti, ha n'eman ket, war e du, ar vaouez vat a c'halvo ar medesin a-raok ma vezo re zivezat; nag a bed a vije bet savetaet, ma vije bet deuet ar medesin kentoc'hik d'o gwelet. E meur a lec'h e ranker beza tōrc'hor a-raok ma vezo sonjet e glask! An dra-ze n'eo ket beza soursius eus an dud eo! mankout d'eun dever eo, rag ar vuhez eo ar brasa mad a zo roet d'eomp gand an Aotrou Doue ha n'hon eus ket a urz da veza lezirek pa vez ano d'he diouall.

P'en em gavo ar medesin e lavaro petra en deus ar c'hlanvour, pe seurt louzeier en deus ezomm, p'eo mat rei

boued d'ezan pe n'eo ket. Heulia a ranker penn-da-benn gourc'hemennou ar medesin; diouz ar c'hlenved en deus ar c'hlanvour, a-walc'h eo beza dievez oc'h entent outan evid e laza.

War ar mêz ez eus kalz hag a gred e ranker rei boued d'ar re o deus terzienn pe a zo o tistrei d'ar yec'hed. Ar boued-ze ne ra vad ebet; chom a ra da stanka o diabarz; an dra-ze a c'hoarvez dreist-holl gand ar re a zo klanv gand an derzienn domm.

Ar c'hlanvour, kerkent ha ma vez esaet d'ezan a c'houlenn boued; kaout a ra d'ezan en deus naoun, ha n'eo ket gouest da c'houzanv boued; e vouzellou, e zac'h ar boued, gwall skuizet gand ar c'hlenved a zo re dener c'hoaz, zoken evit traou skanv!

Dont a ra sonj d'in eus eur pôtr yaouank ugent vloaz; gwall glanv e oa bet ha breman p'oa kouezet an derzienn, e save eur pennadig bemdez; eun dro, da boent merenn, edo azezet, war ar skaon, tost d'an oaled, o sellet ouz ar plac'h, — e dad a oa intanv, — o leda kaot war ar billig da ober krampouez: « Eün debrer krampouez, evel don-me, emezan, a ranko kaout eun tamm bennak hizio! »

« Ar medesin en deus difennet ouzit, debri boued, evelse, Janmar! »

« Ar medesin n'her gouezo ket! hennez a zo aes d'ezan, p'en deus leun e gof; me em eus naoun evel eur bleiz! Digas krampouez d'in! »

« Mat, eme ar plac'h, — eur galon dener a vaouez, — diaes e kavan chom heb ober ouzit da lavarou; ar medisin ivez a dle beza re galet en holl, rag ar boued a ra vad d'an neb en deus c'hoant-debri. »

Chaoket diou grampeuzenn amanennet gand ar pôtr yaouank edo oc'h astenn e zourn da gregi en eun all, pa gouezas war al leur-zi, maro-mik!

Kaletoc'h eged ar medesin oa bet ar plac'h; pell a zo abaoe, rak nevez deuet oan aman hag em eus graet pevar marc'had nao bloaz a-vreman, ha daoust da-ze n'em eus ket ankounac'haet c'hoaz ar maro-ze. Unan bennak a lavare: « Ma vije bet beo e vamm he divije stourmet outan hag en divije pleget! »

N'ouzoun ket, rag ar mammoù a zo ker sot breman da ober divizou o bugale!

Gwella 'zo d'ober eo senti ouz ar medesin.

Ken diaes all e vez pe ziaesoc'h pa ranker, dre urz ar medesin, ha diouz ar c'hlenvejou a vez, rei da zebri da eur buget pe da eun den bras ha n'o deus nemet donjer ouz ar boued.

Debri a rankont koulskoude pe ne deuo ket a nerz d'ezo!

Gand ar brasa preder e ranko ar wreg pe ar vamm aozar meujou; arabad e vefe d'ezi mont da ginnig-eur skudel-lad voued bero d'ar c'hlanvour kizidik a glemm evid eul

loaiad soubenn! Red eo rei d'ezan e bred, a-nebeudou, eul loaiadig bep tro, bep eur, ha teurel evez en aoun ne vije re domm, pe re yen, re zall pe re c'hoular.

Ma 'z eus urz da rei eur vi pe eun tamm kig, ra vezint atao poaz mat, na re, na re nebeud, na re zec'h, na re zrus, pe en devezo heug outo, ha bepred servichet war eur plad neat.

« Ma klemm ar c'hlanvour gand ar vlaz fall a zo en e c'henou, eo red rei d'ezan dour bervet da walc'hi e c'henou en diabarz, da freskaat e vuzellou hag e deod.

« A-benn an noz e vezo gallet aoza eun evach freskus ha skanv rag an noz a zo hir ha poanius d'ar glanvourien geiz !

« Gwaska a c'heller eun aval-oranjez en eur banne-dour ha lakat eun tamm sukr ebarz; an evach-ze a zo mat; eur banne tizan a c'heller da ober ivez, o virvi dour war bleuntill, ment pe dro-heol, anvet, e galleg, « *Camomille* », hag a raio vad, pe c'hoaz kafe tano, laez hag all.

« Dioc'h ar c'hlenved e vezo graet hag ivez dioc'h ar c'hlanvour; pep maouez a gavo en he c'halon ijin ha terneredigez evit prederia gant he zud klanv, beza evito eur skoazell hag eur c'hennerz, takat en o spered an ioul da veza pare hag en o ene fizians e Doue ha doujans d'e volontez. Terneredigez hag habaskder a zo gwelloc'h eged arc'hant rak ne vezont ket kavet da brena hag an holl a c'hell o c'haout.

« Warlerc'h eur c'hlenved bras, pe d'an oad ma ra ar re yaouank o c'hresk, ar medesin a roio urz da rei boued krenv ha nerzus: gwin ha kig bepred.

« Ar re a zo pell diouz ar yourc'h a lavaro : « Da belec'h ez in me da glask kig da hennez! Ar c'hig a zo ker na n'em eus ket a eas da vont bemdez da redet. Petra 'rin? Lezel va gwaz pe va merc'h da fallaat ha da vervel? »

« Nann! nann! eur wech ar zizun ma kirit e c'helloc'h kerc'hat eun tamm kig ejenn pe leue, pe c'hoaz laza eur yar goz, da ober soubenn, soubenn skanv a ziskenno aes e poull-ar-galon ha gant laez, viou, legumach e reoc'h boued magus ha skanv.

« Ma 'n deus donjer ar c'hlanvour ouz ar viou ha ma 'z int gourc'hemennet d'ezan, eur vaouez ijinus a gavo tro d'o rei d'ezan hep m'her gouesfe, koulz lavaret; kemmesk a raio eur melen-vi en eur volennad laez, gant sukr, (rag ar sukr a zo nerzus) pe etouez piz, fa, patatez silet, pe c'hoaz en eun tamm farz tano ha poaz mat. »

Da veur a hini e vez gourc'hemennet, gand ar medesin, eva dour, diwar dachou merglet, da grenfaat, rag an holl a oar ez eus, er vagadurez, kalz pe nebeud a houarn; an den a rank kaout houarn evit chom seder. War eur gaze-tenn em eus gwelet an daolenn-ma, a lakan hizio dirag daoulagad al lennerien, evit diskouez eo aes beva eun den

blank, eur plac'h yaouank dinerz, hag o faera, war ar me-
ziou koulz hag er c'hèriou.

An traou ma a zo bet kavet ha renket gant tud a vicher
hag a c'heller kaout fizians enno.

E 100 gramm riz	o deus kavet:	1 milligramm	8 a houarn
— laez	—	2	3
— gwiniz	—	5	5
— patatez	—	6	4
— piz	—	6	6
— ayalou	—	13	2
— kig-saout	—	16	6
— melen-vi	—	17	1
— pinochez (1)	—	35	9

Ma 'z eo mad ar c'hig da grenfaat, an ayalou, ar viou, al
legumaj glaz a zo ken koulz; an hini a zo pell diouz ti ar
c'higer, a gavo, er gêr, lakaet gant Doue e-unan, frouez an
douar, gouest da zigas d'ezan, yec'hed ha nerz; hag ous-
penn eman viou ar yer, laez ar zaout, mel ar gwenan ha
dreist an traou-ze c'hoaz, an aer vat, aer yac'hus hor Breiz
koant, brudet dre ar bed-holl ha meulet gant ar gwella me-
desined.

Garo e kaver an avel-vor, met daoust ha ne ranker ket,
derveziennou a vez, beza garo ivez ouz ar glanvourien?

Eun tad a vez garo ouz e vugale a-wechou ivez ha ne
vez tamm ebet falloc'h evid an dra-ze. War hor c'hleuziou
alaouret, al lann a zo garo e begou ha gwas-a-ze d'an hini
a glask tostaat e zourn ouz o bleuniou melen. Ni, Bretoned,
hon eus ar vrud da gaout eur stumm-spered, eur vouez
hag eur yez c'haro; ya! mat e vije d'eomp beza garo ouz
ar ganfartet a glask lemme diganeomp hor feiz ha lakât an
dourn war eneou hor bugale. E pep tra ez eus eur gentel,
ma karfemp kompren!

N'eus fors petra 'en em gav, eo mat kaout eul louzou
bennak en ti, dreist holl pa vezer pell dioc'h pep tra.

Kerc'hat a c'heller eta, euz a di an apotiker:

Eur pakad « *ouat idrofil* ».

Eur pakad « *gaz aseptik* ».

Eun « *thermomètr* » da gemeret an derzienn;

Eur pakad « *sulfat de soud* » evit ar spurjou;

Eur vuredad « *éol-kanfrèt* » ouz ar boan izili: n'eo ket
da eva eo, avat! da frotal!

Eur vuredad zour « *bleun-oranjez* » (hen-man a zo da
veza evet etouez dour; eul louzou didanus eo kenan).

Lakeomp c'hoaz: eur « *vuredad zour exyjené* » hag eur
vuredad « *teintur d'iod* ».

Eur ger am eus da lavaret diwarbenn en teintur d'iod-ze:
e meur a di ez eus buredajou anezan ha gwell a-ze ma vez,
war an eur, ententet ouz eun trouc'h pe eur gouli; met setu

(1) Pinochez: *épinards*, e galleg.

aman petra c'hoarvez: eur gwiskad *teintur d'iod* a vo lakêt,
hag antronoz, ma ne vez ket pare, e vezo lakêt eun all, ha
dimeurz, ha dimerc'her ha diriaou, ha dirgwener.

Abenn fin an dro, e vezo gwasoc'h al louzou eged ar boan,
rak dêvi 'ra pa n'eo ket fresk, ha setu penaoz e fazier pa
sonjer:

Eun neubeud 'ra neubeud a vad

Kalz a raio kalz muioc'h a vad!

Eul litrad dour bervet a zo red da gaout ive: lezel an
dour da virvi epad 10 munud.

Evelse, pa vezo ezomm, e vezo kavet pep tra dindan a
dourn, gant ma vezo ar wreg, ar c'hoar, ar verc'h, aketus
d'o renka gant urz, war stal o frez.

Hogen, an talvoudeka eus al louzeier n'eman ket aze, hen-
nez ne vez ket gorrennet asamblez gant ar re-all, rak er
galon eman.

Eul louzou eo, hag a lako ar vaouez d'ankounac'haat he
foaniou evit sonjal e re an nesa; gant al louzou-ze, e roio
nerz-kaloun d'ar c'hlanvour glac'haret; gantan, e c'hello en-
tent gant kement a aked hag a drugarez, ouz ar c'hlanvour
grignouz hag heuguz, eged ouz an hini a fell dezan he faea
dre e anaoudegez-vad. Rak, al louzou dispar-ze eo ar vade-
lez, lakaet gant Doue enn he c'halon evit frealzi pep poan;
ar garantez e kenver an nesa dre garantez evit Doue, setu
kaëra vertuz a c'hell prena ar vaouez.

Pa deuz, d'am gwelet, evid ar bloaz nevez, Yvonik va ni,
Yvonig an didouellet, edon ouz an daol o lenn an Testamant
koz: « Souezet e vezan bep tro, emeve, gant santelez an
den Job! eur skouer eo evidomp, ma karfemp deski gantan
beza laouen e-kreiz an trubuliou! Peb tra a oa lammet di-
gant an hag e veule Doue!

— « Peu tra? ya... nemed... e wreg, siouaz evitan! ma
vije bet aet hounnez da heul e vadou hag e vignoned, ne
vij ket bet ker gwas e stâl! »

Kenderc'hel a reas Yvonik:

— N'anavezan ket kalz a verc'hed! met hiniennou 'zo hag
a lakafe eur zant da bec'hi hag ar vein er c'hae d'en em
ganna. Easoc'h eo gouzanv eur c'hlenved hurr, eged ar mer-
c'hed-ze. E lec'h madelez, ne deu ganto nemed glabousérez,
ranellérez, lezirégez!

Ar c'homzou c'hoëro-ze, eo a lakeas ac'hanon da c'hou-
lenn digantan dioc'h an noz, petra oa war e spered! Kountet
em eus hon diviz, aman.

Allaz! allaz! displega rankan va faper adarre, evit merka
warnan ar pez a gav d'iq a c'hell beza talvoudek d'am len-
nerien!

N'eus ket diou eur hanter, e kleven, ebarz ar streat, hir-
voudou Mën, hanter-tiegez Paol: « O va Doue! ar gwall-eur
a zo ganeomp! Anna goz, en han Doue, diredit dû-man! »
Ha me, er mêz, diwar herr.

— « Petra 'zo, Môn geaz?

— « Va zad kaër, o tralia boued d'ar pen-moc'h, a zo kouezet eur gaouad paralizi warnan! N'em eus ket grêt nemed mont el lab da zellet outan! d'an ampoent oa skatetet Korantinig, ar yaouanka d'in, gant ar podad kafé a oa var an tan! Ho! ho! ho! »

— « Distro d'ar gear, Môn, eno 'man da blas; me a zo o vont ganez. »

He faotr kosa a zo krenv: hon tri hon eus gellet lakaat an tad-koz war eur c'hravaz hag e gas en ti; war an daol hon eus e astennet, e benn sounna ma c'hellemp, ha digoret frank ar prenestr da rei ear.

An eil eus ar botred a oa aet war e varc'h-houarn da gerc'hat ar medisin.

— « Distardomp e zilhad, emeve, ma redo gwelloc'h ar gwad; lakeomp traou yen ouz e benn, traou tomm ouz e dreid, ar c'hafe héro a zo war an oaled, pe vleud-moutard ma 'z peus; ha me a zo vont d'ar gêr, rak an nebeuta ar gwella, a dud war e drô. Ar verc'hig a deuio ganen, da bansi he zroad, hag abarz-nemur, e tistroin da c'houzout penaoz e troio an traou.

Brema, ar botrezig a zo sioul war va gwele: n'oa ket devet doun, ha setu petra 'm euz grêt: souba he zroad en dour yen, ha goude, teurel warnan eul louzou, henvel ouz bleud-hanvet « *bikarbonate de soud* ».


Peurliesa, pa vezer gwasoc'h devet, e lavaran lakat « *vaselin boriké* », hag eur gwiskad bleud « *talk* » var gorre, ha paka heb starda; o paouez dont d'ar gear emao; bet evit an eil gwech o sikour Môn. He zad-kaër a zo easoc'h: ar medisin en deus gourc'hemennet eur spurj, ha laket d'ezan gwaderezed; meuleudi en deuz roet d'eomp evit beza ententet mat outan.

Ah!ô, Yvonig! ar merc'hed, kaër zo, n'int ket holl ken e gas hag hini Job!

TINTIN ANNA.


G. S. — 100 gramm deliou onn eo a ranker lakaat da ober piketez, ha nann 100 delienn, evel ma 'm eus lavaret e *Feiz ha Breiz* miz mae diveza.

T. A.



ROUE AL LAZ

(Kendalc'h)



Azezan rejont, seul ouz seul, war ar geot sec'h. Plom, poultr, fuzuilhou a vo laket kenver ouz-kenver, harp' ouz eur roc'hel a gloze leurenn ar pikern diouz tu ar stêr. Kersôzon a lavaras neuze da Berig:

— N'hellomp ket, emezan, miret ac'hanout en hon touez, ma bugel, en aoun n'arrufe droug ganet breman zouden, pa vo red kerzet da gaout hon enebourien: kemer eta hent ar gêr, pa 'z int bodet holl aman dirazomp ha digor an hent d'it.

Ar pôtrig a deuas an dour en e zaoulagad ha ne respontas netra.

— Kea, eme Gevareg, en eur gregi en e vrec'h goustadik; gwir eo, an hent a zo muioc'h asur eget ne vo al lec'hiou-man bremaik.

— N'am eus ket aon! eme ar bugel.

— Kenavo warc'hoaz, Perig, eme ar c'hloareg. Da vamm hag hon tud ni a zo nec'het hag a vo mall gant klevet eus hon c'helou. Te o diboanio. Kenavo warc'hoaz, ma c'hamarad bihan!

Neuze ar pôtrig a dec'has diouto, pleget e benn. Ne oa ket a brez warnan; Kevareg hen heulias o vont hed ar stêr, hep sellet nag a-gleiz nag a-zehou, ken ne voe kuzet gant eur vodennad haleg...

Perig pleget e benn a ruille an daerou war e ziuojod, ken poaniet ha ma oa o vezan bet kaset kuit. Ne rea forzebet ha pa gavje soudarded war e hent. A-boan eta masavas e zellou pa glevas eur vouez o c'houlen digantan.

— Perak e ouelez, pôtrig?

Dirazan e oa eur pikol den, hir, moan, kastis, hag hen n'e zaoubleg, e zaou zorn war e zaouin, da zellet outan. Perig a dôlas warnan ive eur zell dispont mat, rak an den-man n'en doa ket stumm da vezan drouk.

— Perak e ouelez, pôtrig?

— Me ne ouelan ket! eme Berig, 'n eur dorchan e zaoulagad.

— Gwir eo, an dra-ze ne zell ket ouziz perak e ouelez. Lavar d'in, da vihana, ha pell emaoen c'hoaz diouz milin-Traon-ar-Run?

— Aze eman! eme Berig, 'n eur ziskouez gant e viz. Petra ez it d'ober di, ma ontr?

Ha, d'e dro, ankouac'haet gantan e boan-galon, en em lakas da zellet talarek ouz an den kastis, e ré outan « e ontr », kement a zonzans en doa ouz an dud kosoc'h egetan.

— Me lavarho d'it e-berr, ma karez respont d'in c'hoaz war gement-man: Ha ne peus ket kavet tud 'war da hent?

— Pesort tud? eme Berig.

— Gwir eo! Danvez eun den a spered 'zo ennout, ma niz. Ac'hanta, ma lavarfen d'it emaint o paouez tremen e Kerbeniti hag int 'deut aman warzu ar vilin, da c'hedal soudarded glas?

— N'oc'h ket o klask ober droug d'an dud-ze?

— Tamm ebet, ma fôtr; ne glaskan nemet o brasa mad!

— Deuit ganin neuze, eme ar pôtrig, ken laouen ha tra; me 'ya da gas ac'hañoc'h betek enno.

Eur pennad goude Kevareg hag a oa war evez ouz kement a dremene en draonienn koulz hag er vilin, a lavarho:

— Del! Setu Perig o tizrei adarre! Anavezet en doa anezan diouz e visac'h gantan 'hepred war e skoaz.

— N'eman ket e-unan! emezan.

Hag holl 'n o zav da zellet.

— Piou al lankon bras-ze? eme Riwall.

— Krogomp 'n hon fuzuilhou! eme eun Thepot.

O-daou, bras ha bihan, an daou valeer o doa krapet gant ar c'hrec'h ha setu int o teurel troad war iein ar pikern.

An estranjour a dennas eur boned gloan teo a c'holoe e dal betek e zaoulagad hag a zaludas an holl tro dro. Eur bragou berlij glas a oa gantan, eur chupenn rouz ha war e ziouhar eun heuzou lér kignet ha dislivet gant ar c'herzed ha gant an amzer. Eur fuzuilh a zouge a-dreuz war e gein; met ne veze gwelet nemet ar beg dre zindan e borpan. Eur gontell paket en eur win lien teo a oa stag ouz e gostez, vel kontell eul lazer-moc'h. Kevareg hag a ouie 'n eun tól lagad kemer muzul pep den, a zonzas ennan e-unan, o welet krabanou an noutant-man, ne oa ket brao mont da c'houlenn digantan ped eur e oa.

— C'houi, eme an den-man, o sellet ouz ar c'hloareg, c'houi eo Kloareg Kersôzon?

— Ya, eme ar c'hloareg. Ha c'houi, piou oc'h, mar plij?

— Ha c'houi, eme hon moanard adarre, o sellet ouz Kevareg, c'houi eo Kevareg, eus Kerbeniti?

— Ya, eme Gevareg.

Hon den en devoa dalc'het e voned en e zorn. En eur lakat anezan war e benn, e teuas gantan:

— Ha me eo an Tokous bras, eus Kerziliou, parrouz Plua, a zo deut aman, a-berz an Oitrou ar Rouâri, d'ober eur c'hoze ganeoc'h.

— Ar Rouâri? eme ar c'hloareg, piou an den-ze?

An Tokous bras a zibrennas a chupenn rous, a glaskas en eur pez godell a oa du-man war ar c'hein, a zigasas gantan eur c'houezigell stardet gant eur gorreen lér hag en em lakas da zibrenna anezi. N'eo ket butun a dennas diouti, nemet eur paper pleget mat hag ennan paket eur

paper all tefoc'h. Ar paper-ze a ginnigas d'ar c'hloareg hep lavaret gir. Heman a freuzas ar ziell koar ruz a zal-c'he an daou bleg anezan hag en em lakas d'e lenn gant evez. An holl a oa o zellou warnan ken lemm ha ma oa e re war ar paper.

P'en doé peurlennet, ar c'hloareg a zavas e benn hag a gomzas:

— Mignoned, emezan, ne dalv ket ar boan d'in rei d'eoc'h da anavezout raktal ar pez a zo merket war al lizer-man. Hen ober a rin e-berr, mar gellomp dont a-benn, an dro-man c'hoaz, eus hon tól. N'hon do ket re eus eun devez da boueza ha da adpoueza ar pez a zo merket aman.

Ma den mat, emezan d'an Tokous bras, c'houi oar, mar-teze, da betra omp deut d'al lec'h-man?

— Ya, klevet em eus, eme ar c'hannad, en eur glask eul lec'h da azezan. Ec'h an 'n em c'hoaze, emezan, mar ne gavit droug ebet war ze, rak bet on daou devez hag eun nozvez o kerzet hep kaout ar blijadur da lemel ar bec'h diwar va zreid.

— Breman, emezan, ma kirit am lezel evelse epad eun eur, me vo prest da rei d'eoc'h goude, eun tamm zikour, evel ma plijo ganeoc'h.

— Grit eun diskwiz, ma den mat, eme ar c'hloareg; ma karit dibri hag evan, bezan hon deus peadra da ranna ganeoc'h.

Met an Tokous bras, a-boan en e c'hourvez, a oa krog dija da ziroc'hal.

— Lezomp hen da gousket, eme Gevareg, ha deomp war rôk! Te 'chomo gantan, Pierig, hag a gaso anezan d'ar vilin, pa zihuno!

Entetet mat eo?

— Ya! eme Bierig.

— Sell aze bara ha kig evitan hag evidout! War ze, ar c'houec'h den a oa anezo a grogas pep hini en e fuzuilh; plom ha poultr a voe lodennet hag en hent.

Treuzi rejont ar stér izeloc'h eget ar vilin hag en em zispartia neuze o c'houec'h tro-dro d'an ti, da rei da gredi d'ar Re C'hlas e oant kalz a dud. Klask a rejont pep hini eul lec'h diouz gwelet dor, prenestr pe borz ar vilin.

Riwall ha Kevareg a oa em laket tost ha tost.

— Ne welez ket, eme Gevareg, ez eus tud e kambr ar vilin? Daoust piou a zo eno?

Ne voent ket pell o c'houzout. Eur zoudard a deuas d'ar fenestr hag a c'halvas unan bennak eus ar re a oa er porz. 'Benn eur pennad e voe bodet tri ouz ar prenestr ha pevar didan.

— Aze 'z eus eur wezenn dilh, eme Gevareg, hag eus ar c'haol anezi e c'hellin brao gwelet kement a zo er gambr...

Kerkent e voe er wezenn, war bouez e ziouyrec'h.

— Sko er porz, emezan, me 'skoio er gambr.

Pellik e oant diouz an ti; n'eus forz.

— Poultr frank! eme Gevareg. Prest out?

— Ya!

Ha kerkent daou denn o sklokal 'vel eun tarz-kurun e kreiz sioulder an draouienn. Diouz prenestr ar gambr, eur zoudard a gouezas war e benn d'an traon hag er porz e kouezas eun all. Ha kerkent all, pevar denn all a strakas tro dro d'ar vilin, o skei dor pe brenestr, hag eur youc'hadenn a skiltras er pevar c'horn:

— Torr e benn! Torr e benn! Ar Re C'hlas strafilhet a ziredas er porz evel eur vagad m'erien o tont ermêz diouz o c'hrugelt.

Hag ar poultr da strakal neuze a-gleiz hag a-zehou!

Kelc'hiet omp! eme an ofiser bihan, o lakat e benn ouz ar prenestr. Deuit holl en ti!

Kerkent e serras an daou stlalaf, met eur volod a doras unan anezo hag a zarc'hoas eur skiltrenn gant e benn.

— Deomp d'an traon! emezan; tud a zo war ar gwez!

An nor a voe serret kloz, pa voe an holl dastumet e goudor ar mogeriou. An tennou a oa paonezet; war daou-warnugent soudard, avat, an ofiser bihan ne gontas nemet pemzek. Hag hen da wallozi, da skei e dreid ha da skri-gnal e zent 'vel eun hanter-diaoul ma oa.

— Gortozit; emezan, daou zen aman!

Miliner, bez ez eus eun nor a-drenv?

— Ya! eme Fanch ar Skailh.

— It ho taou, sioul, war ho krabanou, ha kavit d'in an dud-ze, hep m'ho kwelfent!

An daou zoudard a yeas d'en em zila ermêz dre an nor a-drenv, met kerkent ha ma temzigoras, e oa eur volod enni.

— War ho krabanou! eme an ofiser bihan; hag ermêz!

Mont a rejont dreist d'an treujou, a ruz-kaer, war o c'hof, hag evelse, betek ar bern plouz nesan. Eno, unan anezo a zavas en e zav, goustadik, en eur zellet a bep tu.

Demdost e oa eur c'houldri dilezet hag hanter-zisto hag a zervije da zastum pep seurt benviou labour.

Mont a rejont di, d'ar red, en eur blega o choug. Eur skuél a oa er c'houldri, emesk kalz a draou all.

Hon fôtred a grogas enni, he zavas betek an doen hag unan anezo a bignas d'an nec'h. Ac'hano, dre doullou an doenn, e wele porz ar vilin, ar stêr, ar parkou tro-dro, da vihana, diouz ar penn-ze d'an ti.

— Tap d'in ma fuzuilh! emezan, d'êe gamarad. Me 'wel eur chouan!

Per, an hini en devoa tennet war dor a-drenv ar vilin, a oa eno, drek ar c'hleun, er park nesan. Amzer en doe ar zoudard glas da vizan peza a gare; Per a oa e zell war zor an ti; pa skoas an tenn anezan, ec'h asoupas; e benn a gouezas gantan, touez ar geot ha ne finvas ket ken: maro e oa.

Ar zoudard a droas neuze warzu ar stêr.

— Gwelet a ran eun all, emezan, du-hont, e gaol eur wezenn dilh e kichen an dour!

Ha da denna adarre.

— E c'har am eus tizet, emezan; eman o vont traou!

Hon zoudard a zellas c'hoaz, met ne gouezas ket e lagad war zen ebet ken.

— Deomp! emezan, lorc'h ennan, da renta kont d'al letanant.

Al letanant o digemeraz laouen hag a savas c'hoant gantan ivez, da vont da welet petec'h e oa kuzet ar chouanted.

— N'it ket d'ar c'houldri, emezint, rak gellit a-walc'h o dije gouzout eo ac'hano eo ez eus bet tennet.

— D'eomp 'ta etrezek ar penn all, eme an ofiser bihan.

O lakat e benn ermêz, e welas eur skeul hir harpet ouz toenn ar marchosi, lezet eno gant an toer.

— Setu va afer! emezan.

Ne voe ket pell, goude, e oa astennet war e gof war veg ar skeul, d'ezan da c'hellout tizout gant e lagad, en tu all d'ar vilin, betek ar parkeier pellan.

E lagad a oa lemm hag a baras hepdale war daou eus hon mignoned kuzet pep hini nezo adre eur wezenn zero; an daou Dhepot e oant. Ac'hano, dre forz furchal, e kavas Kevareg, ar c'hloareg ha Riwall, o zri bodet, e vel o 'n em guzuilh. Kaer en doa sellet ahendall, ne welas netra. Hag e oa o vont da zisken, seder evel pemp gwen-neg, pa zantas petra... petra 'ta? an doenn o tec'hel... pe... ar skeul? Ar skeul eo, ar skeul eo, sur! Hola! Hola! Setu hi o tistatga diouz an doenn, hag hen da heul.

— Hep la! bez ez eus tud!

Met an hini a zo krog en troad a renk bezan bouzar. Met piou an diaoul a zo krog en troad? Setu hi savet sounn en êr hag hon ofiser, evel eur marmouz, kropet war ar beg, krog gant e dreid ha gant e zaouarn, en aoun na gouezfe. Ar skeul a zo hir, 25' troatad, da vihana, hag an hini a zo krog enni, en deus savet anezi en êr, ha setu m'eo uheloc'h c'hoaz. Krog eo, zoken, da vale gantil... Met piou an diaoul skorn a c'hoari an dro-ze d'ar « Sitoian » letanant?... Mar gellje gouzout? N'hell bezan nemet eur chouan! Klevet en deus lavaret Kevareg a zo eur pôtr krenv... Skiasa 'ra e wad o sonjal eman Kevareg o vont kuit gantan, skeul hag all. Ne wel nemet e gein hag ar boned rous 'zo war e benn. Heuzou disliv a zo gantan ive war e ziouhar ha beg eur fuzuilh a dec'h dre zindan e borpan.

Al laer a ya kuit a gammejou hir, 'trezek ar parkou elec'h m'eman ar chouanted. Ar Re C'hlas a rank gwelet an den-ze o vale gant e skeul hag o letanant war ar beg; met tenna ne gredfont ket, rak mar kouez an douger, ar skeul a gouezo ivez, gwaz d'an neb 'zo pignet enni!

Setu al laer arru er parkoù, demdost d'ar stêr; tri den hag eur pôtrig a deu da ziarbenn anezan en eur zevel o diouvec'h d'an êr hag en eur c'hoarzin ken e tortont.

— Hеп! *attention là-haut!* eme an douger, hag e oa an Tokous bras hen e-unan.

Hag hen o tiskenn e skeul plom e kreiz ar park hag, o sevel e benn, oc'h ober eun tamm prezegenn d'al letanant bihan:

— Diskennit breman, me ho ped, sitoian, emezan; me a zalc'ho mat d'ar skeul. Ma mignon Kevareg a zo du-hont o c'headal ac'hanoc'h; eun dra bennak en deus da lavaret d'eooc'h! Ah! Taolit d'an traon, da gentan ho kleze hag ho pistolenn! Skanvoc'h e vezoc'h.

An ofiser a oa glas. hag ez oa.

Pôtr e voned a zelle outan d'an nec'h, e lagad lemm o heuilh pep finvadenn a rê.

Teurel a reas d'an traon e gleze hag e bistolenn. E keit ze, e voe gwelet o tostet Kevareg, paket e vorzed, harpet war ar c'hloareg. E zaoulagad a dôle luc'hed hag e zent a rigonse en e c'henou. Eur penn-baz dero a oa gantan en e zorn; pa voe arru ouz troad ar skeul, — benn neuze, an ofiser bihan a oa diskennet ive, — Kevareg, o trei ouz e vignoned, a lavaraz d'ezo.

— Daou ac'hanoc'h, emezan, a chomo aman evel testou; ar re all, bezit war evez ouz ar Ré C'hlas!

Gant beg e vaz, e tiskouezas d'an ofiser e gleze ha, gant eur zell morzus:

— Krog en tamm dir-ze, emezan, ha difenn da vuhez, mar gouezez ober!

(Da heuilh).

D. N. D.



RESPONCHOU MEZEVEN 1925

- I. — Eur vouarenn pe eur gerezenn.
- II. — An tok war ar penn.
- III. — Eun irvinenn.
- IV. — Ar zailh er puns.
- V. — Ar wirionez a zo gant Yannig rag e vontr p'eo gwir ne labour ket a verk an eur just diou wech bemdez, e lec'h hini Fanchig ne vez morse, eun hag eun a-walc'h, war an eur.

Er miz a zeu e stagimp da embann anioi ar re a c'hounid prizioù divinadennoù 6 miz kenta 1925 hag e miz Here a zeu e tigorimp eur genstrivadeg nevez ha ne bado nemet tri miz.

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONEZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Soniou — Buhez ar Vro

REDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40. RENNES

ADMINISTRATION
du Bleun-Brug et de l'Engloë Sant Ildu
YV. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Bleun-Brug, E. A. M. — Petra vezo gwelet e Gwengamp. — Viktoria Konan a Zant Luk, J. U. — Roue al Laz, D. N. D. — Diveza gwerzioù eur barz yaouank, L. NIHUELLOU. — Poltred ar Jiklodenn, PER LAURANS. — Sant Nikolas ha sant Kasian. — Kuz-heol e Breiz Izel, J. L'HELGOUALC'H. — Yann ar marc'hadour moc'h, J. L. — Doue, ar Vro, ar Yez, YOUENN AN DREZEN. — Dindan banniel ar vro, F. M. — Keleier a gleiz hag a zebou.

Sulioù ha Gouelioù miz Eost

- 2 a viz Eost. — IX^{vet} sul goude ar Pantekost, p. 465 e levr an A. Uguen.
- 9 a viz Eost. — XV^{vet} sul goude ar Pantekost. An oferenn p. 368.
Gousperou kenta sant Laurans, p. 715.
- 15 a viz Eost. — Gouel Mari Hanter-Eost, p. 720.
- 16 a viz Eost. — XI^{vet} sul goude ar Pantekost. Sant Joachim, Tad ar Werc'hez Vari, p. 725.
- 23 a viz Eost. — XII^{vet} sul goude ar Pantekost. An oferenn p. 476.
Gousperou kenta sant Berthele, p. 727.
- 30 a viz Eost. — XIII^{vet} sul goude ar Pantekost, p. 480.

AR BLEUN-BRUG

E « Reolenou »

Piou bennak a lenno ar pezh a voe skrivet diwarbenn ar *Bleun-Brug*, er C'horn-boud diweza, (p. 102), a ouezo sklêr penôs, adalek an eur genta, henvel ouz eun hadenn hag he deus enni, forz pegen munut eo, holl danvez gwezenn pe louzaouenn, *Bleun-Brug* Keryann, deut da veza hirio *Bleun-Brug Breiz*, da lavaret eo, da asten e skourrou war Vreiz a-bez, a oa ennan ivez, klozet en e vreden, kement m'eo deut, ha kement ma teuo da veza dre ma tigor ha dre ma kresko.

« On se propose d'exalter les traditions nationales de la Bretagne... » Setu petra a verke an Ao. Perrot hag e vignoned. Gant se, e skoulment o menoz hag o labour ouz hini Kermarker, an Uhel, ar Gonideg, hag evelse ouz menoz holl vrodelerien Breiz, a re da re, abaoe amzer an Dispac'h hag a-rôk.

Eno eman gwir eienenn hon Emzao hag a zo ennan, hervez ar spered a-viskoaz, dre zindan al labour breizek, doujans ouz ar feiz. Abalamour, dreist-holl, d'an doujans-ze ouz ar feiz hag ouz he gourc'hemennou eo e tale'h d'en em ren skoaz ouz skoaz gant Bro-C'hall, gant klask avat, a-gostez d'ez, evel m'eo red, e vad e-unan, dre e yez e-unan, e istor e-unan, e spered e-unan. Setu eno an andon yac'h a red e gwazied ar *Bleun-Brug*.

Ha setu perak ar *Bleun-Brug* en deus tro da zevel e benn, sioul ha dispouron, hag en deus respont vat, bep tol, da gement rebech a c'heller skei gantan. Bezan eo kompouez e pep doare, evel eun tour savet mat, diazezet war ar roc'h hag e zifennou gantan a bep tu.

Gwelomp an dra-ze en eur studia e « Reolenou ».
Setu int aman.

ART. I. — Le *Bleun-Brug* de Kerjean est réorganisé sous la dénomination de Société d'éducation nationale bretonne et les anciens statuts approuvés en Assemblée générale à Saint-Vougay, le 15 mars 1912, sont remaniés comme suit:

ART. II. — L'Association a deux buts distincts, mais inséparables:

a) *En tant que bretonne*, elle a pour but de promouvoir l'idéal breton dans le triple domaine intellectuel, politique et économique;

b) *En tant que catholique*, de contribuer à rendre à la Bretagne le plein exercice de sa foi traditionnelle, cela

afin qu'elle devienne par le rayonnement total de sa personnalité, un instrument de salut pour ses fils et un agent de civilisation dans le monde.

ART. III. — L'Association est dirigée par des laïques et sous leur entière responsabilité. Elle se tient en communion étroite avec les représentants de l'Eglise catholique et est placée sous le haut patronage de l'Episcopat breton.

ART. IV. — L'Association a son siège au domicile du président du Bureau Central.

ART. V. — L'Association est essentiellement composée:

a) De *Comités régionaux* répartis par langue ou dialecte: Haute-Bretagne, — Vannes, — Cornouaille, — Tréguier-Goelo, Léon. Chaque région est délimitée par le relevé des paroisses qu'elle contient.

b) D'un *Bureau Central*.

ART. VI. — Le Bureau Central se recrute lui-même; il est renouvelé tous les ans par cinquième; — les membres des Bureaux régionaux sont choisis par le Bureau Central et renouvelés également par cinquième, chaque année.

ART. VII. — Le Bureau Central (B. C.) est composé de:

1° Un président bretonnant;

2° Deux vice-présidents, dont l'un appartenant à la Haute-Bretagne;

3° Deux secrétaires généraux bas-bretons, un ecclésiastique et un laïque parlant et écrivant le breton de tous les dialectes;

4° Un trésorier.

ART. VIII. — Seuls les membres du B.-B. ne faisant partie d'aucune autre association à caractère régionaliste ou nationaliste breton sont éligibles aux différentes fonctions des Bureaux Central et Régionaux (B. C. et B. R.).

ART. IX. — Les membres des B. R. et B. C. sont tenus obligatoirement d'assister à la retraite fermée annuelle (cf. art. xv), à laquelle sont conviés également tous les membres du *Bleun-Brug*.

ART. X. — Le rôle du B. C. est de donner l'impulsion générale, de maintenir la cohésion entre les Comités régionaux et d'organiser le congrès annuel. Celui-ci se tiendra à tour de rôle, en Léon, Cornouaille, Tréguier-Goelo, Vannes, Haute-Bretagne; Le Comité régional fera, à cette occasion, office de Comité local.

ART. XI. — Le B. C. se réunit au moins deux fois l'an; les B. R. se réunissent chaque trimestre.

ART. XII. — Les Comités régionaux forment chacun une petite association autonome. Ils doivent, du moins en Basse-Bretagne, obligatoirement se pourvoir des organes d'action suivants:

- a) Breuriez ar Brezoneg;
- b) Centre de librairie et de propagande bretonne alimentée par l'*Emgleo Sant Iltud*;
- c) Bulletin mensuel;
- d) Une bonne troupe d'acteurs.

Ils s'efforceront, en outre, de former des *chanteurs* et des *conférenciers*.

ART. XIII. — La cotisation annuelle du B.-B. est de 10 francs — exception faite pour les militaires, les étudiants qui paient 5 francs, — dont moitié revient au B. C. et moitié au Bureau du Comité auquel appartient l'adhérent.

Les cotisations sont perçues par les soins du trésorier général qui délivre, à titre de quittance, une carte nominative, qui sert, pour l'année en cours, de carte d'entrée gratuite à toutes les réunions et fêtes organisées par l'Association.

Tout membre peut se libérer du paiement de la cotisation annuelle par un versement global de 200 francs et reçoit une carte de membre à vie.

ART. XIV. — Les présidents des Sections régionales du *Bleun-Brug* ainsi que le président du Bureau Central rendront compte, au cours du Congrès annuel, de l'emploi des ressources et de la propagande réalisée par leurs soins.

ART. XV. — L'exclusion peut être prononcée contre tout membre qui contrecarrerait publiquement les directives essentielles du B.-B. et leurs conséquences logiques. Le Bureau central et le bureau régional dont fait partie l'inculpé sont constitués juges en cette circonstance et leur décision prise à l'unanimité est sans appel.

ART. XVI. — Une retraite *fermée* annuelle est instituée pour les membres du B.-B. et leur amis. Elle se tiendra dans le centre choisi pour le Congrès annuel et aura lieu immédiatement avant.

ART. XVII. — L'Association se déclare étrangère à toute politique de parti.

ART. XVIII. — L'Association adhère, en principe, à la méthode d'action intitulée *cartel*, réalisant, sur un point précis, un accord momentané entre groupements bretons d'esprit différent.

ART. XIX. — La dissolution de l'Association ne pourra être prononcée que par le Bureau Central qui sera alors appelé à décider de la destination à donner au fonds social.

ART. XX. — Sauf initiative prise par le B. C., approuvée par les B. R. et ratifiée en Assemblée générale, nulle modification ne peut être apportée aux statuts du B.-B. que sur demande précise formulée par les 2/3 des membres du B.-B. Les modifications projetées seront mûre-

ment étudiées par les B. C. et B. R., dans l'intervalle de deux Congrès annuels. Leur décision prise à l'unanimité des voix sera promulguée au Congrès suivant par le président et sera sans appel.

ART. XXI. — Les présents statuts lus et approuvés en Assemblée générale à Guingamp, le 21 avril 1925, seront, conformément à l'article 2 de la loi du 1^{er} juillet 1901, déposés à la Préfecture du Finistère.

Membres du Bureau central:

Président: M. Y. Le Moal, Coadout;

Trésorier: M. Y. Drézen, rédacteur au *Courrier du Finistère*;

Secrétaire: M. J.-M. Perrot, Directeur du *Feiz ha Breiz*, Plouguerneau, Finistère.

Diouz ma weler er *Reolennou-ze*, ar *Bleun-Brug*, tra vreizad, en deus, war an dro, doare kristen ha doare laik, ha doare da *stourm ouz spered an dispac'h*.

Kristen eo, rak anzav a ra en e artiklou II, IX, XV, eo silvidigez pep den ar penn-ober brasa 'zo war an douar; — hag anzav a ra ez eus diou c'halloud er bed, hini an Iliz katolik ha hini ar broadeleziou (pe ar c'houarnamanchoù (art. III).

Laik eo ive, rak disklêrian a ra en deus eun dachenn d'ezan e-unan, (art. II) tachenn al labour vreizek; a hendall, renet eo ha renet e vo muioc'h-mui gant laiked, dre m'en em zavo en hon zouez, Bretoned hag a vo feal, war eun dro, d'ar feiz ha d'ar Vro.

Ar *Bleun-Brug* en em zav krenn a-eneb spered an *Dispac'h*, ha setu perak (art. VI) n'en deus ket digemeret ar votadeg. Sellit pelloc'h, avat, (art. XII), ha c'houi welo pegen brao eo kompouezet an traou, o vezan m'eo laket an « autorité », keit-ha-keit hag al « liberté »: izili ar bureoiou bihan hanvet gant re ar Bureo bras a zo lezet goude da labourat en o frankiz...

Kroui an hevelep spered etre an holl, setu petra a glasker ha goude, grit evel ma kavot mat.

An hevelep artikl a lavar, gwir eo, e *ranko* pep strolad sevel *Breuriez ar Brezoneg*, kaout eun *teatr* hag all...

Met ze zo memez tra evel pa lavarfed d'eun den yaouank o sevel tiegez war ar meaz: Red eo d'eoc'h kaout saoud, karr, kezek hag alar...

Ezomm ebet da ziskouez d'eoc'h eo ar *Bleun-Brug* tra *Vreizad*. Biskoaz n'eo bet tamallet diouz an tu-ze.

Rebechou all hon deus klevet pe lennet hag eo da d'eomp disklêria breman.

Darn o devez aon na glask ar *Bleun-Brug* ober gaou ouz Bro-C'hall o rei re a don da *Vreiz*! Rei re a don da *Vreiz* a zo eta klask diliamma anezi, distarda he ereou? — Rei re a don da *Vreiz* a zo dibab he yez diouz hini Bro-C'hall, lakat deski anezi, rei tro d'he Soniou ha

d'he gizioù?... Breiz a zo, e kenver Bro-C'hall, pe he gouarnamant, henvel ouz eun danvad sammet gant ar bleiz; ha koulskoude, hervez Bretoned (?) a zo, arabad d'an danvad leuskel nag eur vlejadenn nag eur winkadenn met kentoc'h, ober allazik d'ar bleiz mat!

Er *Bleun-Brug*, den ebet na glask enebi a-benn-kaer ouz Bro-C'hall. An disparti a glaskomp diouti n'eo nemet an hini a glask an danvad diouz ar bleiz;... dal ma tilezo Bro-C'hall he natur bleiz, ni c'hall'o beva e peoc'h ganti, kenver-ouz-kenver dre ma vezimp keit ha keit.

Da c'hortoz, avat, ar bleiz a zalc'ho e grog ha ni a vezo peurdaget, mar ne ziskrapomp ket.

Kaeroc'h a ra ar *Bleun-Brug* : kroui eul lezenn hag a roio d'eomp, war eun dro, nerz d'en em jacha a-dre skilfoù ar bleiz ha nerz d'en em zével a-nevez-flamm.

Me gred eman ar steuenn anezi er Reolennoù moulet aman. Goût ouzon e c'hell beza, hag ez eus, kevredigezioù, kelaouennoù hag a glask, a-ziavêz da bep kredenn politik ha relijius, rei da anaout dre holl, e Breiz, ar menoz broadel. Goude, emezint, pa vo anavezet gant an holl e vo dibabet etouez ar c'hredennoù all. (1)

Ni 'gred d'eomp eo hounnez eun dezenn douellus, eun tamm henvel ouz an hini a ziwanas gwechall e spered « Jean-Jacques », tad an « Emile ». — Muioc'h a zroug a deufe ac'hano eget a vad; betek pa zo en hon touez tud a gredenn dishenvel, ra glaskint Breiz pep hini diouz e du: meur a boent a zo hag e c'heller holl en em glevet warno.

Nemet eun dra a c'hoarvez; ar menoz broadel a zo diank abaoe keit 'so ma kaver mil abeg er re a zav da zifenn hor gwirioù a-viskoaz: « *Régionaliste, toujours ; séparatiste, jamais!* » eme an Aô. Trémintin, hon depute (2).

Ni a lavar aman: *Régionaliste, jamais ; nationaliste, toujours !* — Perak? Abalamour buhez Breiz ne dle ket en em veska gant buhez Bro-C'hall...

Ar pezh a hanver Stadoù « modernes », daoust ha gwellaenn a deu d'o heul? Ha bezan int eur wellaenn anezo o-unan? Goût ouzomp int ganet diouz « la désintégration des petites patries » (3) hag e teuont, a damm da damm, da laza pep spered gouenn. (4) « Seveni », en doare-ze, a zo mouga ar vuhez. Ar broadeleziou miret en o frankiz hag unanet dre an Iliz katolik, setu eno pal ar sevenadurez.

(1) Gwelit: *Le Nationalisme breton. Aperçu doctrinal.* — Editions Breeiz Alao. Prix: 1 franc. Eul leorig hag a za ennan kalz a wirionezioù, a bouez bras. Nemet ec'h en em zispartiomp diouz an oberour war ar poent-man, dreist-holl.

(2) Cf. *Péroisse bretonne*. Avril 1925, p. 4.

(3) Cf. *Essai sur la question bretonne*, p. 21 (Don Sturzo).

(4) Cf. *Essai sur la question bretonne*, p. 21-22 (Mgr Julien).

Arabad kredi eta na rei da gredi penôs « *nationalisme* » a dalv « *séparatisme* » (1). Broadeleziou dishenvel a c'hall bevan unanet, gant ma ne glasko ket an eil noazout ouz eben.

Setu ar pezh a gaver e *Reolennoù ar Bleun-Brug*: neventi, a dra zur, hag eun doare adnevezet da zellet, n'eo ket hepken ouz stad hon bro ha d'e wellat, met ive ouz stad ar bed ha d'e wellat.

Menez ar *Bleun-Brug* a denn d'ar pezh en em gave en Europ arôk ma oa deut spered pagan ar « Renaissance » d'en em zila er politik hag en holl lezennou: an Iliz a vage lealded ha karante etre ar pobloù; d'ezo da veva, a hendall pep hini hervez e spered, en e frankiz. Hennes eo an Urz. Er Ouenn, gant ar Relijion, eno eman man-menn pep sevenadurez.

E. A. M.

(1) Petra 'ta eo eur « *régionaliste* », eur *nationaliste*, eur *séparatiste*? Me gred an hini a rann istor Breiz e diou lodenn, — arôk 1491 hag adalek 1491, — hag a lavar: al lodenn gentan na gont ket ken, a zo « *régionaliste* », — an hini a zell ouz al lodenn gentan hepken, a zo eur « *séparatiste* »; — an hini a zell outo o-diou a zo eun « *nationaliste* ». Bez ez eus c'hoaz ha ne zellont ouz istor Breiz nemet abaoe 1789. Ar re-ze 'zo politikerien, pe, kentoc'h, dispac'herien, n'o deus gouenn ebet ken.

Breiziz,

Ma ne fell ket d'eoc'h e vefe laeret ho madou ha gopr ho labour da larda divroïdi divez;

Ma ne fell ket d'eoc'h beza kaset d'ar Brezel evel pao-tred du, melen pe ruz e lec'h tud re zigalon da zifenn o mamm-vro;

Ma ne fell ket d'eoc'h e vefe ho feiz, ho yez, ho pro flastret dindan an treid ha goapeet gand eun torrad genaoueien;

M'ho peus c'hoant da zigabestra ho feiz hag ho pro horjeldet a bep tu;

M'ho peus c'hoant da jacha Breiz diouz ar vreinadurez ha d'he adsavel lugernus ha kaer, skoazellet gant ar Feiz;

Deut holl d'ar BLEUN-BRUG!

Kasit ho skodenn — 10 lur ar bloaz — da Y. Drezen, 4, rue du Château, Brest. C/C. 6238, Rennes.

Petra vezo gwelet e Gwengamp gant goueliou ar « Bleun-Brug »

Krogomp, ma karit, dre an ambrougadeg-veur pe « cortège historique ».

E Gwengamp, ar strollad savet ispisial 'vit ar goueliou en devo karg da ingali pep tra e kement hag a zell ouz al lodenn-man.

Na lavaromp ket eo grêt ar pezh a verkomp aman war-lerc'h, met hon deus esperans vat d'her gwelet grêt ha grêt a-zoare, gant a skoazell a deu a bep tu d'ar *Bleun-Brug* hag a zigemer mat a vez grêt d'ar re a gomz en e hano.

Eun ambrougadeg-veur, seurt ma tere ouz ar *Bleun-Brug* ober, n'eo ket eur « cavalcade » eo. Bez 'ez eo 'vel eur gentel istor disklêriet d'an daoulagad dre berz an dôtenn gwirion ha beo a vez laket da bara dirazo, ken kaer ha ken splamm ha ma vez gallet.


E Gwengamp, e vo desrevelet *donedigez an dukez Anna* (1), gant marc'heien, floc'hed ha dimezelled ouz he heul.

Eun den, pa vez arru war an oad, a gar gwelet oc'h adtrement dirazan tôlennon e yaouankiz. D'eur bobl eo eun dra frealzus ivez gwelet dispaka dirazi he amzeriou kaer gwechall, rak mar ne zizro ket ken an amzer dremenet, ar spered anezan a c'hell beza adarre. Ar spered-zê eo an hini a renk adbeva e Breiz hag ober ac'hanomp evel gwechall, tud en o frankiz.

Ra deuiio tôlennou evelse da freskat hon sperejou goenvet, da zila enno c'hoant ar vubêz, ar c'hoant d'en em zizober diouz an holl sorc'hennou politik a zo 'vel ken lies a wabrenn o touella ac'hanomp, o rei d'eomp da gemer evel gwirioneziou ar pezh n'int nemet schlanchoù. Ar geriou goulloù hag a zo reiz 'o genou diouto gant ar falz-renerien a zo en hon fenn, geriou ha n'o deus ket o zalvoudegez e brezoneg, « *Progrès, Humanité, Egalité*, hag all, a goac'h hag a ya da van, pa bar dirazomp tôlennou an amzer goz hag e strink diouto kement a urz hag a wirionez.

Bez ez eus eur wirionez politik, met red eo he c'hlack en amzer gwechall, pa oa pep hini-en e renk, mistri hag a c'hourc'hemenne hep gwaska, sujidi hag a blege hep en em zizenori. An dukez Anna o tont da Wengamp a roio d'eomp eur gentel skouerius diwarbenn eur vro dalc'het war he zu, dre ar frankiz hag an urz.

(1) Gwelit er *C'horn-Boud*.



Plommen I.-V. Wir-Zibour

Cliché de la Bretagne touristique.

Da heul an dôlenn-ze, e vo grêt diouz diskouez ivez eun demskeud eus an tôliou ésa grêt abaoe eun toullad bloaveziou evit addigas adarre Breiz en eur stad henvef ouz he stad koz, n'eo ket rei d'ez i eun duk nag eur roue, met tenna sellou ar Vretoned warzu ar pezh a zalc'h eur vro, frankiz a-ziavéz, urz a-ziabarz.

Bez' e vo eta, ma karont selaou ouz hon fedenn, kan-naded eus ar c'hevredigeziou breizad o kerzet da heul an dukez Anna.

Mar bez krenv ar c'hân e Gwengamp, kanerien dre strollad, a lako hekleioiu koz kêr da zihuna, dre ma kerz-font dre ar ruiou.

D'achui e dro, an ambrougaded-veur a deui d'an teâtr elec'h ma vo danzeet eun dôlenn-all.

II. Teâtr

Pevar bez e brezoneg, (daou anezo n'int ket bet c'hoarriet biskoaz), a vo diskleriet e Gwengamp, d'an 8, 9 ha 10 a viz gwengolo. C'hoarierien Prat a zispako an daou gentan, *Braon merc'h ar barrouz*, gant an A. Bayon, hag *Ar Chiminaou*, gant Dirnador. C'hoarierien Boulvriak a zisplego an trede, *Kerenor*, gwelet dez lun-fask gant darn eus ar re a oa bet e gouel ar Mimbriag. C'hoarierien Benac'h a roio d'eomp da danva buhez *Santez Trifina*, gant an O. Joanno, person Benac'h, en doa roet d'eomp dija *Santez Jermana* ha *Janed d'Ark*.


Ar pezh kenta a zo eur fentigell eus ar re vraoan. Eur fichadenn, eur pezh divalo a blac'h hag a gav d'ez i bezan dreist d'ar re all dre m'eo gwisket e giz Paris, a zo tapet brao gant he mignounezad ha grêt d'ez i eur c'haouad vat a vez.

Ar Chiminaou a ziskouez d'eomp eur pôtr yaouank o-tizrei d'ar gêr en deus bet kuitaet gwechall war e bennad; nemet arôk m'eo digemeret en e di, ez eus grêt eun tamm kouêz warnan.

Kerenor a zo eun dôlenn eus amzer ar Re Unanet a ziskouez d'eomp trubuilhou daou den yaouank, poan d'ezo oc'h arruout d'en em gaout goude en em garout.

Santez Trifina a zo eur pezh steuennet kaer a-hed e dri arvest.

Staga a rer ennan gant buhez ar brinsez Trifina adalek ma teu Konomor d'he goulenn da bried; hag ac'hano, ken m'eo dibennet e glazennig Sebazi. Met an oberour en deus kresket c'hoaz ar strafilh a zav da heul eur blanedenn ken garo, en eur rei d'eomp da anaout doare an dud a oa wardro Trifina; diouz eun tu, tud ken fallakr ha, diouz an tu all tud ken leal ha ma c'heller da gaout. Eneou an dud-ze o'n em zizoloi dirazomp a ra eun dôlenn ken stra-



Perched I.-V. Wir-Zikour

Cl. Bretagne touristique.

filhus ha tôlenn ar vuhez c'haro he deus Trifina da ren epad tri arvest.

An *dukez Anna* ha *Trifina* oc'h en em gaout war leür-c'hoari an teâtr en em zaludo an eil eben. A dalvezo ar boan bezan klevet ha gwelet!...

Aman, pelloc'h, e kavoc'h pep seurt disklêriaduriou di-warbenn al lodennoù all eus ar gouel.

VIKTORIA KONAN A ZANT-LUK

Leanez e Retred Kemper
gillotinet e Paris d'an 21 a viz Gouere 1794

Er Retred

Goude beza bet aotre he zad, Viktoria, evel m'edo ar c'hiz neuze, a dremenas e ti he zud eur bloaz d'en em brepari evit beza digemeret e renk Dimezellet ar Retred. Muioc'h a bedennoù, a binijennou eget araok a reas c'hoaz er bloaz-ze, met laouen e veze evel kentoc'h. Studia a reas doun ar relijion, katekiz a reas d'ar vugale, hag e kenver ar beorien hag ar re glanv e tiskouezas muioc'h a garantez. Erfin, eskob Kemper, mignon ar Retred ha rener Viktoria, a verkas d'e nizez an eil a viz c'houevrer 1782 evit mont evit mat da di ar Retred.

Daelou c'houero a voe skuilhet e maner ar Bot. Ar gerent, ar zervicherien, ar beorien, an holl o doa keuz da Viktoria.

D'an eil a viz c'houevrer, mintin mat, ar vamm, gand he feder merc'h, a gerze da di ar Retred, e Kemper. An ti-ze a zo breman ennan kazarn an archerien, war blasenn La Tour d'Auvergne.

O welet mogerioù an ti, Viktoria a lavaras ar c'homzourman: « Aze e vezin evid ato, en ti-ze eo e vevin, rak c'hoanteet em eus beva ennan. »

Ar vamm a lavaras da Zuperioez ar Retred: « Dont a ran, Dimezell, da lakat etre ho taouarn an tenzor priziusa an eus er bed. »

Eskob Kemper a oa en em gavet ive. Edo er chapel, gwisket evit lavaret an oferenn. Ober a reas eur brezegenn gaer war ar gouel: ar Werc'hez Vari o kinnig he mab en Templ. Eur vamm all hirio a ginnige da Zoue ar pez a gare ar muia war an douar. Rei a reas da Viktoria he gwiskamant santel, hag epad an oferenn, araog ar gommunion, an nizez a lennas ar bedenn d'en em vouestla da Zoue.

Dioc'htu, hep poan ebet, Viktoria a heulias penn da benn reolenn ar Retred. Nebeut amzer goude m'en em gavas, e voe eur retred vrezonek. Viktoria, o veza m'he doa studiet ar brezoneg, a c'hellas labourat epad ar retred-ze, ha mat meurbet.

Karet a rae ar bedenn, eur skouer oa evit dimezellet ar Retred, hag ar re-man a oa leun a zoujans hag a garantez eviti.

Evelato e teuas d'ezi enkreuz ha poan-spered. Daoust m'en em blije er Retred, e c'houlenne outi he-unan ha

n'oa ket gwelloc'h mont en eun urz strisoc'h, urz Leanezed Karmez pe eun all. Hag evid anaout skleroc'h c'hoant Doue, e reas eur retred. Kaout a reas ar peoc'h, hag e lavaras e chomfe beteg ar fin en ti m'oa deuet ennan.

Kendalc'her a reas eta da bedi, d'ober pinijenn, da lenn leorioù santel, da labourat gand an dimezellet all epad ar retrejou-c'hallek pe vrezonek. Prepari mat a rae bep tro ar prezegennoù hag an alioù he doa da rey.

Alies awalc'h he dezo d'ober katekiz d'ar vugale a dlje kommunia evid ar wech kenta. En amzer-ze ar vugale ne reant ket o Fask kenta holl a-unan evel er c'hantved diveza e Frans met pa vezent bet desket awalc'h. Hag e Kemper ar gerent a zigase alies o bugale da zimezellet ar Retred evit paurzeski o c'hatekiz. Viktoria a veze laouen meurbet pa veze karget evelse eus ar vugale. Chomet ez eus eur c'hayer skrivet ganti, hag a zo warnan goulennour d'ober d'ar vugale hag ar responchou, hag e weler-pegement a aked a lake evit keleñn ar vugale hag ober d'ezo karet Jesus-Krist.

Ma c'hoantaer breman gouzout e pelec'h e kave nerzkalon evid ober ato he labour laouen hag eürus, n'ez eus nemet lenn al linenou-man skrivet ganti, hag a ziskouez pegement e poanie da denna eus he c'halon an holl ble-gou fall evit beza bemdez muioc'h mui da Zoue...

« Me fell d'in digemeret laouen digant Doue ar yec'hed, ar c'hlenved, an eur vad, an dismegans, ar blijadur, an enkreuz, o kinnig pep tra da Galon Zakr Jesus.

» Labourat a rin gant muioc'h a aked d'en em zantel-lât, rak Doue a fell d'ezan kement-se, ha da veza habask, izel a galon.

» Ober a rin pinijenn, diskouez a rin karantez d'an nesa, el labour.

» Karout a rin senti, evit klask beza henvel ouz va Doue a zo bet sentus beteg ar maro.

» Poania a rin da zonzal e Doue, da zonzal e wel kement a ran; pa zantin va c'halon klouar er bedenn, e stourmin ouzin va-unan, evit ma vo birvidik va fedennoù.

» O va Doue, me a c'hoanta ar pez a c'hoantait, o veza m'her c'hoantait, en amzer hag evel ma plijo ganeoc'h.

» O va Doue, gant sikour ho kras, oun gouest da zigemeret pep tra diganeoc'h. Petra zigasot d'in? Poanioù a gorf? Poanioù a spered? Gouzout a rit, gwelloc'h egedon, petra zo talvoudus evidon. Ra vo gret ho polontez, ha nann va hini.

» Ya, va Doue, prest oun da zigemeret pep tra diganeoc'h, ar vuhez, ar maro, ar pez a blijo d'eoc'h. Roit d'in hepken nerz ha pasianted. Holl oun d'eoc'h ha da viken. »

Setu aze penos e ra an eneou santel, trey alies o spered ouz Doue, kinnig d'ezan o c'halon, o c'harantez,

kement o deus, klask en em zizober gwella ma c'hellont eus o zechou, o flegou fall. Al labour-ze, n'e ket en eun deiz e c'heller hen ober, ret eo stourm pell amzer hag epad ar vuhez penn da benn koulz lavaret.

An Dispac'h bras (Ar Revolution)

An *dispac'h bras* (Ar Revolution). Dont a reas en eun taol war ar Frans eur barr arne spontus hag a reas freuz ha dismantr evel n'oa bet morse. Tud dizakr en em gemeras ouz ar relijion hag a c'hoanteas diskar an Iliz en hor bro. En em gemeret a rajont ouz ministred Jesus-Krist, ouz ar veleien al Leaned ha Leanezed.

An Aotrou Konan a Zant Luk, eskob Kemper, ne welas nemed ar penn kenta eus ar Revolution. Awalc'h evelato a welas evit gouzout menozioù an dud a glaske ar freuz en hor bro. Gwelet a reas edont o klask regi mantell an Iliz ha distaga Iliz Frans diouz ar Pab, diouz Roum; koundaoni a reas a votez uhel an nevezentioù a veze displeget e pep lec'h, hag e lavare evelhen: « Ra vo lammet diganeomp kement hon eus, ra vezimp koundaonet da veva diwar bara ha dour. Meuleudi a ganimp da Zoue. Ne c'hellimp ket mui sikour ar beorien. Met ar feiz a zal-c'himp. Ret eo evid ar feiz rey ar vuhez, ma z'eus ezomm. Goulennit gras ar verzerenti. Goulennit ma vo Hor Zalver va sklerijenn, va nerz, rak ne dlean ket beza eur c'hi mut. »

Pa voe goulennet digantan toui d'ar 14 a viz gouere 1790, ne fellas ket d'ezan. Ne fellas ket d'ezan ken nebeut kana an *Te Deum* en e iliz-veur en enor d'ar banniell digaset eus a Baris gand ar zoudarded.

D'ar 26 a viz gwengolo, pa voe diskouezet d'ezan al lezenn nevez gret e Paris diwarbenn traou an Iliz, lezenn sinet siouas! gand ar Roue, an eskob a lavaras: « Setu aze evidomp taol ar maro. Sevel a rankan va mouez eneb al lezenn-ze, va dever eo. »


E zekretour, o welet anezan o kemeret e bluenn da skriva, a lavaras d'ezan: « Aotrou'n eskob, c'houi a zo skuiñ ha klanv. Me a skrivo evidoc'h ar c'homzou a lavarot d'in. » — « Mat, eme an eskob d'e zekretour, an aotrou Boissière, gouzout a rit e pe lec'h eman ar skrid am eus preparet. Lakit anezan, ger evit ger, war baper brao. » Ar zekretour a zentas hag a reas evel m'ea bet lavaret d'ezan.

Eun nebeut derveziou goude, d'an 30 a viz gwengolo 1790, an aotrou'n eskob a varvas.

E nizez a vezo henvel outan. Ne blego morse ken nebeut. Ato e talc'ho mat d'ar relijion gatolik, ato ez aio dre an hent eun, ha gand ar vrasa levenez ha nerz-kalon e shuilho he gwad e Paris war ar c'hillohotin.

Ti ar Retred sarret ha laeret

Pa zeuas da Gemper an eskob nevez Expilly, eskob touer, hanvet gand ar voterien ha mann gand ar Pab, ez eas d'ar Retred hag e lavaras d'an Dimezelled e karfe gwelet retrejou evel kentoc'h, hag ec'h en em ginnige da zont, gand e viket vras, d'ober prezegennou. Met respontet e voe d'ezan: « Aotrou, n'hon eus ezomm ebet ac'hanoc'h. »



Skapular graet sant Viktoria

An eskob en em dennas, mezek. Met nebeut amzer goude, an Dimezelled a voe digaset urz d'ezo da doui ive, da ziskleria e sentent gant lealded ouz al lezennou nevez. Respont a rajont nann.

D'an 2 a viz gouere 1791 e voe lavaret d'ezo e tlient toui, pe e vijent kaset kuit abenn eiz dervez ha lakêt ar ziel war gement o doa.

An Dimezelled, pa voe goulennet outo toui, a oa holl e kichen o Zuperiorez, nemet Viktoria a oa bet gwall glanv gand an napez (ar vrec'h), ha n'oa ket c'hoaz pare awalc'h. Holl e rojont o zinatur da ziskleria ne felle ket d'ezo toui.

« Hag an hini glanv? », a c'houlennas ar c'hommiser.

— » Eveldomp e sonj ive ». Met n'oa ket awalc'h evitan ar c'homzou-ze, ha gant ar Zuperiorez ez eas betek kampr Viktoria. Houman a lavaras gand eur vouez krenv. « Morse ne douin, ha sina a rafen gant va gwad, ma ve ret. »

D'ar 7 a viz gouere e teuas tud da verka war baper kement a oa e ti ar Retred; ha souezet o wellet pegement a draou a gavent, e lavarjont d'an Dimezelled: « Hag e tilezit an holl binvidigez-ze! »

Da c'houde e voe laket ar ziell. Da bep hini eus an Dimezelled e voe roet eul loa hag eur fourchetez arc'hant, eur gwele, diou liser, eun daol vihan, eur gador.

Petra a voe gret eus an traou all? Gwerzet e voent ha roet d'an hini a ginnige ar brasa priz.

Evelse eman ar c'hiz, evel a ouezer, e bro Frans, pa vez an dud fall e penn ar vro. O slijadur eo kregi e mado hag e tiez ar re all.

Kaset er meaz eus o zi, Dimezelled ar Retred e voe digemeret gant Leanezed ar C'halvar a oa o leandi er meaz a gear, e kichen Penhars, el lec'h m'eo bet ar c'hloerdi bras epad ar c'hantved diveza. Epad pevarzek miz e chomjont eno. Leanezed ar C'halvar a rannas gantokement o doa ha gand al Leanezed all a ziredas ive d'o zi. A-unan e pedent hag e reant pinijenn evid o bro gez a welent en eur stad truezus.

Epad m'edo er C'halvar, Viktoria, evel m'he doa gret c'hoaz e maner ar Bot, a reas skapularou, warno skeudenn Kalon Zakr Jesus. Eun deiz an aotrou Laroque-Kermaria, medesin, a voe galvet d'ar C'halvar da gaout eur glanvourez. O tremen e kichen kambr Viktoria a oa digor, e welas skapularou. Anaout mat a rae he zud, hag hen eo en doa louzaouet anezi p'oa bet klanv. Viktoria a oa leun a anaoudegez evitan hag a ginnigas d'ezan eur skapular: « Gant plijadur e kemeran anezan, eme an aotrou Laroque. Met roit eun all d'in da gas d'am breur Viktor a zo o ren eur vag e Lorient. » Viktoria a ro eur skapular en eur lavaret d'an aotrou Laroque pedi e vreur da gaout fizians er skapular a denno warnan bennoz Doue.

Ar skapular a voe kaset d'ar breur nebeut amzer goude.

Eun dra dister, ha n'eo ket gwir? Mat, evid an dra-ze, evid ar skapularou-ze, an daou vreur Laroque-Tremaria a vo tamallet da veza enebourien ar vro, a-unan gant tud ar Vande, ha mervel a raint war ar c'hilhotin.

Ar rebech brasa gret da Viktoria a vo ive ar skapularou. Tud ar Vande, en em zavet eneb an dispac'herien, a zounge, evid en em anaout, skeudenn ar Galoun Zakr. Fouquier-Tinville, tamaller bras Paris, a lavaro edo Viktoria a-unan gant tud ar Vande, e kase d'ezo skeudennou ar Galon-Zakr, hag an digarez-ze dreist-holl a voe kavet evid he dibenna.

J. U.

ROUE AL LAZ

(Kendalc'h)



Kannad ar Rouari, an Tokous bras, a oa fellet gantan chom e kichen Kevareg.

Divinet ho po, marvad, penôs e oa en em gavet e milin Traon-ar-Run? An tennou, vel just, o doa trouc'het e gousked d'ezan; hogen, ne zaleas ket, pa ouezas e oa krog an abadenn, da zisken da gât e gensorted. Pierig a dreuzas ar stêr war choug e gamarad, henvel ouz ar Mabig Jezus war diuskoka Sant Kristof ar C'hrenv; ac'hane en em gavjont prim ha prim gant ar re all. An Tokous bras, o teurel evez ouz penn al letanant e lein an dôenn, a lakas en e zonz mont d'e gerc'hat... Dont a reas gantan, evel hon deus gwelet, skeul hag all...

Ar c'hloareg a oa chomet ivez gant Kevareg; ha Pierig war e zeuliou.

Al letanant en doa hastet kregi en e gleze. Ober a reas eul lamm a-drenv hag e chomas difinv, beg e laonenn bantet warzu Kevareg ha prest da skei. Heman, paket e vorzed ha harpet war e fuzuilh, n'en doa nemet eur vrec'h d'en em ganna. Met ar gounnar spontus a oa en e greiz a oa trec'h d'ar boan; netra n'helle harz outan da gastiza muntrer e vamm.

Eur gammed a reas war arôk hag ar vaz a yudas, en eur gilwidenni, evel eul luc'heden en êr. Koueza a reas hep tizout netra, met ar c'hleze ken prim all skoet a feuk a dreuzas porpan Kevareg hag a gignas e gostez. Al letanant a reas eur mousc'hoarz yud hag a lammas adarre a-drenv. Ar c'hloareg en doa chenchet liou hag an Tokous bras a dôle sellou tenval war an ofiser glas. Pierig a oa dilontet e zaoulagad ha demdigor e c'henou gantan...

Kevareg n'en doa ket santet an tôl; ne reas e gounnar nemet kreski o wellet en doa skoet gwenn; adarre, e bennbaz a droas en êr hag egile a leuskas eur c'harmadenn; e gleze a ziflipas digantan hag e vrec'h morzet gant an tôl a gouezas ouz e gostez. Met ken prim ha tra, e oa adkrog ennan gant e zorn kleiz; Kevareg n'hellas ket arruout e koulz da zével e vaz war benn e enebour daoubleget; adkaout a reas anezan 'n e zav dirazan, ar fulor hag ar boan o krika e zremm. Neuze ar vaz hag ar c'hleze a yeas endro hep paouez.

Kevareg a oa eur mestr da c'hoari e venveg; met e c'harr a vanke d'ezan; n'helle ket kas e gorf da heul e vrec'h. Egile en doa e vrec'h dehou e-pign ouz outan. Hini anezo ne zeblante kaout an distera poan, trec'het ma oant o daou gant ar zec'hed an eil d'egile. Ar c'hrog a oa

spontus: unan, ken bras e c'halloud, ken pounner e daol; egile ken skanv, ken gwen, ken lemm.

Ar vaz a zalc'h da skei, da drei ha da franwal; ma tizelaonenn ar c'hleze, e vefe torret heman evel gwer... Ar vaz a glask ar c'hleze; beg ar c'hleze a glask kalon Kevareg.

— Ah! diaoul!

Ar ger-ze zo tec'het diouz genaou an Tokous bras. Gouli Kevareg a zo ad-digoret en e vorzed hag ar gwad a ruilh war e votez hag a ziver war ar geot endro d'ezan; n'hellobiken harz betek ken n'en devo bet an trec'h. Santout a reio souden e nerz o tec'hel; ar c'hrena a grogo ennan, ha neuze!...

— Ah! diaoul! eme an Tokous bras, eun eil gwech...

An ofiser glas a zo war evez d'asuri e daol ha da skei da lazan; netra d'ober nemet gortoz eur pennadig c'hoaz... Ar c'hloareg a zo ken drouk-livet hag e vreur-mager. Daoust ha gellout a ra lezel anezan da vervel hep difenn dirak e zaoulagad?...

An Tokous a zo 'vel eun tigr prest da lammet war e breiz...

Aiou! Setu Kevareg kouezet war eur c'hlin, dialan ha disliou. An ofiser glas a framn warnan, beg e gleze troet ouz e galon. Met arôk m'en deus skoet, Pierig a zo 'n em dôlet etrezan ha Kevareg ha stlapet en e zaoulagad, pe-tra? eun dornad bleud eus ar bisac'h a oa gantan bepred war e skoa. An ofiser, dallet pik, a zalc'ha eun tól a-dro-jouiz hag ar c'hleze a gav war e hent... brec'h Pierig. Ar pôtrig a leusk eur glemmadenn, hag a gouez war e zaoulin; e wad a red puilh hag en em lak da ouelan. Hogen, eur momed goude, an ofiser a zo etre daouarn an Tokous bras; heman en deus kroget ennan dre e gein ha dre e ziouhar, savet anezan en ér hag a-bouez peder pe bemp kammed, e stlap anezan da greiz ar stêr...

Pe fall pe vat en deus grêt? Gouezet e vezo dizale. Davihana, e c'heller breman ober wardro d'ar re c'hloazet, dougen anezo a-gostez, ha louzaoui d'ezo o gouliou.

Paour kêz Pierig! An daerou a deu en daoulagad ar c'hloareg o welet gwad ar bugel o ruzia ar geot dindann...

Ha mar teufe ar Re C'hlas da c'houzout pegen dister ha disteraet c'hoaz eo ar vandenn zo dirazo! Hen gouezet o deus, 'm eus aon... Setu eun tenn o strakal ken ma tregern an holl hekleoioù tro-dro. Kerkent e teu re all; an Tokous bras hag ar c'hloareg a zell endro d'ezo nec'het.

— It ha va lezit! eme Gevareg. Me a c'halvo mar hon devez ezomm sikour!

Kregi a ra er bugel hag ec'h azez anezan en e gichen.

— Bez dinec'h, Pierig, emezan. Ar pôtrig mat ma 'z out n'arruo droug ebet gantan keit vin me beo!

An tennou a zo paouezet. Breman eo youc'hadennou a glever. Marvat, ez eus savet krog du-hont, dirag ar vilin. Ar c'hloareg a red; nemet an Tokous a zo pell en e rôk.

An daou Dhepot ha Riwall a oa tont a-dreñv, ouz en em zifenn koulskoude, herrda m'hellent, ouz ar pevarzek pe bemzek soudard glas a oa kas tapout anezo prizounerien. An daou Dhepot a rebarbe start en tu klei; met Riwall a oa e-unan en tu dehou...

— It war zikour hen-hont! eme an Tokous d'ar c'hloareg; me a ya d'ezo dre an tu dreñv.

Ar vandenn a oa deut ermêz er porz. An Tokous a redas dre drek al lojeiz, en e daoudort, e fuzuilh etre e zaouarn. Sellet a rae endro d'ezan ha setu ma kouezas e zaoulagad war eur pikol horz, eur pez ivin ruz hag a zervije da bilat lanvaz.

Dastum a reas anezan dindan e vrec'h... Kerkent e loskas e denn fuzuilh e choug ar Re C'hlas ha d'ar red warno neuze, e horz en ér. Kentan hini a ziroas warnan, — hen anaout a reas raktal, gleb-dour e zilhad, — eo al letanant bihan. Urz a roas heman d'e dud da zizrei, met dija an Tokous en doa diskaret tri. Al letanant a frammas warnan, eur c'hleze 'n e zorn kleiz. An Tokous a reas eun hanter-tro hag a zistagas gantan eun taôl gwink, diwar hed e zivesker hir, ma kouezas ar pôtr d'an douar 'vel eur freilh. An taolioù horz a bakas eno neuze ar Re C'hlas! Kannad ar Rouari a oa eur maout a c'hourenner: lammet a rê, asupa, plega war e zivesker ha skei gant e dreid koulz ha gant e zaouarn. E bevar gonsort en em zifrete ive diouz o gwella. An taolioù a goueze puilh, nemet stankoc'h, diouz tu hon mignoned; an horz ne baouez ket da zavel ha da gouezan; ouz an Tokous n'helle den pega; diharpa a rê an holl gant e horz pe gant e dreid. Ar blijadur en doe, en eur vont hag en eur dont, da darc'ha eun tól, da frika d'ezan e benn, gant al letanant bihan divaoutet hag a oa o klask adsevel. En dro-ze, ar Re C'hlas hag a c'helle c'hoaz bale a dôlas o armou hag a glaskas o zreid. An Tokous, hep dale pelloc'h, a zammas neuze daou varo hag o stlapas er bie; an daou Dhepot a reas eveltan; Riwall hag ar c'hloareg o doa paket gloaz hag a zelle anezo oc'h ober.

Al letanant bihan ne zihunje ket ken e dour ar stêr; arôk kas anezan warlerc'h e genseurted, an Tokous a gasas anezan da ziskouez da Gevareg:

— An dro genta, emezan, eo deut ermêz eus an dour; an dro-man ne deui ket.

E oa kas staga eur men ouz e c'houzoug; met ar c'hloareg ha Kevareg n'e houzanvjont ket e vije graet kementse; ar c'hloareg a lavaras:

— Trugarekaomp an Otrou Doue ha pedomp evit ar re varo!

— Pelec'h eman Per? eme Gevareg, o sevel gant poan war e dreid.

Pierig a oa krog e dorn e vignon an Tokous hag a boke d'ezan kalonek.

Den na respontas.

— Er vilin ho po keloul! It ha gwelit petra zo c'hoarvezet.

Ar re c'hloazet a azezas da c'hortoz.

Eur pennad goude, ar Miliner hag e wreg a zigasas kelou e oa lazet Per. Ne voe ket diës e gaout, 'n e vrusk war ar c'hleun, 'vel eun den kousket. Divizet e voe e vije kaset da Gerbeniti ha beziet e kichen mamm Kevareg.

Unan bennak hag a voe kavet beo, a drugare Doue, eo an ôtrou kure, bet serret er marchosi gant ar Re C'hlas ha morailhet warnan, da c'hedal mac'h aje ganto betek kêr Lanuon. Klevet en doa trouz ar gann ha pa ouezas e pe tu e oa ét an trec'h, e c'halvas zikour a galon vat.

Goude ar c'holl hag ar gloaziu paket, an holl a vije bet evurus, nemet e sonjent:

— Ar Re C'hlas a deuo aman varc'hoaz!

Neuze Kevareg a gomzas:

— Me 'meus eun ti goullo, emezan, ha ne chomin ket ennan. M'hen kinnig d'it, miliner, 'vit da wreg ha da vugale. Te a deuo ganeomp da en em ganna, evit o difenn ha gounit d'it ha d'ezo ar c'hras da veva c'hoaz e milin Traon-ar-Rhun...

Ne chomjor tamm ebet da dortal: bleud, ed, bara, kig sall, kement a vad a oa er vilin a voe karget en eur c'harr; korf an hini marò a voe laket en eun all hag ar re ne oant ket evit kerzet; Turwall, Kevareg, Pierig, ar c'hloareg, a bignas gantan, fuzuilhou en o c'hichen.

Hastet e voe mont war araok, keit ma oad sur ne oa ket a enebourien dre an henchou. Koulskoude, an daou Dhepot a voe karget da deurel evez en o rôk hag an Tokous bras a chomas war lerc'h.

— Doue d'hon reno! eme an ôtrou kure.

Ar miliner, krog e penn an aneval kentan a dôlas neuze eur zell truezus war e di hag ar Vamm, eur bugel war he brec'h, daou all ouz he c'hostez, a droas he fenn, an daerou o ruilhal war he dioujed.

Hag ec'h ejont en hent, e bolontez Doue.

D. N. D.

Bretoned, ma ne c'hellit ket tremen tri dervez dioc'htu e Gwengamp, gant goueliou ar Bleun-Brug e miz gwengolo a zeu, en em gavit eno, da vihanan, a-benn an 10, da welet an dukez Anna o tont da Wengamp evel ma oa bet e gwirionez breman. 'z eus 420 vloaz!

Diveza gwerziou eur barz yaouank ⁽¹⁾

Avel Vreiz

Klas - ket o deus dis - pa - c'hc - rien Dis -
tru - ja da Vreiz penn-da-benn Hé feiz, hé yez; O reuz en em led
tro - war - dro, Hag ar gwir Vrei-zis en hor bro, Bre - man 'zo rouez.

Kasket o deus dispac'herien
Distruja da Vreiz penn-da-benn
He feiz, he yez;
O reuz en em led tro-war-dro...
Hag ar gwir Vreizis penn-da-benn
Breman 'zo rouez!

Daoust d'o c'hounnar garo ha tenn,
Eun dra n'hellint kemma biken
E Breiz-Izel:
Biken ne gemmint en hor Breiz,
Eun dud fall hag an dud difeiz,
Mouez an Avel.

Ar barz, vit en em frealzi
Emesk an droug, ar falloni,
A gar klevet
Mouez an Avel a c'houez er vro
Hag a gomz brezoneg hirio
Evel bepred.

Avel Vreiz a zo koz meurbet
Ha 'lies he deus peurredet
Arvor, Argoad;
Dastumet he deus ha miret
An holl drouziou ganti klevet
War he redad.

(1) *Setu aman pennadous eus al lizer a oa oc'h heul ar Gwerziou-ze:*

Guiscriff, 27-7-24.

MONSIEUR LE DIRECTEUR,

J'ai l'honneur de vous adresser en vue du Bleun-Brug quelques poésies. Je n'ai pas l'intention d'emporter le « maout » mais je tiens à montrer que même au fond de la Cornouaille il se trouve encore des prêtres pour s'intéresser à la langue bretonne.

... Jeune prêtre condamné à l'inactivité par la maladie, je n'aurai pas le plaisir d'aller jouir des fêtes du Bleun-Brug; depuis quelques mois je suis presque au repos absolu. Si jamais le bon Dieu m'accorde une santé plus robuste, je compte bien étudier plus à fond notre belle langue que je ne connais jusqu'ici que très imparfaitement, et m'intéresser de façon plus active à la question bretonne.

Louis NIHUELLOU, prêtre

Klevet he deus meuez an Dronized
Er c'hoajou doun gwechall hédet
E kreiz an noz;

Ha youc'hadennou ar Getted
O vonet d'ar brezel, renet
Gant eur barz koz.

Klevet he deus, dindan al loar,
Korriganed gant o safar
El lanneier;

Kannerezed gant o golvez
O skei hag o skei hep paouez
E tal ar ster.

Klevet he deus prezegennou
Ar Zent hag o deus d'hon Tadou
Desket pedi;

Pedennou ar venec'h santel
O deus hadet an Aviel
En hor bro-ni.

Klevet he deus tud leun a feiz
Oc'h ober gwechall o zro-Vreiz
Gant levenez,

Hag hirie c'hoaz o pardona
Er Folgoat, e Santez-Anna
Gant trugarez.

Klevet he deus klemmou mantrus
An Anaon oc'h ober, sentus,
O finijenn,

O ouela epad ar miz du,
O klask aluzen, a bep tu,
Eus eur bedenn.

Klevet he deus en eurejou
Son ar bombard hag ar biniou,
Skiltrus, laouen;

Mouez ar bugel war ar menez
O kana 'vit e « garantez »
Eur ganaouenn.

D'ar Vreiz hag o deus tec'het,
Gant divroidi milliget,
Pell diouz ar Vro,
Kasit gant ho mouez venniget.
Ha c'houezit stard en o spered
C'hoant an distro!

L. NIHUELLOU,
beleg eus a Wiscriff.

Klevet he deus trouz ar mor bras,
Soroc'h ar ster, hiboud ar waz
Dre ar draonienn...

Kan an euned e kreiz ar c'hoad,
Mouez al loened o vusellat
El lann melen.

Klevet he deus, trist pe zeder,
Ar moueziou holl e peb amzer
Hag e pep lec'h...

Ha biken n'ankoua netra 'bet
Eus ar pezh he deus bet klevet
Gwechall pe dec'h.

Rak-se da neb a oar selaou
Avel Vreiz a lar kalz a draou
En eur dremen;

An trouzou gantan dastumet
'Zo 'darre heb eil fro c'houezet
E skouarn an den.

An Avel a youc'h hag a yud,
A ra prezegennou d'an dud,
A bed ivez;

An Avel a gan, a c'houitell,
A hirvoud 'lies hag a ouel
Leun a druez.

An niver, siouaz! n'eo ket bras
Eur ar re 'glev an Avel c'hoaz
E Breiz-Izel!

Red eo kaout skouarn eur gwir Vreiz
Hag e galon 'vit kompren mat
Mouez an Avel.


C'houezit, Avel, c'houezit dalc'hmat
C'houezit en Arvor, en Argoad,
E pep mare;

Ha 'dihunit en holl Vreiziz
Vid ar Vro 'vid an Iliz,
Gwir garante.

Poltred ar Jikolodenn

Kanaouenn goapaüs
war gizioù nevez ar Jikolodenned yaouank


Ton : AL LEVIER (BARZAZ-BREIZ).



Se - tu a - man em c'ha-naou-enn, Se - tu a - man em



c'ha-naou-enn, gwir bol - tred ar Ji - ko - lo - denn, ar Ji - ko - lo -



denn 'zo eur ver-c'ho-denn! Ar Ji - ko - lo-denn! A zo eur gwir ver-c'ho-denn!

I

Setu aman em c'hanaouenn (2 wech).
Gwir boltred ar jikolodenn,
Ar Jikolodenn! zo eur verc'hodenn!
Ar Jikolodenn! a zo eur gwir verc'hodenn.

II

Gwisket hep chal e ve laret (2 w.) —
Eur c'houil dero diaskellet
Ar Jikolodenn! hep chal ebet ken,
Ar Jikolodenn! nag iskisa merc'hodenn!

III

Gand eur jakedenn divallo (2 w.)
Eo henvel ouz eur bec'h kolo.
Ar Jikolodenn! gant he jakedenn
Ar Jikolodenn a zo eur gwir verc'hodenn.

IV

Dougen 'ra lostenn hag hiviz (2 w.)
Evel m'her gra felpou Pariz.
Ar Jikolodenn! gwelit he lostenn!
Ar Jikolodenn 'zoug lostenn eur verc'hodenn.

V

He leroù 'zo 'vel ma welit (2 w.)
Ken tano ha gwiad kevnid.
Ar Jikolodenn, gant he leroù gwenn
He deus trefid eur verc'hodenn.

VI

Pegen souezus he boutou (2 w.)
Savet uhel war o seuliou.
Ar Jikolodenn! eus an treid d'ar penn
Ar Jikolodenn! nag iskisa merc'hodenn.

VII

Gant manegou seiz pe voulouz (2 w.)
E c'holo he diou c'holvaz rouz
Ar Jikolodenn! gant manegou gwenn
Ar Jikolodenn! he deus daouarn merc'hodenn.

VIII

He bleo 'zo hir ha rodellet (2 w.)
'Vel ar glan war gein an denved
Ar Jikolodenn! sellit ouz he fenn.
Ar Jikolodenn! he deus penn eur vere'hodenn!

IX

Liou ruz 'zo war he muzellou (2 w.)
Ha bleud gwenn kann war he jodou.
Ar Jikolodenn! gwelit 'ta he dremm.
Ar Jikolodenn! he deus dremm eur vere'hodenn.

X

Louzou c'houez vat he deus fuilhet (2 w.)
Vit trei warni fri ar bôtred.
Ar Jikolodenn! gant eur seurt higenn
Ar Jikolodenn! a zo eur gwall vere'hodenn.

XI

Allaz! allaz! paourkez merc'hed (2 w.)
Peur e tizroio ho spered?
O Jikolodenn! kollet peus ho penn.
O Jikolodenn! peus met skiant merc'hodenn!

XII

Ma 'z eus geier em c'hanaouenn (2 w.)
Me lesfe terri d'in va fenn.
O Jikolodenn! torrit 'ta va fenn.
O Jikolodenn! ma n'oc'h ket eur vere'hodenn!

Per Laurans.

Sant Nikolas ha sant Kasian

Gwelet e vez a-wechou kristenien o kaout abeg en o beleien, dre ma klaskont ober eun dra bennak all c'hoaz-ouspenn o labour-iliz; war o meno, ne dlefant sevel en o farreziou na kec'hou studi, nag asuransou, na strolladou c'hoarierien, na kazetennou; rei o sakramanchou d'andud, prezeg d'ezo da zul, pedi evito goude o maro ha mat pell a zo.

Ar gristenien a gomz evelse ne fennont ket liziri ar Pabed, anat eo, ha setu aman eur marvailh a gavomp en eul levr nevez (1) hag a zo dreist da stanka o genou d'andud abegus-ze.

**

Ha gouzout a rit-hu perag, er Rusi, e raer gouel sant Nikolas, diou wech er bloaz, hag hini sant Kasian pa vez bloavez bizeost hepken, da lavaret eo eur wech bep pevar bloaz?

Ez an d'hen diskleria d'eoc'h e berr gomzou. An daou zant-ze a oa o daou oc'h ober eur pennad bale pa en em gavas ganto eur chalboter a oa sac'het e garr en eun toull-lagenn ha n'oa ket evid e denna ken ac'hano; pec'hi a rae evel eun den daonet war e gezeg ha war an Aotrou Doue. Kasian, strafuilhet o klevet kement all, e lec'h diskenn er streat, a jomas war e gleuz, en aoun da louza ar vantell gaer a oa war e gein; ac'hano ec'h en em lakeas da gomz brao ouz ar chalboter; pedi a eure anezan da vont dres d'e gezeg hag e teuje, en hent-se, kentoc'h a-ze a-benn da jacha e garr eus an toull fall m'oa manet ennan.

Azalek e yaouankiz, Kasian a oa bet o veva, er sioulder hag er c'houezeri, pell diouz trouz ar bed. Nikolas n'eo ket evelse eo en doa graet; bevet en doa atao etouez andud hag en hent-se ec'h anaveze gwelloc'h egetan en eun den; ne jomas ket da dorta; tenna a reas e zilhad war gorre; tronsa a reas e zilhad dindan; diskenn a reas er streat zoun; floura a reas ar c'hezeg; starda a reas dourn ar chalboter hag heb aoun d'en em louza ec'h en em lakeas da drei ar rod hag e tennas kar ar paourkêz eus an toull-lagenn.

P'en em gavas Nikolas e porz ar baradoz, sant Per a lavaras d'ezan en divije daou c'houel, er bloaz, e lec'h Kasian, dre ma oa chomet ken dibreder, dirag eun den er boan, ne vije graet e c'houel nemet bep pevar bloaz.

Sperejou diaes a dud a zo hag a lavaro marteze: « An

(1) *Si nous savions aimer*, par G. Guittou. Préface de S. E. le Cardinal Maurin. Editions Spes, 6 fr.

traou-ze n'int nemed istoriou! » Pedit anezo neuze da fenn, nann istoriou savet gant spered an den, met an Aviel, an istor dreist peb istor, savet gant Doue e-unan.

« Eno ken alies ha bep pajenn, eme zant Jerom, e welint penaos Hor Zalver, goude e brezegenn, a baree ar re glanv hag ar re vac'hagnet evit gounit, dre e oberou, ar re n'en doa ket gellet gounit c'hoaz dre e gomzou! »

Ha ma n'eo ket eur maen eo a zo en o c'hreiz elec'h eur galon gig e livirint gand ar c'hardinal Manning: « N'omp ket gouest, evel Hor Zalver, da lakat ar bara da greski hag an dud lor da barea, met gouest omp, ma karomp, da veza gand ar re genta o tont war zikour kement hini a zo gwasket a gorf pe a spered! »

Re wir eo an dra-ze.

Kuz-heol e Breiz-Izel

En deiz all, tost da Bont-Aven,
En eul liorz en em gaven,
Ha war eur skaon, noz ar pardon,
E peoc'h, o hunvreal edon.

Nav eur, en iliz, a zone,
Er c'harz, an eostig a gane,
Ar maeziou a oa sioul meurbed
Hag e ker ne oa trouz ebet.

Listri skarzet, bagou dister,
A zanse e dinaou ar ster,
Hag, eus va skaon, e selaouen
C'houiban eur martolod laouen.

A-wechou, war an hent ledan,
E tremene kirri dre-dan,
Ha paotred drant, war o « velo »
A nije, o bleo dizolo.

Merc'hed, a-raok mont d'ho gwele,
War an treujou, a varvailhe
Ha gant dudi eo e kleven
Teodou skanv merc'hed Pont-Aven.

Rod eur vilin, bet pell en dro,
A ziskuize, hanter varo,
Da c'hortoz, gant ar miliner,
Kregi en he labour pounner.

O kerik koant, o kerik reiz!
O kaera korn a zo e Breiz;
Yac'h va c'halon, distan va fenn,
Na beva eno a garfen!

Du-ze, war an dremmwell koabrek,
Boul an heol a goueze gorrek
Ha, tra marzus, dre ma ruilhe,
Aour, a bep kostez, a skuilhe.

A nebeudou, tamm goude tamm,
An heol a vihanaas e flamm,
Ha, pell ouzin, wardro ar Raz,
E lagad moug en em zarras.

Met neuze pebez arvest all:
Tan en oabl a redas raktal
Hag ar c'houmoul, hir a deir leo,
E aour edo chenchet o bleo.

Koumoul kaer, koumoul niverus,
Koumoul roz-tener ha re rus,
Re gell mesket gant re velen,
E rez an dremmwell, a welen.

Dre ma tec'he kuit goulskoude
Da vroiou all Roue an de,
Evel fennet warno ludu,
E teue o liou duoc'h du.

An noz peoc'hus, war an oabl glas,
He mantell berlez a daolas;
Ha, war he skoaz eur gwisk a c'hloar,
Tre d'he zron, e pignas al loar.

War Leon; war Dreger, war Gerne,
Mil steredenn a lugerne;
War bep Breizez, war bep Breizad,
E tiskenne bennoz o Zad.

O welet kement a c'houlou,
Kloz e chome va muzellou;
Dirag o gened hep he far,
Va zeod a jome dilavar.

Dreist al loar ha dreist ar stered,
Uhel e nije va spered;
Edon e dor ar baradoz;
.....
Dillo e tremenas an noz.

J. L'HELGOUALCH.

Yann ar Marc'hadour Moc'h

Er goanv tremenet, hon daouarn dirag eun tantad tan, pa voude an avel e beg ar chiminal, va mamm goz, en eur vralla he fenn, a gonte d'eomp rimadellou, darn farsus ha netra ken, ha darn all, leun a genteliou pouezus. Hizio ez eus deuet unan anezo em spered ha setu hi aman.

« Bez e oa o chom, gwechatl, wardro Kraon (1), eur marc'hadour moc'h, e ano Yann hag en doa ezomm da vont da Gemper; neuze va bugaligou, ne oa ket a autoiou evel hizio, hag an hentchou peurliesa a dremene ebiou ar c'hoajou. Yann a bignas eta, beure mat war e varc'h hag en hent, mar gouie. Goude eun eur vale, ec'h en em gavas e kichen eur c'hoad; al loen a jomas a-zav ha kaer en doa Yann lubanat d'ezan hag e skei gand e voutou koad ne finvas ket; nec'het bras, ar marc'hadour a gredas e oa skuizet hag a laoskas anezan eur pennad da ziskuiz; met ar marc'h ne finvas ket adarre pa oa red mont en hent; va den a oa war ar poent d'en em zizrei evit mont d'ar gêr, pa glev son eun drompilh war e lerc'h. Chom a ra sebezet, met eur zonz vat a zeu kerent en e spered; vid an em zizober eus al laeron a zo war e roudou, e lamm war e varc'h, e tenn an dorchenn foenn a zo en e voutou hag e lak anei a zispilh dirak daoulagad al loen mouzet; henman raktal o santout c'houez ar foenn a zigor e c'he-nou prest da chokat; mont a ra war a-raok, hep gellout tizout ar c'henaouad foenn; daoulamm a ra a-dreuz ar vein, ar c'hleuziou a red a bep tu d'ezo ha prestik ar c'hoad a zo tremenet; ar c'hrec'hou a zo pignet en eun amzer, met evid o diskenn Yann en deus mil boan; meur a wech eo dare d'eazn beza taolet d'an traon diwar e varc'h hag henman n'en deus ket tapet c'hoaz e damm foenn.

Koulskoude touriou sant Kaourintin a vez gwelet hag ivez an tiez kenta eus kêr; war an treujou an dud a zeu da zellet hag a gemer anezan evid eur skeud; aman eur yar a zo flastret dindan treid ar marc'h, a-hont eur bugel a zo pilet d'an traon gant an avet graet gantan o tremen. Ha setu Yann erruet e kichen kêr; tenna a ra an dorchenn diouz penn e varc'h met henman ne jom ket a-zav evid an dra-ze; an tiz en deus a gas anezan eun hag eun el lec'h ma tle diskenn ar marc'hadour. Al loen a jomas eno a-zav, hep c'hoantât mont pelloc'h, ker skuizet e oa; c'houezenn a oa warnan hag an eonenn a c'holoe anezan; met Yann, laouen eus e dro, a ziskennas hag o lakât ar foenn en e voutou e lavaras: « Vit mont d'ar gêr e talvezint d'in adarre! »

(1) Kraon pe Graozon.

Ha setu aman ar gentel a dennin eus istor va mamm goz.

Daoust ha gouarnamant Paris, dre holl, ne ra ket evel ar marc'hadour moc'h, pa vez votadegou evit lakât ar bobl da vale en hent en deus c'hoant e kersfe ennan?

« Pe vezo diskaret an ilizou, mouget ar feiz, pellaet ar venec'h, rannet o madou, neuze an holl e Frans a vo pinvidik ha den n'en devezo ezomm da labourat ken! »

Eur zoroc'hell c'houlo n'eo ken an dra-ze, met ar bobl a gerz da heul ar zoroc'hell hag a gas da Baris an treitour Marty hag a lez er gêr ar jeneral Kastelnau.

« Pa vezo galleget Breiz, an Alzas, ar Madagaskar, an Algeri, ar Maroc ha kement bro e c'hell Fanch ar Gall teurel e graban warni, neuze e vo gwelet an traou o kerzet war a-raok er broiou-ze evel ma n'o deus ket bet graet biskoaz! »

Eur zoroc'hell c'houlo n'eo ken an dra-ze, ken nebeut, met ar bobl a gerz da heul ar zoroc'hell hag a ro milionou, beb bloaz, da skigna dre ar bed ar galleg hag an deska-durez dizoue.

Hag ar bobl a gerz da heul ar zoroc'hellou, da heul ar ger « *Communisme* » ha da heul ar ger « *Progrès* » evel marc'h Yann, ar marc'hadour moc'h, da heul e dorchenn foenn.

Bretoned, gant a rainp, digoromp hon daoulagad; ar broiou a gerz da heul ar geriou-ze a zo broiou o koueza en o foull ha ne zavint ket ken!

Na lezomp ket hor bro da goueza er bez evelse: eur vez e vefe ouspenn ar pec'hed; daou c'her ha daou c'her hepken a dle diskouez d'eomp an hent hon eus da heuilh evit savetei madou er bed-man a-unan gant re ar bed-all *Feiz ha Breiz*; en daou c'her-ze eman hent silvidigez ar Vretoned ha n'eman e ger all ebet!

J.-L. PLOGONNEC.

O deus roet evit Bleun-Brug GWENGAMP

An Otrou Even, noter, Landreger.....	500 lur.
An Otrou Ollivier, Landerne.....	100 lur.
An Otrou Loyet, Boulvriak.....	100 lur.
An Otrou Perrot, rener <i>Feiz ha Breiz</i>	600 lur.
Breuzie Breiz (<i>Association bretonne</i>).....	50 lur.
E. Ar Moal.....	25 lur.

Ar c'hef-man 'zo digoret evit herzel ouz ar mizou bras a vo gant goueliou Gwengamp.

Forz petra a gaso d'ezan hon mignoned, arc'hant, leoriou, holl e vezint digemeret mat.

Doue, ar Vro, ar Yez e Kendalc'h holl-geltiek Dublin

SKOUER IWERZON

Evet warlene e Kemper, paotred Keumri, paotred Bro-Skos, re Vreiz ha re an Enez-Mona, o deus en em gavet niverus d'en em zaludi ha da labourat. En em vodet o deus, e penn kenta miz Gouere e Dublin, ker-benn bro-Iwerzon, hag ar blijadur em eus bet da vont da Zublin en ano ar « Bleun-Brug ». Eno e kavis ivez hor c'henvroiz mat, Taldir-Jaffrennou, hag he intron, renerien « Breiz-Atao » an Ao. Mordrel ha Marchal, ha Roparz-Hemon, rener ar c'helaouenn vrezonek « Gwalarn ».

Deiziou kaer meurbed e voe deiziou Dublin. Ouspenn ma oa magadurus ar prezegennou, ha dudius ar goueliou lidet en hon enor, bro-Iwerzon en he fez a zo eur gentel evidomp-ni, Breizis, hag Iwerzonis a c'hell beza kemeret da skouer.

*
**

O bro, gwasket didruez gand ar Zaozon, a oa aet war baouraat. Ma ne gonter ket eur nebeut keariou bras, evel Dublin, Cork, Belfast hag unan bennak ouspenn e c'heller lavarout e oa bet goullonderet ar maeziou gant lezenou fallakr an estren. Iwerzonis a oa bet red d'ezo divroi d'ar Stadou-Unanet, pe d'an Australi, pe da lec'h all. An douarou labour a oa troet holl da foenneier.

Niver an dud a vev e Iwerzon ne oa ket dreist pevar milion.

A-hent-all, ar yez, — yez koz Iwerzon, kenderv hor brezoneg, — argaset gand ar zaozneg, en doa kollet tachenn, mantrus. Ne veze klevet ken nemet war muzellou eun dournad koueriaded ha pesketourien, dizesk, diwenneien, ha dianket duhont pell er c'hornog, etouez ar yunou gouez, ar c'herreg, hag en inizi.

Brezet kriz e oa bet graet ivez gand hugonoded bro-Zaoz da Gatoliked Iwerzon.

*
**

Iwerzon, avat, n'he deus pleget morse dindan ar vaz-yeo. M'o deus Breizis pennou kalet, Iwerzonis o deus pennou houarn, pennou dir... war ar pennou-ze bro-Zaoz he deus torret he ivinou.

Klevet ho peus bet ano, m'oarvad, eus an taol kounnar a hejas an enezenn-c'hlas, azalek 1916 betek 1922. Iwer-

zonis a gemeras o fuzulioù, hag a reas eur vuhez tenn meurbed da zoudarded ha da bolised ar Zaozon. Eur brezel, evit gwir.

Devet e voe Cork, ha dismantret karterioù a-bez e Dublin — n'eo ket savet c'hoaz an holl diez freuzet, — mervel a reas tud gand an naon, kentoc'h eget plega, krouget ha fuzuliet a voe meur a hini; ar Zaozon, avat, a zigalona hag a voe taolet er-maez.

Iwerzon, breman, a zo kouls lavarout disuj. He arc'hant a jom ganti, he zoudarded a zo d'ezhi, hag an Deskadurez a zo etre daouarn Iwerzonis.

N'eo ket breman eo e vo gwelet ober an hu war ar relijion. Hon Iliz santel a zo enoret, hag ar pedennou a vez lavaret dre-holl a vouez uhel, ha d'an holl da glevout.

Hag ar yez. Ah! ar yez! Meur a wech eo bet gwasket va c'halon gand an avi, pa welen penaos ec'h enoret hag e studiet duhont ar yez koz. Embannou ar stalioù-kenverz, e Dublin, a zo skrivet alies-alies e iwerzoneg gant peziou lizerenou aour. Paperioù ar gouarnamant, anioù ar ruiou, hag ar c'hearioù a zo e iwerzoneg. — Taolit evez mat e oa aet an iwerzoneg krenn da god en tri-c'hart eus an Enezenn! — Breman, an den desket, an denjentil, an den a oar beva, a zo anat diouz an iwerzoneg a oar... hag ar plasou mat a zo evitan! — Pell emaoamp, breman, eus paour kez gouezidi ar yunou hag an aochou, gand o c'hoz-yez, mat a-boan da stlepel d'ar c'hi! An aotronez, breman, a ra eus an iwerzoneg o yez-nemetan, hag ar yaouankiz, paotred o « c'helc'h aour » a zilez krenn ar zaozneg evit skriva ha kaozeal iwerzoneg.

*
**

Setu petra em eus gwelet, va-unan, e Dublin hag endro da Zublin. N'omp ket diskennet re izel an holl e Breiz. Ar feiz, ar vro, ar brezoneg a zo beo atao. Enebourien o deus avat. Poent bras eo stourm, ma fell deomp e chomfent divrall. Kemeromp skouer war tud kalonek Iwerzon.

Ar prezegennou

Bretoned Breiz-vihan ne oant ket niverus e kendalc'h Dublin. Meneg ez eus bet evelato eus hor bro, — ha gwelet hon deus ez eo Breiz karet kenan gand hor c'hendirvi Tramor. — Taldir-Jaffrennou, silaouet aketus, a gomzas diwar-benn Breiz. Roparz Hemon, saozneger dispar, — ma a zo mat da zrailha saozneg, da gaozeal, ne lavaran ket! — a zaludas, em lec'h, Iwerzon hag Iwerzonis en ano ar « Bleun-Brug ». Lavarout a reas e oa ar Bleun-Brug eun unvaniez Bretoned ha Katoliked, niverus ha galloudus, hag e tiplegas al labour vat e reomp — dre ar peziou-c'hoari, al leorioù, ar prezegennou, al lasou-kana, — evit dere'hel

sounn hag uhel, daoust d'an arne, banniel ar Feiz ha banniel Breiz stropet. Strakadegou daouarn a voe roet da Roparz Hemon pa voe echu e brezegenn.

Meneg a voe c'hoaz eus Breiz gant paotred « Breiz-Atao » hag « Unvaniez Yaouankiz Vreiz ». Ar re-ze a zo yaouank ha taer, ha distagetlet mat o zeod. Henvel awalc'h int ouz paotred ar « Sinn-Fein » e Iwerzon, ha plijet o deus kenan da yaouankiz ar vro-ze.

A-hent-all, aotronez hag intronezed gouiziek o deus kaezet d'eomp diwar-benn toniou, peziou-c'hoari, ha skridou bro-Geumri, bro-Skos, hag Iwerzon. Arabad d'eomp kridi n'ez eus nemedomp o pleustri war yez koz ar Gelted. Ar Gelted all a labour ivez, ha war draou a zo, e kollomp ganto. — Eur vez eo hen anzaou, *met n'eus ken nemed ar brezoneg ha n'hell ket tremenn toull-dor ar skoliou*. Hor c'hendirvi, dre gaer, evel re bro-Geumri, pe dre heg, evel re Iwerzon, a zesker d'ezo ar yez koz er skol, a zo deuet abenn da lakaat o brezoneg e peb lec'h kenver-ha kenver gand ar zaozneg.

Peur evo gwelet ar brezoneg war an hevelep renk gand ar galleg, e Breiz?

Peziou-c'hoari, kan, koroll

Hostizien dispar eo Iwerzonis. Aozet o doa eur beñtanfoeltr a c'houediu kaer evidomp. Bet omp er c'hoariva (en theatr) o welout displega peziou-c'hoari e iwerzoneg, e keumraeg, hag e saozneg. O c'hoarierien a zo eus ar c'henta. Lavaromp dioustu, avat, n'ez int ket kouls hag hor re, — c'hoarierien ar Bleun-Brug ha re an Ao. Bayon, eus bro-Wened. — O feziou-c'hoari, kennebeut, n'int ket par d'hor re. Va Doue; perag kuza? lorc'h a oa ennon gant-se! Hogen, diouz ar c'hiz ma 'z eont war-raok, emaoimp e riskl-bras da jom war o lerc'h dizale... Hogen, ni ivez a yelo war-raok!

An toniou, — ah! toniou Bretoned Tramor! — a zo dudius ha kanet dispar, ar peurvuia. Mistri kanourien eo Kelted Tramor, ha ne skuizer ket ouz o silaou.

Lennerien « Feiz-ha-Breiz » a anavez mat « Bro Goz va zadou ». Eun ton keumraek eo henez. « Dalc'h sonj, o Breiz-Izel » a zo eun ton iwerzoneg. O zoniou all a zo ker brao all.

An dansou koz — dansou yac'h, ar re-ze! — a oa Let ankounac'haet eun tammig. Hogen, ma welfec'h treid Iwerzonis o vont endro pa zav mouez ar « big-pipe » pe biniou, ez afec'h da zansal hoc'h unan dioc'htu. Arabad, avat, beza berr war hoc'h alan, pe gwelloc'h eo deoc'h chom war ho kador. An dansou a bad pell-pell, hag a ya bepred war zilloat. Iwerzonis ne vezont ket skuiz gant kennebeut.

Digemeret omp bet c'hoaz — war an ton bras — e maner an Ao. O'Kennedy, ar « Chief-Justice », e ti ar prezidant ar Stad-dieub, an Ao. Cosgrave. Bet omp o welout an Ao. de Valera, prezidant ar Republikaned, pe enebourien touet bro-Zaoz, ha meur a zen brudet-bras er vro. Holl e voent hegarat kenan en hor c'henver, hag holl e lavarent o doa karantez birvidik evit hor Breiz-Izel. Kement-se a zo plijadurus da glevout, m'hel lavar!

Troicu a zehou hag a gleiz

Dublin a zo eur gear divent, a 400.000 den bennak; meur a dra souezus a zo da welout enni ha keuz awalc'h em eus p'e gwir n'hallan ket displega d'eoc'h kement tra am eus gwelet eno. « Feiz-ha-Breiz » en e bez, ne vije ket hanter-blas ennan. Kalz tiez freuzet a gaver c'hoaz e-kreiz kear, dreist-holl, e-kichen Nelson-Pillar. An dismantrou-se a jom eno evel eun envor eus ar boan o deus bet Iwerzonis evit kaout o frankiz.

Kaset omp bet da redek gand an « auto-kirri » betek tosenn Tara, chomlec'h brudet rouanez Iwerzon, gwechall goz. Ne jom nemet krugellou douar da verka ar plas, ha war ar penn uhella eo bet savet eun delwenn (pe « statue ») da Zant-Padrik, abostol Iwerzon. Diouz Tara da Zrogheda (distagit Droc'hida) ez aer penn-da-benn gant traonienn ar ster Boyne. Eun draonienn gaer meurbed anezi, glas, glas, glas, goloet gand ar gwez ha dindan foenneier. Mantrus eo, avat, sonjal pegement a zouar mat a ya da goll duhont, dre faot ar perc'henned, al « landlorded » evel ma 'z int hanvet. Pa zonzjer e ranke Iwerzonis divroi da glask o boued, epad ma oa douarou pinvidik — keit ha diouz Brest da Vontroulez — o 'n em goll dindan yeot, hep nebtec'h eur parkad ed na patatez, ne zouezer ket gand an tennou a deue re-alies da vuntra al landlord laer beteg en e vaner.

Eur wech all omp aet da C'hendalough (pe Traon an daou lenn). Eur skrivagner a lavar:

One night spent thus in sweet Glendalough,
Listening to the mountain stream's roar;
An impression 'twill make, as you stand by the lake,
That will haunt your mind overmore.

Eun nozvez tremenet er Glendaloc'h dudius,
O silaou froud ar menez o krozal,
Diwar aod al lenn, a laka en ho spered eun daolenn
Hag e vezoc'h trelatet ganti da viken.

Na pegen gwir!

Treuzet ganeoc'h Dublin, ha Dun-Laoghaire, ha keariou all, e stagit da zavel krec'hiennou uhelloc'h-uhella. Ouspenn mil troatad emaoch azioc'h ar mor, etouez mene-

ziou didud, dilabour, hep gwez. Tachennou leun a zour-chag, kuzet dindan ar brouan, henvel awalc'h, met brasoc'h, ouz Yun-Ellez Braspartz.

Pelloc'h, e tiskenn an hent, epad ma sav ha ma tosta ar menezioù en daou du d'eoc'h. Duhont en traon, etouez ar gwez, e lintr dour an daou lenn. Setu Glenn-daou-loc'h!

Eno, war eur garregenn uhel meurbed, azioc'h al lenn uhella e veve sant Kevin benniget. Eun devez ben-nak e kontin d'eoc'h doare sant Kevin ha Kathleen (dis-tagit Kasslin).

Chom a ra e Glendaloc'h dismantrou ilizou ha tiez koz. Eur skolaer gouziek a oa a-zevri o tisplega doare an traou d'ar re-all. Me, avat, azezet war an aod, a zo chomet da zellout ouz bannou an heol o c'hoari war tarzouigoù al lenn. En daou du, ar menezioù a zave uhel-uhel, hag an avel a donigenne etouez ar gwez pin, e-keit ma rede azioc'h va fenn kourmoul oabl Iwerzon. Istor den gouziek ebet ne dalveze evidon kaerder an daolenn-ze.

Ar zent koz a oa tud a skiant. Gouzout a raent dibaba lec'hioù dispar evid o repu!

**

Setu ni distro da Breiz. Meur a wech a-hed an deiz e nij va envor, dreist ar mor, da Enez-Iwerzon. Sonjal a ran e yaouankizou ar vro-ze, daoulagad glas d'ezo hag atao o vousec'hoarzin. Tud hegarat int, hogen em ziskouezet o deus kalonek ha pennek evit savetei o zenzorioù, — ar feiz, an douar, ar yez, — ha deut int abenn. Deut int abenn pegwir o deus gouezet en em unani, ha stourm hep diskregi morse. Kemeromp skouer warno ha Feiz ha Breiz a yelo bepred war wellaat ha war gaeraat.

YOUENN AN DREZEN.

Levriou nevez

Hor mignon mat an A. Havard beleg soudarded ha mortoloded Sant Malo, a zo o paouez sevel daou levrig koant ha talvoudus kenan d'ar gloareged ha d'ar veleien yaouank.


1) Mes chers petits, ou l'Apostolat des Enfants

Prix: 1 fr. 25, franco par la poste.

2) L'Apostolat des soldats

Prix: 0 fr. 50, franco par la poste.

O goulenn ouz an A. Havard, 11, rue de la Fosse, Saint-Malo (Ille-et-Vilaine). C/C. 6.578. Rennes.



Dindan banniel ar vro, martolod vin warc'hoaz

Evel soun an tremen e soun va ugent vloaz.
Dindan banniel Bro-C'hall, martolod vin warc'hoaz.
Achu ganin debri bara yac'h Breiz-Izel
Eur zoubenn all am bo e bourz enl lestr-brezel.

Pa zonjan vo krennet divarnoun pep frankiz
Kaset ha digaset gant pep mestr, e pep giz
E karfen koueza klanv, klanv bras war eur gwele.
Ma teuio kelou d'in e c'hellan c'hoaz dale.

Petra rin e Toulon, eur porz a gant vil den
Nevez-flamm diskennet, heb anaout eur c'hristen.
Pa vin er vag-houarn, en dro d'in klozet mat,
Skwizet ouz ar vicher, gant ar c'henta blasaat.

Rak me zo eur blantenn, ganet e Breiz-Izel
A gavo va maro pa rankin dilezel
Aochou va yaouankiz, ha douar va c'havel. —
Evidon d'an oad-man, chench bro a zo mervel.

Ya gant klenved ar Vro, me vo kavet eun deiz
Dizec'het ha krignet, e broiou ar c'hreisteiz
Ar mor du-ze n'eo ket, mor glaz va yaouankiz
« Warnan em bo bepred naon ha sec'hed frankiz. »

Evel gwechall o! nann, ne glaskin mui hirio
Mont d'ober tro ar-bed, da redek ar morio
O! perak ouñ re goz da jom er ger sious
Ha re yaouank ive da zonjal distrei c'hoaz...

Mont a ran, eur wech c'hoaz, d'ober tro an « Tevenn »
 A reden betek hen, atao laouenn va fenn;
 Met hirio e kouezo dour eus va daoulagad
 Rak o troia ennan em bo kalz kalonad...

Va c'haloun baour e kanv a glasko sûr c'hoarzin
 Ouz an dud en aochou, da vat, gant ar bizin.
 Perak ouz eur vro noaz, e stag kalon an den
 Stag ouz reier garo evel eur vrennigenn?

Savit, va zad, va mamm, deomp d'an iliz hirio
 Da c'houlenn ouz Jezus ma teuin yac'h endro...
 Dreomp ouz an daol-fask ar bara a'ro nerz
 Da c'houzantv kemend kroaz a zeu d'eomp eus e berz.

Doue a zo em c'hreiz; ha war va zal eman
 C'hoaz bennoz ar beleg, me zant oun gwaz breman...
 C'hoarezed, kenavo, d'ho preur beb an amzer
 C'houi zigaso du-ze, beb eil tro, eul lizer.

« Va mamm, bezit dinec'h, pell eus an enezenn,
 Tommoc'h vin ouz ar ger, ha startoc'h em lezenn;
 Evit ho mabig paour, ho chapeled bemdez
 Livirit gant kalon, en enor d'ar Werc'hez.

En hent, va zad; breudeur, war laez ar peder gouel
 Ma tigo ar vag he lien d'an avel. —
 Leuskit ar stur ganin « ha kwit dreist an « Ero »
 Kenavo, Molenez, kenavo d'an distro. — »

Me gaso va bagig, reiz an enezennou
 D'ober tro ar reier ha tro ar sklozennou
 Lec'h m'oun bet e giz mous, klask petiz ha graded
 Hag e giz martolod, legistri ha grac'hed.

Evelse bezet graet.

F.-M.



Keleier a gleiz hag a zehou

Stad reuzeudik ar Vretoned divroet

An traou gwella pa droont a vez an traou falla; evid an dud eo evel evid an traou; ar Vretoned, pa gerzont war roudou o zud koz n'eus ket gwelloc'h egeto; pa zilezont o bro hag o yez ne zaleont ket da zilezel ivez o Doue ha ne vez ket kavet falloc'h egeto o vale dre ar bed.

Gwelit Brest, ar gêr ruz, piou a ra d'ezi ruzia evel ma ra, ma n'eo ket Bretoned aet eus parreziou gwella Gouled-Leon eo?

Hag e Paris hag en ardremez? E Villeneuve-Le-Roi, eme ar *Bretagne Intégrale*, ez eus 600 kommunist; mat, ouspenn 400 anezo a zo Bretoned divroet.

Setu aze petra deu hor c'henvroiz da veza pa vezont laket da veva etouez tud ha n'int ket eus an hevelep gouenn ganto. N'eus ket gwall bell, war ar 750 maouez a oa kraouiet e Prizon-Sant-Lazar, ouspenn 250 anezo a oa Bretonezed, hag eus unan hepken eus hor pemp eskopti e oa 65!

Ar Vretoned a ya d'an Dordogn n'eo ket ken truezus o stad marteze hag hini ar re a ya d'ar c'hêriou bras, met, e c'hellit kredi, ne c'heller alia den ebet da vont di nemet ne gavfe ket e vara e korn all ebet eus Breiz-Izel e vefe.

M'o divije gelllet beva eno, disparti a-grenn, neuze c'hoaz ne lavaran ket; met siouaz, toueziet int gant re all ha dont a raint abred da veza henvel outo ha falloc'h egeto.

A drugarez Doue, an A. Duparc, Eskob Kemper ha Leon a zo o paouez henvel kure ar Releg, an A. Lanchès, da berson Bretoned an Dordogn. Digemeret e vo gant laouenedigez gant hor c'henvroiz hag eur vad divent a raio d'ezo.

Muioc'h a dud, eget n'eus breman, a oa o chom e Breiz a-raok ar brezel hag an holl o doa o bara.

P'eo gwir eo paour raz-iliz ar C'houarnamant ha p'eo gwir en deus leve e Breiz-Izel, perag ne werz ket al leveze d'ar Vretoned ma c'hellint chom en o bro?

Pet kêr nevez ne c'hellfet ket sevel e Koad-ar-C'hranou tra nemet ken?

Ha ma 'z eus e meur a lec'h tiegeizou re vras, perag ne ranner ket anezo e daou pe dri?

Petra en deus graet ar C'houarnamant evit derc'hel ar Vretoned en o bro?

Netra, nemet digeri frank an hent d'ezo da vont da Baris pe d'an Dordogn; an dra-ze avat en deus graet hag an dra-ze m'arvat eo a glask .

Ma ne ra netra ar C'houarnamant evit savetei hor gouenn, ez eus tud da vihanan, hag a deu war sikour ar Vretoned aet pell diouz douar kunv o c'havell evel an A. Berr, en Naoned, an A. Perquis, e Tours hag an A. Regnier, e Paris; ra vezint benniget gant Sent Breiz eus ar vad a reont d'ar Vretoned.

N'eus ket pell an A. Regnier a reas eur gouel evit bu-gale Bretoned Paris, da welet piou anezo a ouie gwella ar brezoneg.

Ar priz kenta, 30 lur, Istor Breiz hag eur goumanant da Arvorig a voe gounezet gant Francis ar Floc'h, 15 vloaz, ganet e Paris a dud ginidik eus a Brat, e bro Dreger.

7 poent/10 en doa bet evit lenn, 15/15 evit lavaret dindan evor ha 5/5 evit kana.

An eil priz, 25 lur, Istor Breiz hag eur goumanant da Arvorig a voe gounezet gant Deneza ar Floc'h, 14 vloaz, ganet e Paris a dud ginidik eus a Brat, e bro Dreger.

7 p. 1/2/10 he doa bet evit lenn, 14 p. 1/2/15 evit lavaret dindan evor ha 4 1/2/5 evit kana.

An trede priz, 20 lur, Istor Breiz hag eur goumanant da Arvorig a voe gounezet gant Korantina 'r Boennec, 15 vloaz, ginidik eus a Zant Gwennole, e bro Gerne, a zo enni danvez eur c'hoarierez dispar.

Ar pevare priz, 15 lur, Istor Breiz hag eur goumanant da Arvorig a voe gounezet gant Desi Sevignon, 15 vloaz, ginidik eus a Zant Gwennole, e bro Gerne.

Ar pempvet priz, 10 lur, Istor Breiz hag eur goumanant da Arvorig a voe gounezet gant J. ar Berre, ganet e Fouesnant, e bro Gerne.

Setu azê goueliou — goueliou *Breuziezh ar brezoneg* — hag a dlefed ober dre holl, dreist-holl er parrezioù e-lec'h ma weler ar brezoneg o koll gand ar galleg.

Goueliou Kevredigezh broadel Breiz

Eus an 2 d'ar 7 a viz Gwengolo emañ goueliou Kevredigezh broadel Breiz, e Pempoull.

D'an 3 a viz Gwengolo, da 9 eur 1/2, studiaden war *stad ar brezoneg*; piou eo ar re a labour ar muia evitan hag a eneb d'ezan.

Da 15 eur. — *An hini goz o vont da denna he fortred*, pezh c'hoari savet gant Dir-na-Dor ha diskleriet gant merc'hed Bemac'h.

D'ar 4 a viz Gwengolo, da 9 eur 1/2, studiaden war *Istor ha Lennegezh Breiz*.

D'ar 5 a viz Gwengolo, da 9 eur 1/2, studiaden war *ijinou kaer Breiz*.

D'ar 6 a viz Gwengolo, da 13 eur 1/2. Tro ker gant bannielou Bro-C'hoelo. — C'hoariva ha Ti Kaniri Breiz gant Th. Botrel.



KAOURANTIN AN NOURS

(1865-1925)

Reñer bras ar « *C'hourrier du Finistère* », an A. K. an Nours, a zo tremenet e peoc'h d'ar 17 a viz Gouere

diveza; daou pe dri bloaz a oa n'edo ket war e du; n'en doa nemet 60 vloaz; micher ar skrivagner, anat eo, a zo unan eus ar micheriu a deu buanna a-benn eus he den.

Kaourintin a oa eur c'hernevad, ginidik eus a Bleu-vêil; e youl oa beza labourer douar evel e dud, met d'e drizek vloaz e kollas; ñre zarvoud, unan eus e ziwesker hag e rankas klask eur micher all da c'hounit e vara.

Goude beza het eur pen vad oc'h ober skol e teuas da Vrest da rei dourn d'ar *Courrier* da vont en dro.

Daou vloaz ha tregont e chomas en ti-ze, ha pa varvas, ar *C'hourrier* a veze gwerzet pemp gwech muioc'h a niverennoù anezan eget ne veza graet pa zigouezas e Brest evid ar wech kenta.


N'oa ket kalz a gazetennourien gouest da stourin outan; eur bluenn zir en doa; enebourien an Iliz hag enebourien ar Vro a veze flemmet ganti bep sadorn.

An Aotrou Doue a ouezo e zigoll, en e varadoz, eus ar vad en deus graet d'e Iliz, war an douar, hag a roio konfort d'e dud e kaonv.

Doue r'e bardono.

Deizioù bras Breiz

Pötred yaouank, ha c'houi holl hag a fell d'eoc'h rei an dorn, da lakaat amzer da zont hor Breiz da veza laouennoc'h eged an amzer-vreman, bezit holl e Gwengamp d'ar 7 a viz Gwengolo a zeu ha chomit eno betek ar yaou da noz. 15 lur 10 gwenneg bemdez hepken ho pezo da bae, evit beza digemeret dreist e skolach Itron Varia wir zikour; jistr ha gwin ho pezo bep pred ha kafe da lein ha da verenn; en amzer-man, evit ken nebeud all, ne c'hellit ket beza digemeret koulz e-nep lec'h; rak-se 'ta kasit hoc'h ano, ar c'henta 'r gwella, d'an O. Clerc, Administrateur d'*Arvorig*, 15, rue des Capucins, Guingamp.



Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildu*
YV. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES


ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 8 f. l'an
France 9 f. l'an
Etranger 10 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITE
*Toutes les insertions sont faites
à l'année*
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — XV^{vet} Congrès du Bleun-Brug. — An neb a wel sklêr da belec'h ez a ? AR BLEUN-BRUGER. — Ar Bleun-Brug e Gwengamp, E. A. M. — Cortège historique. — An ti heb ene. — Labourioù ar merc'hed wardro an ti, TINTIN ANNA. — Ar spont er Bulgari, J. U. — Viktoria Konan a Zant-Luc. — Var vor, J. L'HELGOALC'H. — Pardon bras sant Visant Ferrier. — Galvadenn eur pötr yaouank, AB-MAEL. — Keleier ar miz. — Gouel ar Peur-zourn. — Dihunomp !

SULIOU HA GOUELIOU MIZ GWENGOLO

- 6 a viz Gwengolo. — XIV^{vet} sul goude ar Pantekost, ofis ar zul-ze, p. 484.
- 8 a viz Gwengolo. — Ginivelez ar Werc'hez Vari, p. 730.
- 13 a viz Gwengolo. — XV^{vet} sul goude ar Pantekost, an oferenn, p. 488.
Gousperou kenta Gouel Krist, p. 733.
- 20 a viz Gwengolo. — XVI^{vet} sul goude ar Pantekost, an oferenn, p. 492.
Gousperou kenta Sant Vaze, p. 742.
- 27 a viz Gwengolo. — XVII^{vet} sul goude ar Pantekost, an ofis, p. 496.



XV^e Congrès du Bleun-Brug à Guingamp

les 8, 9, 10 septembre 1925

Sous la haute présidence de S. G. Mgr Serrand,
Evêque de St-Brieuc et de Tréguier.

PROGRAMME

LUNDI 7, à 18 h. — Ouverture de la retraite-congrès par M. l'abbé J.-M. Perrot, Directeur de *Feiz ha Breiz*. Exercices de la retraite par M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire de Saint-Brieuc.

MARDI 8. — 6 h. 1/2. Méditation.

7 h. Messe.

9 h. Sermon.

10 h. 1/2. Causerie sur les Conférenciers populaires bretons, sous la présidence de M. A. Bocher, de St-Servais.

12 h. Repas en commun.

15 h. Sermon.

16 h. Causerie sur le théâtre populaire breton, sous la présidence de M. l'abbé J.-L. Corven, chapelain à Pluvigner (Morbihan).

18 h. 1/2. Prières et Salut du T.-S. Sacrement.

19 h. Souper.

20 h. 1/2. Allocution bretonne par le conférencier populaire « Ar Yeodet ». Conférence par M. G. Le Douarec, de St-Brieuc: *Valeur économique du mouvement breton*.

Braoan merc'h ar barrouz, saynète comique de M. l'abbé J. Le Bayon, interprétée par la Troupe de Prat.
Ar Chiminaou, pièce en 2 actes, par D. N. D., interprétée par la Troupe de Prat.

Dans un des entr'actes des séances du mardi, mercredi et jeudi, *Herminig Arvor*, de Douarnenez donnera quelques chants extraits de EUN EURED E BRO-WENED.

MERCREDI 9. — 7 h. Messe de communion à la basilique, dite pour les défunts du B.-B. et pour le repos de l'âme du barde Th. Botrel. Sermon par M. l'abbé Coetmeur, Directeur au Grand Séminaire de Vannes.

7 h. 1/2. Rendez-vous au Monument des Morts de la guerre. Offrande de gerbes de fleurs aux rubans semés d'hermines.

9 h. Séance d'étude. — Compte-rendu annuel du président.

1^o Organisation régionale du *Bleun-Brug*. Rapport de M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire, président du Bleun-Brug régional de Tréguier-Goelo-Cornouaille.

2^o *Breuriez ar Brezoneg*: sa nécessité, son programme. Rapport de M. l'abbé Cocaign.

12 h. Repas en commun.

14 h. 1^o Les revendications bretonnes et la manière pratique de les faire aboutir. Rapport de M. Ollivier Chevilloite, de Brélès.

2^o Les droits de la nationalité et les droits de la famille, rapport de M. l'abbé J.-M. Gantois, président de l'*Union des Cercles flamands de France*.

20 h. 1/2. Représentation bretonne, *Kerenor*, drame historique en 3 actes, interprété par la troupe de Bourbriac. Ballet breton par le Patronage Charles de Blois.

Entr'actes: Mélodies bretonnes. — Commémoration du Centenaire du maître Thielemans, ancien organiste de N.-D. de Bon-Secours.

JEUDI 10. — 8 h. Grand'Messe solennelle à la basilique.

9 h. Concours divers: chorales, déclamation, éloquence, lecture, etc.

11 h. 1/4. Repas en commun.

13 h. 1/4. Départ du cortège historique représentant l'entrée de la duchesse Anne à Guingamp, en 1505. Défilé des drapeaux armoriés et des anciens costumes de la région Tréguier-Cornouaille.

14 h. 1/2. Grande séance à la Salle municipale, sous la présidence de S. G. Mgr Serrand, évêque de St-Brieuc, Tréguier.

Santez Trifina, pièce en 3 actes, de M. Joanno, interprétée par la troupe de Belle-Isle-en-Terre, sous la direction de l'auteur.

Dans les entr'actes, exécution des morceaux couronnés.

16 h. 1/2. Proclamation des lauréats des divers concours.

17 h. 1/2. Clôture du XV^e Congrès. Salut du Saint-Sacrement à la basilique de Notre-Dame.

An neb a wel sklêr, da belec'h ez a ?

— **D'ar Bleun-Brug !**

N'eus ket pell, eun den hag en deus, sur awalc'h, kalz a dalvoudegez dre e spered, e zeskamant hag e beadra a lavare d'in, o komz eus Breiz: « Er vro-man, emezan, n'eus netra nemet an traou koz ha stumm ar Vro, he mêziou, hec'h ôchou, a gement a c'hell tennan sellou an den; ahendall, n'eus netra! Buhez speredel ebet, krouans speredel ebet, mag el lennegez, nag er filozofiezh, nag en ijinou-kaer. Ar Vretoned n'o deus buhez uhel ebet. »

Daoust m'eo kri, gwir awalc'h eo ar gomz; holl vuhez ar Breton, eur wech desket gantan ar *b a* ha, er skol, eo labourat e zouar ha derc'hed e diegezh; hag awalc'h a gav d'ezan eo kement-ze. Lakit neuze, 'vit e spered, magadurez ar politik hag ar votadeier, ken treut ha ken berr ma heng ar galon outi, ha setu buhez ar c'houer breton.

An dud a beadra, 'vit ar peurvuian, a dro war vuhez Bro-C'hall ha n'eo ket kalz drusoc'h o doare. Ahendall, n'o deus darempred ebet gant ar bobl nemet dre ar c'honversou hag ar politikerezh; re izel e kavont ar spered en o zouez evit gellout rei d'ezo deskadurez; hag evelse an traou a ya bepred war zigouezout, war baouraat, war zisteraat.

Red eo d'ar re wellan, d'ar re speredek an etouez an dud etre ober diouz en em zével int o-unan, o klask diazez o labour, n'eo ket a-ziavêz d'ezo, met enno o-unan, o wellât hag o krenvât enno o donêzonou natur, herez ar re goz.

Daoust ha n'oar ket gouest da vaga d'eur Breton e spered gant menozioù skrivet e brezoneg? D'ober gant ar yez vrezonek, evit sevel pep seurt doare lennegez hag a vefe gwirion ha yac'h hag ês ha sklêr da intent? Eo da, dal ma vo c'hoant. Ne lavaran ket e tizfomp raktal ar bazenn uhela, met, da vihana, lakat a refomp hon spered e doare da bignal, d'en em zevet. Ar spered 'a vo maget neuze, n'eo ket gant ar paourenteachou pemdeziek pe gant siklêzonou ar bolitikerien, met gant menozioù reiz ha santimanchoù gwirion hag eün.

Tra dibqell eo klask, da genta, kelennadurez a-ziavêz d'eomp, d'hor yez, d'hon istor, d'hor bro. Goude m'hon do perc'hennet mat hon feadra hon unan, neuze e vo dâ d'eomp ober hon mad diouz peadra ar poblou all...

An traou-man holl a zo gwirionezioù eus ar re sklêra, ma ne vijemp ket dallet gant lavariou goullo, evel ar « progrès », an « humanité », an « temps modernes », hag a bep seurt touellerez evelse.

Ar *Bleun-Brug*, da vihana, a zo stag mat dâ glask e hent war an tu kontrol d'ar c'hizioù ha d'ar menozioù nevez. Digemerout a ra kement gonid a zo bet grêt diouz tu ar skianchoù; o gwellaat a garfe c'hoaz; diouz tu ar menozioù, avat, e tec'h digant hon amzer, ha n'eus spered ebet ennan ken, hag e klask buhez ha sklêrijenn gant ar Re Goz.

Kenstrivadegoù ar *Bleun-Brug* a zo grêt evit ze, evit boulc'ha al labour speredel a zo d'ober e Breiz, evit kustum ar Vretoned d'ober gant o yez ar pezh a ra ar poblou all gant o hini, n'eo ket hepken eur benveg da zesrevel an holl disterajoù pemdeziek, met ive ar pep uhela eus spered ha kalon an den. Ar Vretoned a deuo evelse dâ vezan sevenet seul-vui ma vo studiet, reizet hag implijet o yez dre skrid.

Ma teufe ar Vretoned da glask adbeva ha da anaout. neuze, talvoudegez ar *Bleun-Brug*, arôk pell e vefe chenet penn d'ar vaz: hon enebourien e vefe kabêstret, an dud dizeblant a vefe gounezet ha pep tra e Breiz a vefe brezonekaet.

Siouaz! ar Vretoned, an darn-vuian anezo, ne c'houlennot ket bevan e doare Bretoned; divoedet int ha diempennet, kement ha ken bihan ma ne gavont ken c'hoant da netra nemet da gement a vag ar c'horf hag a garg ar c'hodell...

Deut d'ar *Bleun-Brug*, c'houi, da vihana, hag a zo skuiz gant trabas goullo ar vuhez a rener hag a zo c'hoant en o kalon da groui e Breiz eus vuhez Vreizad.

Deut d'ar *Bleun-Brug!* Roit d'ezan ho hano hag ho eskodenn; heuilhit e oueliou!

Eur Bleun-bruger.

Holl izili ar *Bleun-Brug* hag ispisial hor c'henvroiz o deus digemeret ar garg da zével ar *Bleun-Brug* e pep rann-vro a zo pedet da oueliou ar *Bleun-Brug* adalek al lun da noz (7 gwen-golo). Pep bureo, kas, da vihanan, *eur c'hannad* adalek ar 7, de ma tigor ar retred.

Deuint ha digasint gante kerent, mignoned, amezeien !

AR BLEUN-BRUG E GWENGAMP

Unan eus ar peziou-c'hoari :

“ SANTEZ TRIFINA. ”

Santez Trifina an Otrou Joanno a zo eur c'hoar da *Zantez Filomena*, da *Zantez Jermána* ha da *Zantez Jann d'Ark* bet c'hoariet gwechall e skol gristen Plijidi hag a reas d'an dud diwardro kement a vad ha kement a blijadur da welet.

Santez Trifina, avat, a vo kalz brudetoc'h eget an teir all; n'eo ket hepken war zigarez ma vo c'hoariet e kêr Wengamp ha gant goueliou ar *Bleun-Brug*, met o vezan, dreist-holl, m'eo ar pez-c'hoari-man, drezan e-unan, trec'h d'ar re all. Peurachu eo da voula ha kavet e vo hepdale da brena gant an droidigez c'hallek da heul.

**

Trifina, evel ma ouezer, a oa merc'h da Werok, kont Gwened, hag a dennas sellou Konomor, kont Poher, pa oa deut ar mare d'ezan da glask e zeizvet pried, lazet gantan c'houec'h all, an eil goude eben. Panevert da zant Weltas hag a dou da Werok ne zigouez droug ebet gant e verc'h, heman ne rofe biken Trifina da Konomor. Gweltas, evit miret ar peoc'h etre an daou gont, evit gounit Konomor hag en deus prometet chench buhez mar en deve ar plac'hig fur Trifina da bried, Gweltas a ra da Werok lavaret ya. Trifina a bleg da youl he zad hag he mamm hag a lavar ya, d'he zro, nemet, emezi, eo rannet he c'halon.

E Kastel-Finans, chomaj kaer Konomor, Trifina a zo evurus, da genta, evel en eur baradoz; adalek, avat, ma zo ketou ganti da vezan mamm, ez eo barnet d'ar maro evel e briejou all, gant ar c'hont milliget.

Tec'hel a ra kuit Trifina, a greiz an noz, gant diou eus he mitizien. E glazennig Sebazi, e kichen ar Sulon, eo tizet, siouaz ha dibennet gant ar bourreo Konomor! Di e tired he mamm hag e tired ive Gweltas, p'en deus klevet ar c'helou spontus. Gweltas a rent da Drifina he buhez en doa kemeret en e garg.

Setu danvez pez an O. Joanno. War an danvez-ze en deus steuet tri arvest, da c'hoari gant merc'hed yaouank, hep na vez gwelet Konomor nemet en eur dremen. Gweltas na vez gwelet ive nemet e dibenn an III^o arvest, pa deu d'ober ar burzud e kenver Trifina.

Tenn e oa skriva eur pez hep lakat ennan an daou denze, daou den, a dra zur, ma 'z eus bet biskoaz en istor Breiz; Gweltas, ken garo e zantelez, evel m'eo yud ha garo fallagriez Konomor; Gweltas, eur seurt Konomor gwestlet holl da Zoue; Konomor, eur seurt Gweltas gwestlet d'an diaoul. Sant Gweltas eo an hini en deus skrivet al levr hirvoudus ha mallozus, *De excidia Britanniae — Dismant Breiz*, — elec'h ma sko, heb eil tro, war siou fall holl dud e amzer, beleien; aotronez, pobl, hag a voe kiriek, emezan, d'ar walenn a gastiz.

Elec'h diskouez d'eomp eta Gweltas ha Konomor, an oberour en deus kaset dirazomp diou vaouez, unan, kannad Gweltas, eben, kannad Konomor, hag eman war gomzou ha war oberou pep hini anezo siell o mistri.

Setu *Mona*, ar baourez koz. Spered Gweltas a zo enni; dispont ha t'er eveltan en he c'hoarzou, pa vez dirak an dud fall; gwir batrom ar Vreizadez koz hon deus ana-vezet gwechall ha ne blegent nemet d'eul lezenn, hini Doue, ha ne ouient nemet diou gomz, ya pe nann.

Na kaerat dremm hini ar plac'h paour-ze, eur glaskerez-bara, hag a wel 'barz an amzer da zont, a zo ken rik, ken leal, ken karantezus en he darempredou gant he mignoned, ken dinec'h, ken t'er, ken dirankon, zoken, pa 'n em gav dirak an dud troet war ar fall, forz pesort galloud a vez o hini!

Konomor na vez ket gwelet, kennebeut ha Gweltas, met eur vaouez all a zo aman hag a ziskouez d'eomp e drubarderez, e fallagriez, e grizder, en eun doare c'hoaz nerzusoc'h eget ne weler o skedi en *Mona* santelez Gweltas. Bazvalen eo hano ar vaouez-ze, dre m'eman he micher, goude m'he devez grêt muntra pried ha mestr, monet da c'houlenn eun all evitan. Bazvalan eo bet seiz gwech! An dra-ze a ziskouez pesort kalon a zo en he c'hreiz. Penôs lakat da bara dirazomp kemend a yudarez? Eo! bezan zo eun diviz, dreist-holl, pa deu Yoland, mamm Trifina, d'he gwelet da Gastel-Finans, hag a zo eun dôlenn veu ha gwirion eus ar gasoni ar gwasu kuzet dindan doareo ken pilpous ma 'z inf hudur. Studiet eun tammik neuziou ar vaouez-ze ha c'houi lavaro: me a ana-vez meur a vreur hag a c'hoar da hounnez!

Trifina a oar eo barnet d'ar maro; ne gred ket e komzou flour Bazvalen nag er promeseou grêt gant Konomor da Weltas. Eur boureo e vo Konomor eviti; bepred ec'h a davetan; kinnig a ra he buhez evit espern hini he c'herent, he c'henvroiz, miret ar peoc'h e Breiz, ma talc'ho ar vro nevez savet da greski evel eur blantenn nevez plantet hag a daol a bep tu skourrou glas. He buhez, avat, a vo falc'het en he bleun. *Mona* a ziougan d'ezi, adalek an arvest kentan, pebez planedenn a zo ouz he gortoz: eur sparfell he deus gwelet demdost da gastell Gwerok. N'eus forz, he mamm, he zad, Gweltas, zoken, en em gav o-zri

unanet o menozioù; Trifina, an durzunell dinamm en em ginnig da breiz d'ar sparfell!...

Maro eo, distag he fenn diouz he c'horf, endro d'ezi hirvoudou ha klemgan, ha setu ma tisken souden diouz an nenv eur c'han dudius: Pa oa maro Lazar, Jezus a ouelas... kan an elez eo, a gerz dirak Gweltas ar zant, a zo o tont da renti he buhez d'ar verzerez...

Red eo gwelet an dôlenn-ze, Trifina maro ha souden heo adarre, gwelet an dôlenn-ze en eur drei e zell war Vreiz... Plijet gant Doue ma teufe eur Gweltas d'ober en he c'henver ar burzud a zo grêt dirak hon daoulagad e Kenver Trifina!

D'achui, ar zantez adsavet e buhez, a gerzo da gaout an « duke Anna » a vo eno, er renk kenta, o heuilh, tôlenn ha tôlenn istor he merzerenti hag a gomzo outi...

Peadra a vo da welet ha da glevet hag ar pezh a vo gwelet ha klevet ne vo tamm 'bet henvel ouz ar pezh a weler hag a glever bemdeiz!

N'eus Breton ebet ha ne glasko bezan e Gwengamp, d'an 10 a viz gwengolo!

**

Da c'hoari eur seurt pezh, an ôtrou Joanno en deus stummet, a bell zo c'hoarierien hag a zo deut, a damm da damm, da vezan, diouz ar pezh am eus gwelet, par d'ar re wella e Breiz. Pep gir a zo distaget gant an ton hag ar vouez a zo red; pep jestr, muzuliet, pep kammed reizet ma seblant pep tra bezan gwir ha dont anezan e-unan, goude m'eo pourchaset dre evez ha dre studi.

Komzet e ve kalz er mare-man eus an tôliou-êsa a zo bet grêt e Pariz da zevel eun teâtr kristen. Aman, e Breiz, a-benn nebeut, e vo gwelet en e zav eun teâtr broadel ha kristen war an dro, a gemero e zavez en istor Breiz, en istor hon zent koz hag hon tud brudet, koutz hag er vuhez pemdeziek, eun teâtr hag a deuio da vezan d'hon bro evel eur vengleuz aour a gelennadurez d'ercat gwirion.

Santez Trifina an O. Joanno a gemero he renk en oberou an teâtr-ze e kichen *Nikolazig* an Otro Bayon.

E.-A. MOAL.

G. S. — An neb a gar kaout bilhiji en arôk evit an 10, da vont da welet *Santez Trifina*, a dle skriva d'an O. Du, kure, e Gwengamp. Ar bilhiji-ze a gousto 4 *real ouspenn*, nemet e vo miret ar plasou.

Priz ar plasou:

Kadoriou kenta: 10 lur.

Kadoriou (eil rumm): 2 skoed.

Bankou: 1 skoed.

Plasou 'n e zav: 4 real.

Au Congrès du Bleun-Brug à Guingamp

CORTÈGE HISTORIQUE

D'une haute signification, parce que l'on y verra figurer côte à côte, sous l'égide de la patrie bretonne, tous les rangs, toutes les classes, ce cortège se déroulera avec le plus d'éclat possible, à travers les rues de la ville pavées et décorées.

Il comprend, jusqu'à présent, quatre parties: 1° une noce bretonne; 2° le cortège historique proprement dit; 3° le groupe des délégations bretonnes; 4° le groupe des acteurs des différentes pièces représentées au cours du Congrès.

Des groupes de chanteurs, de musiciens, de porteurs de drapeaux, des hérauts garniront les intervalles et encadreront le cortège dont chaque partie formera comme un tout complet.

Dans le cortège qui devra revêtir d'un bout à l'autre une note essentiellement bretonne, nul ne pourra prendre place, si ce n'est à l'un des titres suivants:

a) comme figurant de la noce bretonne: les costumes bretons modernes, Tréguier, Créolo, Cornouaille, Léon, Haute-Bretagne, seront de rigueur.

b) Comme attaché à la suite de la Duchesse Anne: Le costume breton ancien (xiv-xv^e siècle) de dame, de chevalier, de héraut, de page, etc..., etc... est exigé.

c) Comme membre d'une délégation de Société bretonne: Aucun costume spécial n'est requis. Les délégués devront, autant que possible, être porteurs de l'insigne de leur Société et se grouper derrière son drapeau.

d) Comme acteur: Ceux-ci seront revêtus du costume qu'ils portaient en scène.

e) Comme membre d'une chorale: Chanteurs et musiciens se grouperont par Société, sous la direction de leurs chefs.

f) Comme porteur de drapeau: Ceux-ci, jeunes gens et jeunes filles, porteront le costume de leur région, de note ancienne, autant que possible, châle de couleur, tablier, grand coiffe (katiolen).

Pour tout ce qui concerne le cortège, s'adresser à M. Plaire, Guingamp, président du Comité local.

An ti heb ene

Nevez so, e Pariz, ministr an Deskadurez, an O. de Monzie, deut da zigeri an ti breton savet evit an diskouezadeg a zo eno ha hanvet *Ti Breiz*, a lavaras dirak ar Vretoned a oa deut di 'vit ar gouel e oa mat d'eomp miref hon doare sevel lojeiz, hon « Art » breton; hon yez, avat, ne wele ket da beira e oa mat her miref.

Ar Vretoned a oa eno a stagas neuze da gana Soniou brezonek, hag ar ministr a deuas aon d'ezan na gouezje koad an ti war e gein hag a glaskas toull an nor.

Setu aze eta eun den hag a zo ministr, da lavaret eo, dalc'het, dre e garg, da vezan bepred-hegarat, amgraüs, an disteran komz eus e c'henou o talvezout kalz, hag an den-ze a lavar dichek d'ar Vretoned, en o zi broadel, a zo evito evel Breiz e kreiz Pariz: « Ezomm ebet d'eoc'h da viret ho yez! »

Eur freilhad eo hounnez, mar hon deus bet biskoaz hini, o vezan ma teu ar gomz eus a-bers an neb ma teu, ha m'eo bet lavaret el lec'h m'eo bet lavaret.

Ministr an deskadurez, e Pariz a ziskleri hep troidell n'hon deus ket ezomm da viret hon yez; — an dra-ze a dalv da lavaret e fell d'eomp her miref dreist da bep tra, gant kement a breder ha ma viomp hon feiz alc'houez ar vuhez da zont; rak ar brezoneg eo evidomp alc'houez ar vuhez a-vreman.

Da betra kaout eun « ti Breiz », (evel m'eo pep hini en hor bro) ma ne vez ket a Vretoned o chom ennan? Ha pesort Bretoned a vo o chom ennan ma n'ouzont ket a vrezoneg? An O. de Monzie a lavarfe kerkoulz all d'eomp: Mirit ho kwiskamant; an dra-ze zo brao da welet; met dilezit ho yez! — Mirit an diavêz ha dilezit an diabarz! Mirit ar c'horf ha mougît an ene!

Komzou ha n'o deus na penn na lost, « plataj » evel ma lavarer aman, — nemet ha disklêria a rafent, ar c'hoant bras en deus gouarnamant Pariz d'en em zizober diouz ar brezoneg. Eno eman an dalc'h!

Nous faisons appel, pour le cortège de la « duchesse Anne », aux Bretons et aux Bretonnes des divers cantons de Léon, Tréguier, Cornouaille, Vannes et de Haute-Bretagne. Qu'ils viennent revêtus de leurs plus beaux costumes, afin que nous puissions avoir à Guingamp, le 10 septembre, une pleine vision de la grâce et de la richesse de notre Pays.

LABOURIOU AR MERC'HED WARDRO AN TI

Kenteliou Tintin Anna

VII^e PENNAD

Al louzeier madoberus

Pa deuas ar boan er bed, dre ar pec'hed, an Aotrou Doue, leun a deneredigez evid e grouadurien a gemeras truez outo: astenn a reas e zourn war an douar disto hag ouz pep geotenn zister e stagas eun nerz. Neuze e lavaras d'an dud: « Ar c'hlenved a zo kouezet, warnoc'h ha war ar re a ziskenno ac'hanoc'h, dre ar pec'hed; met me, mat en ho kenver bepred, am eus laket al louzou e kichen ar boan; klaskit gand aked, rak e pep louzaouenn am eus kuzet ar c'halloud d'ho parea pe, da nebeuta, d'ho tivec'hia. »

Na peger madelezes eo Doue; ken troet eo ouz eurus-ted e vugale ma rank sec'ha o daerou kerkent ha m'en deus o c'hastizet.

Keit ha ma vevin e talc'hin sonj eus va zonton Job, breur va zad koz, war ar studi oa bet, c'hoant mont da veleg en doa nemet en doa ranket dont d'ar gêr eus ar skolach abadamour m'en doa nebeud a yec'hed; ken dies en doa kavet an taol-ze, ma oa bet tost d'ezan mervel gand eur gwall-derzienn.

E-doug e vuhez e chomas du-man; ast en deveze atao ouz al levriou, daoust ma ne c'helle ket poania kalz war-no; diouz an noz e konte d'eomp danevellou kaer ha diouz ar mintin, abred, eur baner ouz e vrec'h, ez ea da gutuilh louzeier er c'hoajou tro-war-dro. D'ar poent-se n'oa ket tost kement a vedesined ha breman ha va eontr en doa brud da veza desket; alies e teue tud da c'houlenn ali digantan diwarbenn klenvejou, biziadou, taoliou fall; kaout a rea eul louzaouenn ouz pep poan hag evit paeamant e lavare: « Pedit Doue evid eun den paour! »

Hardis oan outan pa n'oan ket bras c'hoaz. — Hizio daoust m'oun kosoc'h n'oun ket kalz brasoc'h, — hag a-wechou e lavaren: « Tonton Job, fist ac'hanom da-vont ganeoc'h warc'hoaz ha me a zougo ha paner! »

Ar paotr yaouank koz gant habaskded a asante bep tro, ha da c'houlou-deiz, en hanv, ez eamp hon daou dre ar

gwennojennoù, tonton Job krog em dourn ha me krog er barner: ne vezemp gwelet nemet gand al laboused: ar filiped, dispont, a zelle ouzomp: an driskli hag ar mouilc'hi a gane pe a zute a-us d'hor penn. An hini koz, mignon da Zoue, dre e vuhez santel, a ouie evel Hor Zalver, komz ouz ar vugale: ne vezen ket inouet oc'h ober va zro; deski a raen gantan meur a dra diwarbenn al louzeier hag o galloud; deski a raen ivez karet va bro ha va Doue, rak ne vanke ket da verka d'in madelez hor C'hrouer ha kærded hor Breiz: « Eun dudi eo, a lavare, beva en eur vro ker koant; digor da fronellou, Annaïg, da ruffa ar c'houez vat a deu eus an douar; lounk, leun da skevent, ezenn yac'hus hor mêziou, dinammet gant freskadurez an noz; ar vogidell dano a weles en dro d'eomp a zo boued-heol; eun devez tomm ha brao a vezo adarre!

Bennoz da Zoue da veza graet an noz d'an dud, d'an anevaled ha d'an traou da ziskuiza; bennoz d'ezan p'en deus hol laket, pell diouz trubuilhou ar bed ha tost d'e oberou; sell, dastum ar boked bleun-skao-ze; divezatoc'h e tiskleriin d'it evit petra oa laket aze gand hon Tad a zo en nenv! »

A-raok treuzi ar foennog a oa demdost d'an ti, va contrkoz a lamm e voutou hag a gerze diarc'henn er gliz. « evit beza tostoc'h da zouar benniget Breiz-Izel ha nevezi e vuhez dioutan! » Me a gemere skouer warnan; va zreid, el leton gleb, e kerzen dinec'h, er riskl da veza gwelet gant va mamm ha gourdrouzet. Pet gwech em eus sonjet ennan abaoe pa gleven hano eus ar vedesined a c'hourc'hemenn d'an dud vlank pe nervennus bale-diarc'henn, er c'hlaenn a-raok ma vez savet an heol, e lavaren ouzin va-unan: « Al louzou-ze a oa kavet, en o raok, gant va zonton-me! »

**

Setu aman an diverra eus ar pezh am eus desket gantan: ne livirin ket a hano d'eoc'h eus kement louzaouenn a zo er prajou pe er c'hoajou, met hepken eus ar re a en em gav, an alies, dindan hon dourn.

An askol

An askol a zav stank en hor parkeier, en hol liorzou hag ouz hor c'hleuziou; kutuilh a reamp anezo da ober tizan; lakaat a reamp da virvi en eul litrad dour wardro eun hanter gurtouroun deliou pe c'hwriziou, ha pa deue unan bennak da gaout va zonton evit klevet ali diwarbenn an daroned, an tign, ar c'hlenved-avu, an uriou pe an derzienn-velen, e kemenne d'ezo eva eul litrad bemdez eus an evach-ze da gas an douriou fall er mêz ha da grenfaat o gwad.

Ouz ar paz e lavare e oa mat lakaat eur verennad tizan askol, diouz ar mintin hag eun all diouz an noz, en eur banne lez-bervet sukr ebarz, hag eva ez-tomm.

Ar brulu

Arabat d'eoc'h, a-vat, mont da ober tizan brulu, rag ar brulu a zo eur poezon krenv; n'eo ket dâ d'eun den kemeret katz anezan evit beza tumpet pe, da vihana, evit heugi, abañ, dislounka pe alteri.

Ar vedesined a ra implij eus ar brulu ouz an droug kostez gant terzienn pe « bleuresi », ouz an droug-skevent, ouz al lamm-kalon, met gwella a zo da ober eo gedal o ali war an dra-ze.

En diavêz n'eus ket a riskl evit gwalc'hi gant dour brulu, eun dourn, eur vrec'h pe eun troad koenvet: vad a raio zoken.

Ar c'haol garo

Ar c'haol garo, e galleg *la bourrache*, a vez kavet, el liorzou, en hanv; o bleun a zo glaz evel an oabl; ar gwennañ a gav warno pep tra d'ober o mel.

Bleun ar c'haol garo a veze dastumet ganeomp bep bloaz ha laket da zec'ha en disheol; 10 gramm eus ar bleun-ze bervet en eur banne dour a ra eul louzou eus ar gwella ouz ar paz, ouz leskadurez ar poull-kalon, ar ruzell hag ar skarlatin.

An deliou fresk, drailhet ha laket war ar goriou, an izili devet, ar gouliou, a dorr ar boan, rak distana a reont.

Ar c'haol-malo

Ar c'haol-malo, anavezet gand an holl a zo eun tenzor all en hon touez!

O bleunioù a vez graet implij anezo ouz ar paz hag an teuret gwad hag ivez, evel ar c'haol-garo, ouz ar ruzell hag ar skarlatin.

An deliou hag ar gwriziou a c'heller ober tizan ganto evel gand ar bleunioù; a-hent all, va zonton a alie an dud da zomba o biziadou en dour kaol malo klouar, da lakaat war ar puniezi hag an izili koenvet eur palastr graet gant deliou pe c'hwriziou kaol malo fresk evit distana o foan.

Ar flemm-douar

Al louzaouenn-man, *fumeterre*, e galleg, n'eo ket anavezet a-walc'h diouz ar sklerig a livirin hano anezi pelloc'h; alies e vez kemeret an eit evid eben ha koulskoude n'int ket henvel; ar flemm-douar a zav uheloc'h hag ar bleun a vez outi a zo ruz-wenn; an tizan diwarno pe diwar an deliou a ro merz ha c'hoant da zibri.

Bep bloaz e kutuilhemp eur guchennad vat a flemm-

douar ha Tonton Job a ouie ober « sirop » d'eomp ganto; sonj am eus atao eus ar vlaz a oa ganto; pa c'hellemp paka ar vured-ze diwar ar siminal e veze lipet hag adlipet, troet ha distroet; den ne c'hine evid eva eul loiad, teir gwech bemdez, evel ma c'hourc'hemennè va eontr koz, pa veze an dogen pe ar prenvéd ouz hon hegal.

Setu aman penaos e vez aozet ar sirop-ze: wardro eum hanter-kartouroun flemm-douar a laker da virvi en eul litrad dour; eun tammig muioc'h ma 'z eo sec'h al louzaouenn; eun tammig nebeutoc'h ma 'z eo glas; p'o devez bervet epad eun hanter eur e vez lammet diwar an tan ha silet; dre eul lienenn dano; goude e vez laket da virvi adarre abalamour d'ar sukr da deuzi rak eul lur hanter a sukr a laker neuze.

Oh! Tonton Job, servicher mat da Zoue, pegement a vad hoc'h eus graet edoug ho puhez!

Ar gwez kraon

Diou wezenn graon a oa e kichen ar presbital, diou pe deir all e kichen ar maner; pa 'z aen da ober eur gefridi bennak, en eil ti pe egile, e veze roet d'in eun dournad kraon, avalou pe spezard, diouz ar mare; va zonton ne vanke ket d'am c'hentelia: « Ar spezard, pôtrezig, a zo distanus evel an avalou; espern an aval-man d'az preur en deus poan, en e skouarn; poaza a rin anezan emberr, er fourn pe e ludu an oaled da takaan war e boan. »

Ar c'hraon a zo eol enno; an eol-ze a zo eur spurj skanv, mat ouz ar prenvéd; debr kraon; ne c'hellont nemed ober vad d'it; goulenn ouz an Aotrou Person eur guchenn zeliou kraon; n'eus ket gwelloc'h d'ober tizan d'ar vugale vlank evel da c'hoar gosa; eva a raio eur skudellad bep mintin war yun hag an dra-ze a grenfalo anezi; an dour diwar deliou kraon a zo mat ivez ouz ar glaziou hag ar gouliou; alia a ran c'hoaz da zouba, en dour-ze, ar vugale taget gant droug-ar-roue; ouz ar goanvennou hag an droug daoulagad e rafen implij anezan ivez ma 'm bije eur maread. »

Ha me, d'ar red, d'ar maner pe d'ar presbital, goude beza debret ar frouez em beze bet!

Morse ne veze lavaret nann d'in ha me ne lavaren nann da zen ebet ken nebeut: « Eur guchenn zeliou kraon d'am zonton, mar piij! »

— « Sell, Annaig, mar keres ez pezo ivez bleun tilh ha deliou on; hennez a vezo lorc'h ennan hag ar polotez-man a gasi ganez da zibri, en eur vont d'ar gêr: berroc'h e kavi an hent. »

An on

20 gramm deliou on, bervet en eul litrad dour, a zo mat tre ouz ar remm: eur banne diouz ar mintin hag eun all diouz an noz.

Evel an deliou kraon, an deliou on a neta ar gwad; ar piketez deliou on am eus komzet anezan a zo ivez eun evach yac'hus e pep doare.

Ar bleun-tilh

Prest goude Gouel Yann e ranker kutuilh ar bleun-tilh; alies e vez tro d'ober tizan diwarno; pa vez poan-benn, c'hoant dislounka, pa jom ar boued da stanka sac'h-ar-boued, pa vez krenienn, terzienn pe glenved nervennou. Ar vugale a vez dalc'het gand ar c'hlizienn a ra vad o gwalc'hi e dour diwar tilh.

An deliou draillhet munut a c'heller lakat war an izili devet koulz ha war an daroued.

An ilio

An ilio hag a zo ker brao da welet p'en em ledont evel eur vantell war ar mogeriou koz a zo talvoudus d'an neb a oar pe seurt galloud a zo roet d'ezo.

Kemeret a c'heller da ober eur spurj 10 pe 15 eus ar boulou a zo stag evel frouez ouz an ilio.

Ouz an droug-penn, al lamm-kalon, ar c'hlenvejou nervennus, e kemerer daou vanne bemdez eus eul litrad gwin gwenn a vezo bet, epad daou zervez, eur c'hartouroun had ilio *bruzunet* ebarz. An deliou fresk a ra vad ouz an dev hag ouz droug-sant-Anton (erysipèle) ouz ar gouliou hag ouz ar goriou doareet fall; sukr malet pe gannell *bruzunet* a lakaer c'hoaz war ar palastrou.

Eun delienn-ilio, dalc'het er gwin-egr epad peder eur war nugen pe ouspenn, a bareo laket alies ha dalc'het war al lec'h klanv epad peder eur war nugen all.

Eun dournad deliou ilio, en eur banne gwin-egr, a zo eul louzou mat ouz ar gal; lod a lavar ez eo mat ivez ouz an drouk-dent pa laker eur guchenn c'hoalenn ebarz ouspenn: gwalc'hi ar c'henou pe c'hourgoullat anezi gantan.

Evit netaat ha nevezi an dilhad du, an holl her goar, ne 'z eus nemed o gwalc'hi gant dour hag a zo bet bervet deliou ilio ennan.

An ilvoud

Estreget gant flemm-douar e raer sirop. Kutuilhit bleun ilvoud, lakit sukr, ar memez pouez; kemmeskit nezo war an tan hag ho pezo eur sirop, ouz ar paz hag ouz ar boan nervennou.

Ouz ar c'hoenv, ar c'hlenved-avu, e c'heller lakaat 150 gramm, eus koe'hen fresk an ilvoud; en eul litrad gwin gwenn hag eva eur banne pe zaou, bemdez.

Al linad

An izili a zo poan enno koulz hag ar re a en em gav sounnet a zo mat skei anezo gant skourrou linad; an draze a zigas tommder er c'horf hag a laka ar gwad da redet.

Ouz an droug-skevent ar vedesined a ro ali da virvi 10 gramm had linad, en eul litrad dour; sila hag eva gant sukr ebarz ha geur melen vi. Dour diwar linad, eul loiad bep hanter eur, a lakaio eun den hag en devezo tapet riou da c'houezi; pa stag ar fri da wada e ra vad lakat er fronellou, eun tamm « outat » soubet e sun al linad pe ivez.

Ar Roz-ki

Eun dra vat eo dastum bep bloaz eur guchennig bleun roz-ki; evit meur a dra e vezont kavet; d'ar vugale gant ar gwent int dreist; birvi eun hanter-litrad dour war daou ventad bleun sec'h; an hevelep louzou a zo mat ouz ar paz, an dreo, ar ruzell ha kement terzienn a zo.

Ne vije fin ebet ma stagfen da niveri an holl bindidigezioù a zo kuzet pe a-wel war an douar, evit hon ezomm pemdeziek.

Ha c'hoaz n'em eus ket hlanvet:

An *treuz-c'heot*, ouz ar paz hag ar c'hoenv, ar *c'haol* ouz ar paz ivez; deliou kaol tommet a zo mat da lakaat, evit palastrou, ouz ar boan-izili;

Ar *sklanvaj* ouz an droug-daoulagad, an trouc'hiou hag ar glazioù;

Ar *bleun-skao* ouz ar paz, ar c'hoenv, koulz en diabarz hag en diavez.

Ar *sarjanted* o deus ar c'halloud da barea an dogenn, an tign, da grenfaat ha da netaat ar gwad; o deliou a zo mat, o gwriziou, gwelloc'h c'hoaz; o lakaat a c'heller da virvi gant gwriziou an *teol* o deus an hevelep galloud; an *troell*, e zeliou a zo eur spurj krenv; ar *sklerig* ouz ar gwenoennou ha kaledennou; eur c'hontamm krenv eo rak-se ar gwella eo chom heb ober implij anezan, a hent-all. An *trichin*; an deliou draillhet, poazet, kemmesket gand eun tamm lard teuz a laka ar pigezi, ar goriou, an eskiji da zirenta; an *ognon* a zo henvel; ar galonenn tommet ha kemmesket gand eun nebeudig sukr hag eun nebeudig aman dizall a laka ar goriou da viri.

Hag ar *ment*, al *lore* ha kant ha kant all o deus muioc'h a dalvoudegez an eil eged eben.

Pec'hed eo, a lavaran, chom hep deski d'ar merc'hed pe d'ar botrezed anaout al louzeier hag o galloud; beva a reont war ar mêz, bresa a reont bemdez, gand o zreid, ar c'heotenn brisius, hep sonjal trugarekaat Doue eus e vadoberiou nag ober implij vat anezo.

Lennerien ger, ma c'hellfen lakaaat en ho klalon, eun tamm anaoudegez vat evit hor mestr hag eun tamm karantez evit Breiz.

Met nebeut a fizians am eus; en deiz a hizio e rear muioc'h a stal eus an dud hag an traou a deu eus a bell bro eged eus a re ar vro!

Louzeier a vez digaset eus ar broiou estren; tud a deu war hon aochou eus ar broiou all ivez; ar re-ze a vezo sellet outo ha graet muioc'h a stad d'ezo eget d'ar genvroiz; ar re-ze a vezo kredet atao n'eus fors pegement a ziotachou a deuo ganto.

N'eus ket ouspenn daou vloaz edon en tren, da zeiz-varc'had; er penn all d'ar wagon e oa eur vaouez a zaou ugent vloaz pe wardro; he fenn teo dindan eun tok du a oa henvel ouz eur vlonegenn, en eur bodez; he bleo, rodillet tro-war-dro, a zebiante beza silzig krazet er fourn; n'oan ket nec'het e oa bet o lakat he dilhad gand eur forc'h ken diskempenn all ha m'oant; he daouarn, hirr ha ledan a lakeas ac'hanon da zonal e diou roenv a-hed he c'horf; n'oa zet a ezomm da zellet diou wech outi evit gouzout n'oa ket kiniterv d'hon Dukez Anna.

Teodet dreist e oa avat! O sant Eozen, alvokañ ar Vretoned, na pebez alvokadez he devije graet hounnez; glaourenni a rea ar pez ma c'helle ha tud a gave d'he selaou ha d'he c'hredi, siouaz!

« Ya! merc'hed, emezi, ar vro-man he deus graet he amzer ha n'eo ket re abred; d'an traon ho prezoneg hag ho kwiskamanchou koz; komzit galleg mat, eveldon-me, lakit eun tok hag e vezoc'h koulz itronezed ha me! Pemzek vloaz a zo em eus kuitaet va farrez ha n'em eus bet morse a geuz d'ez; tud diwarlerc'h evel ma 'z eus dre aman, ken em eus mez o tiskouez kartennou-post, hag a zo tud ar vro-man warno, d'am c'henvroiz nevez! »

Gant trouz an hent houarn ne gleven ket kalz, hag ouspenn-ze n'oun ket desket kaer war ar galleg, met eur plac'h yaouank, em c'hichen, a droe d'in ar pez a entente; droug a oa ennoun, hen anzav a ran, rak gwelet a raen e oa prest an dud da lounka he hoil zotoniach, da drei kein d'o zi ha d'o yez, abalamour d'al lavariou dibenn ha dilost o doa klevet.

« Digor ar prenestr, va merc'h, emeve d'eun amezogez, ma 'z aio marvailhou ar varmouzeze er mêz! » Eur fô a oa ivez ebarz en tren.

Ar vreizadez, nac'herez he bro, a lavaras, en eun huanadenn: « *One trouve agré d'ouvré le fronette.* » — « Hola! emeve, petra eo al lavar trefoet-man? »

D'an ampoent e oa savet, en tren, eur wreg yaouank, eur c'hrouadurig etre he divrec'h; azeza a eure demdost d'eben-ha gant plijadur e sellen ouz gwiskamant he farrez douget ken brao ganti ha gant he faotrig, ouz he dremm laouen, ouz he sell dispont. Pa wellas gant pebez

lorc'h e tislepe al lastez parizianez he c'haoziou faos, pa welas dreist-holl pegement a c'henaouerien a oa en dro d'ez e kemeras perz en diviz: « Ha gwir eo? N'eo ket evit farsal eo emaoec'h o rei an atiou-ze d'eomp? Lakaat eun tok *eveldoc'h c'houi!* Komz galleg *eveldoc'h c'houi*; c'houi ne gomzit na galleg, na saozneg, met ar pezh a c'halver e galleg « *charabia* » ha n'ouzoun ket penaos ne faout ket ho mellezour bep tro ma 'z it da ziskouez d'ezan ar pezh a welan; lavaret e vije graet emaoec'h dic'hizet evid eur pezh farsus bennak! Savomp en hor sav, hon diou, da c'houzout e pe lec'h eman an dud divezat! »

An dud, mantret da genta, a stage da c'hoarzin; eun ozac'h yaouank a lavaras: Ah! ta! Mari-Anna, dao d'ez! Mari-Anna a gendalc'has: « Gwelloc'h e vije bet d'eoc'h, mil gwech, chom en ho pro nevez, eget dont, da gounta sorc'hennou ha gevier dre aman! Pa livirit n'ho peus ket a geuz d'ho parrez eo gevier; anez ne deufec'h ket en dro, hizio! »

Va c'halon goz a dride gand al levenez; seblantout a rea d'in gwelet Breiz he-unan, eur Vreiz adsavet, forc'hus eus he amzer dremenet, ha war he barlenn eur Vreiz nevez, Breiz an amzer da zont, gouest da respont, evel ma 'z eo dleet d'ar vourderien a zo o klask he diskar en eur ziframma diganti he yez pinvidik hag he gizioù hep par.

Barrek omp d'en em jacha hon unan; n'eo ket da d'eomp klask mont na da barizianed na da Zaozon; bezomp Bretoned, start en hor Feiz, evel hon tadou koz hag e kavimp ar gwir hent da veza tud a-raok.

TINTIN ANNA.

Ar spont er Bulgari

An dispac'herien

An holl a oar ar freuz bras a zo bet hag a zo ato er Rusi. Abaoe 1917 an dispac'herien a zo ar vistri. Diskaret o deus ar tzar diwar e dron ha lazet anezan gand e wreg hag e vugale. Lazet o deus ar re holl a zispliche d'ezo, ar re a glaske enebi outo. Gellat o deus kaout evito unan an armou, kanoliou, fuzuilhou, ha n'eus mui dirazo nemet tud dizarmet n'int ket gouest d'en em zifenn hag a rank plega ma n'o deus ket c'hoant da veza lazet pe daolet er prizon.

Pegement a dorfejou euzus a zo bet graet er Rusi, den ne c'hellfe lavaret. N'int ket anavezet holl, ne vezint ket

anavezet araok 10, 20 vloaz pe ouspenn, ha lod a jomo kuzet evid ato.

N'eo ket a-walc'h da zispac'herien ar Rusi lakaat ar spont en o bro. C'hoant o deus ive da lakat ar freuz er broiou atl. Eur c'hi klanv, kounnaret, ne c'hell ket chom hep taga ar chas hag al loened all. An dispac'herien ne c'hellont ket ken nebeut chom heb ober droug. Hag eus ar Rusi ec'h en em zilont er broiou all, da zeski an doare da zismantri pep tra, da deurel d'an traon ar peoc'h hag an urz vat.

Graet o deus o labour divalo er Bulgari, n'eus ket pell. Ar Bulgari, unan eus broiou ar Zav-heol en Europ, a en em lakeas, epad ar brezel bras, a du gand an Alamaned hag a voe trec'het evelo. Hag o veza m'he doa c'hoaz graet brezel, daou vloaz araok, ouz an Turked, ar Bulgari a voe lakaet en eur stad truezus meurbet. Kernez, klenvejou, kaon, die bras, an holl walleuriou a gouezas warni d'he flastra. Ha pa 'z a fall an traou en eur vro, neuze eo e vez klevet an dud oc'h en em glemm ha neuze eo int gouest da drei gand an hini a ouezo touella anezo, komz brao d'ezo. Dont a reas dispac'herien ar Rusi da deurel eol war an tan. Lakat a rajont an dud diwar ar mez ha micherourien ar c'heriou d'en em zével ouz ar c'houarnamant. Klask a rejont diskar ar re holl a oa e penn ar vro, evid en em lakat en o lec'h.

Ar c'houarnamant, dre lakat kalz evez, a c'hellas harpa. Met er bloaz-man, d'ar 14 a viz ebrel diweza, e voe adarre freuz ha spont. An dispac'herien a glaskas dont da veza en eun taol ar vistri, o laza ar roue hag holl bennou bras ar vro, ha setu aman ar menozioù diaoulek a zavas en o spered: laza ar roue da genta, ha da c'houde, da zeiz an anteramant, pa vije an holl bennou bras bodet en iliz, lakat eur vombezenn dynamit da darza dindan toenn an iliz hag o laza holl dindan an tammou mein ha koad.

D'ar 14 a viz ebrel diweza, da veurz ar zizun zantel (er Bulgari), ar roue Boris a oa bet o chaseal gant tri pe bevar eus e balez, hag edo o tistrei en eur c'harr-dredan; en em gavet en eun izelenn, menezioù endro d'ez, e klevas tennou fuzuilh; eur voled a zrailhas ar werenn war e garr hag a c'houlias ar bleiner en e benn. Kerkent pemp pe c'houec'h dispac'her a zifouchas hag a gendalc'has da denna taolioù fuzuilh; ar blienier a gollas e benn hag a lezas e garr da vont e-unan, hag e voe warnez koueza en eun toull-down. Ar roue en em zifennas kalonek, hag a drugare Doue ne voe ket tizet; daou eus ar re a oa gantan a voe lazet.

Met penaos e raio an dispac'herien evit dont a benn eus an taol diaoulek o deus aozet? N'eo ket lazat ar roue; penaos e vo gellat evelato boda kalz tud en iliz-veur? Setu aman: En deiz-ze, 14 a viz ebrel, epad m'edo an holl e kêr-benn Sophia hag er vro a-bez o selaou ar c'helleier

hag o tiskouez levez e veza m'oa bet ar roue saveteet, evel dre vuzud, da eiz eur eus an noz, daou zen a denas tri denn pistolenn war eur jeneral, Konstantin Gheorgieff, epad m'edo o tistrei d'e di eus Kambr an Deputeed. Ar jeneral a varvas el lec'h m'oa bet skoet, hag an daou vuntrier a c'hellas tec'het.

Daou zervez goude edo anteramant ar jeneral en iliz-veur, d'ar yaou-gambrlid (er Buigari), hag ar pennou-bras eus kear a ziredas d'an iliz-veur, evel m'oa dleet, evid enori ar jeneral lazet en eun doare ken euzus. Ar roue n'edo ket en iliz-veur, rak en deiz-ze hag en eur-ze edo ive, en eun iliz all, anteramant an hini a oa bet o chas seal gantan hag a oa bet lazet en eur zifenn anezan.

Hogen, ar vuntrerien, an dispac'herien, goude beza en em glevet gand ar c'hloc'her, eun den fall ive, o doa lakaet eur vombezenn dynamit en eun tu bennak e bolz an iliz, diandan an doenn, hag o doa ijinet eur benveg bennak evit gellout lakat an tan enni hag ober d'ezi tarza d'an eur m'oa doa c'hoant.

E kreiz an anteramant, p'edo leun an iliz, e voe klevet eun trouz spontus; ar vombezenn, o tarza, a freuzas bolz ha toenn an iliz, ha kalz tud a voe lazet pe vac'hagnet. Etouez ar re varo ez oa trizek jeneral, mear Sophia, merc'hed ha bugale zoken.

Ar vinistred a voe glazet, nann lazet, ha, gand aotre ar roue, e kemerjont an tu da ziuall an urz vat ha da viret ouz an dispac'herien d'en em lakat e penn ar c'houarnamant.

Meur a hini eus an dispac'herien o doa en em glevet evid an taol fall-ze a zo bet gallet dibrizonia ha barnet int bet d'ar maro.

Met taoliou all ken euzus a c'hoarvezo c'hoaz, gwech en eur vro, gwech en eur vro all. An dispac'herien, tud hep feiz na reiz, ne reont ket muioc'h a van o laza eun den eged eur c'higer o laza eul feue; n'eo ket tud int, met loened kriz, bleizi, ha gwas a tra a c'hellfe en em gaout gand eur vro, eo kaout en he fenn hevelep tud.

Dever an holl dud a urz eo en em unani da harpa ouz an dispac'herien, ha dever eur c'houarnamant eo poania da rei deskadurez vat d'ar vugale, da lakat doujans Doue en o c'halon, rak hep doujans Doue ne c'hell beza war an douar na peoc'h nag urz vat.

J. U.

Gouel ar Bleun-Brug eo gouel ar Vro, gouel tud ar Vro, dreist-holl, an dud diwar ar miz, rak int o deus miret, ar gwellan, doareou ar Vro, ha, dreist-holl, he yez, ar brezoneg.

Labourerien, tud diwar ar miz, deut niverus da Wengamp, an 10 a viz gwengolo!

VIKTORIA KONAN A ZANT-LUK

Leanez e Retred Kemper
gilhotinet e Paris d'an 21 a viz Gouere 1794

Distro da Vaner ar Bot.

An itron S^c Luc, o welet penaos e tremene an traou, a skrivas d'he merc'h: « Kaout a ra d'in e vije ker-kouls d'it dont aman. N'ez eus ket muioc'h a riskl en hor maner eget e leandi ar C'halvar. Aman eo sioul an traou. Ne welomp den. A-unan e lavarimp ar pedennou. Ma ro ar Zuperiorez aotre, e kasin unan bennak d'az kerc'hat da Gemper. »

Ar Zuperiorez a asantas, ha Viktoria en em dennas eur pennad e ti he zud, da c'hedal petra c'hoarvesfe e Frans.

Ar brezel a gendalc'he dre ar vro. Ar veleien vat a veze taolet er prizon ha kaset d'ar broiou all. Leanez ar C'halvar, e Kemper, a voe ive kaset ermeaz eus o zi d'ar 14 a viz gwengolo 1792, ha dilezel a rankjont o dilhad Leanezed.

E maner ar Bot oa trist an traou. An tad, koz, ha klanv alies gand ar remm, en doa kalz poaniou da c'houzanv. Ar vamm, leun a enkreiz, a oa ive gwall-eürus, n'ez oa mui nag er maner na wardro beleg katolik ebet.

Viktoria a boanias da gennerza ha da frealzi he zud, da lakat eun tamm levez en ti.

Met daou viz goude ma tistroas, an aotrou S^c Luc gand e familh a voe kaset eus e vaner da Gemper, el lec'h ma chomas c'houec'h sizun, diouallet evel pa vije bet eun den fall, gouest d'ober droug.

Goude c'houec'h sizun, e c'hellas dont adarre d'e vaner, met hiviziken n'en dezo mui peoc'h ebet ken. Eman arru an amzer denval, amzer ar Spont. An dud fall a zo mistri en hor bro, hag e lakaint an dud vat da grena. Ar roue Louis XVI a zo dibennet d'an 21 a viz genver 1793, hag an dud jentil, ar re a zo tamallet da veza a du gand ar roue, a vo holl e riskl da goll o buhez.

Viktoria a skrive, da Wener ar Groaz 1793: « O va Doue, lakit doun em c'halon ho komzou: « Eürus ar re o deus da c'houzanv! Eürus ar re o deus da ouela!

Eürus ar re a zo gret brezel d'ezo evid o lealded. Grit d'in kompren eo ar groaz an hent berra evit mont d'ar Baradoz... Ah! pegen kaer eo gouzanv poaniou p'hon eus Doue da dest, Jesus Krist da varner ha da skouer, hag ar Baradoz d'hor paea! Kompren kement-se, o va ene c'houzanv, ha bez laouen e kreiz da boaniou. Perak ne rez ket evel mignoned ar Groaz, evel sant Andre, a lavare, o welet dirazan ar groaz: « O kroaz vat, a c'heden abaoe pell amzer; »; evel sant Jann ar Groaz ne c'houlenne nemet kroaziou evit pae d'e labourou; evel sant Fransez Xavier, a grie, e kreiz e boaniou brasa: « C'hoaz, va Doue! »; evel santez Thereza a c'hoantae pe « c'houzanv pe vervel »; evel santez Madalen a Bazzi ne c'hoantae beva nemed evit gouzanv pelloc'h hag a lavare: « Ne ket mervel, met gouzanv eo a fell d'in! »; evel an holl verzerien, soudarded kalonek Jesus Krist a veze ken laouen e kreiz an tan, ar poaniou kriz, o veza ma komprenent n'ez eus netra enorusoc'h d'an den eget gouzanv evid e Zoue...

« Setu aze peseurt menozioù a dleer kaout pa vez start ar feiz. Va Doue, grit m'am bo anezo ha ma komprenin ne c'hall en em gaout ganen netra talvoudusoc'h eget rei va buhez evidoc'h...

» Evel ma c'hellan beza skoet pa zonjin an nebeuta, hep kaout amzer d'ober mat va zakrifiz, a-vreman, a greiz kalon, ec'h en em ginnigan holl d'eoc'h hag e tigemeran kement a c'hoarvezo. Diskleria a ran zoken aman, dirag ho kroaz, e pardonan a galon vat d'ar re holl a c'hellfe va lakat d'ar maro. Ra denno va gwad warno nann ho kounnar, met ho pardon hag ar c'hras d'ezo d'en em drei ouzoc'h...

» Fiziants am eus, va Doue, da gaout pardon diganeoc'h, o veza ma pardonan va -unan, hag, evel al laer dehou, ez in eus ar groaz d'ar baradoz. Evelse bezet gret. »

Setu ar bedenn gret gant Viktoria dirag ar Groaz, da genver an deiz ma varvas ar Zalver. Evel a weler, ne c'houlenn nemet beza merzerez. He goulenn a vo roet d'ezi, hag evel He Mestr, Hor Zalver, e skuilh he gwad d'an oad a dri bloaz ha tregont.

Edo ar Spont e Frans. E pep lec'h tud fall oc'h ober aon d'ar re vat, e pep lec'h tamallerien divalo o tis-kuilh o enebourien d'ar varnerien kriz.

Epad ar c'houec'h sizun m'oa bet e Kemper gand he zud, diouallet evel tud fall, Viktoria a voe galvet

dirag al lez-varn diwarbenn ar skapularou he doa roet d'an aotrou Laroque hag a oa warno skeudenn ar Zakr. Gret e voe d'ezi kalz goulennoù troi-dellus, Viktoria a respontas war eün, gant lealded, d'an holl goulennoù, souezet o welet ober enklask war draou ken dister. Pa zistroas da gaout he zad hag he mamm, ankeniet oc'h he gedal, e lavaras d'ezo petra a oa c'hoarvezet, hag e oa laouen o konta d'ezo petra he doa respontet, hag e kave d'ezi oa klozet an abadenn-ze.

Siouaz! n'oa ket klozet. An aotrou Laroque hag e vreur a voe galvet ivez ha nao miz da c'houde e vezint e Paris, dirag an tamaller kriz, Fouquier-Tinville, hag heman a lavaro edo an daou Laroque a-unan gant tud ar Vande rak ar re-man ivez a zouge skeudenn ar Galon Zakr. Hag abalamour d'ar skapularou roet d'ezo gant Viktoria, an daou Laroque a vezo dibennet.

Hiviziken familh an aotrou S^t Luc n'he dezo mui peoc'h ebet. Pa ne vo ket er prizoun, e vevo e maner ar Bot e kreiz an enkreiz, war c'hed eus pep seurt trubarderez ha poaniou kriz.

D'an dek a viz here 1793, ar vatez a zistroas eus ar marc'had da vaner ar Bot, en eur ouela. Pa voe goulennet outi perak e ouele. « An archerien, emezi, a zo erru d'ar maner; an aotrou a vezo kaset da brizon Keraez, hag ar re all da brizon ar Faou. »

Eur c'hart-eur goude, ec'h en em gavas an archerien war varc'h. An aotrou a oa klanv, en e wele. Mestr an archerien a lavaras d'ezan: « Grit buan. Hirio, e tleit holl kousket e prizoun ar Faou, ha warc'hoaz e vezot kaset holl da brizon Keraez. »

An tad, ar vamm, Viktoria hag unan eus he c'hoarvezed, a rankas eta kuitat o maner. N'ez ajont ket d'ar Faou, met war eün da Geraez.

Hospital Itron-Varia-a-C'hras, ennan gwechall Leanezed a Urz Sant-Augustin, a oa breman laket d'ober prizon. N'oa na kador, na taol, na gwele. Loustoni hepken, setu petra gaved e prizon Keraez. Skuiz gand ar veach, hag ouspenn klanv, an aotrou S^t Luc n'en doa ket eur gwele da gousket, war ar plench e rankas en em astenn.

Bez 'z oa kalz tud e prizon Keraez, tud a bep stad hag a bep oad, gwazed, merc'hed, tud vat, tud fall, a bep seurt.

Ar pezh a roe eun tamm frealzidigez d'ar familh S^t

Luc, eo m'edont holl en er gichenn. En o c'hambred c'hellent ober tan hag aoza o-unan o boued. Bemdez e veze digaset eun dra bennak d'ezo eus ar Bot. Met ar pez a rae brasa poan d'ezo, eo ma rankent chomato en o c'hambred. Difennet oa mont el liorzou. Alies e veze lammet diganto kement o doa, war zigarez m'oa ezomm da gas peadra d'ar zoudarded a zifenne ar vro.

Viktoria, er prizon, a lakeas he holl aked da skanvat poaniou he c'herent ha d'ober vad ive d'ar brizonierien all. En em ziskouez a rae laouen e kenver an holl; dre he nerz kalon e c'helle trec'hi an enkreze he doa da c'houzanv evel ar re all. Skrivet he deus eno ar c'homzou-man, lavaret gand Hor Zalver er Jardin Olived. « Va ene a zo trist beteg ar maro. Ar c'homzou-ze, o va Jesus, a gredan o lavaret eveldoc'h. Endro d'in eman mantell ar maro, ha ne c'hell dont em c'halon nemet glac'har.

« Pa zonjan e poaniou ar veleien, em c'herent, em mignoned harluet; pa zonjan en ti am eus kuitaet; pa welan ne c'hellomp ket beza frealzet gand ar zakramanchou a rafe d'eomp kement a vad breman, ez oun ankeniet meurbet.

« Ouspenn-ze, gwelet a ran an dud fall, oc'h en em gemeret ouzoc'h, o pec'hi dre o c'homzou hag o oberou. Er prizon zoken, e lec'h ober pinijenn, meur a hini zo ha ne glaskont nemet tro da c'hoarzin, da gaout plijadur.

» Truez, va Doue. Goulenn a ran pardon evidon hag evid an holl dud. Skuilhit warnon grasou ho Pasion hag ho maro. Santellait va foaniou dre ho re ha grit ma vezint talvoudus evit paea dle va fec'hejou. »

Evit tremen an amzer, e skrive. Skrivet he deus zoken notennou farsus, a-unan gand he c'hoar, war ar vuhez o doa e prizon Keraez. « Kloza a ran va skrid en eur lavaret eo talvoudus beza er prizon. N'emaer mui evel a-raok, evel eul labous war ar skourr, hep gouzout, d'ar pardaez, ha gellet e vo kousket e peoc'h beteg ar mintin. Aman, o sevel diouz ar mintin, omp sur e vezimp adarre diouz an noz en hevelep lec'h. N'hon eus mui aon da veza paket, p'e gwir eo gret an taol ». Ha goude traou farsus, e skrive traou poellek: « Goude ar glao e teu an amzer vrao... Ar pez a fell da Zoue a zo ato evid ar gwella ha talvoudus meurbet d'ar re a dle beza salvet. Ar pez a ra d'eomp hor mistri hirio a zo evid hon divoumouna. Desket hor

bezo petra omp gouest d'ober, pegen bras eo hon nerz, eun dra ha ne ouiemp ket araok, Doue hon Tad a gattiz ac'hanomp, met ne glask nemed hor mad. Ar groaz eo alc'houez ar baradoz, ar skeul hon zikouro da bignat war ar menez a gas d'ar wir eürusted...

Ouspenn skriva, e kare ive liva. Desket he doa gwechall linenna ha liva, hag ijin he doa, traou brao a ouie ober. E prizon Keraez, e livas skeudenn he c'hoar Euphrazi hag a zo koant meurbet. Ober a reas ive e Keraez skapularou gant skeudenn ar Galon Zakr.

D'ar 27 a-viz genver 1794, da genver an deiz m'oa bet badezet, e skrivas an traou kaer-man: « Petra c'hellin kinnig da Zoue evid an holl vadou en deus roet d'in? Evelse e c'hellan komz hirio, va Doue, o sonjal er vadelez dispar hoc'h eus bet d'am c'hemeret etouez ho pugale, e lec'h kalz a re all a zo e tenvalijenn ar maro.

» Ma z'eus anaoudegez vat em c'halon da genver an deiz-man, ez eus ive enkreze ha glac'har, pa zonjan er pec'hejou am eus gret abaoe va Badiziant hag o deus saotret ar zae wenn a oa bet gwisket d'in neuze. Ah! ra c'helfen gant va daelou goalc'hi va holl fec'hejou ha lakat adarre kaer bras va ene.

« Poaniet oun ive, o veza ma ne c'hellan ket en deiz-man evel m'oan boazet, goalc'hi va ene e gwad va Zalver na beza maget gand e gorf sakr. Setu aze adarre eur sakrifiz a ginnigan da Zoue evit paea an implij fall am eus gret eus ar grasou prizius skuilhet warnon. Ra blijo gameoc'h, va Doue, en ho madelez, va frealzi eur wech bennak, ha ma vevan er bloaz a zeu, ra vezin eürusoc'h eget er bloaz-man! Ra c'hellin c'hoaz, araok mervel, tostet ouz ar zakramanhcou!

« Dale'h sonj, va ene, out bet badezet, ha dre ar Vadiziant sin ar groaz merket war da dal a dle rei d'it nerz da zougen kroaz Jesus Krist, ha zoken, da vervel war ar groaz gantan, eveldan evitan, ma c'hourc'hemmen kement-se.

« Ranna a rin gant va Zalver kalir e boaniou, digantan e tigemerin an holl boaniou a-unan gantan. Evelse e tlean diskouez d'ezan va anaoudegez vat. Da 33 bloaz eo e peurachuas e zakrifiz. En oad-ze out en em gavet. Ha ne vefes ket laouen da veza laket henvel ouz da Zoue, o vervel d'an oad en doa? Alies e peus c'hoantaet ar c'hras-ze. Marteze e c'hoarvezo ganez.

Abaoe an tri bloaz am eus ranket dilezel ti karet.

ar Retred, ho peus va freparet, va Doue, dre veur a boan, d'ar vuhez a c'houlennit marteze diganen hirio. Ma n'eo ket bet ato va c'halon laouen ha birvidik er boan, evelato oun bet, a-gav d'in, sentus e pep tra hag habask, daoust da zempladurez an den. Gand hevelep menoziou e kinnigan aman d'eoc'h va buhez, hag e tigemeran ar maro en deiz hag en doare ma plijo ganeoc'h, aman pe e lec'h all, hep beza frealzet, sikouret gant den, dre ar c'hleze, dre an tan, dre an naon, dre an dienez; ar pezh a c'hoanteot hag evel ma c'hoanteot. C'houi eo va Doue, ha va buhez a zo etre ho taouarn. Eun dra hepken a c'houlennan: saveteit evid ar vuhez peurbadus eun ene hoc'h eus prenet gand ho kwad. »

Lavarit d'in, ha kaeroc'h ene a c'helfed da gaout? Ha n'eo ket evelse eo e komz ar zent?

Viktoria e prizen Kemper

D'an 31 a viz genver 1794, daou archer a zeuas da brizon Keraez da ziskleria o doa urz da gas Viktoria da Gemper, rak goulennoù a oa d'ober outi eno.

He setu ma rank dilezel he zad, he mamm, he c'hoar, hag en hent da Gemper. Ha perak? En amzer griz m'edod neuze, ez oa lec'h ato da gaout aon.

Eur gwall bennad hent a zo eus Keraez da Gemper, Viktoria a bignas war varc'h, hag a gerzas etre an daou archer, dre ar glao hag an avel. E Pleyben, e kavas lojeiz e ti unan eus he migonezed eus ar Retred, a-reas d'ezi digemer kaer. Antronoz ez eas adarre en hent dre eun amzer falloc'h eget en deiz a-raok. « An hini hon hentche, emezi, a gemeras eun hent treuz, evit trouc'ha berroc'h; n'en em gavjomp war an hent bras, nemet dirak Kerfeunteun. Dre strejou dies spontus e voemp kaset, strejou n'oa enno nemet dour. Va marc'h, ouspenn, a oa born, ha n'am oa stleug nemet dioc'h eun tu, ha zoken n'en doa-en e benn nemet eur c'habestr, pa voe digaset d'in, met klask a ris eur westenn da lakat d'ezan, ha mat am eus gret, rak anez em bije torret va fenn. Eur wech e kouezas warnon, met gellout a ris, gand ar westenn, e lakat da zavel, ha n'am boe droug ebet. Ar glao a goueze heb ehan: dour war c'horre ha dour dindan. Goalc'het eun bet ha va gwad, re domm araok marteze, a zo bet didanet. »

Epad an hent, e welas meur a hini, eus ar merc'hed a oa bet kelennet ganti er Retred, hag e tiskouezent d'ezi beza anaoudek ha poaniet ive eus ar pezh a c'hoarveze ganti. Viktoria a responte dre gomzou a garantez hag a beoc'h.

D'an eil a viz c'houevrer, diouz ar pardaez, daoust m'oa skuiz gand he beach, e skrive: « Pegen prizius e voe an deiz-man evidon, daouzek vloaz zo! En deize, digaset gant va eontr ha va mamm vat, a-unan gant Jesus en Templ, e kinnigis va buhez d'eoc'h, va Doue, en ti santel am oa gret va zonzj da vervel ennan... N'eo mui henvel an traou. Plijet eo ganeoc'h, va Doue, chench doare d'ezo. Met an deiz hirio, ha ne dle ket beza ive prizius evidon en eur c'hiz all, p'e gwir e ro tro d'in d'en em vouestla d'ar groaz evel eun hosti laouen oc'h en em ginnig da Zoue.

« M'ho peus neuze digemeret gant plijadur ar galon a ginnigen d'eoc'h, hirio, fizians am eus ho peus adarre digemeret gant plijadur an hini en em ginnige d'eoc'h, ambrouget gant daou archer, pignet war eur c'hoz marc'h, ha treuzet gand ar glao hag an avel.

» Dont a rean, heb her gouzout, met breman ec'h ouzoun, dont a rean da brizon an dorfetourien da Gemper.

» Hag a zonzjou a zo deuet em spered epad an hent hir ha poanous am eus gret, pa laken ar veach-man e kemm gand ar veach a ris daouzek vloaz zo! Met pebez frealzidigez, evelato, pa gredis lakat va beach e kemm gand ar veach a rajot o vont d'ar C'halvar, gand ho kroaz pounner war ho tiouскоаз, e kreiz hoc'h enebourien oc'h ober goap hag o krial warnoc'h. Ah! pegen eürus oun da veza eun tammig henvel ouz va Fried. Doue. Doue! Ha re eürus e vezin, ma plij d'ezan va unani gantan en e groaz!

» Ha ne dlefen ket, evel an ebestel, lammet gand al levenez o veza m'oun bet kavet din da c'houzanv eun tamm dismegans evid hano Jesus Krist? N'oun ket c'hoaz pignet ken uhel-ze, kredi a ran lavaret, goulskoude, e santan ho kras em c'halon, hag emañ breman leun a nerz, hag am eus frealzidigez, peoc'h, levenez dreist sempladurez an den, ha c'houi hepken, va Doue, eo a ro d'in kement-se. »

Antronoz e voe lennet dirazi skrid an tamaller Fouquier-Tinville, eus a Baris, a lavare do, a-unan gand an daou vreur Laroque, o klask sikour tud ar Vande

a eneb ar Republik. Ha galvet oa da vont da Baris, dirag al lez-varn a goundaone neuze kement a dud d'ar maro.

Skriva a reaz, d'ar bevar a viz c'houvrer d'an dimezell Marigo, Superiorez Dimezelled ar Retred:

« Oc'h en em ginnig, d'an eil a viz c'houevrer 1792, en ho ti santel, da zervich Doue, unanet gant Jezuz en Templ, e tigemeran kement e c'hoantae Doue, evid ar vuhez hag ar maro. Ma n'eo ket plijet gantan e tremenfes e peoc'h va buhez er Retred, ma c'hoanta e kinnigfen d'ezan va buhez, evel m'en deus kinniget e-unan e hini, ha d'an oad en doa, war eun aoter leun a c'hwad, ha ne dlean ket beza eürus ha benniga ato e volontez santel ha karantezus?

» Ma z'oun bet galvet da Gemper, ha ma tlean mont da Baris, eo abalamour d'an daou Laroque-Tremaria, abalamour d'ar skapularou a oa warno ar Galon Zakr. Ma varvan, e c'hellan lavaret e vezin laket d'ar maro enep pep gwir, evid eun dra santel, hag e c'hellin kemeret va maro evel eun eil Badiziant am goal-c'ho eus va fec'hejou, m'am eus ar c'hras-ze digant Kalon Jesus leun a drugarez.

« Va mamm vat, na vezit ket eta re boaniet evid ar pez a c'hoarvez gand ho merc'h, hag en em unanitan evit kinnig da Zoue, gant nerz-kalon, ar zakrifiz a c'houlenn.

N'hon doa ket c'hoaz a verzerien en hor familh eus ar Retred. Ha ne vijen ket re eürus, ma vijen ar genta? Met ar pez am laka souezet eo ma z'eo me an hini a zo bet dibabet, daoust ma n'oun ket din. Met dre eno eo e weler madelez vras Doue, ha kredi a ran eo va eontr en deus gounezet d'in ar c'hras-ze evit va zikour da baea evit va fec'hejou. Evel grasou ive e kemeran an nerz hag ar peoc'h a ro d'in, ha, kredi a ran lavaret, ar frealzidigez, al levenez am eus da veza bet kavet din, evel an ebstel hag hor beleien santel, da c'houzanv eun dismegans bennak evid hano Jesus. Hervez ar c'hig hag an natur, va stad n'eo ket dereat, met da zaoulagad ar feiz, eo a briz bras. Hervez kenteliou sant Paol, e klaskan ato kennerza va c'halon o talc'her va daoulagad troet war Jezuz Krist a zeu digantan ar c'hras, ha fizians start am eus, o kemeret war an douar eul lodenn eus poanioù va Zalver, da gaout eul lodenn eus e c'hloar. Kenavo, ha marteze evid ar Baradoz. »

A nebeudou ene Viktoar a bigne uheloc'h uhelwardu Doue, wardu an Nenv. En em zistaga a rae muioc'h mui bemdez diouz traou an douar.

Ezomm he doa eus nerz Doue evit gouzanv ar poanioù a gouezas warni. E prizon an dorfetourien, e Kemper, e voe lojet en eur gambr vras a oa enni daouzek martolod saoz, merc'hed prizoniet evit laerez, ha tud all c'hoaz. E kreiz an dud-ze Viktoria a en em ziskouezas laouen, war he dremm ez oa evel eun tamm eus sked an neny, hag ar re a wele anezi a oa souezet o veza ma c'helle dougen e peoc'h, heb en em glemm morse, eur stad ken truezus.

En derveziou kenta, goude ma voe prizoniet e Kemper, an dud hec'h anaveze a c'hellas dont d'he gwelet, ha e teuas kalz tud d'ar prizon. Kement-se ne blijas ket d'an dud kriz a oa mistri e Frans, ha gant aon ne vije klasket tenna. Viktoria eus he frizon, ne voe aotreet den ebet mui da zont d'he gwelet.

Evelato unan eus he c'hoarezed, Anjelic, dimezet d'an aotrou de Silguy, o chom teir leo diouz Kemper, a zeuas a benn da vont er prizon, hag eur wech hep sizun a welas he c'hoar. Poan ha glac'har he doa, skler eo, met ive souezet oa ha frealzet eun tammig o welet pegen santel oa Viktoria, pegen kaer oa he ene.

Eur vaez all a glaskas mont d'ar prizon, an Dimezell Marigo, Superiorez ar Retred. C'hoant he doa zoken da veza taolet he-unan er prizon evit beza e kichen Viktoria, d'he c'hennerza. Viktoria a anavezas c'hoant an Dimezell Marigo, a drugarekas anezi hag he fedas da dremen he amzer er peoc'h hag o pedi el lec'h m'edo kuzet, ha d'en em ziwall evid an Dimezelled all, evit beza o mamm adarre divezatoc'h.

Viktoria a oa galvet da vont da Baris. Evelato tremen a rae an amzer, hag e chome ato e prizon Kemper. Mont da Baris, ober eur veach ken ker, ken skui-zus, a sponte anezi, hag e skrivas he-unan da Fouquier-Tinville, an tamaller bras e lez-varn Paris, da c'houlenn beza barnet e Kemper pe e Brest. Displega a rae skler hag eün, n'he doa gret torfed ebet, ne zonje ket beza enebourez d'ar vro o rei daou skapular d'an aotrou Laroque-Tremaria; n'he doa anaoudegez ebet eus an aotrou Laroque a oa e Lorient; ar pez he doa gret a oa eun dra dister ne c'helle noazout da zen ebet na lakat freuz er vro; abaoe pemzek pe ugent vloaz

oa boazet d'ober skapularou, traou santel ha dereat evid eur vaouez en em vouestlet da Zoue.

N'oa ket a lec'h, a gave d'ez, da vont da Baris evid eun dra ken dister. Ma ranke goulskoude beza barnet, e c'houlenne ma vije barnet e Kemper pe e Brest.

Viktoria a c'hedas ar respont d'he lizer. Met skrive he doa da eun den didruez hag a oa klozet e zious-kouarn da glemmou ar re wall-eürus.

Respont ebet ne zeuas, ha Viktoria a jome en he frizon euzus. He c'hoar Anjelic a lavar d'eomp petra c'houzanve: « Pebez poaniou! emezi. Ar prizon a oa lous, spontus. Ouspenn-ze va c'hoar a gleve pep seurd traou gand ar brizonerien nevez deuet ha gant ministred ar c'houarnamnt a dremene alies dre ar prizon. »

Etouez ar brizonerien e voe diou vaouez fallakr meurbet, a reas da Viktoria gwas a c'helljont. Houman a oa madelezus en o c'henver, a ranne ganto kement he doa. An diou vaouez-ze, fall evel al lorgnez, a laere ar pez a jome gant Viktoria, a lavare traou d'ez, a skoe ganti gant kement a gounnar, ma voe eur wech hanter dorret eur vrec'h d'ez hag he dremm roget gand ivinou an diou druilhenn. Viktoria n'en em glemmas morse. Porzier ar prizon eo a zisklerias an traou-ze da Anjelic, c'hoar Viktoria. Houman a reas ar mad e lec'h an droug hag a entantas, gant madelez eur vamm, ouz unan eus an diou vaouez-ze a gouezas klanv. Entent a reas c'hoaz ouz eur c'hlanvour all, eur marc'hadour c'hoalenn, taolet er prizon evit beza kriet: « Buhez hira d'ar Roue! » Epad m'oa klanv, e teue dioutan eur c'houez ken krenv ha ken fall ma pellae ar re all dioutan muia ma c'hellent. Viktoria a jomas en e gichen hag a reas d'ezan gwella ma c'hellas evid e barea hag e frealzi.

Epad daou viz e chomas e prizon Kemper. Abenn ar fin oa karet ha doujet gand an holl. Ar porzier a anv e anezi *ael ar prizon*, hag, e gwirionez, dre he habaskted, he madelez, he dremm ato laquen, oa henveloc'h ouz an elez eged ouz an dud. Ma karfe, he dije gallet tec'het eus ar prizon, rak d'ar fin ne veze ket taolet kalz a evez warni. He mignonezed a alie anezi da gemeret an tec'h, met ne fellas ket d'ez klask tec'het, gand aoun da noazout d'ar porzier, hag ive — selaouit mat ar geriou-man, — « gand aoun da goll kurunenn ar verzerenti kinniget d'ez. »

Mont a ranko da Baris. Met ne oar ket peur. Chom

a ra leun a nerz, hag ar peoc'h a zo en he c'halon. Eun dra, evelato, a ra poan d'ez. Ne c'hell gwelet beleg ebet, hag e karfe kaout an absolvenn eus he fe-c'hejou, a-raok mont en hent d'ar maro. Ober a reas eun naved da zant Fransez Xavier, evit kaout ar c'hras-ze. Selaouet e voe he fedenn. Klevomp anezi he-unan o konta penaos:

« *E prizon Kemper, 23 a veurs 1794.*

» Dont a ran, va mignonez ker (an Dimezell An Arc'hantel), da lavaret d'it eur gerig er pellennou-man. (Lakat a rea he zammou liziri endro d'eur belenn neud).

» Da lizer en deus grêt d'in ar brasa plijadur. Gellout lenn ho liziri ha gellout skriva d'eoc'h, netra gwelloc'h d'am c'halon.

» Hiviziken ne c'hellin ket skriva ken. Difenn zo. An dra-ze a gavin poanius, dreist-holl pa vezin e Paris. Met ret eo senti ouz Doue hag ober evel Jezuz-Krist a zo bet sentus betek ar maro.

» Abaoe eiz dez, eo strisoc'h hor buhez aman. Muioch a evez a doler warnomp... Ne ket beza lojet fall, bevet fall, beza e kreiz al loustoni eo a ra poan d'in. Kement-se n'eo netra. Met chom hep gellout komz na skriva d'ar re hor c'har, gwelet tud klanv dare da vervel hep gellout rei d'ezo sikour ar relijion, beza e kreiz tud fall, ne reont nemet pec'hi, setu petra ra poan d'in.

» Met penos e c'hellin konta d'it an taol a skoas va c'halon, pa voe digaset aman, eiz dervez zo, eur beleg kez; an aotrou Riou, person Lababan, a voe dibennet antronoz; kinnig a ris arc'hant d'ar porzier evit gellout e welet, met ne c'hellis ket. Doaniet oan, hag e tremenis an noz o pedi Doue da zont d'am zikour, hag o c'houlenn dre zant Fransez Xavier ar c'hras a c'hoantaen.

Efin, d'al lun vintin, dor hor c'hambra voe digoret eur pennadig. En em zila a ris goustadik betek al lec'h m'edo an aotrou Riou; e c'helver a ris evit lavaret d'ezan ar c'hoant am oa da reseo sakramant ar Binijenn. Dies e kave an dra-ze, gand aon da noazout d'in. Evitan, n'en doa mui da gaout aon rak netra.

Met ker bras oa va c'hoant, ma c'hellis kas va menoz da benn. E traon ar skalier e lakis eur prizonier a dlie sutal ma vije pignet ar gedour. An dud a oa e kambra an aotrou Riou o doa, epad an noz, gret

eveldon, hag e lavarjont d'in ez afent er penn uhela d'ar gambr, pella ma c'heljent. Ouspenn-ze, ha goude m'eo dije klevet eun dra bennak eus va c'hovesion, ne rean ket a forz, nemet e c'hellfen kaout an absolvenn. Ober a ris va c'hovesion, a-dreuz an nor, hep mont dre ar munud, met Doue, a lenn er galon hag a wel pep tra, a gemer ar pezh a c'heller rei d'ezan. An absolvenn am eus bet he deus karget va c'halon a levez. Nerz he deus roet d'in, ha gwelet a ran aze eur merk eus madelez Doue a fell d'ezan va frepari da boaniou all.

« Karet am bije gellout chom pelloc'h da gomz gantan. Eur zant gwirion eo, eur merzer da Jesus Krist. Aet eo d'ar maro evel d'ar c'hloar, dispont. Ar c'he-dourien o doa poan o tale'her anezan, kement a vall en doa da vont d'ar c'hilhotin. Ah! hen diskleria a ran, kinniget em eus va buhez da Zoue, ha laouen bras e vijen bet o vont d'ar c'hilhotin gand an aotrou Riou. Prometet en deus pedi evidon en Nenv, ha lezet en deus ganen an traou santel en doa. E japeled hag eur groaz vihan a gasan da ranna etre an dimezell Marigo ha te.

« Kenavo. Marteze evid ar wech diveza. »

War a gontar, barner Kemper a glaskaz savetei e vuhez d'an aotrou Riou. « C'houi ho peus 60 vloaz » emezan. — « Nann, eme an aotrou Riou, eun nebeut miziou a vank d'in c'hoaz. »

M'en dije bet 60 vlaz, ne vije bet dibennet, met dalc'het er prizon pe gaset d'an harlu.

Ar bourreo ive, a lavarar, a grene en eur lakat an aotrou Riou d'ar maro. « Va mignon, a lavaras ar beleg, na gren ket; buan e tremeno ar boan a ri d'in, ha pardoni a ran d'it va maro. »

Dibennet e voe d'ar 17 a viz meurzh 1794.

Bretoned o deus roet o skoazell d'ar Bleun-Brug

An O. Delisse, Montauban-de-Bretagne.....	500	lur
An dimezel a Gervenguy.....	50	—
Chaloni Kergus, person Panvrit.....	20	—
Abad Clisson, kure, Landreger.....	100	—
Abad Noel, kure St-Nikolas-ar-Pélem.....	15	—
Abad Guillou p,erson Ptuá.....	10	—

WAR VOR

*War zao, em bag, ar stur em dorn,
Eul al lun beteg ar zadorn,
Dre ar mor bras ez an;
D'an deziou riou, d'an deziou gor,
A-stok ar wern va gouel digor,
Dienkrez e kerzan.*

*Pa vored ar wagenn didrouz,
Pa lip he zeod ar c'herreg rouz,
Warni va bag a ruz;
Ouz he gouel truilh, ouz he gouel paour,
An heol laouen, gant e vez aour,
A stag elvennou ruz.*

*Pa glev ar mor rust o krozal,
Pa wel o lammet war he zal,
Ar gwall darziou, gwenn-kann,
Va bag, em dorn dalc'het ganen,
A droc'h he ero en eonenn,
Nerzet gant va diskann.*

*Pa vlej ar gurun en oabl du,
Pa he fouet ar mor en daou du,
Pro grog ar went enni,
Va bag a ra fae ouz o freuz
Ha, sounn he fenn, an tarz a dreuz,
Hep zoken moulbenni.*

*War-raok e kerzomp evelse,
Hep kaout aon, hep krena morse,
Rag Doue eo hor blein;
Hon daou e kerzimp, deiz ha noz,
Ken na vo eus e varadoz
Ganeomp stoket al lein;*

*Ha ken na vo, eun deiz bennag,
Digoret frank d'in ha d'am bag
D'vrec'h e Vadelez,
Ha ganeomp, echuet hon tro,
Taolet an cor, war god hor Bro,
Bro ar beurbadelez.*

J. L'HELGOUALC'H,
O. M. I.



Pardon bras sant Visant Ferrier E GWITALMEZE

Eur pardon kaer, kristen ha breizad, war an hevelep-
tro, eo bet pardon Sant Visant Ferrier (1), e Gwitalmeze,
d'an 23 a viz Eost diveza.

An amzer, gwasa pezh a oa n'edo ket a-du; daoust da-
ze e c'heller lavaret e oa eno pemzek pe ugent mil den.
Pa ris va diskenn, an taol-lagad kenta, war ar gouel, a zoue-
zas ac'hanoun: ne welen nemet galleg en dro d'in: *Hon-
neur à Saint Vincent*; hanoiou ar parrezioù deuet gant o-
frosesionoù d'ar pardon, Sant Derc'hen, ar Vourc'h Wenn,
Plougerne hag all a oa galleget holl: « Petra eo kement-
man, a liviris d'am mignon Ab-Mael a oa deuet d'am
diambroug? »

« Nebeudig a dra, a drugarez Doue, emezan; bremaik
er yourc'h ne weloc'h nemet brezoneg. »

Hag, e gwirionez, pelloc'h, war eur warez a enor, e len-
nis ar c'homzou-man: *Ra deuo peb unan da rei gloar ha
meuleudi da Zont Visant!*

A-zioc'h an nor-dal goloet a vanniellou herminiget e we-
len: *Sant Visant, pedit evidomp.*

En iliz, aoter nevez sant Visant ne oa nemet skriteelloù
brezonek endro d'ez.

BURZUDOU SANT VISANT

873 diskleriet

Maga 'ra pobladoù tud;

Skuba ar barrou arne;

Skarza ar vosenn;

Rei ar prezeg d'ar ve vut,

Ar c'hleved d'ar re vouzar,

Ar pare da villierou,

Ar vuhez d'ar re varo.

Kloc'h ar burzudou

SANT VISANT FERRIER.

Dalc'hit ar Feiz

en hon touez.

SANT VISANT FERRIER

ganet e Valans 1357,

Kelenn 'ra d'e zek vloaz;

(1) Ober a raet ar pardon-ze evit enori, a-nevez, eun askorn eus-
dourn sant Visant — 1357-1419 — embanner bras ar Varn ziveza,
bet roet da Witalmeze, breman ez eus tost da 500 vloaz, gant
mamm ar c'hardinal Koativy. Ar releg-ze kollet eoad amzer an
dispac'h a zo bet adkavet n'eus ket gwall bell hag a zo graet
eun dourn arc'hant d'her miret.



SANT VISANT FERRIER

Hervez eur skeudenn great en amzer ma veve

Prezeger ar Varn;
Entetet eo gand an holl;
Trec'h eo d'an diaoul;
Pinienn galet a ra
Hag a ra ober d'an dud;
Anaout a ra an traou kuzet
An amzer da zont
Maro e Gwened 1419

Doujit Doue
ha rentit enor d'Ezan.

Er gador-brezeg gand an A. Derrien person ar barrez hag gand an A. Messenger, Rener Kloerdi Kemper, ne glev-jomp nemet brezoneg; ar ganerien ne ganjont meuleudi ar Zant nemed e brezoneg.

E gwirionez, ar pardon a oa ker breizad ha ma oa kristen hag eun dudi e oa d'eur breizad kemeret perz ennan.

Setu aman eun diverra eus prezegenn gaer an oferenn-bred:

Ni a zo deuet aman hizio da drugarekat ha da bedi sant Visant.

Hor Zent koz a zo deuet eus a Vreiz-Veur; sant Visant a zo deuet eus ar Spagn; hor Zent koz o deus hadet ar feiz; sant Visant en deus skoret anezi p'edo toc'hor.

Breman ez eus pemp kant vloaz stad hor bro a oa truezus; red e oa brezelekaat ouz ar Zaozon hag ouz ar C'hallaoued evit dere'hel ar frankiz ha chom digabestr ha gwasa, pe z a oa, endra ma stourment ouz an estren, ar Vretoned a ranke c'hoaz en em zrailha ken etrezo.

Brezel a oa, da lavaret eo, damant ebet ken nag evit buhez, nag evit danvez, nag evit brud vat an nesa; ar Feiz, e Breiz, a yea d'an traon ha Breiz a yea da bagan adarre. Doue a gemeras truez ouz hor Bro hag evit he dere'hel etre divrec'h Jezuz-Krist e tigasas d'zei unan eus ar brasa ebistel a zo bet biskoaz; « Kea, heb aoun, emezan da zant Visant, rag me a vezo ganez ! »

E Breiz eman; galvet eo enni gant he duk; Breiz a-bez a zo ouz e c'hortoz ha breman ne lezo ket anezan ken da dec'het diouti; ar zant, diouz e du, a en em ro da Vreiz; prezeg a ra en Naoned, e Gwened, e Kemper, e Lesneven ha, dre ma'za, ar vro a-bez a zired d'e wellet, ha d'e glevet.

Ho tud koz d'eoc'h c'houi, Gwitalizmeze, a yeas, a verniou, d'e zelaou da Lesneven; kelennet int bet gantan; stantaet int bet gantan en hent mat; aman, hizio, livirit bennoz d'ezan evid ar boan en deus kemeret gant ho tud koz, bennoz d'ezan evid ar vad en deuz graet d'ho Pro.

Trugarekañt sant Visant, met pedit anezan ivez.

Hen anzao a rankomp ha pa zavje mez war hon tal, hor Breiz a dec'h diwar an hent mat, evid en em rei d'an dizurz ha d'ar pec'hed.

Petra deu ar zud da veza? Eñ devéz a zizurz.

Ar gwener? Eun devez a bec'hed.

Ar yaouankizou petra glaskont?

Plijadur.

Hag ar gerent petra reont?

Lezel o bugale da gerzet war hent an ifern heb ober

eun holl vad evid e stanka outo; alies, zoken, e c'heller lavaret, emaint, o-unan, o tegeri an hent-ze d'ezo.

Sant Visant en deus touet e vije alvokad Breiz e lez an Aotrou Doue; goulennomp outan renta ac'hanomp gwir gristenien hiviziken.

Sant Visant evit gounit kalonou an dud a gomze d'ezo, dalc'h mat, eus ar varn ziveza: « Ma n'ho peus ket heuliet hent gourc'hemennou Doue, emezan, an ifern ho founko! » Ar zontj-ze a ziframmas hon tud koz diwar an hent a gas da goll.

Ni a oar a-walc'h e vezo hon ene taolet dirag ar barner, goude hor maro; ni her goar, met me bouezomp ket a-walc'h ar wirionez-ze; sant Visant, en han Doue, sankit anezi en hor sperejoui! Ni a zo bresk, c'houi a zo galloudus! Deuit war sikour ho Pretoned ho pedas, ho ped hag ho pedo bepred!

**

Da ziv eur, ar glao a baouezas hag ar prosesionou a reas tro ar vourec'h evit mont d'ar blasenn foar; eno, diwar eut leurenn kompennet kaer, an A. Duparc a reas eur brezegenn hag a voe klevet gant an holl, dre ma oa kaset e vouez gand an uhel-gomzerez betek pennou pella ar blasenn; kemeret a reas tro eus ar releg santel e oad deuet da enori evid ober meuleudi an dourn: « Goude ar galon hag an empenn n'eus ezel ebet en den kaeroc'h eged an dourn. An dourn oc'h deuet da enori aman n'eo ket dourn eun den ordinal eo, an dourn-ze a zo dourn eun den-Doue, an dourn-ze a zo eun dourn ha n'en deus ket skoet biskoaz, eun dourn hag en deus flouret ha kalonekaet an dud er boan, eun dourn hag en deus sonet kloc'h ar mirakiou. »

Ar glao, p'edo an Aotrou 'n Eskob o kloza e brezegenn, a en em lakeas da goueza adarre; red e voe kana ar gousperou en iliz; goude bennoz ar Zakramant e voe beniget bolz ar c'hardinal Koativy, mab bihan eus a Witalmeze.

Hevelep goueliou a ra vad d'ar Feiz hag a zalc'h an dud stakoc'h-staka ouz o bro! Enor ha meuleudi d'ar re a laka o ijin hag o foan d'o sevel.

Galvadenn eur pôtr yaouank

Adsavomp hor Breiz

Bras ar burzudou a zo bet
E Breiz en amzer dremenet
Brasoc'h eo ar re da zonet
Pa zihuno ar Vretoned.

Ar gwerziou-ze am eus lennet e **Feiz ha Breiz** miz du; ya, bras eo bet ar burzudou graet gant hor Zent koz gwechall; pedomp anezo da ober ker bras burzu-

dou, en hon amzer, en eur zigeri daoulagad ar Vretoned; siouas, an darn vrasa anezo a zo kousket mik evid ar pez a zell ouz o bro; n'eus mui ganto nemet soua an danvez; n'eus mui nemed ar vall da heuilh giziou Paris; ya, Sent karet hor Breiz, daoust hag anaout a rafec'h tud ho kouenn, ma tiskennfec'h breman war zout ar Arvor glebiet gant ho taelou, pa ouelec'h, o sonjal e bro guiv ho kavell ho poa ranket kuitaat, glebiet gant ho c'houezenn, pa droec'h bommou ho pro nevez evit deraoui gand al labour hel lakaje, eun deiz, da zont da veza unan eus ar pinvidika broiou a zo er bed. Me gred e vije brasoc'h ho klac'har rak pa zeuec'h d'an harlu, holl e tigasec'h an hevelep kredennoù hag an hevelep karantez evit ho pro goz. Siouas, bez e vije kavet hizio Bretoned, ya Bretoned, Bretoned fallakr ne lavaran ket, met Bretoned berr-welet a-walc'h evit hoc'h harlui eus ho Pro. O sent karet Breiz-Vihan, digorit o daoulagad d'an dud keiz-ze; roit nerz d'ar Vretoned acnik da anzav dirag o c'henvreudeur int gouest da zifenn o gwirioù, hag, en diwez, grit ma kendalc'ho, da gaout nerz kalon, ar Vretoned dreist a labour gant kement a breder da sklerijenna o c'henvroiz; eun deiz a zeuio, pa 'z aint da welet Doue, ho prasa plijadur, m'oarvat, a vezo o lakaat en ho kichen da ziskuiza eus o labour war an douar-man.

Gwelet a ran evelato n'eo ket maro ar Vretoned, rak dre ar yaouankiz eo dont a-benn eus eur mennad ben-nak hag ar yaouankiz, muioc'h-mui a en em dro ouz ar **Bleun-Brug**; ra vezint a-vernioù e Gwengamp d'ar 7, 8, 9 ha 10 a viz Gwengolo; ra deuo kalz yaouankiz d'en em voda er parrezioù evel ar bôtred kalonek-se a gemer kement a breder gant Breiz, zoken en tu all d'ar Rhen. Ra vezo « gedourien » da viret ouz enebourien Breiz da dostaat outi evit he c'hailhara; re gaer eo hor banniel wenn evit beza saotret; Breiziz yaouank, roit skouer vat; **war zav**; evid adsevel hor bro; **war zav**, evit gouenn he frankizou; **war zav**, dreist-holl evid adsevel he yez; eun tamm nerz-kalon ha pep tra a yelo war well; en em unanomp

Ha mar gra e zle pep hini
Beleien ha tud desket,
Tud yaouank ha tud er gozni,
Breiz a vezo adsavet.

Ab-Mael.



KELIER ar MIZ

KEMPER. — El Lykès

Daou c'hant mestr-skol eus skolioù kristen Breiz-Izel ha Breiz-Uhel a oa el Lykès oc'h ober o retred, e deizioù diveza miz Gouere; bemdez e kanent daou gantik brezonek; war gouenn an A. Duparc a deuas d'o gwelet ha war ali o Rener bras ec'h en em glevjont da labourat a-zevri war ar brezoneg ha da rei d'ezan dor zigor en o skolioù.

Eun dra sebezus oa gwelet a-wechoù mistri kristen oc'h ober ruz war hor yez: hiviziken ne vezo ket gwelet ken eun dra ken ankenius: gwella bugale Vreiz a zihun, a-nebeudou, pelloc'h.

LOUDEAK. — Eun eured

Feiz ha Breiz a ginnig e wella gouc'hamennoù d'an Aotrou ha d'an Itron Yung a zo bet eureujet e iliz Loudeak d'ar 16 a viz Gouere diveza. An Itron Yung eo an dimezell Janed Malivel, anavezet dre hec'h ampartiz koulz ha dre he c'harantez evit Breiz; liverrez ha skeudennerez a-zoare, he labourioù a zo brudet kaer; e **Feiz ha Breiz** e vez bep an amzer skeudennoù hag a zo graet ganti; hor gwella hetou d'ezhi e penn he buhez nevez.

LANDERNE. — Kanvou

An Itron Boucher a zo marvet e Landerne, e deizioù kenta miz eost; **Feiz ha Breiz** a bed eviti hag a gemer perz e glac'har he bugale an Aotrou Alphonse ha Kamilh Boucher, an ograouer hag ar c'haner hep par amavezet gand ar re a zarempred ar **Bleun-Brug**.

LOKOURNAN-LEON

Gouel ar Peur-zourn

D'ar zul 20 a viz Gwengolo eo eman, er bloaz-man, *gouel bras ar peur-zourn*.

Ar gouel-ze hag en devoa bodet eun niver bras a dud, warlene, a zigaso adarre, er bloaz-man, eur bob-tud da Lokournan, eus a holl barrezioù Goueled Leon.

Setu aman e reolenn:

I. — Da 1 eur:

1) Lennadeg vrezonek evid ar vugale etre 8 ha 12 vloaz. Ar vugale a vo barnet war eur pennad brezoneg a lennint e **Feiz ha Breiz**.

2) Displegadeg (déclamation) vrezonek evid ar bôtred yaouank hag ar vugale adatek 12 vloaz.

Ar pezh a vo da zisplega eo « Dihunomp » a gavoc'h aman warlerc'h.

3) Konkour kana.

Ar ganerien pe ar c'hanerezed a vo barnet war ar zon, pe ar werz vrezonek a ganint.

Prizioù. — Levriou talvoudek a vo roet da c'honideien pep hini eus an tri gonkour-ze, evid 20 luriad d'ar c'henta, 15 luriad d'an eil, 10 luriad d'an trede hag 20 realad d'ar pevare.

II. — Da 3 eur 1/2:

C'hoarierien ha c'hoarierzed ar *Bleun-Brug* a zisklerio MOUEZ AR GWAD ha BRAOA MERC'H AR BARREZ, daou bez ha n'eus ket kaeroc'h egeto.

Ar prizioù a vo roet etre an Arvestou.

Lokournan a vo eur mor a gan d'an 20 a viz Gwengolo a zeu; ne vo ket a blas da finvat eno en deiz-ze.

DIHUNOMP !

Pez da lavaret dre envor 'vit ar c'honkour displegadeg (Déclamation)

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
A c'hoarz ouz hor gwiskamanchou
Hag, allas! meur a Vreizad dall
A goll ar penn ouz e selaou,
Hag a daol chupenn o zadou.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp;
'Man ar Gizioù koz o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
Hon flastr gant o lezennou kri,
Gwerzet o c'halenou d'ar fall
Kâs o deus ouz hon traou kaer-ni;
En o eneb ne zav hini.

An Ankou digor e askel
A glask an tud da skei warnomp
'Man ar Frankizioù o vervel,
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
Gant eur c'horvad droug a lavar:
« Komzit galleg 'vel ar re-all! »
Ha kaout a r'er war hon douar
Tud hag a zilez o lavar.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp,
'Man Yez hon Tadou o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
En o skridoù 'verk evellen:
« N'ez eus na Doue na bed-all! »
Ha lod, o klevet o stultenn,
A vev, difeiz ha dibedenn.

An Ankou digor e askel
A glask an tud da skei warnomp,
'Man ar Feiz kristen o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

Hirio, tudhentil a Vro-C'hall
A venn gwaskan an holl draou-ze,
O veza m'o deus grêt gwechall
Enor Breiz hag he nerz ive;
Ha ni 'bleg evel bugale.

An Ankou digor e askel
A glask an tu da skei warnomp
'Man hor Mamm-vroig o vervel...
Dihunomp, pôtred, dihunomp!

J. P. Calloc'h

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Sonioù — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguernean (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^e Guingamp

ADMINISTRATION
du FEIZ HA BREIZ :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Emgleo Sant Ildut*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Allocution prononcée par Mgr SERRAND à Guingamp. — *Bleun-Brug* Gwengamp. — Dibennachou va c'henderv Fallig, E.S.A. M. — Viktoria Konan a Zant Luk, J. U. — Doue ha Breiz, J.-M. PERROT. — Perag e elfoman paotr yaouank, FRANCIS MOAL. — Dar skolaerien, J.-M. L'HELGOUALC'H. — Palmarès du *Bleun-Brug*. — Kentsrivadeg ar c'hardinal DUBOURG. — Divivadennou.

Allocution prononcée, à Guingamp, le 10 septembre 1925, par S. G. Mgr Serrand, Evêque de Saint-Brieuc et Tréguier, en la basilique de N.-D. de Bon-Secours, à l'occasion du XV^e Congrès du *Bleun-Brug*.

MES FRÈRES,


J'ai éprouvé une joie bien douce à constater à quel point la manière dont se déroulait votre Congrès justifiait la déclaration que j'avais trouvée sous la plume du secrétaire général du *Bleun-Brug*, dans son remarquable « Essai sur la question bretonne » : « Nous sommes catholiques

d'abord ». Un cantique populaire chez nous dit: « Catholiques et Bretons toujours ». Vous avez fait de ces deux mots votre devise, vous avez lié les deux causes de la Foi catholique et de la Bretagne et, dans l'action que vous poursuivez, vous leur donnez le même rang que le cantique: la Foi catholique en premier lieu. Et parce que vous vous êtes réunis ici pour étudier ensemble les raisons puissantes que vous avez de faire triompher la cause bretonne et pour décider des moyens par lesquels vous la ferez pratiquement triompher, vous avez voulu commencer par raviver vos convictions chrétiennes, dans une retraite annuelle, sous la direction de M. l'abbé Brochen. En tant qu'évêque, comment n'en serais-je pas infiniment réjoui!

Mais pourquoi donc liez-vous ces deux causes: la cause catholique et la cause bretonne? Sont-elles si inséparables et ne pourrait-on, sans inconvenient, les dissocier? Vous savez bien que des groupements dont on ne saurait nier qu'ils sont vraiment dévoués à la cause bretonne se refusent à adopter votre formule et, cédant à l'esprit du jour, prétendent qu'il faut dégager cette cause de toute considération confessionnelle, parce que c'est le meilleur, l'unique moyen de faire aboutir votre mouvement. Et, à première vue, on serait tenté de croire qu'ils n'ont peut-être pas si tort. La croyance, en effet, n'a que des rapports bien lointains avec le caractère particulier d'une race, et ne doit-on pas le dire tout spécialement de la croyance catholique, qui est ici en cause, puisque c'est le propre de cette croyance, d'après sa définition même, de convenir à tous les peuples, de s'imposer à tous? A première vue? Oui, mais quand on veut y regarder d'un peu plus près, combien vite et combien clairement on s'aperçoit qu'ils ont tort et que c'est vous qui avez raison, et qu'il n'est pas possible de laisser de côté la question catholique sans que la question bretonne soit immédiatement en danger de mort.

Comment cela? C'est ce qu'il me semble assez facile d'établir.

On dit: Mais le Breton est bien antérieur à la religion chrétienne; on le parlait des siècles et des siècles avant l'évangélisation de notre sol! (C'est pourquoi certains veulent aller chercher près des druides l'explication de notre tempérament moral). Sans doute, mais qu'importe! Une chose est certaine, c'est que depuis quinze siècles, le Catholicisme s'est installé chez nous; c'est qu'il a pris possession des esprits et des cœurs; c'est qu'il a façonné les habitudes, non seulement des individus, mais de la famille, mais du village, mais de la société entière; c'est qu'il est à la base de toute une foule de phénomènes de la vie sociale bretonne qui ne s'expliqueraient pas sans lui. Au visage physique lui-même de la province, il a donné une



AN A. SERRAND,
Eskep Sant Brieç ha Landreger

note à part qui ne peut se maintenir qu'avec lui. Ce visage physique n'est pas seulement constitué par nos côtes incomparables et par la mer qui les baigne, par nos rivières et leurs merveilleuses vallées, par nos collines et nos montagnes, par nos bois et nos forêts, par nos landes et nos ajoncs et nos genêts d'or, par notre atmosphère plus ou moins grise et plus ou moins brumeuse; il est aussi constitué par tout ce que la main de l'homme a édifié sur notre sol. Et si, quelles que soient les variations que peut subir la croyance religieuse sur ce sol, les premiers éléments que je viens de citer doivent demeurer, le dernier, à supposer que le catholicisme soit abandonné par nous, subit de telles modifications qu'en toute vérité, même aux yeux du voyageur qui la traversera, la Bretagne cessera bientôt d'être la Bretagne.

Faites disparaître sur ce territoire ce qui est spécifiquement catholique, et voilà immédiatement que disparaissent nos clochers à jour et nos églises à l'architecture si spéciale, qu'on a faites basses à cause des grands vents, à cause aussi du caractère breton qui réclame, pour s'épancher devant Dieu dans la prière, quelque chose de ramassé, de discret, d'intime, de demi-mystérieux; — et ces magnifiques calvaires, un de nos plus beaux trésors, et qui nous appartiennent si bien qu'en vain nous chercherions rien de pareil d'un bout à l'autre du monde; — et les croix qui se dressent le long de nos chemins, aux carrefours ou sur les talus, et les petites chapelles qui ont été édifiées partout en l'honneur de la Vierge ou des Saints. — La Bretagne serait-elle encore la Bretagne quand on aurait supprimé tout cela? Qui donc oserait le prétendre?

Je sais bien, on me dira: Mais lors même que les esprits se détacheraient de la croyance catholique, tout cela demeurerait, on le conserverait avec soin. — On le conserverait? Ah! et comment? Comme monument d'un passé disparu, comme une pièce d'archéologie? Je suppose qu'on y réussisse, mais tout cela ainsi transformé proclamerait, c'est évident, la révolution morale qui se serait opérée chez nous déjà; tout cela proclamerait déjà que la Bretagne ne serait plus la Bretagne. Mais on n'y réussira pas! car vous savez bien que là où l'âme s'est envolée, le corps se désagrège bientôt et tombe en poussière. La Foi catholique, c'est l'âme de toutes ces choses, c'est elle qui leur donne la vie; elle absente, tout s'effritera fatalement.

Et ce ne sera pas seulement les édifices extérieurs qui s'en iront, ce sera l'intérieur de la maison bretonne qui sera modifié à en être méconnaissable. Cet intérieur suppose actuellement, et depuis quinze siècles, un crucifix, une statue de la Sainte Vierge, une statue de Sainte Anne, ou de quelque saint ou sainte en particulière vénération

dans la région. Supprimez la croyance catholique, il n'y a plus rien de tout cela.

Les pardons sont une des caractéristiques de chez nous. Nulle part ils ne se retrouvent avec la note qu'ils ont en terre bretonne, avec leurs foules à la fois recueillies et joyeuses, avec leurs splendides processions, avec leurs drapeaux, leurs bannières, leurs sociétés et confréries variées. Que deviennent-ils si le souffle catholique ne les anime plus? Ce qu'ils deviennent? De ces assemblées vulgaires et banales, comme on en voit partout, où l'on danse, où l'on s'amuse sans grâce et sans beauté, où l'on s'animalise de plus en plus au lieu de trouver le coup d'aile qui emporte vers les hauteurs.

Et croyez bien que rien n'échappera à cette ruine de ce qui est spécifiquement breton: le costume et la langue y passeront comme le reste. Le costume, parce que la forme en est dictée par les idées particulières à un pays, et que, nous venons de le dire, la disparition de la Foi catholique entraîne la disparition de tout ce qui marque la Bretagne d'un trait particulier.

La langue, parce qu'elle est aussi l'expression d'une pensée à part et qu'il n'y a plus de pensée à part à exprimer là où l'on a supprimé toute ce qu'il y avait de plus caractéristique d'une région.

Oui, vous avez eu raison de dire: « Catholiques et Bretons ». Oui, vous avez eu raison de faire de votre mouvement un mouvement confessionnel. Mais élevons-nous, si vous le voulez bien, en des régions un peu plus hautes, afin de mieux voir encore.

Votre mouvement est un mouvement régionaliste. Or, ai-je besoin de le dire, tout mouvement régionaliste est, en son fonds, un mouvement traditionaliste. Pourquoi? Oh! c'est très simple: parce qu'il s'inspire d'une idée de fidélité. Il veut conserver son pays avec sa physionomie propre; il ne veut pas qu'il aille se perdre dans une masse où rien ne le distinguerait plus de ce qui l'entourerait. Assurément, il se garde de le fermer à tout progrès; il consent à ce qu'il évolue, mais d'une évolution qui ressemble à l'évolution des plantes dans la nature, c'est-à-dire, d'une évolution par assimilation à soi-même, par réduction à son genre, à son espèce, à son individualité particulière, des éléments qu'on absorbe. Il veut qu'il se continue identique tout en se développant. Mais le traditionalisme suppose une doctrine stable, immuable, comme fondement; son essence même l'exige. Où la trouvera-t-il, cette doctrine? Le catholicisme la lui fournira incontestablement et avec toutes les conditions qu'il peut désirer. Ses dogmes sont immuables; ils sont aujourd'hui ce qu'ils étaient à la fondation du Christianisme; ils seront à la fin du monde ce qu'ils sont aujourd'hui. S'ils


sont susceptibles d'un certain développement, ce développement ne change rien à leur fond: il consiste simplement à faire sortir de ce fond tout ce qu'il renfermait et qui n'avait pas été, tout d'abord, aperçu, comme le développement de la plante consiste à la mise en valeur, par les divers procédés de culture, de toutes les énergies qui y reposent en germe. Un mouvement qui s'appuie sur lui n'a donc pas à craindre de dévier; il est assuré de se maintenir fidèle à lui-même. J'ajoute tout de suite qu'il est le seul à offrir cette sécurité. En dehors de lui, qu'y a-t-il autre chose que des opinions humaines et qu'y a-t-il de plus instable, de plus changeant que les opinions humaines? Je ne connais rien de plus propre à nous donner d'humbles sentiments de nous-mêmes, que l'histoire de tous les systèmes philosophiques qui se sont partagé le monde. C'est une suite ininterrompue de contradictions qui se heurtent les unes aux autres. Là, ne cherchez plus l'évolution qui conserve la même maison, en la développant et en l'améliorant sans cesse; non; c'est la révolution qui ne se lasse pas de démolir et de démolir encore, pour construire une maison toujours nouvelle et toujours ruineuse.

Observez et vous verrez si les faits ne justifient pas ces remarques. Tout ce qui est inspiré de l'esprit laïque ou neutre, tout ce qui écarte le caractère confessionnel dans un mouvement quelconque, quoi qu'on fasse, a bientôt fini de tourner à l'hostilité contre tout ce qui est traditionalisme, régionalisme, nationalisme. Pour celui qui veut suivre attentivement le mouvement des idées, l'époque actuelle offre là-dessus un champ d'études merveilleux où il n'y a qu'à se baisser pour recueillir, à pleines mains, les exemples les plus démonstratifs que l'on puisse désirer. Le rattachement en masse de nos instituteurs officiels à la Confédération générale du Travail, qui professe un internationalisme certain, n'est pas le moins édifiant.

Je puis donc le répéter, oui, vous avez eu raison de lier les deux causes catholique et bretonne; vous avez ainsi donné à votre action une solidité et une sécurité incomparables; vous l'avez prémunie contre tout danger de déviation; vous lui avez procuré la certitude d'un développement harmonieux et continu. Allez donc hardiment dans cette ligne et tout droitement. Et qu'autour de vos drapeaux, qu'autour de vos devises: « Feiz ha Breiz » « Doue, ar Vro », tous les Bretons qui aiment leur petite patrie se serrent. Ce n'est pas seulement l'Evêque de Saint-Brieuc et Tréguier, c'est la Sainte Eglise elle-même qui vous bénit!



Bleun-Brug Gwengamp



An Ac. MCAL,
Rener ar Bleun-Brug

I

AN DERVEZ KENTA

Chouket ken sioutik ha tra e va c'hough-tro e tibunen eur gudenn hir a zonjou endra ma ruiñhe an tren war hent Gwengamp etrezeg ar Bleun-Brug. Sonjou du ha sonjou sklear, diredet a raent beb eil tro warnoun ha goude ruiñh ha diruiñh eur pennad em spered e tec'hent diwar va zro evid eur predig, da c'hedal distrei adarre krenvoc'h ha stantoc'h. Sonjal a raen e va Breiz kouezet en eur stad ker reuzeudik hag ar velkoni a leunie va c'halon. Sonjal a raen er Bleun-Brug hag er yaouankizou bodet endro d'e vanniell hag ar fizians a ziouane em c'hreiz...

Koulskoude ne greden ket en em rei re d'al levezeg. Aon am oa na vije ket heuliet ar gouel; ha dre ma tostaen e c'houlennan ouzin va unan gand eun nebeudig enkreiz e va c'halon, pe seurt digemer a rafe Tregeriz d'hor C'hendalc'h. Ar Bleun-Brug n'eo ket gwall anavezet ganto ha meur a hini m'oarvat en o zouez n'o deus, morse klevet komz anezan. Evito hor gouel a dle beza henvel-kaer ouz ar goueliou a weler ker stank en deiz a hirio ha ken-

toc'h eged en em zirenka e kreiz ar zizun evit mont d'her gwelet ha dilezel an eost a jom da beurechui e kavint gwell marteze chom er gear da beurzastum ha da beurzourna ar gwinizou a welen c'hoaz-aman hag a-hont a zavadennoù er parkeier.




An A. DUJARDIN,
Rener Emglec Sant Iltud

Hag e gwirionez n'em boa ket skoet fall rak d'al lun d'abardaez niver an dud deuet da heulia ar retred n'oa ket eus ar re vrasa. En o zouez koulskoude ez oa eur rummadig brao a baotred yaouank ha kement se a reas plijadur d'in rak hirio muioc'h eget biskoaz hor beus ezomm bras a yaouankizou dreist-holl a yaouankizou desket evit difenn hor Bro evit dizrei ha blenia hor c'henvroiz paour dihenchet ha dianket. Taget a bep tu gand eun niver brasoc'h brasa a enebourien, dilezet ha nac'het zoken gant he mibien, hor Breiz a gerz war hent an argoll; ha siouaz kenderc'hel a ray da rinkla war an tu 'ze ma ne zav ket hepdale etouez yaouankizou ar vro eur strolad paotred kalonek ha taer evit diarbenn an droug ha herzel outan.

Prezegenn an Aotrou Perrot

Ar wirionez ze an Aotrou Perrot he displeg d'eomp en he hed en eur zigeri ar c'hendalch. Unan a zo emezan en hon touez ha na anavezomp ket ha Doue eo. Evel m'her grae gwechall p'edo o veva war an douar-man Jezuz a dremen adarre en hon touez. Chom a ra da azeza war



An A. DE MUN,
Paeroun ar Bleun-Bruñ

dreuziou hon tiez evit dic'hourda e gorf brevet hag e izili skuiz. Skei a ra war hon doriou. Met siouaz nebeut a zigor d'ezan rak an dud ne jomont ket en o ziez. Ar re a jom er gear hag a ro d'ezan dor zigor, re alies ive pe ne reont van ouz her gwelet dre m'eman o spered hag o c'halon en eun tu bennak, pe a vez nec'het ouz hen digemeret dre ma 'z eo re leun o zi ha dre ma 'z eus re a zizurz cnnan. Ha Jezuz a zo glac'haret meurbet o wetet an dismegans a daol an dud warnan. Unan a zo en hon touez ha na anavezomp ket hag hor Breiz eo. Dont a ra bemdez ive da skei war dor hor c'halon ha chom a rank ive evel Jezuz war dreuzou hon ti; n'eo mui anavezet gant he bugale; touellet gant komzou an enebour a zo bet o hada hadenn an droug endra m'edont kousket, ar re-man, peurvouget ganto en o c'hreiz glaouenn ar garantez-vro, a zo deuet da gasaat o Breiz, da nac'h o gwad ha da drec'hi gouenn. Fae a reont war an traou a berc'hennont. Dismegans a daolont war an dauvez a zo d'ezo. N'emaint mui en o ziez. Kuitaet o deus o Bro hag en o lec'h an estren a zo deuet da ren ha da c'houarn; Breiz n'eo mui mestrez

en he zi; n'eus mui a blas eviti; n'he deus mui aotre zoken da gomz ouz he bugale ha da rei d'ezo ar gelennadurez a roe gwechall hag a garfe rei adarre. Evid enebh ouz eur seurt reuz an holl Vreiziz a galon a rank en em zével hag en em harpa. Elec'h lezel hor Mamm e toull an nor da c'houzanv poaniou garo ha da vervel marteze gand an dienez, digoromp dezi frank hon doriou, evit ma hello gouarn adarre he danvez evel m'he deus her graet kerkouls gwechall, p'oa dieub ha diere. Dieubomp eta d'ezi he zi ha lakomp urz ennan.

II

AN EIL DERVEZ

An Aotrou Brochen

Met araok kregi da vat gand eur seurt labour hag a zeblant ken tenn ha ken diaes da ziskar e ve mat marteze dizrei ennomp hon unan eun nebeudig hag ober eur zell ouz ar menozioù hag ar mennadoù a vagomp en hor c'hreiz. Mat e ve gwelout da genta ha kemeret a reomp an henchou mat evit tizout ar pal a vennomp erruout gantan. Mat e ve anaout piz, evit gellout aesoc'h a ze o farea goudeze an holl glenvejou a dag hor Breiz hag a lamm diganti hag he yec'hed hag he gened. Mat e ve dreist-holl en em intent war dachenn ar menozioù ha displega didroidell ar gelennadur a vennomp dibab ha heulia, evit gellout gant muioc'h a aes kerzout gant hon hent hep riskl da dec'het diwar ar roudenn vat. An holl gudennou-ze fiziet en Aotrou Brochen kelenner e kloerdi bras Sant Brieg a zo bet dirouestlet gantan en eun doare dreist ha displeget e teir brezegenn gaer e chapel ar c'helendi. Ar prezegennou-ze aozet ha kempennet a-zoare ha distaget fraes ha dichipot a zo bet selaouet gand ar brasa evez gand eun niver bras a dud, atao war gresk. Ar gwirioneziou a bouez bras hadet ker stank dreizo, ar menozioù fetis hag uhel displeget ker founnus enno a zo bet miret ha dalc'het gand ar brasa preder. Eun dudi oa evid ar spered hag eur frealzidigez evid ar galon selaou ha digemeret eur gelennadur ker bras en eur yez ker flour, skeudennet ha kinklet ker kaer. Roet en deus d'eomp alioù fur ha poellek war gement a zell ouz an oaz pe ar « zèle » ha var an doareoù gwella d'hel lakaat da dalvezont war dachenn ar Vro. Dispaket en deus al labour fall graet en hon touez gant hon enebourien hag an droug graet d'hor Bro ganeomp hon unan. Barnet en deus menozioù trenk an Dispac'h vras ha diskouezet dre an hent-se pegen noazus int d'ar relijion ha d'ar Vro. Diskleriet en deus holl menozioù ar Bleun-Brug war gement a aparchant ouz an emzao breizek ha lavaret perak n'omp ket evid an Disparti, perak omp broadelerien « nationalis-

ted », roet da intent d'an holl petra glaskomp ha petra vennomp kaout evit adrei d'hor Breiz he sked a wechall.

Ar Yeodet

Met en eur gregi gand al labour-ze, kenta a zo da ober eo dihuni etouez ar Vretoned spered ar Vro, rei d'ezo da intent ez int eur bobl dishenvet diouz ar re all, d'ezi eur yez, eun istor hag eur zevenadur hag evit se e ve mat ha ret zoken kaout prezezerien a yaje dre ar vro da embann hor gwirioù, da lavaret d'hor c'henvroiz chom fidel d'o Feiz ha d'o Breiz ha d'erc'hel start d'o yez ha d'o gizioù. An A. Bocher (ar Yeodet) a gomz d'eomp diwar-benn ze. Prezezer eo ha prezezer dispar. Bateet en deus dre barrezioù Treger hag anaout a ra ezommou e genvroiz. Ar Vretoned emezan ne houlennot ket gwell eget klevet komz eus o Istor. Ne anavezont siouz netra anezi. D'ar yaouankizioù, dreist-holl, eo da gelenn ar bobl ze hag a c'houlenn beza sklerijennet hag a garje gouzout ar wirionez war ar pez a zell ken tost outi. Met ha kavet e vint an dud yaouank ze a yelo dre Vreiz da hada dre-holl ar c'homzou birvidik a zihuno pelloc'h ar Vretoned kousket? Fizians vras hon deus e vo gellet hep dale peñ seveni mennad ar Yeodet ha marteze kerkent hag ar bloaz-man e vo eur strollad prezezerien prest da vale.

An Aotrou Corven

Evit digeri hent d'ezo e vo savet, e kement lec'h ma vo aes hen ober, gouelioù brezonek a vo c'hoariet enno peziou hag a vo war eun dro ha kristen ha breizad. Rak evel m'hel lavarar d'eomp an Aotrou Corven en eur brezegenn zispar war an teatr poblet ar gwella peziou c'hoari n'int ket ar fentigelloù-ze savet diwar n'oun dare petra ha graet hepken evit dizenoui ha didui, met ar peziou a gomz d'eomp eus hor Feiz hag hor Breiz, hag a zispleg d'eomp burzudou hor Zent ha taolioù kaer hon tud koz. An teatr savet dreist-holl evit kelenn diwar c'hoari a rank beza evel eur skol a zesker ennan beza gwir gristenien ha gwir Vreiziz. Peziouigoù a netra evel *Braoa merc'h ar barrez* an Aotrou Bayon ha *Chiminaou* Dirnador, dreist-holl pa vezont displeget gant c'hoarierien aroutet war o micher evel re Prat, a hell beza war ar poent-ze talvoudek bras ha kelennus dreist. O welet evelse giz ar vro enoret ha giz kear disprizet ar Vreizadez a zalc'h startoc'h da wiskamant he zud ha ne zav ket enni ar c'hoant da gemeret war he c'hein truilhou mezek ar gear vras. O welet dispaket dirazan stad reuzeudik ar Breton divroet kollet gantan e yec'hed, e zanvez hag e enor e kreiz loustoni ar c'hêriou, hor c'henvroad a zalc'h tostoc'h d'e zouar hag e lec'h mont da foeta bro evel ar paour kaez chiminaou, e kav gwel chom da veva, da labourat ha da vervel e bro e gavell.

(Ar rest er miz a zeù).

Dibennachou va c'henderv Fallig

Va c'henderv Fallig a oa digouezet du-man pevar devez araok goueliou ar *Bleun-Brug*. Ar stal vras kastelodennou eman gwerzer enni, du-hont, e Paris, a oa laket eun all enni da zerc'hel e blas, e keit ha ma vije hen, e konje, eur mizvez. Va c'henderv Fallig, kentan en doa grêt, en eur zigouezout er vro, 'oa dont da Gerehan, rak sonj en doa bezan debret eno gwechall krapouez lardet hag a oa druz hag eyet banneou jistr hag a oa gwell eget gwinn Pariz. Eun devez e oa e zonzj chom, met ne gavas ket amzer awalc'h da gonta d'in, en eun devez, e zoareou penn-da-benn hag e chomas eun eil hag eun trede. An trede e lavaris d'ezan:

— Warc'hoaz, kenderv Fallig, me a ya d'ar *Bleun-Brug*.

— D'ar bleun brug? emezan; bleun-brug az peus da zerri?

— D'eur gouel, emon-me, hag e ve grêt gouel ar *Bleun-Brug* anezan!

— Ah! ya, emezan; evel ma vez grêt gouel ar bleun ed-du ha n'ouzon ped all evelse!

— Ya, emeon, met aman, ar bleun brug n'eo nemet eun arouez, eur zin. Ouz danvez ar gouel an hini a zo da zellet...

— Ah? petra 'ta eo an danvez-ze?

— Pôtrez ar *Bleun-Brug* en em zastum, e harz ar groaz, da studia etrezo an doare ar gwella da viret o yez, ar brezoneg, d'her studia, da rei da anaout istor o Bro, he gizioù, he gwiskamanchou, hec'h holl gaerderiou, evit lakat ar re yaouank d'en em staga outo a-nevez... Dont a ri ganin da Wengamp? Eno eman ar gouel; digemeret mat e vi ha tri devez, en eur seurt gouel, ne badont ket pell...

— Ah! emezan, me n'ouzon ket ha mont a rin... C'houez ar c'hoz a zo gant da c'houet.

— C'houez ar brein, da vihana, ne vezo ket, kenderv! Donet a rez pe ne rez?

— An traou-ze, emezan, a zo eneb d'am zantimanchou! Arabad dizrei war a-drenv!... War raok! var raok bepred!

— War raok... da belec'h?

— Da belec'h?

— Ya, vel just, emon-me; da belec'h sur! N'eo ket awalc'h mont war araok, red eo gouzout da belec'h!... Klev, kenderv Fallig, kentoc'h eget mont war araok da derri va gouzoug en eun toull bennak, me eo gwell ganin dont war a-drenv, rak pa deuan war a-drenv; ec'h ouzon pelec'h ez an.

— Marvat, emezan, feuket, pa lavaran kerzet war araok, ec'h ouzon ive da belec'h am eus da vont!

— Ac'hanta, gwelomp pe me a zigaso ac'hanout d'ar *Bleun-Brug*, pe e jacht te ac'hanon... elec'h emañ o vont! Kôze da genta!

Va c'henderv Fallig a reas eur zell nec'het endro d'ezan evel da glask e hent:

— Ma, feiz, emezan, me a ya elec'h ma 'z a an holl!

— Te zo henvel ouz denved Panurj! Ar re-man a oa et holl an eil warlerc'h egile, d'en em deurel en eur foz, hep ma c'houennas hini anezo gant an hini a oa en e raok: Da belec'h ez eomp?

— Trezek ar vuhez, trezek ar sklêrijenn hag ar « progrès » ez eomp sur! eme va c'henderv Fallig, entanet.

— Me glev an dud o lavaret daou dra: da gentan, penôs ez a mat an traou; d'an eil, penôs an dud a zo arru fall daonet. Ar vuhez hag ar sklêrijenn eo neuze ma 'z eio mat an traou, na pa vefe an dud falloc'h evit fall? Met daoust hag hen e talc'ho an traou da wellaat ma talc'h an dud da fallaat? Nann; ze zo vel eun neudenn ha, pa ve arru re stenn a rank terri... Ha ne gredez te ket ez eus gwell ezomm da glask lakat eun tamm poell e sperejou an dud ha, dre-ze, eun tamm urz hag eun tamm peoc'h etrezo?

— Traou evelse, eme va Fallig, ne zellont ket ouzin-me!

— Te n'ez eus nemet eun dra hag a zell ouzit, kemer da blijadur ha leuskel ar bed da vont war e du... Kalz a zo henvel ouz va c'henderv Fallig!

— Ha te, emezan, petra ri gwelloc'h?...

— N'ouzon ket ha me a reio eun dra bennak gwelloc'h; nemet klask ober a rin, da vihana!... Klask an tu, da gentan, ya! Klask pelec'h harpa ma zreid evit gellout stourm ac'hano. Ha setu perak, va mignon Fallig, ez an war a-drenv, rak endro d'in ne gavan harp ebet d'am zreid...

Chomet e oa da zellet ouzin, dem c'hoapaüs e lagad hag e c'henou.

— Deus 'ta! emeon; te wel, koulz ha me, ar stal o vont ganeomp da benn ar c'hochu... Me lavar, me penôs pep den a galon a rank harz... Met dre benôs?...

— Ya, emezan, dre benôs?

— Lavaret a reer, dre ar politik. Lod a lavar dre an hini wenn, lod all dre an hini ru; lod, dre ar republik, an demokrasi, ar « sociale »; lod dre ar roue pe an impalaer... Me, kenderv Fallig, a lavar n'eo ket dre ar politik e vo gwellaet stad ar vro. N'eus harp ebet da gemer diwar eun dra chench-dichench evel, m'eo hennez. Te gav d'it e vez chenchet eun den adalek ma chench gwiskamant?

— Nann, ne gredan ket ze!

— Ac'hanta, chench furm gouarnamant, evit eur bobl, a zo vel d'eun den chench gwiskamant. Dounoc'h eta eo red klask an tu d'e wellaat, en eur poent bennak hag a zo ken nez d'ezan hag e natur, da lavaret eo, e Feiz

hag e Vro. N'hellez ket na chench na dilezel da relijion anez kaout koll, na da Vro, kennebeut. Eun Doue a zo hag en deus hon c'hrouet, hon dasprenet, da lavaret eo, e rank bezan darempred etrezan ha ni; an darempredze eo ar relijion; — er vro-man vro ha diouz ar ouenn-man ouenn a dud ez omp ganet; n'hellomp ket hen nac'h, n'eo ket gwir?

— Vef just!

— Te zo hirio marc'hadour kastelodennou; varc'hoaz e c'hellez bezan marc'hadour gwin, hep kaout koll ebet; — met n'hellez ket, ha te Breton ha kristen, bezan varc'hoaz eur Gall hag eur pagan, anez koll kement mad a zo ennout, hep gounit netra. Ne gavi ket eun Doue all nag eur Vro all! pep den n'eus nemet eur Vro hag eun Doue...

— Kalz a lavar ar c'hontrol...

— Evel ma lavarfe eun dall n'eus ket sklêrijenn da greiz-teiz! Daoust ha te gredfe anezan?

— ?!...

— Neuze ta e rankez anzav penôs gwasa si hon deus hirio eo m'hon deus klasket dilezel pe chench ar pez n'hellomp na dilezel na chench, hon relijion, hon bro, hon Feiz katolik, hon Breiz... Ni 'zo kalz breman, dre aman, hag a zo sur a gement-ze ha setu ma fell d'eomp adunani ar Feiz hag ar Vro... Hogen, evit kaout eur skouer beo eus an unaniez-ze, e renkomp mont d'her c'h'blask... en amzer dremenet. Intent a rez breman perak ez eomp war a-drenv? Evit kaout ac'hano tu da vonet war araok!... hep koll hon hent. N'eo ket vit chom da vouza ha da ouela war dismantrou an amzer dremenet, met evit klask ene yac'h hon Bro ha kemer skouer diwarnan. Kenderv Fallig ne vousc'hoarze ket ken. Koulskoude, krog a gave d'ezan en doa warnon, hag hen da lavaret:

— Neuze, ne rez forz eus politik ebet? En da zonzj, pep politik a zo eun dra fall?

— Gouzout a rez, kenderv Fallig, emeon, ar politik a zo deut hirio d'en em zavel dreist d'ar relijion ha dreist d'ar Vro. Eur relijion 'n hini eo deut ar politik da vezan! N'eo ket gwir ze? N'eo ket gwir ez eus e Breiz, tud, kristenien zoken, hag a laka o c'hredennou politik, dreist d'ar relijion, dreist d'o bro Breiz? Republikaned, demokrated, roueterien, ne glevez anezo nemet o hopal pep hini diouz e du: « Gant va folitik me eo e vezoc'h salvet! Deuit da vedoun! » An deiz ma lakint o folitik en he renk, da lavaret eo, warlerc'h ar relijion ha warlerc'h ar Vro, en deiz-ze e c'hellin, marteze, o chilaou...

— Marteze, te lavar?

— Pegwir e fell d'it klevet diganin ma zonzj penn-dabenn, klev 'ta ive ma zonzj e politik.

— Ah! marvat ez out « roueler »?

— Ya, « monarchist » ez oun; met « demokrat » ez on ive ha, zoken, war ar marc'had, ez oun c'hoaz « aristokrat » !...

— Pebez saladenn!

— Eo, kenderv Fallig, me zo, gant se, henge, ouz an Otrou Doue. Daoust ha krouet en deus eun dra bennak ha n'en dije penn ebet?

— Hen! ne gredan ket!

— ... Pe n'en dije treid ebet pe gwriziou, evel ma-kiri?

— N'eus ket, marvat!

— Hogen, etre ar penn hag an treid e vez ivez eun dra bennak; n'eo ket stag ar penn ouz an treid, nag ar vegenn ouz ar gwriziou?

— Nann!

— Setu mat. Ar wezenn-ze du-hont, ped penn he deus?

— Unan.

— Ha gwriziou? Unan hepken, pe ouspenn?

— Ouspenn unan, sur!

— Troc'h ar penn, petra c'hoarvezo? Daoust hag ar wezenn a vo gwezenn c'hoaz?

— Nann, eun tagos ne vo ken.

— Troc'h breman he gwriziou. Ha gwezenn e vo c'hoaz?

— Nann, mervel a reio.

— Troc'h breman ar c'hef, ar pez a zo etre ar gwriziou hag ar vegenn.

— Ar wezenn ne vo gwezenn ebet adarre, rak ar gwriziou a zo evit ar c'hef evel ma 'man ar c'hef evit ar vegenn...

— Mat sur, kenderv Fallig! Ac'hanta, ha te wel breman pesort politik eo va hini?

— Ne welan ket re sklêr an holl...

— Ar gwriziou eo ar bobl; ar c'hef eo an dud a renk, a beadra; ar vegenn eo ar mestr, ar penn-rener. Breman, an demokrasi eo ar bobl a ren e-unan; an aristokrasi eo an noblans, ar binvidien mestr anezo o-unan; ar « monarchi » eo ar penn-rener o c'houarn, hen hepken. Hogen, an eil n'hell ket mont heb egile, anat eo; ar bobl he deus he renk hag he mouez; hogen, eur mestr hepken a zo ret ive, hag etre ar bobl hag ar mestr ez eus eur bazenn, pazenn an dud a zeskadurez hag a beadra hag o deus karg evel da zila ha da groueria menozioù ar bobl, ma ne zavo d'an nec'h nemet ar pep gwella anezo. Rak, kleo mat, ne fell ket e vefe disparti krenn etre an tri stad; ar pep gwella eus ar bobl a dle gellout pignal e renk an dud uhel, hag an hini gwella eus an dud uhel a zo da vezan mestr, da vezan er penn. Setu lezenn an natur?...

Met, va Doue, kenderv Fallig, a belec'h e oamp ni partiet ha da belec'h hon doa da vont?

— D'ar *Bleun-Brug* hon doa da vont, ha mont a rin, kenderv Goulec'hen. C'hoant am eus da welet, goude bezan klevet, da welet hoc'h oberou goude bezan klevet da gomzou.

E. A. M.



VIKTORIA KONAN A ZANT-LUK

Leanez e Retred Kemper
gilhaonet e Paris d'an 21 a viz Gouere 1794

Tad ha mamm Viktoria e prizen Kemper

Brud a zave e Kemper da lavaret e tlie dizale an aotrou hag an itroun a zant Luk dont da Gemper. Ar c'helou-ze a reas poan da Viktoria, rak kompren a rea edod o vont da gas ive he c'herent d'ar maro.

Hag e gwirionez, nebeut amzer goude, mouez ar gedour a voe klevet o kroزال er prizen « Dimezell a zant Luk, setu erru ho tad hag ho mamm! »

Pebez tarz kurun evit Viktoria! He c'hoar, Anjelic, an itroun de Silguy, a oa ive e Kemper en deiz-ze. Pa glev an diou c'hoar komzou ar gedour, ez eont war nij da ziambroug o c'herent. Kaout a reont o mamm o pignat ar skalier, harpet gant daou zen. Da c'houde e teue an aotrou a Zant Luk war eur c'hra-vaz. An den keaz, oajet a 74 vloaz ha klanv gand ar remm, ne c'helle ket bale. An diou c'hoar, en eur grena, en em daolas ouz treid o c'herent, a bokas d'o daouarn en eur lenva, hep gellout lavaret ger. An tad a lenve, a boke d'e verc'hed. « Va bugale ger, emezan, n'e ket va stad truezus a ra d'in lenva, met hepken ar joa am eus da c'hellout ho kwelet araok mervel. » Ar vamm ne lenve ket; kaout a reas nerz-kalon a-walc'h evit derc'hel he daelou. « Savit ta, va bugale, emezi. Na lenvit ket warnon. Ha n'omp ket eürus da veza chadennet ha prizoniet evit Jezuz-Christ? Meulet hon euz stourmadou ar verzerien. Bezomp eürus da veza bet kavet din da c'houzanv eun dra bennak evid hano Jezuz-Krist. »

Ar brizonierien all a jome mantret. Ne lavarent ket eur ger. An daouzek martolod saoz ne gomprenent ket ar c'homzou a lavare ar gerent hag ar vugale, met gand o daoulagad e komprenent petra dre-mene. Hag e voent da c'houde dereat, madelezus zoken e kenver ar brizonierien, pa glevjont piou oant.

Viktoria a voe eürus da c'hellout gwelet he zad hag he mamm araok mervel, met ive ankeniet o sonjal petra c'hellfe c'hoarvezout ganto. « Gouzanv va-unan, n'eo netra, emezi, met gwelet va zad ha va mamm er



Victoria Konan a Zant-Luk

stad truezus-ze a ra d'in kement a boan, ma varfen, anez sikour Doue. »

Ouspenn-ze, an aotrou hag an itroun a Zant Luk a voe klanv. Lakeet e voent o-unan en eur gambr distag diouz ar re all, hag o merc'h Anjelic hepken, an itroun de Silguy, a voe aotreet da jom ganto ha da entent outo epad dek dervez. Dont a rea mintin mat d'ar prizen hag e chome beteg an noz. Ha c'hoaz, d'an deiz diveza, ne c'hellas ket o gwelet, ne c'hellas ket lavaret kenavo d'ezo.

D'an eil a viz ebrel 1794 e voe roet da anaout urz

Fouquier-Tinville eus a Baris a c'halve d'e lez-varn Viktoria a Zant Luk, he zad hag he mamm.

An deiz araok kuitât Kemper, Viktoria a c'hellas kas al lizer-man d'an dimezell Marigo, he Superiorez.

« Prizon Kemper, 3 a viz ebrel 1794;

« Araok mont en hent evid eur veach ken hir ha ken dies, e fell d'in lavaret kenavo d'eoc'h ha d'an dimezell an Arc'hantel.

» Dirgwener vintin eo e tleomp kemeret hent Paris, gwech e vezimp en eur c'hoz- karr bihan ha gwech all en eur c'harr bras. Poaniou kriz a zo ouz hor gedal, met an tanva hon eus bet aman eus ar poaniou euzusa. N'eus bet gret morse muioc'h d'ar brasa torfetourien. Hor c'houstians e peoc'h hag ar zonz eus Hor Mestr war e groaz o deus roet d'eomp nerz ha frealzidigez.

» Bec'h am eus bet, hen anzao a ran, oc'h harpa, p'am eus gwelet va zad ha va mamm o tont aman. Aon am eus na rankfen dilezel unan anezo pe o daou zoken en eur prizon bennak, abalamour m'int klanv. Met ret eo lakat pep fra etre daouarn Doue, ne glask nemed hor mad, da vihana evid ar vuhez peurbadus. Kennerzet oun bet o welet pegen bras kalon o deus va zad ha va mamm.

» Mont a reomp evel ma z'a eun oan d'ar gigerez, rak diouz an doare m'eo great hor prosez, ne gav ket d'in e c'helfe hini ac'hanomp savetei e vuhez. Grêt e vo d'eomp pep seurt goulennou troidellus, ha ne c'hellimp respont nemet gant lealded hag hervez hor c'houstians. Kavet e vezo tro d'ober torfetourien ac'hanomp.

» Va zad ha va mamm a zo rebechet d'ezo en em glevet gand an divroidi, (1) ha gand an daou Laroque-Tremaria. N'eus ket ezomm kalz a dra hirio evit beza dibennet, ha ne gomzan ket eus an hano a zouger hag ar vrud da gaout eun tamm peadra.

» Ar veach a ro d'in muioc'h a enkrez eget ar c'hilhotin ne bad nemed eur predig amzer. Met ret eo eva ar c'halir beteg ar strad ha mont gant nerz-kalon dre an hent poanius, spontus, a zigor dirazomp.

« Setu o tont amzer ar Basion; sonjal a raimp e poaniou Hor Zalver evit gellout dougenn hor re; rak hor beach a c'hellomp da henvel eur Basion; mont a reomp, sur a-walc'h, da skuilh hor gwad evit Doue.

(1) O daou vab o doa kuitaet ar Frans e 1791 hag a oa etouez an divroidi.

» Ra c'hellimp dre boaniou ar vuhez-man en em ziwall diouz poaniou ar bed all. Lavaret a c'hellomp breman e vezimp dizale gwir ziskibien Jezuz-Krist, pa ro d'eomp da zougenn eur penn eus e groaz.

» Ne c'hellomp mui gwelet aman hon elig frealzer. (He c'hoar, an itron de Silguy, ne voe ket aotreet, en deiz diveza, da zont d'ar prizon). Konta a ray d'eoc'h hor buhez trist er prizon. Ne c'heller ket kompren petra eo; kement a c'hell ober poan d'ar galon, d'ar spered ha d'ar c'horf, a zo aman; hag abalamour da-ze hon eus c'hoant a-walc'h da veza tennet kuit.

» Mont a rankimp eus eur prizon d'eun all; evelse hor poaniou ne vezint ket ato henvel.

» Hor beach a bado 25 dervez. Da fin an amzer Fask eo e tleomp beza e Paris.

» Va mignonezed ker, pedit Doue d'hon harpa ha da rei d'eomp ar grasou hon eus ezomm.

« Urz a roer d'eomp da vont da gousket. Tremena rafen an noz penn-da-benn o skriva d'eoc'h. Met ret eo senti.

» Kenavo. Dalc'hit sonj ac'hanon, ha dreist pep tra goude va maro. Gouzout a rit pegement ho karan. Kenavo, va mignonezed ker, kenavo ar bed all.

« Keuz am eus da eun dra, da veza bet re lezirek d'en em zantellât epad m'edon en ho ti ken santel. Met fizians am eus e trugarez Doue, a gemero va foaniou e pinijenn d'am fec'hejou. »

Antronoz, d'ar gwener, 4 a viz ebrel, ez ejont en hent da Baris. Ar veach a badas 25 dervez, beteg an 28 a viz ebrel. Tremena rejont dre Rosporden, Kemperle, Hennbont, Locmine, Josselin, Ploermel, Raouzou, Vitre, Alençon, Mortagne, Dreux, Houdan, Versailles.

Diou wech e c'hellas Viktoria skriva d'he c'hoar, an itron de Silguy, epad er veach. Lavaret a rae d'ezi ez ea mat an traou hag o doa kavet war o hent tud madelezeus o-doa truez outo hag a ree d'ezo gwella ma c'hellent.

E Paris, e voent lakeet er prizon hanvet « Conciergerie »; ar verc'h hag he c'herent a jomas eno unanet, eun tammig ouspenn daou viz. Gouzant en eur gichenn a oa frealzus evito. Viktoria, war a gonter, a skrivas eno meur a lizer. Met al liziri-ze, sur a-walc'h, n'int ket bet kaset, rak dies oa d'ar mare-ze kas liziri.

Ar vuhez, e prizon Paris, a oa henvel a-walc'h ouz hini Kemper. Viktoria a lenne hag a laboure.

Ober a rea skeudennou eus ar Galon Zakr evit ski-gna en dro d'ezhi an devoision he doa he-unan. Relegou he doa bet digant he contr, an eskob, hag e rea boestou, archedou bihan d'o lakât. E kenver ar brizonierien all, e tiskouezê he madelez; he zad hag he mamm a rea eveldi. Kalz amzer a dremene ive o pedi, rak gouzout a rea ez afent eus ar prizon d'ar c'hilho-tin. Gellout a reant kovez alies, met nan kommunia. Bemdez e lavarent ar pedennou merket evid ar re a zo war o zremenvan. Rak bemdez edont war c'hed eus ar maro. Bemdez e veze dibennet unan bennak. Ne ouient ket peur e teufe o zro.

Erfin, er penn kenta a viz gouere, Viktoria a voe pellaet diouz he c'herent. Ha ne ouzomp ket penaos e tremenas ar pemzek dervez diveza eus he buhez.

Theodor Botrel


Da abardaez gouel santez Anna, e tremenas, e peoc'h, ar barz Theodor Botrel, eur breizad hag a garas e Vro hag a lakeas kalz brud da goueza war he zal.

Eus a Vreiz-Uhel oa ginidik; bras oa ha ne ouie c'hoaz nemet galleg; evit gellout beza eur breizad penn-kil-ha-troad ec'h en em lakeas da zeski brezoneg ha sevel a eure zoken, er yez-se, darn eus e werziou. J. Bastia, a skrive er gazetenn *Les Annales* d'an 9 a viz Eost diveza: « *La Bretagne perd en Théodore Botrel un chanteur amoureux... de tout le pittoresque de ce pays ami de la France.* » Kement-se zo re wir; epad pell hag hira amzer e chomo an envor anezan e Breiz; ma 'z eus eieiz oc'h anaout o Bro hag ouz he c'haret Theodor Botrel eo en deus graet skol warnezi da veur a hini anezo; hag evit netra eo e-rae skol; n'en doa ket eur gwenneg evitan e-unan; kana a rea evid ar blijadur da gana ha d'ober vad; ne glaske nemed eun dra: lakaat an dud d'en em garet muioc'h ha d'en em glevet gwelloc'h.

Ar *Bleun-Brug* d'an 9 a viz Gwengolo a lakeas lavaret eun oferenn evitan e Gwengamp, e iliz Itron Varia: 'r wir Zikour.

Doae r'e bardonq!

Doae ha Breiz⁽¹⁾



An A. PERROT,
Rener Feiz ha Breiz

Medius autem vestrum stetit quem vos nescitis.

En ho touez ez eus unan ha ne ana-vezit ket.

Aviel sant Yann, I. 26.

VA BREUDEUR KER,

Goude Itron Varia 'r Wir Zikour, a bedomp c'hoantek d'hor rekour, ha sant Erwan, mab Kervarzin, Tad Breiz, an Aotrou sant Yann venniget, embanner bras ar binijenn ha badezour Hor Zalver Jezuz-Krist, eo m'oar vat ar Zant karet ar muia en eskopti Treger; ober a raer e dantad; miret a raer e c'houel, — gouel Nedeleg an hanv; — savet zo bet eur bern chapelioù en e enor, ha du-hont, e Traon-Meriadeg, tost da Vro-Leon hag harp er mor bras, eun iliz-veur, savet gant largentez hon Duked, a vir, evel eun tenzor, e viz santel, ar biz-se a ziskoueze an Oan a lamm ar pec'hejou hag a lakea an dud war hent ar baradoz. Kefridi sant Yann, war an douar-man oa digeri hent d'Hor

(1) Prezegenn graet, gand an A. Perrot e chapel skolach an Itron Varia, e Gwengamp, d'ar 7 a viz Gwengolo, evit digeri Retred kenta ar *Bleun-Brug*.

Zalver; hen oa ar gwaz enor a zigor hent d'ar gwaz nevez; e holl gomzou a oa komzou a bouez hag unan eus ar re zouezusa etrezo oa houman: « En ho touez ez eus unan ha ne anavezit ket! » En em harpa a rin warnez evit lavaret d'eoc'h, berr ha berr, petra rank eur c'hristen da ober evit beza gwir gristen hag eur breizad evit beza gwir vreizad.

I

An hini a zo en hon touez ha ne anavezomp ket eo Doue; e pep lec'h eman; met en hon touez-ni, kristenien, eo eman, dreist-holl; stegnet en deus e delt en hor c'hichen; beva a ra en hor serr; ilizou kaer hon eus savet a-zioc'h e aoteriou ha war e aoteriou klozennou aour a vir e gorf hag e c'hwad; n'eo ket evid ar c'hlozennou-ze, nag evid an aoteriou-ze, nag evid an ilizou-ze eo eman war an douar; n'eman en hor c'hichen nemed evit beza ennomp *alies* — hag an alies eo ar gwella, — dre e gorf hag e c'hwad hag ennomp *atao* dre e c'hras; en hon touez eman, met hanter amzer ne reomp ket eur van outan ha setu perag n'eman ket ennomp ha koulskoude n'eman en hor c'hichen nemed evit gellout beza ennomp.

N'eman ket ennomp, perak?

Ne jomomp ket er gêr d'e zigemeret; evel Zache, a zo hano anezan en Aviel, dalc'h mat atao emamp o redet a-gleiz hag a-zehou; ha c'hoaz ma redjemp, warlerc'h Hor Zalver, ne vije metra da lavaret, met, peurliesà, n'eo ket evit an dra-ze eo e tec'homp diouz ar gêr; tec'het a reomp; d'an distera trouz kar, d'an distera taol sut, d'an distera trouz tud emamp war nij.

« Zache, eme Hor Zalver, diskenn d'illo, diwar da wezenn, rak hizio end-eeun, e felt d'in mont d'az kêr; bremaik ez in d'az kwelet; bez en da di ouz va gortoz! »

Eus barr ar wezenn d'an traon, hag ac'hano d'an ti, n'eo ket harr ar bale; na pegeit e vezer alies, koulskoude, oc'h ober ar pennad hent-se.

Hag a dud, en dro d'eomp, a vev evel ma n'o defe ene ebet; e beg ar gwez emaint: « Debromp, evomp, fringomp; lakomp kurunennoù roz war hor penn, rak warc'hoaz e varvimp! » Setu o ger; suliou an dud-ze a zo suliou heb oferenñ; goueliou an dud-ze a zo goueliou hep beleg; buheziou an dud-ze a zo buheziou hep Doue: trista suliou; trista goueliou; trista buheziou!

Hag etouez ar re a oar o deus eun ene hag a bed ha ne ziskennont morse ennan; chom a reont war e dreujou da zellet ouz an dud o tremen; Doue ne c'hell ket diskenn e ti tud evelse, rak Doue a zo eun aotrou bras, ha ne vez ket digemeret war an treujou, e kreiz an trouz: *non in commotione Dominus*.

Diskennomp, evel Zache, en hon ti, da lavaret eo en hon ene ha Doue ivez a raio e ziskenn ennomp.

Pa ban yaouank, gwechall, em eus sonj e veze lennet bemdez, diouz an noz, *Buhez ar Zent* ha lavaret ar *Bater*; goudeze an holl a jome sioul, eur pennadig, ken na zave an tad da vont d'e wele hag e vezen o klask gouzout perag e chomet evelse, eur pennad, ken didrouz all, war an daoulin.

Pep hini, evelse, — her gouezet em eus abgoe, — a ziskenne ennan e-unan, ha ma rea vad *Buhez ar Zent* hag ar *Bater*, ar pennad sioulded-se a rea muic'h c'hoaz, hep mar ebet.

Ma karfemp, en em voaza, da ziskenn, evelse, bemdez, e goueled hor c'halon, hag a wellaenn ne deufe ket ennomp hag en dro d'eomp: dont a rafemp hag e klevfemp kalon Doue o lammat en hor c'halon den!

Kenta tra hon eus da ober evit tremen diouz Doue eo chom er gêr; an eil tra eo dieubi hon ti da ober d'ezan eul lec'h diouz e zoare.

Pa 'z eas ar Werc'hez ha sant Joseph, da noz Nedeleg, da Vethleem, da glask loj, ne oa plas ebet ken evito en ostaleri; plas ebet; plas a oa eno evid eur bern tremenidi all, met ne oa ket a blas evit Joseph ha Mari; Jezuz-Krist, an Hini m'edo ar bed keit all a oa ouz e c'hortoz a deu da skei war dor eun-ostaleri ha n'eus ket a blas enni evitan!

Leun eo an ti. Ha petra 'zo ennan' ta? Ar pezh a garg an ostaleri eo ar garantez re vras evit heman pe hen-hont; houman pe houn-hont, an dra-man pe an dra-hont.

Ar pezh a garg an ostaleri eo ar pec'hed ha keit ha ma chomo hennez eno ne vo ket a blas en ostaleri ha Jezuz ne raio ket e ziskenn enni; kerkent ha ma 'z aio, er mêz eus ar galon, an diveza pec'hed marvel e teuo Doue ebarz; kalon an den a zo eul lenn, hag e weler Doue enni, pa ne vez ket strafuilhet he dour gand ar pec'hed.

An trede tra en deus an den da ober evit tremen diouz Doue eo ober evel ma ne vefe hini all ebet nemetan en e di; e lec'h komz d'ezan eus ar baourentez a gav war an douar, komz d'ezan eus e binvidigez; e lec'h komz d'ezan eus ar pec'hejou m'eo bet kouezet enno, komz d'ezan eus e drugarez; e lec'h komz d'ezan eus ar c'hroaziou a gouez war e ziskoaz komz d'ezan eus e groaz; e lec'h komz d'ezan eus an enoriou a garfe da gaout, komz d'ezan eus e c'hloar, eus a c'hloar an Tad, ar Mab hag ar Spered Glan, eus e rouantelez, *cujus regni non erit finis*, eus e rouantelez hag a bado da viken, da virviken.

En em ankounnac'haat an unan, — daoust pegen tenn bennak e c'hellfe beza kement-se, — ha kemeret preder hepken gant Doue hag an nesa, setu aze ar zantelez, hag an tanva eus ar baradoz.

II

Va breudeur ker, ar pezh a dle eun den d'ober evit tremen diouz Doue, eleiz a zo hag hen anavez braoik a-walc'h; met ar pezh a dleer d'ober evit tremen diouz ar Vro setu ar pezh n'anavezet ket nemeur ha setu perag e kouezer e pec'hejou hag a laka gwalenn Doue da goueza war hor c'hein hag hor Breiz da goueza en he foull

Hor Zalver J.-K., p'eo gwir e c'hourc'hemenn d'eomp klask da genta traou an ene *querite primum regnum Dei*, a ziskouez, en hent-se, ez eus traou all hag a dleomp ivez da glask, gant m'o c'huskimp gant furnez, hag an traoze eo *traou ar Vro*; diskouezet en deus d'eomp ar skouer hon eus da heulia; karet en deus e Vro betek gouela warni pa wele pebez gwalinier a venne he skei; pegen truezus eo ar gomz-man diwar he fenn, a glevomp o koueza eus e c'henou: « *Quotiescumque volui...* » Pet gwech n'em eus me ket klasket boda da holl vugale evel ma vod ar yar he re vihan, dindan he eskell, *et noluiti*, ha n'eo ket bet falvezet ganez! »

Hor Bro, siouaz, a c'heller lavaret anezi ivez ar pezh a lavare sant Yann diwarbenn an Aotrou Doue: « Unan a zo hag e vevit en he serr ha ne anavezit ket hag eo ho Pro! » Ar Vretoned en deiz a hizio, evid ar pezh a zell ouz o Breiz, a zo ken diwarlerc'h hag o zadou koz, war draou ar feiz, breman ez eus 16 pe 1.700 vloaz pa deus daveto Ebestel kenta Hor Zalver Jezuz-Krist. Ne anavezont ket o Bro ha n'o deus ket eun hano mat da rei d'ezi, an darn vrasa anezo.

Penaos omp en em gavet da goueza ken izel all?

En Aviel, e kavomp eur gomz hag a respont mat d'ar goulen-se: « *Cum autem dormirent homines*, En dra ma kouske an dud, an enebour a zo deuet hag en deus hadet dreog dre douez ar gwiniz. » Math. XIII. 25.

Endra ma kouske ar Vretoned an enebour a zo deuet ivez hag en deus hadet had fall en o sperejou hag en o c'halonou: miret en deus outo da anaout o Bro ha desket en deus d'ezo he c'hasaat, ha setu perag e reont, evel Zache, ne jomont ket enni; evid an distera digarez e nijont warlaeziou; re all, siouaz, niverusoc'h, a jom er gêr, hag a dec'h evelato diouz o Bro, en eur jom hep komz he yez hag hep deski he Istor, en eur zarempredi, datc'h mist, an estren hag en eur c'houzanv e lezennou hep klemm.

Kenta tra hon eus da ober e kenver hor Bro eo beza *den a vro* e pep lec'h hag e peb amzer; er gêr hag er mêz eus ar gêr; pa vezer an unan ha pa vezer gant tud all; ar Yuzevien gwechall hag a oa bet aozet o bro d'ezo gand an Aotrou Doue ne zispartient ket en o c'halon o c'harantez evid o Bro diouz o c'harantez evit Doue ha p'en em gavent da veza pell diouz Jerusalem e kave d'ezo beza ivez pell diouz Doue.

Breiz, ar vro hep par, — koad en he c'heiz, mor en he zro, — a zo bet dibabet d'eomp ivez gant hor Zent koz; n'eus bet savet enni nemet traou da gomz d'eomp eus ar baradoz; ne reomp ket eur gammad enni hep bale war retegou ar Re Goz; Anna, Mamm Mari, he deus he c'hemeret da skabell d'he zreid; n'eus bro ebet hag a dlefe beza ken tost hag hi d'hor c'halon ha pa dec'homp diouti e tec'homp ivez, tamm pe damm, diouz Doue; ar wirionez-se a vez embannet pa leverer hano eus a unan bennak hag a zo aet warlaeziou: « Aet eo e kêr, met lezet en deus Doue er gêr! »

Kenta tra hon eus da ober e kenver hor Bro eo chom enni; an eil tra eo he dieubi; hor Bro a zo evel ostaleri Bethleem; n'eus ket a blas enni evid ar Vretoned; plas a zo enni evid an diavezidi; ober a c'hellont o renkou enni evel ma karont; met gewlka bugale ar Vro, ar re ne gomzont nemet he yez, n'o deus gwir ebet da welet e nep lec'h; mall eo d'eomp dieubi hor Bro; ma rank diavezidi chom enni, ra vezint en o renk, atao da eil ha morse da genta.

Ma rankomp ober implij eus ar galleg, ra vezo eur mevel, en hor serr, ha morse eur mestr; war an douar-man, an traou koulz hag an dud a rank beza pep hini en e renk.

Penaos dieubi hor Bro?

En eur ober implij eus an armou a daol a bep tu d'ezo nann ar maro, met ar sklerijenn: *arma lucis*; en eur gemeret evit gounit he frankizioù da Vreiz an armou a c'hourc'hemenn an Eskibien da gemeret evit gounit he frankizioù d'an fliz; en eur ziskleria hor gwirioù heb ehan ha dirag an holl:

Ar gwir a zo trec'h d'ar bed.

Ar poblou evel an dud o deus gwir da veza ha ma 'z eus lezennou hag a varn anezo d'ar maro, ad lezennou-ze a zo lezennou fall ha n'eus nemed eun dra da ober d'ezo: o diskar hag o flastra dindan an treid.

Penaos c'hoaz?

En eur boueza war al lezennourien hag en eur jom hep rei hor mouezioù pa vez votadeg d'ar re anezo ha ne douint ket difenn penn-da-benn gwirioù o Bro; en eur boueza, er fin, *holl a-unan*, war ar C'houarnamant.

Perag eo bet trec'het ar Vretoned edoug ar c'hantvejou nemet dre ma n'o deus ket bet gouezet biskoaz en em glevet? E Buhez Agricola, ar skrivagner Tacitus hen anavez, breman ez eus tost da 1900 vloaz: *Ita, dum singuli pugnans universi vincuntur*.

Ar pezh a oa gwir neuze a zo bet gwir abaoe; n'omp bet trec'het edoug ar c'hantvejou nemet dre ma klaskemp stourm ouz hon enebourien a hiniennou; pa stourmemp outo, holl a-unan, e teuemp atao a-benn anezo; stour-

fiomp eta a-zevri, holl a-unan, hag an trec'h a vo d'eomp : a-zevri, hor Breiz a vleunia a-nevez dindan banniel aour ar Frankiz!

An trede tra hon eus da ober e kenver hor Bro eo ober anaoudegez vat ganti ha komz anezi evel ma n'hon defe hini all ebet nemeti: hor Bro da genta!

Darn a lavar n'o deus bro ebet; darn all a lavar o deus diou; ni a lavar ne c'hell an den kaout, war an douarman, nemed eur vro evel ma n'en deus nemed eun Tad en nenv hag eur vamm war an douar, rak ma klask tremen diouz diou, ne zervicho mat hini ebet anezo: « Den ebet, eme Hor Zalver, ne c'hell servicha daou vestr! » Ker sklér ha dour-stivell eo ar wirionez-se hag hor Bro, na petra 'ta eo Breiz: eur vro vihan, met an dud vihanhia kouls hag an dud vrasa o deus gwir da veva hag evid ar poblou eo henvel.

Ma karomp hor Bro hon-unan dreist an holl broiou all n'eo ket red d'eomp evid an dra-ze beza e brezel gand ar broiou all, dreist holl gand hon amezeien dosta; nann, red eo d'eomp zoken, hervez al lezenn gristen, en em glevet ganto, o anaout hag o c'haret, met o anaout hag o c'haret nebeutoc'h eget hon Bro hon-unan rag a hent-all e vefe dizurz en hon anaoudegez hag en hor c'harrantez (1).

(1) Pa vez daou diegez, en eur gichen evel Kerargall ha Kereozen, ha pa welont int berr e sikour, ec'h en em glevont evid ober *al labouriou brasa*; met ozac'h Kerargall, war zigarez ma 'z eo en em glevet gand ozac'h Kereozen, arabad eo d'ezan klask ober, re en holl, e renkou, e Kereozen, nak hini Kereozen e Kerargall, pe e trenko an traou ne vo ket pell an dale; war *al labouriou brasa*, — ar palarat pe an douarna, — eo ez eus emgleo ha netra ken; war an traou all pep hini a ra evel ma kar; pep hini, dreist-holl, a vev, a wisk hag a zav e vugale, hervez e renk, hep m'en defe egile netra ebet da welet war gement-se.

Breiz ha Bro-C'hall a zo diou vro ivez, harp-en-harp, hag o veza ma n'en em gavent ket krenv a-walc'h atao da stourm ouz o eubourien, a zo en em laket o diou, nann *en unan*, met *a-unan*, hervez lizer-emgleo ar bloaz 1532. Pa vez al labouriou brasa da ober e c'hellont rei eun taol skoaz an eil d'eben; met, a-hent-all, pep hini a jom mestrez da ober gand he zud ar pez a gar.

War zigarez ma 'z eus unvaniez etre Kerargall ha Kereozen — hag eun dra gaer 'eo en em glevet, — ne vo ket lavaret eo bugale Kerargall eus a Gereozen na bugale Kereozen eus a Kerargall; pep hini a gendalc'ho da zougen hano e gêr; evelse ivez ar C'hallaoued hag ar Vretoned daoust d'an unvaniez a zo etrezo a dle kenderc'hel da zougen an hanoioù o deus ha nann kemeret an eil hano egile; an dra-ze c'hoaz a zo sklér hag anat.

Lizer-emgleo ar bloaz 1532 n'eo ket roget na prenvedet, daoust d'ezan da gaout tost da 400 vloaz; mat e vefe d'ar C'hallaoued lenn anezan ha neuze marteze ne rafent ket ar faziou estlammus a reout breman.

D'ar 15 a viz C'houevrer diveza ar c'hardinal Charost, arc'heskob Roazon a lavare da wazed e arc'heskopti, bodet e kêr-benn Breiz, ar c'homzou-man a dle beza anavezet ha laket da dalvezout gand an holl Vretoned: « Messieurs, quand la Bretagne s'est donnée à la France, elle a réservé ses franchises et ses libertés religieuses aussi catégoriquement que l'a fait l'Alsace. Pas plus que nos pères,

Anaout hor Bro a-raok anaout ar broiou all; he douarou, he aochou, he meneziou, he c'hoajou, he zraoniennou, he braventeziou, he c'hestell, he chapelioù, he c'hroaziou, he ilizou; anaout he ene, he istor a-raok istorioù ar broiou all; n'eus pobl ebet ha ne vefe ket skrivet he istor gand douar Doue ha berrwelet eo an hini n'her gwel ket; met nemeur a boblou a zo o kaout eun istor ker kaer hag hini ar Vretoned ha fizians am eus n'eman ket tost an Aotrou Doue da skriva enni c'hoaz e bennad diveza, rak en hor Bro-ni, gwella pez a zo, tenzor ar vuhez n'eman ket tost c'hoaz da vont da hesk.

Va breudeur ker, tennomp Istor Breiz nann hepken abaoe ar bloaz 1789, nann hepken abaoe ar bloaz 1532, met adalek ar pennadou kenta skrivet enni gand hor Zent koz deuet eus a Vreiz-Veur pe eus a Iwerzon.

N'eo ket alaouret holl bajennou an Istor-se; meur a hini anezo a zo tenval; pegen izel n'eo ket bet hon tadou er VI^{et} kantved pa dec'hent a-raok ar Zaozon, en IX^{et} kantved pa dec'hent a-raok an Normaned, er XIV^{et} kantved p'en em zrailhent ken etrezo; kouezet e oant izella ma c'hellet koueza met biskoaz netra n'en deus gelllet o lakat da fallgaloni, ha setu perag o deus gelllet adsevel o bro, ken alies gwech ha m'oa bet diskaret d'ezo. Perak ne rafemp-ni ket en XX^{et} kantved ar pez en deuz graet hon tadou, er VI^{et}, en IX^{et} hag er XIV^{et} kantved: an neb a venna, hennez a c'hell.

Anaout a dleomp dreist-holl yez hor Bro a-raok ha gwelloc'h eged an holl yezou all; ar brezoneg eo an alc'houez burzudus a gemeras hor mammou da zigeri dor hor spe-rejou; deski a c'hellomp yezou all met birviken ne deuimp a-benn da c'houzout tenna talvoudegez anezo evel eus yez hor Bro; birviken ne c'hellimp gand eur yez all lavaret kêr piz, ker sklér, ker flour ar pez a zo war hor spered.

Yez ar vro, met hor gouzoug, hon teod hag hor skouarn a zo graet diouti kalz gwelloc'h eget diouz yez all ebet; yez ar vro a deu ennomp da heul ar gwad hag en eur c'hoari eo e laka ar vamm anezi da vleunia a genou he bugel ha setu perag e tleomp karet yez hor bro, he lenn, he skriva, he c'hana; destum kement ger, kement lavar, a zo miret gand ar bobl, en eur c'horn pe gorn, en eur

Nous n'avons ce que saint Paul appelait « l'esprit de servitude ». Nous ne souffrirons nulle atteinte portée à ces libertés-là. Nous ne menaçons ni le droit, ni la liberté de personne, nous ne déchainons de guerre contre personne. Mais nous ne nous courberons jamais devant celle qui serait faite à la religieuse prosternée sous sa bure, à l'enfance qu'abritent nos écoles, à toutes les faiblesses sacrées à qui on l'a faite jadis, si odieusement. M. Jenouvrier a parlé d'un parti vaincu. Ce n'est pas chez nous qu'il l'a été: nous n'avons pas connu l'abaissement et l'amoindrissement de la défaite! Nous ne sommes pas mûrs pour la résignation. Et puisqu'on se permet de nous rappeler, non sans quelque cynisme, la mansuétude du Christ, nous rappellerons aussi qu'il ordonne au Père de famille de « ne pas laisser percer le mur de sa maison! »

barrez pe barrez, hag a die beza laket da binvidikaat ar yez da zont: *colligite quae superaverunt fragmenta, nē pereant!*

Ober a dlemp gant hor brezoneg evel ma n'hon dese yez all ebet; implija anezan en ilizou, en tiez-skol, en tiez-kêr, en tiez-hent-houarn, en tiez-post; implija anezan er c'hazetennou, el levriou, er prezegennou; m'hon divije gouezet, amzer 'zo bet, difenn hor gwiriou, n'hon divije ket ket bet muioc'h a ezomm eus ar galleg e Breiz eget n'o deus ezomm ar C'hallaoued eus ar brezoneg e Pariz (1).

Darempredomp ivez ar goueliou a ra *Breurie ar Brezoneg* hag ar *Bleun-Brug* en enor d'ar Vro; *Bleun-Brug* ar bloaz-man a zo bet prientet ker piz gant Gwengampiz ma vo kaeroc'h eget n'eus fors pehini eus ar pevarzek all a zo bet en e raok.

An hini ne ya ket d'ar *Bleun-Brug*, p'eo aes d'ezan, hag en deus c'hoant da lavaret eo eur breizad mat a zo eun tamm henvet ouz ar c'hristen a lavar eo eur c'hristen mat ha ne ya ket d'an oferenn, zoken d'ar Zul-Fask.

Gwelet a rit, va breudeur ker, n'eo ket labour eo a vanko d'eomp, ma fell d'eomp en em zavetei ha savetei hor Bro; kalon avat da staga gantan ne lavaran ket.

Al labour hon eus da ober evit salvi hor Bro a zo eul labour dister; n'omp nemet darbarerien; oc'h ober diazez hor Bro nevez n'emaomp ken; greomp al labour izel-ze hep damant ebet na d'hor c'horf na d'hor yalc'h; an traou uhel, an traou kizellet kaer, re all divezatoc'h a raio anezol! Labouromp!

Dihun a reomp, met ne zihunomp ket mat a-walc'h; labourat a reomp met ne labouromp ket hanter; ar pez hon eus graet a zo kaer met n'eo netra e-skoaz ar pez a zo c'hoaz d'ober.

Ar Yuzevien a glaske rouantelez ar bed-man, eme ziant Augustin, met ne glaskent ket rouantelez ar bed all (2); klask a raent silvidigez o bro, met ne glaskent ket silvidigez o ene ha setu perag e kolljont anezo o daou; kement hini a raio evel ar Yuzevien a en em gavo gantan ar pez a en em gavas gand ar re-man.

An tiez a rank beza savet war ar c'halet hag ar broiou; a rank beza diazezet war ar mean-korn ma 'z eo Hor

(1) *Alies e klever darn o lavaret: « Red eo d'ar bôtred gouzout galleg abenn ma 'z aint da zoudarded pe da vortoloded! » — Ya! breman c'hoaz eo red gouzout galleg evit mont da zoudard d pe da vortoloded, met en deiz ma ouezo ar Vretoned ober o mistri e Breiz, an ofiserien a vezo red may d'ezo mont e brezoneg da heul an dud all; neuze ar Vretoned a raio o amzer-zoudard pe o amzer-vortolod e Breiz ha nann e Bro-C'hall, hag an deiz-se n'eo ket da lavaret e vefe keit se diouzomp ken: an traou re ne badont ket! Ar gwir a zav atao war gorre, abred pe zivezail!*

(2) *Temporalia perdere timuerunt, et vitam æternam non cogitaverunt, ac sic utrumque amiserunt. — S. Augustini Tract. 49 in Joannem.*

Zalver Jezuz-Krist; sankomp ar wirionez-se doue en hor spered: ma klaskomp da genta rouantelez Doue, an traou all a vezo roet d'eomp war ar marc'had.

Evelse bezet graet.

D'ar Skolaerien

Labour, labour, skolaer bihan,
An deiziou a nij kuit buan,
Eur mignon, nann eun enebour,
Eo, er vuhez-man, at labour.

Pa zeu mouez ar c'hloc'h d'az kervel,
Na dermes ket evit sevel,
Skriv eur gounid, e penn an de,
Gwelloc'h ez ay an traou goude.

Dirag da Zoue, bep mintin,
Stou da dal ha kowez d'an daoulin,
Klask er bedenn an nerz 'zo red,
Evit bale war-eün bepred.

Gant gras Doue evit mantell,
Kerz, mall ennout, d'an daot zantel,
Debr korf da Zalver, ev e wad,
Int eo magadurez peb oad.

Neuze, samm ar bec'h war da skoaz,
Da biou eo manket Krist biskoaz?
En e roudou laka da re,
Ha bouc'h an dachenn adarre.

Dindan ar wrez, na bleges ket,
Toull bemdez al lodenn merket,
Tra ma ra an heol splann e dro,
Gant da c'houezenn gleb da ero.

Ma fell d'it kutuilh ar rozenn,
Kign da zouarn ouz an dreznenn;
Araok eosti greun alaouret,
Skuiz da dreid war al lann aret.

Bez eveziek ha striv hep prez,
Sell hepken ouz ar pez a rez,
Ober padus hag ober kaer
Setu reolenn aour ar skolaer.

Kerz war-raok, kousto pe gousto,
An dud krenv 'deu ar maout ganto,
Diouz skouer ar C'hrist, ebars da stad,
Gra bemdez bolontez an Tad.

Eus park ar skiant, ar furnez,
Chach tenzoriou kuzet ganez,
Nebeut outo a dalv kalz aour
Hag hepdo an den a jom paour.

Lufr bemdez perlezenn da feiz,
Hepzi, er bed, n'eus mui a Vreiz;
Desk ha komz yez koz da dadou,
Kaera mad etouez ar madou.

Lenn, skriv, studi ha kemer poan,
Adalek fein tre beteg koan,
Ha, pa lazi da c'houlouenn,
Da gousk en do hunvreou laouen.

Hed da vuhez, lirzin e vi,
Diouz hanaf ar joa ec'h evi
Rag eur feunteun a levenez
A zougi, e pep lec'h, ganez.

Ha, pa vo deut eur da varo,
Da Varner d'id a lavaro:
« Ouz da bez-labour laouen oun,
Pign, servicher, beteg ennoun.

Deus da gemer ar gurunen
'Zo em dorn evidout ganen,
Deus da balez ar veuleudi,
Deus da danva mel va dudi.

Deus d'am c'hichen da ziskuiza,
Deus, war eun tron, da azeza,
Ankoua poan an harlu c'houero,
Digor eo d'id doriou da Vro. »

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

Lettres d'excuse de nos amis

Gued, de gouel Maria.

Le curé de la cathédrale envoie au Bleun-Brug et à tous les Bretonnants réunis dans la ville du Bon-Secours, ses fraternelles salutations.

Ils sont quatre frères qui, parce qu'ils vivaient isolés

les uns des autres depuis 3 ou 400 ans, ne se comprenaient presque plus. Merci au Bleun-Brug qui travaille à les rapprocher, car à force de se rapprocher ils finiront par se comprendre de nouveau. Les cœurs sont à l'unisson; les parlers différent, mais seulement en apparence; et cette variété elle-même, qui est identique à la variété des idiomes littéraires de la Grèce, est une richesse en réalité, ici comme là-bas, à la condition toutefois qu'elle ne demeure pas une cause d'isolement.

Beomp unanet.

J. BULÉON,
Person Guened.

**

Paris, le 4 Août 1925.

MONSIEUR LE PRÉSIDENT,

J'ai été bien sensible à votre aimable invitation et j'espérais bien pouvoir y donner suite. Le premier contact que j'ai pris avec nos amis de Bretagne l'an dernier m'a donné une bien grande envie de nouer des relations plus suivies et peut-être plus efficaces avec notre province sœur. Votre congrès serait une excellente occasion, d'autant plus que j'aurais l'honneur et le plaisir d'y revoir votre vaillant Evêque qui a été si aimable envers moi lors de la réunion de Saint-Brieuc.

Vous me dites que la Flandre catholique sera représentée par l'abbé Gantois. Bretagne, Flandre, Alsace, quel beau trio! et que nous serions forts si nous nous unissions plus intimement. Je voudrais venir vous le dire, le dire à vos chers Bretons. Mais hélas, ma santé paraît s'opposer si violemment à la réalisation de mon rêve que je me vois dans la pénible nécessité de vous prier de ne pas compter sur ma présence.


Strasbourg, 21 août. Lorsqu'à Paris j'écrivais il y a une quinzaine de jours les quelques lignes qui précèdent j'avais encore le secret espoir de pouvoir peut-être venir à l'improviste assister à votre Congrès. Mais je me vois hélas! obligé d'y renoncer définitivement. Je vous en exprime mon plus vif regret. Je serai d'esprit et de cœur avec vous! Veuillez offrir mes regrets avec mes plus respectueux hommages à Monseigneur Serrand et l'expression de la plus vive sympathie des catholiques d'Alsace que j'aurais été si heureux et si fier de représenter au milieu d'eux, aux amis de Bretagne qui se rencontreront dans votre Congrès.

Veuillez en même temps recevoir pour vous, Monsieur le Président, l'expression de mon plus cordial et respectueux salut.

EUG. MULLER,
Ch. hon., Député d'Alsace.

Perag e choman paotr yaouank


Allegretto.



Kal-zik a dud a jom sou - e - zet dré - ma ne zoun ket c'hoaz for - tu



niet Mont rân da goun - ta deoc'h va re zan 'vel se ne jo - mot ket en es



ton se - tu a - ze e - vit pe - tra ne fell ket d'in for - tun - ia

DISKAN

Setu aze evit peira
Ne fell ket d'in fortuna.

1

Kalz a dud a jom souezet [niet:
Dre ma ne 'z oun ket c'hoaz fortu-
Mont 'rân da goun-ta deoc'h va rezon,
'Velse ne jomot ket en eston.

2

Eur pennad a zo em eus bet c'hoant
Ober al lez da eur plac'hig koant;
Allaz! trumm goude 'm eus bet gwe-
'Vel ar re all ez oa dirollet [let

3

Eur poent zo bet e vezent gwelet
Gant chaliou kaer ha koeffou brodet
Siouaz breman en o gwiskamant
'Z eus eur maread a jenchamant.

4

Lostennou berr beteg an daoulin
Ma vez an dud dezo o c'hoarzin
Beteg paotred yaouank 'vez gwelet,
Ruz gand ar vez, o vont da guzet.

5

Gwechall d'o digas da di o zad
Eun tok ledan vouloutzet 'oa mat;
Breman 'ranker kaout eur «chapeau mou»
Eun tamm kanenn hag eur manegou.

6

Berniajou poultr war o figurion
Ha pentur ruz war o muzellou,
Evit beza muioc'h delikat,
'Lakeont traou du var o daoulagad.

7

Gant kalz anezo bleo trouc'het
Divalo-mez, farsus da welet;
Beteg ar chas 'velet anezo
A stag diouztu da harzal outo.

8

En o zreid koz tammou bouteienn
Seulioù uhel, traou fall ha disters
Lercier ken sklear a vez ganto
Ma vez gwelet o c'hroc'hen dreiz

9

Boucles d'oreilles var o diskouant
Eun tamik *sacoch* en o daouarn
Kalz gwalennou var o bizied,
Evit klask deseo an holl botred

10

Maread anezo a vez gwelet
'C'h ober ardou 'vel an *dourister*
Ha pen em gavont ebarz o zi,
'Vez ket eun tamm bara da zreb

11

Kalz a zo c'hoaz, pa deu an noz
Pa vez d'an oll poent mont da repo
A rank gourvez var eur bank tou
N'o deuz ket eur gwele da gousk

12

Poent eo d'in paouez ha chom aze
Gwest e ve ar merc'hed da fac
Met 'pad ma c'heilhint gizioù ne
Morse ne gemerin eur vaouez

FRANCIS MOA

Palmarès des Concours du Bleun-Brug (1925)

I. Concours de déclamation. — Maximum 40 points.

1. Guillaume Marchadour, 61, rue Jean-Jaurès, Douarnez, 40 points.
2. Yves Floch, Plouguerneau, 38.
3. Yves Le Floch, Saint-Thégonnec, 36.
4. Louise Kerbaol, Lanneuffret, 36.
5. François Robin, Plouézec, 35.
6. Marie Manac'h, Lanneuffret, 33.
7. Marie-Yvonne Olivier, Lanneuffret, 32.
8. Jean-Louis Pichon, Guiclan, 32.
9. François-Louis Manac'h, 32.
10. Lociz ar Floch, Lannilis, 31.
11. Yann du Roscoat, Carantec, 29.
12. Charles-François Kerbaol, Lanneuffret, 29.
13. Jean Fichoux, Plouguerneau, 29.
14. Marie Kerbaol, Lanneuffret, 29.
15. Jean Dantec, Saint-Vougay, 28.
16. Alphonse Salaün, Ploudalmézeau, 28.
17. Henri Kerbaol, Lanneuffret, 28.
18. Louis Kerbaol, Lanneuffret, 28.
19. Auguste Kerbaol, Lanneuffret, 26.

II. Concours de chorales. — A 4 voix mixtes, 1^{er} prix, Saint-Pierre-Quilbignon.

A 3 voix mixtes, 1^{er} prix, Saint-Nicolas-du-Pélem; 2^o prix, Saint-Mathieu de Quimper.

A 2 voix, 1^{er} prix ex-æquo, Saint-Pol-de-Léon et Saint-Mathieu de Quimper; 2^o prix ex-æquo, Plouguerneau et Saint-Pierre-Quilbignon.

Série spéciale. Prix: Plounévez-Moëdec.

III. Chanteurs individuels. — Solistes. — 1^o Soprani, 1^{er} prix, Mlle Plantez, de Saint-Pol-de-Léon; 2^o Barytons, ex-æquo, M. Maurice, de Saint-Pierre-Quilbignon; M. Baré, de Saint-Mathieu de Quimper.

IV. Concours KOULMIG ARVOR :

- 1^o Enfants de moins de 14 ans. (**Breuriez ar Brezoneg**).
1. Aimée Le Bail, de Ploumagoar.
2. Louise Omnès, de Ploumagoar.
3. Denise Lamidon, de Ploumagoar.
4. Jeanne Aler, de Ploumagoar.
5. Emilie Béhec, de Ploumagoar.
- 2^o Jeunes gens et jeunes filles.
1. Ex-æquo, Jean-Marie Lautout, de Coadout; Madeleine Le Moal, de Coadout; Pierre Boulbin, de Guingamp.
2. Rosé Brizot, de Prat.
3. Marie-Louise Lucas, de Prat.
4. Louise Courtois, de Coadout.
5. Marie Courtois, de Coadout.

V. **Lecture bretonne (Breuriez ar Brezoneg) et traduction du texte.**

Il a été tenu compte de la compréhension du texte breton et l'équivalent français de certaines expressions a été demandé.

a) **Garçons.**

1. Louis Pichon, de Saint-Thégonnec (Léon).
2. Yves Le Floc'h, de Saint-Thégonnec (Léon).
3. Charles Uguen, de Plouguerneau (Léon).
4. Job Abguillerm, de Plouguerneau (Léon).
5. Robin, de Plouézec (Trégor).
6. François Courtois, de Coadout (Trégor).
7. Lucien Kerandel, de Plouguerneau.
8. Y. Abjean, de Plouguerneau.
9. Antoine Pronost, de Plouguerneau.
10. Louis Bars, de Plouguerneau.
11. Marcel Breton, de Plouguerneau.
12. Pierre Le Sauz, de Plouézec (Trégor).
13. Jean Morvan, de Plouézec (Trégor).
- Louis Dollo, de Plouézec (hors classe).

b) **Filles.**

1. Ex-æquo, Suzanne Le Roux, de Brélévenez; Alexandrine Cocaign, de Pleumeur-Bédou.
2. Anna Queffelec, de Plouézec.
3. Yvonne Nicol, de Plouézec.
4. Yvonne Le Meur, de Plouézec.
5. Bernadette Le Gall, de Brélévenez.
6. Marie Guyomar, de Plouézec.
7. Ex-æquo, Angèle Taton, de Ploumagoar; Louise Graouiec, de Brélévenez.
8. Jeanne Garandel, de Plounévez-Moédec (Trégor).
9. Anna Le Fustec, de Plounévez-Moédec (Trégor).
10. Marthe Bolloc'h, de Plouézec.
11. Jeanne Bouédec, de Ploumagoar.
12. Ex-æquo, Maria Bourdellès, de Brélévenez; Elisa Hamon, de Plouézec.
13. Yvonne Béhec, de Ploumagoar.
14. Alice Le Sauz, de Brélévenez.
15. Louise Omnès, de Ploumagoar.
16. Germaine Peurou, de Ploumagoar.
17. Ex-æquo, Simone Thoraval, de Brélévenez; Anna Le Bail, de Ploumagoar.
18. Ex-æquo, Denise Lamidon, de Ploumagoar; Françoise Le Gall, de Ploumagoar.
19. Emilie Béhec, de Ploumagoar.
20. Maria Kerléveau, de Brélévenez.
21. Louise Maigat, de Plouézec.
22. Odette Guégan, de Brélévenez.
23. Anna Le Gall, de Brélévenez.
24. Jeanne Allaire, de Ploumagoar.

Le jury: Taldir, Karevro, ar Yeodet, Penndero.

VI. **CONCOURS ECRIT (Breuriez ar Brezoneg).**

1^{er} prix (Prix Gweltas) (1), 50 fr. et le voyage de Guingamp, Suzanne Le Roux, de Brélévenez.

(1) Ce prix est ainsi nommé en mémoire du regretté M. Coroller, de Quintin, qui donna de son vivant, à la Breuriez ar Brezoneg, de grandes marques d'attachement. Que les enfants bretons aient un souvenir pour lui dans leurs prières!

2. Alexandrine Cocaign, de Pleumeur-Bédou.
3. Joséphine Léost, de Plabennec (Léon).
4. Ex-æquo, François Courtois, de Coadout (Trégor); Léon Favé, de Cléder (Léon).
5. Bernadette Le Gall, Brélévenez.
6. Yvonne Chapel, Plouézec.
7. Alphonsine Allain, Brélévenez.
8. Marie Guéguen, Sizun (Kerne).
9. François Robin, Plouézec.
10. Maria Bourdellès, Brélévenez.
11. Anne-Marie Le Moal, Coadout.
12. Yvonne Nicol, Plouézec.
13. Anna Le Gall, Brélévenez.
14. Maria Kerléveau, Brélévenez.
15. Yvonne Guégan, Brélévenez.
16. Marie-Anne Salaün, Loperhet (Kerne).
17. Jeanne Allain, Brélévenez.
18. Ex-æquo, Eugène Dubois, Plévin; Alice Le Saux, Brélévenez.
19. Louis Dollo, Pludual.
20. Louis Ropartz, Coadout.
21. Simone Thoraval, Brélévenez.
22. Anna Le Guefflec, Plouézec.
23. Y. Le Floc'h, Saint-Thégonnec.
24. Guillaume Guefflec, Plouézec.
25. Maria Godé et Eugénie Quilin, Brélévenez.
26. Armand Hamon, de Bonen, Yvonne Flanchee, de Brélévenez.
27. Pierre Morvan, Plouézec.
28. Yvonne Le Meur, Plouézec.
29. Renée Philippe, Brélévenez.
30. Pierre Le Saux, Plouézec.
31. Guillaume Le Corre, Lanhouarneau (Léon).
32. Renée Libouban, Brélévenez.
33. Ambrosine Le Couliz, Brélévenez.
34. Edmond Dupuis, Perret, près Gouarec (Kerne).
35. Odete Guégan, Brélévenez.
36. Jean Morvan, Milizac (Léon).
37. Jean Cottin, Pommerit-le-V^{te}.
38. Elise Hamon, Plouézec.
39. Jean Morvan, Plouézec.
40. Joséphine Matagnez, Plouézec.
41. Yvonne Gauffeny, Plouézec.
42. Louise Le Maigat, Plouézec.
43. Marguerite Le Bolloc'h, Plouézec.
44. Marie Guyomar, Plouézec.

VIII. **Prix Calloc'h**: 500 francs, décerné à M. l'abbé Joseph Le Bayon pour son drame intitulé: **Kado, Roue ar Mor.**

VIII. **Kenstrivadeg ar Brezegerez.**

Kenta priz: Yann Dantec, Sant-Nouga.
 Eil priz: Anna Youenou, Douarnenez.
 Trede priz: Jakez Dourmap, Lanarvily.
 Pevare priz: Mac'harit Gourlaouen, Douarnenez.
 Pempvet priz: Herve ar Bras, Gwinvinter.
 Ar varnerien o deus lavaret ranna evelhen ar prizioù: 120 lur d'ar c'henta; 100 lur d'an eil; 80 lur d'an trede; 75 lur d'ar pevare, ha 75 lur d'ar pempvet.

IX. Kenstrivadeg an Aot. Roudot.

Perak emañ ar brezoneg o koll tachenn en ho parrez:
Kenta priz: L. B., Plabennec.
Eil priz: Loeiz ar Floc'h, Lannilis.

X. Kenstrivadeg Arzur de la Borderie.

Eun daolenn eus istor Breiz epad amzer ar Rouaned hag amzer an Duked.
Kenta priz: Anna Sevellec, Douarnenez.
Eil priz: Mari Kergoat, Douarnenez.

XI. Barzoniez.

Eur rimadell farsus da zispenn eur c'hiz fall bennak:
Kenta priz: Jorj Tanguy, Plouguiel, kichenn Treger.
Eil priz: Rosa Gonidec, Douarnenez.

XII. Komz-plen.

Ober eun dolenn eus buhez Breiz war ar maaz epad ar brezel:
Kenta priz: Anna Youenou, Douarnenez.
Eil priz: Anna Lappart, Douarnenez.
Da dosta goude: Mac'harit Guéguen, Sizun.

Er miziou a zeu e vo kavet e **Feiz ha Breiz** pennadoù eus an deverioù a zo bet priziet, ar pennadoù kaera. War wellat ez a ar genstrivadeg, hag er bloaz-mañ ar merc'hed, a zo deuet ive da ziskouez e karont o yez hag e c'hellont skriva ha komz brao ar brezoneg.

Pempvet Kenstrivadeg ar C'hardinal Dubourg

ROLL AR PRIZIOU

E c'hellet gounit 210 poent

PAOTRED

1	Pierre Landuré, Skol gristen, Lesneven.....	185
2	François-Marie Saillour, Guitevede.....	178
3	Jean-Louis Palud, Guitevede.....	161 1/2
4	Joseph Combot, S. G., ar Folgoat.....	159
5	F.-L. Le Borgne, Sk. ar Pont, Guitevede.....	158
6	Joseph Guillerm, Plouzeniel.....	156
ex-æq.	Pierre Dantec, Plouzeniel.....	156
8	Laurent Quémener, Sk. Kastel, Plouvorn.....	149 1/2
9	François Boucher, S. G., ar Folgoat.....	148
10	Yves-Marie Cornily, Guitevede.....	144 1/2
11	Vincent Salou, Kerlouen.....	144
12	Yves Gouriou, S. G., ar Folgoat.....	140
13	Yves Guéguen, Sizun.....	137
ex-æq.	François-Louis Paul, Guitevede.....	137
15	Jean Herry, S. G., ar Folgoat.....	135
16	Yves Le Borgne, Guitevede.....	134
17	Louis Cloarec, Skolaj Kastel, Santec.....	131

18	Jean Gourhant, S. G., Lesneven.....	130
19	Félix Toullec, S. G., ar Folgoat.....	127
20	Félix Abiven, S. G., Lesneven.....	121
ex-æq.	Hervé Loaec, S. G., Lesneven.....	121
ex-æq.	Jean-François Saout, Guitevede.....	121
23	François Lesquivit, Sk. ar Pont, Dirinon.....	120
ex-æq.	E. Guéguen, Skolaj ar Pont.....	120
25	Jean Siche, S. G., Lesneven.....	118
26	Yves Inizan, Skolaj ar Pont, An Trehou.....	117
27	Hervé Scao, Skolaj ar Pont, Briecc.....	116
ex-æq.	Jean-Louis Saillour, Guitevede.....	116
29	Joseph Loaec, S. G., Lesneven.....	115
30	Guillaume Ezel, Sk. ar Pont, Ploare.....	114
31	Jean-Louis Tanné, S. G., Lesneven.....	112
ex-æq.	René Brenaut, Sk. ar Pont, Dirinon.....	112
33	Goulven Bihan, S. G., Lesneven.....	111
ex-æq.	Louis Jacopin, S. G., ar Folgoat.....	111
35	Albert Bihan, S. G., Lesneven.....	110
ex-æq.	Hervé Sallou, Guitevede.....	110
37	François-Louis Merrien, S. G., ar Folgoat.....	109 1/2
38	Joseph Bihan, S. G., Lesneven.....	108
39	Jean Bernard, S. G., Collorecc.....	106

Taolenn a enor

40	Joseph ar Scao, S. G., Briecc.....	105
ex-æq.	René Gougan, Sk. ar Pont, Briecc.....	105
ex-æq.	Jean-Pierre Martin, S. G., ar Folgoat.....	105
43	François Floc'h, S. G., ar Folgoat.....	104
ex-æq.	François Toullec, S. G., ar Folgoat.....	104
45	Hervé Conseil, S. G., ar Folgoat.....	103
46	Yves Balcon, S. G., ar Folgoat.....	102 1/2
47	Jean-Paul Morizur, S. G., Lesneven.....	101 1/2
48	Goulven Couloigner, S. G., Lesneven.....	101
ex-æq.	Jean Donval, S. G., ar Folgoat.....	101
50	François Pellé, S. G., ar Folgoat.....	100 1/2

PAOTREZED


1	Michelle Pengam, S. G., Lesneven.....	176
2	Marie Fouasseur, S. G., Lesneven.....	170 1/2
3	Angelina Le Borgne, S. G., Mespaul.....	167 1/2
4	Marie Conseil, Guitevede.....	160
ex-æq.	Marie-Anna Coathalem, Briecc.....	160
6	Victorine Le Guen, S. G., Lesneven.....	159
ex-æq.	Marie Floc'h, S. G., Cleder.....	159
8	Marie Quéré, S. G., Cleder.....	157
9	Marie Le Guen, S. G., Cleder.....	156
ex-æq.	Marie Pencreac'h, Locomelard.....	156
11	Marie Le Borgne, Guitevede.....	155 1/2
12	Marie-Anne Cueff, S. G., Cleder.....	154
ex-æq.	Yvonne Mercier, S. G., Mespaul.....	154
14	Aline Saout, Guitevede.....	153 1/2
15	Elisa Mobihan, S. G., Lambol-Wimilio.....	153
ex-æq.	Anne-Marie Person, S. G., Mespaul.....	153
17	Louise Rognant, S. G., Lesneven.....	152
13	Reine Creignou, S. G., Mespaul.....	149
ex-æq.	Marie Allain, S. G., Sant Wazec.....	149

20	Reine Bellec, S. G., Cleder.....	148
ex-æq.	Yvonne Dourmap, S. G., Lesneven.....	148
22	Jeanne Meudec, S. G., Guiclan.....	146 1/2
23	Marie-Y. Daniellou, S. G., Cleder.....	146
24	Scholastique Bihan, S. G., Lesneven.....	145 1/2
25	Jeanne Argouarc'h, S. G., Mespaul.....	145
ex-æq.	Marie Pellen, S. G., Plouvian.....	145
ex-æq.	Marie Grall, Guitevede.....	145
28	Thérèse Calvez, S. G., Lesneven.....	144
29	Yvonne Mingam, S. G., Guiclan.....	143 1/2
30	Anne Batany, S. G., Lesneven.....	142
31	Yvonne Coajou, S. G., Pouldregat.....	142
32	Cécile Guillou, S. G., Lesneven.....	141
33	Yvonne Guéguen, S. G., Briec.....	140 1/2
34	Jeanne Quiviger, S. G., Cleder.....	140
+ 35	Louise Paul, S. G., Plouvian.....	139 1/2
36	Marie Le Borgne, S. G., Cleder.....	139
ex-æq.	Marguerite Laot, S. G., Lesneven.....	139
ex-æq.	Pauline Jaffrès, S. G., Lesneven.....	139
ex-æq.	A. Le Bris, S. G., Lesneven.....	139
40	Rosalie Rosec, S. G., Cleder.....	138
41	Louise Falhun, S. G., Cleder.....	137
ex-æq.	Jeanne André, S. G., Cleder.....	137
ex-æq.	Simone Ansquer, S. G., Pouldregat.....	137
44	Catherine Le Roux, S. G., Cleder.....	136
ex-æq.	Mari-Anne Le Bihan, S. G., Cleder.....	136
ex-æq.	Marie-Yvonne Riou, S. G., Cleder.....	136
ex-æq.	Anne-Marie Mear, S. G., Mespaul.....	135
48	Anna Herviou, S. G., Sant Woazec.....	135
ex-æq.	Anne-Marie Méar, S. G., Mespaul.....	135
50	Marie Le Bis, Cléden-Cap-Sizun.....	133
51	Isabelle Le Lez, S. G., Cldeer.....	132
52	Marie Godec, S. G., Guiclan.....	131
ex-æq.	Victorine Prigent, S. G., Mespaul.....	131
ex-æq.	Marie-Anne Colin, S. G., Pouldregat.....	131
ex-æq.	Marguerite Quilec, S. G., Cleder.....	131
57	Anna Le Foll, S. G., Briec.....	130 1/2
58	Jeanne Lagadec, S. G., Lesneven.....	130
59	Marie Ellegoët, S. G., Plouvian.....	129 1/2
60	Jeanne Le Du, S. G., Sant Woazec.....	129
61	Anne-Marie Quioc, S. G., Cleder.....	129

Taolen a enor

62	Catherine Velly, S. G., Cleder.....	128
ex-æq.	Marie-Anne Gourmelen, S. G., Lesneven.....	128
ex-æq.	Jeanne Fouasseur, Kerlouen.....	128
65	Aline Kervarec, S. G., Pouldregat.....	127
ex-æq.	Anne-Marie Roué, S. G., Cleder.....	127
ex-æq.	Yvonne Quéré, S. G., Cleder.....	127
68	Augustine Gouriou, S. G., Lesneven.....	126
ex-æq.	Louise Calvez, S. G., Plouvian.....	126
70	Julia Tanguy, S. G., Mespaul.....	125 1/2
71	Marie-Anne Rospars, S. G., Sant Woazec.....	125
72	Louise Jolivet, S. G., Pouldregat.....	124
ex-æq.	Jeanne-Yvonne Rolland, S. G., Guiclan.....	124
74	Jeanne Drévès, S. G., Lesneven.....	123

ex-æq.	Perrine Roguès, S. G., Guiclan.....	123
75	Julia Cazuc, Guitevede.....	121
ex-æq.	Louise Elard, S. G., Cleder.....	121
77	Jeanne-Y. Conseil, S. G., Cleder.....	120
78	Adèle Son, S. G., Mespaul.....	119 1/2
79	Jeanne Montréer, S. G., Lesneven.....	118
80	Marie Ménez, S. G., Lesneven.....	118
ex-æq.	Marie-Anne Allain, S. G., Sant Woazec.....	118
ex-æq.	Madeleine Rolland, S. G., Plounéour-Ménez...	118
83	Marie-Louise Kerroz, S. G., Lesneven.....	117
ex-æq.	Thérèse Bourhis, S. G., Pouldregat.....	117
85	Francine Le Saint, S. G., Lesneven.....	116 1/2
86	Marie Guiriec, S. G. Pouldregat.....	116
ex-æq.	Marie Bourdon, S. G., Pouldregat.....	116
ex-æq.	Anna Colin, S. G., Pouldregat.....	116
89	Marcelle Plouliquen, S. G., Lesneven.....	115
90	Angéline Pellay, S. G., Pouldregat.....	113
91	Marie Guillermou, S. G., Briec.....	112
92	Julienne Kerouanton, S. G., Lesneven.....	111
93	Louise Créac'h, S. G., Cleder.....	110
94	Marie-Anne Squiban, S. G., Lesneven.....	109 1/2
95	Anna Bot, S. G., Briec.....	109
96	Marguerite Gourlaouen, S. G., Pouldregat.....	108
ex-æq.	Marie Le Borgne, Plouarzel.....	108
ex-æq.	Alexandrine Paugam, S. G., Mespaul.....	108
99	Thérèse Pellé, Cléden-Cap-Sizun.....	107
ex-æq.	Alice Géréec, S. G., Plounéour-Ménez.....	107
101	Marie-Anne Stervinou, S. G., Sant Woazec.....	105 1/2
102	Marie Le Pape, S. G., Pouldregat.....	104
ex-æq.	Yvonne Guen, S. G., Lesneven.....	104
104	Marie Cochard, S. G., Lesneven.....	102
105	Marie Tulipo, S. G., Briec.....	101
106	Anne Le Moigne, S. G., Sant Woazec.....	100
ex-æq.	Marie-Anne Guelec, S. G., Pouldregat.....	100
ex-æq.	Germaine Marc, S. G., Lesneven.....	100



O deus gounezet priziuo divinadennoù e'houec'h miz kenta ar bloaz:

21 o deus bet 600 point :	Mari Laurent, Gwipavas.
Mar. Cabon, Guisseny.	F. Mear, Trezillide.
CletCoz, Cléden.	Felix Moal, Enez-Vaz.
Louis Floch'h, Plomeur.	J. P. Moal, Tregarvan.
J. B. ar Goff, St-Thegonnec.	Penn-Kalet, Gwitalmeze.
Victor Gouriou, St-Thonan.	Yann ar Perrot, Rosko.
Ch. ar Guen, Lambezellec.	M. Postec, St-Thonan.
Rene Jacolot, Gwipavas.	Fr. Pouliquen, St-Thegonnec.
G. J. Pont-Melvez.	Itr. Rolland, Mayenne.
Mari Kervella, Plougastell.	J. M. Salaün, An Trehou.
L. Lars, Plouzane.	M. A. Segalen, Gouesnou.

Etre an 21-man e rannimp talvoudegezh 145 lur a levriou, en eur ober henvel d'an holl p'eo gwtr int holl kevatal; d'an 19 all e roimp peb o levr a 20 real.

1 he deus bet 530
Mari Guyader, Lanneufret.

3 o deus bet 560
August Abarnou, Plouyvan.
Gabriel Kersimon, Plabennec.
Henri Madec, Sant-Divy.

7 o deus bet 540
Frans. Gourmelon, Plougastell.
Nijerien Breiz, Tours.
Jann Tanguy, Sant-Thegonnee.
J. M. G., Goulehan.

J. ar Goff, Pouldergat.
W. L. V., Sant-Nic.
Paulina Pinvidic, Gwikar.

6 o deus bet 520
St. Boucher, Plougerne.
Henri Larvor, Mellars.
Jos. Lossouarn, Gwissentay.
Tanguy Creignou, Gleder.
J. F. Diverres, An Trehou.
Mikael Dreves, Plouzane.

2 o deus bet 500
Mari Kermarrec, Sant-Divy.

Ha breman e tigoromp eur gentrivadeg nevez ha ne bada nemet tri miz etre ar re n'o deus ket getlet kaout priz ebet c'hoaz er bloaz-man.

DIVINADENNOU MIZ HERE

I. — Gwenn evel ere'h,
Glaz evel kerc'h
ruz evel tan,
du evel bran.

20 p. ar r. Digaset gant K. ar Bihan, Gwikar.

II. — An hini am gra n'am dalc'h ket;
An hini am doug n'am c'hlas ket;
An hini am gwisk n'her goar ket?

20 p. ar r. Digaset gant J. M. S. Soudard e Kemper.

III. — Gand ar c'houec'h ger brezonek-man: heol,
preiz, kleiz, kreiz, dourn, paour, grit c'houec'h
ger brezonek all en eur denna eul lizerenn eus
pep hini anezho ha gand al lizerennou tennnet,
en eur o lezel, an eil war lerc'h eben evel m'int
bet kemeret, furmit hano eur zantez a veve e
kantvejou kenta an iliz.

20 p. ar r. Digaset gant Franseza Creignou, Gleder.

IV. — Petra a ya d'ar ster
A lez e vouzellou er gêr?

20 p. ar r. Digaset gant Loeiz Cadou, eus ar Zant, Bro-Wened.

V. — Gériou karre a beder lizerenn pep hini a c'heller da lenn koulz eus a zehou da gleiz evel eus an nee'h d'an traou.

☼☼☼☼ Perc'hennet gant Breiz
☼☼☼☼ D'ar c'hemener eo red
☼☼☼☼ Eur Roue eus Rom
☼☼☼☼ N'e garas biskoaz e vanm.

20 p. ar r. Digaset gant G. J. Pont-Melvez.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet abenn ar 25 eus ar miz da:

M. le Directeur du **Feiz ha Breiz**, à Plouguerneau (Finistère).

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAQUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerzioù
ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F^{re}) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp

ADMINISTRATION
du **FEIZ HA BREIZ** :
FR. GEORGELIN,
Brest — 4, rue du Château — Brest
c/c 44-40 RENNES

ADMINISTRATION
du *Bleun-Brug* et de l'*Engleo Sant Iltud*
Yv. DREZEN,
BREST — 4, rue du Château — BREST
c/c 6238 RENNES

ABONNEMENTS INDIVIDUELS
« FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD »
Bretagne 10 f. l'an
France 11 f. l'an
Etranger 12 f. l'an
Abonnements collectifs
Feiz ha Breiz (seul)
(à partir de 5 exempl.) . . . 5 f. l'an

PUBLICITE
Toutes les insertions sont faites
à l'année
Une page entière 300 fr.
Une demi-page 175 fr.
Un quart de page 100 fr.

TAOLENN AR MIZ. — Tro-Breiz Kannaded ar Bleun-Brug.
— Bez meur soudarded ha martoloded Breiz, Y.-M. PERROT. — E skolaj Lesneven. — Bleun-Brug Gwengamp. — Viktoria Konan a Zant-Luk, J. U. — An Anaon, J. L'HELGOALCH. — Gwilhou ar Rouz, G. P. — An diaoul en aod, K. AR BOUTINOU. — Roue al Laz, D. N. D. — Keleier ar miz. — Divinadennoù.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ DU

- 1 a viz Du.** — Gouel an Holl Zent, p. 761 e levr an A. Uguen.
- 2 a viz Du.** — Hanter Gouel an Anaon, p. 768.
- 8 a viz Du.** — XXIII^{es} sul goude ar Pantekost. An oferenn p. 518. Gousperou kenta Dedi iliz Hor Zalver e Rom p. 607.
- 15 a viz Du.** — XXIV^{es} sul goude ar Pantekost, p. 240.
- 22 a viz Du.** — Diveza sul goude ar Pantekost, p. 522.
- 29 a viz Du.** — Sul kenta an Asvent. An oferenn p. 145. Gousperou kenta sant Andre, p. 620.

Tro-Breiz Kannaded ar Bleun-Brug

14-15-16 Here 1925)

Ar Bleun-Brug dirak Eskibien Breiz

Kannaded a-beurz ar *Bleun-Brug*, an Aotronez Joanno, person Benac'h, Chevillotte, rener Strollad B.-B. Leon, hag E. ar Moal, rener ar B.-B., a zo bet o kaout an Ao. Kardinal Roazon, Ao. 'n Eskob Gwened hag Ao. 'n Eskob Naoned evit disklêrian d'ezo menoz ar B.-B. ha kaout o asant war gement a ra hag a zonj ober.

Bet o deus hor c'hannaded digant an aotronez vras-man ar gwellan digemer. E Gwened, an Ao. Gouraud a roas d'an Ao. Guillevic, vikêl-vras, karg da bléal gant ar *Bleun-Brug*, en e hano. Kaout a reas mat gwelet ar B.-B. o tont da vloaz d'ober e c'houel da Vro-Wened hag o sevel eur Strollad, evel e pep rann-vro all.

An Ao. Guillevic, vikêl-vras, an Ao. Buleon, person an iliz-veur, an Ao. Coetmeur, mestr-kelenner er c'hloerdi, a reas kalz a stad ouz kannaded ar B.-B., ma teuont d'o zrugarekat aman a vouez uhel. — E Roazon, an Ao. Regnault a zigoras e di d'ar gannaded hag a lakas en o serr e amzer hag e boan. C'houec'h en em gavjont da vont da welet an Ao. Charost: an Aotronez Joanno, Chevillotte, Poisson, Perquis, Regnault hag E. Ar Moal. An aotronez Havard ha Quilgars n'o doa ket gallet dont na, kennebeut, an Ao. Delahaye, rener an *Nouvelliste*.

An Ao. Charost a zalc'has hor c'hannaded gantan eun hanter-eurvez oralaj hag a roas kalz meulodi da labour ar B.-B., abalamour ma talc'h war an dro da frankizioù hon bro Vreiz ha da re an Iliz katolik, hep klask en em zispartia diouz ar Frans.

O klevet e tlee ar B.-B. dont d'ober e c'houel da Roazon, er blôaz 1927, e lavaras e teuje hen e-unan d'en em lakat e penn ar gouel-ze.

Kannaded ar B.-B. a lavaras mil drugarez d'an Ao. Kardinal hag a gimidas dioutan, goude m'en

doe roet d'ezo e vennoz, o c'halonou leun a levez.

A-benn nebeut, e kimiadjont ive diouz an Ao. hag an Dimezel Regnault, gant komzou a anaoudegez vat, hag e kemerjont, da eiz eur noz, penn an hent da vont d'an Naoned. Re nebeut amzer o doe da c'hellout o-zri gwelet an Ao. 'n Eskob. Setu ma ne chomas nemet an Ao. Chevillotte, gant karg d'en em gaout ar gwener, da ziou eur goude kreizte, e palez an Eskopti. Hogen, setu ar pez a skriv d'eomp hirio, an aotrou-man:

« Gwelet em eus dec'h an Aotrou 'n Eskob. A-du ganeomp eman penn-da-benn, nemet en deus c'hoant da c'hellout barn ar B.-B. diwar ar skridou hon deus savet. Kasit d'ezan eta *Feiz ha Breiz*, ar « *Bleun-Brug e Gwengamp* » hag all... »

Labour talvoudus ar *Bleun-Brug*, kevredigez breizad ha kristen, a zo breman anevzet ha kavet mat gant holl eskibien Breiz a-unan. En eur mare ha ma 'z eus kement a zellou troet warzu an *Emzao breizek*, o klask gouzout gant pe gelaouenn, gant pe gevredigez eman ar wirionez, setu respont deut a-beurs renerien vrasan ar vro: Gant ar *Bleun-Brug* hag e vignoned! Bretoned, yaouank ha koz, heuilhit hen! Na droit ket elec'h all ho sellou. Henchou dall a gavfet meur a hini; n'eus nemet eur gwir hent, an hini a zo pleustret gant pôted ar *Bleun-Brug*.

Evit eur mignon,

Eur bedenn !

An hini etouez mignoned ar *Bleun-Brug* en deus labouret gant ar muian a fizians hag a nerz-kalon d'hen diazezan evel m'eman breman, an Ao. Delisse, eus Mene-Alban, a zo gwell boaniet er mare-man hag e diegez gantan. Bet e oa gant e dud e gouel ar *Bleun-Brug* e Gwengamp, hag hon doa taolet evez e oa o koll e weled. Siouaz! red eo bet d'ezan, abaoe, mont da gaout eur medisin da Bariz, ha n'ouzomp ket c'hoaz penôs eo bet e dro. Lenerien *Feiz ha Breiz*, kasit da Zoue, me ho ped, eur bedenn virvidik evit ar Breizad kalonek-man, ma teuo d'ezan ar sklêrijenn a-nevez-flamm evit mad e diegez hag ar Vro!

BEZ MEUR soudarded ha martoloded Breiz

maro er brezel bras 1914-1918



Kement hini a zo bet, e Santez Anna Wened, gant goueliou hep par jubile an tri c'hantved bloaz abaoe ma 'z eo en em ziskouezet eno Mamm ar Werc'hez da Yvon Nikolazig, en deus gellet gwelet e oad stag da zevel, e kichen ti Vamm hor Bro, eur bez meur d'ar vugale geiz he deus kollet epad ar brezel bras 1914-1918.

Ar maen kenta (1) anezan a zo bet diazezet da genver sul bras ar Rozera 1922 gand an A. Cerretti, kannad ar Pab e Pariz, dirag ar c'hardinal Charost, arc'heskob Roazon, an A. Gouraud, eskob Gwened, an A. Duparc, eskob Kemper, an A. Morice, eskob Cayes hag eun niver bras a dud.

Tri bloaz a zo abaoe hag abaoe n'eus bet ehan ebet d'al labour warnezan; daoust da-ze emaez pell c'hoaz diouz penn hag an 250.000 lur a zavas ar gest kenta a dle beza teuzet breman, pe dost, ker ker ha ma 'z eo pep tra, ha setu perag e teu holl Eskibien Breiz, eun eil gwech, da astenn an dourn d'ar Vretoned: an aluzen a zo ker pinvidik hag a ra traou ker bras, hag eun dra vras, kaer ha kristen eo a glasker da ober e Santez Anna Wened.

Pep tiegez ha pep parnez o deus enoret Re Varo ar brezel; darn a zo hag a lavar eo tra a-walc'h; fazia a reont; ar zoudarded hag ar vartoloded maro er brezel a dle beza enoret gand ar Vro a-bez; d'ar Vro a-bez, — ha n'eo ket da heman pe da hen-hont, — eo o deus graet vad, ha war ar Vro a-bez eo o deus

(1) Ar geriou-man a lennomp warnan: *Aux Bretons, soldats et marins morts pendant la guerre*. Tenn eo gwelet lakaat galleg hep-ken el lec'h ma ne gomzas santez Anna nemed e brezoneg.

laket bannou skedus ar c'hloar da ziskenn; bet int bet epad pevar bloaz hanter « ar freilh hag a val, ar garreg hag a flastr, ar gurun a freuz, ar mor a veuz » (1). Arabad eo morse hen ankounac'haat; bro ebet goude gwalenn ar brezel, n'he deus bet kement a gaonv da zougen ha Breiz (2) ha bro ebet, en he mantell-gaonv ha war he daoulin, ne ganas ar brezel, evel m'her greas Breiz, dre c'henou he barz brudet Yann Per Calloc'h.

Bez meur holl vrezelourien Breiz a rank eta beza savet, ha ne c'heller e zevel nemed e kalon ar vro, hag e pe lec'h eman kalon Breiz ma n'eo ket e ti ar Vamm an hini eo?

Bez meur brezelourien Breiz a rank beza bras, ma vo gwelet a-bell, (3) gant kement hini a dremenno dre Geranna ha ma c'hello tud Breiz-Izel ha tud Breiz-Uhel en em voda, holl a-unan, er flourenn a vo en dro d'ezan, da zelaou kenteliou ar Re Varo ha da zeski pebez kalonou tud o doa o Zadou.

Bez meur brezelourien Breiz a rank beza kaer, da welet ha da c'houzout; stummet e giz ar vro, ha graet gant traou ar vro; arabad e vefe eun dra diwar zav hag a vo dispennet, e nebeud bloaveziou, gand ivinou yut an amzer; red eo e vefe kizellet e mein galet an Arvor, ma chomo, en e zav, keit hag iliz Santez Anna.

Bez meur brezelourien Breiz a rank dreist holl beza kristen; doare ha doare a zo da enori ar re varo; o enori a c'heller e payaned; o enori a c'heller e kristenien; truezus eo gwelet petra o deus graet ar C'hallaoued d'ar zoudarded maro er brezel; o enori o deus graet en eur zibab relegou unan anezo, — a c'helle beza eur c'hristen eus ar re wella, — ha kaset o deus anezan, hep kroaz, na kloc'h, na beleg, na pedenn, na dour benniget, da eur bez o deus toulllet evitan duhont, dindan an « Arc de Triomphe », e kreiz kêr Bariz; eno, ar zoudard-se a zo deuet da veza evel eun doue nevez evid ar re n'o deus Doue ebet ken; eur gwareg enor, kement hag eun iliz, a zo a-zioc'h e vez; e vez a zo evel eun aoter e vez kinniget bleuniou warnezi ken alies ha bemdez ha dalc'het goulou dirazi ken alies ha bep noz; dont a réar da brezeg en he

(1) Ar en deulin, p. 32.

(2) Ni, Bretoned, hon eus kollet 1/17 er brezel, pa ne gollie ar C'hallaoued 1/30.

(3) An tour a vo war e c'horre en do 45 metr.

c'hichen ha da stoui dirazi en eur ober ar mut epad eur vunutenn.

Skuiz gand ar relijion goz ne heulient ket ken, Aotronez Gouarnamant Pariz o deus savet ar relijion nevez-se, relijion ar Zoudard Disano, ar zoudard ha n'en doa war o menno, feiz ebet ken, hag a zo gallet, dre-ze, e gas d'an douar, evel eur payan!

N'eo ket evelse eo ec'h enoro ar Vretoned o zud varo; n'int ket kouezet ken izel-se c'hoaz evelato; en em gemeret a raint en eun doare all hag a zisklerio dirag ar bed holl pebez kemm a zo etre an diou ouenn-dud.

Bez meur soudarded ha martoloded hor Bro-ni; n'eo ket bez unan hag en deus kollet e ano hag e feiz e vo; hennez a vo bez 240.000 soudard pe vartolod a ouezer mat o anioiu hag a vo o anioiu warnan; hennez a vo eur bez kristen; eun *Hent ar Groaz*, ha n'en do ket e bar e Breiz, a raio an dro d'ezan; eur chapel a vo ennan hag er chapel-se pemp aoter, ken alies a aoter hag a c'houli en doa Hor Zalver war ar groaz, ken alies a aoter hag a eskopti a zo breman e Breiz.

Kement breizad a zo maro edoug ar brezel a rank kaout e vaen-bez gand e ano warnan, e Keranna; priz ar maen, gand an ano kizellet warnan, a zo 200 lur; ar vein-se, a zougo anioiu ar re varo, evit ma vo aesoc'h a-ze o c'haout, a vo renket, dre barrez, war voger Hent ar Groaz a raio an dro da flourenn ar bez meur.

Kement hini a roio eur prof bennak a vezo lavaret eun oferenn evid e dud aet da Anaon, bep lun kenta r miz, ouz aoter sant Erwan, en iliz Santez Anna, beteg ar bloaz 1950.

Kement hini a roio da nebeuta 2.000 lur, a vezo; ma kar goulenn, lavaret eun oferenn er bloaz evitan, epad 20 vloaz.

Evit bez meur brezelourien Breiz, e Santez Anna, lennerien vat, roit holl hoc'h aluzen ha Doue ho paeo!

Y.-M. PERROT.

Ar profou hag anioiu ar zoudarded pe ar vartoloded varo a c'hello beza kaset pe da veleien ar parrezioù, pe d'ar *chalonî Guillo, Trésorier de l'Association diocésaine, à l'Evêché de Vannes (Morbihan)*, pe d'ar *chalonî Pouézat, Supérieur de la Basilique, à Sainte-Anne d'Auray (Morbihan)*. Chèque Postal 88-90, Nantes.

E Skolaj Lesneven

Setu savet, e skolaj Lesneven, eur c'helc'h studi brezonek, e hano Kelc'h Sant-Weltas.

Disul eta (17 a viz Here), ar re vras etouez ar skolaerien a en em vode, e kichen chapelig Sant-Egarek, hag eno e oa displeget dirazo, e berr gomzou, penaos e c'hellfe beza savet, en o zonez, eur c'helc'h-studi, ha pe-seurt labour a c'hellfe beza graet ennan. En amzer hizio, n'eus Breizad yaouank ebet, hag hen war ar s'udi, hag a c'hellfe chom heb anaout doare e Vro. Er skolioù bras e vez desket yez, istor, sevenadurez ar broioù koz hag ar broioù estren, penaos chom hep deski yez, istor ha sevenadurez hor Mamm-Vro.

Ha setu aman reolennoù Kelc'h Sant-Weltas.

I. Kelc'h-studi Skolaj Lesneven a zo takaet dindan skolaer-sant Weltas: ganet e Bro-Skos, diskibl sant Iltud e Bro-Geumri, abostol ar feiz, e Bro-Iwerzon, manac'h e Bro Breiz-Izel, sant Weltas a zesko d'eomp karout hor Mamm-Vro, ha karout ive ar bobloù keltiek eus hor gouenn.

II. Ar c'helc'h-studi a heuilh aliou, menozioù-spered ar gelaouenn *Feiz ha Breiz* ha kemerout a ra perz e gouelioù hag e kenstrivadegoù ar Bleun-Brug.

III. Labour ar C'helc'h: peb ezel, epad e amzer studi, a boanio:

a) Da anaout gwelloc'h hor Bro-Vreiz, he yez, he sevenadurez, he istor, ha, dreist-holl, he lennegezh, evel ma tesk doareoù ha yezioù ar bobloù all (galleg, latin, saosneg...)

b) Da anaout gwelloc'h ha da garout muioc'h hor Zent koz.

IV. Hag evit-se:

a) Pep-hini a labouro, hen e-unan, dre lenn, dre skriva...

b) Bep sul, goude ar gousperou, e-kreiz ehan an dro-vale, e vezo graet, evid izili ar C'helc'h, gand unan eus ar renerien, eur brezegenn; war ar yez, doare ar ouenn, al lennegezh, pe eun danvez all. Goude, e vezo kanet gwerzioù pe sonioù brezonek, hag, evid echui, *Bro goz da Zadou*.

V. E dibenn miz Mae, e vezo graet pardon ar C'helc'h. Deus ar mintin, oferenn gant kantikoù brezonek ha komunion en enor d'hor Zent koz — ha, d'an abardaez, eur brezegenn, e brezonek, eur eur chapel bennak tost da ger Lesneven.

VI. Evit gellout lakat an hano er c'helc'h e ranker beza en trede klas pe en eur c'hlas uhelloc'h. Ar skolaerien yaouankoc'h a c'hello, da c'hortoz, heulia ar c'hentelioù brezonek a vezo roet d'ezo er c'hlasoù izelloc'h.

Renerien ar C'helc'h.

Ha dioc'h-tu goude bodadeg disul, e oa eun 70 bennak o rei o hano evit Kelc'h Sant-Weltas — (11 e-touez ar « Philosophed », 25 er c'hlas kenta, 16 en eil klas ha 26 en trede) — holl prest da staga kalonek, d'al labour. An Ao. Perrot, rener *Feiz ha Breiz*, a deuas, diziou diweza, beteg ar Skolaj, hag a reas, dirag izili ar C'helc'h, eur brezegenn gaer hag entanet, hag a lakeas da virvi e kalon pep-hini ac'hanomp hor c'harantez evit hor Bro.

Pep yez, eme an A. Perrot, a zo eun tenzor hag en deiz ma tiskenno ar brezoneg er bez, gand an diveza a vo ouz e gomz, e vo vo eun tenzor nebeutoc'h, war an douar, hag eun eostig nebeutoc'h e-barz er bed o kana meuleudiou an Aotrou Doue.

An traou kaer ha goude ma ne vefent nement, kaer a dle beza miret; met ar brezoneg n'eo ket kaer hepken eo, ar brezoneg a zo talvoudus; eur yez eo ha p'he gouezer ervat, e tesker kalz buanoc'h ar yezou all.

Ha goude ma ne vije ket kaer ha goude ma ne vije ket gwall dalvoudus e vije red d'eomp c'hoaz deski ar brezoneg, dre ma 'z eo yez hor bro, yez hou tud koz, yez hor gouenn ha m'eman mouez ar gwad o lavaret d'eomp he c'homz.

... Kemeret ho peus an ano a ziskibien sant Weltas ha n'eo ket heb abeg; c'hoant ho peus da ziskouez dre-ze, m'oarvat, ho peus ioul da studia n'eo ket ho yez hepken met ivez hoc'h istor, rak sant Weltas eo Tad Istor Breiz; hen eo a skrivas al levr brudet *De excidio Britanniae: Penaos eo bet diskaret Breiz*. Ya! deskit penaos eo bet diskaret Breiz en amzeriou koz hag en hon amzer, met deskit dreist-holl penaos eo red en em gemeret evit he advel: en eur bez eman; laket eo bet ennan ez-veo, met beo-buhezk eo eno c'hoaz: d'eoec'h c'houi, tud yaouank, — evel an Elez a zavas gwechall ar maen diwar bez Hor Zalver, — eo da zével ar maen a vir outi da vale, da derri he ereou ha da gana en he enor Alleluia bras ar Zui Fask!

A-hend-all, er c'hlasou izelloc'h, er skolaj, e vez graet ive kenteliou brezonek, er 5^o gand an Ao. Menn; er 4^o gand an Ao. Pichon; en 3^o ha 2^o gand an Ao. Bañany, ha darempredet mat e vint, me laka, gant ma zo, a-benn breman, kant hag ouspenn, o veza lakaet o hano — (43 er 4^o — eun 40 bennak er 5^o ha 29 en 3^o hag en eil klas.

Ha perak ne c'hellfet ket, er skolajou all eus hor Bro, sevel kelc'hou henvel ouz hini Sant-Weltas? Daoust ha ne welfet ket, neuze, er c'helta gouel ar Bleun-Brug, e Gwened, eur strollad skolaerien yaouank, ganto, doun en o c'halonou, doujans Doue hag o Bro, hag etre o daouarn, savet ploum hag uhel, banniel digailhar hon Erminig karet.

Prizioù ar Bleun-Brug ha Feiz ha Breiz

Rener *Emgleo sant Itud* a bed gounideien prizioù ar *Bleun-Brug* ha *Feiz ha Breiz* d'hen digarezi evid an dale a laka da gas d'ezo ar prizioù; n'eo ket evit tizout ganto, en deizioù-man, ha gedal a rankint miz kerzu a-barz kaout o leorioù: ne gollint netra evit gedal.



Iliz Itron Varia Wir-Zikour

Bleun-Brug Gwengamp

(Kendalc'h)

AN TREDE DERVEZ

Gand an daou bez-c'hoari-ze, (Braoa merc'h ar barrez hag ar Chiminaou), eo ec'h echu eil dervez ar Bleun-Brug. Hep mar ebet, an dervez-ze eo ar c'henteliusa hag an talvoudusa eus ar c'hendalc'h a-bez. Hen eo a ra al labour founnus, al labour a bouez, al labour ar mutia ret.

Kentelia, reiza hag euna setu aze e bengenn. Ar gwirio-neziou displeget edoug an deiz-ze o deus muioc'h a zounded hag a ledanded eged ar re a vez diskleriet e kerz an derveziadou all. O veza ma 'z int harpet war roc'h divrall ar geleennadurez kristen, ez int startoc'h war o diazez, suroc'h e pep giz. Aesoc'h ha brasoc'h krog o devez war ar sperejou ha frouez founnusoc'h a daolont. Ar c'hoant da zével ar retred-ze a oa diwanet, war am eus klevet, eur pennadig a oa e spered rener ar B.-B. Met ne grede ket bale re vuan war an tu ze gand aon da rankout kila pe chom a sav. An dud a rafe marteze skouarn-vouzar. Ne gomprenfet ket mat a-walc'h talvoudegez eun nevezenti eus ar seurt-ze... A drugare Doue an dud a zo deuet, niverusoc'h zoken eget na c'heded. Hag an niver anezo a zo aet war stankaat adaleg ar mintin beteg ar pardaez-noz.

D'ar merc'her, diouz ar beure, ec'h en em gavomp, eun toulladig brao en iliz Itron Varia Wir-Zikour. An aotrou Buleon, person Sant-Yann-Brevelay (eus eskopti Gwened), a lavar an oferenn hag an aotrou Coëtmeur, kelenner er c'hloerdi bras, a ro ar brezegenn.

Heuliet hag intentet eo gand an holl, Kement-se a ziskouez splann pegen didalvez eo barnedigez an dud-ze,

tud desket war o meno, hag a lavar ez eus kalz re vras kemm etre brezoneg. Gwened hag hon hini-ni.

Da nav eur, ec'h erruomp e sal patronaj Charlez Bleas evid ar studiadedou. Ar zal a zo lenniet brao hag an dud a zo enni a zo denet a bep korn a Vreiz, eus Leon, Treger, Kerne, Goelo, Bro Wened ha Breiz Uhel, eus Pariz, Four, Anjers... Tud a zo aze a bep stad hag a bep micher; tud yaouank, tud en oad, tud koz. Merc'hed zoken a zo en o zouez ha gwelet a ran dreist holl a-hont, da dosta d'al leurenn-c'hoari, eun toullad plac'hed yaouank eus Douarnenez. Erruet int dec'h da noz. Hirio ec'h heuilhint penn da benn al labouriou hag em-berr, gwisket ganto, gwiskamanchou pinvidik o c'horn bro e pignint war ar c'hoarilec'h evit distaga d'eomp kanenn zispar « an Eured ». Eun dudi vo o gwelet gand o c'hoefou hir, broudet ker skanv, gand o chaliou hag o zavacherou stummet ker koant, hag eun drugar o c'hlevet gand o c'han hag o moueziou keñ flour ha ken tomm. Meur a hini m'oarvat a skuilhas daerou o selaou sonig « ar vamm » hag, e gwirionez an daolenn a oa ker frommus ma n'oad ket evit chom dizeblant dirazi. Ar ganerez a gane gant kement a galon; hag ar vamm a luske, a neze hag a bede gant kement a zousder hag a garantez ma tride ha ma c'hourlamme kalonou an holl dud a oa er zal. Lavaromp eta eur bennoz Doue eus ar re c'houeka d'ar merc'hed ze ha selaouomp breman gand evez komzou an Aotrou Moal a ro d'eomp eun damskeud eus an nevezentiou c'hoarvezet edoug ar bloaz, hag a zell a bell pe a dost ouz an emzao breizek.

Nevezenti vras ar bloaz-man eo an dilez en deus roet an A. Dujardin eus e garg a Rener ar *Bleun-Brug* o welet ne c'helle ket, gand ar vicher en deus, en em emmell evel m'eo dleet eus ar Gevredigez; en em astenn a ra kement ma ranker kaout en he fenn unan hag a c'hello rei d'ez i e holl amzer, koulz lavaret: An A. Dujardin abaoe ar brezel en deus laketa ar *Bleun-Brug* d'en em astenn war Leon ha war Gerne a-bez; *Bleun-Brugou* 1920, 1921, 1922, e Kastell-Paol, 1923 e Lesneven ha 1924 Kemper, o deus dihunet eleiz a Vretoned. An Aotrou Moal, o kemeret ar stur eus a dre daouarn an A. Dujardin, a drugareka he-man eus e labour vreiziek a gendalc'ho atao en eur ren, evid ar gwella, Emgleo Sant Ilud.

Goude ar Yeodet, a skoas dec'h da noz ker kalet war-nan, Dir-na-Dor en em zav ive d'e dro a enep lizer an Aotrou de Monzie. Ar c'houarnamant oc'h ober ar pez a ra a ya en tu all d'he gwir. Perak serri evelse dirag ar Brezoneg, hor yez-ni, doriou skoliou ar vro? Perak dinac'h ouz ar vugaligou geiz studi ar yez a glevont er gear abaoe ma 'z eus anezo, an hini a zeskiñt war varlenn o mammou pa oant bihanik? Perak bruzuna etre hon daouarn ar benveg kaer-ze govellet kerkouls gwechall-



An Dukez Anna (Dimezell de Sonis) hag he flac'hed enor

goz gant hor c'hentadou, ha fiziet ennomp ganto, abarz kuitat o Breiz?

Perak??... Abalamour n'ez eus netra a nevez war c'horre ar bed. Lizer de Monzie a zo eun dra goz. Graet eo, ha peurechuet meur a gant vloaz a zo. Lennet eo bet gant hon tadou meur a wech; ha ni d'hon tro arabat d'eomp beza re souezet, an holl ouz her gwelet hirio dispaket bras dirazomp, da lavaret eo, arabat d'eomp diskorbella re hon daoulagad dirag trubarderez gouarnamant Pariz.

Ar c'houarnamant abaoe ma 'z eus anezan, n'en deus klasket nemed eun dra: lemmel muioc'h mui digand ar Vretoned kement a ra d'ezo beza dishenvel c'hoaz diouz ar C'hallaoued. Gwechall e laeras hor frankiziu: dech e rae fae war hor giziu, hirio e venn laza ar brezoneg war muzellou hor bugale, ha munga en hor c'halonou tan ar garantez vro. Dre-ze netra da c'headal dioutan, ha n'hor beus netra da ober nemet labourat ha poania evel m'hel lavar an holl brezegeien a dremen aze dirazomp.


Labouromp dre « Vreuziezh ar Brezoneg », ha war gemt-mañ heuilhomp ar roudenn a verkas d'eomp an Aotroun Cocaign en e gaozeadenn. Ar Vreuziezh-ze a rank beza harpet ha skoret. Muioc'h a astenn a rank da gaout, muioc'h a nerz. An aotrou Cocaign a garfe boda dindan he banniel holl yugaligou Breiz-Izel ha Breiz-Uhel evit gellont aesoc'h aze o c'helenn war o Bro. Ne ouzon netra ar paour kaez bugaligou!! Bemdez endro d'ezo, e klevont gwallgomz eus o yez, eus giziu ha gwiskamanchou o zud. Morse ne vez troet dirazo pajennoù Istor o Bro, ha biskoaz n'o deus klevet ano eus frankiziu o Breiz. N'e-maint ket zoken war-nes sonjal eo bet gwechall o zud koz dieub ha dishual, hag ez eus bet graet etre ar C'hallaoued hag int eul lizer marc'had, a rankfe hirio c'hoaz beza miret dre ma n'eo bet morse na freuzet na torret, evel m'hen digasas d'eomp da zonz an Aotrou Chevillotte, goud kreisteiz.

Ha labouromp ive dre ar Bleun-Brug ha war ar poent man greomp hor mad eus aliou ho kuzulioù an Aotrou Brochen a gomzas war-lerc'h an Aotrou Moal. Hor c'hevredigez a rank gounid tachenn. Betek-hen n'edo nemed en he bugaleaj, kouls lavaret.

Ar reolennou roet d'ez, e gwasked mogerioù Keryann, a helle c'hoaz mont outi. Met breman, p'eo graet he c'hresk ganti, ha p'eo kroget e penn he baz da vont en hent, eo poent chench reizadur ha rei d'ez eur wiskamant a vo muioc'h diouz he doare ha diouz he ment. Pa vo graet kement-se, e kerzo primoc'h gant he hent, hag a vloaz da vloaz he c'hammejou a yelo war greski ha war stankaat. He c'hendalc'hiou a vo reizet ha rannet gwelloc'h; he studiadegoù aozet gant muioc'h a breder hag a aked. Kemer a ray krog e pep lec'h ha war bep tachenn. Komz a ray en ano ar Vro.

Harp a roio d'ar broadou all a stourm war an hevelep tu ganti. Skoret e vo ganto d'he zro, ar pezh a ray dezi beza nerzusoc'h c'hoaz. War ar poent-mañ eo boulc'het mat an traou; rak er bloaz-mañ ar Flamanted o deus digaset davedomp an Aotrou Gantois a reas d'eomp eur brezegeñn, gaer kenan, an diweza eus an dervez studi.

Hag erfin, bep bloaz, da zeiz ar gouel bras, ar Vretoned a viliadou a ziredo, da welet traou kaeroc'h c'hoaz eged an holl draou a weljomp edoug ar yaou e kear



An eured vreizad oc'h ober tre kêr Cl- Delattre.

Gwengamp. — Diwar-benn kement man e karfen lavaret eur ger abarz echui.

AR YAOU

Muioc'h a fizians a oa em c'halon, d'ar merc'her eget d'al lun. En eur guitaat ar patronaj, d'ar merc'her da noz va fenn n'oa mui ken leun a zonzou du. Ar pezh c'hoari, Kerenor, roet ken braoik ha tra en doa chachet kalz tud. Ar zal c'hoari a oa bet leun blouk ha kemend-all a dud a rankas chom er maez. Sin vat evid antronoz!

Hag ouspenn klevet am boa meur a dra, trawalc'h evit kas da get an holl zigarezioù am boa sonjet enno. Trouz a oa bet graet endro d'ar Gouel, ha dreist-holl endro d'an dervez diweza. Kazetennoù, ha kelaouennoù Breiz o doa kaset ar zonz-galv a dreuz ar peder avel.


E Treger hag e Goelo ar c'halvadenn a oa bet skiltroc'h c'hoaz. Paperennoù ingalet dre an tiez pe staget ouz mogerioù kear o doa embannet e pep lec'h an dervez bras a oa da gaout. Hag evit gwir ar yaou a dlie beza an dervez bras, an deiz ma tispakje ennan en o splann holl

denzoriou koz hag holl denzoriou nevez ar Vro. Kerkent ha savet diouz ar mintin, evel eur c'houer evesiant, e ran eur zellig ouz an amzer. Mat an traoul... Ar mal-kennou tenval a zaoulamme, dec'h da noz a dreuz an oabl, a zo bet skubet holl. Hirio bolz an nenv a zo glas kaer ha du-hont e traon an draonienn an heol a zispak laouen e benn, adrenv ar gwez-fao. Doue ra vo meulet, emedoun! An amzer a vo kaer. Hag e kerzan d'an iliz sart ha seder en eur vouskana kanenn. « Ho mamm. » — An heol a zo a vec'h savet ha setu er ru vras keriz divorfil, o vont hag o tont, tres eun dra bennak a nevez war o spered...

Kavet o doa mat Renerien ar B.-B. digeri an dervez-ze ivez dre ar bedenn. Doue ha Breiz setu o ger-ardamez Doue araok, hag e gwirionez, Doue a voe er penn araok en deiz-ze, dreist-holl. En eun nebeut amzer, Iliz Itron Varia Wir-Zikour a zo leun-chek. Eus a belec'h eo deuet an holl dud diredet aze? N'hellfen ket hel lavarret. Ar pez a zo kaer eo, o gwelet holl o klevet an oferenn-bred, gand eun hevelep kalon, hag oc'h unani o moueziou da gana gloar hag enor da Zoue mestr ar Broiou. An Aotrou 'n Eskop Serrand, deuet da rei muioc'h a lufr hag a skor d'hor gouel, a blijas gantan pignat er gador hag ober a vouez uhel brasa meuleudi labour ar B.-B. Goude beza diskouezet petra rae d'hor Bro beza kaer, e lavaras oa eun dra ret difenn he gwiriou. « Kelennadurez an Iliz, emezan, he deus atao sikouret miret frankiziu ar broa-deleziou, pa vezont, dreist holl, hervez al lealded evel hor re. E gomzou poellus ne nijint ket gand an avel. Kennerzet ganto, mignoned ar B.-B. a labouro c'hoaz gant muioc'h a galon.

Met, mall bras eo staga gand ar c'hentstrivadegou. Buan, buan, an dud en em rann e diou vandennad. Mont a ran da heul ar vihana beteg ar skolaj evit gwelet ha klevet. Paotred ha merc'hed a c'houren eno war dachenn ar prezek, an displega hag al lenn. An eil goude egile e savont war al leurenn, hag e tibunont o c'hudenn darn lentik, darn all avat ker braoik ha tra, evel tud aroutet war o micher. Aman adarre, merc'hed ha paotred yaouank Douarnenez a zo gand ar re genta hag ar maout a ya gwall alies ganto.

C'hoant am eus da welet pep tra. Hag e tilezan paotred ha plac'hed, hag en hent war-du ar Patronaj. O tigouezout eno e choman a ban da zellet. Eur bern tud a zo er maez, ha kemend all a zo bet dare d'ezo chom ive war an treuziou. Eur mignon a zo en nor. Dre laer, e hellan tizout beteg ennan, ha setu me er zal. N'oun ket gwall varrek war ar muzik ha va skouarn, feiz avat, n'eo ket gwall dano. Koulskoude e selaouan gant dudi an holl ganerien a dremen hag e kavan brao kemend a ganont. Distaga reont bommou eus ar re gaera hag eun dudi eo



Cl. Delaire

An Dukez Anna hag he lez

o c'hlevet. O c'han tro ha tro, goustad hag a-lamm, doanuis ha laouen, a ra plijadur vras d'an holl. D'in me e plijont kenan ha chomet e vijen d'o zelaou heb enoui beteg ar pardaerz-norz. Edo an heol us d'ar penn pa d'avas ar c'han. Hanteret mat an deiz ha kalzik traou a yoa c'hoaz da gaout. E kear ez eus eur voundinell mar d'eo mantrus. Tud o vont diouz an druilh. Kirri dre dan, kirribihan, marc'h-hou-houarn... ha gwazed ha merc'hed ha paotred, ha paotrezed, ganto gwiskamanchou, eun dru-

gar sellet outo. Ar ru vras a zo chenchet evel eun all en he flas. An tiez a zo fichet ker kaer ha da zul ar zakramant: bannielou eleiz o sourral er prenester, bodoubleuniou a bep seurt ha bodou-brug-ruz o touezia hag o meska o liouiu, a hed ar mogeriou, war ar pallennou gwenn herminiget, garlantezennou glas, oc'h en em dapa, oc'h en em groazia a-us d'ar penn, azioc'h an hent ma tremeno dreizan an Dukez Anna hag he lez. Bleun-Brug Lesneven en doa c'hoantaet lakat dirak daoulagad Leoniz pirc'hirinaj Yann V er Folgoat. Ambrongadeg ar bla-man a dlie envori digouez an Dukez Anna e Gwengamp, ha digeri evelse dirag an holl eur bajenn vuhezek eus Istor hor Bro. Daoust ha sked amzer goz Vreiz n'eo ket evit dihuni ar Vretoned?

Da ziv eur e tremenas, Breiz a bez en he raok; Breiz evel ma oa gwechall goz hag evel m'eman breman, Breiz en he c'haer gant he bleuniou, he gwiskamanchou, he bannielou, he muzikou, he c'hanaouennou. Tremena a reas evel eur skedenn gaer en eun hunvre laouen, ugent mil den pe wardro ouz he heul, o c'halonou o tridal gand al levenez, o daoulagad o trelli gand ar gwel eus kement a zilhajou kaer, ha n'o deus o far e nep bro.

Eun hanter-eur goudeze tri mil den, all a oa bodet e sal vras kear, oc'h arvesti ouz pe. dispar an Aotrou Joanno, Santez Trifina. Ker stank eo an dud ma venn an doriou divarc'ha gand ar wask a zo warno. Hag ouspenn tri mil all o deus ranket chom er mæz. Ouspenn 500 beleg a zo etouez an engroez hag eul lodenn vras anezou diredet eus an Eskoptiou all. Anaout a ran an Aotronez Havard, Poisson Hervé, eus Raozon; an Aotronez Uguen, Grill, Batany, S. ar Goff, S. Guivarc'h, V. Favé, eus Kemper, an Aotronez Buleon, Corven, Ar Gall, Coetmeur, eus Gwened. Eur bern laiked a zo ive diredet eus pep bro. Setu aman an Aotrou Dujardin, dec'h rener ar B.-B., hirio kaloneka ha skoazeller brasa ar gouel-ze. Pelloc'h setu an Aotrou hag an l. Delisse hag o bugale, an Aotronez Marker, Regnier, Regnault, Gourvil, Goaziou, Ollivier, Abalor, Jaffrennou, hag aman hag ahont e korn pe gorn, an Itronez de Kerzozon, de Roscoat, an Aotrou l'Estourbeillon, ar jeneral Mordrel hag e vab, an aotr. Elies, Charles, Vallée, L. ar Floc'h, Courtois, Drezen, Morice, Bouillé, Bocher, Chevillotte, Inizan, kannad Bro Leon an dimezelled de Kermenguy, Rebours, — An Itron E. ar Rouz a Bariz, — an A. Herpin, eas a Zant-Malo...

Trugarez dezo holl. Gand o skoazell hag o zikour ar B.-B. a yelo atao muioc'h mui war-raok. Er bloaz a zeu ec'h en em gavimp adarre holl e harz treid Santez Anna, e bro Wened.

Hag ar gouel a vo kaeroc'h c'hoaz.

VIKTORIA KONAN A ZANT-LUK

Levez e Retred Kemper

gilhotinet e Paris d'an 21 a viz Gouere 1794

Ar varnedigez. — Ar maro

An deiz araok o barnedigez, d'ar gwener, 18 a viz gouere, an tad, ar vamm hag ar verc'h a voe unanet adarre. En o hano o zri, an tad, an aotrou Konan a zant Luk, a skrivas an tammig lizer-man d'e verc'h, an itroun de Silguy:

« Paris, 18 gouere 1798, an deiz araog hor barnedigez.

« Pokat a ran d'eoc'h, va bugale ger, va c'herent, mignoned, servicherien, a greiz va c'halon. Pedit Doue evidon. Ho mam hag ho c'hoar a lavar d'eoc'h evel-don. Bezit leun a nerz, gand ar fizians en dezo Doue truez ouzomp hag hor bezo an eurvad d'E bedi evidoc'h, p'e gwir en deus roet d'eomp ar c'hras d'en em brepari d'ar maro.

Kenavo d'eoc'h holl, va mignoned ker. »

Evel a weler, an tad, ar vamm, ar verc'h a oa en o c'halon hevelep feiz, hevelep karantez evit Doue.

Deuet eo deiz ar varnedigez. Ar familh Sant Luk a glev lenn dirazi ar skrid tamaller savet gant Fouquier-Tinville... Viktoria he deus roet skapularou, d'an daou Laroque-Tremaria, enebourien d'ar vro. Ar skapularou-ze, warno skeudenn ar Galon Zakr, a ziskouez emaer a-unan gant forbaned ar Vande... Mab an Aotrou a zant Luk a zo e arme an divroidi; ar familh-ze eta a zo eneb ar Revolusion hag eneb ar vro, a-unan gand an holl forbaned, ha dreist pep tra, gand eskibien Kemper.

Abalamour da-ze, war goulenn an tamaller, ar familh a Zant Luk a jomo er prizon da c'hedal beza barnet. Barnet e voent dioc'h tu.

Goulennet e voe digand ar varnerien evelhen: « Viktoria Konan a Zant Luk 33 vloaz, ganet e Raozon, o chom e Kemper en eun ti hanvet ar Retred; Jil-Renan Konan a Zant Luk, 75 vloaz, gwechall den-jentil, bet kuzulier e Roazoun; Mari Duboz, gwreg Konan a Zant Luk ha tamallet evel-dan; ha kredi a rit int enebourien ar bobl? evit beza bet a-unan gand ene-

bourien ar Revolusion, beza sikouret forbaned ar Vande d'en em zevel, beza kaset d'ezo skeudennou ebid en em anaout... (ar skapularou).

Ar varnerien a respontas *ya*, ha goude beza klevet an tamaller o tisplega al lezenn, al lez-varn a goundaonas an aotrou a Zant Luk, an itroun hag o merc'h, da veza kaset d'ar maro.

Seiz oant er c'harr o digasas eus Kemper da Paris: Viktoria he zad hag he mamm; gwreg Beneat; mab Sant Alouarn, ha diou verc'h Laroque.

Gwreg Beneat ne voe ket koundaonet. Ar re all a voe ive dibennet. Eus a zeiz, unan hepken a voe espernet.

Goude beza koundaonet d'ar maro, ar brizonierien, n'o doa mui netra da ober nemet gedal an deiz ma teufe ar c'harr d'o c'herc'hat ha do c'has beteg ar c'hilhotin.

Viktoria hag he c'herent o doa pell zo kinniget o buhez da Zoue hag a c'hede e peoc'h deiz o maro. Met er prizoun ez oa eun den a 23 vloaz, markiz Kornulier, dimezet d'eur vaouez yaouankoc'h c'hoaz ha warnez beza mamm. Ar markiz, kollet gantan e benn, ne felle ket d'ezan mervel, hen ker yaouank, hag ec'h en em gemere ouz an holl, ha zoken ouz Doue. Viktoria a lavare enni he-unan: « Ma varv evelse, eman e riskl da veza daonet. » Hag e tosteas outan, e tis-kouezas kaout truez outan, kemeret perz en e boan. Komz a reas d'ezan eus madelez Doue, eus eürusted peurbadus an Nenv. Pedi a reas ive, hag an den yaouank a voe gounezet; diskenn a reas en e galon eun tamm peoc'h ha frealzidigez. E zaelou ne voent mui ken c'houero. Viktoria a gasas anezan da gaout eur beleg a oa er prizoun, ha goude beza bet an-absolute, ar markiz a bignas hep re a geuz beteg ar c'hilhotin.

O c'hedal karr ar c'hilhotin, Viktoria a zastumas kement he doa hag a gargas tud d'o c'has d'he c'herent ha mignonezed.

Setu aman an tammig skrid digouezet gand an dimezell Arc'hantel.

« Eus a berz Viktoria a zo o vont d'ar c'hilhotin, hag a c'houlenn, goude he maro, pedennou diganez ha digant da vreur Renan (beleg). Pa weli da vreur, kempenn d'ezan, eus va ferz, eun archedig kaer da lakat an holl relegou a gasan d'it, relegou gwirion, am eus bet digant va eontr eskob.

» M'am eus an eurvad da vont d'ar baradoz, evel am eus fizians, n'ankounac'hain ket va mignoned. »

An tamm lizer-ze a voe skrivet buan, sur a-walc'h nebeut amzer a-raok ma pignas Viktoria e kar ar c'hilhotin.



Merzerenti Viktoria hag hini he zad

Deiz ar maro a voe an 19 a viz gouere 1794. Diskennet eus ar c'harr dirag ar c'hilhotin, war blasenn an Tron, Viktoria a oa etre he zad hag he mamm, hag e pedas an « Aotrou Bourreo » da rei aotre d'ezi da bignat araog he c'herent. Ar bourreo a roas d'ezi he goulenn. Pokat a reas d'he zad ha d'he mamm, hag oc'h en em daoler d'an daoulin dirazo, e c'houlennas o bennoz evel ma rea gwechall, e maner ar Bot, araok mont da gousket. Ha goude e savas hag e lavaras: Va zad ker ha va mamm ger, desket hoc'h eus d'in

beva; gant gras Doue ez an da zeski d'eoc'h mervel. »
Ha dispont, gant tiz, e pignas da lakat he gouzoug
dindan kountell ar c'hilhotin.

He c'horf, korfou he c'herent hag an tri ugent ben-
nak a voe dibennet en deiz-ze war blasenn an Tron,
a voe taolet mesk ha mesk e kartier Picpus, en eur
vengleuz trez, er foz m'oa bet taolet enni, daou zervez
araok, ar c'houezek Leanez eus Karmel Kompiegn.

Hirio, war eur voger eus bered Picpus ez eus, en eur
gichenn, diou daolennig, unan evit Viktoria, eun all
evit Karmelitezed Kompiegn, hag a verk e pelec'h,
war a greder, int bet laket an douar.

Leanezed Kompiegn a zo bet, n'eus ket pell, laket
gant an Iliz, e renk an dud eürus en Nenv.

Fizians a c'hellomp kaout e vo gret hevelep enor da
Viktoria Konan a Zant Luk.

Karet he deus Doue hag an nesa, santel eo bet he
buhez, santel eo bet he maro.

Met ar pez a sko ar spered pa lenner he buhez, eo
he madelez, he habasketed, he nerz-kalon er prizon, e
kreiz ar poaniou spontus a rankas da c'houzanv.

Lakat ar c'houzoug dindan kountell ar c'hilhotin,
an dra-ze n'eo netra, evel ma skrive he-unan; an dra-
ze ne bad nemed eur predig-amzer. Met beza er pri-
zon e kreiz al loustoni, an denvalijenn, e mesk
tud fallakr, beza goapeet, dismeganset, beza tamallet
e gaou, koundaonet enep pep gwir, ha chom evelato
laouen, e peoc'h, gouzout kinnig an holl boaniou da
Zoue a-unan gant poaniou Hor Zalver war ar Groaz,
gouzout pardoni, ober vad d'ar re a ra droug, pedi
evito, ha kement-se nann eun dervez hepken, met
bemdez, epad meur a zizun, meur a viz, setu aze petra
zo tenn, petra ne c'heller ober nemet gand eun nerz-
kalon souezus.

Evelse he deus gret Viktoria a Zant Luk. Eun ene
kaer meurbet a gimnigas da Zoue.

Ya, fizians a c'hellomp kaout e vo kavet din gand
an Iliz, da veza laket war roll ar Zent, etouez ar
Gwerc'hezid ha Merzerezed. J. U.

**Brasa torfed a c'hell eun tad ober
e kenver e vugale, goude lemmel di-
ganto o feiz, eo gallegat outo a-raok
beza desket d'ezo brezoneg mat.**

AN ANAON

Eus goueled va frison a dan,
Eus va islónk doun ha ledan,
Va mouez a zav, leun a c'hlac'har,
Etrezek piou bennak am c'har.

En eur stad damantus emoun,
Dourn pounner Doue 'zo warnoun,
D'e skouarn ne bign ket va c'hlemm
Hag e fouet didruez am flemm.

En amc'houlou-man hep e bar,
Bann-heol ebet warnoun ne bar;
Na d'am doaniou, na d'am c'heinvan,
Hegleo, e nep lec'h, ne gavan.

Te, va breur mat, te, va c'hoar ger,
Am eus lezet du-hont er ger,
C'houi, kenvroiz a Vreiz-Izel,
War va anken taolit eur zell.

Laza a c'hellit an tan kriz
A ra, endro d'in, eur gouriz,
Rannit d'in hepken eul lodenn
Eus ho tanvez hag ho pedenn.

Doue a c'halv pep den d'e dro,
Tud vev, skorit an dud varo,
Hag, euz lein an nenv, eun dervez,
Ar re man ho skoro ivez.

Hag aet, gant Doue, d'e balez,
Aet da Vro ar beurbadelez,
Laouen ni en em vriato,
El lidou kaer a bad ato.

J. L'HELGOUALCH, O. M. I.

COURS DE LANGUES CELTIQUES

Des cours de Breton, de Gallois et d'Irlandais, orga-
nisés par le « Cercle Celtique de Paris » fonctionnent ré-
gulièrément à la Sorbonne depuis cinq ans.

Les cours de Breton peuvent profiter, tant aux person-
nes ne connaissant pas la langue bretonne, qu'aux bre-
tonnants désireux de se perfectionner dans sa connais-
sance.



Les cours reprendront en Novembre prochain, et les
personnes désirant les suivre sont priées de s'inscrire
avant le 30 Novembre chez M. REGNIER, Secrétaire Gé-
néral du Cercle Celtique, 16, rue des Ecoles, PARIS (5^e Ar.).

GWILHOU AR ROUZ

Ar c'hiz a zo da lavaret ne oa tamm deskadurez ebet gwechall etouez an dud hag ez eo bet red d'ar « Republik » pignat war an tron abarz ma 'z eus bet gellet sevel eun ti-skol e pep parrez.

« Gwechall, — eme c'hlabouserien a zo hag a vez o teski o c'hentel gant mistri-skol dizoue, — ar rouaned hag ar veleien n'o devoa ket a c'hoant da welet an dud o tapa deskadurez, en aoun ne c'helljent ket o lakât da zenti outo kenkoulz ken goudeze! »

Setu aze ar pez a leverer, met eur gaou eo hag eur mellad hini zoken, rag an Dispac'h e lec'h kroui skoliou nevez n'en deus graet nemet serra eleiz a re goz e veze roet deskadurez enno evit netra da gement hini n'en doa ket a aes da baea; gwir eo, er skoliouze e tesket d'ar vugale anaout ha karet an Aotrou Doue hag an dra-ze a zo eun torfed ha ne c'hell ket beza pardonet gand an dispac'herien. Sebezet e chomer pa zigorer kaerou koz ar badiziantou, an eureujou hag an enterramanchou, skrivet gwechall gand ar bersoned ha miret fall a-walc'h breman, en darn



vrasa eus an tiez-kêr, — o welet nag a dud war hor meziou, er XVIIth hag en XVIIIth kantved a ouie skriva mat ha lakat brao o ano; *muioc'h a dud a oa, o c'houlzout lenn ha skriva er bloaz 1750 eget ne oa er bloaz 1850.*

Perag an dra-ze?

Dre ma oa en hor bro eleiz a veleien, graet studiou mat ganto ha pa vezent laket er parrezioù, a en em gieve gant pennadurezioù ar barrez evit sevel skoliou bihan e veze digemeret enno an holl vugale a-dro-war-dro, paour ha pinvidik; ar re binvidik a bae eun draig bennak d'ar mestri-skol pe a gase d'ezan lêz, ed, kig hag aman; peurliesâ, ar barrez he-unan, goudeze, a bae euid ar re baour.

Evelse, er bloaz 1574, e parrez Plougasnou, e veze graet skol d'an holl vugale e chapel Sant Jorj hag ar barrizioniz a anzave, en eur skrid graet d'ar 26 a viz gwengolo, er bloaz-ze « ne c'helled ket ober gwelloc'h implij gand an arc'hant nag o lakat da dalvezout gwelloc'h evit brasa mad ar « Republik ».

Ar ger « Republik » a zo eta implijet er XVIth kantved, en amzer m'edo ar Roue Herri III, war an tron, ar pez a ziskouez e ouied neuze e talvez ar ger « Republik » da lavaret tra an holl ha nann tra eun toulladig lakipoted difeiz ha mistri digar evel ma 'z eo Republik ar Frans, en deiz a hizio.

Er skrid-ze ivez parrizioniz Plougasnou a hanv da vestrskol an A. Sebastien Lucas, eur beleg eus a Wimaec hag a ro d'ezan, e gopr, ugent skoed er bloaz, gand aotre da gemeret en e skol bugale an dud en o aes evit 2 wenneg er miz ar re anezo a studi ar yezadur (1) hag al lennegez (2) hag euid 1 gweneg ar re anezo a zo c'hoaz o teski lenn.

Eur gwennegig bennak a c'helle ivez da c'hounit war ar plun, al liou, ar paper hag al levriou; n'oa ket hir ar peuri, met en amzer-ze an arc'hant en devoa muioc'h a dalvoudegez eget breman ha ne zispignet ket evit beva ar pez a zispigner breman.

Ar vugale baour avât a ranke da skolia evit netra.

Eun testeni a jom c'hoaz hag a ziskouez d'eomp pebez talvoudegez he devoa skol sant Jorj: an testeni-ze a gavomp en eul levrig latin hanvet *Nugae poeticae*, da favaret eo Mojennoù eur barz, moulet e Paris e ti Ber Pautonnier, er bloaz 1605. Gwilhou ar Rouz eo ano an hini en deus skrivet al levr-ze: beleg oa ha chapel sant Yann ar Biz, stag neuze c'hoaz ouz parrez Plougasnou, a oa en e garg. P'oa bihan, emezan, en e levr, e oa bet e-unan, er skol e Sant Jorj hag eno eo e teskas sevel gwerzioù latin, gand eur beleg mat, Yann ar Masson e ano.

Evit diskouez d'ezan e anaoudegez vat e iaka anezan

(1) Yezadur = grammaire.

(2) Lennegez = Litterature.

war an hevelep renk gant Kikeron, Virjil, Juvenal hag Horat, skrivagnerien hag e oa bet laket gantan da lenn o skridoù.

Yann ar Masson a anavezze an holl skianchou ha ker barrek oa ha Pythagor, Platon hag Aristot. Goude beza graet meuleudi e vestr, Gwilhou ar Rouz a ra meuleudi e genseurted, Yann ar Fur, Herve Lucas. Per Lagadou (a deuas da veza person e Plougasnou), Anton Talven, Jakez ar Gwennec, Rene Roparts, Rolland Kervellec, Thomas Jannin ha Sylvestr ar Bacol, aet da veleien an darn vrasa anezo ha dizroet goudeze da jom da Blougasnou nemet Rolland Kervellec a gavomp o chom e Louannec; er bloaz 1602; o c'haret a ra ha fizians en deus d'o gwelet adarre, dizale, dal ma vezo echu ar brezel.


Goude beza tapet eun deskadurez kaer, e Sant Jorj, Gwilhou ar Rouz a voe epad pemp bloaz, mestr-skol Rene Keryabon, mab yaouank Kerbrijant, unan eus tiez nobl ar barrez.

D'e vugel-skol eo e kinnig e levr, er bloaz 1605 hag anat eo n'en deus ket d'en em glemm re anezan: « Pemp bloaz, emezan, am eus tremenet en da zerr, dinec'h, en habaskder hag en dudi; anat oa diouzit, ez-vihan, petra vijes deuet da veza ez-vras; kendalc'h, gant a ri da veza kalonek ha dalc'h sonj eus da dad, Doue r'her pardono; eur skouer oa eus an holl vertuziou... Ennout e welan unan eus kaera bugale gouenn ar Vretoned... Da dud koz, ar Gervaboned, o deus stourmet n'eo ket hepken evit Breiz, met ivez vit enor an Iliz katolik ha pa vezo ano d'en em ganna evit Pried an Oan, morse n'o deus troet kein d'an enebourien; setu perag ema o ano etouez anioù kaera noblans ar Vro! »

Gwilhou ar Rouz a ra ivez, en e werziou, meuleudi Yvon, tad Rene, dre m'oa troef ouz al labour-douar hag ouz an dud diwar ar mêz pa ne veze ket o stourm gand e gleze evid ar vro hag o lakat gloar da goueza war e diegez: « Aotrou Kerbrijant, emezan, a ziskouezas petra c'hell ober eun den hag a zo en e galon an drugarez hag al lealded; kenderc'hel a rea da garet ar re en deveze karet; kas a rea da benn e venozioù ha pa c'helle ober eur vad, da unan bennak, ne vanke ket d'hen ober; maget en deus ar re reuzeudik, gwisket en deus ar re o devoa riu; difivret en deus ar brizonierien; laket en deus an holl da embann e lealded! »

Gant hevelep mistri e tlie beza brao bevâ; gwsa pez a zo, war an douar-man, al laouenedigez hag an dristidigez a zo diaes o dispartia; Yvon Gervabon a varvas; brezel ar re unanet a lakeas ar strafuilh er vro hag er bloaz 1596 pa c'hellas ar Spagnoled, gant skoazell Fontanellan, kemeret Kastell Primel, holl Arvoriz Plougasnou a rankas tec'hed diouz o aochou, en aoun da veza laeret pe lazet; Suzanna Trogoff, intanvez Aotrou Keryabon, a yeas da

Vontroulez gant he bugale, Rene ha Mari; Fontanellan, en he lec'h, a gemeras perz e maner Kerbrijant; ac'hino eo ez ejont da ober ar rins tro-war-dro, met ar goueriaded a deuas, a-nebendou, d'en em hardisaat, hag, eun deiz, m'edo person Plougasnou oc'h ober e bron e lavaras d'ezo e c'helljent marteze, er zulvez-ze, e lec'h dont d'ar gousperou, en em gaout e Kerbrijant da ganna al laeron; an hel a gavas mat ar brezegenn-ze ha raktal goude lein ec'h en em vodjont e Kroaz-hent Kervron; fic'hier, ferc'hier ha bizier a oa ganto; bale a rejont war an neiziad laeron pa 'z edod nebenta ouz o gedal; Fontanellan, n'edo ket eno; meur a hini eus e zoudarded a voe lazet hag ar re all a dec'has buanna ma c'helljont; evit dismantri eun neiz hag en divije gelllet al louarn dizrei ennan adarre, e voe laket an fan-gwall er maner!



Gwilhou ar Rouz n'en deus ket graet a werziou war an darvoud-ze, met gwelet a eure Per Boiseon, gouarner Montroulez, o lakat ar seziz war gastell Primel evit gellout, en hent-se, trec'hi ar Spagnoled dre ar gernez ha lezel amzer gand ar goueriaded da ober o eost. Gwelet a eure ar zoudarded o chom en iliz Plougasnou hag ar moged diouz an tan a raent en iliz a zuas kement ar zent ma voe red o goalc'hi hag o liva a-nevez; gwelet a eure iliz sant Yann ar Biz, fezier doun tro-war-dro d'ezi, laeret gant al laer bras La Magnanne; a-drugarez Doue, tenzor ar zant a oa kuzet neuze e kastell an Taro.

Gwilhou ar Rouz, en e werziou, a gomz evelhen eus ar brezel: « Relijion ebet ken, emezan, karantez ebet; mez ebet; an douar a zo beuzet er gwad... dre holl tud c'hlazet ha tud varo!... »

Da heul ar brezel, siouas, e teuas ar vosenn; Gwilhou ar Rouz en deus he gwelet o peurgas ar vro d'an traon; en em erbedi a ra ouz sant Sebastian, ar merzer bras a bella ar c'hlenvejou spegus: « Siouaz! ar vosenn a daol

ennomp he c'hontamm; lakat a ra daerou en hon daou-lagad; pellaat a ra an dud eus o ziez; o c'has a ra da veva e kreiz al loened gouez; ar re a zo war o-zremenvan a en em ruz e keoiou ctouez an aered; an dizesper a faka anezo da veza ken drouk ma ne greder ket mont daveto da rei d'ezo o sakramanchou; tra skrijus, ar mab en deus donjer ouz penn skornet e dad hag an tad ouz e vab hag ar verc'h ouz he mamm; ar pried ne gred ket tostaat ouz e bried nag ar mab kaer ouz e dad kaer evel ma vije kontammet o c'horfou gand al lorgnez; eur gouli hudur a c'holo o c'hroc'hen 'ha, tra galet da c'houzanv, hosti ar C'hrist zoken a zo nac'het outo! O merzer santel, ped Doue, kalonek, ma ehano da gastiza ac'hanomp evel ma ra; ni ho ped ivez, o Gwerc'hez santel, mamm vat, ni ho salud, ni a en em erbed ouzoc'h, salvit ac'hanomp! »

Gwelet a rear, dre ar geriou-ze, en deus laket ar barz da dremen var ar paper eur skeudenn wirion eus ar pez a oa e goueled e galon. Gwilhou ar Rouz a zoug kaonv, dreist-holl, d'e vestr mat, Herve Prijant, person Plougasnou, marvet gand ar vosenn: « Ar beleg-ze oa hor sklerijenn; komz a rea evel Kikeron; barrekoc'h oa da zével gwerziou eget Virjil, Pers, Horas ha Juvenal; eur mestr eveziant e oa, mat da gelenn ha da hentcha ar yaouankiz; holl barrizioniz hag holl veteien Plougasnou o deus keuz d'ezan.

Pa deuas ar peoc'h, Gwilhou ar Rouz a yeas da Paris, da genderc'hel e studi; er bloaz 1602 ha 1603 edo e skol-veur Menez Santez Jenovefa oc'h heuilh kelennadurez an Doktor Paol Boudot, unan eus ar re a ouezas gwella al latin.

Dizro da Vreiz e kavas skol sant Jorj adsavet hag heuliet gand eleiz a vugale. An ti-ze, emezan, a oa bet diskaret gand ar berzel; ne glevet ger latin ebet ken war e dro! epad 10 vloaz, dre fazi Meurz, an hini drouk, den ebet n'en deus pleustret ennan war labouriou Minerva; dre ma ne oa ket a dud, ar mæziou fraost a zo en em c'holoet a zrez; na tenn e kavas ar re yaouank plega o fenn dindan krabanou ar brezelour kriz! »

Met breman, da heul ar peoc'h, an ti-skol a zo digor a-nevez e zoriou: « Bugel taol evez en aoun da veza lezirek; arabat d'it chom diwar-lerc'h, na koll da amzer! »



Dizro da vat da Drevenanou, eur geriadenn goant, harp er mor bras, e weler anezi iliz sant Yann ar Biz, diazezet ker brao, e Traon Meriadeg, Gwilhou ar Rouz, eur wech graet e bedennou hag e labour gantan en iliz kaer an Aotrou Sant Yann, a veze eur werz nevez bennak gantan atao war ar stern.

En e lev'r moulet er bloaz 1605 e lavar d'eomp penaos e teuas; hervez ar re goz, Biz sant Yann Vadezour, da chapel Sant Meriadeg Plougasnou; eur potr yaouank, ginidik eus a Blougasnou, a oa aet d'an Normandi, el lec'h

m'edo Biz an Aotrou sant Yann; pa zizroas d'ar gêr, e tougas warnan, hep her gouzout, ar releg santel hag e voe tamallet da veza sorser, o veza ma souble ar gwêz ha m'en em lakea ar c'hleier da zeni anezo o-unan, dre ma tremene; taolet e voe er prizon, met antronoz pa zihunas e oa gourvezet war ar geot perlezennet gant gliz miz east, e bro e vugaleach; kloc'h sant Meriadeg a en em lakeas da zeni, ar pez a zouzas an holl adalek bourc'h Plougasnou betek broiou Kerdrenn. P'en em gavas tud Plougasnou e Traon-Meriadeg, e kavjont ar pôtr yaouank daoulinet dirag an aoter m'edo warni ar biz santel tec'het diouz bro an Normaned el lec'h ma n'hen enoret ket a-walc'h evit dont da Draon-Meriadeg da venna ar Vretoned ha da ziskouez d'ezo hent ar baradoz.

Kalz eus ar gwerziou savet gant Gwilhou ar Rouz a zo bet graet war draou ha sent ar vro; teir a gaver war zantez Katell he doa eur chapel e bered Plougasnou. Pa gouzas ar chapel en he foub, ar zantez a voe kaset da chapel sant Vaodez Kerbabu, el lec'h m'her gwelis c'hoaz breman ez eus ugent vloaz, harpet var he rod torret, he bourreo Maxans dindan he zreid o tenna e varo eus e benn gand ar gounnar.

Siouaz! chapel goz Kerbabu a zo kouezet ha santez Kastell a dle beza breman o kaeraat ti eur franmason bennak en devezo plijadur o tiskuez d'ar re a deuo d'her gwelet ar pez-labour kaer-ze en deus kavet e Breiz-Izel!



Gwilhou ar Rouz a reas gwerzioù ivez war zant Nikolas en devoa eur chapel e Kericuff, Sant Jorj, a veze graet skol en e chapel, ha sant Sebastien, patron chapel Ker- vouster.

Pa varvas person Plougasnou, Per Lagadou, an hini a gasas e barrizioniz da zineizia laeron Kerbrijant hag a varvas e miz mezeven 1604, Gwilhou ar Rouz a reas eur werz ivez warnezan: « Eur pesketaer oa eus ar re wella hag a ouie, war gomzou ar C'hrist, e pellec'h teurel e rouejeu. Prezeger hep par, skedi a rae evel eur c'hleuzer kel lugernus e c'houlou hag hini an deiz; graet oa evid azeza etouez ar rouaned! »

En eur werz all e reas meuleudi Mari Gervabon, c'hoar Rene, marvet d'he ugent vloaz; en eur werz all c'hoaz e c'hourdrouz an Ankou, dre m'eo deuet da zamma en e garr eun denchentil yaouank Alan al Lann, Aotrou Penn- ar-Wern, eur mañer tost da zant Yann ar Biz, maro, dres p'edo o vont da zimezi hag a oa karet ha gwelet mat gant an holl.

Diou werz vihan a gavomp c'hoaz kinniget, ar genfa. da Wilhou Halgouet, Eskop Landreger, maro er bloaz 1602 hag eben da Adrian Amboas an hini a voe eskob e Lan- dreger warlerc'h an Aotrou Halgouet.

En eur werz all, er fin, e ra meuleudi Per Boiseon, aotrou Coatinizan, gouarner Montroulez, ker barrek, emezan, hag Alexandr, August, Encas hag Hektor hag a ouzas lakat ar peoc'h da vleunia en e vro, warlerc'h ar brezel.

Gwilhou ar Rouz n'en deus moulet levr all ebet nemed e *Nugæ poetiçæ*.

Er bloaz 1610 e oa gouarner chapel Sant Yann-ar-Biz; er bloaz 1622, edo stag atao ouz ar chapel-ze; d'an deiz kenta a viz meurz 1629 e reas e destamant hag e roas da Vreuriezh ar Zakramant tri dammig douar en doa e Tre- henvel gant ma vo roet bep bloaz, en dizro, eur boezellad eiz da zant Yann-ar-Biz, eun all da veleien ar chapel ha pemp gwenneg da denzorier Breuriezh ar Rozera. Mervel e eure dem-goude, d'ar 15 a viz meurz.

E lec'h kemeret skouer war Varzed Rom ha touezia doueou ar bayaned gant sent ar gristenien, ma karje Gwilhou ar Rouz beza skrivet e brezoneg en divije graet vad d'e vro ha d'ar yez en devoa desket war barlenn e vamm hag e werzioù e vije bet gellet o lakat etre daouarn hor bugale-skot.

An deskadurez neuze, — skridou Gwilhou ar Rouz hen diskouez splann, — a oa ker bras pe vrasoc'h eged an deskadurez vremen; met, siouas, neuze koulz hag hizio, an deskadurez a roed d'ar yugale, gwella ma oa 'oa d'ho lakat da goll hent o bro ha deskadurezioù evelse n'oar ket evit miret da gaout kaz outo.

Pegoulz eta e vo roet d'ar Vretoned eun deskadurez

hervez o gouenn, eun deskadurez ha ne zallo ha ne vezvo ket anezo, evel an deskadurez c'hall?

P'o devezo c'hoant a-walc'h d'he c'haout ha pa vo mis- tri barrek a-walc'h d'he rei.

G. P.

An Diaoul en aod...

En deiz-se, Yann a oa aet abred d'e wele. Er maez, an avel a yude dre ar gwez bras. Hag aze, tostik, ar mor fu- loret a groze spontus, evel ma vije bet erru fin ar bed.

« An Diaoul, eme Yann d'e wreg, a zo hirio emichans o redek dre an aod. »

Katell ne lavare grik. O peurachui gwalc'hi ar skudilli edo, hast warni. N'he doa ket amzer da respont Yann. He spered a oa o labourat hag e sonje enni hec'h unan: An noz-man a zo eus ar gwella evit gwelet ha dont a raio eun dra bennak gand ar mor; eun nozvez vat ive evit diyalc'ha piou bennak a dremenno divezat o tont eus foar ar Pont! » Rak Katell he doa meur a vicher. Ped gwech goude m'oa aet he gwaz d'e wele, n'oa ket aet hi d'an aod, dreist-holl pa veze fall an amzer, he c'hrog-bezin war he skoaz! Ped ha ped gwech e oa deut d'ar ger, skuiz maro, glebiet hag anouedet, ha netra d'he heul. Met a-wechou all ive an dro a veze drusoc'h... Krenv evel eur gwaz, dis- pont evel tri, en he sav war ar c'herrek, pe o vont hag o tont war an traez, he zreid en dour, Katell a furche ar gwagennou gand he daoulagad lemm. Ha kerkent ma wele pense o tont gand ar mor ez ae dinoc'h d'e gerc'hat. Pe- zioù koad hir ha teo 'oa bet deut ganti evelse war ar zec'h. Eur bloavez e kavas epad ar goanv peadra da goata eur c'hraou nevez. Eur wech all e tigouezas war eur vari- kennad win, hag hep sikour ebet, e tigasas anezi a-ruilhou d'ar ger.

Laerez ar mor n'eo ket eun droug bras. Katell a rae gwasoc'h. Yann en doa sonj mat 'oa bet deut ganti peziou arc'hant gwenn hag aour melen. Droug ennan, hag aon d'ezan e walc'h, e c'houlenne: « Eus petec'h eo deut an dra-ze ganit, Katell? » Ha Katell a responte ker sioulik- ha-tra: « Kavet en aod, kollet gand eur beachour bennak, emichans. » Yann ne grede ket lavaret muioc'h, met e sonje: « Kavet? Pe kentoc'h laeret... » Hag e skrabe e benn en eur lavaret: « Me a denno ar si-ze diouzit! »

Graet en doa a bep seurt evit delc'her e wreg er ger. Lubannerez na gourdrouzou, netra ne rae. Katell a bensae ato, hag a laere a-wechou.

Eun deiz 'voe kavet eur maltouter beuzet ha digaset gand ar mor da c'horre an traez. An archerien a deuas

lag a lavaras: « En em veuzi en deus graet. » Met ar vrud a yeas dre ar vro eo krog-bezin Katell en doa graet an taol... Ha Yann a lavare ato: « Me ' denno ar si fall-ze anezi. » Met Katell a gendalc'he da vont d'an aod.

Hirio adarre, Yann a wele mat e oa eur sonj fall bennek e penn e wreg. Echu he labour ganti, Katell a yeas ctrezck an nor. « Da belec'h emout o vont? eme Yann.

— D'al lec'h ma karan, emezi.

— Chom er ger, ' lavarand'it, pe me welo!

— Tê welo petra? Daoust hag ez eo red d'in mont ken abred ha te d'am gwele? Evidout-te da veza skuiz, me n'oun ket.

— Katell, krak ha berr, me fell d'in e chomfes er ger!

Ho! Ho! sell Yann, oc'h ober eur brezegenn eus e wele. An hini a zo pignet en e c'hud a zo pedet da jom mut... »

An avel a c'houeze gwasoc'h-gwas, ken a ziframme ar vein diouz an doenn. En o c'hreier ar zaoud a vletije evel ma vijent pennfollet.

« Katell, pa lavarand'it, an diaoul a zo en noz-man o redek ar maenziou.

— Me ne ran forz ebet gand an diaoul eme ar vaouez hardiz.

— Diouall na zigouesfes gantan », a lavaras c'hoaz ar paour kez Yann, pa oa e wreg o tremen an nor.

An noz a oa tenval. Ar gwabrennou disliv a rede warzu Mene-Hom, pouezet gand avel kriz Beg ar Raz. Katell a skrijas pa en em gavas hec'h unan. Dre amzeriou fall e oa bet en henchou, met biskoaz dindan eur seurt barr-amzer. Evid ar wech kenta marteze e teuas eun tammik aon d'ezi.

Pa dremenas dre gichen ar werneg, eur vandennad laboused mor a zavas eus etre he zreid hag a jomas da drei azioc'h he fenn en eur deurel d'an avel o c'harm skrijus: Laboused daonet! » eme Katell. Hag e kendalc'has gand he hent, met he nec'h a greske. Er mor, an tonnou a greve gand eun trouz ifern, ha du-ze, e Penn-an-traez, ar c'herreg du a wenne dindan ar gwagennou, conennus.

Kerkent m'oa aet Katell er maez an ti, Yann a oa avet diouz e wele, eur mousc'hoaz war e vuzellou. « Me a denno ar si fall-ze anezi! » emezan. Buan en em wiskas, ha goude beza lazec' ar goulou rousin a daole e dammig sklerijenn var an oaled, e kuiteas ive an ti. Ha hen ive d'an aod, d'an daou lamm ruz, a dreuz ar parkeier, dreist ar c'hleuziou hag ar foziou evit mont buanoc'h, e riskl da derri e c'houzoug hag e zivesker. Katell ne oa ket c'hoaz hanter 'n hent pa oa digouezet Yann war ribl ar mor. Eno e c'hourvezas a-stok e gorf war an traez, e fri er c'hano. Eur wech an amzer e save e benn da zellet dirazan peur e vefe e wreg o tont. Eun nebendik goude e kre-das gwelet eur skeud du en noz tenval. Neuze ne hinvas

mui hag e reas an neuz da veza maro. Katell eo a oa ar skeud-se a deue en eur ruza war an traez. Sellet a rae en dro d'ezi en dra ma c'helle, o klask pense, koat, bari-kennou pe draou all. Merzout a reas en eun dra du astennet aze e kichen. Tostât a reas buan. Pa stouas, e welas e oa eur c'horf bras ha hir: « Unan mezo bennag, pe eun den beuzet en eur zont eus foar ar Pont, a zonjas hi! »

« Tommik, tommik, nevez maro! eur chupennig vat d'am gwazig, Doue r'e bardono! Hag e krogas da denna e chupenn digantan, pa zavas trumm an hini maro en e zao. Tapout a reas Katell dre he bleo hag e reas d'ezi eur prad evel n'he doa ket bet biskoaz. Katell spontet a reas eur griadenn skiltr hag a gouzas. E keit ma oa oc'h en em zastum, an hini maro, da lavaret eo Yann, a yeas d'ar ger, ker buan ha ma oa deut, ha buan, buan, en e wele.

Demm goude e tigouezas Katell, he dent o strakall, he diwesker oc'h horjellat, he dremm ker gwenn hag eul hinsel. Yann a roc'he evel ma vije bet kousket abaoe div eur.

Pa 'z eas Katell d'he gwele, e reas da zihuni, hag e c'houlennas, ker brao ha tra: « Ac'hanta, petra ' peus kavet? »

— « Netra emezi en eur grena, met an Diaoul zo digouezet ganin.

— « Lavaret em oa d'it e oa o redek an aochou en noz-man. Perak n'am selaouas ket?

— « Mat, Yann, hen toui a ran d'it, eme Katell en eur grena ato, biken mui ne lakin ma zreid en aod goude kuz-heol!... »

Er maez, an avel goanv a c'houeze ato hag a heje ar gwez bras. Trouz ar mor a zave ker spontus, hag en e wele Yann a voutsc'hoarze en eur lavaret etre e zent: « Deut oun a-benn da denna he giz fall diouz Katellig, ma gwreg!... »

K. AR BOUTINOÙ.

Breiziz, lennit :

La Langue Bretonne en 40 leçons, par F. Vallée, 6^e édition, imprimerie Saint-Guillaume, Saint-Brieuc, et chez tous les libraires de la Bretagne.

Prix, franco. 3,50

Notennoù diwar-benn Islor ha Sevenadur ar Gelted koz (Notes sur l'Histoire et la Civilisation celtique) par Meven Mordiern et Abherve: 7 volumes avec lexiques, notes, cartes, etc. Chez R. Le Roux, St-Hélory, Pordic (Côtes-du-Nord).

Prix, franco. 2,45

Marc'hekadenn Atepomaros tennet eus *Skella Segobrani*, chez R. Le Roux, Pordic.

Prix, franco. 1 fr.

ROUE AL LAZ⁽¹⁾

Er beure-ze, p'he doe adtommet da lein ar restad sou-benn chomet abaoe an noz arôk, Rosa ar Meur, eus Ker-beniti, mamm hon mignon Pierig, a c'halvas ar paotr kousket maro en e wele-kloz, e korn an oaled:

— Pierig! Diblouzit, va faotr! Hirio 'z eus eun devez mat d'ober aman! Lavarit ho pater ha debrit ho tijuni, keit ma vin o c'horô ar vioc'h!... Klevet ho peus ac'hanon?

Dre ar c'homzou-ze e veze galvet Pierig bep beure.

Eur vouez moug ha hanter-raouïet a deuas ermêz dre stalafiou ar gwele-kloz:

— Ya! ma...amm!

— Deuit 'ta!

Ha Roza endro gant he fodez en he dorn. Kerkent, avat, e tilammas en ti war he c'hiz.

— Aze, emezi 'z eus daou zen dizanav o tont war aman, diouz tu ar stêr! Sav, dillo, dillo! Me ya da di Kevareg, betegout...

Ne lavaras ket muioc'h, gant ar brez he doa da vont. Pierig a lammas ermêz, a wiskas prim e zilhâd ha, dinc'h kaer, evel m'eo ar ganfarded, e teuas da doull an nor da zellet piou a oa o figouezout. Kerkent ha ma oa e benn ermêz, e oa ive an daou estranjour oc'h arruout e traon ar porz; Pierig a laoskas eur youc'hadenn a levenez: an Tokous bras ha Kloareg Kersôzon eo a oa an daou den dizanav. Monet a reas ha kregi en o daouarn ha digas anezo gantan d'an ti, en eur ouela hag en eur c'hoarzin war an dro.

— Ni grede d'eomp, emezan, e oac'h bet lazeta pe ba- ket gant ar Re C'hlas.

— Ar veaj a zo bet astennet, Pierig, rak e Sant-Brieg hon deus ranket gedal tri deiz an hini hon doa da welet...

— Ha grêt ho peus tro vat? eme ar pôtrig.

— Hag aman? Netra a-nevez abaoe eiz deiz m'hon deus kwitaet?

— Nann, eme ar bugel. Ar Re C'hlas n'int ket bet war-dro aman, abaoe al lip o doa tapet e milin Traon-ar-Run; nemet int bet o tanan kement a oa eno... Kevareg ha me a zo arru yac'h hon daou breman...

— Gwell a ze, eme ar c'hloareg, a dennas e alan evel eun den a ve dizammet e galon d'ezan. Pelec'h eta eman va c'hoar?

N'en doe ket Pierig amzer da respont. E vamm a oa o tont war he c'hiz hag a reas eur souz a-drenv, pa 'n em gavas ouz an treujou.

— N'ho pet ket aon, Roza! eme ar C'hloareg. Ni eo a zo aman!

(1) Gwelit Feiz ha Breiz gouere.

— Ah! emezi, gwasat gaouad spont am heus bet! Bem-deiz ha bemnoz emaoamp war c'hed eus ar Re C'hlas! — Emaon o' paouez gwelet ho c'hoar, aotrou, emezi. Janig ha hi a vez unan anezo aman, war an deiz, hag eben gant ar miliner hag e dud, e ti mamm Kevareg. (Doue d'he fardonol). En noz, ez eont d'an ti dilezet ha dirapar ho peus gwelet 'n eur zont aman, war ho torn dehou. Eun tamm keo a oa dindanan hag a oa stouvet a-ziavêz gant mein ar chiminal rampet er goanv tremenet. Er c'heo-ze hag a zo kempennet ennan tri wele, ez eus grêt toull d'en em zilan dre drek men ar fornigell. Eno e vezont kuzet mat; pa vezont et e-barz, unan ac'hanomp a lak ar menfornigell en e zav, ha setu...

— Ni 'yelo di e-berr! eme ar C'hloareg. Pelec'h eman Kevareg?

— Eman o paouez tec'het warzu an ti kouezet, betegout piou vijec'h bet...

— Deomp, eme ar C'hloareg, da welet ar miliner, ha galvit Kevareg da zont di.

Roza a lavaras mont d'e gerc'hat.

Pierig a grogas e dorn e vignon, an Tokous, da gas anezan trezek an ti bihan distro elec'h ma oa bet lazeta mamm Kevareg.

— Pelec'h eo et an daou Dhepot ha Riwall? eme ar C'hloareg.

— Da Roz-an-Ivinenn, eme ar pôtrig, da di an Thepot koz, nemet e teu unan aman, beb eil deiz, da c'houzout an doareou. Fenez, zoken, e tleer dont!...

— Mat! eme ar C'hloareg... Warc'hoaz e rankimp holl en em welet e Toull-an-Houc'h, ma vo disklêriet d'ezo an nevezentiou a zigasomp.

Eur zell a reas ouz an Tokous ha heman a asantas, en eur ober eur pleg d'e benn.

An eur vad d'en em welet yac'h ha divac'hagn a lakas d'ankounac'haat, eur pennad, an anken a grigne anezo.

An dimezel Kersôzon a oa mall ganti klevet kelou eus beaj he breur hag e vignon an Tokous.

Ar C'hloareg a dennas eun dornad paperou eus godell dindan e borpan.

— Gortozomp! emezan, ma en em gavo Kevareg ha neuze me a zisklêrio d'eoc'h an traou burzudus hon deus klevet.

Pierig a oa e benn ouz gwerenn ar fenestr: « Arru eo! » emezan.

Pebez levenez ha pebez briata! Ken souezus evel ma oa en em adwelout beo na pa ne vije nemet goude eun devez disparti!

Pa voe an holl azezet ha var evez, ar C'hloareg a gomzas evellen:

— Pemzek deiz a vo souden, en em gavas ganeomp du-hont, war bikern Traon-ar-Run, ma mignon an To-

kous, gant al lizer-man, hag e lavariz d'eoc'h ne oa ket ar mare da zisklêria neuze petra oa warnan. Pa zizrojomp aman, e rois d'eoc'h da anaout e oan pedet da vont da gaout an Ôtrou markiz Tuffin ar Rouâri, abalamour d'in d'eh em glevet gantan diwarbenn meur a dra. Gwelet em eus anezan epad tost d'eun nozvez war he hed, en eun ti distro, demdost da Zant-Brieg, hag em eus aman ganin testeniu ha paperou hag a roio da anaout d'eoc'h eo gwir va c'homzou. Varc'hoaz ez aimp da gousket da Doull-an-Houc'h; ac'hano, e kasimp kelou a bep tu, d'an dud omp sur anezo, d'en em gaout, da zerr-noz, an deiz warlerc'h, ouz toull dor a-drenv kastel Kersôzon. Er c'heo dindan ar c'hastell e vo dastumet an dud-se hag eno e komzimp d'ezo eus ar pezh am eus kemeret karg da rei da anaout d'ar re 'zo c'hoaz, en hor bro, Bretoned ha kristenien kalonek.

Ma kontin d'eoc'h doare va beaj war he hed.

Et e oamp ac'han da dapout stêr al Leger, izeloc'h eget Ploubêr; ac'hano, e heuilhjomp ar Gendi betek Pedernek; trei diwar Wengamp hon doa d'ober rak eno, diouz ma lavare d'in va mignon an Tokous en em gave eur « procureur syndic », Vistort e hano, hag en doa kasoni meur-bed ouz ar veleien hag an noblans. Diskenn a rejomp izeloc'h eget kêr, 'trezek ar c'hreizreiz, dre eur barrouz, he hano... Arsa 'ta, Tokous, te a anavez ar broiou-ze gwel egedon. Kont d'hon zud penôs en em gavas an traou ganeomp!...

An Tokous a reas eur skrab d'e benn, rak gant e deod ne oa ket gwel akuit:

— Féiz, klevit 'ta, emezan, mar c'houitan warni, c'houi a zivanko ac'hanon...

Skarza reas e c'houzoug diou pe deir gwech dioc'htu hag e stagas da gonta, en doare m'en dije displeget eur marvailh d'eur vandenn vugale:

— E Gurunhuel, emezan, e oamp chomet en deiz-ze da ziskwiza, er c'hoajou etre Benac'h ha Gurunhel, pa lavariz ervad... Hum!... Da zerr-noz ec'h ejomp en henchou, e zonj tizout koajou Krec'hkant ha, dre Goadou, koajou Keroffret ha goude Malane, Ar C'hastel ha Sant-Brieg... Hum! hum!... Ni a oa tud hag a skarze... hum!... Pa voemp arru e Mousteru, e trojomp diwar ar bourk, 'vel just, evit skei, dre véveri an Enez, 'trezek Kerc'hkant... Ha! ha! ha!

Aman an Tokous a grogas eur barrad c'hoarzin ennan, ken ne zic'hoarze ket.

— Eno, emezan, e c'hoarvezas eun dro fentus ganin. Pa oan o tremen ebioù d'an ti, an avel hag a oa diwar Wengamp a zigasas d'in c'houez ar bara tomm. O tennan bara e oad, sur awalc'h... Ma fé da douac'h, hag e sonjis e raje vad eun tamm bara fresk d'an ôtrou ha d'in... Ha! ha! ha! ha!... Lavaret a ris d'an ôtrou gedal ac'hanon

eur momedig dindan eur wezenn ivin, e korn liorz traon ar porz, hag ec'h is, kaset gant ar c'houez, 'trezek ar forn, elec'h ma oa eur pôtr o tenna bara, eul lêtern gantan, ha bep ma tenne, e vernie anezo en eur garrigell. Pebez c'houez, va ene! Digeri rê va c'halon ha va stomok, netra nemet o rufla ar c'houez dudiuz-ze! Hag e sonjen penôs e rajen da gaout an tanva... Ar pôtr, pa voe grêt e garg, nao pe dek torz, da vihana, a dremenas brok al lêtern e brec'h ar garrigell hag a zavas anezi da vont d'ar gêr. Me, avat, voen ket pell neuze o tarc'haoi eun töl troad gant ar goulou hag o kregi war eun dorz! Ar pôtr spontet kloz a laoskas brec'hiou ar garrigell hag a dec'has kuit en eur youc'hal evel eun den tretelat. An torziou a ruilhas a bep tu gant ar stronsadenn... Ne chomis ket d'o dastum, rak kerkent e klevis mouez chas o harzâl ha n'eo ket re vihan e oant. « Paket omp, emeon, mar tap ar re-ze donet war hon roudou! »

Ar chas a deuas betek ar forn, ya, met eno e kavjont an torziou bara... ha! ha! ha!... hag e chomjont, kredabl eo, d'o diskolpan rak an ôtrou ha me a c'hellas tec'hel war hon fouezig, didrous... Da veure, e tebris bara fresk d'am lein, me, da vihana, rak an ôtrou ne zebras ket dre ma oa, emezan, bara laeret... Mat e oa memez tra! N'am boe ket a zroug-kof warlerc'h... Ah bah! Vit kelou eun dorz vara!...

— N'eo ket, eme ar C'hloareg, hennez kaera taol ho peus grêt, da vihana... A c'houde, treuzi a rejomp, ouz skeud al loar, bourkig Koadou, kousket e harz tosenn Krec'h-Mikêl hag e chapel. Ne oa ket sklêr, ne oa ket tenvall diabarz ar chapel hag e sonjchomp e c'helle bezan tud enni, marteze eur beleg forbanet bennak oc'h oferenna e kuz da greiz an noz, met pa ne oamp ket anavezet, ha c'hoant beza n'hon doa ket, e tec'hjomp hep dale, da aruout e koajou Keroffret arôk ma savje an deiz.

(Da heuilh.)

RAKPRENIT (Souscrivez à):

SKETLA SEGOBRANI

Danevellou ar Gelted koz

(KEVRENN DIWEZA)

Priz: 7 lur evid ar rakprenerien

Kas an anoiou da:

F. VALLÉE, 23, Rue Saint-Benoît SAINT-BRIEUC

Priz an diou gevrennad kenta: 8 lur pep lev

KELEIER ar MIZ

SENT AR VRO

Eskob Poitiers, an A. de Durfort a gase, n'eus ket pell, ar gemennadurez-man da dud e eskopti:

Le culte que nous rendons aux saints comporte une certaine hiérarchie que la raison indique et que confirme l'esprit de l'Eglise.

Nous avons constaté avec une pénible surprise que trop généralement l'on néglige ou méconnaît la dévotion aux saints patrons de l'Eglise, du diocèse, de la paroisse et même de son propre patron. Ils sont cependant les intercesseurs-nés des individus ou des collectivités auprès de Dieu.

Pour favoriser ces dévotions principales et éviter en même temps le retour de certains abus contraires à l'esthétique des édifices du culte, nous croyons devoir n'autoriser à l'avenir, dans les églises et chapelles du diocèse, l'érection de statues de saints ou de saintes satisfaisant des dévotions particulières, si répandues et si légitimes soient-elles, que si tout d'abord, et dans la mesure où le comporte l'édifice, s'y trouvent représentées les dévotions générales indiquées plus haut.

Komzou an A. de Durfort a zo komzou fur; goude Doue, ar Werc'hez ha sant Joseph, enoromp da genta sent hor bro; ma ne deu ket ar re-ze d'hor selaou, piou a deuo 'ta?

Sent ar Vro, sent an Eskopti, sent ar barrez, a dle tremen atao a-raok sent ar broiou-all, sent an eskoptiou all, sent ar parreziou all; an dra-ze a zo sklêr hag anat; mat, daoust da-ze, e kavoc'h, e meur a iliz, e Breiz, eur bern sent nevez deuet di da ober o renkou, den ne oar perag, hag o deus kaset sent ar vro ermêz.

Sant Per ha sant Paol, breman ez eus tri c'hant vloaz o deus digadoriet ne ouezer ket ped eus hor sent patron ha breman, sent all, ma ne geromp diouail, e beurgaso, eus hon ilizou, kaera bleuniou hor gouenn; mall eo d'eomp teurel evez.

N'eus ket pell e oan bet o pardona en eur chapel savet d'ar zant kenta a zigasas sklerijenn ar feiz er vro-man; o koueza en he foull edo, ha sur a-walc'h, er barrez-se, ha ne gaver ket eur gwenneg da gempenn eur chapel goz, e kaver kant luriou da brena eur zantez Jann d'Arc, eur zantez Thereza ar Mabig Jezuz, eur person Ars pe eur zant Antou a Badou!

Ar zent-se a zo sent bras, hep mar ebet; an Iliz he deus hen embannet; o fedi a c'heller e pep lec'h, met hor sent-ni, e Breiz, a dle tremen en o raok!

Evel a lavar an A. de Durfort a zo gwir: ar zent a dle beza lezet pep hini en, e renk!

SANT JUDIKAEL

D'ar 27 a viz Gwengolo ez eus bet benniget, e Pennpont, en eskopti Roazon, eur skeudenn da zant Judikael,

unan eus rouaned hor Breiz-ni. Kalz Vretoned a oa dire-det d'ar gouel-se hag an A. markiz de l'Estourbeillon a zougas e-unan banniel Breiz.

An A. Charost goude ma oa bet benniget ar zant nevez a reas eur brezegenn gaer war Dadou hor Bro; setu aman pennadouigou anezi a dennomp diwar *Le Redonnais* an 3 a viz Here.

« Mes premiers mots dit Son Eminence seront pour dire merci à M. Méliçon, ancien recteur de Paimpont et à M. Thouail, pour avoir relié la chaîne des souvenirs, et des cœurs à treize cents ans de distance et pour avoir, en faisant élever une statue à saint Judicaël, lié le peuple breton au fondement même de sa Nationalité.

« Voyez-vous, un peuple, pas plus qu'un homme, ne doit se dire né de père inconnu. Un peuple, en ces conditions, est aussi malheureux qu'un homme qui a cette misère. Si une ombre plane sur ses origines il demeure éternellement misérable.

L'origine de cette civilisation qu'on veut nous imposer est tout entière dans la flaque de sang de l'échafaud révolutionnaire. Mais, Bretons, notre aurore n'a pas surgi de cette boue sanglante. Nous sommes un peuple baptisé par l'eau du baptême, d'abord, mais aussi par la sainteté de nos pères.

« Judicaël était le dixième descendant de Conan-Mériadec qui avait délivré son pays du joug des Romains. Nous avons su, les Celtes, garder une supériorité sur la race gauloise. Elle avait perdu sa langue qui est le miroir d'un peuple; elle avait perdu sa conscience de Nation. Elle avait accepté les honneurs de la main des empereurs romains. Or, jamais, les Celtes ne se plièrent à cette servitude. Il fallut un étranger, Clovis, pour faire de la Gaule la France, et vous, Bretons, vous n'avez dû cela qu'à vos propres princes.

« Ils étaient le meilleur de votre race.

« Ah! qu'il est vrai ce vers du grand poète Lamartine:

« C'est la cendre des morts qui créa la Patrie. »

« Pour la Bretagne, nous pourrions refaire ce vers et nous écrier.

« C'est la cendre des Saints qui créa sa Patrie. »

« Ils firent, tel Judicaël, son indépendance, mais ils lui furent encore plus utiles par leurs vertus, qui lui apportèrent cette force morale qui la conserve, ce dédain magnifique des joies de la chair et des honneurs, de tout ce qui peut énerver un peuple.

« Il était élevé à l'école de notre grand saint Méen. Ah! je sais bien que les fondateurs de mon beau diocèse sont saint Melaine et saint Amand, mais saint Méen a porté la foi bretonne dans nos contrées. Il a appris à vaincre le sensualisme de la chair. On nous dit comment saint Judicaël, en se plongeant, dans une rivière glacée, domptait les feux impurs qui tourmentaient sa jeunesse.

« On a dit encore de saint Judicaël qu'il fut un *Saint Louis Breton*. Invincible à la guerre, invincible dans sa lutte contre ses passions...

Ah! Merci à ceux qui ont fait revivre et briller ici à nos yeux, devant l'antique abbaye témoin de tant de choses, la couleur des siècles passés!

« Tout à l'heure, je voyais cette statue s'avancer grande et douce et c'était une résurrection!

« Ah! les honneurs que Pascal appelait les grandeurs de la chair, Judicaël les a rendus avec sa couronne pour posséder les grandeurs du ciel. Mais cette couronne, Dieu la lui a rendue...

« Qu'est-ce que notre civilisation barbare a donc à envier à celle de ce temps! La justice et la paix y étaient plus loyales, plus modérées et plus désintéressées. Dieu a voulu qu'en Bretagne les grandes leçons de saint Judicaël demeurent. Mais quelle joie ce fut pour moi dans le Nord de retrouver son fils, saint Winnoc, patron d'une paroisse de Lille. Ah! comme le prestige des saints bretons est allé loin. Semence immortelle de civilisation et de grandeur morale allant porter partout le salut de Jésus-Christ... »

Et Son Eminence termina par une sublime invocation à la statue du roi Breton, en la suppliant de continuer l'œuvre du grand saint parmi les Bretons.

LENNIT HA STUDIIT

Potred yaouank, merc'hed yaouank, lennit ha studiit; an hanv eo amzer al labour-korf, ar goanv eo amzer al labour-spered; leoriou nevez flamm, war o c'henta lamm, a gaver, diouz an druilh, da brena e ti *Emgleo sant Iltud*.

Epad nozveziou hir ar goanv lennit ha studiit; mez eo gwelet, evel ma kaver e keriou a zo, Bretoned ha ne ouezont ket a vrezoneg; an dud-se a zo evel tud dianket en o bro o-unan; deskit brezoneg mat en eur lenn al leoriou kaer a zaver breman; deskit Istor ho Pro; eur breizad ha ne oar ket Istor Breiz, evel a lavar ar C'hardinal Charost, a zo evel eur c'hrouadur ha ne oar ket piou eo e dad. Goulennit ha lennit er goanv-man.

<i>Istor Breiz</i> , gant J. C.....	4 real
<i>Histoire de Notre Bretagne</i> , par C. Danio.....	12 lur
<i>Barzaz Breiz</i>	12 lur 10 gwenneq
<i>Pipi Gonto</i> , gant Dir-na-Dor.....	20 real
<i>Bilzig</i>	20 real
<i>Lizer an hini maro</i>	8 real
<i>Santez Trifina</i> , gant A. Joanno.....	8 real
<i>Ar Chiminaou</i> , gant Dir-na-Dor.....	6 real
<i>Le Breton</i> , en 40 leçons, Vallée.....	1 skoad

Goulenn a c'heller al leoriou-ze ha re all eleiz, ouz an A. Drezen, Ti E. S. I., 4, rue du Château, Brest. C/C. 62-38, Rennes.

LA LANGUE BRETONNE

La langue bretonne a zo eul levrig a beder bajenn ha tregont savet gant an A. Marcel Guieysse a dle lenn kement hini a gar e yez ma fell d'ezan gwelet penaos en deus gellet ar brezoneg beva betek hen, kement all a enebourien en deus kavet war e hent edoug ar c'hantvejou.

Evel a lavar an oberour, warlerc'h e dad, a zo gwir: « *La langue bretonne doit être étudiée pour elle-même. Elle doit être un but, non un moyen.* »

An dra-ze a zo skler hag anat; met ar pezh a zo ken anat all eo an dra-man: ar re a vez bet klasket kuzat istor ha yez o bro outo eo a deu da veza o brasa difennourien goudeze pa deuont da welet pebez gaou a vez bet graet outo:

« Il en est de la langue comme de l'histoire soigneusement cachée; ceux qui, par hasard, intuition, ou recherche raisonnée découvrent un beau jour qu'on ne leur a pas appris la véritable histoire de leur pays, et que non seulement on ne la leur a pas apprise mais qu'on l'a même, — mettons *modifiée*, dans la mesure très

grande où elle se mêle à l'histoire générale de France, ceux-là passent généralement au nationalisme par ressentiment contre l'enseignement officiel; de même ceux qui n'ont pas appris, jeunes, la langue de leur pays et qui un jour, sous de multiples influences, pour des causes variables et nombreuses, finissent par se rendre compte de tout ce qui leur manque, de ce que l'on a ainsi atrophié ou supprimé dans leur conscience, dans leur esprit, de la diminution ainsi apportée à leur intellectualité, du trouble créé dans leur être intime et dans les ressorts les plus cachés de leur personnalité, ceux-là à leur tour se reprennent et se ressaisissent, ils en veulent d'autant plus à ce stupide enseignement qui broie ainsi sous sa lourde meule tous les cerveaux, toutes les intelligences, pour les couler ensuite dans le même moule universitaire sans souci de ce qu'il a pu détruire, sans même se rendre compte du mal qu'il fait: il semble si béatement fier de son travail que l'on éprouve presque de la peine et du scrupule à tâcher de lui faire comprendre qu'il a accompli là une besogne inepte, une tâche impie. Et il y avait une si belle œuvre d'instruction à entreprendre et à mener à bien ». *La langue bretonne*, p. 29 et 30.

Kaer o do pabored Pariz beza fall, ha kaer o do tadou ha mammou a zo e Breiz beza dall, ar brezoneg en do an trec'h war e holl enebourien; setu ar pezh a gredit gant an A. Guieysse pa glozit e leor, goude beza e lennet penn-da-benn.

Evit kaout *La langue bretonne* kasit pemp real nemed eur gwenneq d'an oberour: M. Marcel Guieysse, 60, Boulevard Port-Royal, Paris (V°).

Evit 10 lur ho pezo 10 levr.

GOURC'HEMENNOU

An Otrou F. Gourvil, rener Ti Breiz, e Montroulez, a zigemenn d'eomp e timez gant an Dimezell Marc'harid Salaün. Al lid-eured a vezo gret en Iliz Sant-Melani Montroulez, al Lun 26 a viz Here, da 10 eur eus ar mintin.

Pedi a reomp ar priejou nevez da zigemer hor gwella menozioù a evurusted.

Eclairer notre esprits par la Culture bretonne, le fortifier par la doctrine catholique, c'est préparer à notre race une influence profonde et de lointaine portée.

Breiz Atao
(*La Nation Bretonne*)
Revue du nationalisme breton

PANCELIA
Organe des relations interceltiques

ABONNEMENTS :
Bretagne et France... 10 fr.
Autres pays... 15 fr.
Etudiants et soldats... 5 fr.
Service gratuit aux Membres de l'U. Y. V.
Bureaux : 8-10, rue du Vau-Saint-Germain, Rennes
Chèques postaux : C-C. 25-29, Rennes.

Demandez un numéro spécimen qui vous sera envoyé gratuitement



I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ HERE

- I. — Ar mouar. II. — Eun arched. III. — Eol, priz, keiz, kriz, dour, pour. — Helena. IV. — Ar c'holc'hed.
 V. — Anna
 Neud
 Numa
 Adam

II. — DIVINADENNOU MIZ DU

- I. — Pegoulz ne c'heller ket kaout abeg
 En eur genaoueg?
20 p. ar r. Digaset gant Mari Kervella, Plougastell.
- II. — Eun dra ha n'eo ket bet gwelet biskoaz
 A zo hizio ha ne vo ket warc'hoaz.
20 p. ar r. Digaset gant Mari Bellec, Plouguin.
- III. — Piou a ya ac'han d'ar maout
 O vale war e dreid faout?
20 p. ar r. Digaset gant A. M. Cadiou, Plouenan.
- IV. — Daoust hag e p'lec'h e kavin
 An dra henvela ouzin?
20 p. ar r. Digaset gant Potr L. N. Logonna-Daoulas.
- V. — Ken teo hag eur varrikenn
 ha ker skanv hag eur bluenn.
20 p. ar r. Digaset gant Mari Cadiou, Gouesnac'h.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet, abenn ar 25 eus ar miz da: M. le Directeur du Feiz ha Breiz, Plouguerneau (Finistère).

Graines Potagères, Fourragères et de Fleurs

A. HUON

L. AUDREN, SUCC^R

13, Rue de Siam -- BREST

Adresse Télégr. : AUDREN-GRAINES-BREST Téléphone 5-33

ARTICLES de PÊCHE et CORDAGES

Feiz ha Breiz

HA KROAZ AR VRETONED

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU

Relijion — Istor Breiz — Marvailhou — Gwerziou
 ha Soniou — Buhez ar Vro

RÉDACTION

J.-M. PERROT, Plouguerneau (F¹⁹) | Y. LE MOAL, Coadout, p^r Guingamp


ADMINISTRATION du FEIZ HA BREIZ : FR. GEORGELIN, Brest — 4, rue du Château — Brest c/c 44-40 RENNES	ADMINISTRATION du Bleun-Brug et de l'Emgleo Sant Iltud Yv. DREZEN, BREST — 4, rue du Château — BREST c/c 6238 RENNES
--	---

ABONNEMENTS INDIVIDUELS « FEIZ HA BREIZ » et « KORN-BOUD » Bretagne 10 f. l'an France 11 f. l'an Etranger 12 f. l'an Abonnements collectifs Feiz ha Breiz (seul) (à partir de 5 exempl.). 5 f. l'an	PUBLICITÉ Toutes les insertions sont faites à l'année Une page entière 300 fr. Une demi-page 175 fr. Un quart de page 100 fr.
---	---

TAOLENN AR MIZ. — Galvadenn Eskibien Breiz evit Bez-
 meur Santez-Anna-Wened. — Breuriez sant Korantin
 ha sant Pol. — Breiz, Preiz? — Loc-Maze Penn-ar-
 Bed, G. P. — Salud, Pôtrede Plougerne, LOEIZ LOK-
 RONAN. — E Bethleem, J. L'HELGOUALC'H. — Preze-
 genn ar Yeodet. — Nedeleg Katell goz, MELEGAN. —
 Bleun-Brug T. G. K., A. R. — Keleier ar miz. — Di-
 vinadennoù.

SULIOU HA GOUELIOU MIZ KERZU

- 6 a viz Kerzu. — Eil sul an Asvent, p. 152 e levr an A.
 Uguen.
 8 a viz Kerzu. — Ar Werc'hez Vari krouet dinamm p. 623.
 13 a viz Kerzu. — Trede sul an Asvent, Ofisoù Sant Korantin
 p. 780.
 20 a viz Kerzu. — Pevare sul an Asvent. An oferenn p. 163.
 Gousperou kenta Sant Thomas p. 628.
 25 a viz Kerzu. — Gânivelez Hor Zalver Jezuz-Krist p. 170.
 26 a viz Kerzu. — Gouel Sant Stephan p. 191.
 27 a viz Kerzu. — Sant Yann an Avielier p. 196.



Bez-meur Keranna

**Galvadenn ar C'hardinal CHAROST,
arc'heskob Roazon hag holl Esbibien
all Breiz evit goulenn profou da ze-
vel Bez-meur ar Vretoned e Santez-
Anna-Wened.**

HOR BREUDEUR KER,

Evid an drede ha diveza gwech, fizians hon eus, Eskibien Breiz a deu da astenn an dourn d'eoc'h evit bez-meur soudarded ha martoloded Breiz, maro epad ar brezel 1914-1918, emær stag, goude beza bet en em glevet ganeoc'h, da zavel e Santez-Anna Wened.

Maro ouspenn 200.000 eus hon tud, e bleun o yaouankiz, a zo eun dra ken estlammus ma ne dle ket beza ankounac'haet gand ar re a deuo war hon lerc'h; setu petra hon eus kredet hag ar profou ho peus roet d'eomp betek-hen agnt kement a largetez a ziskouez emaeoc'h a grenn a-du ga-neomp.

... Ar bez-meur a zavomp a vo diou chapel an eil war gorre eben en e greiz; fizians hon eus da c'hellout peur-ober ar chapel en traon a-benn par-don bras ar 26 a viz Gouere a-zeu.

... Evit gellout kaout peadra da beur-ober ar chapel-ze, dres, eo ec'h astennomp an dourn d'eoc'h en taol-man.

Santez Anna, gand ar pezh a gasoc'h d'ezi bep bloaz, goudeze, pa 'z eoc'h da bardona d'he c'hêr, a en em gargo da beur-ober ar rest.

Evit rei an dourn d'eomp ho pedomp da rei ho profou hag hoc'h aluzennoù er gest, a vezo gourc'hemennet dizale e pep hini eus pemp eskopti Breiz.

Kas a reoc'h ivez, fizians hon eus, anioù ho tud maro er brezel da voula war vein moger an hent-ar-groaz bras a raio an dro da flourenn ar bez-meur: 200 lur e kousto moula peb ano.

Poueza a reomp start evit ma taolo evez mat beleien ha kristenien hon eskopti war ar gest-se gourc'hemennet evit bez-meur Santez Anna hag a vo graet da zul kenta viz kerzu e holl ilizoù ha chapelioù an eskopti da gement oferenñ ha da gement ofis a vezo graet en ilizoù ha chapelioù-ze.

Ar gest-ze a vezo digaset, kenta ma vo gellet, da zekretour an eskopti.

Kemper d'ar 15 a viz Du.

† ADOLPH,
Eskob Kemper ha Leon.

*Pedenn evit goulenn ma vo laket Mikel an Nobletz
maro da 5 a viz maë 1652 e renk an dud eürus.*

Doue Holl C'halloudek, ho peus laket e kalon an den enorus Mikel an Nobletz eur garantez tener evid ar Wer-c'hez Glorius Vari, ha dreizi roet d'ezan ar c'hras kaer da heulia ar vertuzioù en eun doare skedus; C'hwil ho peus entanet anezan gand ar youl da labourat evid ho kloar ha silvidigez an eneoù, o kas ar misioner dispar-ze da vro Vreiz.

Teurvezit, ni ho ped, rei da anaout, dre vuzudou, gloar ho servicher, ma vo gand an Iliz hor Mamm laket e renk an dud eürus, evit ma c'hellimp e enori evel skouer beleien Breiz, ha patron ar misionoù a vez gret en hor parrezioù, dre Jezuz-Krist, Hor Zalver. Evelse bezet gret.

Breuriez Sant Korantin ha Sant Pol

An A. Duparc, Eskob Kemper ha Leon, a zo o paouez kas da dud e Eskopti, eul lizer meur hag e tennomp anezan ar pennadou kaera da lakaat dirak daoulagad hon lennerien:

SEVEL BELEIEN, eno eman an dalc'h; ar feiz, ar relijion a jomo beo, ma vez beleien; met mervel a raint, sklêr eo, ma ne vez ket mui a veleien.

Souezet e vezot marteze, Hor Breudeur ker, o klevet hano eus buhez pe varo ar feiz en Hon eskopti. Met, e riskl d'ober plijadur d'hon enebourien kriz, ret eo d'eomp komz evelse. E 1910, hor boa ouspenn 1.100 beleg. E 1925, hon eus 950, hag en o zouez 75 n'emaint mui e karg. Hor beleien oajet o deus dalc'het mat epad ar brezel hag abaoe. Daoust da-ze, abalamour d'ar veleien kouezet er brezel, diskaret gand ar c'hlenved pe ar gozni, hon eus ranket tenna meur a gure eus ar parrezioù ha d'ar mare ma z'eus ar muia ezomm anezo evid al labour d'ober: Unvaniez katolik, Katekiz, patronachou, Kelc'hou-studi, ha dreist pep tra, skolioù.

Ya, ezomm Hon eus a veleien. Met ret eo d'eomp o c'hask, hag o c'haout a raimp endro d'eomp eun eskopti ker kristen hag hon hini. Evit pignat ouz an aoter e ranker, gwir eo, beza galvet gant Doue, ha da Zoue hepken eo da zibaba e vinistred: « Den ebet, eme zant Paol, ne dle kemeret ar garg a velegiaj, ma n'eo ket galvet gant Doue evel ma voe Aaron. » Met skler eo, furnez Doue a c'halvo ato kement a veleien ha ma c'houlennno ezommou an eneou. Ha zoken, o veza ma z'euz meur a hini ha n'ez eont ket da benn, Doue a c'halv eleis a dud yaouank en hor familhou, er familhou a bep stad, paour ha pinvidik, eus a douez ar bobl hag eus a douez an dudchentil, e ker ha var ar mez.

... Evit sikour an eneou-ze dibabet gant Doue ha merket evit beza e zervicherien, hag ive evit pourvezi da ezommou bras an Iliz ha dreist-holl

da ezommou Hon eskopti, eo Hon eus laketa en Hor penn ober ar Vreuriez da zikour sevel beleien. Sant Visant a Baol a lavare: « N'eus netra brasoc'h eget eur beleg santel. Sonjomp en dra-ze kement ha ma karomp; ne gavimp netra kaeroc'h, brasoc'h eget sikour sevel eur beleg santel. »

... Digand an holl e c'houlennomp da genta pedi, rak gant sikour ar bedenn ez a mat ato an traou a zell ouz an ene.

... Breman ez eus 300 vloaz, Dom Mikel an Nobletz en em glemme o veza n'en doa ket en dro d'ezan beleien awalc'h d'e zikour en e visionou, hag oa ret d'ezan goulenn digant merc'hed santel displega e daolennou ha lakat kanan e gantikou.

Tregont vloaz goude, an Tad maner a vode endro d'ezan ouspenn mil beleg, gouest da labourat er misionou, a zente outan evel soudarded, hag a veze kaset, a vandennou a dregont pe a zaou-ugent, d'ar parrezioù a veze misionou d'ober enno.

Ar bedenn hag an aked o doa gret ar bruzudze. Hen ober a c'hellont c'hoaz hirio.

... Met re alies, daoust ma vezer galvet gant Doue ha ma ne c'houlenner ket gwelloc'h eget senti, e c'hoarvez eun dra poanius: n'eus ket er familh a beadra awalc'h evit paea ar studi. Ne c'heller ket ober eur beleg eus eun dervez d'egile, red eo studia epad hir amzer evit kaout an deskadurez dereat. Bete vremen, beleien hor parrezioù a veze da genta oc'h en em ginnig evit paea lod eus ar mizou. Eur c'halz hirio, o veza m'eo ker beva, ne c'hellont mui sikour evel gwechall ar re a zo var ar studi. Ouspenn-ze, laeret eo bet digand an eskopti hag an daou Seminer an tammig leve o doa. An arc'hant dastumet er gest, n'eo ket kresket evel m'eo kresket priz ar beva. Ha setu perak omp lakeet nec'het.

Ha goulskoude den ebet ne gomprenfe e vije ranket distrei diouz ar velegiaj eun den yaouank galvet gand Doue, var zigarez ma n'en deus ket a beadra a-walc'h. Abalamour da-ze eo e savomp ar Vreuriez-man da zikour ober beleien, hag e roomp d'ezi da baeroned sant Korantin ha sant

Paol a Leon. Goulenn a reomp beza sikouret gant kement hini en deus feiz, kement hini a bed. Ma ne c'hell ket an holl rei kalz, an holl, zoken ar vugale vihana, a c'hello rei bep bloaz eun aluzenn a bemp gwenneg. Gant eur gwenneg dre benn bep bloaz roet gant tud an eskopti, eo e c'hellas an aotrou Graveran sevel daou veg var douriou iliz sant Korantin etre 1850 ha 1855. Ar familhou, ar c'houentchou, ar skoliou, ar Breuriezou a c'hell aes sevel peadra da baea evid eur skolaer, pe an hanter eus ar pezh a zo ezomm. Kristenien kalonek a gemero eun hevelep karg pe evid ato pe evid eun nebeut bloaveziou. En eur brezegenn gaer diwarbenn sevel beleien, an aotrou'n eskob Bougaud a lavare: « Ma vefen o veva er bed, e karfen kaout, enep va fec'hejou, evel skoed azioc'h va fenn ha penn va bugale, unan pe meur a veleg a vefe bet sikouret ganen d'ober o studi, hag a rafe bep mintin en oferenn eur bedenn evidon; diwallet e vefen ganto, evel ma vez diwallet an ti ouz ar gurun gand an diskuruner (paratonnerre).

RAK-SE,

Goude beza predet Doue, Hon eus gourc'hemennet hag e c'hourc'hemennomp ar pezh a zo aman varlerc'h.

ARTIKL I

Sevel a reomp en Hon Eskopti Breuriez sant Korantin ha sant Pol. evit sikour ar gloareged yaouank, hervez m'o devezo ezomm, d'ober o studi en hor Semineriou.

ARTIKL II

Ar vreuriez-man a ranko beza savet en holl barreziou. Gouarnet e vo evel Propagation ar Feiz gand ar veleien sikouret gant tud vat eus ar parreziou.

ARTIKL III

Er Vreuriez e vezo:

1° *Kenvreudeur*, a roio bep bloaz eun aluzenn a bemp gwenneg d'an nebeuta, hag a vo rannet dre zek, gant unan en o fenn, karget da zastum an aluzennou. Goulenn a reomp eun aluzenn vihan, evit ma c'hello ar familhou paoura lakat o holl vugale er Vreuriez.

2° *Madoberourien*, a roio bep bloaz ugent lur d'an nebeuta.

3° *Diazeourien*, a gemer ar garg, evid ato pe evit c'houec'h vloaz d'an nebeuta, euz mizou studi eun den yaouank, pe eus an hanter anezo (1200 lur ar bloaz, ha 600 lur evid an hanter).

O rei peadra da gaout 1200 lur leve pe interest ar bloaz, e kemerer ar garg eus eun den yaouank evid ato.

Meur a hini a c'hello en em unani evit gellout sevel 1200 lur pe 600 lur ar bloaz: eur familh, eul leandi, eur Vreuriez kristen, a c'hello en em glevet evit lakat a-unan o aluzennou ha paea mizou eun den yaouank pe an hanter anezo.

ARTIKL IV

Ret e vo pedi kalz, evit ma vezo krenv ha yac'h Hor Breuriez. Goulenn a reomp eta digand an holl dud fidel, ha dreist pep tra digand ar c'houentchou, familhou, skoliou, kristen, digand an dud yaouank katolik, pedi start ha kommunia allies evid ar Vreuriez. Alia a reomp d'ober an tri gouenn-man a vo gallet da lavaret bemdez er pedennou diouz an noz:

« Kalon Zakr Jesus, roit d'eomp beleien santel.

» Sant Korantin ha sant Pol, pedit evidomp. »

» O Mari, Rouanez ar veleien, goulennit evidomp beleien santel.

Staga a reomp 50 dervez induljansou ouz ar goulennoù-ze evel ouz ar bedenn all da c'houlenn beleien, a zo anavezet, eur pennad zo, en eskopti.

ARTIKL V

Ni Hon-unan eo a vezo e penn ar Vreuriez hag a lavaro penaos implija an arc'hant dastumet.

An otrou chaloni Le Roy a vo karget eus ar Vreuriez hag a zisplego d'eomp bep bloaz penos e vo et an traou e pep parre.

ARTIKL VI

Bep miz e vo lavaret eun oferenn, er Seminer bras hag er Seminer bihan, evit kenvreudeur ha madoberourien ar Vreuriez, ar re vezo hag ar re varo. Ha bemdez e vo pedet en hor Semineriou evid an intanstonou-ze.

Pa vo savet mat ar Vreuriez, e c'houlennimp eviti induljansou digand Hon Tad Santel ar Pab.

Hag e vo al lizer-man lennet en holl ilizou ha chapelioù eus an eskopti, d'ar zul goude ma vo digonezet.

Kemper, 1 a viz Du 1925.

† ADOLPH,
Eskop Kemper ha Leon.

« *Les Celtes à Quimper* »

Beau volume in-octavo, de 382 pages avec 40 illustrations, cartes, armoiries, musique et couverture en trois couleurs, relatant le congrès panceltique de 1924. Prix: 20 francs.

Ecrire, pour le demander, à M. de l'Estourbeillon, 4, rue du Vieux-Colombier, Paris (VI^e).

KRISTENIEN, n'it ket da brena netra digant marc'hadourien hag a gas o bugale d'ar skoliou dizoue, — mar deo aes d'ezo o c'has d'ar skoliou kristen, rak an dud-se eo **MEZ AR FEIZ**.

BRETONEG, n'it ket da brena netra digant marc'hadourien ha ne zeskont ket a vrezonég d'o bugale, — hag i o chom e Breiz-Izel, rag an dud-se eo **MEZ AR VRO !**

BREIZ, — PREIZ?

MIGNONED,

Ar c'houmoull du a stanka hag a devaa a-zioc'h hor pennou. Bro-Frans a-bez, ha Breiz, da heul a venn d'ezan kinniget da breiz d'eur vandenn ailhoned hag o deus evit lezenn lakat ar bed war an tu gin.

Enebi a zo red!

Evit enebi, eo red en em vodan;

Evit en em vodan, eo red gouzout etre piou ha diwarbenn petra.

Etre piou; — diwarbenn petra?

Etre Bretoned katolik; — evit difenn ar Feiz hag evit difenn hor Mamm-Vro Breiz.

En eur zifenn Breiz hag en eur he adsevel en he sked gwechall, e tifennimp ar gwella hor feiz; — o tifenn a-unan hor Feiz hag hor Mamm-Vro, e raimp ar muia vad d'ar Frans, e sikourimp ar pep gwella a zo enni da advleunia.

En eur zizoc'ha gant tachenn ar bloaz 1925, hag hor zellou enkrezet troet warzu ar bloaz nevez, e c'houlennomp diganeoc'h plêal da vat gant ar menozioù disklêriet aman warlerc'h.

Breiz a zo red he adsevel; hon enor, hor brud vat, hon interest her goulenn. Uheloc'h c'hoaz, an Urz laket gant Doue er bed her goulenn ivez hag al Lealded, hag he deus aman he gwrizienn en Istor, her gourc'hemen kemend all. Biskoaz an holl mouezioù-ze n'o deus komzet krenvoc'h eget hirio, rak Breiz a zo war-nez mont da get en droman; koulz hag an holl broioù, bihan ha bras, en em lez da vezan renet gant ar re ma 'z omp renet ganto.

Eur benveg a zo red evit al labour-ze, adsevel hor bro; n'eus ket ezomm d'hen henvel; n'hell be-

zan nemet kement-man: eur gevredigez c'halloudus. Pa lavaran *galloudus*, e fell d'in komz eus eur gevredigez hag he defe troc'h a-walc'h da voda, en eur ober eun nebeut bloavezioù, an dekvet lodenn eus ar Vretoned, eur gevredigez hag en em gemerfe diouz starda hec'h izili etrezo gant an hevelep menozioù breizad, kristen hag ivez politik.

Menoziou eün var bep tra ha grêt diouz klota etrezo, setu starta tra zo da zispaka. Klaskomp bepred boulc'ha al labour.

Breiz; — an Iliz katolik; — ar Frans: diouz an doare ma lavarer d'eoc'h e tle en em ren an tri hano-ze etrezo, e welit kerKent gant piou ho peus d'ober. Bezan zo Bretoned hag a zebtant lavaret ne dle ket bezan darempred ebet etre Breiz hag an diou all; — darn all, Bretoned ivez, a lavar ez eus aman eun hano re, hini Breiz; an Iliz katolik hag ar Frans, n'eus ezomm ken! — darn all c'hoaz a zalc'h an tri hano hag a verk an darempred 'zo dleet etrezo.

Ar wirionez n'hall ket bezan gant an daou rummad kentan; gant an trede, ne lavaran ket, mar goar eüna mat an darempredou, hervez an Urz hag al Lealded.

Da genta pesort darempred etre Breiz hag an Iliz? An Iliz eo mamm ar Broioù; dleet zo d'ezi doujans, sentidigez, peadra da harz da zigouezont ar pezh a weler elec'h ma vez dispartiet ar Vro diouz an Iliz: ar Vro o vreina diouz eun tu, keit ha ma seblant bleunia diouz an tu all, o vezan ma 'z eo renet gant ar gaou-man, evel pa lavarfen: eur Breizad sod gant ar brezoneg, istor Breiz, gwis-kamant Breiz hag all, a zo eur Breizad mat, forz pesort kredenn pe ziskredenn en deus; da lavaret eo, forz pegen avelet ar penn, mar zo warnan eun tog voulouzennet, mat eo; — forz pegen brein ar galon, mar teu, diouz ar genou, brezoneg c'houek, mat eo! Mat eo, ya, da gas ar Vro d'an argoll.

D'an eil, pesort darempred etre Breiz hag ar Frans? Evel m'eman breman, n'eus darempred ebet, pegwir n'he deus ket Breiz gwir da zougen

he hano. Kemend all a c'hell c'hoarvezout ivez dre zisparti. Daoust ha n'eman ket etre daou ar wirionez? N'eo ket lavaret eo n'hell ket Breiz beva heb ar Frans; grêt he deus epad pell amzer ha barrek eo d'hen ober c'hoaz, diouz ar red, kentoc'h, marteze, eget ar Frans da veva hepdi; met n'eo ket disparti a glaskomp; Kerzet ez-leal gant an mar deo posubl, hag ez eo. Kerzet ez-leal gant an hent-ze, 'n eur zerc'hel e zell war wiriou ar Vro, ma ne vo ket noazus an darempred outo, setu, me gred, eun eil menoz hag a zere ouz eur gevredigez hag he deus c'hoant d'en em zével ha da zével ar Vro d'he heul.

Mat! War an daou venoz-ze eo ez eo diazezet ar *Bleun-Brug*, ha c'hoaz war eun all: enebiez ouz spered an Dispac'h, spered 89.

— Pelec'h 'ta, emezoc'h, e welin sklêr, evel en eur mezellour, eman diazezet kevredigez ar *Bleun-Brug* evel ma lavarit aze. Nep lec'h gwelloc'h eget en he *Reolenn*. Ar *Reolenn-ze* eo, dreist d'ar re all an hini a zo grêt diouz unani ar muian sperejou ha diouz o unani ar starta; e zell e Vreiz, hep tec'het kammed diouz ar wirionez. Setu hi aman warlerc'h, ar pep brasa anezi gant ar gwellaennou zo bet grêt.

STATUTS DU BLEUN-BRUG

ART. I. — Le *Bleun-Brug* de Kerjean est réorganisé sous la dénomination de *Société d'éducation nationale bretonne* et les anciens statuts approuvés en Assemblée générale à Saint-Vougay, le 15 mars 1912, sont remaniés comme suit:

ART. II. — L'Association a deux buts distincts, mais inséparables:

a) *En tant que bretonne*, elle a pour but de promouvoir l'idéal breton dans le triple domaine intellectuel, politique et économique;

b) *En tant que catholique*, de contribuer à rendre à la Bretagne le plein exercice de sa foi traditionnelle, cela afin qu'elle devienne le rayonnement total de sa personnalité, un instrument de salut pour ses fils et un agent de civilisation dans le monde.

ART. III. — L'Association est dirigée par des laïques et sous leur entière responsabilité. Elle se tient en com-

munion étroite avec les représentants de l'Eglise catholique et est placée sous le haut patronage de l'Episcopat breton.

ART. VIII. — Les membres du B.-B. ne feront point partie d'associations bretonnes neutres ou régionalistes (1).

ART. XVII. — Le B.-B. est étranger à toute politique de parti. Il pratique une politique bretonne consistant à poursuivre la préparation et la conquête d'un régime d'autonomie qui permette à la Bretagne de développer elle-même et sans entraves sa personnalité morale, intellectuelle, ses intérêts économiques et d'en assurer l'entière et perpétuelle sauvegardé.

(1) An artikl-man en deus kavet etouez hor mignoned a bep seurt digemer. Unan a skriv: « N'hellan ket mont a-du gant an artikl-ze, rak dismegansus eo e kenver ar c'hevredigeziou all. » Hor mignon n'en deus ket tlet evez pegen dismegansus eo an « *neutralité* » e kenver hor Breiz katolik; pegen dismegansus eo ivez evit Breiz, pa ne c'houlenner eviti nemet eun tammik begad frankiz, 'vel ma tigouezfe restôl d'unan eul lodennig hepken eus ar madou bet diframmet digantan.

Respout hor mignon a zigas war va spered sonj ar mérour-ze hag a rea dismegans d'e amezeg en eur vont d'ar ofereñn, o vezan ma ne 'z ae ket heman.

Ar pezh a zo gwir eo kement-man: Bez ez eus evit an *Emzao brezonek* eun diazezet hag en em gav anat en pajennou hon istor, a rumm da rumm, koulz hag e kalon pep Breton; goueliou ar BB., hag a denn kement ar bobl, a ro testeni eus ar wirionez-ze, *goueliou ar BB. hag o deus eun doare kristen rik ha breizad rik*.

Daoust ha dleet eo d'eomp-ni, hag hon deus bet bennoz Eskibien Breiz abalamour n'en deus ar BB. spered kristen rik, (lennit war ze prezegem an Ao. Serrand, *Eskob Sant-Brieg*) daoust ha dleet eo d'eomp rei tu d'ar spered amgristen pe neutr d'en em zila en hon touez? Daoust ha n'eo ket dleet d'eomp, war gement digarez a zo, serri krenn an nor outan? Ha penôs serri an nor outan, ma tigemromp tud hag o do eun troad en eur gevredigez neutr hag eun all er *Bleun-Brug*? Skrivan a ra d'eomp eur mignon all penôs e gevredigez hen n'eo ket neutr. *Gwell a ze*; neuze 'ta an art. VIII « ne ra dismegans » ebet outi. Neuze eta e c'hellomp en em glevet ha kerzet a-gevred?

AN DRA-ZE 'N HINI A GLASKOMP, er *Bleun-Brug*, ober emgleo GWIRION gant ar c'hevredigeziou all, nemet n'eo ket int, mar dint neutr, eo a dle jacha ac'hanomp, ni eo a dle digas anezo da gaout hon diazezet ni.

Arabad eo d'ar *Bleun-Brug* fiach an distera war ar poent-ze: E VUHEZ A GOLLFE. Red eo d'ezan rei testeni d'ar wirionez, kous-ted a gousto, na pa gollfe grasou mat darn eus e izili, ha lod eus e beadra, hag hen ken dister koulskoude.

Ha n'ho peus ket lennet kement-man en Aviel: « Me, eme Hor Zalver, a zo deut da zigas ar c'hleze war an douar? » D'ober petra ar c'hleze-ze? Da zispartia etre ar gwir hag ar gaou; hag en em gaout a ra eun amzer ha, pa vezint re vesket, eo red impliga ar c'hleze-ze, anez. Doue a gas eus c'hleze all... Skoet en deus dija!

Setu perak e kavan dister abegou evel heman, a skriv d'eomp c'hoaz eur mignon: « Laza ar B. B. a reot gant an artikl-ze o lakat a bep tu enebiez da zével en e eneb! » Arru omp en em eur mare hag eo gant ar wirionez eo e fell d'eomp kerzet kentoc'h eget gant an dud, rak forz gant piou na penôs, hon oberou ne deunt ket da vat ken dic'halloud ma 'z omp dirak ar fall dichadennet, ma ne den-nomp ket warnomp, da genta, sellou trugarezus an Holl-C'halloudek: Pep kristen a dle kompren an dra ze... *hirio*.

En fonction de cette politique bretonne, le B.-B. repoussant toute tendance séparatiste, admet avec les différentes régions françaises une entente fédérative en vue de la défense de tous leurs intérêts généraux; — favorise, avec elles, la constitution d'un pouvoir central qui soit, par nature, le tenant et le mainteneur de nos libertés religieuses et bretonnes (1).

Setu ar poenchou bras, dreist d'ar re all, a zo da deurel evez outo er Reolenn-man.

Da genta eta, goulenn a rer (art. VIII) ma ne vo ket izili ar *Bleun-Brug* e kevredigez all ebet, nemet hag hevelep diazezet ganti he defe.

Va lezit da lavaret aman d'eoc'h penôs an artiklize a laka, evit ar wech kenta, an Emzao breizek en e blom. Evit ar wech kenta e kreder disklêria n'eus ket a ziu stumm da welet ha d'ober vad d'ar Vro; hen anzavit, an neb a gred, hag holl e kerzimp a-unan, na pa ne gerzfemp ket en hevelep kevredigez. Rak, n'eo ket e zonzj ober gaou ouz ar re all ha chacha, evel ma lavarer, an dour d'hor milin-ni, eo e tivizomp kemend all, met dre garantez ouz ar wirionez, ouz hor Bro hag ouz hor c'henvroiz hag a zo naontek ha pevar-ugent war gant anezo ha n'o deus ket c'hoaz taolet eur zell war al labour grêt evit Breiz dre ma n'her c'havent ket diazezet mat.

E ped ha ped spered breman e teuer da welet sklêr ar gaou euzus a zo kuzet dindan al « liberté de penser » pe, an holl menoziou ha kredennou keit ha keit, lezenn al « liberté », « égalité » ha « fraternité » astennet d'ar wirionez ha d'ar gaou!... Ac'hanta, ni lavar, en eneb, n'hell ket an hevelep den, nemet heb her gouzout e vefe, heuilh war an dro diou lezenn dishenvel, rak n'hellont ket bezan koulz ha koulz o-diou. Bezit krenn e tu pe du! Falla tra 'zo n'eo ket ar wirionez hag ar gaou pa en em dourfont, met pa en em veskont evel da en em glevet. Eno eman gouli hon amzer ha si an darn-vuian.

(1) E Gwened, d'an deiz kenta a viz Kerzu, e vo pouezet piz pep ger eus an artikloù man ha lammet er miz ar re ne vesent ket kavet dres a-walc'h.

Ha galloud a-walc'h en deus ar *Bleun-Brug* da zamma ha da zougen ar wirionez-ze? A dra zur, goude ar vrud en deus gounezet warlerc'h goueliou Lesneven, Kemper ha Gwengamp; eun dlead eo, zoken, pegwir grasou mat ar re a zo karget da viret ar wirionez, Aotronez Eskibien Breiz, a deu d'ezan war zigarez m'eo ken reiz en e oberou evel en e gredennou.

N'eus ket eta da gila an distera na da lezel pelloc'h c'hoari troiou kamm d'ar wirionez!... Ha mar doc'h eviti, c'houi vézo gant ar *Bleun-Brug*.

Eur poent bras all eo ar politik (art. XVII). Unan bennak a lavare d'eun all, n'eus ket pell, dirazon, diwarbenn ar *Bleun-Brug*: « Harpit ar *Bleun-Brug*, emezan, rak bezan eo eur gevredigez ha ne ra ket a bolitik! » Gwir ha gaou a oa er gomz-ze. Arsa, tud vat, daoust ha ni a ra goueliou brezonek hag a ro prijou 'vit ar brezoneg, a voul kelaouennou ha leoriou brezonek 'vit ar blijadur hepken d'ober eun tammik brud ha da baouez eun deiz bennak pa vezimp arru skwiz?

Kalz a zonje ganto, betek hen, e oa ze oa an *Emzao brezonek*, eun diduell, eur c'hoari evel eun all, eur « Sport » evit tud yaouank ha tud koz ivez, pep hini hervez e oad... Met abaoe m'eo krog goueliou ar B.-B. hag e venoziou da vezan brudet, zo iet klevet meur a hini o lavaret, lod e galleg, lod e brezoneg: « *Tiens! tiens! il y a quelque chose là-dedans!* » — *Ça devient intéressant!* eme eun all.

Ar *Bleun-Brug* a zo bet bepred ar pezh m'eo breman, nemet e oa bihanoc'h gwechall ha ne grede ket kôzeal. Hirio, p'en deus kresket, eo deut da zavel e benn. (Ha neuze, ar bed dre ma 'z a, a ziskouez eman ar wirionez gantan). Neuze 'ta, eo en em laket da zisklêria penôs an holl labour vrezonek a rê a oa evit adkroui eur vuhez vreton. Hogen, ar vuhez vreton, evit beza leun, a rank 'n em astenn betek kaout eur gont a zo a frankiz politik. Heb eur frankiz politik bennak, n'hellomp ren buhez vreton ebet.

Ar *Bleun-Brug* eta a ra politik, nann politik kos-

tezenn ruz, gwenn, briz pe yell, pe c'hlas pe varellet, met politik vreizek. Lennit an art. XVII ha lennit ivez ar goulennoù savet gant an O. Regnier, sekretour ar *C'helc'h keltiek « Me a zalc'ho »*, e Pariz. Moulet int bet er *C'horn-Boud*.


A dra zur, digarez hon devo meur a wech, da zizrei war an art. XVII ha war goulennoù an O. Regnier, daou dra hag a zo demhenvel; nemet ni a ra ganto menozioù ar *Bleun-Brug* hag an O. Regnier a glaske ober ganto menozioù an holl gevredigezioù breizad, dre an intent hanvet « Cartel ».

Eur c'hemm all c'hoaz: an O. Regnier a glaske lakat ar menozioù-ze da zont da vezan re an holl dud politik e Breiz, adalek ar c'huzuilher « municipal » betek an depute ha ni a lavar *n'hon deus fizians ebet ebarz ar c'hostezennou politik, e hini ebet anezo, vit gounit frankiz d'ar Vro*, nag er re a zo a-du gant ar gouarnamant nag er re a zo en en e eneb. Pesort politik eta eo hon hini? 'N em glevet gant ar broioù all a zo kement ha ni gwasket ha kabestret, lakat mouez ar bobl dre holl a-du ganeomp, terri o fenn d'ar c'hostezennou politik ha n'int, peurliesan nemet moked hag avel, ha diazeza eur politik nevez war *spered ar broioù*, war o frankiz, ha war ar pep gwella eus an dud anezo, dibabet dre stad ha dre vicher da vezan o c'hannaded.

Setu eno ar pezh a gaver er *Bleun-Brug* hag a ziniñ, e kenver an holl, intent vat, peoc'h, emgleo, betek ma anzavint eo Breiz eun hanô kaer prenet ganeomp abaoe pell zo hag a zo dleet doujans d'ezan.

MIGNONED,

Ar c'halvadenn-man he deus hirio d'he sina tud a bep korn a Vreiz. Er miz a zeu, ni a lakaio aman o hanoioù ha, goude ze, e stagimp da vat da gas endro, dre ar Vro, menozioù fur, poellek ha kalonek ar *Bleun-Brug*, ma teuoc'h a-vil-vern da rei d'ezan ho hanoioù, o c'houzout da vat petra eo, petra glask ha penaos e fell d'ezan tizout ar pal a dle tizout.



Eul leo diouz bourc'h Plougonvelen, e tu ar c'huz-heol, el lec'h ma chom Breiz a-zav dirag ar mor bras, e kaver ar pezh a jom c'hoaz eus abati Lok-Maze Penn-ar-Bed.

Ne c'helled ket kaout eul lec'h kaeroc'h evit pedi Doue; ar venec'h a veve eno n'o devoa dirag o daoulagad nemed ar mor bras atao henvel hag atao dis-henvel ha, pa veze deuet an noz du, pa glevent ar gurun o strakal, an avel o sourrat hag ar mor o trouzal ec'h en em roent da gousket en eur drugarekaat Doue da veza o lakat da bignat war eul lestr ha ne vezo goueledet biskoaz kaer en do ar gwall amzer spega ennan !

Sant Tanguy, goude m'en doa lazec'h e c'hoar santez Eodez, a yeas di, war a leverer, da ober pinijenn; divezatoc'h, merdeidi, eus a Vro-Leon, a gouezas war darn eus relegou sant Vaze, en Ethio-

pi hag a zigasas anezo ganto war o lestr; en em gavet dirag Penn-ar-Bed, eur gwall varr-amzer a strinkas anezo war ar c'herreg; strafuilhet holl an dudou keizze a en em erbedas ouz sant Vaze; kerkent ar c'herreg

a dec'has hag al lestr a c'hellas douara e porz Konk ; evit derc'hel koun eus ar burzud-ze an hini a oa neuze e penn ar vro a roas urz da gas relegou sant Vaze da iliz ar manati a voe hanvet adalek neuze manati Lok-Maze Penn-ar-Bed.

En X^{vet} kantved, an Normaned a reas ar rins er vro ; relegou sant Vaze a voe kollet; divezatoc'h, Herve I, komt Leon, a yeas da vrezel ar Groaz hag a zigasas gantan, eus an douar santel, darn eus penn sant Vaze hag a roas amezan d'an abati savet a-nevez, er bloaz 1157, gant Herve Leon, e dad koz, war al lec'h m'edo a-raok m'oa het diskaret gand an Normaned.

Menec'h eus a urz sant Beneat eo a oa en abati-ze ; dont a rejont buan da veza pinvidik rak holl dudchentil ar vro a roas d'ezo aluzennoù bras; abaded Lok-Maze, el didou sakr, o devoa peb a vaz ha peb a gabell evel an eskibien; ilizou ha chapelioù a oa er vro hag a oa stag ouz abati Lok-Maze evel Plougonvelen, Sant-Vaze Montroulez, Lok-Ronan, ar Seiz-Sant, e Brest, Lok-Preden e Plouenan, Sant-Vaze, e Gwikourvest ha Brevantec, en Drevec. Gwirioù a zestument war ar gwinn hag an ed, war mare'hajou Konk ha Brest hag an deog e parrez Plougonvelen.

E serr ar venec'h e oa brao beva; eur gêr vras, 36 ru enni, a voe savet e traon ar manati: eur porz-mor a oa eno eus ar re genta; ar gêr-ze, devet gand ar Zaozon, a voe peurziskaret gand ar mor ha ne jom anezi nemet eun nebeudig tiez bodet en dro d'ar chapel savet gand ar pez a jom eus an iliz-parrez dismantret.

Abati Lok-Maze Penn-ar-Bed skoet, a hep tu, gand ar gwall amzer a voe graet m'oc'h a c'haou outan c'hoaz gand an dud eget gand an amzer. Er bloaz 1294, ar Zaozon a reas ar skrab warnezan; ar venec'h a c'houlennas neuze aotre da zevel mogerioù ledan hag uhel tro-war-dro d'o zi evit gellout rei digemer ennau da dud kêr ha tro-war-dro pa zavje bec'h warnezo.

Er bloaz 1373, ar Zaozon a reas o diskenn e Lok-Maze hag e Konk, met an emgleo sinet er bloavez warlerc'h etre Duk Breiz ha Roue Bro-Zaoz a lakeas anezo da dec'het.

Er bloaz 1403 edo o listri adarre dirak ker hag edont o c'hedal diskenn enni d'he laerez ha d'he leski pa gouezas Yann ar Penhoat gant listri ha martoloded Breiz warnezo; eun emgann vras a zavas, ar Zaozon a gollas 40 lestr hag eur vag leun a draou laeret ganto en enezeier; ar re eus o listri a c'hellas tec'het a voe redet war o lerc'h betek porzioù Bro-Zaoz.

Er bloaz 1513, da c'houel sant Laurans, d'an 10 a viz eost, eun toullad listri saoz a deuas da glask kemeret Brest; an amiral Porzmoger a oa eno neuze, eun toullad aotronez hag intronezed pedet gantan da leina, war

e lestr; dal ma klevas ar c'helou edo ar Zaozon o tostaat ez eas ker buan d'o diambroug ma ne gemeras ket a amzer zoken da ziskenn d'an douar ar re a oa deuet d'e wellet; war e lestr, ar « C'hordelière » kaera hini a oa en amzer-ze, e redas da daga lestr an amiral saoz ar « Grand Henri » dirak Lok-Maze Penn-ar-Bed, hag edo o vont da c'houeledi anezan pa grogas an tangwall e gwern vras e lestr; raktal gant krapou e lakeas al lestr saoz hag e hini stag-ha-stag; an fan eus e lestr a grogas er « Grand Henri » hag holl ez ejont da strad ar mor.

Maro Porzmoger ne voe ket didalvez rag an enebourien o wellet e oa maro o amiral a en em dennas hep klask diskenn war hon aochou.


Er bloaz 1558 Lok-Maze a voe gwall lakaet gand ar Zaozon hag an Hollanded; d'ar 25 a viz gouere, er bloaz-ze, lord Klington a lakeas 6.000 den da ober o diskenn en aod Gwenn-Trez; kabiten Konk, Goulc'hen Lansilin, n'en doa da enebi outo nemet 140 soudard hag eur pez kanol bennak. Klask a eure diarbenn an enebourien met flastret e voe dillo; kêr a voe laeret hag an holl diez enni nemet eiz a voe devet; er porz, ar Zaozon a c'houeledas 37 lestr a oa 300 pez kanol warnezo; ar pez a ziskouez pegement a gemwerz a raet eno, dre vor, en amzer-ze.

Eus a Konk al laeron a yeas da Lok-Maze; abati ha kêr a oa goullio; an holl, strafuilhet a oa tec'het; devi a rejont ar c'hoc'hu hag al lezvarn! kas a rejont ganto holl zilhad hag holl listri sakr an iliz. Kleier an tangwall a voe sonet e holl dourioù Goueled-Leon ha war-dro 8 eur diouz an noz, e tigouezas Gwilhou ar C'hastell, aotrou Kersimon, e Plouguin, kabiten eskopti Leon, a oa deuet a-benn, e 12 eur horolach, da zastum 8 pe 9.000 den, koueriaded ha tudchentil; ar Zaozon o wellet petra c'hoarveze, a glaskas raktal an hent d'o bagou en dra ma klaske an Hollanded enebi eun draig bennak: holl, amiral hag all, e voent lazet.

Ar Zaozon, pignet war o listri, a dec'has endra ma c'hellent gwelet 30.000 den, dastumet d'ar red, renket war an aod azalek Lok-Maze betek Gwenn-Trez; Saoz ebet ken ne gredas dont war e giz.

An enklask gouc'hemennet gant Duk Etamp, er miz warlerc'h, a ziskouez splann pebez droug o devoa graet al laeron ha peger pinvidig e oa Konk, en amzer-ze; e maner Pouliorc'h hebken, el lec'h m'edo Sebastian Ponsilin o chom, ar Zaozon o devoa laeret ouspenn 30.000 skoed aour, ar pez a dalvezfe eur milion, en deiz a hirio.

Eul lodenn eus kampreier abati Lok-Maze hag ar sakreteri o devoa devet; kement a oa en iliz diouz o doare, an tenzor, an ogrou hag ar c'hleier a oa aet



ganto; an hini a oa abad e Lock-Maze neuze oa eskop Roazon, Glaoda Dodieu, unan eus Tadou konsil Trant, a voe kaset gand ar Frans evel kannad daved ar Pañ Paol III hag an impalaer

Charlez V; lakaat a reas adsevel ar pezh a oa bet devet gand ar Zaazon; e skoued, e vaz - eskob a - zioc'h d'ezan, a weler c'hoaz war ar mogeriou. Goude an abad-ze a oa eun den a zoare e voe gwel, e penn Lok-Maze, eun Italian eus a Florans, kuzulier ha beleg eus a lez ar roue Herri III, Kom Ruggieri, a

veze war a leverer oc'h heul ar rouanez Katell Medisis evel sorser; goude maro ar rouanez-ze, e lec'h e lakât ouz ar groug, e voe kavet mat da zigas da C'housel-Leon; beva a eure beteg ar bloaz 1615; e venec'h, o weler en devoa muioc'h a fizians en diaoul eged e Doue, n'oant ket evid e c'houzanv ha goude e varo, e lec'h kas e gorf d'an douar benniget, e stlepijont anezan en hevelep toull gand korf maro eun azen.

Na kêr, nag abati Lok-Maze ne c'helljont ket en em zevel ken, mat a-walc'h, goude darvoud spontus ar bloaz 1558.

Er bloaz 1686 ne oa mui e ker nemet 4 ru hag e oa 36 enni daou c'hant vloaz kentoc'h; ar manati, pa zrollas an Dispac'h n'en devoa mui nemet 3.500 lur leve ha ne gaset ennan nemed ar venec'h a veze c'hoant da lakaat e pinienn. P'en em gavas kuzulierien Plougonvelen er manati, er bloaz 1790, evid ober an inventar, ne gavjont ken ennan nemet pevar manac'h hag eur mevel.

An abati laeret gand Gouarnamant Paris a voe prenet er bloaz 1796 gand ar Provost, eus a Gonk, a lezas, na petra 'ta, an iliz da goueza en he foull hag a freuzas ti ar venec'h evit gwerza e vein.

Hizio iliz koz an abati n'he deus toenn ebet ken; leton

a zo penn da benn gant he bali greiz hag al laboused-mor a ra o neziou e faoutou he mogeriou; he gwaregeier, freuzet an hanter anezo, he frenecher hep gwer, he mogeriou difradet ken uhel dreist ar vri a laka c'hoaz, ar gwel nemet ken anezo, an dristidigez da waska kalon an den! Setu aze eur skeudenn vihan eus dismantr Breiz; ivinou an amzer o deus graet gaou ouz iliz Lok-Maze, met ivinou an dud, muioc'h c'hoaz eged ivinou an amzer, eo o deus graet outi ar gaou brasa!

An iliz-ze a oa bet savet etre ar bloaveziou 1157 ha 1208; al lodenn gosa eo an talbenn diouz tu ar c'hour-naouog, troet ouz ar mor; peulioù ar vali greiz a zo graet darn gant mein tuf ha darn gant mein ar vro. Hamp el lec'h m'edo gwechall an aoter vras e weler c'hoaz bez eun abad hag a oa eus tiegez brudet Aotro-ned ar C'hastell.

E tu an hanter-noz edo an tour, mogeriou ledan d'ezan hag aes oa en em guzat hag en em zifenn ennan.

Gwechall ar venec'h a rae tan gant keuneud dero pe geuneud lann en tour-ze, epad an noz evit hentcha al listri war ar mor; divezatoc'h, e lec'h ober tan, e voe enaouet eul letarn ennan. Er bloaz 1835 e voe savet an tour-tan a weler breman hag a gas e sklerijenn pell dioutan beteg eiz leo er mor; evit kaout eur gwel kaer war ar vro, tro-war-dro eo red pignat e beg an tour-ze; pa vez sklêr, e weler beg ar Raz hag Enez Sizun.

Lok-Maze a zo dudius; e nep lec'h ne gaver kaeroc'h kador da zaoulina warni da bedi Doue; eun deiz pe zeiz, pa vezo dihonet da vat, ar Vretoned eus o c'houisk hirf, ha pa vezint gouest da barea ar gouliou euzus graet d'o bro, edoug ar c'hantvejou, gand o enebourien touet ar Zaazon hag ar C'hallaoued, e lakint adarre, e Lok-Maze Penn-ar-Bed menec'h hag a adsavo, tamm ha tamm, an iliz hanter ziskaret hag a bedo Doue enni goudeze noz-deiz evit silvidigez Breiz.

G. P.



Salud Pôtrez Plougerne ⁽¹⁾


Laouen ha dillo.



Se - laou - it, Pô - tred Plou - ger - ne Tran - la - di -



ra Tran - la - di - ra lon - la Se - laou - it,



Pô - tred Plou - ger - ne o ka - na d'eoec'h eur zon ne - ve

Selaouit, Pôtrez Plougerne,
Tran la dira, tran la dira lon la,
Selaouit, Pôtrez Plougerne,
O kana d'eoec'h eur zon neve.

Eur zon nevez d'ho saludi,
Yann ha Jakez, Fanch ha Mari.

Marijannig ha Franseza
Katellig ha Tonton Glaoda.

Tud Lok-Maria, Plouzane,
Lanber, Plonger ha Lok-Maze.

Digorit mat ho skouarniou
Ho taoulagad... hag ho kenou.

Da zelaou diskleria ervat
Kenteliou kaer Mouez ar Gwad.

Ar gwad a lavar d'eomp karet
Hor c'herent hag hor mignoned.

Hor bugaligou da genta:
Emaomp o vont d'hen diskleria.

LOEIZ LOK-RONAN.

(1) Ar zon-man a voe kanet evid ar wech kenta, e Lok-Maria, d'an 11 a viz Here diveza, pa 'z eas Pôtrez Mikael Nobletz di da ziskleria *Mouez ar Gwad*.

E BETHLEEM

A-hont, doun en oabl ataouret,
Eman war enaou ar stered;

War dal an noz sioul ha seder
Al loar arc'hant a daol sklerder;

En aer splann, mouez flour an avel
A huanad, araok mervel;

E ker Bethleem ha tro-dro,
D'ar c'housk pep hini en em ro;

Eur c'har bennag, war ar vein lemm,
Gant pep tro rod, a laosk eur c'hlemm;

Chomet er meaz, dirag o dor,
Chas a yud, da c'houlenn goudor;

Kluchet en o mantilli reun
Mesaerien ker a veilh er reun; (1)

Hag, en noz didrouz, o denved
O vegeliat a vez klevet;

Bodet en dro d'an tan ruz-glaou,
Ar vesaerien holl a zelaou,

A zelaou, drant hag eveziek,
An danevellou pemdeziek

A gont dezo, puchet er geot,
Eur mesaer koz, lemm c'hoaz e deod;

Hirio e kont istor o zud,
Graet, penn-da-benn, gant mil burzud,

Hag int, eno, oc'h e glevet,
A ankounac'ha o denved,

Ha, war o diou jod, an daelou
D'an traon a red, evel strilhoul,

Dreist holl, seul ma tispieg eman
Ar C'hrist warnez diskenn aman,

Hag e vezo dreizan ar bed
Tennet a boan ha dieubet,

E savo eur rouantelez
E redo enni mel ha laez,

(1) *Reun, run* : colline.

Hogen, a greiz-holl, eun Arc'hael
A dreuz an oabl, a denn-askell,

Euz seul e droad betek e gern,
Ar run, gant e sked, a lugern,

Hag int, dre ar spont act yen-skorn,
A gren betek ar mel-askorn.

« N'ho ped ket aon, tud vat, emezan, gant dousder,
Ganen, evit ho pobl, e teu kelou seder,
Hirio eo evidoc'h ganet e ker David
Ar Zalver benniget keit all 'zo e c'halvit,
Etrezeg Bethleem kerzit en eun taol red,
Kaout a rafot eno ar Bugel mailhuret. »
Kerkent, eus an nenvou, eur c'helc'h tan war o zal,
E welont o tiskenn bandennou Aelez all
Hag o armeou lufus, kurunet gant dudi,
A gas warzu Doue eur c'han a veuleudi.

Ar vesaerien, laouen o dremm,
A red dioustu da Vethleem,

Hag eno, dious komz an Arc'hael,
E welont ganet ar Bugel;

E welont Joseph ha Mari
Stouet o daou da adori,

Ar Bugel, el laouer kolo,
E kroaz e zaouarn dizolo,

Ha d'e Dad, evit mad an den,
O kinnig daelou ha pedenn...


Kerz eta, pec'her, hep krena,
Dirag e neo, da zaoulina,

Kemmesk da zaelou gant e re
Hag ec'h adsavi diere,

Rag evidout hag evidoun
Eo deuet gantan ar pardoun,

Ha mar deo hor pec'hejou bras,
Bihanoc'h int eget e c'hras.

J. L'HELGOUALCH, o. m. l.



AR BLEUN-BRUG

Eur berradur eus prezegenn "Ar Yeodet"



A. Bocher « Ar Yeodet »

Komzet hon eus bet er *Feiz ha Breiz* diweza eus ar brezegenn gaer graet gant Ar Yeodet e Gwengamp d'ar meurzh da noz, eil devez eus ar *Bleun-Brug*.

Warlerc'h bezan displeget buhez ar B.-B. betek-hen ha lavaret eman brema diouz Breiz a-bez goude beza bet pell leonad, Ar Yeodet a lavar c'hoaz penôs hep c'hoantaat na didroada, na noazout ouz ar Breuriezou-all, o deus gwir da garout ha da zifenn Breiz en o doare, e kendalc'h ar B.-B. d'ober dre ar vro labour vat ha padus, rak e ziazezou a zo divrall, a zo didrec'h ».

Menez ar Bleun-Brug

Ar Bleun-Brug a zo eur Vreuriezh savet evit boda en dro d'ezhi ar Vretoned a gar mirout ha difenn kement tra a zell ouz mad hon Bro.

Ar pezh a blij ar muian er B.-B. n'eo ket ar goueliou, daoust ma 'z int dispar. Ar goueliou eo ar bleun; ar frouez, avat, eo an tu poellet; ar labour a bouez, an anaoudegezh vras e vez roet d'ar Vretoned eus o zalvoudegezh o-unan, eus madelez o Bro, eus an istor anezi, eus ar garantezh krenv a dleont kaout eviti, eus an ezomm o deus da viret

he gizioù fur, da zerc'hel d'he c'hredennou start, da gomz ha da garout he yez, ar Brezoneg.

Hag an traou-ze n'int na sorc'hennou gwrac'hed koz na c'hoantadennou tud dilerc'het. Gwrac'hed koz, tud dilerc'het, genaouien n'int ket gouest d'anveout istor eur vro na da zevel eun Emzao bennak. E penn an Emzavioù e welomp dalc'hmad tud a anaoudegez, studi d'ezo ha skiant-prena: skrivagnerien, beleien, Barzed, tud chentil, labourenn, micherourien, en eur gir, tud a venozioù uhel

E penn ar B.-B. emaint stank hag o menoz, laret em eus, eo dihun o c'henvroiz hag entana anézo gant ar Garantez-Vro.

Breiz-Izel, eur Vro!

Rak Breiz-Izel a zo eur Vro, dishenvel diouz ar broioù-all. Beza he deus eun istor d'ezi hec'h-unan, eun istor gaer, ha skedus, a dlefe beza anavezet gant Breiziz holl.

Ar Vretoned n'int ket hepken eur Bobl, beza ez int eur ouenn c'halloudus (une race), bet didrec'h en amzer gwechall ha kalonekoc'h c'hoaz breman eget kalz a bobloù all.

Ar ouenn-dud-ze he deus eur Yez, unan goz, pinvidik, dudius.

Hag eur Yez eo, komzet ha skrivet hervez reolennou ar yezou; n'eo ket eur « patois » bennak pe eur vriz-yez, — evel ma lavar hirio an ao. a Vonzie.

Ar Vretoned o deus c'hoaz gizioù fur, gwiskamanchou kaer, kredennou start... Hag e fell mirout tenzorioù ken-koulz!

Hag ar seurt tenzorioù, gewlet a rit, n'int na sorc'hennou gwrac'hed koz, na c'hoantadennou tud dilerc'het!

Ar Yez

N'hallomp anavezout mad hon Bro nemed o studia he spered, hec'h istor hag o studia anezo dre zikour ar Yez, dre ar Brezoneg. Rak ar Yez eo ene ar Ouenn, Spered ar Vro, nerz didrec'han eur Bobl. Eur Bobl hep Yez d'ezi he-unan a zo henvel ouz eur vag hep stur; ar vag hep stur a vez taolet buan war ar c'herreg gant avel ha korventenn hag eur bobl ha ne viro ket he yez a yelo ivez buan d'an argoll...

Ouspenn, ar Yez a zo eun herez zakr deut d'eomp a rumm-da-ruum, a remzi-da-zemzi, a gantved-da-gantved, a-beurz hon c'hentadou. He dilezel, a vefe nac'h hon gwad, ober dismegans d'hor Gouenn, koll gwellan difenn hon Broadelez.

Ar Brezoneg eo hon Yez-ni, Bretoned. Miromp d'ezan al lec'h kenta, dreist pep tra en hon c'halon, pegwir eo ive « Yez ar Galon ». Da zisplega menozioù tener ar galon n'eus ket, e gwirionez, eur yez eveltan. « Bretagne est poésie », a lare gwechall goz Marie de France.

N'he deus ket kollet he brud-vad, kredit ac'hanon, Bepred e chom « Môr a gân » ha « Môr a zudi »!

Miromp hor Yez neuze;

Karomp anezi;

Komzomp anezi;

Kânomp anezi! (1)

Kaerder hon Bro

Mar hon eus en hon Gouenn, en hon Istor, en hon Gizioù, en hon Yez, en hon Herez zakr, tenzorioù dispar, petra laret ivez eus ar Vro anezi hec'h-unan?

N'eus ket e-barz ar Grouadelez eur vro par d'hon bini. Evel dre eur burzud, ar C'hrouer en deus laket enni kement tra a c'halfe ar c'hrouadur c'hoantât, kement peadra a c'halfe goulenn, kement levenez a spered a c'halfe ober plijadur d'ezan.

(Aman eun displegadenn ar vavan eus dudi ha koantiri hon Bro).

Bretoned rik ha dihun

Hag o chom Bretoned — ar pez eo hon Gwir striz! — ne d'omp tamm ebet falloc'h Fransizien. En eneb, al lealan eus ar bobloù a zo bet staget, pe en em roet, pe unanet d'ar Frans, dre vrao pe dre hao, eo c'hoaz ar Vretoned, kement o deus miret en o c'hreiz, daoust d'ar gwall-reuzioù gouzanvet, balc'hded ar Ouenn ha menozioù uhel ar Spered Keltiek..

Ar Garantez-vro eo da gentan karantez an ti elec'h ma vez bet ganet an den, karantez hag en em led, hag en em astenn tamm ha tamm eus ar barrez d'ar parrezioù tro-dro, ac'hano d'ar vro a-bez, nemed e vir bepred he mammenn hag he nerz en ti elec'h m'eman an oaled.

Araok eur vro ha n'anevezomp ket, e rankomp da gentan karout an hini a anavezomp.

Perak goulenn diganeomp en em staga ouz Bro-C'hall, mar kroger da zistaga hon c'halon diouz hon Bro-ni? Disfaga eur c'hrouadur diouz e vamm a zo dinatur ha muioc'h dinatur c'hoaz e staga, da c'houde, ouz eur vamm all. Setu ar pez a rafe ar Frans, mar tifennfe ouzimp karout hon Breiz hag en em rei d'ezi hep dizro.

Hogen, ni, Bretoned, a lavar e c'hallomp, e tleomp hag e karomp zoken hon Bro dreist d'ar broioù-all. Mar tigouez d'eomp rei aliez hon spered hag hon c'horf da Vro-C'hall, hon c'halon, avat, a chom hag a chomo da Vreiz!

An dud a varve du-hont e-pad ar brezel bras, a varve evit Bro-C'hall, a dra zur, — o c'horfoù a chome ganti; — mervel a raent da gentan, koulskoude, evit miret ouz

(1) Aman e tap ken gwaz de Monzie e begement, ma nij an holl gant ar stad. Pebez c'hoarzadeg!

ar vro-man bezan drastet, evit miret ouz o zud hag o c'he-
rent bezan flastret. Ar pezh a roc kalon d'ezo, e oa da gen-
tan sonj o zi, sonj douar o c'havell...

Rak ar wir garantez-vro, ar « patriotisme » a zo dia-
zezet war oaled ti ar c'havell. An neb ne garo ket da
gentan bro e gavell, n'halla biken karout na difenn eur
vro-all. En doare m'eo red d'eomp beva brema, ar Vretoned
a zo muioc'h Fransizien eget ne sonj da galz, abalamour
m'az int gwir Vretoned.

Ar Vretoned a ro dalc'hmadauspenn o dlead da Vro-
C'hall. Daoust ha houman ha n'hellfe ket diskouez d'ezo
eun tammig mat muioc'h a anaoudegez-vad?

Evit kaout, e ranker da gentan rei, a gredan!

Ni a ro dalc'hmada, ni a ro bepred. Pegoulz e vezo la-
varet d'eomp eun *Trugarez* hepken?

Mar d'omp Fransizien ive, — hag hon emroadur a zo
dibaouez! — an 250.000 Breizad kouezet du-hont evit he-
difenn, a dlefe ivez talvezout d'eomp, a-beurz Bro-C'hall,
muioc'h a Frankiz, — petra a lavaran? — Hon Franki-
ziou leun!

Tud dilerc'het ?

Netra a gement a zo Arokaat pe « Progrès » ne ra aon
d'eomp.

Brezoneg a ouezomp, Galleg a ouezomp!

Hon Yez a gomzomp. Ar Yez-all, pa garomp.

Diou Yez, diou binvidigez; daou alc'houez war zôr ar
Spered; daou hent digor dirazomp.

Neb lec'h, n'ez omp herrek na dilerc'herien. Nag er stu-
diou uhel, nag er skianchou, nag er c'havadennou zoue-
zus a vremen, nag er c'henwerz, nag er micheriu, nag
el labouriou a ijn, nag et lizeradur, nag er varzoniez, na
war zouar, na war vôr... Neb lec'h!

N'omp ket dilerc'herien. Heuilh a reomp hon amzer,
nann evel tud dibocell; he heuilh a reomp, harpet war hon
Gouenn ha renet gant Spered hon Bro.

Ar pezh a glaskomp, eo miret hon Bro en he c'haerder,
en he c'hoantiri, miret anezi hi hec'h-unan; rei d'ezi evu-
rusted hep noazout, e stumm ebet, ouz he furnez nag
he broadelez.

Breiz a-bez !

Ha, mar karomp Breiz evelse, dre Vreiz e laromp Breiz
a-bez, Breiz hon Zadou Koz.

Karout a reomp anei gant he doare dishenvel diouz ar
broiou-all; gant he gwiskamanchou ken brao; gant he
giziou fur; gant he c'hredennou start, — karout a reomp
anezi gant ar re-man en-deün, gand ar re-man dreist-holl,
gant ar re-man da gentan.

Karout a reomp anezi gant hec'h ilizou kaer; gant he
zouriou uhel, dantelezet; gant he chapelioù koant, cha-

pelioù koant, chapelioù hon zent koz; gant he c'halvarioù
hag he c'hroazioù diouanet en pep kroaz-hent, en pep
lec'h distro, evel gedourien... En eur gir, karout a reomp
anezi evel ma kar ar c'houadur douar e gavell, evel ma
kar ar bugel e vamm, evel ma kar an divroad paour e
Vamm-Vro!

Ha karout a reomp anezi ivez er vleuennig a guz ar
gwellan, he c'hoantiri, er vleuennig a gomz ar muian hag
an teneran d'hon c'halon a Vretoned... Karout a reomp
anezi er « Bleun-Brug »!

AR YEODET.

NEVEZENTIOU

Hor, c'henlabourer, an Aotrou hag an Itron Guennec,
a zigas d'eoc'h, eus a Gemper, kelou mat ginivelez o mab
Herve, a vo eur c'hristen mat hag eur breizad kalonek
evel e zaou vreur hena.

Eus a Roazon, an Aotrou hag an Itron Elies o deus
an eurvad da gemenn d'eoc'h ginivelez o mab Herve.

Eus a vaner Langongar, e Plouzane, Tonig, Jobig, Herve
ha Gwenn de Parcevaux de Tronjoly a zo laouen o tont
da gemenn d'eoc'h ginivelez o c'hoar vihan Annaïg.

Bennoz ar Mabig Jezuz war ar vugale vihan-ze a deu
er bed gant hanolioù sent o bro!

*:

An A. J. Marchal, a zavas *Kousk Breiz-Izel* hag eun
Eured e bro Wened a zo o paouez beza hanvet da berson
e parrez bras Pleuvinie.

Feiz ha Breiz a gas d'ezan e wella gourc'hemennou.

An A. J. Cocaign, mignon bras Bugale Breuriez ar Bre-
zoneg, a vo beleget d'an 19 a viz Kerzu. Pedi a raimp
evitan ma vezo eur beleg santel hag iye eur beleg breton.

An A. Albert Dujardin, breur an A. Louis Dujardin, a
zo o paouez beza hanvet da Rener skolach Lesneven, war-
lerc'h an A. Moenner a zo aet da berson bras da Zant
Louis Brest. Hor gwella gourc'hemennou d'an eil ha
d'egile anezo!

KLEVIT 'TA

*Gand ar bloaz nevez a zeu e tigasimp nevezentioù
ha gwellaennou eleiz e Feiz ha Breiz.*

AR PRIZIOU

*A-benn Nedeleg e tigouezint, evelato, pelloc'h,
gand o gounideien.*

NEDELEK KATELL GOZ

Katell, matez koz person koz Landregat, he doa pemp ploaz ha tri-ugent echu abaoe gouel Maria viz kerzu, ha morse c'hoaz en he buhez abaoe m'edo o servicha beleien, n'oa chomet hep debri kig yar da c'houel Nedeleg, ken a oa er bloavez-ze. Ha goulskoude n'eo ket mank a yer a oa er presbital; hag endeün, gwreg miliner Kimoged a oa bet en derc'hent o tigas en he faner daou benn yar eus ar re vraoa. Mat, daoust da-ze, Katell ne danveas ket ar c'hig yar er bloavez-ze. Kompren a rit, tudou, talvezout a ra er boan gouzout perak.



*
**

Pa voe echu e dammig pred vijil gand an Aotrou Person, e voe lakaet nec'het maro ar paour kez den. Petra rafe da c'hortoz oferenn an Hanter-noz? Evitan oa houman trista nozvez eus ar bloaz. Peurvuia, d'ar zul da noz unan bennak eus e barrizioniz, a-wechou daou ha tri, a deue d'e welet goude ar gousperou, ha goude beza evet peb a vanne, e veze graet eur bartiad « domino ». Med hirio, pep hini a oa chomet er gêr gand e dud, hag an aotrou person ne deuas den war e dro. E unan-penn edo eta, glac'haret holl ha doaniet. Ah! m'en defe gelllet ober eur-barti « domino »! — Kaera c'hoari 'zo war an douar, a lavare alies. Ar c'hoariou all, emezan, 'zo bet savet holl gand an diaoul, n'eus nemed an « dominoiou » hag a ve bet graet gand an Aotrou Doue. Rak-se pebez dudi evid ar beleg koz pa veze en e zaouarn e zeiz « domino » ha dreist holl pa c'houenze. Ya, rak ne gave ket aes koll, komprenit; ha goulskoude, va Doue, an « dra » ne veze morse bras: eur gwenneg ar barti, ha netra ken. — Katell, a lavare bep mare d'e blac'h, Katell, pa varvin, m'ho peus c'hoant da c'houzout ha maro mik e vezin, n'ho po nemed youc'hal d'in: « Pemp en daou benn, Aotrou Person! » Lavar hardiz, maro mat e vin ma ne zihunan ket... » Eur zonz a deu d'an Aotrou Person: ha ma pedfe Katell da c'hoari outan.

— « Katell ». — « Petra, Aotrou Person? » — « Klaskit an « dominoiou » ha pegwir n'eus nemedomp aman hirio, c'houi a c'hoario ouzin. » Mes Katell ne zent ket dioustu, ober a ra an neuz da c'hrognal.

— « Ac'hanta, Katell, petra 'zo 'ta, m'eus son oc'h deuet da veza pounner-gleo. » — « N'oun ket, a drugarez Doue, Aotrou Person, med gouzout a rit e ve gwel d'eoc'h mont d'ober eur vorenn 'get chom war zav betek hanter-noz, rak, mardouen, n'eo ket gwellaat a rit ken, ken-nebent ha me, ha moarvat ho peus dizonjet e chomo ganeoc'h c'hoaz, goude ar pelgent, eun oferenn da lavaret hag eun all da gana. » — « Allo, allo, a c'hrosmoale ar person, allo, Katell, digasit an « dominoiou ». E gwirionez, Katell a oa sot gand ar c'hoari « domino » ha ne reas an neuz da enebi nemed abalamour ma ouie ervat he doa tro vrap da zikouez he galloud. Mont a reas eta da gerc'hat an « dominoiou » benniget ha raktal e voe boulc'het ar c'hoari: an Aotrou Person en eun tu d'an daol hag e vatez en tu all, ganto o daou o lunedou war beg o fri.

Al levezenez a oa deuet adarre da bara war dal ar beleg ha Katell eus he c'hostez a oa laouenn evel ar Spered-Santel. A vare da vare unan pe unan anezo a lope war an daol ha bep eil e vezent klevet o lavaret:

— « Pemp pe beder ».

— Ar beder-deir.
 — Pemp pe deir.
 — Ar par teir, a lavare Katell en er lakat anezan da strakal.

— Ar bemp videt.

Boud, eme Gatell.

Hag e tirolle ar person da c'hoarzin.

— *War ar menez e oa pastored*, a vouskane ar vatez epad ma c'hoarie he mestr ar par-bidet ha war e lerc'h ar bidet c'houec'h... An amzer a dremene buan hag eur an ofiz a zonas pa oa an daou c'hoarier eus o gwella, an eil o klask lakat egile da veza boud.

— « Ar c'hloc'h, eme Gatell! »

An Iliz a oa leun-chouk pa zigwezas an Aotrou Person dirak an aoter vras gand e zaou gurust. Gwisket en doa e zilhad kaera, ar gazulenn venn, seizennet ha broudet, n'e veze gwelet nemed teir pe beder gwech edoug ar bloaz; e gampz dantelez, fresk beo, hag ampêzet gant Katell. Breman en doa bannet eus e spered sonj an « dominoi » hag e save e galon war-zu Roue an Nenv e kraou Bethleem. E vouez a grene eun nebeudig pa ganas ar *Gloria in excelsis*. « Gloar da Zoue e bar an Nenv ha peoc'h war an douar d'an dud a youl vat. » Ar c'homzouze a yea doun betek goueled kalon ar beleg santel. Nebeut goude, drant ha seder, e kanas geriou kenta ar *Gredo*. E vouez ne grene mui, krenv oa breman na nerzus; hag a greiz kalon eo e tibunas ar *Gredo* penn da benn. E keit-ze, gwazed ha merc'hed a gendalc'he gand ar c'han, kennerzet hag harpet gant muzig ar c'hloc'her; hag an holl a youc'he gwella ma c'hellent o feiz war-zu an nenv. An Aotrou Person pa oa echu e gredo gantan a oa aet da azeza war eur skabell, eur c'hurust a bep tu d'ezan. Tridal a rae o klevout e barrisioniz hag e zaoulagad demmzerret gantan e kave d'eza beza er Baradoz...

Et vitam venturi sæculi. Amen. — Ech u ar *Gredo*. Ar c'hloc'her a lakeas e vuzig eur pennadig c'hoaz da c'hrognal, ha pep tra a deuas adarre da veza sioul. Goulskoude war e skabell an Aotrou Person ne finve ket. Daoulagad kement hini a oa en iliz a baras war ar pastor, med ar pastor ne finve ket muioc'h. Raktal an holl a gomprenas hag an eil a lavaras d'egile: « Kousket eo. Ya kousket chêt! » Hag e gwirionez ar person a oa kousket, ha kousket mat. Samm an devez a oa bet pounner, meur a eur en doa tremenet en e gador govez, ha breman e benn a oa pounner ive, skuiz maro oa, aezenn an iliz a oa tomm, hag ar beleg kez en doa en em roet... Setu aze avât eun abadenn! rak red oa hen dihuna. Ha penoz? Ar c'hloc'her en doa eun tamm paz. Skarza reas e gorzailhenn gand eun trouz spontus, med ar c'housker ne glevas neitra.

Ar re dosta d'ar splad (1) a rea sin d'ar gurusted da skei eun taolig war e skoaz, med allas, ar vugale geiz ne gredent ket. Goulskoude an hardisa anezo a gredas evelkent lavaret: « Aotrou Person, Aotrou Person! » med e vouez a oa ker simplig, kel lentig ma kendalc'has an Aotrou Prson da gousket. Goulskoude angli a ranked eun dra bennak. Ar c'hloc'her a gwiteas e vusig. Dont a reas da gaout e vestr hag e reas eun hejadig d'e vreaoc'h. Van ebet!

Biskoaz kement all! ne c'helled ket kennebeut heja person ar barrez evel ma vefe bet eur wezenn avalou. Ar c'hloc'her a zelle en dro d'ezan hag a oa laket nec'het maro, pa voe gwelet o tont eus traon an iliz eur vaouez koz; Katell, matez ar person. He daouarn a oa kroaziet war he feultrin, he daoulagad troet warzu mein al leurrenn, bale a rea evel eul leanez. En eur dremen abiou d'an aoter vras e stouaz he fenn ha setu hi dirak he mestr. Eur zonzj a oa deuet en he spered. Tostat a reas ouz ar beleg hag e youc'has outan en e skouarn: « Pemp en daou benn Aotrou Person! » hag hi kwit d'he flas, buhanna ma c'helle.

Ar person a reas eul lamm war e skabell, dihunet net evel pa vije tarzet ar gurun etre e dreid hag a respontas: « Boud, Katell! » Neuze hepken e paras e zaoulagad war ar goulao ha war an dud a oa en iliz. Kompren a reas e ranke beza bet kousket hag en doa hunvreet.

Goude ar pelgent an Aotrou Person, doaniet holl e galon, ne jomas ket pell en iliz.

— « Katell, emezan, d'e vatez, pa zigwezas er presbital, Katell, hirio em eus grêt eun dra ha n'em oa grêt morse c'hoaz em buhez: en em roet oun da gousket epad an oferenn. Va Doue, va Doue. Da vihana, livirit d'in 'ta, den ebet n'en deus taolet evez ouzin? »

— « Tra, tra, Aotrou Person, den ebet. »

— Gwell aze, va fec'hed a vije bet gwasoc'h. Goulskoude eur pec'hed am eus grêt hag her c'hovez a rankin. Med da c'hortoz e rankan ober pinienn. Katell, hirio, ne vo ket debret aman a gig yar!

Ha setu aze penoz, Katell geaz, matez person koz Landregat e Kerne, a dremenas vid ar wech kenta en he buhez, d'an oad a bemp ploaz ha tri-ugent, devez kaer Nedeleg hep tanva eur vorzedenn yar.

MELEGAN.



(1) Ar splad e Kerne eo ar balustr e Leon.

Bleun-Brug T.K.G. (Treger-Kerne-Goelo)

**Hor fizians a zo ennoc'h !
Penôs labourat ?**

Goueliou Gwengamp a zo bet evel eun tarz sklêrijenn hag en deus dizoloet da Vretoned Treger, Kerne ha Goelo ar pezh n'o devoa biskoaz gwelet, betek hen, ken kaer all, *gened o Bro*. Ar c'han, an teâtr, an ambrougaded-veur o doa dastumet eno, en eur wech hag en eun deiz, kement a gaera hag a vuhezeka a zo e Breiz. Ze voe 'vel eur gavaden estlammus 'vit an darn-vuia. « Ah! va Doue! Ha piou en dije sonjet? » Darn a grede d'ezo ne oa Breiz ebet ken souezet evel ma voent o welet e oa beo c'hoaz! Hag é raent, en o levez, evel lammat en he c'herc'hen da bokat d'ezi!

Al levez-ze 'zo beo bepred (ne varvo ken!) Setu aman ar pezh a skriv d'eomp eur mignon eus Treger: « Eman c'hoaz ar Bleun-Brug em spered, evel ma oa dindan ma daoulagad, o tremen dre ruiou Gwengamp, kempennet ha bleuniet eus ar c'hoanta, gant ar garlantez ruz *Bleun-Brug* o tiskenn hag o kroazia, ar bobl a Vreiziz gwisket evel vid eun eured, a zeiz hag a voulouz broudet, a aour, a ar-c'hant hag a berlez, a lugerne en heol seder, o para en oabl glas; arôk, ar varc'heien, en o faroa, o tiambroug an dukez Anna o vont kufun dirak kement a enorieu d'ober he fedenn ouz treid an Itron-Varia; an trompilhou o tregerni, ar c'hloc'h bras o vouboual, milierou ha milierou a dud a-grap ouz an tiez pe bodet dirazo evel gwenan ouz o rusken, o stakal herdan m'hellent o daouarn, al levez en o c'herc'hen, daerou a joa en o daoulagad... Biken, etre ma vin beo, ne nijo an dôlenn dudiuz-ze diouz ma spered! »

Setu eno, me gred, disklêriet ken sklêr ha ken kalonek ha ma c'hell bezan, ar blijadur dreist en doa grêt goueliou Gwengamp d'ar Vretoned a bep korn a Vreiz. Ar *Bleun-Brug* a zo deut a-benn da adc'houeza buhez a-walc'h en ene vreton-ze a zo boutin etrezomp holl, evit ma teufe da lakat, da vihana, e kerz eun devez gouel, an holl Vretoned d'en em anaout ha da c'hoarzin an eiz ouz egile. Hon dibrada a ra ar *Bleun-Brug* diwar dachenn ar vuhez vremen, ken paour ha ken rukunus, ha rei a ra d'eomp da danva ar vuhez a dlefe bezan bepred hon hini. Setu perak ar *Bleun-Brug* en deus gounezet kalonou ar Vretoned; gantan eman alc'houez o evurusted.

Met ar *Bleun-Brug*, goude ar gouel, a lavar d'eomp: « Allas! mignoned, kement-man n'eo nemet eun ehan ha ne bad ket, eun hunvre, koulz lavaret!... Vit ma pado bepred an ehan, vit ma tevio an hunvre da wir, e fell d'eomp

labourat! » Hag holl ar Vretoned en em droio souden ivez warzu ar *Bleun-Brug*, koulz 'vid al *labour* evel evid ar *blijadur*: « Desket ho peus d'eomp emezo, tanva ar gwir blijadur; deskêt d'eomp breman penôs ober labour talvoudus! Hor fizians a zo ennoc'h! »

Penôs labourat ar gwella?

Merket eo e Reolennou (Statuts) ar *Bleun-Brug*, ha merket sklêr:

Ar *Bleun-Brug* a labour en diou stumm: — dre eur GOUEL bloaveziek;

— Dre STROLLADOU — hag a labour epad ar bloaz. D'ar Strolladou-ze eo e c'halvomp ar Vretoned da rei o hanoiou, goude bezan lennet ha studiet hor Reolennou; evel ma c'halvomp da gemer peurs er gouel bloaveziek ha dreist-holl, en e genstrivadegou, holl skrivagnerien ha skrivagnerezed, kanerien ha kanerezed Breiz.

Ar *Strollad* (pe Komite), hag a zo breman unan e pep rann-vro, a zav goueliou er bourkiou, er c'hêriou, a gas unan eus e dud d'ober eno eur brezegenn war ar *Bleun-Brug*, da werza leoriou brezonek ha paperou diwarbenn ar BB. (tracts), ha da glask izili vit ar BB. bugale vit *Breuriez ar Brezoneg*, lennerien 'vit *Arvorig* ha *Feiz ha Breiz*.

Abaoe goueliou Gwengamp, *Strollad Bleun-Brug T. K. G.* en deus grêt daou ouel: unan er Chapel-Nevez, gant skoazell an Otrou Deniel, person, hag e bôtred yaouank. An O. Joanno a deuas da c'hoari *Santez Trifina*. E Ar Moal a reas eur brezegenn hag a lakas gwerza leoriou; — eun all, e Sant-Nikolas-ar-Palem, elec'h m'en em gav hor mignoned, an O. Bozec'h ha Moel, harpet gant eur maread mignoned all. Kanerien ha kanerezed S. Nicolas a zo bet loreet e Gwengamp, (priz kentan), evel ma ouzoc'h; da c'hoari peziou, ar merc'hed a zo ken dilu all. Eur yec'hed e oa o c'hlevet d'ar zul 15 a viz du, o kana toniou *Kanaouennou* ar BB. hag o gwelet o c'hoari an *Trên ter eur*.

Eur brezegenn a voe grêt adarre gant kannad ar Strollad ha brudet gouel ar *Bleun-Brug* 1926. Dija, emaeur o c'hortoz an toniou da zeski. En eur gêr all, ar bôtred a laka dija arc'hant a-gostez 'benn mont d'ar BB. da Zantez-Anna.

Daou c'houel all a vo grêt hepdale, gant Strollad Treger: unan hag a vo kaer, a dra zur, e Lanuon, da c'houel bras an 8 a viz kerdu; — eun all, en eur gêr all, e Kerne, hag emeur o tanzen anezan. Eno e vezo grêt, zoken, eun « *Devez Bleun-Brug* ».

Peadra zo da laouennat ar galon, n'eo ket 'ta? Laouennoc'h e vezoc'h pa lennoc'h ar pezh a skriv c'hoaz hor mignon eus Treger:

« Biken, emezan, etre ma vin beo ne nijo an daolenn dudiuz-ze diouz ma spered.

Ha breman, setu me krog el labour. Pep bugel, er c'ha-tekiz, a vez e levr gantan o heuilh. Bep tro ve grêt d'eun

toullad lenn beb eil. Evelse e teskont lenn brezoneg hag e c'hellont lenn *Buhe ar Zent*.

En ofis ve red kaout peb a levr, peb a levr *Kantikou bras*, pa ne ve ket a *Leor oferenn*. Er stumm-ze, e c'hellont heuilh an ofis hag esa kanan, da heuilh kanerien ha kanerezed.

Bep tri miz, e vo prijou evit ar c'hatekiz hag al lenn brezoneg.

Ar yaou, oun e zell da zastum bugale ar bourk da studian ha da zeski skrivan brezoneg. Ar vugale diwar ar miz, siouaz, a zo dièsoc'h kaout krog warnezo. Ezomm a vez anezo er gêr.

Mar ne vije ket ken berr an amzer, e vije gallet ober muioc'h evit Doue ha Breiz! »

**

Me gred, setu aze, e 2 diou dôlenn, penôs eo dleet labourat: penôs e tle izili ar *Bleun-Brug* labourat, pep hin en e stad, hervez e amzer hag e beadra.

N'omp c'hoaz nemet o kregi. Araok fin ar bloaz, avat, eo red ma vefe boulc'het al labour gant an holl Strolladou hag e vefe gallet rei aman, bep miz doare buhez ar *Bleun-Brug*, e pep rann-vro.

A. R.

KELEIER ar MIZ

LANUON. — Gouel ar Bleun-Brug
(8 a viz Kerdu 1925)

Skriva raer d'omp:

War hevelep tro gant an *Devez* bras grêt e Lanuon evit bruda ha rei da anaout Lidou kaer an Iliz katolik e vo grêt, d'abarde, eur vodadeg er Patronaj, renet gant an Otrou Bocher, person Lanuon, evit bruda ive ha rei da anaout ar *Bleun-Brug*, eur gevredigez hag a zo, koulz lavaret, savet war droujou an Iliz evit he difenn, en eur zifenn Breiz. Niver a barroziou eus Bro Lanuon a vo en deiz-ze e kêr hag an dud a gemero plijadur o tont da wet pez kaer *Santez Trifina*, bet c'hoariet e Gwengamp gant kement a vrud, ha da glevet gant ar barz helavar *Ar Yeodet* peira eo ar *Bleun-Brug*: Pôtrez yaouank skolaj bras Lanuon a c'hoario *Yann Pôtr ar ger* hag an *Tabouliner koz*. Ar re-man o doa kustumet mont, epad an ehan-studi, renet gant o mestr, an Otrou 'n abad Cathou, da c'hoari peziou brezonek d'ar parrezioù. Ar vrud anezo a zo et dija a-bell bro hag ar re n'o deus ket gwelet anezo c'hoaz a garo dont d'o selaou.

Setu roll ar gouel:

1. « Ho mamm » (kan).
2. Prezegenn diwarbenn ar *Bleun-Brug*, gant ar Yeodet.
3. *Santez Trifina*, gant Merc'hed yaouank Benac'h, renet gant an Oberour.
4. *Yann pôtr ar gêr*; *An Tabouliner koz*, gant Potred Skolaj St-Joseph Lanuon.
5. *Bro goz ma Zadou*, gant Laz-kana Sant-Yann-Vadezour. Priz ar plasou: 1^{er} 20 real (5 fr.); 2^{er} 1 skoed (3 fr.); 3^{er} 8 real (2 fr.).

EVESAIT. — Gellout a rêr mirout e blas adalek ar zul 6 a viz kerdu, gant komz ouz porzer ar patronaj, ru Treger.

— Gellout a rêr c'hoaz mirout e blas, o skriva 'vit ze d'an O. Pouhaer rener ar Patronaj; er presbitoar.

AR FOLGOAD

An A. Gweguen, person Lanneufred, a zo o paouez beza bet hanvet da berson e Follgoad, warlerc'h an A. Pab; an A. Calvez, person Lesneven eo a ziambrongas anezan pa gemeras perz en iliz an Itron Varia, d'ar 15 a viz Du diveza; da lein, antronoz, Rener Feiz ha Breiz a ginnigas d'ezan e wella gourc'hemennou; goude beza e drugarekaet eus ar vad a reas d'ar brezoneg p'edo e Lanneufred, e reketas d'ezan yec'hed hag amzer da ober kement all en e barrez nevez: « Iliz ar Follgoad, eme an A. Perrot, a zo unan eus ilizou Breiz; savet eo bet, nann gant parrez an Elestrog hag evit parrez an Elestrog, met gant ar Vro a-bez hag evid ar Vro a-bez; savet eo bet, en amzer Yann V^{er}, he brasa madoberour, evit ma vije pedet enni, da virviken, evit Duked ha Pobl Breiz; ar wirionez-ze, an holl hen anaveze mat gwechall, met abaoe Dispac'h 1789, ha dreist holl abaoe Brezel 1870, ez eus deuet tenvalijenn e sperejou eleiz a Vretoned; pedi a reont evid ar Frans (1), e Follgoad, met ne glever ano ebet ken e gwerz an Itron Varia, nag eus al lili, nag eus a Vreiz, nag eus diazezourien brasa pardon a zo e Leon; c'hoant am bije da lavaret e vefe diberc'hennet an iliz kaer savet war bez ar Foll, endra m'eo beo c'hoaz bugale ar re o deus he savet, ha koulskoude ma ne vez ket pedet

(1) Mat eo pedi evid ar Frans, e pep lec'h, sur a-walc'h, hag ezomm a zo d'hen ober, breman, muioc'h eget biskoaz, p'eman an traou enni o vont war o c'hement all, met arabad eo paouez, evid an dra-ze, da bedi ivez evit Breiz, *dreist-holl*, e Follgoad.

Itron Varia ar Follgoad a zo bet hag a dle beza, Itron Varia ar Vretoned.

Diou werz kaer a zo bet savet da gana burzudou ar Follgoad; hini an A. Gwillou, savet evit pardon bras ar 25 a viz mae 1873 hag hini an A. Kere savet evit pardon bras an 8 viz Gwengolo 1888! an diou werz-se a oa graet evit beza kanet *eun dervez* met ne oant ket graet evit beza kanet *atao* ha setu perag ez eus enno breman traou hag a zo tremenet o amzer; an eur denna anezo o diou ar c'houlblajou ne gosaont ket e vije gallet renka eur werz dudiuz hag a vije gallet he henvel e gwirionez, GWERZ ITRON VARIA 'R FOLGOAD.

evit Breiz e Follgoad e pelec'h e vo graet ha ma ne vez ket pedef eviti, e nep lec'h, penaos e chomo en he sav?

Gwella pezh a zo, Aotrou Person, ar gwir, abred pe zivezat, a zav atao war gorre, hag a-wechou zoken e kaver tud vat da rei an dourn d'ezan da zavel kentoc'h aze; yec'hed ha buhez hir d'eoc'h eta, digand an Aotrou Doue hag an Itron Varia, e tal iliz Breiz, e ti hon Dukez Anna! »

**MARI-SALOME,
MARI-SUZANNA,
MARI-MIKAEL.**

Kant vloaz a zo bet er bloaz-man abaoe ma teuas er bed, du-hont, e kreteiz ar Frans, war harzou ar Spagn, an hini a dlie beza divezatoc'h ar c'hardinal Lavigerie (1).

D'e 38 vloaz edo eskob e Nancy; daoust peger bras eo, re vihan e kave e eskopti diouz e zoare; ne gave ket a labour a-walc'h da ober ennan diouz an nerz a oa en e galon: pevar bloaz goude edo e Alger; eno, en eun arc'heskopti kement hag eur vro ha pep tra da ober ennan evit lakaat an dud da anaout ha da garet H. Z. J. K. e stag gand e ero; sevel a ra, da rei an dourn d'ezan, eur strollad beleien a voe lezhanvet Tadou Gwenn, diouz liou o gwiskamant; anavezet mat int e Breiz, rak e Hennbont eman o c'hloerdi hag e Plougerne e vezont gwelet bep bloaz gand o c'hloareged, o tiskuiza, diouz o skoi, epad an hanv; dont a ra da Vreiz da glask merc'hed da vont gantan d'e zikour da skigna ar feiz etouez ar vorianed; peder eus a Blougerne a glev e c'halv hag a ya d'e heul; unan a deu da fallgaloni en hent hag a zizro d'ar ger; met an teir all a ya betek penn hag a jomo gantan.

Ar genta, Mari-Renea Roudaut a oa ganet e Kervaro, e Gwiseny, er bloaz 1847; unnek vloaz hanter he doa pa deuas da jom da Blougerne; daouzek vloaz e chomas e Keranaou; tri bloaz war nugen he doa pa gemeras penn an hent da vont d'an Afrik; he breur, Goulc'hen, beo atao, a zo breman o chom e Kerilhès. An eil, Mari Roudaut, ganet er bloaz 1849 a oa o chom en Enez-Kadek, en ti m'eman ennan breman c'hoaz he breur Nedeleg; an trede, Soaz Calvez a oa o chom, er C'hrouaneg, en ti a zo dirag ar chapel, el lec'h m'edo gwechall ar gouarnet; pemp bloaz hag hanter kant a zo abaoe; Soaz Calvez n'eman mui, maro eo, met an diou all a zo seder atao; Mari-Renea Roudaut, — ar C'hoar Mari-Salome, — he deus savet gant skoazell he c'henvroadez Mari Roudaut, — ar C'hoar Mari-Suzanna, — Urz Leanezed Gwenn ar c'hardinal Lavigerie hag eul leanez all, ar C'hoar Mari-Mikael eus a Gerlastren, e Plougerne, a zo aet daveto hag he deus kemeret en o c'hichen ar plas lezet goull gant Soaz Calvez.

(1) *Charl Lavigerie a zo bet ganet e Bayonn d'an 31 a viz Here 1825.*

Evel teir Vari an Aviel, teir Vari Plougerne o deus graet labour vat; n'o devoa netra nemet paourentez pa zigouesjont eno; 84 ti o dus breman evit skolia ar vugale hag entent ouz ar re goz hag ar re glavy; 680 leanez o deus en o urz nevez: nag a vorianed hag a anavez breman ar gwir Doue, dre m'o deus bet ar merc'hed-se kalon a-walc'h evit mont eus eur vro gristen evel o hini da eur vro c'houez evel an Afrik, da heul an A. Lavigerie pe gentoc'h da heul e vestr, Hor Zalver Jezuz-Krist.

Archeskob Roazon, ar c'hardinal Charost eo a zo bet kaset gand ar Pab, da ren, en e ano, Goueliou kantved ar c'hardinal Lavigerie; e Aljer, e Karthaj, hag e Tunis, en deus bet eun digemer laouen; e Sant Charl, el lec'h m'eman ti bras al Leanezed Gwenn, unan eus ar C'hoarezed a zaludas anezan en ano an Urz a-bez, dre ar c'homzou-man hag a jomo pell, en e galon, sur a-walc'h: « *En votre personne, Eminence, c'est l'Eglise qui vient à ses missionnaires pour les encourager dans le labeur de chaque jour; c'est la France qui vient demander à ses enfants de la faire connaître et aimer des indigènes; c'est aussi la Bretagne qui vient à l'Afrique, après lui avoir donné les meilleurs de ses enfants. Quand notre Vénéré Père voulut fonder la Congrégation c'est au vieux sang Breton qu'il fit appel, et les vaillantes qui vinrent à lui furent les premières missionnaires de Notre-Dame d'Afrique.*

Soyez remerciée, Eminence, d'avoir bien voulu, ainsi que les illustres Prélats qui vous entourent, consacrer quelques instants aux Filles du Cardinal Lavigerie. Votre pourpre nous rappelle trop la sienne pour que nous ne soyons profondément heureuses de recevoir votre bénédiction. Votre présence a mis la joie dans tous les cœurs, et dans notre vie de missionnaires, nous garderons toujours le souvenir ému de cette inoubliable journée. »

« Chom a reont an eil e tal eben, — ar C'hoar Mari-Salome hag ar C'hoar Mari-Suzanna, — a skrive en deziou-man d'he c'herent ar C'hoar Mari-Mikael, ha me gred, ma teu unan anezo da vervel, eben ne zaleo ket da vont d'he heul, ker stag int an eil ouz eben; en em gaout dreist a ran, en ho serr, rak evel diou vamm int evidoun! »

Pemp bloaz hag hanter kant a zo emaint o rei an dourn an eil d'eben, war an hevelep tachenn, ha n'eo ket souez klevet ne c'hellfent ket ken en em ziouret.

Gant goueliou bras ar C'hardinal Lavigerie e pedomp ar C'hoar Mari-Mikael da ginnig, e yez o mammou, doujans ha gourc'hemennou gwella Feiz ha Breiz, d'an diou Vretonez kalonek a zigoras hent da sklerijenn ar feiz da vont da ober vad etouez Muzulmaned an Afrik (1).

(1) *Ma vefe Bretonezed hag o defe c'hoant da vont da zikour as-enn rouantelez Jezuz-Krist d'an Afrik n'o defe, nemet skriva d'ar Sœur Marie Salome, Religieuse missionnaire, Orphelinat Saint-Charles, par Birmandreis, Algérie (Afrique).*

FLANDREZ, ALZAZ HA BREIZ



AN A. J.-M. GANTOIS,
Kannad ar Flandrez e Bleun-Brug Guingamp

Ma 'z eo gwasket Breiz, gand ar C'houarnamant a zo breman o lakaat ar Frans da goueza en he foull, n'eman ket he-unan; broiou all a zo, bihannoc'h egeti, mar kirit, met ker gwasket hag i; en o zouez ha gand ar re genta

eman ar Flandrez hag an Alzas; p'eo gwir omp gwasket gand an hevelep lezennou n'hon eus nemed klask an tu d'en em glevet hag e vezimp trec'h d'hor gwaskerien. Setu, dres, petra zo bet graet da c'houeliou ar Bleun-Brug; el lec'h ma teuas an A. Gantois (1), da lavaret d'eomp penaos e tremen an traou er Flandrez.

D'ar 25 eus ar miz tremen e oa ivez, e Lill, eur studia-deg war an doare da gemeret evid adsevel ar Flandrez en he stumm hag en he gened gwechall; ar *Bleun-Brug* a oa pedet da gemeret perz enni.

Epad lein, an A. Andre de Poncheville a lavaras ar c'homzou pouezuz-man: « Il faut que nos provinces, sans abandonner le caractère qui leur est particulier, se concertent afin de résister à la poussée matérialiste qui menacerait de détruire notre civilisation accidentale et la chrétienté elle-même. »

An Alzas ivez a zo en he sav; gwelet a ra n'eus netra ebet ken da c'bedal diouz gouarnamanchou Pariz ha ne reont nemet mont a eneb o ger ha setu perag e fell d'ez i kaout he gouarnamant he-unan.

D'ar 4 a viz Here diveza en eur vodadeg katoliked e Molsheim an A. Schaeffer a lavare, en eur brezegenn hag an holl, dre o strakadennou douarn a ziskoueze e oant a-du gantan: « N'eus ken nemed eur gall hag hon dije fizians ennan hag eo hon Aotrou 'n Eskob. »

En deziou diveza, ar c'hazetennou a embanne ivez eul lizer hag e weler ennan penaos eo barnet Herriot, Painleve hag o mignoned gand an Alzas:

« La France, la République, nous ont trahis sur toute la ligne. L'amour le plus grand se mue en une haine profonde. »

« Nous ne connaissons pas de distinction entre la France et la République; elle est d'ailleurs impossible à soutenir. Moi-même j'étais un Français ardent — je l'étais devenu pendant la guerre alors que j'étais déjà auparavant un ami de la France — maintenant je ne suis plus rien. »

« Qu'advient-il maintenant? »

« Nos populations ne marchent plus. »

« La France sera juste et nous octroiera l'autonomie, ou bien à la désaffection des cœurs suivra bien autre chose. »

« Nous avons le droit, devant Dieu et devant le monde, de choisir notre sort, d'autant plus que la France a manqué à sa parole. »

« Nous irons désormais par des voies à nous: le monde entier apprendra que l'Alsace et la France ne peuvent plus s'accorder. Et en Lorraine la situation est encore plus grave qu'en Alsace. »

Flandrez, Alzas ha Breiz, broiou kristen, broiou gwasket, en o yez koulz hag en o feiz, hag a dorro o eréou, ma kavont an tu d'en em glevet a-zoare!

(1) Lennit war *Gorn-Boud* ar miz tremen hag hint ar miz-man ar brezegenn gaer a reas e Gwengamp d'an 9 a viz Gwengolo diveza.

I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU MIZ DU

I. — Pa jom sioul. II. — An devez m'emaer ennan. III. — Ar veoc'h. IV. — Er mellezour. V. — Eur c'houezigell.

II. — DIVINADENNOU MIZ KERZU

I. — Ma varvan e tivarvin
ha ma vevan e varvin?
20 p. ar r. Digaset gant Y. Mer. Kervezenneo, Guiclan.

II. — Eun dra 'ze, piou oar petra
pa astenn a ziverra?
20 p. ar r. Digaset gant Fransiz Salaün, an Trehou.

III. — Gwenn eo p'her leper,
melen p'hen tenner,
mat eo da zebri
ha tenn da denna eus genou eur c'hi.
20 p. ar r. Digaset gant Franseza Greignou, eus Cleder.

IV. — Divin d'in eun divinadenn:
Tri baotrig mistr ha kempenn
n'o deus o zri nemed eun tok
hag a ya, d'o fennou, klok?
20 p. ar r. Digaset gant Visant Prigent, eus a Zant Noug, a skolach Kastell-Paol.

V. — Intron Geroulas hag Intron Gerguvelen a oa
gante peb a vogel war bleg e brec'h; daou
aotrou, baro gwenn d'ezo, a deue war o lerc'h;
daou zenchentil yaouank a en em gavas gante
hag a c'houennas euz an diou intron yaouank
piou oa an daou aotrou koz-ze: an intronezed a
respontas:
An daou goz-ze eo hon tadeu,
rak priedou int d'hor mammou;
breman int c'hoaz hor priedou
ha d'an daouik-man int tadou.
Penaos an dra-ze?

20 p. ar r. Digaset gant eul lennerez paperou koz. —
Konk Kerne.

Digas ar responchou hag an divinadennoù nevez a gavfet a-
benn an 20 eus ar miz da: M. le Directeur du Feiz ha Breiz à
Plouguerneau (Finistère).

Graines Potagères, Fourragères et de Fleurs

A. HUON

L. AUDREN, SUCCR

13, Rue de Siam — BREST

Adresse Télégr. : AUDREN-GRAINES-BREST

Téléphone 3-33

ARTICLES de PÊCHE et CORDAGES

Ar c'hannad-man ne gerz nemet da heul FEIZ HA BREIZ hag ARVORIS

AR C'HORN-BOUD

KANNAD MIZIEK


Kevredigez ar "BLEUN-BRUG"

Penôs ec'h en em c'hraio ar brezoneg skrivet?

Eur yez ha ne vez ket skrivet a zo eur yez kollet. Ar geriou, a c'henou da c'henou, a rumm da rumm, a deuo d'en em zistresan, henvel ouz eun tön hag a vez desre-velet dishenvel gant kement hini en devez e glevet, mat n'ouzont ket an notennoù. Vid eun den hag a oar an notennoù, eun tön ne sko ket hepken war e glevet, skei a ra ivez war e weled; 'n em ziskouez a ra dirazan skrivet, dre ma teu an dibun anezan; en doare-ze n'hell ket ar muziker fazian pa deud da adkanan, nemet ha faoz e vefe e vouez.

Evit ar yez eo memez tra. Ar geriou, dre ma vezint distaget, a en em ziskouezo skrivet da zaoulagad an neb a oar skrivan ha, mar deo reizet mat an doare-skrivan (orthographe), setu eno geriou hag a dalvezo keit ha keit da gement hini a oar e yez. Met d'ar re ne ouzont ket? Aman avat, ez eus meskañ! An otroù Uguen, rener kloerdi Pont-Kroaz, en deus ket klasket gouzout pegement e c'helle ar brezoneg bezan distummet, pa ne vez nemet ar skouarn o reizan an doare anezan. **Feiz ha Breiz** miz mae 1921 a voulas enklask an otroù Uguen; fentus eo gwelet pegement a faziou a ra ar skouarn pa ne vez ket renet gant al lagad ha gant ar spered. Pep hini a skriv diouz ma klev: ! **pegwir** a deu da ve vezan **pugur, pugure**; — eur **wech all, vichalle**; — eun **tam-mig** a vo eun **timig**; — **azafek aze** a vo **jalegaze**; — eur **paour kez, eur polkez; hen a gar e vamm** a deu da vezan eon ga vam...

Kemerit tud eus a bep korn a Vreiz, Bretoned ha n'ouzont ket skriva o yez, — n'eo ket start kaout, — nemet ec'h ouzont, koulskoude, d'erc'hel eur bluenn; gait d'ezo skriva, war glevet, eur bajennad brezoneg; war gant den, c'houi ho po, marteze, kant doare skriva dishenvel! Evel e tour Babel, ar brezoneg a deufe da veza eun divinadenn, diouz an eil parrez d'eben, mar



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011